

# AL LIAMM 108

Genver-C'hwevrer 1965

21 añ Bloavezh

## PROFOU :

1961 : 2357,22 L  
1962 : 2785,00 L  
1963 : 2921,50 L  
1964 : 2943,00 L

## KOUMANANTERIEN

1963 : 478  
1964 : 512  
1965 : 559

## TAOLENN

Kizhier Bihan, gant Benead	3
War gein ar Vro, gant Youenn Gwernig	4
Hentoù, gant Youenn Gwernig	5
Récife, Gant Manuel Bandeira (troet gant Yann Talbot)	7
Istor Kembre, gant R. S. Thomas (troidigezh gant Y. B. Piriou)	10
Bodadeg ar Pevarzekved, gant Meven Mordiern	12
Berenice, gant Edgar A. Poe (brezhoneg gant Per Denez)	17
Ar Vreuriezh Wenn e Gwengamp, gant Maodez Glanndour	25
Al lennegezh e Breizh kant vloaz 'zo, gant Benead	30
An Dourig mat, gant Herve Ar Menn	37
Diazezoù ar sevel gwerzioù, gant F. Kervella	40
Al Levrioù	54
Notennoù	60

**Kizhier Bihan**

BENEAD

Polotennoù erc'h ha glaou,  
 Pennoù o fiñval hag o selaou,  
 Daouzek pav mibin,  
 Kizhier bihan en dro din...

Va c'hazez, e-touez da dri mab,  
 A, krizder an dibab !

\* \* \*

Ne virin nemet unan ac'hanoc'h,  
 Te ' oar c'hoari, te ' zo kreñvoc'h.  
 Dilenn ar farser pe ar chaseour,  
 Ar furlukin, pe ar c'hadour ?

Me a zibab ar prederour !

\* \* \*

Ez taoulagad boull,  
 Kazh bihan mut ha sioul,  
 Emañ da vuhez a-bezh ;  
 Souezh, tenerded, hiraezh,  
 Skleurennoù bliv, froudennoù lirzhin,

Fromus ha don, ar c'hevrin...

(1943)

YOUENN GWERNIG

**WAR GEIN AR VRO**

Rec'hier, brug hag an avel  
 emañ war gein va bro  
 rec'hier dindan ar brug hag eskern  
 tud bet beo gwechall  
 Hendadoù :  
 en avel n' eus keloù 'met eus ar re veo.

Ar re varo zo maro  
 div pe deir gwech maro  
 maro evit mat  
 aet o eskern da boultr - pell zo -  
 Relegoù, ludu,  
 ha ne vez ken klevet o mouezh en avel :  
 en avel n'eus keloù met eus ar re veo.

Emaon war gein va bro  
tro-war-dro betek an dremmwel  
tourioù parrezioù va bro  
o beredoù leun a vleunioù degaset gant ar re veo  
evit ar re nevezvarvet ;  
karnelioù, relegoù ankoueet,  
n' eus met mousc'hoarzh un ael kizellet e mein ar vro  
evit ar re aet pell zo, pell zo  
da anaon.

Evit ar re-se du-hont,  
o eskern mesk-ha-mesk gant boteier-ler  
tokarnoù, hernajoù  
douar estren  
ha bidonioù merglet,  
n' eus netra.

Rec'hier, brug, hag an avel  
o kanañ  
war gein va bro :  
'n e gan n'eus keloù met eus ar re veo.

1964

5  
YOUENN GWERNIG

## **HENTOÙ**

Kerzhet hon doa war hentoù seiz  
ken flour ha kuñv d'hon treid  
hentoù seiz ha voulouz,  
stummet oamp bet, petra ri,  
da gerzhout war hentoù seiz ha voulouz  
gweet evidomp  
aketus  
gant ar re-se a varvas  
war o gwele spern ha drez  
hep lavar mann.

Kri ur c'havan, gwevn ha glan,  
'n aer voull miz Ebrel,  
an tour ken tost enni kleier 'n amzer Bask,  
ha ret oa pignat gant an treustoù  
da dizhout dantelezh ar mein  
evit pakañ  
vioù ar c'havan  
'n ur sellont ouzh ar vro hag an oabl,  
hag an hollved oa deomp  
'vit ur pennad.

Hentoù seiz ha voulouz  
hon treid e boutoù voulouz  
ha dezho seulioù plom,  
porpantoù voulouz ha rochedoù seiz  
war groc'hen tener hor yaouankiz,  
danvez kuñv, limestra,  
dilhada roueed  
gweet an tammoù anezho  
gant neudoù dir...

6

Hentoù kalet ha kriz  
an noz-se  
m'oa bet ret sevel ha mont ganto  
- n' hellemp ober tra all ebet ken -  
da heul  
ar re-se a rede war gern ar menez sec'h.  
marc'hegerien rust, dic'hras,  
noazh  
dindan al loar  
hag eürus.

1964

7

MANUEL BANDEIRA  
troet gant Yann Talbot

## **RECIFE**

RECIFE,  
RECIFE,  
Neket ar VENEZIA amerikan,  
Na MAURITSTADT paramantourien INDEZ ar C'hornog,  
Na RECIFE ar werzherien-red,  
Na zoken RECIFE am eus desket karout diwezhatoc'h,  
RECIFE an dispac'hoù dishualus.  
Hogen RECIFE hep istor na lennegezh,  
RECIFE e-unan  
RECIFE va yaouankiz...

\*

Straed an Unaniezh 'lec'h ma c'hoarienn fured,  
Ha ma torren ar gwerennoù ' ti Dona ANINHA VIEGAS,  
TOTONIO RODRIGUEZ a oa kozh-Noe hag e lakae e lunedoù war veg e fri.  
Goude koan ar familhoù a leunie ar riblennoù gant kadorioù, brozennoù,  
karantezioùigoù, c'hoarzhadennoù...  
C'hoariet e veze e-kreiz ar straed ;  
Ar baotredigoù a youc'he :  
    " Ar c'honikl 'zeu 'maez !  
    'zeu ket 'maez ! "  
Er pellder, mouezhioù flour ar merc'hedigoù a gane war veur a don  
    " Bod-roz ro din ur rozenn,  
    Jenoflenn ro din ur broustig. "  
(Eus ar rozennoù-se meur a rozenn  
A zo sur-awalc'h marvet e broust...)  
En un taol,  
    e pellder an noz,  
        ur c'hloc'h.

8

Un den en oad a lavare :  
    " An tan e Sant Anton !"  
Unan all a responte : " N' eo ket, e Sant Josef emañ "  
TOTONIO RODRIGUEZ a veze dalc'hmat ali e oa e Sant Josef.  
Ar wazed a lakae o zogoù hag ez aent er-maez 'n ur vutuniñ.  
Ha kounnaret e vezen-me da vout bihan  
Rak ne c'hellen ket mont da welout an tangwall.

\*

Straed an Unaniezh...  
Pegen c'hwek e oant, anvioù straedoù va yaouankiz.  
Straed an Heol.  
(Aon am eus na ve anvet bremañ straed ur jeneral bennak.)  
A-drek hon ti e oa straed an Hiraezh...  
'lec'h ma 'z aemp da vutuniñ e kuzh.  
Diouzh an tu all e oa kae straed Tarzh an Deiz...  
'lec'h ma 'z aemp da besketa e kuzh.

\*

KAPIBERIBE,  
KAPIBARIBE.  
Du-hont strouezhegig KAKSANGA,  
Logigoù-kouronkañ graet gant plouz.  
Un deiz em eus gwelet ur plac'h yaouank  
o kouronkañ e noazh-pilh-bloc'h ;  
Chomet on a-sav, va c'halon o skeiñ,  
Hag he deus c'hoarzhed;  
E voe va c'hentañ trelladur.

\*

Ar c'hresk-dour ! ar c'hreskoù-dour !  
Pri, ejen marv, gwez, brignon, ar bouilh en deus liñvet pep tra ;  
Ha war vegoù ar pont hent-houarn ar G-«Cablocos » divrall  
war ar radelloù gwez-bananez.  
Navedoù,  
marc'hekadegoù ;  
'N em lakais e-pign kouzoug ar plac'hig,

9

Hag e tremenas he dorn em blev.  
KAPIBERIBE,  
KAPIBARIBE.  
Straed an Unaniezh ma dremene pep noz enni ar vorianez gant he bananez,  
Warni he skerb liesliv kotoñs roudennet ;  
Hag ar marc'hadour bizhier korzenn-sukr,  
Hini ar c'hakaouetez, a veze anvet « midubim »,  
Ha na vezent ket krazet, poazhet nemetken.

\*

Derc'hel 'ran soñj eus kement youc'hadenn ar varc'hadourien:  
" Vioù fresk marc'hat-mat,  
Pevar gwenneg an dek ! "  
Pell 'zo abaoe...  
Ar vuhez ne zeue ket davedon dre ar c'helaouennoù hag al levrioù,  
Dre c'henou ar Bobl e teue, e yezh trefoet ar Bobl.  
Yezh difazius ar Bobl.  
Rak hi eo a gomz saourus Portugaleg Brazil ;  
Tra ma  
Ne reomp-ni  
'Met marmouzañ  
Ar frazennadur luzitaniek.  
Ar vuhez leun a gement a draoù na gomprenen ket ervat,  
Broioù na ouien ket pelec'h en em gavent.

8

\*

RECIFE  
Straed an Unaniezh,  
Ti va zad-kozh...

Kammed n' em bije kredet e c'hellfe steuziañ ;  
Pep tra a seblante intret a beurbadelezh.  
RECIFE...

Marv, va zad-kozh...

Marv, RECIFE - RECIFE mat - RECIFE braziliat evel ti va zad-kozh.

NOTENN. - Manuel BANDEIRA 'zo unan eus brudetañ barzhed lodenn gentañ an XX-vet kantved. Ganet eo bet e Recife e 1886.

10

R. S. THOMAS

troidigezh gant Y. B. Piriou

## **ISTOR KEMBRE**

Ur bobl e oamp, kalet er brezel.  
Ar menezioù  
gwisket gant geot rouez,  
tommoc'h dezho eget ar rochedoù rust  
war hon eskern moan,  
na oant ket kaletoc'h.

Stourm a raemp  
hag atav e vezemp trec'het  
evel an erc'h o teuziñ war diribinoù  
ar Mynydd Mawr.  
Koulskoude an estren  
ne gavas biskoazh hon diwezhañ  
moger-difenn er c'hoadoù don,  
entanet ma oamp gant hor gwerzioù  
ha gant galv an delenn.

Hon tierned a varvas, pe lazhet e voent gant an drubarderezh kozh mar ribl ar stêr.  
Hor barzhed a yeas da get, argaset diouzh kestell an dudjentil gant ar spern hag an drez.

Ur bobl e oamp. Maget e oamp bet gant mojennoù ha tommañ  
raemp hon daouarn ouzh tan ruz hon amzer dremenet.

Mezh o doa an uhelidi pa welent hon truilhoù.  
Hor c'hofoù treut hag hon tiez fank a broue anat n' oamp ket graet evit bevañ.

11

Ur bobl e oamp ha foraniñ raemp hon nerzh  
en emgannoù didalvoud evit hor mistri  
e-barzh broioù m' hor boa gwir ebet warno,  
gant tud n' hor boa kas ebet outo.

Ur bobl e oamp hag ez omp c'hoazh.  
P' hon devo echu da dabutal  
evit kaout bruzunachoù dindan an daol,  
pe da grignat eskern ur sevenadur marv  
ec'h adsavimp,  
armet,  
met ne vo ken en doare kozh.

## **Bodadeg ar Pevarzekved**

-I-

N' eo ket un dasorc'hadenn edon o vont da ober, hogen ur grouadenn, pe gentoc'h un drevezadenn, da lavarout krenn-ha-krak ar wirionez : un douelladenn.

Alies em bugeliezh em boa klevet digant va mamm anv al lec'h m' edo beziat va c'hoarig, ar grug a c'holoe bez ar verc'hig he doa bet va mamm gwechall hag a oa marvet ez vihan e-tal ar mor, meur-meur a vloaz a oa.

Kas a rajen ganen va c'hoar hag he daskor d' am mamm

Tostik-tost d' ar mor e save ar grug, ha dalc'het dizrein ha distrouezh e oa bet al lec'h tro-war-dro gant merc'hed ar vro ; ez is war yun da azezañ dirak ar grug, va daoulagad stag outi, paket strizh em mantell , palv digor va daouarn ouzh va divoc'h.

Ur furmig skañv eo a welis da gentañ war lein ar grug. Boull ha treuzwelus e oa evel un tammig lusenn. Tevaat, fetisaat a reas tamm-ha-tamm. Didreuzus d' al luc'h e teuas da vezañ. Kantren a reas war-c'horre ar grug ha tro-war-dro dezhi, gwech o sellout ouzh ar mor evel pa he dije c'hoant da vont da c'hoari gant an tonnoù, gwech all o sellout ouzhin evel pa vije bet war-nes dont d' am c'haout. An aezhenn-vor a lakae hej en he blev melen-aour hir rodellek. Bez' ez oa anezhi ur goant a blac'hig glas-mor he daoulagad, heñvel-bev ouzh ar verc'hig a oa bet taolennet din gant va mamm.

Da zibenn an navet nozvezh, p' edo ar stered o vont da guzh, ha flammeged ar beure, dre zisplegañ o eskell ruz-roz, o tiouganañ nes-savidigezh an heol, e lakais va c'hrouadenn da zont davedon hag he briata a ris. Fetisted ha tomnder ar vuhez a oa ganti, nemet digomz e vane, evel ma ra ar skeudennoù a saver dre hud. Pokat ouzh he zal a ris, he fakañ em mantell, he lakaat war bleg va brec'h hag o tilec'hiañ ac'hano, ez is da gaout va daou genvarc'heg.

13

Duteutos mab Adiatorix a gavis oc'h ober ged war doull ar ganiennig.

- A diern ! emezañ. Da ganen gwelout n' eo ket bet difrouezh da hir a c'hortoz e-tal ar mor.

- Ya, soldur ! emeve. Setu tennet eus he c'harc'har douar ha mein ar plac'hig a oa bet laeret gwechall diganeomp. Davet he mamm e Vindobalia ez ay en hon ser.

- Meulet, emezañ, meulet ra vo an doue a roas dit galloud da ober an taol-marzh-se !

Gant an tan-gward pa zegouezhis, edo Dukarios mab Pixtilankios o tanzen lein.

- A diern ! emezañ. Deuet mat ra vezi, ha ra vezo deuet mat an hini vihan a zougez ken aketus war da vrec'h !

- Ya, soldur, emeve. Setu hi dasorc'het ha bev mat adarre, ar c'hoar am eus bet gwechall.

- Trugarekaomp an doueed, emezañ, evit ar vad-dreist-se !

- II -

O klevout trouz pavioù hor c'hezeg war ar c'harrhent a save betek dorborzh an dunon, e teuas Antoniakos e toull ar porzh.

- Bez deuet-mat e ti da gerent, Ategene Roudikne, goude kemend-all a vloavezhioù tremenet er-maez.

- Laouen ouzh da welout adarre, kavare, emezon. Ha div wech laouen, rak ur pennabeg all a zo d' am levez : evel m' edos pa 'z is kuit, evel-se da gavout a ran pa zistroan ; kemm ebet war fall ennout, meulet ra vo Doue !

Kavare a zo tro-c'hervel kavaros, « ramz » ha « kadour-dreist ». Antoniakos a zelleze an eil hag egile eus an daou ster a zo gant kavaros. Bez' e oa anezhañ ur ramz en tu-hont d' 1 m. 80, ha kreñv diouzh e vent. Soudard kalonek e oa ouzhpenn.

- Da e vefe ganen gallout lavarout kemend-all diwar da benn, Ategene, eme Antoniakos, nec'het e vouezh, en ur stardañ va dorn gant karantez. Ar palefarzhkantved o vont e-biou en deus lezet roud e skilfroù warnout. Evelato mar deo aet kozh ha teuc'h ar wiskamant gant an amzer, an ene en diabarzh a zo manet yaouank ha digemm atav. Hounnezh eo bet madelezh Doue en hor c'heñver.

14

- Hag evel ma welez, n' eo ket me hepken a zo o tont war ar marc'h-mañ.

- Ne vern piv eo an hini a zalc'hez ken aketus war zivskoaz da varc'h, deuet mat eo en abeg dit, Ategene, eme Antoniakos. Piv eo ar plac'h yaouank-mañ, emezañ.

- Ar verc'h a zo bet laeret digant va mamm, bez' ez eus bremañ meur-meur a vloaz.

- Ra vo deuet mat ar plac'h yaouank-mañ en abeg dezhi hec'h-unan. Ha kanmeulet ra vezo Doue evit ar burzhud nevez-mañ. Un drugar e vo d' an itron he gwelout adarre.

Ha paot a dud er sal.

- Ar re a c'hortozed a zo deuet holl gwitibunan. N' oa diouer nemet eus te hag eus da c'hoar, Ategene Roudikne. Noz ar burzhudoù eo e gwirionez an noz-mañ evidomp. E-touez kemend-all a dud deredet eus a bell-vro hag eus a bell-amzer, n' eus hini ebet hag a vo warnañ arouezioù ar skuizhder, ar gwall-oad hag an ankou. Holl ez int yaouank ha yac'h, sart ha seder evel pa vefe anezho doueed.

- Nemedon.

Hag o tiskouez da Antoniakos va daou genvarc'heg :

- Kavare, ez madelezh e fizian va daou soudard. Kas-i da Di an Ostizidi, ha gra war o zro e-pad an noz-mañ.

- Hag e rin, eme Antoniakos. Evit da varc'h, lez-eñ amañ ; damantet e vo outañ gant Dera ha Genetta.

- III -

Va c'hoar a reas ul lamm d' an traoñ, ha divarc'hañ d' am zro a ris.

O klevout va marc'h o karnata hag o tifronkal, e ris un arsavig hag un hanterdro d' am fenn. Edo div grennardez daouzek pe drizek vloaz en e gichen ouzh e flourañ. C'hoarzhin gwalc'h va c'halon a ris, rak ar gwel anezho a lakaas da c'hwezhañ warnon ur gaouad-aezhenn flour-flour savet diwar bleuñvegou



heoliet-kaer va bugeliezh pell. Pa oan daouzek vloaz, o chom e dunon Vindobalia, edo o vevañ er vourc'h hag en un ti bras e-harz an dunon div blac'h kevoad din ha gwisket kempenn, merc'hed da gouerion, an eil blev melen-aour hir rodellek, eben blev melen-mell dirodell o div dremmet-kaer, lank ha korfet-brav, garet-koant, kerzhedet-skañv. Int-i eo a oa e-kichen va marc'h, nemet tra vurzhdus, n' oa c'hoarvezet kemm ebet enno. Me hepken a oa aet damvoal va fenn, ha war va choug e santen darn eus ar samm-oad a oa gant ar roue Dejotaros. Kregiñ a rejont e brid va marc'h, hag o tremen e-biou din hep va anaout, ez ejont e-barzh ar sal da lakaat va jav e-touez ar c'hezeg all. Mont a ris war o lerc'h hag e-pad m' edont o lakaat foenn ha kolo dirak va loen, e ris ur sell ouzh ar saliad kent mont e-barzh.

15

Pevarc'hornek-hir hag oaledet-kevatal en he c'hreiz eo sal-veur ar bodadegoù e dunon Vindobalia. Gant an hir a oaledad-se a dan-flamm hag a regez, e vez dispartiet ar baotred diouzh ar merc'hed. E-touez ar wazed ez anavezis da gentañ va zad hag e-touez ar merc'hed va mamm. Va zad a oa en e gichen ar muiañ-karet eus e vreudeur, deuet en-dro eus aouregi Iwerzhon-Veur da dremen Gouel ar Pevarzekved en hon ser. En tu-hont dezho, ha mentekoc'h c'hoazh egeto, edo an daou vreur d' am mamm, Moririx ha Rigovalos, hec'h eontr Argantodanis, melen-lanfas e vlev, he zad hag he zad-kozh, tad he zad, anezho ramzed melen-gell. Gant va eontr Moririx e oa an horzh troadet-hir a zo arouez e garg : pennvelegiezh Taranis. Diouzh tu ar merc'hed, e welis va c'henitervezed-kompez Kirata, merc'h Gabrilla, c'hoar va mamm, Skotta, Rigantona ha Sêna Donna, merc'hed Moririx, anezho merc'hed mentet-dreist ha kaer. An div verc'h da Skotta, brasoc'h ha kaeroc'h c'hoazh eget o mamm, a oa en o c'hichen. E-kichen va mamm e oa va moereb Gabrilla, hag uheloc'h er rezad mamm va mamm, houmañ ur wir vleuñvenn a gened. Tremen a rin hep envel ar gerent all a oa eno. Leun e oa kreiz ar sal ganto, hag un dudi e oa o gwelout.

Ha me ha mont davet dor ar sal vras, va c'hoar war va seulioù. Ha treiñ va fenn d' ober ur sell ouzh va c'hoar. Heñvel ouzh div steredenn c'hlas, edo he daoulagad o parañ warnon, hag e-touez ar merc'hed neuziet-brav a oa er sal, n' oa ket anezhi an hini zisterañ. Ma savas ennon un tamm lorc'h diwar zegas seurt kaerenn er vodadeg.

Da levier war an tolpad e oa Katuvellaunos, tad-kozh va mamm a-berzh he zad. Va c'hevarchañ a reas, kreñv e vouezh evel un tarz-h-kurun :

- Bez deuet mat, kar deomp, gouniz din. Ategene Roudikne !

Hag ar saliad da adlavarout hegarat :

- Bez deuet-mat !

Ha kerkent va eontr, pennveleg Taranis, o kas er vann e horzh, a zarc'havas gant ar gaoter arem war he genou dirazañ, seizh taol ponner, evit lidwareziñ va donedigezh er vodadeg.

16

- Piv ar plac'h yaouank a zo a-dreñv dit, Ategene ? eme va mamm, damizel he mouezh. Ha pried dit e vefe ?

C'hoant c'hoarzhin a zeuas din, rak va breur ha me, mezevellet ez vihan gant hoal ar pellderioù, n' omp bet biskoazh dedennet gant gwall-lifreoù ar sevel-tiegezh : prietaat ha bugaleañ. Derc'hel war va c'hoarzh a ris koulskoude, dre garantez hag azaouez ouzh va mamm, teneraet m'edon ouzhpenn gant he mouezh n' em boa ket klevet abaoe ur palefarzh-kantved ha gant an tamm strafuilh a verzen er vouezh karet-se.

- Pried din n' eo ket, emezon, kreñv va mouezh, d' an holl da glevout. N' eo ket ur wreg-pried a zegasan. Ur c'hoar d' am breur ha din-me eo, ur c'hoar bet dianket abaoe pell. Mamm, ar verc'h bet diframmet ez kriz diganez

gwechall...

Ur youc'hadeg o sevel drant gant ar saliad a-bezh a viras ouzhin da lavarout muioc'h. Koll he liv a reas va mamm. He daoulagad glas a baras ez virvidik war an hini a ambrougen. Trizaoliñ a reas skiltrus an arem glan gant horzh va eontr. Safar lirzhin hor c'herent ha dreist-holl gwel va mamm ha va c'hoar ouzh en em vriata kloz hag o pokat an eil d' eben gant daeroù a levez.

19-1-1947.

NOTENN. - Trugarekaat a reomp an Ao. GOEDGOUREDHEN a fizias ennomp ar skrid-mañ, o reiñ an aotre d' e embann.

brezhoneg gant Per Denez

## **BERENICE**

Diceblant mihi sodales, si sepulchrum amicae visitarem, curas meas aliquantum fore levatas.

Ebn ZAIAT.

AN dristidigezh he deus meur a zoare. Reuzeudigezh an dud he deus meur a stumm. O vont, evel ar ganevedenn, en tu-hont da vevennoù an dremmwel, ez eo ken niverus he livioù ha livioù gwareg-ar-glav - ken disheñvel ivez, ha c'hoazh toueziet ken start. O vont, evel ar ganevedenn, en tu-hont da vevennoù an dremmwel ! Penaos em eus gallet avat tennañ eus un dra genedek ur skouer a zigened ? - eus an arouez a beoc'h ur skeudenn a c'hlac'har ? Hogen e-giz ma teu, er vuhez, an droug eus ar mad, e c'hell ivez ar glac'har dont eus al levenez. Rak eñvor ur joa tremenet a zo anken evit an deiz-hiziv, pe neuze an enkreziou hag a zo o devez o orin er plijadurioù hag o defe gallet bezañ.

Va anv-badez a zo Egaeus ; anv va ziegezh ne lavarín ket. Padal n' eus ket er bed a gastell koshoc'h eget tourioù trist ha teñval va hendadoù. Ur ouenn tud klañv o faltazi a zo bet graet ac'hanomp ; hag e meur a dra sebezus - e stumm an ti e-unan en izelvosou ar sal-degemer vras - e pallenou-moger ar c'hambrou - e kizelladur ar bolzioù e sal-an-armou muioc'h c'hoazh en trepas e livadurioù kozh - e kinkladur al levr di hag, en diwezh, e doare souezhus-meurbet al levrioù o-unan, ez eus ouzhpenn a zo ezhomm evit diskouez pegen gwir eo ar pezh a lavarar.

18

An eñvorennoù kentañ eus va yaouankiz a zo stag ouzh ar gambr-se hag ouzh he levrioù - met eus ar re-mañ ne gomzin ket hiroc'h. Eno e varvas va mamm. Eno e voen ganet. Hogen koll amzer e vefe lavarout n' am boa ket bevet en a-raok - n' en deus ket an ene a vuhez kent. Ne gredit ket ? - ma, ne dalvez ket ar boan tabutal. Krediñ a ran-me, hogen ne glaskan ket lakaat ar re all da grediñ. An eñvor a viran, koulskoude, eus stummoù aerel - eus daoulagad speredel ha leun a ouiziegezh - eus sonioù plijus met tristedik - un eñvor na c'hell ket bezañ nac'het, un eñvor evel ur skeud, dispis, kemmus, diresis, distabil, hogen, evel ur skeud ivez, un eñvor n' em bo ket an tu da gaout an dizober dioutañ keit na ma vo heol va foell e barr e sked.

Er gambr-se e voen ganet. O tihuniñ evel-se eus ar pezh a seblante bezañ, hogen na oa ket, nozvezh hir an netra, hag oc'h en em gavout en un taol e-kreiz-kaer bro ar marzhoù - en ur palez a faltazi - e rouantelezhioù disuj ar preder manac'hel hag ar ouiziegezh - n' eo ket souezh eta ma paris war va zro ur sell sabatuet ha c'hoantus - ma tremenis va bugaleaj o kantren dre ved al levrioù ha ma kollis va yaouankiz o rambreal. Pezh a zo souezh avat eo ar morgousk a gouezhas, gant an amzer o vont e-biou - ha me, deut d' an oad-gour, o chom atav en ti-familh - pezh a zo souezh, a lavaran, eo ar morgousk a gouezhas war luskou va buhez, an doare ma voe eilpennet va menozioù boutinañ. Gwirionezioù ar bed a oa din evel gweledigezhioù, ha gweledigezhioù hepken, hag er c'hontrol e teuas ar faltaziennou direol eus bro an huñvreoù da vezañ n'eo ket danvez va buhez pemdeziek, met ar vuhez-se hec'h-unan, en he gwirañ hag en he c'hlokañ.

Berenice ha me a oa kendirvi, ha kevret e tremenjomp hor yaouankiz e kastell va zud. Padal, disheñvel e voe ar yaouankiz ganeomp - me klañvidik ha beziet en dristidigezh, hi skañv, heneuz ha leun a nerzh ; - dezhi ar baleadennoù ouzh tor ar grec'hienn, din al labour e peoc'h ar gambr-studi ; din

ar vuhez kevrinus e goudor ar galon, ar predererezh an donañ hag ar poaniusañ, dezhi ar c'hantren didrubuilh dre ar vuhez, an disoursi eus ar skeudoù du war ar wenodenn hag eus tec'hadeg didrouz an eurvezhioù o eskell bran. Berenice ! - gervel a ran hec'h anv - Berenice ! - hag eus dismantrou louet va eñvor e tihun, ouzh ar son, miliadoù eñvorennoù fromet ! A ! heñvel ouzh bev emañ bremañ he skeudenn dirazon, evel e devezhioù kentañ he drantiz hag he levezeg ! O ! Kened pinvidik ha padal sebezus ! O ! Boudig kuzhet e-kreiz koadeler gouez Arnheim ! O ! Dourvanez e-touez o feunteunioù ! - ha neuze - ha neuze, pep tra zo kevren ha spont, hag ur gontadenn na zlefe ket bezañ lavaret. Ar c'hleñved - ur c'hleñved n' oa tra d' ober a-enep dezhañ - a sammas he c'horf evel ur gorventenn, ken e welen, paret warni va daoulagad, arc'houere ar c'hemmañ ouzh hec'h aloubiñ, oc'h intrañ he foell, he boazioù, he spered, hag, en un doare sutil ha spontus, o cheñch zoken he fersonelezh ! Siwazh ! dont a reas an distrujer, ha mont kuit, met ar glañvourez - pelec'h e oa ? n' hec'h anavezen ket, pe n' hec'h anavezen ket mui evel Berenice.

19

E-touez ar rummad kleñvedoù iskis o doa kemmet korf ha spered va c'henitervez en un doare ken spontus, e oa unan, mantrus ha dalc'hus dreist ar re all : ur seurt barrad droug-uhel a echue peurliesañ gant ur sempladenn - ur sempladenn heñvel-meurbet ouzh ar marv, a zihune va c'henitervez diouti a-daol-trumm koulskoude. E-keit-se, va c'hleñved-me - rak lavaret eo bet din e tlean reiñ an anv-se dezhañ - e-keit-se va c'hleñved-me a washaas buan warnon hag, o treiñ en diwezh d' ur seurt albac'henn iskis a sebezus, e teuas kreñvoc'h-kreñvañ, betek e mestroniañ en un doare digomprenadus. An albac'henn-se, ha n' ouzon ket re penaos displegañ he doare, a oa ur gizidigezh klañvidik eus ar galloud speredel a vez anvet, gant an dregorfoniezh, galloud an evezhiañ. Sur on na gompren ket ar pezh a fell din lavarout ; met aon am eus, evit gwir, n' eus tu all ebet d' ober d' al lenner intent gant peseurt nerzh-prederiañ e c'helle va foell - evit ober gant gerioù eeun - en em reiñ da sellout ha da arvestiñ ouzh an traoù, ouzh ar re voutinañ zoken hag a oa er bed.

Rambreal hep skuizhañ e-pad eurvezhioù hag eurvezhioù, viñset va daoulagad ouzh un draig dister bennak war bajenn ul levr ; bezañ dalc'het va spered, e-doug un devezh-hañv a-bezh, gant ur skeud iskis o kouezhañ a-veskell war ar pallen-moger ha war al leur ; chom e-pad un nozvezh da sellout ouzh flammenn difiñv ur gleuzeur pe ouzh regez un tantad ; tremen devezhioù oc'h huñvreal diwar-benn frond ur vleunienn, lavarout hag adlavarout ur ger bennak betek d'ar son, o kouezhañ dibaouez em skouarn, bezañ diskarget eus pep talvoudegezh evit va spered, koll pep santadur a lusk hag a vezañ korfel dre c'hourvez hir amzer ha menel peurzifiñv : - setu aze lod eus ar c'hustumañ hag ivez eus an dinoasañ froudennoù a bake va spered, taget gant ur c'hleñved na oa den evit intent pe evit displegañ.

20

Ne garfen ket avat bezañ treuzkomprenet. An aked souezhus, dalc'hus ha klañvidik atizet ennon gant traoù ha n'o doa drezo o-unan talvoudegezh ebet, ne zle ket bezañ kammgemeret evit ar pleg da rambreal a gaver en holl dud, dreist-holl en dud hag a zo kreñv a-walc'h o faltazi. Ne oa ket zoken, evel ma c'hellfed krediñ, ur stumm kreñvoc'h ha gwashoc'h eus ar pleg-se : un dra disheñvel a-grenn he natur e oa. Ar rambreer a vez, hogos pep gwech, atizet e spered gant un dra n' eo ket didalvoud drezañ e-unan, gant un dra a vez kollet, tammig-dre-dammig, ar gwel dioutañ, en ur milendall prederiadennoù direol, ken e vez disoñjet a-grenn, e dibenn an huñvre dihun, karget a blijadur ar peurliesañ, an *incitamentum* en doa awenet anezhañ. Ganin avat, an dra-orin a veze atav dibouez, daoust ma kemere, em spered klañv, un dalvoudegezh direizh-meurbet. Nebeut a brederiadennoù a raen, hag an nebeut prederiadennoù-se a veze atav kreizennet war an dra e-unan. Ouzhpenn-se ar prederiadennoù ne vezent morse plijus. Ha pa echue ar rambre, an dra orin ne oa ket kollet ar soñj anezhañ, en enep dihunet en devoa atav em spered an aked dreist-natur hag a oa an arouez pennañ eus va c'hleñved. En ur ger berr, ganin ar pezh a labourer ar muiañ a oa, evel em eus lavaret dija, ar galloud-evezhiañ, ha gant ar rambreer ar galloud-poellata.

Al levrioù a lennen d' ar mare-se, ma ne servijent ket e gwirionez da atizañ an droug, a oa enno-holl, evel ma vo gwelet diouzh o anvioù, kalz faltazi ha kalz diboelegez. Soñj am eus mat, a-douez ur bern re all, eus levr kaer an Italian Coelius Secundus Curio, *De Amplitudine Beati Regni Dei* ; eus oberenn vras Sant Aoustin, *Keoded Doue* ; eus skrid Tertullianus, *De Carne Christi*, a zo ennañ ar frazenn iskis-mañ : « *Mortuus est Dei filius ; credibile est quia ineptum est : et sepultus resurrexit ; certum est quia impossibile est* », hag a leunias va fenn, e-pad meur a sizhun, gant prederadennoù poanuis-meurbet ha didalvoud.

Komprenet e vo neuze pegen heñvel e oa va spered, hag eñ lakaet brall ennañ gant traoù dister hepken, ouzh ar garreg a zo komz anezhi e skridoù Ptolemaios Hefestion : ar garreg a chome diflach-kaer dindan taolioù an dud, dindan skourjez ar gorventenn dirollet hag an tonnoù, hag a grene pa veze stoket outi gant ar vleunienn anvet miladenn. Hag a-se, daoust d'ar pezh a c'hellfe an dud dievezh soñjal, n'eo ket ar c'hemmoù bras degaset gant ar c'hleñved e spered Berenice a sachas va evezh, a zedennas ar galloud-prederiañ am eus klasket displegañ, gant kement a boan, petra oa anezhañ. E gwirionez, pa ne oa ket dalc'het va spered gant an droug, e soñjen tristidik en he gwalleur ha, glac'haret-bras gant diskar he buhezic kaer, e prederien don diwar-benn krizder un dismantr ken trumm. Ar prederadennoù-se avat, ne oa enno tra iskis ebet, ha pezh a soñjen a vije bet gallet soñjal ivez, e degouezhioù heñvel, gant forzh peseurt den all. Hogen, evel ma oa da c'hortoz, e oa dalc'het va spered klañv gant un dra nebeutoc'h pouezus met spontusoc'h kalz da welout - gant an doare iskriv ha saouzanus ma oa kemmet korf Berenice.

21

En amzer ma oa-hi ar gaerañ-holl n' em boa ket, sur-mat, he c'haret. Ganin avat, direizh evel ma oan, ne zeue morse an trivliadennoù eus ar galon, hag ar garantez a veze ganet atav er spered. En emc'houlou da strink an deiz - e skeud brizheoliet ar c'hoadoù da greisteiz - e didrouz va lenndi d' an noz, he doa fringet dirak va daoulagad hag em boa sellet outi n' eo ket evel ouzh ur boud eus an douar, met evel ouzh an diheverzadur eus ar seurt boud - n' eo ket evel ouzh un dra d' ober deoc'h estlammiñ, met d' ober deoc'h prederiañ - n' eo ket evel ouzh ur plac'h da garout, met un danvez da vagañ an diaesañ hag an diskiantañ poellataerezh. Ha bremañ - bremañ e skrijen pa dostae, hag e kollen va liv p' en em gave dirazon ; hag enkrezet-holl gant he stad izel ha truezus e trois da soñjal e kare ac'hanon abaoe pell, hag en un devezh a wallchañs e c'houlennis ganti bezañ va gwreg.

Un endervezh goañv - tost e oa neuze deiz hon eured - unan eus an endervezhioù klouar, sioul ha gleborek-se a vez ganet enno, daoust d' ar c'houlz-amzer, Halsion kenedek, e oan azezet, va-unan-penn a gave din, e-barzh va lenndi. Hag o sevel va daoulagad e welis Berenice en he sav dirazon.

N' oufen lavarout petra voe abeg an dra-se - pe va faltazi birvilhet - pe latarenn ar goañv - pe amc'houlou ar gambr - pe ar stignoù mezer louet a gouezhe en-dro d' he c'horf - met dispis ha krenidik e oa he zrolinenn. Ne rannas grik, ha me - evit netra er bed n' em bije gallet larout ur ger. Ur gridienn yen-sklas a redas a-hed va livenn-gein ; un enkrez ponner a waskas va bruched : ur c'hoant-gouzout birdivik a leunias va ene ; hag, o harpañ va c'hein ouzh ar gador, e chomis ur pennadig hep analat hag hep fiñval, peget outi va daoulagad. Siwazh ! Treut-spontus e oa he c'horf, hag en he stummoù ne chome roud ebet eus ar pezh a oa-hi bet. Hag en diwezh e kouezhas va selloù birvidik war he fas.

22

An tal a oa uhel, gwenn-meurbet ha sioul-souezhus ; ar blev, gwechall du evel jed, a guzhe o rodelloù melen-flamm an daouividig kleuz, a oa sebezus o doare e-kichen melkoni an dremm. An daoulagad a oa divuhez, dilufr, hag, a vije bet lavaret, diibil, ha daoust din va-unan e tistrois va fenn, en ur skrijañ, diouzh o sell skornet, hag e taolis va evezh war ar muzelloù treut ha roufennet. Digeriñ a rejont ; hag en ur mousc'hoarzh saouzanus e ster, e tiskouezjont din, goustadik, dent ar Berenice nevez. A youl Doue n' em bije morse gwelet anezho, pe ouzh o gwelout e vijen bet marv war an taol.

Trouz un nor o serriñ a strafuilhas ac'hanon hag, o sevel va daoulagad, e verzis e oa aet kuit va c'henitervez diouzh ar penn. Diouzh va fenn paour-me, avat, skeudenn disliv-spontus he dent ne oa ket aet, siwazh, ha ne dafe morse kuit. Kement tachadennig du a oa warno - kement arliv eus o amailh - kement skalfig en o c'hostez a oa bet trawalc'h eus he mousc'hoarzh berr evit o engravañ da viken em spered. Dre va eñvor o gwelen splannoc'h eget n' em boa o gwelet e gwirionez zoken. An dent ! An dent ! Amañ oant, hag aze, hag e pep lec'h, da vezañ gwelet ha touchet ; hir, strizh, gwenn-meurbet, gant ar muzelloù moan oc'h en em weañ en-dro dezho, evel er momed spontus m' am boa o spurmantet da gentañ. Neuze e teuas va albac'henn da vezañ ur gwir gleñved, hag en aner eo e stourmis a-enep d' he levezon iskis ha distrujer. En holl draoù hag a oa war va zro ne welen netra nemet an dent. Dezho em boe c'hoant, evel m' en devez un den foll c'hoant d' un dra bennak. An holl brederioù all, hag an holl gudennoù all a steuzias dirazo, din da sellout outo bepred. Int - int hepken a oa bezant dirak lagad va spered, hag int, en o gwirionez dibar, a zeuas da vezañ kreizenn va buhez spered. O derc'hel a raen e pep doare dirak ar gouloù. O zreiñ a raen a bep tu. Studiañ a raen kement tra iskis a oa enno. Prederiañ a raen war o stumm. Rambreal a raen diwar-benn an doare ma oa kemmet o natur. Skrijañ a raen pa roen dezho, dre va faltazi, ar galloud da santout ha da c'houzañv ha, zoken hep ar muzelloù war o zro, ar galloud brasoc'h c'hoazh da zisplegañ pezh a santent. Eus Mademoiselle Salle ez eus bet lavaret « *que tous ses pas étaient des sentiments* », hag eus Berenice e kredan startoc'h c'hoazh *que toutes ses dents étaient des idées. Des idées !* - A, setu aze ar soñj diot a zistrujas ac'hanon ! *Des idées !* A, setu aze perak em boa c'hoant dezho en un doare ken diskiant ! Dont a ris da santout na c'hellfen bezañ e peoc'h, na c'hellfen adkavout reizhder va foell nemet p' em befe anezho.

23

An abardaez a glozas warnon - an deñvalijenn a zeuas, a aloubas an ti hag a yeas kuit - an deiz a darzhas en-dro - adarre en em zastumas en-dro din skeudoù un eil nozvezh -- hag atav e oan azezet, difiñv a-grenn, er gambr dizarempred ; hag atav oan dalc'het gant va freder, boemet gant spes an dent, a chome ken splann dirak va daoulagad ma oa un euzh o gwelout, tro-ha-tro e sklerijenn hag e teñvalijenn ar gambr. En diwezh e tarzhas e-kreiz va huñvreoù ur garm a spont hag a enkrez ; ha neuze, goude ur pennadig, e teuas betek ennon un nebeut mouezhioù izel, gant klemmoù karget a boan hag a c'hlac'har. Sevel a ris diwar va c'hador hag, o tigeriñ unan eus dorioù al lenndi, e welis en trepas ur vatezh o leñvañ, hag a lavaras din dre he daeroù e oa-hi, Berenice - o paouez mervel. D' ar mintin e oa bet kemeret gant ur barrad droug-uhel ha bremañ, da serr-noz, e oa toullet ar bez eviti ha prientet pep tra evit an douaridigezh.

En em gavout a ris azezet el lenndi, adarre va-unan-penn. Seblantout a rae din e oan o tihuniñ eus un huñvre luziet ha fromus. Gouzout a raen e oa bremañ kreiznoz, ha gouzout a raen ivez e oa bet douaret Berenice diouzhtu goude kuzh-heol. Met eus ar maread spontus a oa etre kuzh-heol ha kreiznoz n' em boa reiz resis ebet. Ha padal, an eñvor anezhañ a oa karget a spouron - eus ur spouron seul spontusoc'h ma oa dispis, eus un enkrez seul efreizusoc'h ma oa digomprenus. Ur bajenn saouzanus e oa e levr va buhez, skrivet penn-da-benn gant eñvorennoù teñval, euzhus hag iskis. Eus va gwellañ e raen evit lenn anezho, met ne zeuen ket a-benn ha bep ar mare, heñvel ouzh ar spes eus un trouz marv, e kleven o tregerniñ ouzh va skouarn evel ur youc'hadenn skiltr ha yud laosket gant ur vaouez. Un dra bennak em boa graet - met petra oa ? A vouezh uhel em boa goulennet kement-se ouzhin va-unan, ha gant heklevioù ar gambr n' em boe ken respont : « petra oa ? »

War an daol em c'hichen e oa ur gleuzeur war enaou, hag ouzh troad ar gleuzeur ur voest vihan. Ar voest ne oa netra souezhus en he doare, hag alies em boa gwelet anezhi en a-raok, peogwir e oa da vedisin hon tiegezh ; penaos avat e oa deut eno, war an daol, ha perak e skrijen en ur sellout outi, sed na oan ket evit kompren. En diwezh e stouis va daoulagad war-du ul levr digor hag e welis ennañ ur frazenn islinennet : ar frazenn iskis met eeun skrivet gant ar barzh

Ebn Zaiat, « Dicebant mihi sodales si sepulchrum amicae visitarem, curas meas aliquantulum fore levatas ». Perak avat, o lenn anezho, e savas va blev a-bik war va fenn hag e skornas va gwad em gwazhied ?

24

Un taol skañv a voe skoet ouzh dor al lenndi hag ur mevel a dostaas, o vale war begoù e dreid. Ken disliv e oa hag un den o tont er-maez eus ar bez. E zaoulagad a oa dispourbellet gant ar spont ha, pa gomzas ouzhin, e krene e vouezh, izel, raoulet. Petra lavaras ? Un nebeut frazennoù a zihostas. Displegañ reas e oa bet klevet ur garm spontus e-kreiz zioulder an noz - o doa ar vevelien en em vodet - e oant aet da glask diouzh an tu ma oa deut ar son ; ha neuze e kemeras e vouezh nerzh ha from pa stagas da gontañ an doare eus ar bez digoret - eus ar c'horf dizremmet, paket en e liñselioù ha padal oc'h analat c'hoazh, o skrijañ c'hoazh, o vevañ c'hoazh.

Diskouez a reas va dilhad gant e viz : louzet e oa gant ar gwad hag ar pri. Digomz ha goustadik e kemeras va dorn : kignet e oa, evel krabiset gant ivinoù un den. Ober a reas din treiñ va fenn war-du un dra harpet ouzh ar voger ; - sellout a ris outañ e-pad un nebeut munutennoù - : ur bal e oa. En ur youc'hal e lammis war-du an daol hag e krogis er voest a oa warni. Ne c'hellis ket he digeriñ avat ha kement e krenen ma risklas a-dre va daouarn ha ma kouezhas war al leur, e-lec'h ma torras : ha diouti, gant un trouz sklentin, e ruilhas un nebeut binvioù da dennañ dent, mesk-ha-mesk gant daou dra vihan ha tregont, gwenn hag heñvel ouzh olifant, strewet amañ hag ahont war an daroù.

## AR VREURIEZH WENN E GWENGAMP

Evel m' en deus hen skrivet Sigismond Roparz, tad hon sonaozour brudet Gwilh Roparz, en e levr : *Guingamp, Etudes pour servir à l'histoire du Tiers Etat en Bretagne, 1859*, Istor Gwengamp a zo talvoudus kenañ e meur a geñver, pa ne vije nemet dre m' eo bet Gwengamp unan eus kêrioù kentañ Breizh o kaout frankizoù-kêr, reizhadur ha gwirioù dezhi hec'h-unan.

Derou kentañ ar frankizoù-se a savfe betek Konan IV (12vet kantved). Met gwelout a reomp anezho o resisaat hag o kreñvaat en amzer Pêr I ha Charlez Bleiz. Abaoe pell dija, e veze perc'hennet Gwengamp gant Duk Breizh e-unan, ha kompren a reer mat e vije bet roet da Wengampiz gwirioù ispisial en abeg d' o fealded d' an Duked. C'hwec'h kant vloaz zo, he devoa he c'hastell en e sav-sonn. Charlez Bleiz (+ 1364) en devoa bevet ennañ, ur chapelig dezhañ e-unan en devoa e-barzh, ha diwezhatoc'h e tlee servijout ivez da di-annez da Bêr II ha d' e wreg Franseza Amboaz. Distrujet eo bet, siwazh, e 1626, goude emsav Kaesar, duk Vendôme, a oa dimezet gant pennherez an Duk Merkeur.

Istor Gwengamp n' hall ket bezañ savet eta, hep na vije studiet emdroerezh reizhadurioù bourc'hizel ar vro. Met un abeg all hon eus da sellout tostoc'h ouzh istor Gwengamp e-keñver ar menozioù kevredigezhel e Breizh. Ar Vreuriezh Wenn an hini eo, stag ouzh pardon Itron Varia Wir Sikour, a zo bet en amzer dremenet, betek an Dispac'h bras e Bro-C'hall, ur c'hevren a gengarantez etre renkadoù ar Gevredigezh vreizhat en amzer gozh.

26

Diaes eo lavarout da begoulz e sav ar Vreuriezh Wenn. Seblantout a ra bezañ bet anvet da gentañ : *Diskibion Jezuz*, ha bezañ bet a-dal ar penn kentañ stag ouzh santual I. V. Wir Sikour.

Pêr II an hini eo en divije roet dezhi an anv a Vreuriezh Wenn, hag adstummet anezhi goude bezañ bet lakaet en he fenn evel Abad lik, e 1456.

Met petra eo abad lik ar Vreuriezh ? Evit hen displegañ eo ret din komz da gentañ diwar-benn mennad ha reizhadur ar Vreuriezh. He ger-stur a ro da anaout ar menoz en deus labouret d' he savidigezh : ar frazennig-mañ tennet eus Levr ar C'hrennlavarioù, ha displeget gant al latin : *funiculus triplex difficile rumpitur*, a welomp troet gant ar brezhoneg : fun tri neud a vec'h ez torrer. Met aez eo a gav din, adkavout dindan ar stumm yaouankaet-se, ar werzenn grennvrezhonek a vije bet : Fun tri gor a vec'h ez torrer. Ar fun-se, gant an niver tri, hini an Dreinded didorrus, mammenn a bep karantez, a zo arouez da unvaniezh an teir renkad eus ar gevredigezh vreizhat d' ar c'houlz-se : tud a iliz, noblañs ha trede urzh. Evel-se e felle d' an diazezeur e trec'hje etre ar vreudeur ar soñj e oant holl, n'eo ket hepken kenvroidi, met breudeur, soñj ma welomp ennañ broadelezh uhelaet ha startaet dre relijion.

Eeun a-walc'h e oa statutoù ar Vreuriezh. Dleet e oa d' an izili en em vodañ ur wech ar bloaz, evit gouel an Itron Varia Wir Sikour. Lidañ a raent a-gevret an oferenn a oa da vezañ lavaret gant abad-beleg ar vreuriezh ; ha goude-se e raent a-stroll ar prosesion.

Dleet e oa dezho ivez dont d' ar vodadeg prevez, lec'h ma veze kompezet kement diaesamant a c'helle bezañ etre ar vreudeur, ha stardet an unvaniezh etre an teir urzh. Advotet e veze neuze evit envel an abaded ; unan anezho den a iliz, egile den lik. Hemañ a veze kemeret a bep eil tro etre tud an noblañs hag an trede urzh. Enskrivet e veze anvioù an diskibion nevez, ha divodet e veze an dud goude bezañ sinet war gaier ar c'huzuliadegoù.



An Abad-beleg a oa dleet dezhañ lavarout an oferenn evit ar genvreudeur bep lun eus ar bloaz, hag oferennañ ivez ur wech evit kement hini a varve. Pezh a oa karantez speredel ha karg ponner a-walc'h.

Met taolomp pled muioc'h ouzh an abad lik, stag ouzh an abad-beleg ; d' ar c'houlz-mañ eus ar Sened Meur hag eus an Istor ma komzer kement-ha-kement eus lec'h al laiked en Iliz, e rankomp lavarout o devoa gwechall o lec'h muioc'h eget bremañ en aferioù ar relijion, eo dreist-holl e-pad an 19vet Kantved int bet lakaet er-maez eus renerezh an Iliz, zoken evit pezh a sell ouzh he madoù. Evel-se e Bro-C'hall eo lezennoù nevez an Inventorioù (ar renabloù) o deus skarzhet kuit ar pezh a veze anvet Jeneral ar Barrouz, da lavarout eo ar strollad laiked a soursie ouzh madoù ar parrezioù...

27

Hep mar ebet, bezañ un abad lik e penn ar vreuriezh he deus bet ur pouez bras e buhez ar vro, ha kompezet meur a ziaezamant etre ar vreudeur. Ha pa welomp e 1456, Pêr II o tont da abad lik, n'eo ket diaes soñjal peseurt benveg e c'helle bezañ etre e zaouarn evit stummañ an unvaniezh e kevredigezh Vreizh endro dezhañ.

Lavaromp ivez ne veze ankouaet netra e statutoù ar Vreuriezh ; kement disantadenn e-keñver ar statutoù a veze kastizet gant un tell arc'hant da vezañ paet d'ar vreuriezh evit sevenidigezh he labour.

A-walc'h e vije kredet ganimp ne veze, dreist-holl d' ar c'houlz-se, nemet paotred oc'h ober ar Vreuriezh. Evel m' hen gwelomp gant Lizher ar Pab Paol V eus an 19 a viz Ebrel 1619, o c'hrataat grasoù speredel d' ar Vreuriezh, e veze e-barzh kenkoulz merc'hed ha paotred. « Peogwir, emezañ, ez eus en iliz-parrez an Itron Varia e kêr Gwengamp, eskopti Treger, abaoe pell amzer, ur vreuriezh a gristenion fidel, ken merc'hed ha paotred, a renkad disheñvel, bet savet en reoliek dindan anv ar Werc'hez glorius Vari, hag anvet ar Vreuriezh Wenn, dre ma vennomp reiñ berv d' an devosion hag aliañ pep unan da vezañ enskrivet er vreuriezh... »

Testenn bouezus a ziskouez ne oa ket bet digresket pouez na levezon ar Vreuriezh gant stagidigezh an Dukelezh ouzh kurunenn Bro-C'hall. Chom a rae mennad ar Vreuriezh bev bepred, ha marteze kreñvoc'h peogwir e veze tu da gaout dindan Roma ur Vuilh a induljañsoù.

Petra roe an diell ? Induljañs leun evit ar re a 'n em enskrive er Vreuriezh da zeiz o antre enni, un induljañs leun ivez da zeiz o marv, hep kontañ induljañsoù all gant gweladenniñ iliz Itron Varia Wir Sikour da zeiz ar pardon ha d' an deizioù gouel all eus ar Werc'hez.

Met kement-mañ dreist-holl a ziskouez mennad ar Vreuriezh : induljañsoù a veze roet ivez gant ar Pab evit kement oberenn a drugarez, e-keñver ar re vev hag ar re varv a c'helle bezañ graet gant tud ar Vreuriezh.

28

Gant se n' eo ket souezhus eta e vije deuet ar Vreuriezh Wenn da vezañ anavezet evel tra a bouez dre ar vro a-bezh, ha m' en divije gant se ivez pardon an I. V. Wir Sikour kemeret ton ha braventez muioc'h-mui. Met evit kompren gwelloc'h petra oa ar Vreuriezh hag ar pardon-se evit hon tadoù, eo ret lenn aketus un teul all a gavomp e dielloù kêr. Kontañ a ra penaos e-pad seziz Gwengamp e 1488, e oa bet graet gant bourc'hizion Gwengamp un emvod evit gouzout penaos en em zifenn. Ha n' helle ket an dud en em glevout kenetrezo ; pa soñjas unan eus tud ar C'huzul pediñ an Itron Varia, patronez kêr, evit ma teufe da sikour he glad. Setu m'en en gavas buan ar c'huzul a bezh a un soñj, a un galon. En eñvor eus an dra-se, eme an teul, e vez graet ar brosesion e-pad an noz, e gouloù an etivi, ar baotred o vont noazh o zreid, ar merc'hed gwisket e gwenn, da heul o banniel skeudennet warni ar Werc'hez gant ar ger-stur : *Funiculus triplex...*

Hag-eñ n' hon eus ket aze un heklev eus ar pezh a lavar ar werz kozh *Sesiz Gwengamp*, o komz eus ar Werc'hez o reiñ brall d' ar c'hleier hag o tieubiñ he zud eus ar soudarded enebour. Meur a wech moarvat, en degouezhioù trubuilhus an istor, ez eus bet graet gouestloù da Itron Varia Wir Sikour, evit ma teufe da zifenn ar geodidi. Renabloù ar 17vet kantved hag an triwec'hvet a zoug anv eus an taolenn en arc'hant, o skeudenniñ kêr Wengamp ouzh troad an Itron Varia, a vez anvet ganto : Taolenn ar gouestl d' ar Werc'hez. Miret e veze d' ar c'houlz-se dindan ar Porched.

Abaoe an amzer kozh-se eo bet diskaret lodennoù krec'h ar C'hastell, leun a soñjoù istorel, ha savet en e greiz un ti-skol divalo a gomz d' ar vugale eus Bro-C'hall hag eus kehelerez Marianna, diskaret eo bet ul lodenn vras eus ar mogerioù, ne chom ken anezho nemet tammoù distumm a-walc'h. N' eus ken eus ar Vreuriezh Wenn nemet ar soñj anezhi.

Koulskoude sichennoù an tourioù a zo bepred aze o c'hortoz marteze bezañ adsavet, ar mogerioù a c'hellfe bezañ raparet, ar Vreuriezh Wenn a c'hellfe adveañ. Moarvat ne vije ket er stumm m' eo bet gwechall-gozh dres, n' eus ken teir urzh a gevredigezh evel m'eo bet, met ur gudenn a gevredigezh a zo bepred, ur gudenn a unvaniezh broadel dindan gwarez ar Werc'hez e sklerijenn Aviel ar C'hrist. Ha perak ne vefe ket un deiz adsavet an dra-se ?

29

Huñvreal a ran a-wechoù en ur Vreuriezh Wenn nevez a strollfe an holl dud a volontez vat e Breizh, a rafe bep bloaz marteze, evel ma vez graet e Bro-C'hall ur c'hendalc'h kevredigezhel diwar-benn ar gudenn-mañ pe ar gudenn-se... pe marteze gwelloc'h c'hoazh a vije mammenn strolladoù bihan a bedenn hag a genskoazell evit silvidigezh ar bobl hag ar Vro. Met daoust ha n' eo ket Unvaniezh Speredel Vreizh pennherez wirion d' ar Vreuriezh Wenn ? Daoust ha n' hellfe ket ober koulz hag hi, mar bez bolontez Doue... hag hini ar Vretoned ?

N' hellan ket adlenn gwerz *Sesiz Gwengamp*, hep santout enni hiraezh hor pobl, an hiraezh d' ar frankiz kollet gant skeudenn an Dukez Anna, a zo seul souezhusoc'h ma seblant ar werz evit gwir komz eus seziz 1591 gant priñs de Dombes ; hag ivez an hiraezh d' un dieubidigezh dre skoazell ar Werc'hez.

An hiraezh-se a vez bepred oc'h annezañ hor c'halonoù. Sezizet maz omp gant an nerzhioù enebour, treitouret en diabarzh. Chom a ra dimp esperiñ bepred ha pediñ evit ma teuio an deiz ma vo roet gant ar Werc'hez hec'h-unan, deut d' hor sikour, brall d' ar c'hleier, pa dec'ho kuit an estrañjourion.

(Prezegenn evit Bodadeg U. S. V. e Gwengamp, 15/11/1964.)

## **AL LENNEGEZH E BREIZH KANT VLOAZ 'ZO**

EVIT GLOAR DOUE HA MAD AR BOPL

Setu ama douetus bras kenta cazeten zo bet skrivet e brezonec

EVELSE e kroge, kant vloaz 'zo, « dessadorn 4 C'huevrer 1865 », niverenn gentañ FEIZ HA BREIZ. Sellout a ran gant doujañs ouzh dastumad ar bloavezh kentañ-se, diaes-tre sur-mat da gavout bremañ en e bezh. Eizh pajenn moulet war paper start a-walc'h, ment 32 X 22. Ar c'houmanant a gouste 6 lur ar bloaz, an niverenn daou wenneg. Gallout a c'helled koumanantiñ e ti Salaün, straed Kereon, pe straed ar Gigerezh, e ti Kerangal, ar mouler. Ar pennadoù hag al lizhiri a veze da gas d' an ao. beleg Morvan.

Ar gazetenn a oa, eveljust, etre daouarn Eskopti Kemper, renet d' ar c'houlz-se gant an Ao. 'n Eskob Serjent. Tad " Feiz ha Breiz " a oa, evit gwir, ar Vikel vras, an Ao. LEZELEUC, bet ganet e Kastell Paol d' an 30/6/1814, hag a voe diwezhatoc'h Eskob Autun. Moarvat ne skrivas ket kalz en e gazetenn, evitañ da vezañ ur brezhoneger dispar ; n' eus forzh penaos, eo diaes gouzout piv a skrive en niverennoù kentañ, peogwir n' eus anv skrivagner ebet ; un tammig diwezhatoc'h e vo merket pennlizherennoù hepken e traoñ ar pennadoù, ha tamm-ha-tamm e teuio anvioù pe lezanvioù an oberourion.

Koulskoude, e c'heller bezañ sur eo an Ao. Morvan e-unan en deus skrivet al lodenn vrasañ eus testenn an niverennoù kentañ. Goulven MORVAN, ganet er Forest Landerne e 1818, a zo bet rener " Feiz ha Breiz " betek 1875. Aet eo neuze da vanac'h, ha p' eo moarvat e 1891, e oa Priol Abati an Drapaded e Timadeug. Skrivagner fonnus, en deus savet meur a levr a relijion, en o zouez *Scol ar Maro mad*, embannet en hevelep bloaz 1865, hag ur barzhoneg hir (tost da vil gwerzenn !), *Argad Aberwrac'h*.

31

Ar sinadur kavet an aliesañ goude-se a zo hini ur MORVAN all, Gabriel, a oa d' ar mare-se kure e Plouvoger. Eñ eo en deus skrivet er gazetenn adalek an niverenn gentañ pennadoù anvet : *Ar Fals Doktoret hag ho Lavariou*, a zo bet embannet e stumm ul levr e 1885.

Pal ar gelaouenn nevez a oa merket sklaer war an talbenn :

*Kelou a bep bro ha kenteliou war bep tra, digasset hep sul da gemment Christen zo e Kerne, e Leon hag e Treguer.*

Ar pennad digeriñ a lavare an traoù ken sklaer all :

*Ar c'hazetennou gallec so nebeut anezo hag a ve mad da lacat etre daouarn an oll. Eleac'h beza kelennet ganto var ar mad, e c'halfet beza poulzet d'an droug. Eleac'h deski ar virionez e c'halfet deski gueier.*

*Nil novi sub sole* : da vihanañ e wele an dud hag ar veleion d'ar mare-se pegen noazhus e oa peurvuiañ d' ar Vretoned ar pezh a veze degaset dezho gant Pariz. Fellout a rae d'ar gelaouenn lakaat an dud da glevout ar wirionez, hag hi nemetken, da anaout o gwirioù hag o deverioù, da studiañ istor Breizh hag hini he Sent, kement-se en un doare aes ha plijus ; marvailhoù, traoù fentus ne vezent ket ankouaet, rak gouzout a raed e oa mat d' al labourer en em ziduiñ da sul pe da noz.

Hogen, arabat lavarout tra ebet, « *hag en defe an ear da veuli pe da vlam*

ar re hor gouarn », en ur ger, ober politikerezh. Koulskoude n' eo ket diaes gwelout pegen breizhgar e oa spered ar gazetenn ; ur bern skouerioù a c'hellfed reiñ eus kement-se.

Petra ' gavomp en niverenn gentañ ? Derou Buhez an Tad Noblez, hag ivez " Ar Fals Doktoer " hon eus komzet uheloc'h diwar o fenn. Un istor skouerius " *Penaus e servich avechou an archerien d'an den evit choas eur stad a vuez* " ; troidigezh ur vojenn " *Ar Miliner, he Vap hag an Azen* " ; ur barzhonegig " *Ar Feiz hag ar Brezonek* ", oc'h echuiñ evel-hen :

Va sonjezon a vezo  
Eur bedenn evit va bro ;  
Ma vezo ennhi nos-deiz  
Ar brezonek hag ar feiz.

32

Kavout a raed ivez en niverenn keleier a bep seurt, un nebeut linennoù diwar-benn Sent ar sizhun, krenn-lavarioù o sellout ouzh miz C'hwevrer, hag alioù evit mirout ar yec'hed (er wech-mañ e oa istor Jenner hag an doare da ziwall ouzh ar vrec'h).

Gant an niverennoù da heul, e teuo " Levr al Labourer ", e gwerzennoù, Istor Santel, buhezioù an Tad Maner ha St Matilin, istor Santez Anna Wened, hag all... hep ankouaat ur pennad eus buhez St Loeiz, savet gant Charlez de Gaulle !

Deskiñ a reer ur bern traoù o lenn " Feiz ha Breiz " kant vloaz 'zo... Pegen marc'had-mat e oa ar vuhez en amzer-se ! 14 pe 15 lur ar gwinizh, 7 pe 8 lur an heiz, ha 2 lur 50 an avaloù-douar (ar sac'had 50 kg eveljust). Ha koulskoude, fall-tre e oa bet an eost er bloaz-se, un hanter hepken eus ur bloavezh ordinal. Ar c'holera a rede dre ar vro ha ne ouied ket ober kalz a dra outañ, nemet evañ « distrempoù » graet gant tro-an-heol (kramamailh), malo pe ampez gwenn. D' ar 4 a viz Kerzu, e voe ur gorventenn spontus war Benn ar Bed : ar mor dirollet a veuzas e Penmarc'h ouzhpenn daou c'hant devezh-arat. Peñseoù a voe a vil vern ; an traezh a voe goloet gant orañjez ha moc'h beuzet.

Degemeret mat-tre e voe ar gelaouenn gant ar Vrezhonegerion, peogwir e c'honzas daou vil koumananter en ur ober eizh miz hepken. Peadra da lakaat avi e kalon renerion hor c'helaouennoù a-vremañ !

Lennet e veze er broioù tramor ivez ha betek Oslo (Kristiana d' ar mare-se), lec'h ma veze kenteliet studierion ar Skol-Veur war ar yezhoù keltiek. Pezh a lakae Charlez de Gaulle da fuloriñ o soñjal ne oa e Bro-C'hall tra ebet evit yezh hon hendadoù. Koulskoude e oa bet, nebeut a-raok, goulennet gant P. G. de Dumast (1) ma vefe krouet div gador e Skolaj-Veur Bro-C'hall evit respont d' an ezhomm-se.

" Feiz ha Breiz " a rae berzh eta, ha meulet e veze zoken gant an dud desket, a wele mat peseurt levezon brizius a c'hellfe kemer war ar bobl. Anat e oa d' an holl ar spered, brogar ha kristen a verve en he skrivagnerion. Hogen, rebechoù a reseve en abeg d' ar yezh implijet ganti. A-vec'h ma oa deut er-maez an niverenn gentañ ma klemme Leon Bureau : Perak, emeze, skrivañ **d'ezhan**, ha n' eo ket **dezan**, **hou-ma**, ha n' eo ket **homa** ? Perak dilezel ar **k** evit implijout ar **c** ? E berr gornzoù, perak lezel da gouezhañ reizhskrivadur ar Gonideg ?

(1) L'Enseignement supérieur tel qu'il est organisé en France et le genre d'extension à y donner (Paris 1865). 33

33

Charlez de Gaulle avat a damalle da " Feiz ha Breiz " estreget fazioù reizhskrivadur. En ur pennad hir ha talvoudus (2), e rae e seizh gwellañ evit difenn glanded ar brezhoneg. Rebech a rae ouzh ar gelaouenn trefodachoù evel *gerant*, *abonamant*, *librer*, ha dreist-holl *chabist*. Ha perak komz eus *Mathurin*,

pa gave dezhañ eo kalz gwelloc'h ar stumm *Matelin*.

Displijet e oa ivez o welout pegen liesseurt e veze ar stummoù implijet gant ar gazetenn er yezhadur koulz hag er reizhskrivadur. N' heller ket gouzañv, emezañ, ur seurt dizurzh spontus. Petra bennak a vije bet gwechall, soñjomp bremañ ouzh an dazont hepken ; ankouaomp rendaeloù kozh ha labouromp a-gevret evit brasañ mad ar Vro. Bep bloaz e kresk niver al levrioù skrivet er reizhskrivadur klasek ; an trec'h a seblant bezañ tonket dimp a-benn ur pennad amzer a dleomp berraat ar muiañ posubl... »

D' ar pennad-se e respontas an Ao. Joubiouz, evit difenn eveljust, gwirioù ar gwenedeg ; hen ober a reas en un doare poellek ha seven. E lizher, hag a oa kaset da Gervarker, a echue gant ar c'homzoù fromus-mañ : « Gwelout a rit, va mignon ker, penaos ez on dedennet c'hoazh gant hor yezh, daoust din bezañ tri-ugent vloaz bremañ. Da veur a hini, e seblanto kement-se bezañ mibiliachoù, aon am eus. Hogen, ma kav d' ur beleg eo stag kudenn ar yezh ouzh hini ar feiz hag ar vuhezegezh, daoust hag e c'hellfe neuze bezañ rebechet dezhañ e c'hred evit ar yezh ? »

Feiz ha Breiz " kozh a vevas tost da ugent vloaz ; echuiñ a reas gant niverenn ar 26/4/1884. An eil rummad, hini an Ao. Perrot, a vo kalz padusoc'h ; lazhet eo bet gant fallagriezh reoù 'zo ha laoskentez reoù all. Hogen n' eo ket chomet dishêr, a-drugarez Doue, peogwir e c'hellomp kontañ dija 41 niverenn eus BARR-HEOL WAR AR FEIZ HA BREIZH. Spi hon eus evelato ne glasko ket e Rener en em heñvelaat ouzh e ziaraoger, Goulven Morvan, betek mont da Drapad e Timadeug, d' e dro !

(2) Le Mouvement de Renaissance de la Littérature Bretonne -" Revue de Bretagne & de Vendée ", Here 1865.

34

E 1865, e teuas er-maez eus gwaskoù J. Haslé, e Montroulez, barzhonegoù F. An UHEL, *Bepred Breizhad*, gant an droidigezh c'hallek : 27 barzhoneg kinniget, hini ha hini, da vignoned an oberour, barzhed int-i ivez peurvuiañ.

N' eo ket da lavarout e vije al levr barzhoniezh awenet dispar ; da vihanañ ez eo brogar ar menozioù, hervez doare an amzer, da lavarout eo un tammig klouar ha divlaz evidomp-ni !

Holl Vreizaded a c'hrouienn vad,  
Klewet eur gir, tud Breiz-lzell,  
- Da chomo pep unan Breizad,  
Dre holl, bepred, beteg merwell ! -

Kregiñ a ra al levr gant ar poz-se, hag ec'h echu evel-hen :

Keit 'vo gerrek en aod ar morr,  
'Kano 'r barz-koz war dreuz he zôr,  
Bepred en iez-koz ann Armor !

Kristen ivez e seblant an Uhel bezañ c'hoazh d' ar c'houlz-se. Gwelit da skouer " Bedenn ar Mederrien euz ar Mintin ", enni un droidigezh vrav eus an *De Profundis*, a zo bet advoulet gant SKOL, niv. 9, 1960, Kanaouennoù Santel.

En e gentskrid gallek, e fellas d' an Uhel menegiñ un nebeut komzoù kaer bet skrivet gant e eontr ar C'hwero (Le Huérou), oberour an " Institutions Mérovingiennes et Carolingiennes " : « Dizistrujus eo an hengounioù a vroadelezh : a-wechoù e c'hellont bezañ distreset pe veuzet e-kreiz ar gorventenn, met ne varvont morse hag e teuont bepred a-benn da adsevel eus an islonk ; bepred e teuont adarre war-c'horre. Un arouez eo an dra-se eus un divarvelezh a zo tonket dezho ».

\* \* \*

War an hevelep pazenn, kichen-ha-kichen, emañ ar brezhoneg hag ar galleg e *Bepred Breizad*. El levr embannet gant Kervarker, er bloaz 1865 ivez, e ti Didier, Paris, a oa ar brezhoneg distaolet e traoñ ar bajenn ha moulet e lizherennoù bihan-tre. Ar plas a enor a oa roet d' an droidigezh evel ma 'z eus bet graet, siwazh, re alies e levrioù seurt-se. Ha koulskoude pebezh mouladur kaer hini *Burzud Bras Jezuz, Le Grand Mystère de Jésus ! Bras e vent, brav ar paper hag al lizherennoù*.

35

Savet e oa bet al levr gant Kervarker diwar daou vouladur kozh :

Unan gant Eozen Quilleuere, e *quichen an Pont bihan, en assign an du ; en rue hauet la Bucherie (1530)*.

Egile gant Jord Allienne, Montroulez, 1622, « *corriget hac amantet gant Tanguy Gueguen, boelec hag organist, natiff a Leon* ».

Pegen anaouedek e tleomp bezañ da Gervarker a doulle hent evel-se d'ar brezhoneg-krenn dilezet betek neuze gant an dud desket e Breizh hag e Bro-C'hall. Gwir eo, e oa bet embannet dija *Buhez Santez Nonn*, e ti Merlin, Paris, 1837, gant an Ao. Beleg SIONNET, ar c'hentskrid gantañ hag an droidigezh gant ar Gonideg. Met fall a-walc'h e oa bet adskrivet pe adlennet an destenn ; ne oa ket disi, pell a se. Kervarker en devoa studiet pizh *Buhez Santez Nonn*, eveljust. Ar skouerenn a zo hiziv etre va daouarn, hag a zo bet prestet din gant Maodez Glanndour, a zo hini Kervarker ; merket en deus e anv war ar bajenn gantañ ; aes eo anavezout e skritur moan ha mistr.

Klask a reas ober gwelloc'h oc'h embann *Burzud Bras Jezuz*, ha ne c'hwitas ket war e daol kement ha ma plijfe da Fanch Gourvil hol lakaat da grediñ, pa varn al levr en e Dezenn, gant e vadelezh kustum.

Talvoudus-bras eta ez eo bet al levr e-keñver ar yezh hag al lennegezh : ul levezon bouezus en deus bet war studi ar c'hrennvrezhonek : un diaraoger eo bet Kervarker war ar poent-se ivez.

Muioc'h a zo c'hoazh e *Burzud Bras Jezuz* : feiz ha karantez pobl kristen Breizh, o'n em zisplegañ gant troioù kizidik meurbet a-wechoù, en desped da stern strizh gwerzaouriezh an amzer-se.

Gwelit an diviz etre Jezuz hag e Vamm, ken hael ha tener war un dro. Selaouit klemmvan ar Vadalen, pennfollet gant he glac'har o klask Jezuz el liorzh. Ha marteze e reot evel hon tadoù :

Ann dud az a enn eur gana  
Hag a zistro en eur oela. (1)

(1) *Burzud bras Jezuz*, p. LXXXVI.

36

Hag aotreet e vefe din bremañ teurel ur sell war al lennegezh c'hallek e Breizh kant vloaz 'zo ? Ne seblant ket kinnig dimp kement a draoù a-bouez hag an hini vrezhonek.

P' am bo lavaret deoc'h e teuas neuze er-maez ul levr, barzhonegoù ha kontadennoù mesket, gant Hipolit VIOLEAU (*Histoires de Chez nous, Récits bretons*) n' ho po ket c'hoant moarvat da glask muioc'h al levr-se. Ha koulskoude ez eus ennañ pajennoù bet skrivet gwechall gant an Dimezell de La Fruglaye (merc'h-vihan La Chalotais) hag a dalvez ar boan bezañ studiet ganimp ur wech all.

P' am bo meneget ouzhpenn-se barzhonegoù all, *Révélations Poétiques*, gant an Itron Penker, barzhez hollvrudet Lannilis, n' em bo ket graet un eost fonnus.

Gwir eo en deus savet Jul VERNE e 1865 ur romant nevez " ur veaj e kreiz an douar ", met hemañ n'eo ket, am eus aon, ken mat ha ken brudet ha reoù all bet skrivet gant e bluenn lemm. Gwir eo ivez en deus savet Edouarz SIOC'HAN de KERSABIEG, ur vuhez eus Franseza Amboaz, dugez Vreizh, met al levr-se a zo bet dic'hizet buan, dre m' eo bet heuliet prestik goude gant ur Vuhez all e div levrenn, skrivet gant an Ao. Beleg RICHARD, a zo deut diwezhatoc'h da vezañ Kardinal Arc'heskob Paris.

Gwall nebeut evel ma welit, e-keñver an nevezintioù bras e brezhoneg hon eus komzet diwar o fenn. A-benn ar fin, n' eus ket kalz a dra a vefe kemmet e Breizh abaoe kant vloaz, hag ar pezh a welomp bremañ a oa dija gwir d'ar c'houlz-se. Meskaj a oa gant an doare-skrivañ, ha tud fin a-walc'h evit ober kentel poellek. Dihun e oa ar gwir vrezhonegerion ha mouget a-walc'h spered ar c'hallegerion.

Un diforc'h bras a zo bremañ koulskoude. Ar skrivagnerion vreizhat ne c'houlennont ken digant un droidigezh c'hallek eus o oberennoù degas dezho prizioù lennegel, hervez, pe un tammig brud a netra. Evel ma c'hortoze an Uhel meuleudioù digant Sainte Beuve ! Nann. N' o deus ket kalz a lennerion evit bremañ, marteze. Da vihanañ, ez eo deut ar brezhoneg da vezañ mestr nemetañ evit brezhonegerion emskiantek an Emsav.

Ha mat-dispar eo an dra-se.

## AN DOURIG MAT

Kentañ ma klevis anv eus an " dourig mat ", e oan pevar bloaz bennak, ouzhpenn tri ugent vloaz zo abaoe. Emedon war ar maez e ti va zud, kouerien vihan anezho, kalz bugale dezho, leizh an ti a bennoù berr. Ne veze ket meurlarjez du-mañ div wech ar bloaz, evel am eus klevet kanañ. Ne veze prenet netra da zebriñ, hoalen ha sukr evit boued ar vugale. Bara heiz-winizh pe segal-winizh, aozet er gêr. Kig-moc'h, bloneg hag amann, dour ha laezh diennet da evañ ha c'hoazh feunteun an dour mat a oa pemp kant metrad eus an ti. Soubenn da zijuniñ, yod da greisteiz pe ragout, krampouezh d' ar gwener. Ha da goan a-hed ar bloaz e veze avaloù-douar poazhet dre an dour hepken. Yod gant sukr pe voued-laezh d' ar vugale yaouankañ.

Dibaot-tre e oa ar frouezh, dre ar vro, nemet per hag avaloù garzh, kistin, kraoñkelvez, mouar, lus ha mesper. A-wechoù e prene hor mamm ur wenegad madigoù, d' ar sul er vourc'h. Un ugent bennak a veze gwerzhet evit ur gweneg. Setu un darvoud a bouez ha peadra da laouenaat ar « ribitailh ». D' an Nedeleg ar vugale vrasañ a brene kouignoù ar Pellgent da rannañ etre an tiad, kraoñ pe gistin a gavemp en hor bouteier lakaet er siminal an derc'hent. Da ouel Nedeleg c'hoazh pe da Gala-bloaz e prene hon tud un aour-aval bennak, unan da rannañ etre pemp pe c'hwec'h bugel, pe ouzhpenn zoken. A-wechoù ne veze ket azv ar frouezh-se, debret e vezent daoust dezho bezañ trenk-ki. Ha meur a wech e save bec'h diwar-benn ar bluskenn, ma lak an dour anezhi an daoulagad da ouelañ hag a ro c'hwec'h-vat pa vez miret da sec'hañ. Setu aze c'hoazh diduamantoù ne oant ket pemdeziek.

38

Bremañ pa ouezit gant petra e veze herlinket hor staoñ e vo aesoc'h d' al lenner muzuliañ c'hwekter ha talvoudegezh an Dourig mat. Kaset al loened er-maez, aet an dud vras d' ar park hag ar vugale goshañ d' ar skol, ne chome er gêr nemet hor mamm gant ar pennoù-berrañ, da lavarout eo ar vugale yaouankañ. Neuze, a-wechoù, a-wechoù hepken, arabat soñjal e veze kemend-all bep sizhun na zoken bep miz, er goañv, dreist-holl pa veze yen an amzer hor mammig a lavare dimp : « Ma vezit fur va bugaligoù, bremaik ma a roio deoc'h bep a vanne dourig mat. Gant ma viot fur, keta, ha gant ma ne rannot grik da zen ». Ne oa ket ezhomm da c'hortoz ar respont : « O ya mammig, » emezomp a-gevret. Che ! na pebezh frealzidigezh ! emedomp o vont da gaout dourig mat. Un evaj ne oa anezhañ moarvat nemet er baradoz. Nag e tegase-heñ tommder d' hon izili ha laouenidigezh, war hor min ! Ha seul welloc'h e oa c'hoazh, dre ma ne veze ket roet d' an holl diad. Ni hepken ar pennoù berrañ hon deveze an dourig mat gant hor mammig. Ar re all daoust pegen karet e oant moarvat ne oant ket dellezek da dañva evaj an doueed. Petra hon defe ket ni graet evit plijout d' hor mamm garet hag evit tañva un nebeut lonkadennoù dourig mat ? Nag e fringemp da c'houde. Bremañ p' eo boazet ar vugale da gaout kement a vadigoù ha pep tra d' o choant n' eus hini anezho gouest da brizout an dudi hag al levenez a veze hor re, tri ugent vloaz zo, gant hon dourig mat.

Che ! va zud kaezh, me gave din n' em boa netra da lavarout deoc'h ha ne ouezit ket c'hoazh petra eo an dourig mat. Feiz, un dister a dra evit ar begoù figus a zo bremañ ac'hanoc'h. Hon dourig ne oa anezhañ nemet ur banne kafe evel ma ouied hen ober tri ugent vloaz zo : ur meudad kafe malet gant ur palvad chikore, lakaet da virviñ er gaoter, silet da c'houde gant sil ar yod-kerc'h, lakaet er skudelloù gant al loa diennañ laezh, un tamm sukr pe zaou, laezh digoavenn ha setu hor c'hafe-laezh. Ar c'hafe a veze malet e ti ar marc'hadour er vourc'h, ur c'hartourenn pe daou a veze prenet marteze d' ober bloaz, prenet dre guzh d' an tadoù dreist-holl, soñjit 'ta un dra ken ker ! a-walc'h da gas an den da glask e vara m' eo ar wreg foranerez. Moarvat eo ar c'hafe evaj an diaoul ivez, rak e berr amzer goude e teuas ar c'hiz da reiñ anezhañ d' an holl, bep



mintin.

Goulennit 'ta lennerien, gant ar re gozh e pe goulz o deus evet kafe evit ar c'hentañ gwech.

39

Da grediñ eo evelato e oa un tammig warlerc'hiet an dud e va bro Hanveg, rak Habasque en doa skrivet kement-mañ pell a oa kent : « Ar c'houerezed pinvidik, pa 'z eont d' ar marchad e plij dezho evañ kafe gant likor, unan bennak anezho a sach war ur c'horn-butun, rouez int avat (" Notions historiques sur le littoral des Côtes-du-Nord ", 1832, T. I, p. 282). Setu amañ ur pennad all, diwar levr F. Kadik " Dans les campagnes bretonnes " (1903), hag a zo kempred a-walc'h ganin hag a zezrevel an hevelep doare d' evañ kafe dre guzh d'an tiad, evel du-mañ. Lavarout a ra : « kerkent aet an ozhac'h, ar vugale hag ar goskor d' ar park, goude un dijuni treut diwar laezh trenk, buan e veze fardet ar « greg » gant kafe ha chikore enni.

Evet e veze ar c'hafe gant kement a evezh hag a breder ma c'hellas Eva lakaat da zebriñ an aval kentañ. Goude e klevet an amezegezed o c'hoarzhin laouen hag o varvailhat war o zreuzoù. - « Ha mat hoc'h eus kavet anezhañ Maturin ? - Ag er c'hoej (distinget) Fanchon, gwelloc'h e oa eget ar c'hafe kinniget gant ar person da bennoù tevañ ar barrez ! Pelloc'h ne badas ket ar c'hiz gant mestrezed an tiez. Hiziv n' eus maouez ebet war ar maez o tremen hep he skudellad rouzig. »

Daoust d' an tri ugent vloaz tremenet abaoe, chomet eo em genou blaz an dourig mat, hag alies e kanan son " Evnig Penn ar C'hoad " :

Netra ne blij din-me vel ur banne kafe.

## **DIAZEZOÙ AR SEVEL GWERZIOÙ**

Ar studiadenn-mañ a oa bet kroget d' hec'h embann e Gwalarn e 1944 ; en niverennoù 162, 163 ha 164 e oa bet pennadoù. Gant reuz ar brezel e oa chomet sac'het neuze.

Ouzhpenn ugent vloaz goude e tegouezho gant al lenner, war-bouez nebeut evel ma oa bet savet neuze, ha klok ar wech-mañ.

Evit disoc'h :

### **GWERZONIEZH HA BARZHONIEZH**

I. - Ur pezh a c'hell bezañ skrivet e daou zoare heñvel: ma venner hepken displegañ eeun ar pezh a zo da lavarout e vez graet gant ar gomz pe lavar-plaen. Setu penaos e tispleg Maodez Glanndour perzhioù ar gomz voutin pe lavar-plaen :

*« Diskleriañ un dra bennak war eeun, evitañ e-unan, hennezh eo doare ar gomz voutin. An diskleriañ n' eo ket hepken an displegañ, n' eo ket hepken reiñ da anaout, hogen hen ober ar sklaerañ ar gwellañ. Bez' e klask neuze ar spered ober tro an dra, mont en e ziabarzh, e sellout ennañ e-unan, evel ma ra ur perc'henn ouzh e zomanoù... »*

*...Dindan dalc'h an doare-meizañ boutin emañ al lodenn vrasañ eus al lennegezh, kement a zo studiadenn, dezrevell, livadur buhezegezh, kounadurioù, ar pezhioù-c'hoari, ar bern uhelañ eus ar romantoù. Zoken an drama a chom peurliesañ war e dachenn. »*

(Gant hentoù meur ar Gwerzaouañ,  
" Sav " 18, pp. 31-32.)

41

E-kichen ar gomz voutin e kaver ar varzhoniezh. E-lec'h lakaat etre an danvezioù hag an traoù keñveriadur ar reiz, e laka etrezo ur c'heñveriadur kalon. E-lec'h reiñ da intent e ro da santout.

Ouzh ar gomz voutin e tere al lavar-plaen. Pa venner barzhoniam, avat, e reer kentoc'h gant un doare a-ratozh da renkañ ar gerioù hag al lavar : an doare-se eo ar werzenn.

E pep bro hag e pep yezh ez eus bet savet gwerzennoù.

2. - Petra 'ta 'zo o tistrannañ ur pennad lavar-plaen diouzh ur guchennad gwerzennoù ? Selaouomp c'hoazh ar pezh a lavar Maodez Glanndour :

*« El lavar-plaen, evel er gwerzennoù, ez eus giz ul lusk gant sav-diskenn, tenn-distenn, a vez aroueziet er skrivadur gant ar virgulennoù hag ar pikoù. Pa zistager e virer ehanou, toullou sioulder. Emañ ar spered o tremen a bep eil, eus an displeg d' an emsoñj, eus an degemer d' ar renkañ ; ar spered ez eus gantañ ur monedone evel gant ribouler al luskerez, gant lamm ar gwad, gant houl ar mor. Pep lusk a zo troierezh. Hogen el lavar-plaen ne glasker nemet resister ha sklaerder hag e teu an troc'hadennoù hervez ezhommoù an diskouez. Er varzhoniezh avat e vo taolet pled muioc'h pe nebeutoc'h da grouiñ hesoniezh e lusk ar mouezhiadennoù. »*

(id., pp. 35-36.)

Eus an hesoniezh-se er mouezhiadennoù hag a zo diazez ar werzenn, eo e tizher an hesoniezh e lusk ar mennozhioù hag ar santadennoù, diazez pep barzhoniezh.

Anat eo e c'heller kavout kement derez a zo etre ar gomz voutin hag ar varzhoniezh. Bez' ez eus pennadoù barzhoniezh kaer-tre ha ne dint ket renket dindan stumm gwerzennoù dre ma ne heuilher ket atav evit hesonerezh al lavar a lezennoù strizh-strizh. War an tu enep e c'hell un den gouiziek ha lemm e bluenn sevel gwerzennoù reizh hervez lezennoù ar werzaouriezh an displegañ he deus bleuniet e pep bro da vareoù a zo hag e Breizh marteze muioc'h eget e bro all ebet.

42

3. - DIAZEOU. - Un dra a ranker da ober atav pa groger gant ur studi bennak, dindan boan da chom digompren, pe, a zo gwashoc'h, da vezañ komprenet a-dreuz. Kentañ kammed ar studiaden-mañ a vo eta spisaat talvoudegezh ar gerioù a vo graet ganto : e dalc'h ar barzh emañ sevel barzhoniezh. Ar pezh a zo o tiforc'h ar barzh diouzh n' eus forzh pe skrivagner all eo e sant e gwirionez kened ar bed hag an darempredoù arouzel a zo etre an traoù, an dud hag an darvoudoù. Ouzhpenn un den « awenet » eo ar barzh avat, un arzour e rank bezañ ivez hag evit reiñ kened ha kevrinoù ar bed d'ar re all da santout eo e sav e varzhonegoù. Ur varzhoneg a zo a-se ur pennad barzhoniezh lakaet dindan stumm al lavar.

Dindan neuz gwerzennoù eo e vez lakaet peurvuiañ ar barzhonegoù. Barzhonegiñ ha gwerzaouiñ a zo eta daou labour disheñvel, hogen daou labour a ya an eil gant egile. Setu perak e vo kentañ preder ar barzh yaouank deskiñ ar werzaouriezh, da lavarout eo an doare da sevel gwerzennoù kaer hag al lezennoù evit dont a-benn a se. Gwerzoniezh a c'heller ober eus ar skiant a studi an doare ma vez savet ar gwerzennoù.

Ur varzhoneg a vezo kavet eta peurliesañ dindan stumm ur werz. Gwelout a raimp koulskoude diwezhatoc'h e vez miret an anv-mañ evit un doare barzhoneg aratozh.

Un dastumad barzhonegoù a vez graet anezhañ ur barzhaz, abaoe m' eo bet embannet gant Kervarker ar " Barzaz Breiz " brudet.

En abeg d' ar gerentiezh a zo etre ar werzoniezh, ar c'han hag ar sonerezh, e vez graet sonioù, sonedoù, kanennoù, h.a., eus doareoù barzhonegoù a zo a oa da vezañ heuliet da gentañ gant sonerezh pe lakaet war gan.

4. - TEIR AMZERVEZH AR WERZAOURIEZH VREZHONEK. - P' o deus barzhed Vreizh klasket sevel gwerzennoù o deus heuliet, hervez ar mare, meur a giz disheñvel :

a) Er skridoù brezhonek krenn, da lavarout eo ar re savet betek derou ar 17vet kantved, e kavomp un doare gwerzaouiñ o tennañ d' an doare gwerzaouiñ a gaver ivez er broioù keltiek all (Kembre, Iwerzhon). Diazezet e oa war niver ar mouezhiadennoù er werzenn, war ar c'hlotennoù dibenn hag ar c'hlotennoù diabarzh. Distreiñ a raimp d' an doare gwerzaouiñ-se p' hor bo bet studiet frammadur ar werzenn.

43

b) Eus ar 17vet kantved betek bloavezhioù kentañ an 20vet kantved n' o deus hor barzhed anavezet nemet an doare gwerzaouiñ a vez graet e Bro-C'hall. Diazezet eo war niver ar mouezhiadennoù er werzenn ha war ar c'hlotennoù dibenn.

k) En ugenvet kantved o deus klasket muioc'h-mui ar varzhed, o welout ne zeree ket mat an doare gall da werzaouiñ ouzh ar brezhoneg, doareoù nevez da sevel o gwerzennoù. Darn n' o deus heuliet hent strizh ebet, fiziout ma raent hepken war o skouarn evit kavout al lusk dereat ; darn all o deus klasket gwellaat an doare gwerzaouiñ diazezet war ar glotenn-dibenn ; darn all c'hoazh o

deus diazezet o gwerzennoù war an taol-mouezh, war genheuliad ar mouezhiadennoù toniet hag ar re zidon. Kement hini a zo anezho a ziskouez bezañ bet dedennet gant ar c'hlotennerezh-diabarzh, hep m' en devije hini ebet graet implij ledan anezhañ, nemet koulskoude Roparz Hemon. Gwir arzour evel ma 'z eo en deus gwelet e oa eno an doare gwellañ, hini an amzer dremenet a zle dont da vezañ ivez hini an amzer da zont.

An darn vrasañ eus ar skrivagnerien vrezhonek n' o devoa, gwir eo, un hanter-kant vloaz bennak 'zo, nemet ur ouiziegezh diresis eus hon doare kozh da werzaouiñ, biskoazh ne oa bet displeget fraezh d an holl ha ret e oa mont da lenn skridoù, dizudi re alies, ar c'hennvrezhoneg e levrioù skiant skrivet e galleg evit dont a-benn da c'houzout petra e oa.

Fiziañs am eus e talvezo ar rummad kentelioù-mañ d' hor barzhed yaouank ha n' o devo ket da glask o hent evel ar rummad a zo bet en o raok.

5. - TRI HENT AR GWERZAOUIN. - « *Tri hent ez eus evit pellaat diouzh al lavar boutin ha tizhout pal ar c'han, tri hent a vez a-walc'h mont gant unan anezho, daoust ma c'heller ivez o fleustriñ a-gevret,* » a lavar deomp Maodez Glanndour.

- An hent kentañ eo ar c'henventerezh e niver ar mouezhiadennoù ;
- An eil, kenventerezh ar pouezmouezhioù ;
- An trede, kengloterezh ar sonioù.

An tri hent-se eo emaomp da zaremprediñ tro-ha-tro evit klask diazezoù ar gwerzaouiñ.

44

War an hent kentañ :

KEHED PE KENVENTEREZH AR MOUEZHIADENNOU

6. - AR VOUEZHIADENN. - Envel a reer mouezhiadenn ar strollad sonennoù ha kensonennoù ouzh o harpañ a vez distaget en un tenn-mouezh hepken. Silabenn a vez graet ivez eus ar vouezhiadenn e studi an distagadur.

Ne vez ket troc'het ar gerioù e mouezhiadennoù hervez o zalvoudegezh diabarzh, hogen hervez an doare ma vezont distaget. Evel-se **kan** a zo ur vouezhiadenn ennañ ; ma stager outañ an dibenn **-er** evit ober **kaner** e vo rannet evel-hen : **ka-ner** ha neket **kan-er** ; en hevelep doare : **ka-na-deg** ha neket **kan-ad-eg** evel ma c'houlennfed hervez doare-sevel ar ger.

7. - Ar vouezhiadenn eeunañ a zo enni ur vogalenn hepken : a. Peurvuañ e vez en tu-hont da se ur gensonenn pe veur a hini. Hervez lec'h ar c'hensonennoù e c'heller diforc'h :

- mouezhiadennoù boull pe digor a echu gant ur vogalenn. Er penn kentañ e c'hell bezañ unan, div pe deir gensonenn : **ra, tre, gwri** ;

- mouezhiadennoù serr, a grog gant ur vogalenn hag a echu gant unan, div pe deir gensonenn : **ar, ant, intr** ;

- mouezhiadennoù kloz, a grog hag a echu gant ken sonennoù : **tud, plant, strink**.

8. - Setu penaos e vez rannet ar gerioù e mouezhiadennoù :

- an troc'h a vez atav war-lerc'h ur vogalenn hir : **kre-giñ, lou-zoù, ne-vez** ;

- bez' e vez ivez war-lerc'h ur strollad vogalennoù **brei-zhiz, koa-niañ, poue-zet** ;

- ur gensonenn galet war-lerc'h ur vogalenn verr a vez kontet war un dro en div vouezhiadenn : **kannet (kan-net), plomenn (plom-menn)** ;

- ur strollad kensonennoù a vez peurluviañ troc'het dre an hanter : **as-koan, dis-taol, ar-mel, kam-brig**. Ar strolladoù oc'h echuiñ gant **l** pe **r** ne heuliont ket avat al lezenn-se : **sa-briñ, di-zle, a-dreñv, sou-blañ, di-frouezh...**

45

Setu penaos, da skouer, e vo rannet ar gwerzennoù-mañ :

Hag ur marc'heg yaouank o tont eus an arme  
A glevas ur vouezh dous 'kanañ war ar mene.  
(" BARZAZ BREIZ ", Gwreg ar C'hroazour.)

Hag / ur / mar / c'heg / yaou / ank / o , / tont / eus / an / ar / me  
A / gle / vas / ur / vouezh , / deus / 'ka / nañ / war / ar / me / ne.

Gwerzennoù daouzek mouezhiadenn eo eta ar gwerzennoù-se,

9. - NIVER AR MOUEZHIADENNOU ER WERZENN. - A-wechoù ne gaver ment reizh ebet er gwerzennoù. Kemerit da skouer barzhonegoù kaerañ Kalloc'h " Deuit Spered Santel " ha " Tri Neved, Teir Bedenn " ha klaskit ar vent implijet. N' her c'havit ket, petra bennak ma n' eus ket aze komz-plaen, ar pezh a zo anat diouzhtu.

Peurluviañ e vez mentet hed ar gwerzennoù ; ar re-mañ a c'hell bezañ berr pe hir, adalek 4 pe 5 mouezhiadenn betek 13 pe 15 mouezhiadenn hag ouzhpenn.

Distreiñ a raimp d' ar stummoù gwerzennoù-se goude bezañ studiet ar c'hellusk hag ar c'henganerezh er werzenn. Lavaromp hepken amañ ez eo ar stankañ ar gwerzennoù etre 6 ha 15.

Ar varzhed kembraek eus ar Grennamzer o devoa kavet anvioù kaer evit kehed ar gwerzennoù, a raent anezhañ « cyhydedd » (kehedez) : kehedez verr (4 mouezhiadenn), k. wenn (5 m.), k. c'hlas (6 m.), k. kaezh (7 m.), k. treuz (8 m.), k. fraost (9 m.), k. hir (10 m.).

Setu skouer un nebeud gwerzennoù hed disheñvel :

4 Glac'har, glac'har,  
13 Gwa me, n' on ket dellezek da glevout komzoù Doue.  
6 Glana va c'halon wan,  
9 Ha kas davedon arc'hael an tan.  
8 Ur steredenn 'n e vizied.  
8 Ur c'hlaouenn eus al lestr-ezañs,  
8 entanet dirak da vezañs,  
10 Evit stekiñ ganti ouzh va diweuz.

(Maodez GLANDOUR.)

46

10. - RANNADUR AR WERZENN, AN ARSAV. - Pa vez hir a-walc'h ar werzenn e vez peurluviañ enni un troc'h goude un nebeud mouezhiadennoù. Gwelloc'h e vez merket evel-se lusk ar werzenn. War an troc'h-se e chom ar vouezh ur pennad a-sav ; setu perak e lavarer e vez neuze un arsav \*. Kreñv pe greñvoc'h e vez an arsav. Peurluviañ e vez e pep werzenn hir a-walc'h un arsav pennañ. Bez' e c'hell bezañ ivez *adarsavioù*.

Setu penaos eo rannet er feur-se ar gwerzennoù a-us :

2+2 Glac'har // glac'har,  
2+(5+6) Gwa me // n' on ket dellezek / da glevout komzoù Doue.  
2+4 Glana / va c'halon wan,  
5+4 Ha kas davedon / arc'hael an tan,  
4+4 Ur steredenn / 'n e vizied,  
3+5 Ur c'hlaouenn / eus al lestr-ezañs,  
3+5 entanet / dirak da vezañs,  
6+4 Evit stekiñ ganti / ouzh va diweuz.

Setu ur skouer all kemeret e gwerzennoù unvanoc'h :

7+6 Tro mare ur c'huzh-heol // 'voe klevet trouz neihour,  
(3+4)+6 Trouz ur vag / a voe klevet / o tonet gant an dour,  
2+5+6 Ha strap // ha son an drompilh / hag an taboulinoù  
7+6 Ken na sone ar c'herreg // war lein ar menezioù.  
7+6 Ha me monet da welout // ha ne welis netra  
7+(2+4) Nemet Marc'haid ar gerc'heiz // pav-kamm / o pesketa.

(Ar re unanet, " BARZAZ BREIZ " )

Ar werzenn diwezhañ a zlefe moarvat bezañ kentoc'h troc'het evel-hen evit ar ster : 4 + 5 + 4. En abeg d' an hesonerezh avat e ranker troc'hañ a-hend-all.

Kemmet e c'hell bezañ ivez doare distagañ ar gerioù en abeg da niver ar mouezhiadennoù er werzenn. Evel-se e ranker kontañ amañ heol evit div vouezhiadenn tra ma tremen peurvuiañ evit unan hepken. En enep ne gont Marc'haid ar gerc'heiz nemet evit pemp mouezhiadenn e-lec'h ma c'houlennfed c'hwec'h.

(\*) Erwan BERTHOU (Kevrin Barzed Breiz, p. 9) a ro d' ar ger **arsav** un dalvoudegezh all. Evitañ eo an arsav an ehan a virer war ar vogalenn hir. Gwelloc'h e kavan ober gantañ evit an ehan war an troc'h.

47

EVEZHIADENN. - Ar siouladenn o tont diwar an arsav a c'hell kontañ e ment ar werzenn. Setu ar pezh a lavar diwar-benn-se Maodez Glanndour : « *Ya, ar siouladenn a gont er mentoù-sonerezh. Ar siouladenn a zo ur pik, a-wechoù nebeutoc'h, ar siouladenn eo bepred ar gwenn e penn al linenn, an amzer evit ar spered d' en em soñjal, a-raok kregiñ gant ur werzenn all. Dav eo teurel evezh koulskoude e vez alies a-walc'h danvez ar siouladenn diwar verraat ar siouladenn a-raok, ha neuze n' eus koulzad ebet ouzhpenn* ».

Kontañ an arsav evit ur vouezhiadenn, pe gontañ heol evit div er werzenn a-us a zo eta an hevelep tra.

11. - PENAOS E VEZ MENTET GERIOU 'ZO ? - Ar skouerioù-se hon doug da gomz diwar-benn ur gudenn amjestr a-walc'h hag a zo bet roet ur respont disheñvel dezhi hervez an dud : an doare da gontañ ar silabennoù enno un divsonenn pe diftongenn.

Dre vras e c'heller lavarout ez eo divsonennoù ar brezhoneg diftongennoù digor, da lavarout eo e koezh an taol-mouezh war ar vogalenn gentañ : koad, loar, loer, aotrou, saout, rouan, roue, e-touez, reizh, brein, eeun, eor, maen...

N' eo ket peurglok al lezenn koulskoude, hag an div-sonennoù o kregiñ gant **o** hag **ou** a vez distaget alies evel diftongennoù serr, da lavarout eo e koezh an taol-mouezh war an eil vogalenn, hag e vez eus **o** hag **ou** un hanter-gensonenn. Kement-se a c'hoarvez dreist-holl er-maez eus Bro-Leon : **kouezhañ/'kwe:zâ/**, **c'hoant/xwânt/**, **loar,/lwa:r/**. Kement-se a c'hoarvez atav pa vez ur silabenn all war-lerc'h : **koan/kôân/** **pe /kwa:n/**, **hogen koaniañ/'kwâniâ/**.

Diwar zoare distagañ reizh an divsonennoù ez eur deuet a-wechoù da gontañ evit div vouezhiadenn gerioù evel **Doue, roue, heol, poan, oad**, h.a.

Peurvuiañ e vo miret da ober ur seurt troc'h er gerioù unsilabennek. Diouzh ret e vo gellet ober ganto, evel er skouer roet uheloc'h, dirak an arsav.

En enep ne vez kontet a-wechoù div silabenn nemet evit ur vouezhiadenn hepken pa zeu ur silabenn serr rag-eeun war-lerc'h ur silabenn digor e-doare ma vez neuze ur seurt divsonenn : **lakaat, traoù, kembraeg, roi...** D' ar barzh da welout neuze penaos e vo an hesonañ e werzenn.

12. MENT AR VOGALENNOU. - Mouezhiadennoù ar werzenn a zo e gwirionez koulzadoù. Hogen ne deo ket keit-ha-keit ar c'houlzadoù-se. Rak bez' e ranker (er mouezhiadennoù toniet da nebeutañ) diforch etre vogalennoù berr ha re hir.

48

Ur vogalenn doniet a c'hell bezañ berr : **dall**, hir : **dal** pe etre : **dalit**. Bez' e c'hellfed ivez eta lakaat kemm etre mouezhiadennoù hir ha mouezhiadennoù berr. E-touez ar mouezhiadennoù hir e rankfed ivez kontañ ouzhpenn ar re enno da nebeutañ ur vogalenn etre, un darn vras eus ar re a zo enno un diftongenn.

E gwirionez ne vez ket taolet pled, dre vras, ouzh hed ar mouezhiadennoù er werzaouriezh vrezhonek.

\*

War an eil hent :

#### **KELLUSK PE KENVENTEREZH AN TAOLIOU-MOUEZH**

13. - HEULIAD AN TAOLIOU-MOUEZH. - Er gomz voutin ne heulier lezenn strizh ebet evit lakaat ar pouez-mouezh da zegouezhout e lec'h reizh. Ac'hano e c'hoarvez a-wechoù doareoù-lavar diblijus d'ar c'hleved, dreist-holl pa zeu an eil war-lerc'h egile ur steudad hir a c'herioù didon. Setu ur skouer a zo roet deomp gant Maodez Glanndour : "**Gwelet e oa bet neuze ganin**".

N' eus el lavarenn-se nemet div vouezhiadenn a vefe pouezmouezhiet start : an hini gentañ hag an hini ziwezhañ ; ur ger all a zoug un eil pouez-mouezh skañvoc'h : neuze. Etre **gwe-** ha **neu-**, avat, ez eus peder mouezhiadenn c'houllo.

Penaos 'ta en em drofe ur gwerzaouer evit lakaat un elfenn a hesoniezh en aridennad gerioù-se ? Bez' e c'hell kemm urzh ar gerioù evel m' hen aotre ar yezhadur : **Neuze e oa bet gwelet ganin**. Diouzhtu e welomp n' eo tamm gwelloc'h ar stumm nevez-mañ. Displijus eo **neuze e**, hag adkavout a reomp ar peder mouezhiadenn didon. **Neuze 'oa bet gwelet ganin** a zo a-vec'h gwelloc'h. Deomp hardisoc'h dezhi ha lavaromp : **Ganin ' oa bet gwelet** neuze, avat. Diouzhtu e welor ez eo kalz hesonoc'h al lavarenn-mañ. An div vouezhiadenn doniet pennañ **in** ha **gwel** a zo tostaet an eil ouzh eben ha ne chom mui ouzhpenn div vouezhiadenn wan etre ar mouezhiadennoù kreñv.

49

EVEZHIADENN. - Anat eo ez eus abegoù all estreget ar pouez-mouezh o lakaat ar skouer-se da vezañ displijus d' ar c'hleved. Da hesoniezh ar sonioù eo e tennont : ur gudenn kenganerezh a zo amañ e-kichen ar gudenn kelluskerezh.

14. - LEZENNOU DIAZEZ AR C'HELLUSK. - Bez' ez eus div lezenn a zo ret-mat heuliañ ma fell deomp e chomje plijus kerzhed ar gwerzennoù.

a) Etre daou daol-mouezh ne zle ket bezañ en tu-hont da ziv vouezhiadenn dinerzh.

b) Ne c'hell ket div vouezhiadenn doniet dont an eil wat-lerc'h eben nemet ha mirout a rafed ur gwir siouladenn etrezo. Pa vo rannoù gwerzenn, da skouer, e c'hell an hini gentañ echuiñ gant ur vouezhiadenn bouezmouezhiet hag an eil kregiñ ivez gant unan.

Setu ur varzhonegig eus Maodez Glanndour evel skouer :

ERC'H WAR AN ENEZEG

3+(5) Hag-eñ eo diskennet en noz  
4+(4) Elerc'h gwenn-kann an Hanter-Noz,  
4+(4) Hag e kouskont er mor (,) morzet,  
4+(4) Pleget o fenn dindan o fluñv ?  
4+(4) N' eo ket elerc'h, an erc'h  
4+(7) A zo kouezhet askellek war 'n enezeg ;  
3+(4) En aber n' eus 'met rehier  
4+(4) A huñvre kuñv dindan o fluñv.

Er skouer-se e kaver eta tro-ha-tro gwerzennoù tri ha pevar fouez-mouezh. Ret eo teurel evezh evelkent ne deo reizh an trede gwerzenn nemet ha lakaat a rafed ur c'houlzad sioul etre **mor** ha **morzet**.

N' eus ket bet taolet evezh avat ouzh niver an mouezhiadennoù didon er werzenn nag ouzh o lec'hiadur etre ar mouezhiadennoù toniet :

1-2-2-	3+(5)= 8
-2-1-1-	4+(4)= 8
-1-2-(1)-1	4+(5)= 9 (8)
-2-1-1-	4+(4)= 8
-1-2-	3+(3)= 6
2-2-1-1-1	4+(7)= 11
1-1-1-1	3+(4)= 7
1-1-1-1-	4+(4)= 8

Soñjal a c'heller evelato e vije dalc'het kont eus niver ar mouezhiadennoù er werzenn hag ivez eus niver ar mouezhiadennoù dinerzh etre ar mouezhiadennoù nerzhus. Setu amañ ur skouer :

50

LIORZHOU

Liorzhoù gant frondoù damdeuzet ar bleunioù,  
E sarac'h an delioù, hirvoudoù ankenius.  
Liorzhoù entanet, gant gourgomz ar gwenan,  
Skrilhadeg ar c'hwiled e gwasked ar menez.  
Liorzhoù a ro d' an eneoù ar peoc'h er garantez,  
Pa nijell mouzkomzoù an anken er girzhier.

(D. K. KONGAR.)

Setu aze eta ur skouer ma kaver gwerzennoù enno holl peder mouezhiadenn nerzhus (toniet) hag eizh mouezhiadenn dinerzh (didon). Etre pep mouezhiadenn doniet e kaver div zidon. E penn ar werzenn hag en dibenn anezhi e kaver ivez ur vouezhiadenn dinerzh.

Bez' e c'heller ober c'hoazh gant ur vouezhiadenn dinerzh hepken etre pep mouezhiadenn doniet :

Pa vezo tir ha lann, ha mor ha lenn,  
Ken splann ha sklaer d'un amzer all ha dec'h ;  
Pa vezo tor ar grug bepred ken gwenn,  
Ha 'n oabl ken glas ouzh kribenn lemm ar c'hrec'h ;  
Pa vezo trouz ar mor en aod ken gwan,



Ken mut ar gwez e lusk an avel fresk,  
Hag ene 'n den ken sioul, hag eñ diboan,  
Diyoul war c'hlann ar feunteun aet da hesk.

(R. HEMON.)

Amañ e kavomp an heuliad :

.-.-.-.-

Pemp mouezhiadenn doniet ha pemp mouezhiadenn didon o tont bep eil, ar werzenn o kregiñ gant ur vouezhiadenn dinerzh, hag oc'h echuiñ gant unan doniet.

51

Evel m' hen gweler dre ar skouer-mañ e c'heller a-wechoù, er gwerzennoù, treuzlec'hiañ ar pouez-mouezh diwar abegoù hesoniezh. An eil gwerzenn diwezhañ :

Hag ene 'n den ken sioul, hag eñ diboan

a vefe da vezañ toniet evel-hen e komz-plaen :

Hag ene 'n den ken sioul, hag (eñ) diboan  
gant un damdon hepken war eñ.

Un doare all a zo c'hoazh da ober : niver ar mouezhiadennoù dinerzh etre pep mouezhiadenn nerzhus n' eo ket rediet, hogen bez' e tleer adkavout an niver e penn ar werzenn. An doare ober-se a zo talvoudus evit mirout ouzh an untonerezh pa vez hir an heuliad gwerzennoù. Setu amañ da heul ur skouer gant gwerzennoù 10 mouezhiadenn (11 pa 'z vez didon an hini ziwezhañ) enno atav pemp mouezhiadenn doniet. Lech ar vouezhiadenn didon gentañ eo hepken a gemm amañ, e doare ma vez an heuliad :

.-.-.-.- (.)

pe -.-.-.-.- (.)

Anat eo e c'hell bezañ brasoc'h an dilec'h :

Ha re all 'zo ivez,  
Eürus pa ouzont bevañ : ober lod  
An douar hag an neñv ; na fur na foll.  
Derc'hel, ha plegañ pa vez ret. Arboellañ  
Tommder o c'halon.

Ha da c'hopr o deus  
Un ti, ur vaouez vat, bugale flour,  
Madoù e-leizh, keneiled, kement benveg  
Da dognañ broud an amzer, ha da ren,  
Pa ruilh ar bed er vilded hag er fank,  
Ur vuhez sioul didrabas.

(R. Hemon, Pirc'hirin ar Mor.)

15. - GWERZENNOU START HA GWERZENNOU LAOSK. - Er skouer roet uheloc'h ez eus gwerzennoù dek mouezhiadenn, ha re all zo o deus unan ouzhpenn. Ar re-mañ eo ar re a zo ur vouezhiadenn didon ouzh an dibenn anezho. Setu amañ perak :

52

Gwerzennoù toniet war an dilost evel :

'Tro mAre Ar c huzh-hEol 'voe klEvet trOUz neihOUr  
Trouz Ur vag A voe klEvet o tOnet gAnt an dOUr.

o devez un doare leunoc'h, peurglokoc'h eget gwerzennoù evel :

Hag o tOnt eus an Iliz 'n em stOUont er vEred :  
Arsa 'ta, KERnev-Uhel, sEtu hO soudArded.

enno ur vouezhiadenn dinerzh da ziwezhañ.

Ar re gentañ a c'hell bezañ graet anezho a se gwerzennoù start tra m' eo laosk ar re ziwezhañ.

( Pa vez hanter werzennoù pe rannoù-gwerzenn e c'hell bezañ pep hini anezho d' he zro start pe laosk, hervez doare toniañ ar ger a zo dirak an arsav.)

Evit startaat ar gwerzennoù laosk e c'houlenn gwerzaouerien a zo, da heul Jakez Kerrien, e vije lakaet enno ur vouezhiadenn muioc'h eget er re a echu gant ur vouezhiadenn doniet. Ar reolenn-se eo a zo bet heuliet gant Roparz Hemon er skouer roet uheloc'h diwar " Pirc'hirin ar Mor ". Setu c'hoazh ur skouer all diwar an oberour-se :

Warc'hoazh ez aint d' o labour 'vel bepred (10)  
O wiskañ 'kreiz an dud o dremmoù seder, (11)  
E-mesk o frederennoù bihan, ken dibreder, (13)  
E-mesk o zrevell aner, leun a c'hred. (10)

16. - IMPLIJ AN TAOL-MOUEZH ER GWERZAOUIÑ. - E-touez barzhed Vreizh, n' eus bet betek-hen nemet unan, Roparz Heton, hag en devije e gwirionez savet barzhonegoù hir diazezet war gellusk an toniañ. Evel-se eo ez eo savet an darn vrasañ eus e varzhonegoù kentañ ; ar re bouezusañ anezho : *Barzhoneg evit kreiz ar Bloaz, Listri Noz, Pirc'hirin ar Mor, Al Lestr.*

Heuliañ a ra dalc'hmat ez-strizh lezenn ar c'hehed da heul hini ar c'hellusk. Alies e ra ouzhpenn gant ar glotenn-dibenn.

Ne ra peurlvuiañ R Hemon implij nemet gant un hevelep niver a vouezhiadennoù toniet hag a vouezhiadennoù dinerzh, ac'hano o devez e varzhonegoù un doare rust ha garv a-walc'h, o tont eus ma ra kalz implij a c'herioù un- pe zivsilabennek. Amañ e klot, gwir eo, garvder an danvez, ouzh garvder ar gwisk ; an darn vrasañ eus ar varzhed, avat a vefe ret dezho lakaat muioc'h a vouezhiadennoù dinerzh en o gwerzennoù eget a vouezhiadennoù toniet.

53

Pet gwech e tle an taol-mouezh kouezhañ war ar werzenn ? Diaes eo reiñ ur respont eeun d' ar goulenn-se. Lavaromp koulskoude ez eo an naturelañ ar gwerzennoù enno teir, peder pe bemp mouezhiadenn doniet. Ar re a ziv a zo gwall vistr, hag ar re a c'hwec'h gwall bounner.

Ar gwerzennoù tri fouez-mouezh a vo enno peurlvuiañ 6, 7. pe 8 mouezhiadenn (a-wechoù 9, mar bez didon an hini dilost). Ar gwerzennoù pevar fouez-mouezh a devo eus 8 da 12 mouezhiadenn (13 er re laosk). Ar re pemp pouez-mouezh a vo enno eus 10 betek 15 mouezhiadenn.

(Da genderc'hel.)

## AL LEVRIOU

JORD KLER

" ISRAEL, ANNEES DE LUTTE " gant David Ben Gourion.

Evidomp-ni, Bretoned an emsav, re sammet e vezomp gant labourioù ken niverus ma n' hon eus ket amzer a-walc'h da lenn da levrioù embannet muioc'h-mui war danvezioù a bep seurt, ken dedennus an eil hag egile.

Hen anzav a rankan fraez : n'eo ket gant plijadur em eus digoret levr Ben Gourion. Perak en em lakaat da studiañ un oberenn diwar-benn ar vro-se, pell diouzhomp, peogwir n' em boa ket amzer da bleustriñ war embannadurioù hol lennegezh-ni ! Met gant ar begad kentañ e teuas ar blaz !

Anavezet mat eo David Ben Gourion, an " hini kozh ". Ganet e Polonia e 1886, ar yuzev-se a ouestlas e vuhez da zieubidigezh e genvroidi harluet. Tapet gantañ e ugent vloaz e krogas da gas an uhelvennad-se da vat. Goude trubuilhoù a bep seurt e teuas da vezañ penn-rener ar vro nevez savet e 1948 en desped da enebiezh taer ar broioù arab. Eñ eo a savetaas Israel e 1948-1949 pa voe arsailhet ar stad gant enebourien droukrañsus. Ben Gourion a oa deuet mat gant an holl gwitibunan. Diwezhatoc'h e voe tamallet dezhañ bep seurt traoù, heudet e voe al labourioù en doa bet kement a boan o lakaat war ar stern. Meur a dra a c'hwhitas hag e tilezas e garg e 1953. Galvet e voe a-nevez e penn ar vro e 1956 pa drenkas an traoù. Ar stourmer kozh a skoas... Dalc'hit soñj eus emgann ar Sinai.

Setu aze 'ta un den a skiant en deus skrivet ul levr kalet, didruez. Displegañ a ra deomp un emgann bepred aznevezet, morse dilezet. Deskiñ a ra deomp penaos e c'hanas ur stad dieub ha penaos e c'hellas chom bev ha start daoust d' an heudoù ha d' ar gwallzarvoudoù strewet gant broioù gwarizius. Ur garantez divent en deus maget Ben Gourion evit e vro hag evit hec'h annezidi kaset kuit diouzh broioù ar bed. Fromus eo ar pennad ma tispleg ennañ an oberour donedigezh ar re gentañ eus an enbroerien forbanet, en o zouez Ben Gourion.

- « Pa zilestrjomp war an aochoù benniget e kredis e oa va c'halon o tarzhañ. » Komprenet o deus an dud vac'het-se, e oa ret krouiñ un ere, ul liamm etre ar bobl hag an douar, ere al labour pemdeziek ! (Lennit pennad Barr-Heol, niverenn 41 : " Lec'h ma 'z eus karantez ne gaver ket start al labour nag ar boan "). Pegen gwir !

55

« Evidon-me, a skriv Ben Gourion, labouret em eus er parkeier, er gwini. Graet em eus diouzh an arar. Un dornad gwastadourien e oant nemetken, met un dornad a dud yaouank, leun a virvidigezh. »

Ret e voe dezhe sankañ don gwriziennoù ur vro hag a venn padout : kudenn beurbadel ar stadoù bihan endalc'het gant ramzed prest da lonkañ al loenig. Met petra a dalvez galloud an armeoù e-keñver bolontez ur bobl, gant ma chomo bev ar feiz, an esperañs dalc'hus hag an emroüsted wirion ! An dud-se, divroet, bannet, argaset, o deus savet ul labour dispar. Krouet o deus emboelladoù, en em unanet ez int hag ur skouer eo se, evidomp-ni, Bretoned ! Gounezet o deus ar yuzevien-se emgann ar frankiz war dachenn an arboellerezh, ar sevenadur. " Les années de lutte" o deus douget o frouezh, gwell-a-se ! N' eo ket hep poan nag hep kerseen e stourmas Ben Gourion. Diaes eo chom start pa vez an amzer fall o vrallañ ar vag !

El levr, ne welomp enebiezh ebet, drougrañs ebet. Studiet mat ha resis eo framm ar pennad istor-se. Displeget eo an traoù evel m' emaint. Ne gomz ket an oberour - pe ken nebeut - eus al labour graet gantañ e-unan. Ha koulskoude, piv

a voe ene an dasorc'hidigezh nemet Ben Gourion ? Kunujenn ebet en e ziskleriadurioù, met ur goanag pegus en amzer-da-zont. Hetiñ a ra e servijo vertuzioù Israel d' ar bobl met e c'houlenn ivez ma vo gwelet liammoù etrevroadel diazezañ etre an holl bobloù.

Ya, ur studiaden eus ar c'hentañ hon eus aze, koulz evit an danvez hag ar spered. Echuiñ a ra an oberour e levr gant ur gentel a-bouez : « Ur bobl hag a goll tamm-ha-tamm ar c'houestoni da vrouezañ a yelo da netra. Lealded d' ar stad, d' ar c'houenn, d' an hengoun a dle bezañ desket d'ar re yaouank. An diseblanter a vez lorgnez ur vro. Na c'hortozomp ket da vezañ gouzañverien. »

Rust a-wechoù eo levr Ben Gourion. Ne zigas ket melkoni, goanag ne lavaran ket. Dre ma oa bet fur a-walc'h an den-se, dre ma oa leun e spered a wiriegezh e kasas da vat pal e vuhez : ganedigezh ha diazezadur ur stad nevez.

Ul levr fromus. Embannet eo e ti " Flammarion ".

56

PER DENEZ

Joseph Chardonnet. - " HISTOIRE DE BRETAGNE ". - Nouvelles Editions Latines, 1965. 250 pajenn

N' eus ket kalz levrioù a vije bet muioc'h ezhomm anezho eget levr istor Breizh an Ao. Chardonnet. Meur a wech am eus bet c'hoant da ginnig da vignoned, da dud yaouank, ul levr Istor Breizh : ne oa ket tu. Levr Durtelle de Saint-Sauveur a zo re ouizieik, ha n' eo ket broadelour ; hini an Ao. Poisson, hag eñ mat-tre, ne vez ket lennet aes koulskoude ; hini an Ao. Rebillon, gwelloc'h chom hep komz anezhañ. Setu, a-benn ar fin, al levr berr a-walc'h, skrivet aes, plijus e zoare hor boa ezhomm anezhañ. Labouret mat en deus an Ao. Chardonnet evit Breizh o sevel an oberenn-se.

N' eo ket, anat eo, ul levr a ouiziegezh : ne oad ket o c'hortoz kement-se. Ul labour diazezet war ar ouiziegezh ez eo, ha diazezet-start : graet en deus an Ao. Chardonnet e vad eus skridoù hon istourien veur ha n' en deus ket klasket adstummañ, evel m' o deus graet re all, ha n' o doa ket gouiziegezh nag a bell, red hon istor ; klasel e chom e oberenn, feal da hengoun d'Argentré ha La Borderie, feal d' an hengoun broadel. N' en deus graet an Ao. Chardonnet nemet addisplegañ, eeun ha plijus, o c'hentelioù. Hag o displeget en deus eus ar gwellañ.

E nep lec'h ne glask an Ao. Chardonnet c'hoari an den gouizieik : n' eus ket a notennoù e traoñ ar pajennoù, n' eus ket a roll levrioù lorc'hus e fin an oberenn. Kompren a ra diouzhtu al lenner petra eo an oberour : un displeger - traken. A-hend-all, maget mat ez eo an anaoudegezh en deus an Ao. Chardonnet eus hon istor maget eus ar bouedoù yac'husañ. Met morse ne glask bezañ estr eget un dezreveller. Ha brav-tre e tezrevell : en un doare prim, berr, plijus da lenn hag aes da intent, o lakaat al lenner, dre geñveradennoù akuit, da veizañ sklaer ar pezh a dremenas er c'hantvedoù kent.

Meur a zoare a zo da sellout ouzh an istor. E-keñver gouiziegezh, istor an treitour a werzhas e vro en deus an hevelep talvoudegezh hag istor an hini a varvas o tifenn anezhi. E-keñver gouiziegezh, a lavaran. Met n' emaoomp ket amañ war dachenn ar ouiziegezh. A-douez meskaj an darvoudoù istorel, e tibaber ar re a zo aet a-du gant difenn pe adsevel Breizh vroadel. Evidomp-ni, ar pezh a gont eo an hengoun broadel a-hed ar c'hantvedoù. Gouzout a reomp mat-tre ez eus div nerzh o stourm e Breizh : unan o kas Breizh d' an traoñ, o kas anezhi da deuziñ e-barzh Bro-C'hall, unan all o virout Breizh evel bro. E-keñver gouiziegezh, e-keñver skiant, ken ha ken talvoudus ez eo istor an div nerzh-se. Ar brogarour, avat, a ra un dibab. Istor Breizh eo istor ar re o deus stourmet da zerc'hel anezhi dieub. Ur seurt istor broadel eo an hini en deus savet an Ao. Chardonnet.

Abegiñ a c'hellfen un nebeut traoù. Hag eñ beleg, diaes eo dezhañ barn re galet roll politikel an Iliz en istor hor bro. Ne vefen ket a-du ivez gant kement a lavar diwar-benn ar Chouanerezh : met anzav a ran en em gavomp aze war un dachenn diaes. Studiet eo bet ar chouanerezh gant istorourien roueelour, an holl anezho pe dost. Gouez dezho, pe dic'houez dezho zoken, o deus brudet fedoù zo, kentoc'h eget fedoù all. Meur a wech em eus lavaret nag a geuz am boa na vije ket bet dastumet an holl zanevelloù a oa chomet e-touez tud ar bobl diwar-benn ar chouanerezh. Diwezhat eo bremañ evit hen ober : marteze ez eus c'hoazh bruzunoù da zastum, met poent-bras eo.

An tamall pennañ a rafen eo n' eus ket bet pouezet a-walc'h war darvoudoù pennañ an istor, - emgann Sant Albin, da skouer, - na roet lec'h a-walc'h d' an Emsav a-vremañ, da lavarout eo d' ar stourm broadel en hanter-kant bloavezh diwezhañ : gwall-skort ez eo ar pennadoù gouestlet d' ar prantad-se eus hon istor.

Met ar seurt levr a ranke bezañ berr, ha dleet e oa d' an oberour ober un dibab. Graet en deus an dibab-se hervez e ijin hag hervez e goustiañs. Savet en deus, mat-tre, ul levr hag a zo talvoudus-bras evit emledañ hon emsav hag evit deskadurezh hor yaouankiz. Hen erbediñ a ran deoc'h start-meurbet. Hag aliañ a ran deoc'h prenañ un hanter-dousennad skouerennoù hag a c'hello servijout evit hetañ un deiz-ha-bloaz bennak : dleout a rafe al levr-se bezañ lakaet etre daouarn ur bern yaouankizoù.

Arabat e oa din disoñjal menegiñ kement-mañ, hag a zo a-bouez : moulet plijus eo an oberenn, ha kinklet gant luc'hskeudennoù dedennus. Pell eo kement-se a vezañ didalvez.

(9 lur al levrenn. - STUDI HA LENN, 75, rue de l'Assomption, PARIS (16')). - C. C. P. Paris 8626-20.)

\*

YOUENN OLIER

LEWIS (Saunders). - « Merch Gwern Hywel ».

Rhamant hanesiol. - Llandybie, Llyfrau'r dryw, Christopher Davies (cyhoeddwr), cyf., (1964). In-8°, 84 p. - Priz : 7/6.

Ster an talbenn a zo : Merc'h Wern Hywel. Romant istorel.

Pell 'zo n'em boa lennet levr ebet gant Saunders Lewis. E-pad ur pennad en deus savet ar skrivagner-mañ pezhioù-c'hoari dreist-holl. Gwechall, war-lerc'h ar brezel bed kentañ en doa embannet romantoù hogen n' en doa ket pleustret an doare-lennegezh-se abaoe.

Ar romant-mañ a-hend-all a vefe kentoc'h un danevell peogwir n' eus nemet 84 pajennad ennañ. El levr-mañ e kont Saunders Lewis karantezioù ur plac'h yaouank Sarah Jones gant un danvez pastor metodistat William Roberts. An daou zen yaouank ne c'hellont ket dimeziñ en arbenn da aheurtterezh mamm ar plac'h yaouank a zo ur vamm a c'hiz kozh ha na c'hell ket degemer he defe klasket he merc'h un danvez-pried hep gouzout dezhi : hi an hini eo a zle dibab ur gwaz d' he merc'h. A-benn ar fin e skrapo an den yaouank - hag eñ pastor - e zanzev-pried hag e kaso anezhi da Enez Von e-lec'h en deus savet un tamm kenwerzh a roy tu dezhañ da vevañ e diegezh.

Gorrek ha difrom a-walc'h eo an danevell eviti da vezañ savet ha kempouezet mat. Graet eo dreist-holl a zivizoù ampart - ur saver pezhioù-c'hoari eo Saunders Lewis - e-lec'h e kav ar skrivagner tro da zisplegañ e venozioù diwar-benn relijion, metodistiezh, stad Kembre e derou an XIXvet kantved.

Ret eo notañ ez eo gwirion an darvoudoù o unan : e-touez gourdadoù da Saunders Lewis ez int c'hoarvezet. Hemañ, e-giz ma ouzer, evitañ da vezañ troet

d' ar gatoligiezh a-c'houdevezh, a oa mab d' ur pastor metodistat kembreat en doa graet e annez e Lerpwl.

59

JONES ( W. J. ). - « Dwy stori serch : Gymeri di nghalon ? Mae Robin yn swil ". - Wrecsam, Hughes a'i fab (1963).  
In-8°, 108 p. - Priz 8/-

Kavout a reer div zanevell el levrenn-mañ. Bez ez eus anezho istorioù karantez hervez an talbenn. Evit lavarout ar wirionez ez eo an hini gentañ dreist-holl un doare istor polis. Kejout a ra Menna gant ur paotr yaouank en ur c'hamp hañv war ribl ar mor. Kouezhañ a ra e karantez anezhañ ha krediñ a ra ez eo karet ivez gant an den yaouank. Merzout a ra buan avat e ra war-dro ar vaouez all. Pep tra vez diskleriet en diwezh. Ar paotr yaouank a zo e gwirionez ur polis a zo deuet da gas da benn un enklask diwar-benn diamantoù laeret gant ur c'hoarier fiñvskeudennerezh kozh. Luziet a-walc'h eo an istor hag ar garantez n'eo ket an destenn bennañ ennañ. Ret eo lavarout evelato ne vank ket ar pokoù en danevell-se evel en istor all hogen n' eus ket anv tamm ebet a drivliadoù don.

An eil istor a zo dudiusoc'h marteze daoust ma ne seblant ket an awen bezañ donoc'h na gwirionoc'h eget er gontadenn gentañ. Diskouez a ra deomp merc'h ul labourer-douar devot (« blaenor » eo er chapel) a zizolo n'eo ket e karantez tamm ebet gant ar pastor yaouank a zo bet prometet dezhi hag a zo kalz re zereat d' he soñj : ret eo lavarout ez eo ar plac'h yaouank divergont hag hardizh evit merc'h ur « blaenor », e-keñver he danvez-pried da gentañ ; mont a ra zoken d' an eisteddfod gant mevel ar vereuri pa fell dezhi terriñ an darempredoù gant Glyn, an danvez pastor he deus klasket amprouiñ d' ur mare. Ar wirionez eo e klask Rhian, ar plac'h yaouank, tizhout ur paotr yaouank all, Robin, m' eo kouezhet e karantez anezhañ o klevout anezhañ o kanañ (emaomp e Kembre ! ) hag a adkav en diwezh en Eisteddfod lec'hel dres.

An trivlierezh a chom diwar-c'horre a-walc'h d' am soñj. Koulskoude ez eo ar skrid-mañ plijusoc'h eget egile. Kavout a reer ennañ un alberz eus ar vuhez war ar maez e Kembre er mare-mañ. A-hend-all, mennad an aozer da dagañ dereadegezh ha « brizh-furnez » pilpous ar gevredigezh a zoare a zo kembreat rik ivez. Kreñv tre eo ar vuhezouriezh kalvinat e Kembre.

Ster an talbenn eo : Div istor karantez : Daoust hag e kemeri va c'halon ? Robin a zo lent.

## NOTENNOÙ

Savet pe gempennet eo bet an notennoù-mañ gant Per Penneg, Y. Ber Pirlou, Per ar Bihan ha Ronan Huon

### HOR MIGNONED

Klevet hon eus gant plijadur keloù ganedigezh ur plac'hig, Gaela hec'h anv, e tiegezh Per LEMOINE ha Marivon VALLERIE, e Kemper, da ouel Sant Kaourintin.

Pierre-Yves MOIGN hag e wreg zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Gwendal-Erwan, e Brest, d' an 3 a viz Genver.

Mikael CHAPELAIN hag Elen BIHAN zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Erwan, e Brest, d' an 10 a viz Genver.

Ronan PELLEN hag e wreg a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh c'hoar vihan Alan ha Mikael. Haude eo bet anvet. - E Montroulez d' an 28 a viz Genver.

Lizbed ha Perig KARO zo laouen o kemenn d' o mignoned ganedigezh Maella-Anna-Maria.

Lanig PAGEOT zo eürus da gaout ur c'hoar-vager. Kerfeunteun-ar-Vadelezh e parrez Gwaez (Bro-Naoned).

Judith ha Paol KEINEG zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Katell-Angharad-Mari, e Kemper, d' an 11 a viz C'hwevrer.

Andrea ar GOUILH hag Herve KORBEL a zo laouen o kemenn int bet euredet e Pluguen, d' ar 26 a viz Kerzu.

Hor gwellañ gourc'hemennoù.

Kas a reomp hor gourc'hemennoù ivez d' hor c'heneil ha koumananter GI KREACH hag a zo bet anvet da ezel Kuzul Kenskoazell ar Vretoned e Pariz.

61

### KAÑV

Klevet hon eus gant glac'har e oa aet da anaon an Doktor Herve DELAPORTE, d' an 12 a viz Kerzu e Kastell-Nevez.

D' e gerent ha d'e vignoned e kasomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

### KONTOU 1964

FREJOU		
Moulañ :	lurioù	
Niv. 102	1.772,03	
Niv. 103	1.692,52	
Niv. 104	1.619,40	
Niv. 105	1.752,49	
Niv. 106	1.912,79	
Niv. 107	1.860,37	
Bandennoù	153,20	
War un dro		10.762,80
Mizoù-post		416,14
Mizoù-bruderezh		249
Mizoù-burev		60
War un dro		11.487,94

ENKEFIADURIOU

Koumanantou	8.884,10
Niverennoù gwerzhet	377,70
Profoù	2.943
War un dro	12.204,80
STAD AR C'HEF	
Koll ar bloavezhioù all	2.412,85
Gounid 1964	716,86
An toull er c'hef	1.695,99

Gant kresk priz ar moulañ, n'hon eus roet d' al lennerien e 1964 482 bajenn da lenn ha koustet o deus 10.762,80 lur (e 1963, 510 pajenn o doa koustet 10.340,52 lur). Gwir eo ivez e voulomp bremañ muioc'h a skouerennoù. En enkefiadurioù, lodenn ar c'houmanantou a zo o uhelaat : 8.884,10 lur (6.470 lur e 1962, 7.351 lur e 1963).

62

## PROFOU

Degemeret hon eus an arc'hantou-mañ e-korf ar 4 miz diwezhañ :

HERE 1964 :

Frañsez Kervella, 110 lur ; Loeiz Bihannig, 35 ; R. Tremel, 20 ; A. Parker, 20.  
- War un dro, 185 lur.

DU 1964 :

Yann Thomas, 10 lur ; Mona Steven, 10 ; Andrev Latimier, 20 ; Jord Klerg, 5 ;  
It. S. Jaffres, 10, Frañsez Tourmen, 15.  
- War un dro, 70 lur.

KERZU 1964 :

Jozef Penneg, 20 lur ; Dll M. J. Marot, 10 ; D. Guichard, 10 ; Yann-Ber Piriou, 5 ;  
H. ar Floc'h, 5 ; Dll Ivona Marzhin, 25 ; M. Klerg, 20 ; Erwan Roperz, 5 ;  
Y. V. Bouessel du Bourg, 80 ; Yann Gwegen, 5 ; Erwan Souffes-Despré, 21 ; F. ar  
Bleiz, 5 ; R. Moride, 23 ; Dr Jakez Gwegen, 500.  
- War un dro, 734 lur.

Hollad ar profoù evit 1964 : 2.943 lur

GENVER 1965 :

Erwan Bonvallet, 5 lur ; Per Manac'h, 5 ; J. Abarnou, 15 ; Kdt Le Villain, 5 ;  
Andrev Cloître, 10 ; Ewan Konan, 3 ; Tonig an Timeur, 500 ; Yann Renault, 5 ;  
Merwen Runpaot, 5 ; Bernez Assicot, 15 ; Dll Janed Keilhe, 10 ; F. ar C'haloneg,  
2 ; F. Kemener, 5 ; Dll M. Gourlaouen, 10 ; Yann Gamilh Hanus, 10 ; Alberz  
Gwilhou, 110.  
- War un dro, 715 lur.

Trugarez, a-greiz-kalon, d' hor skoazellerien !

Muioc'h a brofoù e 1964 eget biskoazh ! (2.943 lur). E 1963 endeo e oa bet profet 2.921,50 lur d' ar gelaouenn. Gant ar skoazell bouezus-se ez eo aet war yac'haat hor c'hef kaezh ha ne vank ennañ bremañ nemet 1.695,99 lur, un netraig. Un tamm chañs c'hoazh hag e vo rampo lodenn an dispignoù hag hini ar gounidoù da geñver gouel Sant Selvestr. D' ar brofourion galonek eta, hon anaoudegezh vat !

## 559 KOUMANANTER

E dibenn miz Genver e kontemp 559 koumananter, rannet evel-hen :

Aodoù an Hanternoz, 74 ; Penn ar Bed, 110 ; Il ha Gwinum, 70 ; Lijer Atlantek, 26 ;  
Mor Bihan, 49 ; Rannvro Bariz, 118 ; Departamantou all, 54 ; Afrika an  
Hanternoz, 5 ; Afrika Du, 2 ; Iwerzhon, 14 ; Kembre, 11 ; Skos, 1 ; Kernev Veur, 1 ;  
Bro-Saoz, 2 ; Bro-Alamagn, 7 ; Helvetia, 1 ; Monako, 1 ; Izelvroioù, 3 ;  
Belgia, 1 ; Stadoù-Unanet, 2 ; Kanada, 4 ; Arc'hentina, 2 ; Perou, 1.

Gounezet he deus ar gelaouenn 47 koumananter e-pad ar bloaz tremenet (Genver 1964, 512 koumananter ; ha Genver 1963, 478). E Breizh e kontomp bremañ 329 koumananter (290 yearlene), 27 er Broioù keltiek, 172 e Bro-C'hall. En Europa emañ o chom an darn vuiañ eus al lennerien ; n' eus nemet 9 en Amerika ha 7 en



Afrika.

Harpet omp bet evit ar bruderezh gant Alan Al Louarn, Yann ar Beg, Yann Thomas, Teo Jeusset, Andrev Latimier, gant Per Denez ha skipailh AR VRO ha gant meur a hini all ouzhpenn. Tenn eo ar stourm. Gant ur skoazell brasoc'h c'hoazh ha strivoù urzhiet e teuio a-benn AL LIAMM da greskiñ ervat he nerzh hag he levezon.

63

BRUDEREZH WAR «AL LIAMM»

Setu amañ ar prizioù nevez :

	1 niverenn	3 niverenn	6 niverenn
1 linenn	1 lur	2 lur	4 lur
5 linenn	3	7	14
1/4 pajenn	3	15	30
1/2 bajenn	10	25	50
1 bajenn	20	40	80

### DEIZ-HA-BLOAZ

Ugent vloaz 'zo, e miz Genver 1945, e voe savet ar gelaouennig TIR NA N-OG (" Douar ar Yaouankiz "). Ar gelaouenn vreizhat gentañ o tont er-maez war-lerc'h reuz ar brezel e oa. Niverenn gentañ Tir NA N-OG ne oa anezhi nemet un nebeut pajennoù dister roneoskrivet, met ar gerioù lakaet e derou ar gelaouenn gant ar renerien Pol Gouriereg ha Ronan Huon ha tennet eus ur varzhoneg gant Roparz Hemon a oa  
D' hon huñvreoù kaer  
A vo trec'h d' ar Bed.

Ha trec'h eo bet rak ar gelaouennig a greskas hag un nebeut bloavezhioù war-lerc'h e voe kendeuzet gant Kened hag Al Liamm, dindan an anv AL LIAMM - TIR NA N-OG.

### ARC'HANTEREZH AN EMSAV

Trugarekaat a reomp an F. C. B. evit an arc'hant a zo bet kaset deomp evit sikour hon embannadurioù (1.000 lur). Sed amañ penaos eo bet rannet arc'hant keat ar brezhoneg :

Mizoù evit aozañ ar gest	2000 lur
Lizher-dle " Yannig "	300 lur
Lizher-dle " Troioù kamm Alanig "	2000 lur
Embannadur gwenedek " Troioù kamm "	2000 lur
Adembannadur Geriadurig Stephan-Seite (kentañ paeamant)	2000 lur
Embannadurioù AL LIAMM : " Abrobin", " Diamantoù Keroulaz ", " Dictionnaire Breton- Français "	1000 lur
Skol dre lizher Ober, Embannadurioù ar Bibl, Wannig ha Wennig, Preder, Hor Yerzh, Skol	1000 lur
Skoazell O.L.S.B.	4500 lur
Skol dre lizher Bleun-Brug	500 lur
Skol dre lizher Ar Falz	500 lur

64

En abeg d' ar mizoù bras hon eus bet gant embannadur *Geriadur Roparz Hemon* (500 pajenn) en doa Ronan Huon goulennet ur skoazell a-ratozh digant an Ao. Tricoire, rener an F. C. B. N' en deus ket bet a respont evit c'hoazh. Sed amañ ar mizoù hon eus bet gant an Embannadurioù e 1964 :

Abrobin, gant Yeun ar Gow	3.450,70 F
Diamantoù Keroulaz, gant Roparz Hemon	4.691,70 F
Dictionnaire Breton-Français, gant Roparz Hemon	13703,23 F
WAR UN DRO	21.845,63 F

En arc'hant kozh 2 vilion 184.563 lur. Ar skoazell a sav betek-hen da gant mil lur kozh.

Yeun ar Gow en deus prestet deomp 1.000 lur evit embann e levr " Abrobin ".

## KELEIER DIGANT JARL PRIEL

Hor c'henlabourer Jarl Priel a skriv deomp da geñver Nedeleg ez eo bet war var mont da anaon gant un « infarctus ». Goulenn a ra diganeomp embann evit e vignoned ar gerioù-mañ : « Jarl Priel a zo gwall glañv er mare-mat ha dre-se n'hello ket evel boaz skrivañ d' e vignoned da goulz an deiz kentañ bloaz. Ra vo digarezet ganto «. 217, La Penne-sur-Huveaune (Bouches-du-Rhône).

## KELAOUENNOU

" Kannadig Kêr-Vreiz " a zalc'h mat hag ur blijadur eo evidomp gwelout emañ an darn vrasañ anezhañ e brezhoneg. Pennadoù evel " an Nevezc'herioù e brezhoneg " a dalv ar boan bezañ lennet, zoken ma n' asanter ket d' an holl menozioù a zo e-barzh. An tabut diwar-benn kudenn ar gerioù nevez n' eo ket tost da echuiñ. Ra gouno koulskoude paotred ar brezhoneg arnevez n' eo ket ur yezh melezeour buhez speredel ar filologourien hepken. An holl vrezhonegerien o deus ur roll da c'hoari evit goveliañ benveg Breizh da zont. Hag evidomp-ni douget a-walc'h e vefemp da soñjal evel an Ao. Klerg pa skriv war niverenn 41 Barr-Heol : « Daoust ha c'hoari er stumm-se n' eo ket en un doare bennak kaout dispriz evit ar Bobl hag en deus gant poanioù bras en e vadoù, en e spered, en e galon miret betek ennomp ar yezh-se anvet ar brezhoneg, ur yezh mac'hagnet ha goullet, ur yezh klañvidik, ha lorc'hus koulskoude, met ur yezh bev bepred, dimp da bareañ kement gwander a c'hell bezañ enni, gant karantez tener mibion ha merc'hed ur ouenn illur ? »

Meur a dra all a vefe da venegiñ e **Barr-Heol** atav ken saourus ha ken kempouez e yezh.

Plijet omp bet ivez gant pennad Youenn Olier pa lavar da skouer : « Adunaniñ eveljust, ne dalvez ket kement hag unvaniñ , se zo sklaer, peogwir ez eus plas e Breizh evit emsavioù a bep seurt. Adunvaniñ n' hell bezañ nemet emglev hag intent vat etre ar Vretoned. Un dra hag a aesafe an emglev e vefe anzav ne c'hello Breizh bevañ nemet ma vez savet ur stad vroadel en diwezh, hag e tle eta kement oberenn a vez savet e Breizh, tennañ da enaouiñ emskiant vroadel wirion e-touez Breizhiz ».

65

Chom a reomp e Bro-Dreger, gant **Mouezh Sant Erwan**, kelaouenn un dornad yaouankizoù gredus eus Lanuon. O fal a zo « saveteiñ Mab-Den en e bezh, e Breizh ». Frouezhus eo e meur a genver lenn ar c'hendiviz etre c'hwec'h paotr yaouank eus skolaj Sant-Jozeb, diwar-benn Breuriez Sant Erwan. Santout a reer en o c'homzoù ur birvidigezh-dreist hag a lak ac'hanomp da gaout nerzh a-wechoù pa welomp pegen dister eo bet hon labour betek-hen.

An Aotrou Kalvez en deus embannet nevez zo ivez ul levrig kanaouennoù evit e baotred : **Gwir Vretoned**. E-kichen ar re voutin e kavomp meur a gan nevez evel Kan bale Nevenoe gant Glenmor, Setu echu ar goañv, Paotred ar Yeodet gant Y. Derrien hag ur bern kanoù etrevroadel evel Santa Lucia, Auld Lang Syne hag all, bet troet e brezhoneg gant Roparz Hemon. Al levrig a rank bezañ e dalc'h kement-hini a gar kanañ, n' eo ket hepken e fromadennoù relijiel pe brogar met ivez e levnez-bevañ hag e fent.

Niverenn 43 **Hor Yezh** a glotfe muioc'h a dra sur gant temz-spered paotred ar Filoloji eget gant hon hini. Ret dimp anzav koulskoude ez omp bet plijet bras o lenn skridvarnadenn Arzel Even diwar-benn levr Leon Fleuriot. Daoust ma oa disteroc'h al lodenn vrezhonek e-barzh, ez omp bet plijet ivez gant niverenn 32 **Sturier Yaouankiz**. Kaer eo bepred ar gelaouenn da welout hag ur vrogarantez wirion a santer e pep pennad.

Echuiñ a raimp gant niverenn Genver **ABK**. Un druez eo soñjal ez eus c'hoazh kement a vrezhonegerien ha n' ouzont ket petra dalv an teir lizherenn-se. Gouez da **ABK** e c'hellomp heuilh en hor yezh darvoudoù ar bed-a-bezh pe lenn pennadoù aes ha sklaer o plediñ gant kudennoù hon amzer. Kentelius-kenañ eo lenn ivez ur

pennad evel Miz ar Brezhoneg pe Amzer-vak. En ur lenn " Ar Vrezhoneg o tont da Arvorig " e soñjemp el labour ramzel ez eus da seveniñ war an dachenn-se. Peur hon devo ul levr istor sirius, sklaer, ha gouiziek hag a vo war un dro, skrivet en ur brezhoneg ken brav hag hini Roparz Hemon ?

« Al lugernigenn aour war enaou er gwalarn  
Tour-tan ar spi... Tour-tan ar spi. »

(F. Kervendal, " ABK " niv. 75)

Y. B. P.

### " STUDI HAG OBER "

Studi hag Ober, niv. 2-3, a zo ivez o paouez dont er-maez. Ur pezh kaier roneoskrivet eo, 60 pajenn ennañ. Ar skrid a zo " Lennadurioù evit an Azvent ", savet eo bet gant Maodez Glanndour.

Priz : 7 lur. : Koumanant-bloaz da 4 niv. : 12 lur. - D11 SAINT GAL DE PONS, C.C.P. Rennes 519 40.

66

### " TALAR AN HOC'H "

Talar an Hoc'h gant Meven Mordiern, Niverenn 57 " Preder ", ez eus anezhañ un oberenn diembann diwar zorn Meven Mordiern. Evel ma lavar G. Etienne en digoradur neegas ar skrid-mañ netra nevez met un diverrañ eo eus pennmenozioù ar skrivagner.

Daoust da se ez eo dedennus tre da lenn rak menozioù Mordiern n' int ket boutin ha menozioù souezhus a-walc'h en doa diwar-benn al « lennegezh ».

Priz ar c'haier a zo 5 lur. - C. C. P. G. ETIENNE 16 093-13 Paris.

### AR C'HRIST D' AN INDIANED

Gant dalc'husted e kas an Aotrou Troal keleier eus ar Perou. An niverenn 16 eus e gannadig zo degouezhet ganeomp. War niverenn a zeu " Al Liamm " e vo ur pennad gant an Aotrou Troal diwar-benn Bro-Berou.

### A ZIVOUT PENNAD YOUENN OLIER :

Buhez Seamas O Conghaile (" Al Liamm ", niv. 107)

Degas a reomp da soñj d' hol lennerien ez eo bet embannet e-barzh AR VRO (niv. 9, p. 36) ul luc'hskeudenn o tiskouez ur batailhon eus an " Irish Citizen Army ", krouet gant Seamas O'Conghaile (James Conolly) : renket eo ar soudarded dirak Ti ar Sindikat : " Irish Transport and General Workers' Union ". Dindan anv ar Sindikat e c'heller lenn war ur skritell : « We serve neither King nor Kaiser but Ireland » (Ne servijomp ket ar Roue nag ar C'haiser met Iwerzhon hepken).

Brendan Behan ha Sean O'Casey (sell. AL LIAMM, niv. 107) o doa stourmet un amzer a voe, evit seveniñ uhelvennad O'Conghaile, ha Behan a skrive c'hoazh e 1962 : « Sur on e vo graet ar c'hammed kentañ war-raok en Iwerzhon gant al labourerien-ijinerzh en Hanternoz ; int-i a raio eus Iwerzhon ar pezh a felle da renerien Emsavadeg 1916 : ur Republik Sokialour ».

### AN ARZ E BREIZH-VEUR E GRE AR ROMANED

" Art in Britain under the Roman ", gant J. M. C. Toynbee, a zo anv ul levr embannet warlene e Bro-Saoz, hag a vez kavet ennañ skeudennoù an darn vrasañ eus an oberoù arzel kavet e Breizh-Veur ; met an dra souezhusañ, evel ma skriv Geoffrey Grigson (The Observer Week-End Review, 13-12-1964), a zo ne gaver arz ebet enno : an holl oberoù-mañ a zo drevezadennoù divlaz eus an arz roman pe c'hresian ; setu pezh a c'hoarvez p' en em laka ur bobl da varmouzañ e vistri, evel ma rae ar Vrezhoneg pinvidik e kêrioù Breizh-Veur ; er c'hontrol ; bleuniañ a rae d' an hevelep mare an ijin keltiek en Iwerzhon chomet dieub, oc'h ober zoken gant stummou 'zo amprestet digant ar sevenadur roman met hep drevezañ anezhi hag o krouiñ oberoù dibar. « Disheñvel diouzh darn vuiañ ar Gelted all, Iwerzhoniz an amzer-se ne zeuas ket da gaout mez eus o sevenadur, ne voe ket ret dezho kennebeut plegañ da zoareoù-meizañ estren, ne voe ket anezho tud

trevadennet o drevezañ betek neuizioù garvañ ur sevenadur urzhiet-groñs, bouedet mat, ijinerezhet ha dañvezennek, » setu pezh a skriv Frañseza Henry e " L'Art Irlandais ". (Aliañ a reomp hol lennerien sellout ouzh teir levrenn an oberenn gaer mañ, embannet e 1964 gant " Les Editions du Zodiaque ").

67

#### **MOUEZH AR VRO (kendalc'h...)**

« Ret eo bezañ reizh e-keñver Pariz, rak e Pariz hon eus kavet emskiant hor broadelezh aljeriat. Ma vefen chomet en Aljeria ne vefe ket bet heñvel ar gudenn. Pa 'z on erruet e Pariz santet e oan Aljeriat ha deuet eo din ivez an ezhomm da addizoleiñ va bro... Met n'eo ket al livourien o deus digoret an hent da az-ginivelezh sevenadurel Aljeria, ar skrivagnerien an hini eo. Klasket o deus ijinañ ur stumm aljeriat da skrivañ, un doare da lakaat an ene aljeriat en o oberoù... »

ABDALLAH BENANTEUR (livour aljeriat, ganet e 1936.  
Interview roet da " Afrika ", Niv. C'hwevrer 1964.

#### **SKOEDOU AOUR AN DUKEZ ANNA**

D' an 2 a viz Kerzu eo bet lakaet e gwerzh, en Ostaleri Drouot e Pariz, un dastumad pezhioù-mouneiz kozh perc'hennet gant un tiegezh vreizhat ; bez' e oa en o zouez ur pezh aour kaer ha rouez-tre (ne vez anavezet nemet un nebeut skouerennoù anezhañ), oberiet e Breizh e 1498 dindan urzh an Dukez Anna ; deuet e oa an Dukez en dro da Vreizh goude marv he gwaz Charlez VIII roue Bro-C'hall hag evit merkañ e oa Breizh ur vro dieub he doa roet urzh da oberiañ pezhioù-mouneiz. Ar pezh-mañ a zo bet lakaet e bann da 25.000 lur nevez ha gwerzhet eo bet evit 52.000 lur nevez !

#### **AN ILIZ HAG AR YEZHOU**

Gouzout a reomp ez eo bet aotreet d' ar 26 a viz Gouere 1964 gant Eskibien Kemper, Gwened ha Sant-Brieg ober gant ar brezhoneg el lidoù-sakr hervez reolennoù nevez al liderezh. Ordrenañsoù heñvel a zo bet kemeret evit an euskareg hag ar c'hatalaneg ; aotreet eo bet en Eskopti Baiona ober gant **al** levrioù savet hag embannet gant Beneadiz Abati Belloc ; ar Beneadiz-se a ra ul labour dispar evit an euskareg : embannet o deus e 1963 un dastumadenn destennoù relijiel, **Irakurgaia**, hag un dastumadenn salmoù, **Salmoac** ; savet o deus ivez tonioù nevez evit al lidoù-sakr tonioù harpet war ar c'hantikoù pe ar c'hanaouennoù hengounel. (Enskrivet eo bet un oferenn euskarek, kanet gant menec'h Belloc, war ur pladenn e gwerzh e ti " Goiztiri ", 14, rue des Cordeliers, Bayonne). Aotreet eo bet nevez 'zo en eskoptioù euskarat dindan dalc'h Bro-Spagn lenn an Abostol hag an Aviel en euskareg abaoe ar lañ a viz Genver 1965, hag a-benn ar 7 a viz Meurzh e vo gellet ober gant an euskareg er sakramantoù hag e darnoù all an oferenn ; an hevelep aotre a zo bet roet gant an Eskibien evit ar c'hatalaneg. Keloù mat evit Euskariz ha Katalaniz !

68

Notenn. - Piv, e-touez hol lennerien, a c'hellfe taolenniñ deomp al labour kaset da benn gant Beneadiz Belloc ha lavarout deomp ivez perak ne vez ket graet heñvel gant Beneadiz Landeveneg ?

#### **DESKADUREZH YEZHOU AFRIKA E BRO-C'HALL**

Divizet eo bet, e miz Du 1964, gant gouarnamant ar Republik Kreiz-Afrikat lakaat ar sangoeg da yezh vroadel. Heuilhet e vo ar skouer-mañ gant Stadoù all, a skriv an Ao. P. Alexandre, kelenner war ar yezhoù bantouek e Skol ar Yezhoù Reterel e Pariz, en ul lizher embannet gant " Le Monde " d' an 12-12-1964, hag en abeg da se e klemm abalamour da stad truezus deskadurezh yezhoù Afrika Du e Bro-C'hall ; chomet eo houmañ er c'heñver-se kalz war-lerc'h Bro-Alamagn, ar Stadoù-Unanet, an Unvaniezh Soviedel, Bro-Saoz ha zoken Belgia ; ur skouer : tra ma vez un tregont bennak a arbennigourien war yezhoù Afrika Du e " School of Oriental hag African Studies " e Londrez, n' eus nemet pevar e Skolioù Uhel Bro-C'hall a-bezh, hag ouzhpenn ne vez ket roet dezho an tuioù da ober ul labour efedus. Ar yezhourion-mañ a vez diskouezet dezho disfiziañs gant melestrourion « brogarour

» ; ar re-mañ o deus diskred outo dre ma soñjont emaint o vont da lakaat Afrikiz da zilezel ar galleg peogwir e vezont aliet ganto ober gant o yezhoù. Ha setu perak gouarnamantoù Afrika hag an U.N.E.S.C.O. ne gavont ket arbennigourien e Bro-C'hall.

### **"AR VRO"**

War niverenn 28 Ar Vro e c'heller lenn ur pennad dudiuz e brezhoneg gant Per Denez a-zivout " Al Levezon Iwerzhonat war an Emsav ". Bez ez eus ivez div skeudenn diembann eus Meven Mordiern, F. Vallée, Abeozen ha Roparz Hemon. Koumanant : 20 lur. - J. DESBORDES, C.C.P. Nantes 1493-79.

### **HISTOIRE DE BRETAGNE, gant Jozef Chardronnet**

Kemenn a reer deomp embannadur al levr-mañ, ennañ 250 pajenn. Ar studiadenn a zo kaset betek 1960, pezh a blijo da galz ac'hanomp. Met perzhioù mat all en deus sur an oberenn, pa anavezzer spered lemm hag oberiantiz ar skrivagner.

Priz al levr : 9 lur franko.

Goulenn digant : STUDI HA LENN, 75, rue de l'Assomption, Paris (16') - C.C.P. Paris 8626-20. - An ti-embann zo " Nouvelles Editions Latines ".

69

### **" A CONTRE-COURANT "**

Dont a ra er-maez eus ar wask e Pariz - brasañ kêrbenn ar Vretoned bremañ - ul levr savet gant Keraudren unan eus ar stourmerien entanus e galon e-pad ar brezel :

A Contre-courant, e anv.

Moulet eo gant " Les Editions du Scorpion ", 1, rue Lobineau, Paris (6e), en o dastumadenn " Alternance ".

A dra sur eo al levr-se « a-enep ar froud » triliv a redas e-pad an hañv diwezhañ : niverennoù glas-gwenn-ruz ur c'helc'hgelaouenn vrudet a zo c'hoazh en ur c'horn bennak eus pep ti. Hag an holl gelaouennoù a Vro-C'hall a savas o mouezh evit « ar Vamm-Vro garet », a-enep ar « Voched », evel just.

Amañ e kavor danevell an Emsav breizhat goude 1918 betek 1945... hini Breiz Atao dreist-holl. Ha penaos e voe gwalleget ar brizonidi vrezhon e toull-bac'hioù Bro-Frañs, en hini Fontevrault dreist-holl, e-lec'h ma varvas kalz tud gant an naon.

### **" SANG D'OCCIDENT "**

Degouezhet eo ganeomp levr barzhonegoù gallek nevez C. Le Mercier d'Erm. El levr, awenet gant ar vrogarantez, e kaver ur varzhoneg e brezhoneg.

### **UN DISKOUEZADEG LEVRIOU BREZHONEK**

Herve ar Menn eus Pariz a skriv :

« E Pariz e vez bep bloaz ur « vente des écrivains bretons » (sic). E galleg eo skrivet levrioù an dud-mañ ha peurliesañ ne vez ere ebet etre ar skridoù ha bro ar skrivagnerien. Gwashoc'h c'hoazh, n' eus lec'h ebet d' ar skridoù brezhonek eno. Mezh am bez bep gwech ma 'z an d' ar werzhadeg-se. Evit diskouez ez eus estreget galleggerion e Breizh e vo aozet un diskouezadeg levrioù e Pariz. Digor e vo e kêr-Varker, 15, rue Guy-Moquet azalek 4 eur betek 8 eur noz etre ar 6 hag an 13 a viz Meurzh 1965 : war wel pep tra embannet abaoe 1920 betek hiziv. Aozet eo dindan baeroniezh an Emglev Sevenadurel, kêr-Vreizh, K.A.V. ha kelennerien ar brezhoneg. »

### **OFERENN E BREZHONEK E BREST.**

Evel bep bloaz abaoe 1958 e vo graet e parrez Sant-Mark teir beilhadeg Koraiz, d' ar 24, d' an 31 a viz Meurzh ha d' ar 7 a viz Ebrel. Da geñver pephini e vo lavaret un oferenn e brezhoneg penn-da-benn. An Aotrou 'n Eskob Fave a lavaro hini ar 7 a viz Ebrel. E Brest e vo tu da gaout oferenoù all e brezhoneg ma

fell d' ar vrezhonegerien.

70

#### **NOTENN**

An Dr Paol Laurent, rener THE BRYTHONIC SOCIETY ha skoazeller feal d' AL LIAMM, a c'hourdrouz un tamm ac'hanomp da vezañ chomet hep ober meneg eus bodadegoù bet dalc'het warlene ha pouezus evit Keltia a-bezh, a roomp amañ dindan ar roll anezho :

- Meurzh-Ebrel : Kendalc'h Keltiek Enez Vanav (rentañ-kont bet embannet war AR VRO).
- Mezheven : Kendalc'h F.U.E.N. (Unvaniezh kevredigezhel kumuniezhioù gouennel Europa) e Regensburg : e-touez an dileuridi, 5 Breizhad ha 2 Gernevad.
- Eost : Eisteddfodd ha Gorsedd Abertawe : eno, ur Breizhad, dileuriad ez-ofisiel.
- Eost : Skol Haf Coleg Harlech, Skol Haf Truro.
- Eost : Gorsedd Kernev-Veur e Tintagel.
- Gwengolo : Kendalc'h F.U.E.N. en Andorra.

Laromp ouzhpenn ez eo bet an Dr Laurent kannad Breizh en holl vodadegoù-se. Hor gourc'hemennoù d' hor c'henskriver evit e oberiantiz.

#### **BUHEZ KER-VREIZ**

Ar gevredigezh-se, krouet 37 bloaz 'zo endeo, he deus kaset abaoe ul labour bras da benn ha souezhet e vefed ma c'hellfe bezañ jedet niver an dud tremenet dre sal deñval straed St-Plasid. Rener kêr-Vreiz a zo bremañ Yann Gerlann ha kenderc'hel a ra gant strivoù prezidantad ar bloavezhioù diwezhañ : Per Laurañs, Erwan de Gouyon-Matignon, Frañsez Ters ha Yann Moign e-sell da zerc'hel e Pariz ur greizenn a sevenadurezh vreizhat.

Kannadig Kêr-Vreiz a c'hellit kaout en ur gas 5 lur e giz skoazell-bloaz. - C.C.P. 5356 83 Paris (6°).

#### **GOUEL BLEIMOR**

D' ar 17 a viz Genver o deus roet Skaouted Bleimor da vugale Bretoned rannvro Bariz levrioù e brezhoneg pe diwar-benn Breizh hag ur gaer a arvestadeg. Ampartiz hag ijin an aozerien a zo da veuliñ ha koun a zalc'hor eus balc'hded ar sonerien yaouank ha duster notennoù an telennerezed. Herri Gaouisin, yaouank hag helavar bepred, a ginnigas an abadenn lodenn dre lodenn hag a renas kenstrivadeg sevenadurel ar vugale. Entanus e voe prezegen Per Geraod, rener Bleimor. Strollad Bleimor, ezel eus Emsav Skaouted Europa, a zo endeo un elfenn eus ar savadur kevredigezhel a zastumo un deiz, spi hon eus, pobloù Europa gozh.

Degemer a ra Strollad Bleimor ar Vretoned yaouank eus 8 betek 25 bloaz. Skrivañ da : Per GERAUD, 6, Villa d'Estienne-d'Orves, Clamart (Seine).

71

#### **LIZHER DIGANT SKINGOMZ HA SKINWEL**

Bet hon eus al lizher digant A. Omnes hag a zo e penn Kevredigezh Selaouerien an O.R.T.F.

« Bloavezh mat d' hon holl vignoned ! Ra vo 1965 bloavezh an trec'h bras, n' eo ket hepken evit hor skingomz ha skinwel vrezhonek hogen ivez evit an hini vreizhat e galleg.

Hon digarezit evit bezañ chomet keit all hep embann hor follennig. Gwalleurioù hon eus bet. Hor perc'hentiezh Bro-Dreger drailhet gant korventenn spontus an 9 a viz Here, hor burev Sant-Brieg dour-beuzet ha da heul ur bern paperoù prizius kollet, ha setu bremañ ez eo ret adkempenn hag adsevel.

Kenlabourerien a ra diouer dimp. Hor sekretour an Ao. Moreau re sammet gant al

labour ne c'hell ket daoust d' e youl vat ober kalz a dra evidomp. Gant hor prezidant Kerlann ez eo an hevelep kudenn, ha n' eo ket alies e klevomp diwar e benn. Piv a c'hellfe sikour ac'hanomp ? Piv, da skouer, a skrivfe gwech ha gwech all ur pennadig diwar-benn ar skingomz hag ar skinwel ? An holl skridoù a vo degemeret mat, zoken al lizheroù kunujennoù gant ma ne vezint ket skrivet evit dispenn hepken.

Evel ma oar pep hini, un nebeut gwellaennoù o deus tizhet kaout ar mizioù tremenet gant kalz a boan, mignoned ar skingomz vrezhonek, hogen pell emaoomp c'hoazh eus ar pezh o deus hor breudeur a Vro-Gembre en o yezh, da skouer.

Hor c'heneil Charlez ar Gall, rener an abadennoù brezhonek, a ra e seizh gwellañ evit reiñ bep sul danvez plijus da selaou hogen kompren a reomp mat-tre ne c'hell ket ober burzhudoù gant ur budjet reuzeudik evel e hini. Ar vignoned a garfe sikour anezhañ evit ar c'hoariva, ar gontadennoù, ar c'han, ar sonerezh, an douaroniezh, ar jedoniezh, ha., ha., a zo pedet da gas o anvioù dimp ar c'hentañ ar gwellañ.

Tud yaouank " Oaled Abherve " e Sant-Brieg o deus pell 'zo soñjet aozañ ur pezh-c'hoari evit ar skingomz. Spi hon eus e krogint dizale gant al labour-se.

Burutellerezh mar plij !

Karout a rafemp kaout an aliesañ ar gwellañ burutellerezh diwar-benn kasadennoù ar sul. Lavarit dimp (pe da Charlez ar Gall), petra a blij deoc'h ha petra ne blij ket. E doare-se hepken e vo tu d'ober hervez c'hoant an darn vuiañ eus ar selaouerien ha tu e vo ivez da ziskouez da renerien an O.R.T.F. e Pariz n' eo ket diseblant ar vrezhonegerien e-keñver o skingomz. N' eo ket ar wech kentañ e c'houlennomp an dra-se digant hor mignoned hogen, koulz lavaret, en aner. Mantrus eo gwelout pegen diegus eo ar Vretoned evit kregiñ en ur bluenn. Buan, mar plij, ul lizherig pe zoken, ur gartennig !

Hor Burev-plasañ. - Un toullad mat a c'houlennoù digant kenvroiz o klask dont en-dro da Vreizh hon eus bet hag ivez un nebeut digant labouradegoù o c'houlenn implijidi ha ma c'hellfemp paeañ unan bennak d' ober war-dro ar fichenoù ha da skrivañ evit brasañ mad ar Vro. Goulennet hon eus pell 'zo ur sikourig digant an departamant hogen betek-hen n' eus bet ur respont nemet evit lavarout dimp e vefe pledet gant hor goulenn. Gortozomp eta, hogen hep re a fiziañs.

72

N' ankounac'hait ket kas ur skodenn bras pe vihan evit ma c'hellimp ober muioc'h a vruderezh e 1965. K.R.P. 2031-55 Roazhon, en anv an Itron Omnes. Bennozh Doue a-greiz kalon !

G. S. - Ar c'hwekañ trugarez d' an Dimezell Y. Charriou eus Sant-Brieg, teñzorerez " Oaled Abherve " evit he skoazell hegarat. Gant ar brasañ evezh he deus renket ha studiet pizh an holl follennoù enklask diwar-benn ar skingomz resevet ganimp evit gouzout ar pezh a blij pe a blijfe ar muiañ d' hor c'henvroiz en abadennoù. Ur rentañ-kont a roimp diwezhatoc'h.

## **LUC'HSKEUDENN**

Luc'hskeudenn Youenn Olier bet embannet war hon niverenn diwezhañ a oa bet kemeret gant hor c'houmananter an Ao, Thomas, beleg eus Lanuon.

AR VRO

SOMMAIRE N° 28

EDITORIAL Bloavezh Mat.

Pol LE DORE; : Ballade aux Fossoyeurs.

Alain LE BANNER : Europe et Bretagne.

Per DENEZ : Al Levezon Iwerzhonat var an Emsav Breizhat

Léon JASSON : Poèmes, pensées, traductions.

M. ST GALL DE PONS : Union Spirituelle Bretonne,

M. CARRIÈRES : Le Manifeste Fédéraliste de 1892.

JEAN LE RAZAVET : L'Economie de la Bretagne XIX et XX.  
Abonnement : 20 F  
J. DESBORDES, B. P. 48, Brest - C.C.P. 1493-79 Nantes



# AL LIAMM 109

Meurzh-Ebrel 1965

21 añ Bloavezh

## TAOLENN

An Toull en Nor, gant Youenn Gwernig	75
Ar Roueed, gant Youenn Gwernig	76
Ar C'hovel, gant Youenn Gwernig	78
Noz derc'hent Gouel Yann, gant Angela Duval	80
Daeloù, gant Walt Whitman ( tr. J. Kler)	81
Nevez-Amzer, gant M. L. G.	82
Douaradur piv ? gant Harri Webb (tr. P. Denez)	83
Chomet e oa ar vazh e toull an nor, gant Y ar Gow	84
Skeudenn: Ur Vamm Indian	94
Betek Dent-Heskenn an Andoù, gant E. Troal	95
Diazezoù ar sevel gwerzioù, gant Kervella	103
Roje Casement, gant Per Denez	119
Komzoù Casement	120
Daskor relegoù R. Casement, gant A. Heussaff	124
Bodadeg ar C'hevren Keltiek	126
Al Levrioù, gant A. Heussaff, Per Denez ha Per ar Bihan	129
Notennoù	135

## **An Toull en Nor**

YOUENN GWERNIG

Ya  
 Re aes 'oa  
 Ober un toull  
 E koad tano da zor  
 N' hellez ket bout da-un  
 Bout da-unan er bed-mañ ken,  
 Aet eo da get amzer ar penitioù,  
 Ret eo degemer ar reuz a ren er bed.  
 N'heller ken tec'hout neblec'h :  
 An engroez eo a leugn an den  
 Gant e yud hag e youc'h  
 En ur bed n' eo bet  
 Morse an den  
 Gwashoc'h  
 E-un.

## **Ar Roueed**

YOUENN GWERNIG

Roue ar Grouadelezh,  
 an Den,  
 dre m' eo an trouzusañ marteze  
 n' eus bet loen na tra krouet  
 gouest d'e zislavarout  
 er bed.

Koulskoude me,  
 Roue ar Grouadelezh,  
 den,  
 skrign hirisus an doullerezh dredan a ra din poan dent :  
 me 'zo un den eus ar c'hantved kent.

Me 'zo un den eus meur a gantved kent  
 hag e veajan bemdeiz en trenioù a-vremañ,  
 evel ar c'hoz hag ar c'hilh hag ar preñv  
 e veajan bemdeiz e kof an douar :  
 me 'zo un den a-vremañ.

Trouzoù sebezus a glever en toulloù-se :  
 ruilhadennoù safarus dindanoc'h  
 giz ma vefe bouzelloù an douar prest da darzhañ,  
 boubou un tren e pellder an hent-kev, o tostaat,  
 e fuc'h a verzer o kreskiñ tamm-ha-tamm  
 hag a-daol-trumm karbac'h ar reklom  
 o troc'hañ e gomz da bep-hini,  
 ha chourig euzhus al loen dindan ar wesken - skrijus,

Tudoù sebezus e vez gwelet en trenioù-se,  
 pa seller mat ouzh an dremmoù stank-ha-stank  
 hejet lusk-dilusk - unanet -  
 e soñjer eo deut an hollved

gouennoù tud an hollved  
Roueed ar Grouadelezh  
d' en em skoachañ gwitibunan  
en ur voest.

New-York, 1963.

78

## **Ar C'hovel**

YOUENN GWERNIG

Un taol, un eil, un trede ha koroll ar morzhol  
un taol, blim, un eil ha tintirin an dir war an annev.  
Hogen se oa diwezhatoc'h  
p' oa marvet da vat kalon an ardivink meur :  
abafa... bafa... abafabafabafa...  
ar gwir oa gant Jan Poud, ar genaoueg a sant  
a dalv e ludu koulz ha re an den meur, bremañ ;  
ha se oa diwezhatoc'h  
p' oa bet diframmet unan-hag-unan, aketus,  
bleunioù va huñvre  
kefioù ha brankoù noazh, ograoù mut, difiñv,  
dirak ar sav-heol nodet, euzhus, evel da viken.

N'oa neuze met ar poultrenn-se, druz ha du,  
skouarnoù merglet, rodoù ramzel  
hag ar wezenn ber-se he frouezh trenk  
dezho neuz genn ha skouarn alar  
gant blaz an dir ha blaz al lard, druz ha du ;  
ha c'hoarzh ar gov o tarzhañ 'vel ar gurun,  
divrec'h estlammus, blev e vrusk ha lufr  
e gof kelc'hiet gant ler e davañjer,  
ramz bruc'hellus e gorf maget mat  
oc'h ober goap ouzh e ene marnaoniek,  
ramz ha doue 'n elfennoù ha tint an dir  
n' ouie tra eus e eed war e dremenvan  
n' ouie tra eus e eed war-nes genel tarzhoù-deiz  
morse c'hoazh bet huñvreet gant mabig an den.

79

Gwigour ha skrign roudoù un diaoul dindan samm  
kef ur wezenn fav,  
sonerezh kozh, sonerezh ragistorel :  
n' eo mat ar marc'h ken met d' ober ul loen sirk,  
kefioù an eil war egile, Himalaya, ti prenn an Noz-meur,  
huñvreoù gouez, diere, e frond c'hwerv ar sev ;  
dre vurzhud n'oa bet flastret e gorfig da zen  
'pezh a c'hoarvez a vare da vare d' ur goadour  
'pezh a c'hoarvez bemdeiz da dud 'vel da vuzhug.  
Denelezh malet er vilin diaoulek bet diouganet pell 'zo  
bet diouganet, diouganet meur a wech ;  
buzhugenn flastret ha troc'het dre pevar  
an tammoù o weata 'n o gouezded dall  
ha gouzañv a ra ar vuzhugenn peder gwech ?

Kraoñ gwisket e paper arc'hant, orañjez,  
tammigoù paper, liesliv, c'hwez ar peg hag al liv,  
mousc'hoarzh habask ur seurez, ker kuñv,  
seurezig he daoulagad boull ken glas, ha glan,  
o tibunañ gerioù fentus o son, kevrinus pe dianav  
o ster, yezh an Aotrounez : yezh an archer,

dimezellig an ti-post ha mab an apotiker...  
Hogen se oa pell 'zo  
pa darzhe c'hoazh er c'hovel c'hoarzh doueel ar gov.

Meurzh 1965.

80

ANGELA DUVAL

## **Noz Derc'hent Gouel Yann**

Noz verrañ ar bloaz. Noz an deiz hirañ  
Dek eur ! An noz na gouezh ket  
Sklaer-hewel ha resis pep furm er pellder.  
An oabl en deus un amliv hanter gañv :  
Glas-moug tanav, dibafalus, dilavarus,  
Liv d' ar c'hevren, liv d' an hiraezh,  
Liv d' an eñvor...

Splann al loar. Kann.  
Diwelus c'hoazh ar stered.  
An noz he deus un neuz soñjus.  
Un neuz hiraezus, ur soñj kañvaouus 'michañs  
D' ar boazioù kouezhet en Tremenet.  
Splanner ha levnez kent  
An nozvezhioù derc'hent Gouel Yann  
E maezioù Breizh hag er bourkoù bihan.  
Flammoù ruz o sevel a bep kêriadenn.  
C'hwez ar moged en aer noz.  
Youc'hadennoù skiltrus bugale  
Krapet war ar c'hleuzioù  
En-dro d'an tuchennoù  
O kontañ an tantadoù  
Tro-war-dro.

Henozh, hepken, 'us d' ar glen  
Tantad sioul, tantad yen :  
Al loar splann,  
En he c'hann  
O skediñ war al lann  
Noz derc'hent gouel Yann...

23 Mezheven 1964

81

WALT WHITMAN

## **Daeloù**

Daeloù ! Daeloù ! Daeloù !  
En noz, va-unanig, daeloù  
O kouezhañ a-veradoù war an draezhenn wenn, sunet gant ar jimbl.  
Daeloù, steredenn ebet en oabl... Teñval ha goulllo eo pep tra.  
Daeloù meizh diwar un dremm vinwasket.

O ! Piv eo an tasmant-se ? Pe stumm 'welan-me en deñvalijenn, daeloù gantañ ?  
Petra eo 'ta an dolzenn, disneuz, krommet, skoachet eno en draezhenn !  
Froudoù a zaeloù, difronkadennoù a zaeloù, jahinerezh, mouget gant garmoù kriz !  
O ! Korventenn denel hag a sav, hag a red a-hed an draezhenn dre gammedoù bras.  
O ! Korventenn diroll, kañvus, nozel ! O ! strinkadennoù an avel dic'hoanag.  
O ! Skeud ! ken madelezhus ha ken sioul en deiz, gant da fas seder ha da gamm  
ingal,  
Met en noz, e-keit ma nijez kuit, diwel - O, neuze pebezh meurvor diboell  
A zaeloù ! a zaeloù, a zaeloù !

(troet hag aozet diwar ar saozneg gant Jord KLER )

82  
M.L.G

## **Nevez-Amzer**

Va ene, va breur henañ, evit an Nevez-Amzer da vezañ deuet, n' aimp ket mui  
war-du ar c'hoad m' out ganet ha deuet ouzh al luc'h, ha ni ha sevel gant an  
diribin,  
mennet da dapout hol lodenn eus ankounac'h ar plant sklintin, disi o bed.

Va ene, va breur henañ, ez out evel unan eus ar merc'hed a-wechall hag a  
lavare : « Me a ro deoc'h geotenn ar Werc'hez ». Hag i o vonet dre greiz ur prad  
ma richan ur wazh-dour ha ma trid a-ismouezh an halegenn...

Ael ar c'hoad a savas dirazout, hiboudiñ a reas dit :  
« N' eus netra ». Ha goude ez eo aet  
e peoc'h gwasked ar bed.

Ha sed an halegenn  
ac'h eus savet 'vidout  
gant seim an diviz don,  
hag e c'hortozez ma vezo skuilhet da wad er geot nevez gant sotoni, gant  
dallentez ar bed.

C'hwevrer 1965.

83  
HARRI WEBB

## **Douaradur piv ?**

E-un en deus urzhiet, a lavarer,  
Dibun e zisparti, dre ar munud en deus aozet  
Obidoù broadel hag an diskenn eeun  
'Barzh an douar a gare kement  
Hervez giz e amzer hag e bobl  
A zo bremañ echu dezho.

Den meur e ranker bezañ  
'Vit kaout ar seurt preder. Un enebour mat eo bet,  
Ha bremañ e dud, o kimiadiñ dioutañ,  
A gimriad ivez diouzh kement int bet,  
Digompren marteze eus ar pezh a reont,  
Pe o kompren un tammig hepken, pe marteze

O kompren re vat.

(tr. Per DENEZ.)  
- Ebrel 1965. -

## **CHOMET E OA AR VAZH E TOULL AN NOR**

Pa zimezas Mari Toulleg da Joz David, an eil eus o faotred, e oa fouge e Chann Gwiñvarc'h hag e Youen, he gwaz. Ur fortun vat a rae Joz, rak, war a lavared, ouzhpenn m'he devoa Mari un tammig mat a argourou, e oa ul labourerez hag ur plac'h gouest koulz er-maez ha war-dro an ti. Ur wreg a-zoare a raje hep mar, mat da ren pep tra ha da gas an traoù en-dro, war-eeun ar pezh a zeree ouzh Joz, ur paotr a boagn ha kalonek, ma oa unan, hogen pounnerik a spered ha divarrek, moarvat, d' ober ur mestr mat e penn un atant.

Daoust ma ne oant ket c'hoazh re gozh holl, pa n' edo ken ar wreg gant he zri-ugent vloaz hag an ozhac'h o kaout nemet daou pe dri bloaz muioc'h egeti, o devoa graet Chann ha Youen o menoz da zispegañ diouzh o danvez. Perc'henn e oant d' un atant vat a zaou-ugent devezh-arat, e Kêrgroaz, hag o stal-diegezh, loened ha benviji, a dalveze ivez un tamm brav a arc'hant. O soñj a oa reiñ an douar, stal-diegezh hag all, d' o mab Joz a savje o danvez en arc'hant d' e dri breur. Dezhañ, a gredient, e oa dleet an atant pa oa chomet ganto, er gêr, da labourat abaoe m' en devoa kuitaet ar skol d' an oad a drizek vloaz. Evit gwir, e amzer soudard, e-pad triwec'h miz a rankas ober er Marok, « e kas-da-blantañ, gant ar re zu », evel ma lavare Youen, hag, e-keit-se, Herve, an trede eus ar vugale, a skoazellas e dud war-dro an tiegezh. Abaoe, avat, e oa aet da zeskiñ ur vicher, ha n' eo ket heñ a zeuje da zerc'hel an douar. Yann, ar c'hoshañ, a oa fortuniet abred hag aet d' ur barrez all, e-lec'h ma kavas un atant diouzh e zoare. Hemañ, kennebeut, ne vije ket goubet kement-se da zont da Gêrgroaz A-hend-all, n' eo ket Tin, ar pevare, triwec'h vloaz dezhañ hepken, a c'hellje soñjal e vije lakaet Kêrgroaz war e anv, rak ne lakaer ket un den ken yaouank e penn un tiegezh. Gant an danvez a savje Joz dezhañ ez aje da glask e chañs da lec'h all.

85

A-viskoazh he devoa graet Chann Gwiñvarc'h he Mari-Bragoù e Kêrgroaz. Hi eo a oa mestr ha Youen, oc'h anzav e oa ampartoc'h egetañ, he laoske da c'hourc'hemenn ha da ren pep tra, hervez he soñj, hag a sente outi war gement tachenn. Gouezet he devoa tennañ o mad eus an douar, paeañ an dle he degas meur a wellaenn war an atant.

Diouzh he zu e ouie Chann e teuje buan he mab Joz, gant skoazell ur wreg evel Mari Toulleg, d' en em sevel e Kêrgroaz. Darn eus danvez ar vugale all a vije paeet gant arc'hant houmañ hag ar peurrest savet da c'houde, a-nebeudoù, dre ma vije aes d' an daou bried yaouank.

Er penn kentañ eus hec'h amzer, e oa bet ret da Chann bezañ kempenn war he mouneiz ha mont pizh gant he hent. Evit arboell koumanant ur vatezh, e rae hec'h-unan holl labour an ti, ar pezh na vire ket outi da vont alies d' ar park da reiñ dorn d' he gwaz ha d' ur mevel. Pa oa bihan ar vugale, o vezañ n' he devoa den da evezhiañ outo er gêr, o c'hase d' he heul, bep sul d' an oferenn-bred, e-barzh ar charbañ. War bep a gador e lakae ar re goshañ da azezañ en-dro dezhi, endra ma talc'he an hini bihanañ war he barlenn hag e roe bronn dezhañ hep mezh, e-kreiz an iliz, pa c'hoarveze ganto gouelañ. Ne gave morse amzer da gemerout un tammig didu ha, goude bezañ trevellet e-doug an deiz da c'horro ar buoc'hed, da vouetañ al loened, da aozañ ar predoù, e ranke c'hoazh, diouzh an noz, peñseliañ ha takonañ dilhad he gwaz hag he bugale.

A dra sur, e-skoaz hi hec'h-unan, ar vourledenn goujorn ha frammet mat, e tenne Mari Toulleg, ar plac'h giz Kastellin, d' ur verc'hodenn goant ha d' un dimezell mistr he dargreiz. Met kement-se ne verne ket re p' he devoa peadra ha pa oa anavezet evit bezañ ul labourerez dispar hag ur vaouez e pep keñver. « Gant hounnezh, » a lavare Chann outi hec'h-unan. « ne chomo ket luget Joz da gas e stal en-dro ! »

Un deiz a viz Gouere eus ar bloaz pemp warn-ugent, etre ar foenn hag an eost, ez eas Chann ha Yeun, o bugale hag ar verc'h-kaer, da studi an Aotrou Briant a oa noter er vourc'h d' an ampoent. En em glevet e oant da lakaat ar madoù war anv Joz, da lavarout eo an atant hag ar stal-diegezh : hemañ, ouzhpenn m' en dije bep a bemzek mil lur da sevel d' e vreudeur, a baeje, en o bev, c'hwec'h kant lur ar bloaz d' e dad ha d' e vamm hag a laoskje ganto, betek marv an hini diwezhañ anezho, d'ober ti « rezervation », evel ma lavared, ur penn eus ar c'hrañch, goude bezañ graet enni ur spuradenn war e vizoù e-unan. Diviz en devoa ivez da reiñ dezho boued ur vuoc'h da heul e re, da leuskel ganto ar gerz, betek o marv, eus " Park ar Porzh ", ennañ un devezh-arat pe war-dro ha da zegas dezho, bep bloaz, d' o zi, div gordenn geuneud, ur c'hant duilh bleñchoù, kant lur gaol-irvin, ur c'holc'hedad pell kerc'h, daou c'hant lur winizh, kant lur gerc'h, kemend-all a ed-du hag ur varrikennad sistr ar bloavezhioù ma raje heñ c'hwec'h pe ouzhpenn, hag un hanter hini hepken pa ne raje nemet teir.

Un dra c'hoazh : pa ne vije ket gouest ar re gozh d' en em geitañ o-unan, en abeg d' ar gozhni pe d' ar c'hleñved, e rankje Joz o digemerout en e di, o bouetañ ouzh e daol eveltañ hag e dud e-unan, o gwiskañ dereat ha, diouzh ret, paeañ ar mizoù medisin hag apotiker.

A-barzh en em glevout diwar-benn talvoudegezh ar madoù hag an holl zivizoù-se, e oa bet, moarvat, meur a dammig tabut etre Joz hag e vreudeur diouzh un tu, hag an tad hag ar vamm, diouzh un tu all. Ha kement-se n'eo ket souezh, p' edo Mari Toulleg, a-dreñv e gein, ouzh e aliañ hag e vroudañ. Hogen ne ouezas an noter netra eus an diaesterioù-se ha ne glaskas ket gouzout hiroc'h, ken boazet all e oa ouzh ar rendaeloù a veze gant e ostizidi bewech ma veze anv da rannañ un dra bennak etrezo.

Kerkent ha m' en devoe disaouzan sklaer eus an afer, e kemeras ar c'hrad da sevel an dilez. « Va zud, » emezañ, « marteze e vefe koulz deoc'h mont ac'hann da aveliñ ho pennoù e-pad ur predad, rak war-dro div eur bennak a fazi din evit aozañ va skrid. Deuit en-dro a-benn-neuze ha degasit daou dest ganeoc'h. »

Setu ma 'z eas Chann ha Youen, o bugale hag ar verc'h-kaer, d' an davarn dostañ da gemerout bep a vanne, e-keit ha ma labourer an noter war an dilez. Pa zistrojont d' ar studi, div eur goude, e oa ganto daou dest : Gwregor an Uhel, ar c'here, ha Per an Hamon, ar c'halvez.

An noter a lennas an aketa d' ar gontraderien ha d' an testou hag a c'houlennas ouzh ar vamm, p' en devoe echu : « N' hoc'h eus ket ankouaet netra, emichañs, rak re ziwezhat e vo dont da glask lakaat netra muioc'h er skrid pa vo bet klozet.

- Ha ! » eme Chann, « pa vo aet hor buoc'h da zilaezh, e rankimp kaout ul lur amann bep sizhun hag ul litrad laezh bemdez. Youen, amañ, a zo kreñv war ar boued laezh.

- Ya, » a lavaras Youen, « ha marc'h ha charbañ a zivizan kaout ivez, ur wech bep miz da vont d' ober va zroioù e-lec'h ma plijo ganin, hag al labour loened a vo dav da Joz ober deomp e " Park ar Porzh ". »

Ar verc'h-kaer a grizas he zal : « Ho ! » emezi, trenkik he mouezh, « ne oa ket bet anv ganeoc'h a gement-se dec'h, p' hor boa lavaret e kemerjemp ar plas ! An dra-mañ a cheñch mod d' ar pezh a oa bet intentet. Ha n' eo ket gwir, Joz ?

- Eo, merc'h, » a zistagas ar vourledenn d' he merc'h-kaer, « c'hwi a oar mat petra a oa bet meneget gant Youen ha me. M' hon eus ankouaet diskleriañ traoù 'zo d' an Aotrou Briant pa gemere ar c'hrad, n' eo ket un digarez d' o nac'h bremañ. Un druez eo evelato, e rankfed kaout soñj eus kement kraf, anez



bezañ an arvar da glevout diwezhatoc'h n'hor bo perzh ebet er pezh na vo ket bet douget war baper. Ne c'houlennomp na muioc'h na nebeutoc'h eget ar pezh a vez divizet, en dilezoù, gant an tad hag ar vamm. Ac'hanta, Joz, ha c'hoant ac'h eus da vont en da votoù, evel da wreg ? »

Joz ne lavare ger hag a selle, nec'hik, ouzh Mari Toulleg, tres ur gammenn war he gweuzkenn. « Asa ! » a lavare Chann outi hec'h-unan, « n' emañ ket diwezhat ar wreg yaouank o reiñ da c'houzout e ranko bezañ ganti ar vroz hag ar bragoù war un dro ! » Hag hi adarre d' he mab :

« Ne respontez ket, va faotr ? Ha n' ac'h eus ket a vezh o karnañ da reiñ d' ar re gozh ar pezh a zo dleet dezho da vevañ, goude bezañ poaniet kement da zastum danvez dit... Selaout, mabig, ha c'hwi, merc'h-kaer, evel m' hon eus divizet ho tad ha me, e ranko bezañ pe, a-hend-all, n' eus netra c'hraet ! Merourien a-walc'h a gavin da lakaat em ziegezh hag, ouzhpenn paeañ ferm din bep bloaz, da seveniñ hon divizoù penn-da-benn, hep kontañ e chomo ivez ganin priz ar stal-diegezh pa vo bet gwerzhidigezh warni ! »

Kerkent e savas ar vugale all o mouezh a-du gant ar vamm hag an tad. Hag ar c'hoshañ anezho da lavarout e kemerje Kêrgroaz evit an dalvoudegezh roet dezhi hag ar rezervation dleet d' ar re gozh. « Gant ar pezh a werzhin va atant va-unan, » emezañ, « ne vo ket re boanius holl din sevel o lod d' ar re all. »

88

Moarvat e oa deuet keuz d' he c'homzoù d' ar verc'h-kaer, o welout n' edo ket mui an avel ganti war an tu mat « Ho ! mamm, » elavaras, « arabat deoc'h taeriñ ! N' eo ket bet biskoazh en hor soñj ober divalav deoc'h na da dad. Met n' eo ket iskis kennebeut ec'h en em zifennfemp, bremañ p' emeur o klask en em glevout. Ma 'z eo dav asantiñ penn-da-benn d' ho tivizoù, e vo ret hen ober, ar pezh na viro ket ouzhin da grediñ ez int rustik un tammig. »

« Ha ! p' emamp o klask en em glevout ? » a eilgerias ar vourledenn. « Ha ne oamp ket en em glevet a-barzh dont amañ ? Ne blij ket din e teufec'h da c'houlenn dirak an noter hag an testoù ma vo cheñchet doare d' ar pezh a zo bet intentet mat... Ha sinañ a reoc'h war ar pezh hon eus lavaret, pe ne rit ket ? Ma n' asantit ket, e pedin an Aotrou Briant da lakaat an traoù d' ho preur koshañ. »

An noter, neuze, a gavas tro da gomepezañ an tabut ha, kerkent deuet ar peoc'h en-dro, e reizhas an akta evel ma c'houlenne Chann ha Youen. Da c'houde hen lennas d' an holl hag e voe sinet ganto, war bouez an daou gozh a lavaras na ouient ket skrivañ.

« Ni a ray bep a groaz, » emezo, « pa n' omp ket evit lakaat hor sin. » Met kement-se ne oa ket ret, a zisplegas dezho an Aotrou Briant, pa 'z eo gwir e roent o asant dirak testoù. Ha, war-lerc'h, ez ejont holl gant an noter; d' e sal, da evañ bep a vanne; rak, er vro-mañ, ne vez graet nep afer war ar sec'h.

Pep hini eus an testoù, ouzhpenn ar vicher a rae, a oa ivez tavarnour. Setu ma voe dav mont d' o ziez, da darlipat, evel just, ha Joz, ar perc'henn nevez, eo a baeas an troiadoù kentañ. Hag, hervez ar boaz, pep hini eus ar re all, testoù hag all, a ginnigas bep a vanne d' e dro.

Gant keuz e rae Mari Toulleg outi hec'h-unan, ar gont eus dispignoù he gwaz a vije bet gwelloc'h ganti mirout. Met, petra a fell deoc'h, ar c'hiz a oa da zougen yec'hedoù da geñver un afer ken pouezus hag un dilez. Hag an holl a hetas da Joz ha dezhi chañs vat e penn o atant nevez.

Youen, ma ne oa ket badaouet, a oa tommet dezhañ un nebeudig koulskoude, hag, oc'h en em gavout er gêr, a lavaras da Chann : « Klevet ac'h eus hor merc'h-kaer, maouez ? Petra a lavarez anezhi ? Set' aze un ebeulez, neketa ?

89

- Un ebeulez -? » eme ar vourledenn, teñval he fenn. « Lavar kentoc'h ur

wespedenn, va den kaezh. Hounnezh, me gred, a ray deomp gwelout a bep seurt, a-barzh pell. »

\*

Boazet e oa an Aotrou Briant ouzh an diaesterioù a save dalc'hmat etre e ostizidi pa veze meneg ganto eus un dilez bennak. Ankouaet en devoa, pell a oa, an trouz a oa bet p' edod o klozañ hini an Davided, p' en em gavas Chann, un deiz, en e studi. « Asa ! Chann, » emezañ. « hag a nevez e Kêrgroaz ? Yac'h eo an holl du-se, emichañs ?

- Mont a ra mat ar bed ganeomp, a-drugarez Doue, aotrou Briant, » a lavaras ar vourledenn. « Youen ha me, avat, a zo koshaet ha disteraet kalz da heul ar gwad fall a reomp bemdez abaoe m'hon eus dispeget diouzh hor peadra.

- Ha petra 'ta a zo kiriek deoc'h da vezañ drouklaouen ? » a c'houlennas an noter.

- Soñj hoc'h eus, moarvat, aotrou, eus ar pezh a oa bet divizet war an dilez. Ne oa ket diraezon ar *rezervation* lakaet ganeomp war hon tiegezh daoust m' he c'have pounner hor merc'h-kaer. An hini a zo lakaet war Wern-ar-Gall, un atant ha ne dalvez ket hon hini, a zo rustoc'h, a dra sur. Eno ar re gozh, ouzhpenn ar pezh a rankont kaout da vevañ, o deus miret ur guchennad a dregont mil lur war dalvoudegezh ar plas ha laosket ar vugale d' en em geitañ war ar rest, hervez m' am eus klevet... Mat e vije bet deomp ober evelto ha derc'hel ganeomp an askorn bras gant un tamm kig en dro dezhañ. Neuze ne vije ket bet ken diaes va fenn ha ma 'z eo bremañ.

- Petra 'zo c'hoarvezet 'ta, Chann ? Ha ne ro ket Joz deoc'h kement a zo dleet ?

- Allas, paour kaezh aotrou, Joz n' eo ket ken ar paotr karantezus ha sentus a oa kent. Mari Toulleg eo ar mestr hag e rank ober evel ma lavar ar wreg. Houmañ a zo ur gebenn eus ar gwashañ hag e tle an holl plegañ dezhi !

- Chê ! evelato, Chann. Hag e nac'h reiñ deoc'h ar pezh hoc'h eus ar gwir da gaout diganti ?

90

- Evel ma lavarit, aotrou. Ha n' eo ket a-walc'h dezhi nac'h, pa glevomp ganti kunuc'hennoù ha luc'haj bewech ma 'z eomp da glask tra pe dra eus ar pezh a zo douget war ar skrid a voe savet ganeoc'h... Un digarez bennak a gav bepred d' hor c'has, gant daouarn goull, diwar he zro : fall e vez bet ar bloaz, koll he devez bet e-touez he loened, he buoc'hed a vez aet da zilaezh, ha kamm pe glañv e vez atav ar c'hezec p' en em gav ar mare d' ober al labour loened.

Hag ouzhpenn, pa zeu c'hoant deomp da sternañ ar gazezig kozh da vont d' ur foar bennak, e vez bet c'hoarvezet tra pe dra gant ar charbañ... Banne sistr a zoare morse kennebeut. Ar fallañ rapatuilhachoù eus an avaloù a laosker gant Youen hag e lavarar dezhañ en em geitañ ganto. Ha koulskoude, aotrou, c'hwi 'oar hon eus sistr mat da gaout diganto ha n' eo ket deomp d' hen ober... »

Brouezet holl e oa Chann hag, e-keit ha ma tape hec'h anal a-nevez da genderc'hel gant he zamalloù, e kavas tu an noter da lavarout dezhi : « Maouez paour, truez am eus ouzhoc'h hag ouzh ho kwaz, hag ur vezh eo d' ar vugale ober seurt vilonioù d'un tad ha d'ur vamm. Hogen, petra a respont Joz pa c'houlennit outañ seveniñ an divizoù a zo en dilez ? Ho mab e-unan, ha n' eo ket e wreg, eo a zo dleour deoc'h anezho.

« Joz, aotrou, a rank stankañ e c'henou, ar paotr kaezh ! Henezh eo Yannig Bonton-Staen ha bewech ma komz e wreg, e vez dav dezhañ tevel ha chom ken flep hag ur c'hi fret.

« Ar bloavezh kentañ war-lerc'h an eost e oa dougerez Mari Toulleg ha drouklaouen ha kintus he c'havis pa 'z is da glask ar sac'hadoù ed hor boa da gaout digant Joz. Ouzh he gwelout o taeriñ, e kavis gwelloc'h tevel ha distreiñ habask ha didrouz d' am zi, gant aon d' ober gaou outi hag ouzh he bugel. Dont a reas ar c'hrouadur da vat, ur verc'hig kreñv ha koant, a-drugarez Doue. Neuze e ris bec'h da Joz evit ma roje kement e oa dleour deomp. Met, siwazh ! tapet he devoa e wreg ar pleg da garnañ ha da gavout abegoù toull evit kaout tu d' en em zigaregiñ ha da chom hep seveniñ ar c'hontrad.

« Abaoe n' eo ket ur vuhez bevañ en he ser ha ken lies tro ma c'houlennan va gwir, e strak trouz ha tabut. Daou vloaz 'zo n'em eus bet nep gweneg ivez diganti ha n' ouzon ket penaos e raimp evit bevañ, Youen ha me, pa nac'h kement tra ouzhomp...

« C'hwi a dle gouzout, Aotrou Briant, petra a zo ret ober evit hon tennañ eus ar reuz-se.

91

- A dra sur, Chann » eme an noter, « ha n' hoc'h eus nemet reiñ kefridi d' un urcher da c'hourc'hemenn dre libell d' ho mab e ranko heuliañ kement diviz, anez gwelout al lez-varn o terriñ an dilez.

- O ! paour kaezh aotrou, lakaat terriñ an dilez ? Penaos ober ur seurt tra hep pec'hiñ dirak Doue ? Ar pezh 'zo roet 'zo roet ! N' on ket evit tennañ diganto an danvez a dle bezañ d' o merc'hig war o lerc'h !

- N' eus doare all ebet d' o lakaat da vezañ tud d' o ger, » a gendalc'has an den-a-lezenn. « Hogen, bezit dibreder, rak, kentoc'h eget bezañ diberc'hennet, e kavint gwelloc'h plegañ da urzhioù al libell... Un adskrid eus an dilez hoc'h eus, an hini a anver ar vaz ha ne c'hell bezañ aozet nemet ur wech hepken gant an noter hag a zoug, ouzhpenn e siell hag e sinatur, ur gemennadurezh a-berzh ar Stad da skoazellerien ar Justis, da lakaat seveniñ penn-da-benn kement diviz meneget er vamm-skrid.

« Kasit ar vaz-se d' an urcher ma freo ganti ho pugale disuj.

- Bennozh Doue deoc'h, aotrou, » eme Chann gant anaoudegezh-vat. « Sentiñ a rin ouzh hoc'h ali, hogen ne vennan, e nep doare, e vefe freuzhet an dilez !... Siwazh ! nag a drubuilhoù a ro deomp ar pennoù kleiz-se !... Lavaret em eus dezho na vez ket atav tro an hevelep re hag e c'hellje c'hoarvezout ganto, diwezhatoc'h, ar vilonioù a reont deomp bremañ. N'eo ket o vezañ ken dic'hrad en hor c'heñver, e roont skouer vat d' o merc'hig, ha piv ' oar hag-heñ ne gavint ket, un deiz bennak, ar vazh m' hor c'hannont ganti e-tal an nor ? »

. . . . .

Un nebeud deizioù da c'houde, e voe ret da Joz ha da Vari Toulleg restaol d' ar re gozh kement o devoa miret diouto. Bet e oa an urcher war o zro d' o gelver, dre libell, dirak ar barner a beoc'h ha, gant aon rak al lezenn, o devoa graet o menoz da godianañ. Met, diwar-se, e kreskas an dizunvaniezh etre ar re yaouank hag ar re gozh hag e fallaas c'hoazh an darempredoù etrezo.

Pa voe ganet ur bugel all e ti Joz, e reas an ozhac'h e venoz da c'houlenn e dad pe e vamm da envel ar c'hrouadur. Ar wreg, avat, ne voe ket ali gantañ hag a zibabas da dad-paeron ar c'hoshañ eus he breudeur-kaer. Ha kement-se adarre a voe ur rann-galon nevez da Youen ha da Chann.

\*

92

E-doug ar bloavezhioù a dremenas da c'houde, e chomas Mari Toulleg ken dic'hrad bepred ouzh he zud-kaer. Koshaet e oa kalz ar re-mañ ha dinerzhet gant an oad. N' o deveze digant ar verc'h-kaer nemet ar pezh a blije ganti reiñ dezho. Hag an daou gozhiad a c'houzañve he vilonioù gant an habasketed a ro ar

bloavezhioù d'ar re a vez bet trec'het e stourm ar vuhez. Ne vennent mui proseziñ, rak petra a dalvezje reiñ arc'hant d' an dud a lezenn ha lakaat an teotoù da vabouzat evit bezañ bepred oc'h en em zifretañ en un enkadenn n' he dije nep diwezh.

E-keit-se e kreske Eliane, merc'h o mab hag o merc'h-kaer, savet re bar d' un dimezell donius gant he mamm. Netra ne fazie dezhi, na buhez dibreder na dilhad kaer. Ur plac'h a oa houmañ ha ne soñje nemet enni hec'h-unan hag er ficherezh hag er blijadur. Dismegañs he devoa ouzh he zud-kozh, daoust ha pegen karantezus e veze ar re-mañ en he c'heñver, ha Chann, gant tristidigezh, a lavare da Youen : « Evel ma vez savet an dud, e vezont kavet, paotr kozh. Ar verc'h-mañ, moarvat, a vo barrek, a-barzh pell, da ziskouez d' he mamm ha d' he zad, siwazh dezho ! e vo chomet, er gêr-mañ, ar vazh e-tal an nor ».

Dimeziñ a reas Eliane d' ur paotr yaouank a-zoare ha kalzik arc'hant laosk dezhañ war ar marc'had. Hogen, prim goude, e varvas Joz hag, evel-se, e kias ar wreg yaouank da vezañ perc'henn da vadoù he zad, da lavarout eo an atant hag an darn vrasañ eus ar stal-diegezh.

Ne oa ket troet ar bennhêrez gant al labour ; gant an dispignoù, avat, ne lavaran ket. Bremañ, p' en em gave pinvidik, e taole arc'hant diouti gant he daou zorn ha buan ez eas ar stal da stalig, daoust d' he fried da boaniañ a-lazh-korf. Ouzhpenn ma oa toull he daouarn, e plije da Eliane al lip-e-bav hag an evajoù mat ha kreñv. Ha setu ma teuas da vezañ ur vezvierenz divezh. A-barzh pell, e voe flutet ganti danvez he zad ha debret ar strapenn, evel ma lavarer. Gwerzh a lakajod warni evit paeañ an dle hag ez eas kuit, gant he gwaz, war-du ar c'hêrioù, evel ma ra ar re a rank divroañ da c'hounit o boned hag ar re a vez foranet o feadra ganto. Ha Mari Toulleg, dilezet gant he merc'h, a voe ret dezhi mont d' ur penn-ti hec'h unanik, gant ar guchennadig vihan, gwall zister, siwazh ! he devoa saveteet eus an dismantr.

93

Hogen Chann, intañvezet a-benn neuze, he devoe hiviziken, betek he marv digant prener an atant, ar pezh he devoa diviz da gaout hervez ar skrid eus an dilez. D' an termenou deziadet e veze degaset dezhi he leve hag he fourvezioù, hep an disterañ riot na trouz. Ar feur-se, douget gant an noter, e pren ar perc'henn nevez, hervez al lezenn, en dije roet tu d' ar gozhiadez da lakaat terriñ an dilez, ha, dre-se, ar c'hontrad gwerzh, ma vije bet nac'het outi ar pezh he devoa ar gwir da gaout.

Ur rann-galon, avat, e voe da Chann gwelout an atant o vont gant an estren, met he rezervasion he deveze klok ha d' ar mare, ar pezh a frealze he c'herse. Hag e lavare outi hec'h-unan, pa soñje er stad reuzeudik m' edo enni he merc'h-kaer. N' em eus ket hetet dezhi morse an dichañs a zo en em gavet ganti. Hogen marteze en abeg d' he c'hreizder ouzh va faour-kaezh Youen hag ouzhin-me, e oa chomet ar vazh e-tal an nor. N' em eus ket a gasoni outi, met ur c'hras eo din eo bet aet an douar gant un den leal hag eeun. A-wechoù, hag ar c'hrenn-lavar-se a zo gwir :

An tostañ kar en deus mab-den  
Eo an estren yen.

## **BETEK DENT-HESKENN AN ANDOU**

HOR c'hultur a zo ur c'hultur disprizet. Ha gouzout a reomp, ni-Bretoned, ez eus er bed kulturioù all, graet ivez fae warno. Evelato, daoust hag anaoudegezh hor befe ez eus, du-se, en argoll, war gernioù garv Menezioù an Andoù, n' eo ket, hervez ar vrud badus, aour hag arc'hant danvezel, met aour hag arc'hant speredel: kultur ar C'hetchouaed hag hini an Aymaraed.

D' am meno, en Europa, skrid-diskuliadur kelennerien Skolioù-Meur broioù an Hanternoz eo bet ar garm kentañ, evit dihunañ enkrez dirak an dismantrou speredel sevenet war an douar bras amerikat. Hag evel-se, un nebeut bloavezhioù 'zo ez eus bet roet lañs d' ul Lusk evit difenn kulturioù mac'homet an hollved : A.I.L.C.M. ec'h anv. Tu am eus bet da skrivañ da sekretour-meur an Emsav-se : ar c'helenner Per Naert o chom e Abo, e Bro-Finlanda. O vevañ d' an ampoent, war an tamm artifisiel-mañ eus Amerika-an-Traoñ, Perou hec'h anv en em gavan e-serr Ketchouaed hag Aymaraed, glan a ouenn, diskennet eus an uhel-gompezennoù da drevadenniñ koadoù ha brouskoadoù ur « selva » spletusoc'h. Fellet en deus din eta reiñ dezhañ da anaout stad kulturel an daou boblad-mañ, kement ha ma c'hellen gouzout er c'hogn distro-mañ, nepell diouzh al Lenn Titikaka, war harzoù Bolivia. E respont a erruas ganin d' ar 26 a viz Ebrel warlene. « Klasket em eus, emezañ, meur-a-wech, kaout darempredoù frouezhus gant tud pe emsavioù, e-sell difenn « pobloù » bihan tramor Atlantel, met bepred em eus c'hwitet war va zaol... »

96

Ha perak seurt c'hwitadenn ? Perak hepken tud bouzar ha mut ? Perak heklev ebet ? Ur wech c'hoazh, va fri-furch ne c'hell ket redek-bro ha berr eo eta va gouiziegezh, met seblantout a ra anat kenañ n' o deus Indianed an Andoù mouezh ebet. N' o deus, d' ar mare-mañ, mouezh « broadel » ebet, diouzh ar ster a stagomp ni-Bretoned, ouzh ar ger-se. Ha koulskoude e kaver skridoù entanet, ha n' o deus diwanet, anat eo, nemet eus strad ur galon emskiantek pe hogos emskiantek. Ur galon, hag he deus selaouet « ar vro e truilhoù » e-giz ma lavar Maodez Glanndour. Met ar galv ne vefe ket c'hoazh resis ; distumm hepken. Un dra bennak o krozal en donderioù.

Soñjal a ran da gentañ, er rakskridoù savet gant ar beleg Lira, eus eskopti Cuzco, d' ec'h oberennoù niverus, hag a c'hellfe bezañ gwir binvioù a silvidigezh evit ar c'hultur ketchouaek darbet da vont da goll. Bez' em eus dirak va daoulagad e bikol " Diccionario Kkechuwa-Español ", a 1199 pajenn, embannet e 1945, e Bro-Arc'hentina, gant Skol-Veur Tucuman. « En deñvalijenn, a skriv an oberour, emañ soubet d' an ampoent, splannder lugernus ha meurdeus ar c'hultur ketchoua ; kement a oa a veur hag a estlammus a zo bremañ torret, diveget, mac'hagnet... Unnek milion a « indigenas » a vale war an douar amerikat ha ganto o bec'h a c'hlod a-wechall, met an tremened skedus-se a zo ur bromesa a vrasder en un dazont hag a zo tost... Va digoll am bezo bet eus va foan mar gell va oberenn bezañ ur benveg a stourm da ziframañ evit 11 milion eus va breudeur, ar gwir d' en em zispakañ evel ar gevredigezhioù a lugern warno ar gwir frankiz a zo bet nac'het outo betek-hen ». Kalz fraeshoc'h n' eus ket tu da vezañ !

Dres ugent vloaz 'zo eo bet distaget ar c'homzoù-se. Jorj Lira a zo bev atav, o kenderc'hel gant e enklaskoù war ar yezh, war ar sonerezh, war al lennegezh-pobl, bepred e servij an Iliz; daoust dezhañ bezañ bet, ur c'houlzad bennak, diaesterioù ganti. N' eo ket mat, diriskl holl hentoù an emouestl hag an emro. Ouzhpenn, evel ma lavare an Tad Sertillanges, da c'houzañv ez eus « evit an Iliz, met ivez a-berzh an Iliz ». Ha galvadennoù 'zo a dregern re a-bred, oc'h en em goll neuze er gouezlec'h pe oc'h en em flastrañ ouzh ar roc'h.

Nevez 'zo ez eus erruet betek ennon eus Bro-Bolivia, ur gwir " Assimil " ketchoua. Div vrikenn a 300 pajenn pep unan, dindan anv Zavier Albo S. J. Un tamm labour dreist maz eus unan ! Pedagogel, bourrus, skeudennaouet arzel ha fentus, gantañ c'hwezh kreñv an douarenn. Taol-kaer ur strollad jezuisted, m' eus aon ! (Nihil obstat : Tad Gabriel Siquier S. J. - Imprimi potest : Tad Antonio Abad , S. J.. rener rannvroel Bolivia.) Ha marteze, amañ, ez eus adarre ur vouezh pe ur vouezhig all ! Gant al linennoù-mañ e krog ar rakskrid : « Anaoudegezh ur yezh eo ar c'hammed kentañ da ober evit en em gendoniañ gant kalon ur bobl. Gant ar C'hetchoua, e kaver dor-zigor en ene « indigena » (Boull-c'hurun ! na zistagit morse ar ger « indio » ! ) Gantañ e veizer talvoudegezhioù, pinvidigezhioù an ene-se ha gantañ e teuer da vezañ barrek da skoazellañ an « indigena » da bignat, da vont war-raok... Aesoc'h eo ar c'hetchoua eget ar saozneg. ar rusianeg pe an alamaneg. Eeun eo ar gramadeg anezhañ. evel ma 'z eo eeun an den hag a ra gantañ. Met tro-spered ar yezh-se a zo disheñvel-bev diouzh stumm-spered ar C'hornog. Hag e-sigur-se, e tiskuilh petra eo an indian... » Ha gant al linennoù-mañ, e kloz ar c'hentskrid : « Spi hon eus... ec'h ouezfec'h lenn etre al linennoù ha dizoleiñ - betek ho kontammiñ - an uhelvennad en deus hor broudet da seveniñ ul labour anat-mat bezañ bet tenn-kenañ : ur garantez hag un doujañs don evit an den ketchoua bamet ma 'z omp dirak e berzhioù kulturel ha speredel, karet ma 'z eo ganeomp evel ur breur. Gant hon holl nerzh, fellout a ra deomp eñ skoazellañ da vezañ bemdeiz, muioc'h-mui, perc'henn warnañ e-unan (*la conquista diara de si-mismo*). Perc'henned, mistri all a vefe eta aloubet ganto ene an den ketchoua ? Daoust hag eñ ez eo dieub an hini n' eo ket mestr 'n e di ? Ha bez' ez eus ur stad skrijusoc'h eget bezañ sklavour a spered ? Ma ! gant ar son-se, na gav ket deoc'h ez a d' hec'h heul un ton broadel, broadelour, mar fell deoc'h ? Rak ar vroadelouriezh yac'h, er bobloù breset, n' eo nemet unan eus an nerzhioù dispaket evit reiñ da vab-den ar frankiz peurvut a zo bet profet dezhañ gant e Grouer ».

Ha setu c'hoazh ur c'hentskrid all, hini levr-deskiñ Demetrio Tupac Yupanqui, Runa Simi Yachay, embannet e 1961, e Lima. Ha ne gavit ket taer-kenañ lavarou an Doktor Rafael Aguila, oc'h ober eus ar spagnoleg « yezh ofisiel diazez drevadennelour ar gapitalouriezh ma 'z eo kêr Lima » (*idioma oficial de esta sede colonial del capitalismo*) : « E kement korn, emezañ, eus ar bed, en Asia, en Afrika, e-kreiz hag e hanternoz Amerika, ez eo degemeret n' eus e-gwirionez, frankiz, demokratelezh, doujañs evit mab-den, hep disrann rummadel pe gouennel, ma n' o deus ket an holl dud hag an holl bobloù, en hollved, ar gwir, an droed da ober gant o yezh ha da zeskiñ lenn ha skrivañ er yezh desket ganto war barlenn o mamm. Ha n' en deus ket aon evit echuiñ, da sevel e vouezh enep ar re a gendalc'h da vac'hagnañ ar c'hetchoua ha da zifenn outañ antren er skolioù hag er c'hreizennoù kulturel a-berzh-stad, krog ma 'z int atav ouzh soñj hudur ar re a drouc'has e deod da Tupac Amaru (merzheriet ha lazhet gant ar Spagnoled e Cuzco e 1544, evit bezañ en em savet enep dezho : eñ eo an Inka diwezhañ). Rak mibien ar Vamm-Spagn (Madre España) a soñj dezho evit o flijadur ez eo aet hor yezh da get ». Rafael Aguilar a vev en Lima : eno eo pennrener Ensavadur ar Yezhoù Gwerinel (*Instituto de Lenguas Aborigenas*).

E-sigur an aymara, tanav eo ar skridoù, hag a zo em dalc'h. « Strivañ da gomz en e yezh eo evidoc'h ar gwellañ dor evit en em silañ e buhezioù hag e kalonoù ar bobl aymara. » Se a lennomp e talbenn " *Rudimentos de Gramatica Aymara* ", oberenn a 240 pajenn, embannet gant ar Mision Badezour Kanadian. Amañ, hervezon, ne gaver ket an tan, a verv e kalon difennourion ar c'hetchoua met dav eo ivez merzout ne vefe, hervez Lira, nemet 30.000 Indian eus ar ouenn-se, oc'h ober o annez tro-war-dro ha war-c'horre al Lenn Titikaka, darn anezho er Perou darn all e Bolivia.

Nebeut a flamm ivez e " Levr-dorn ar person aymara " diwar bluenn an Tad Loris eus Urzh Sant-Fransez, embannet e 1923, en La Paz (Bolivia). Goulenn a ra al lean digant ar veleion deskiñ aymara, rak lakaat ar fideled da bediñ e kastilhaneg a vefe ober perokeded anezho dre ma ne gomprenont grik er spagnoleg.

En Andoù, moarvat, ma verv ar gaoter gomunour, na gan ket c'hoazh ar

gaoater vroadelour, seblantout a ra ne vefe ket c'hoazh a geginourion. N'eo ket warc'hoazh eta eo e vezo brav war ar Vro-Inka. Ha setu aze 12 milion a beorien-rann, strewet war uhelgompezennoù pezh a anver ez-ofisiel Ekouador, Bolivia, Perou. N' ouzont na lenn, na skrivañ. Ha pa ouzont n' eus bet graet nemet teuler war o spered ur gwiskadig tanav a spagnoleg trefoet ; Cervantes dasorc'het ne c'hellfe ket herzel da glevout e yezh mastaret ken skrijus : d' an daoulamm e tistrofe d' e vez. N' eus bet graet nemet pegañ war o chupenn - gwelloc'h, war o « p-foncho » - pe ar skritellig « peruanat », pe ar skritellig « bolivianet », pe ar skritellig « ekouadoriat ». Hag e vez klasket neuze sachañ an « indio » e-diabarzh ar gevredigezh vroadel rak anzav a reer e vev en-diavaez-groñs. Hag e vez stourmet da zigeriñ skolioù, er c'hognoù ar muiañ distro, evit kastilhanekaat an den ketchoua hag an den aymara. Gwechall e Breizh, e veze duet paper evit ober gant ar brezhoneg da zeskiñ yezh ar C'hallaoued. Amañ, e eil lodenn an 20vet kantved, e kendalc'her bepred da sevel war gorf-marv ur yezh evit astenn an divrec'h da dizhout ur yezh all. Digoromp " Aporte a la castellanización del indigena ", levr a 267 pajenn, embannet e Ayacucho e 1962. Hag e lennomp e « komzoù an oberour », Moises Caverero Cazo : « Unan eus ar c'hudennoù broadel ar pouezusañ en em stok outo ar Gouarnamant, d' ar mare-mañ, eo kastilhanekadur an indian, evit ma tizho ar boblañs peruanat en e fezh ar sevenadur dre unander ar yezh ». Sklaer evel lagad an naer ! Ur yezh n' eus nemeti, setu ar Pal ! Ar stad ne glask nemet kenstagañ ar pennoù melen-teñval ouzh buhez gevredigezhel, kulturel ha politikel ar vroad. «Kenstagañ » n' eo ket kreñv a-walc'h : resisoc'h e vefe skrivañ « endeuziñ », « heñvelaat », « lonkañ ». Ar Stad-peruanat, bolivianat, ekouadoriat ar stur anezhañ etre daouarn a re-wenn pe damwenn, dall-put ma 'z int holl, - ne c'hell ket gouzañv a vefe ar stal en un doare all. E traoñ ar skeul eo bet atav ar pennoù asiateg hag eno o deus da chom. Abalamour da se, ne c'hell ket da yezhoù indian bezañ yezhoù ofisiel. En Amerika Latinek n' eus nemet ur vroad hag a enorfe a-berzh-stad ur yezh komzet gant tud, hag a oa mistri war an daouarbras-mañ, a-raok aloubidigezh tud ar Spagn. Meuleudi da Vro-Paragouay hag a laka rez-ha-rez kastilhaneg ha gwaranieg ! En abeg da se, ne gav ar yezhoù-se dor-zigor ebet er skolioù. Nemet er Skolioù-Meur : eno ez eus kelennerien bras. Met ni, Bretoned, a oar ervat petra eo ar geusteuenn-se. Ur yezh hag a vez roet dezhi ur gador-vrec'h hag e vez nac'het outi skinvier ha torchennoù a zo kemeret evel ur c'hozhtra a viridi, kozhkailhoù gwall-louedet, banniel preñvedet ur ouenn dismegañset, barnet da ziskenn d' ar bez.

Daoust d' an Iliz heuliañ dousik-dousik ar Stad, evit livañ an Indian e Spagnol, anat eo koulskoude e veiz n' eus evit c'hoazh pastorelezh sirius ebet hep anaoudegezh, hep implij eus yezhoù-kavell ar « sierra ». E 1581, Roue Spagn a zifennas ouzh an eskibien reiñ an urzhioù sakr d' ar re ne ouient ket ketchoua. Hag ar Pab Gregor III a gemenas e c'hellfe bezañ beleget hironed ha bastardet gant ma oufent yezh ar werin. D' an ampoent, n' eo ket seurt diviz eo ar ro trabas d' an dud-a-iliz, evit dibab ha stummañ beleion evit Menezioù an Andoù. Evel ma ne vag ket anken e Breizh-Izel.

100

Koulskoude e kemerer preder da embann katekizoù, levrioù-deoliezh, kantikoù, e ketchoua hag e aymara. E 1963, arc'heskob Cuzcuo a laka advoulañ ur " Hanac Pacha Punku " (Dor an Neñv) renevezet. Nevez 'zo ivez, eskob Juli, war aod al Lenn Titikaka, er vro aymara a skigne, a vilieroù, ur c'hatekiz bihan : " Jiska Catecismo ". Met ma 'z eus ur guchennadig a levrioù relijiel, ne c'heller ket ober hepdo, n' eus ket c'hoazh un droidigezh glok eus ar Bibl. Dre c'hrad ar Brotestanted, e c'hellomp en hon ilizoù katolik lenn an Testamant Nevez e ketchoua. Ar skouerenn eus ar " Mosoq Rimanakuyya Qelgankuna " am eus etre va daouarn a zo bet moulet er bloavezh 1947, gant *Sociedades Biblicas Unidas* ha gwasket er Stadoù-Unanet. E-doug ar Sened-Meur an Aotrou Fave eileskop Kemper, en unan eus ar c'hirri-boutin a gase an Tadoù Vatikan II da Sant-Per, a erruas kichen-ha-kichen gant unan eus eskibien Bro-an-Indianed, da vat o lenn an Aviel en droidigezh brotestant-se.

Evit mont da heul an Adreizhadur Liderezhel enaouet gant ar Sened Ekumenek, er Perou, div gomision o deus en em sterniet, gant ar pal da dreiñ er yezhoù indian al liderezh roman. Na diaes seveniñ seurt labour, dre ma ra diouer

ar Skritur Sakr peurechu e droidigezh ! Hep mar, e c'heller soñjal ne vezo ket peurlipet an testennoù. Netra vat ne vez graet d' an daoulamm. En disamm, eo dav merzout a vez graet adal 1958, gant ur ritual aymara, hep an disterañ bomm latinek, e Bro-Bolivia hag e Preladelezh Joli, e Bro-Perou. Lidou an obidoù en o fezh a gaver zoken ennañ salmoù hag all e yezh an Aymaraed. Ur steredennig c'hoazh en dremmwel : retredoù graet penn-da-benn e ketchoua gant ouzhpenn mil indian, hag o deus graet kalz berzh warlene e Cochabamba (Bolivia). Fidandoue ! memes « Embregerezhioù Sant Ignaz » !

An daolennig-mañ eus buhez c'hulturel ar « ouenn arem » war grec'hennoù kevrinus an Andoù a zo livet divalav. Met d' an nebeutañ, treset evel-se, ra lakaio ar breizhad da ziskenn en unan eus an donañ islonkoù a reuzeudigezh speredel a zo er bed. N' emañ ket al lec'h da gomz amañ eus an islonk a reuzeudigezh danvezel ! Dezhañ da veizout dreist-holl n' eus ket un taol morzhol distaget gantañ evit adsevel e Di a ne dregernfe ket betek uhelgompezennoù Amerika-an-Traoñ, betek dent-heskenn an Andoù.

31-1-65.



## DIAZEZOÙ AR SEVEL GWERZIOÙ

( Kendalc'h )

War an trede hent : KENGLLOT PE GENGANEREZH AR SONIOÙ

17. - AR GLOTENN. - Evit lakaat ar werzenn da skeiñ war ar spered, evit reiñ dezhi ur wir dalvoudegezh hud, ez eus un doare ober a vez graet gantañ dalc'hmat, hag eo lakaat un hevelep son, un hevelep lizherenn da zont a vareadoù resis. Ar gerioù heñvel-se a glot etrezo, setu perak e lavarer e vez klotennet ar gwerzennoù neuze, ha pep hini eus ar rannoù lakaet da glotañ a zo ur glotenn.

Meur a zoare ober a zo : bez' e c'heller lakaat da glotañ sonennoù pe vogalennoù hepken etrezo ; klotennoù son a zo neuze.

Bez' e c'heller lakaat ar c'hensonennoù pe ar strolladoù kensonennoù da glotañ diouzh o zu. Klotennoù kenson a zo neuze.

Bez' e c'heller lakaat erfin da glotañ an hevelep sonenn harpet gant kensonennoù heñvel. Hounnezh eo ar glotenn a gaver an aliesañ er varzhoniezh vrezhonek. Pa ne vo ket spisaet e vo hi ar *glotenn*.

Dre zegouezh reizh hevelep sonioù, hevelep lizherennoù e sav er werz ur seurt kan-diskan, setu perak e reer eus ar c'hlotennerezh ivez kengan, kenganerezh (pe c'hoazh kenganez hervez ar ger kembraek).

102

18. - SKOUERIOU KLOTENNOU. - Adalek bremañ e c'hellomp lavarout e vez kavet peurvuiñ ar glotenn ouzh penn diwezhañ ar werzenn. Unan eus an doareoù gwellañ da lakaat al lavarennoù da sankañ e spered an dud eo o lakaat e gwerzennoù klotennet, setu perak e vez klotennet an darn vuiañ eus ar c'hrennlavarioù.

Ar yaou  
Diouzh ma c'houlaou.

Bloavezh glizh  
Bloavezh gwinizh.

Ar pinvidik  
'Zo gwiridik.

Er rimadelloù bugale e vez alles c'hoariet e gwirionez gant ar glotenn :

Petra 'vo da lein ?  
Ar vazh war ho kein.  
Petra 'vo da ver'nn ?  
Ar vazh war ho kern.  
Petra 'vo da goan ?  
Yod poazhet war an tan.

Setu ur skouer all ma kenglot ar c'hensonennoù ivez e diabarzh ar werzenn, ouzhpenn ar c'hlotennoù-son en dibenn :

Ar vilin vras o valañ hei(z)  
Hag ar gougoug o kanañ de'i.

Ar c'hlotennoù a gaver an aliesañ eo ar c'hlotennoù-dibenn. Setu ur skouer :

Va mamm, va mamm, mar am c'hredET,  
Kouez d'ar gwener na rafoc'h kET ;  
Neb a verv liziv d' ar gwenER,  
Parediñ 'ra gwad hor SalVER.

Lamfot ket 'r c'hog digant ar yAR,  
Na Yann ar boc'hig digant pAR ;  
Ar c'hilhog a gan en uhEL  
A gan pa gan an ebestEL.

(Yannig Skolan, " BARZAZ BREIZ ")

Klotennoù diavaez a c'heller ober ivez eus ar c'hlotennoù-se dre ma vezont kavet atav e penn diwezhañ ar werzenn. Outo e vez enebet ar c'hlotennoù diabarzh a vez kavet e korf ar werzenn.

103

Pa 'z eus kengan kensonennoù ez eo hogos atav ar c'hensonennoù-se klotennoù diabarzh :

Ar vilin vras o valañ hei(z)

Kenganerezh war N ha K :

Na keuz ennoc'h, na kañv , na kleñved, nag anken.

War G ha L:

Grougous sioul ar gudon e goudor an elo.

War L ha R:

El listri luskellet war houlenn ar c'huzh-heol  
E kan ar roeñverien dre ma skoont an dour.  
(Y. DREZEN.)

E-kichen ar c'hengan-se war ar c'hensonennoù, e c'hell bezañ ivez avat sonennoù o kenglotañ. Menegomp er feur-se adarre barzhonegig Maodez Glanndour :

Hag-eñ eo diskENNet EN Noz  
Elerc'h gwenn-kANN an HANter-noz,  
Hag e kouskont er MOR, MORzet,  
Pleget O Fenn dindan O Fluñv ?  
N' eo ket eLERC'H, an ERC'H  
A zo kouEZHet askellek war 'n enEZeg ;  
N' eus en abER 'met rehiER  
A hUNVre kUNV dindan o flUNV.

E skridoù ar Grennamzer e kaver peurvuiañ war un dro klotennoù diabarzh ha klotennoù dibenn. Setu ur skouer tennet eus " Buhez Santez Nonn " (lakaet en doare-skrivañ bremañ) :

Ac'h, Aotrou Doue zo gwir roue 'r bED, me zo nET resusitET sklêr,  
Goude ma angoes ha m'estLAMM er plas-mañ fLAMM ha AMzer  
A-hed pemzek vloaz e noazhdER, kalz a hirdER a gemERen ;  
Amañ kof kein e vreinLS, aet oan war ma c'hIZ da zISpenn ;  
Amañ ma unan e vanEN, den a nep pENN n' am gouLENne,  
Deuet eo din koñsol am solAS goude hir spAS eus a c'hrAS Doue.

104

E pennadoù a zo eus " Barzaz Breiz ", Ar Bugel Lec'hiet hag Alanig al Louarn da skouer, e kaver ivez c'hoazh aspadennoù diwar an doare gwerzaouiñ-se :

Marig koant a zo keuziet  
He Loig ker he deus kollet  
Gant ar Gorrigan emañ aet.  
- Pa 'z is davit dour d' ar stivell,  
Va Loig ' lezis er c'havell,  
Pa zeuis d' ar gêr ' oa gwall-bell.  
Al loen-mañ en e lec'h laket,  
E veg ken du hag un touseg,  
A graf, a Beg hep ger eBet.  
Ha bronn bepred 'mañ kas kaouet !...

Neb ' ganas ar ganenn-mañ ne ganas ur wech all,  
War zigarez, siwazh, Dezhañ, diDeodet gant ar Gall.  
HoGen, mar deo dideodet, ne deo ket diGalon...

E brezhoneg krenn e kaved ivez kengloterezh kensonennoù keñver-ha-keñver gant ar c'henglot sonennoù. Ma n' int ket bet miret e pennadoù hir, e vezont kavet koulskoude, pe e gwerzennoù distag :

Da oBer BEC da ReBECca  
(" Burzhud bras Jezuz ".)

pe zoken e pennadoù, evel ar ganaouenn-mañ e " Buhez Santez Barba " :

Euelhen eu Gounit Gloat hac ebataff  
Euelhen eu Gounit Gloat,  
Mar da moues dan marchat  
Ha caffout compaignon mat  
Hac e reo da evaf.

#### DIAZEZOU AR C'HENGAN

19. - AL LIZHERENNOU. - Evit ma vefe kengan e ranker lakaat da glotañ sonioù heñvel pe a hevelep natur. Dav eo d' ar barzh anavezout evit se diazezoù ar soniadouriezh.

Daou rummad lizherennoù a gaver el lavar : ar sonennoù pe vogalennoù, anvet evel-se dre m' o deus ur son dezho o-unan ; ur vogalenn hepken a c'hell bezañ ur ger : **a, e, i, o** a zo gerioù distag e brezhoneg. En o c'heñver ez eus kensonennoù, ar re-mañ ne c'hellont ket bezañ distaget o-unan, hogen hepken pa vez ur sonenn ouzh o harpañ : ki, du, me...

105

Bez' e c'heller, evel m' o deus diskouezet ar skouerioù roet a-us lakaat da glotañ sonennoù etrezo, kensonennoù etrezo, pe aliesoc'h strolladoù lizherennoù oc'h ober ur soniad.

A) Sonennoù. - Bez' ez eus seizh sonenn diazez e brezhoneg : A, E, I, O, OU, EU, U. Re hir e vefe displegañ amañ perzhioù pep hini eus ar sonennoù-se ; pediñ a ran ac'hanoc'h da lenn ar pezh a lavaran diwar o fenn e pajennoù kentañ va " Yezhadur ".

Daoust m' o devez sonennoù 'zo evel **e, o** pe **eu** livioù disheñvel hervez al lec'h ma vezont (keñveriañ da skouer : **per, lêt** ha **nerzh ; mor, koll** ha **roc'h ; bleud** ha **meurzh**) ec'h anzaver outo peurvuiañ an tu da genglotañ. Koulskoude eo ret anzav ne glot ket re vat ar gerioù-se. Ha ne deo ket eus ar c'hentañ ar c'hengan diabarzh war **or** er werzenn-mañ :

Porzhier, digorit an nor-mañ.

Ha gwir eo ivez eus ar c'henglot etre sonioù glan ha sonioù fri, ne gengan ket re vat **tomm** ha **bomm** kenetrezo, nemet dre ar skritur e ve... D' ar barzh eta

bezañ aketus war ar poent-se.

B) Kensonennoù. - Re hir e ve displegañ amañ perzhioù ar c'hensonennoù war o hed. Degas a ran da soñj hepken e c'heller o rannañ etre :

1) kensonennoù gweuz : **P, B, F, V, M, W**  
kensonennoù dent: **T, D, S, Z, N**  
kensonennoù staon, anvet alies kensonennoù « gleb » : **CH, J, GN, LH, Y**  
kensonennoù korzailhen : **K, G, C'H, NG**  
ur gensonenn gourlañchenn : **H**.

2) kensonennoù tarzh : **K, T, P, G, D, B**  
kensonennoù c'hwez : **C'H, S, Z, F, V, CH**  
kensonennoù fri : **M, N, GN, NG**  
kensonennoù linkus : **L, LH, R**  
kensonennoù vogalek : **W, Y, U** kensonenn (**W** a vez skrivet alies **V, OU** pe **O, Y** a vez skrivet alies **I**).

Barzhed Kembre o devoa kavet anvioù bravoc'h evit ar rummadoù kensonennoù, da skouer **llyfn** (levn) evit ar c'hensonennoù tarzh, ha **crych** (krec'h, d.l.e. kreñnek) evit ar re c'hwezet.

3) E pep rummad ez eus ur son blot hag ur son kalet. Kembreiz a lavar *skañv* ha *tromm* (ponner). **K, T, P** a zo kalet ; **G, D, B** a zo blot ; **F, S, CH** a zo kalet ; **V, Z, J** a zo blot. Luzietoc'h eo an traoù egwirionez, rak kensonennoù evel **G, D, B, L, N, R** a vez dezho a-wechoù ur son kalet ha blotadur **C'H, F, S** ha **CH** ne vez ket skrivet atav.

106

Da deurel evezh ez eus ivez ne chom ket digemm ar c'hensonennoù er frazenn, ur gensonenn vlot o tont rag-eeun dirak unan bonner a galeta hag a ro ur c'henson hepken mar deo an div kenrummad : **beg kant, mab pennek, koad troc'h, glas sin...** Dirak **h** e kaleta ivez ar c'hensonennoù blot : **miz here, kuzh heol** a vez distaget evel *misere, kuseol...* War-lerc'h **s** hag **c'h** e c'hoarvez alies heñvel hag ivez war-lerc'h strolladoù evel **nt, mp, nk** : *miz gwengolo, roc'h zu, hent bras, pemp gwenneg* a vez klevet evel « *miz kwengolo* », « *roc'h su* », « *hent pras* », « *pemp kwenneg* ».

Aner e vije eta mont re bell evit klask lakaat kemm etre kensonennoù a zo tost an eil ouzh eben. Pelloc'h ez eer zoken a-wechoù hag er gwerzioù-pobl e vez kavet alies kengan etre kensonennoù dent ha kensonennoù gweuz, lakaet e vez da glotañ **mat** ha **mab, beg** ha **bed**. Mat eo ivez lakaat da glotañ dic'hwez ha divouez...

K) Divsonennoù. - A-wechoù e kaver div vogalenn disheñvel en ur vouezhiadenn : **Doue, heol, brein, koad, eeun** (gw. ivez § 11). An divsonennoù-se a vez graet anezho c'hoazh diftongennoù.

Er skouerioù-se hon eus skouer diftongennoù gwir. Er re-se emañ an taol-mouezh war ar vogalenn gentañ. En o c'hichen e kaver avat falsdiftongennoù : er re-mañ emañ an taol-mouezh war an eil vogalenn hag an hini gentañ a zo e gwirionez an hanter vogalenn : **W, Y** pe **ù** : *yar, gwan, kouezhet, kuit*.

Gerioù evel **mouezh, koad, koan, loen** a zo enno un diftongenn wir evit tud 'zo, ur falsdiftongenn hepken evit re all.

Evit ar werzaouriezh ez eus da deurel evezh ouzh kement-mañ :

- un diftongenn wirion ne c'hell klotañ nemet ganti hec'h-unan : **koan** ha **poan** a gloto etrezo, hogen ne glotint ket ganti **gwan** pe **ban** pe **kan** ; **frouezh, kouez** ha **gouez** a gloto kenetrezo, hogen ne glotint ket ganti **kouezh, c'hwezh** pe **gwez** ;

- ur falsdiftongenn avat a c'hell he vogalenn doniet kenganañ gant ur vogalenn hec'h-unan evel-se **yar, gwar** ha **par ; kouezh, gwez** ha **mez** a gloto mat-tre kenetrezo.

107

D) Kudenn V. - Gerioù evel **marv, c'hwerv, bezv, malv, anv** a c'hell bezañ kontet evel unan pe evel div vouezhiadenn. Pa gonter div ez eo mat koulskoude skrivañ **maro, c'hwero, bezo, malo, ano...**

## 20. - AR MOUEZHIADENNOU PE SILABENNOU.

Diwar ar pezh emeur o tont a lenn e c'heller dastum ez eus daou rummad a vouezhiadennoù : ar mouezhiadennoù vogalek, enno ur vogalenn hepken, hag ar mouezhiadennoù diftongek.

Gwelet hon eus dija (§ 7) e c'hell ar mouezhiadennoù bezañ :

- boull ma echuont gant ur sonenn : **tra, gwri, bro, tu.**  
- serr ma teu ar sonenn da gentañ : **ar, eur, arzh, aour...**  
- gwasked mar demañ ar sonenn (pe an divsonenn) etre kensonennoù : **mar, gwenn, stem.**

Kement-se a zo eeun-tre evit gerioù unsilabennek kemeret a-unanoù. Evel avat m' eo liammet peurvuiañ ar mouezhiadennoù da sevel gerioù hag ar gerioù o-unan da sevel bommoù-lavar, ez eus un dra a-bouez hag a ranker lavarout : n'eo ket diazezet ar glotenn war ar vouezhiadenn, nemet ha kouezhañ a rafe dibenn ar vouezhiadenn war an arsav.

Evit lakaat mouezhiadennoù da glotañ ez eo trawalc'h e vefe heñvel ar sonioù adalek ar vogalenn ; dre vras eta ne daoler evezh evit ar glotenn nemet ouzh ar c'hensonennoù a zeu da c'houde ar vogalenn. Pa ne vez troc'h ebet en distagañ e rank ar gensonenn war-lerc'h klotañ, zoken ma n' eo ket eus an hevelep mouezhiadenn. Daoust d' an doare distagañ e tenn eta ar glotenn d' ar silabenn wirion. Alies avat e klot zoken ar gensonenn war-lerc'h, zoken ma ne deo ket eus an hevelep silabenn na zoken eus an hevelep ger. Ar ger **goudomm** a ranko e rann gentañ kaout ur glotenn en **oud** ha neket hepken en **ou** ; klotañ mat a ray gant **hiboud**, fall avat gant **spegoù ; didorr** a gloto mat gant **lid**, hogen fall hepken gant **ti**.

A-se eo e tispleger gwerzennoù evel :

Ar Varn a vezo strizh, ha pizh, abeg tri zra.  
(Melezour an Marv.)

108

(An Barnn a vezo striz, ha piz, abec tri-tra.)

pe :

Orzca cza tut ma ty  
(Buhez Santez Nonn.).

pe c'hoazh :

Pleget o fenn dindan o fluñv  
(Maodez GLANNDOUR.)

## AR GLOTENN DIBENN

21. - PINVIDIGEZH AR GLOTENN. - Ar glotenn dibenn a vez kavet koulz e skridoù ar Grennamzer hag e re an amzer-vremañ. Setu perak e krogimp ganti da gentañ.

Ur c'hlotañ mouezhiadennek eo, setu perak e rank an holl sonioù klotañ

adalek ar vogalenn diwezhañ.

Mar deo boull ar vouezhiadenn diwezhañ ez eo a-walc'h neuze e vije ul lizherenn hepken o klotañ :

Ya, ma pardon Doue,  
Perak n' her grafen-me ?  
Ha perak ne lavarfen-me  
Hervez va le  
Ur bedenn evit e ene ?  
(T. MALMANCHE.)

Echuet oa an daou vloaz, echuet oa an tri ;  
- Kenavo dit Silvestrig, me n' az kwelin ket mui ;  
Mar kavfen da eskern paour taolet gant ar mare  
O ! me o dastumefe hag o briatafe.  
(Barzaz Breiz.)

Pa ne vez ket boull ar vouezhiadenn diwezhañ e rank ar gensonenn pe ar c'hensonennoù a zo war-lerc'h ar vogalenn bezañ heñvel evit ma vije klotenn a-walc'h :

Me am eus ur goulmig c'hlas e-kichenik ma dor,  
Hag hi e toull ar garreg war benn ar roz e gor ;  
Me ' stago ouzh he gouzoug, me ' stago ul lizher  
Gant seizenenn ma eured, ra zeuy ma mab d' ar gêr.  
(Barzaz Breiz. )

109

A-bell ha c'hwi 'ec'h eus klevET  
En erc'heg c'hlas divent,  
Pe chas, pe dud skourjezet  
O leñvañ 'hed an hent.  
(Roparz HEMON.)

A-wechoùigoù avat e reer hepken gant klotennoù vogalenn :

Un noz e oan em gwele, ne oan ket kousket mat,  
Me ' gleve merc'hed Kerlaz a gane son ma mab.  
(Barzaz Breiz. )

Klotennoù prim a vez neuze.

Barr e vez ar glotenn pa vez harpet gant ur gensonenn da vihanañ a-raok ar vogalenn :

Etrezek pennoù skorn ar bed,  
Ha na glevas mui den ebet.  
(Roparz HEMON.)

Ar Vretoned a welis o vediñ er c'hadir,  
Naren gant filzier-strob, nemet klezeier dir.  
(Barzaz Breiz.)

*Pinvidik* eo ar glotenn pa 'z eus kengan adalek vogalenn an eil mouezhiadenn diwezhañ :

Ar c'hozh ki kounnaret  
En doa din-me lavaret.  
(T. MALMANCHE.)

Tec'het ! A geneil ! petra 'vern ?  
Sell : ha ne welez ket a-vern...  
(R. HEMON.)

Ouroulerien arc'hant ar groaz perlezennet  
Gant ar c'hreñvañ gwazed sonn er vann dougenet,  
Bremañ, evit klozañ, sellit ur pennadig,  
Ur paotrig gwisket gwenn o ren un dañvadig.  
(Laouenanig Breizh.)

Lavarout a reer erfin ez eo *pinvidik-mor* ar glotenn pa 'z eus c'hoazh da nebeutañ ur gensonenn o kenganañ dirak vogalenn an eil silabenn diwezhañ :

110

Va intento neb a garo,  
Va stad avat a zo garo.  
(T. MALMANCHE.)

Ma fonn ar bleunioù melen en doureier.  
Ma kresk an iliav ouzh ar reier,  
(R. HEMON.)

Er skouer da heul e vefe ivez ur glotenn binvidik-mor, nemet ez eo prim dre m' eo disheñvel ar gensonenn dilost :

Meur a hini o klask gouzout  
En deus graet dê, gant troad e lañs  
Lonk' o zeod 'barzh 'n o gouzoug.  
(T. MALMANCHE)

22. - AR GLOTENN HAG AN TAOL-MOUEZH. - Ne deo ket atav pinvidigezh ar glotenn a laka ar c'hengan da vezañ kaer. Setu ar pezh a lavar diwar-benn-se Maodez Glanndour : « Galloud ur glotenn ne vo ket atav diouzh he finvidigezh : kanennoù furlukinerezh a c'hell kavout klotennoù pinvidik-mor ».

Ouzhpenn-se ez eo ret ivez teurel evezh ouzh an taol-mouezh.

E gwerzennoù evel :

Petra ' zo nevez e Kêr-Iz  
Ma 'eo ken foll ar yaouankiz.  
(O. SOUETR.)

ne glever ket heñvel an dibenn IZ en div werzenn.

En daou skouer da heul :

Va intento neb a garo,  
Va stad avat a zo garo.  
(T. MALMANCHE)

Tra 'vo mouezh ha buhez ganin.  
Da gaerder atav a ganin  
(H ar GARREG.)

ez eus klotennoù pinvidik-mor. Er skouer kentañ avat e klot ivez an toniadur, tra ma ne ra mui en eil.

111

Ac'hano ez eus savet ur gudenn a-zivout an darempredoù etre ar pouez-mouezh hag ar glotenn. Daou rummad a zo e-touez ar werzaourien evit diluziañ ar gudenn :

A) Da heul Jakez Kerrien o deus gwerzaourien 'zo lavaret e rank ar sonioù klotañ adalek ar vogalenn doniet diwezhañ.

Piv bennak a fell dezhañ avat heuliañ al lezenn-se a gav dirazañ ur skoilh bras : an darn vuiañ eus ar gerioù brezhonek a zo pouezmouezhiet war an eil silabenn diwezhañ. Pe e ranker neuze klask gerioù o klotañ enno div silabenn, pe ober gant gerioù unsilabennek. N' eus forzh penaos e teu an doare ober da vezañ unton.

Ar varzhed o deus klasket gwerzaouiñ hervez ar reolenn-se o deus hen santet sur a-walc'h ha kavet un doare all d' en em dennañ : lakaat da glotañ ar silabenn didon diwezhañ, hervez ar reolenn dre vras bet displeget uheloc'h. Ouzhpenn-se avat e rank bezañ kengan etre ar vogalennoù toniet hep ma vefe ret lakaat ar c'hensonennoù war-lerc'h da genglotañ.

An doare-se da ober en deus diskouezet bezañ spletus a-walc'h :

E tour ar chapel gozh, kloc'h Sant-Yann o sini,  
Prosesion Sant-Nouga, ha d' he heul kaniri.  
A zikenn gant an hent : gwelit ar groaz arc'hANT  
Douget gant tri gozhiad lufirus o gwiskamANT ;  
Skeudenn sant Yann Keran ha, war-lerc'h, bannielOU  
Gant merc'hed fichet kaer, war o dorn manegOU.  
(Laouenanig Breizh.)

B) Barzhed a zo avat hag a lavar en enep : ar glotenn dibenn, dreist-holl ma rank ar sonioù klotañ adalek en taol-mouezh diwezhañ a zo un dra bounner ha danvezek, mat da lakaat lufir ha da ober stirlink, hogen n' emañ ket kaer diouzh doare tud vlizidik. Perak, emezo, ne lakafed ket en enep da reolenn ne c'hellfe klotañ nemet ur vouezhiadenn doniet hag unan zinerzh (hervez ar reolenn heuliet er c'hewez kembraek). Ac'hano ivez vefe urzhiet heuliad ar gwerzennoù start hag ar gwerzennoù laosk. D' an neb a heulio an ali-se e vo aner, avat, ar pezh emeur o vont da zisplegañ en arroud da heul.

112

23. - KLOTENNOU MAT HA KLOTENNOU FALL. Klotennoù a zo evel ar re a gaver en **evañ** ha **kanañ**, **brasoc'h** ha **pelloc'h**, **eostiñ** ha **goriñ**, **laboused** ha **loened...**, ha n' o deus ket kalz a dalvoudegezh, dre m'eo re aes kavout seurt klotennoù. Falloc'h c'hoazh, ma c'heller lavarout, e vo lakaat da glotañ anvioù-gwan-verb evel **torret** ha **kaset**.

Bez' ez eus eta klotennoù hag a zle ur gwerzaouer aketus kaout disfiziañs outo :

- Stummoù ar verb kenetrezo ;

- An araogennoù displeget (arabat lakaat da glotañ **warnañ** hag **evitañ**, da skouer) ;

- An anvioù-gwan enno un dibenn a gaver alies evel **-ek**, **at**, **-us**. Ar gerioù **ruz** ha **druz** a gloto kenetrezo, bez' e c'hellint ivez klotañ gant **kuzh** ha **truezus** ; **truezus**, **eürus** ha **kasaus** ne glotint ket avat kenetrezo, kennebeut ha **brezhonek** gant **askellek**.

- Anvioù lies gant dibennoù evel **-où**, **-ioù**, **-ed**, **-fen**, **-ier**, **-i**. Mat e vo chom hep lakaat da glotañ **givri** ha **tirvi**, **kêrioù** ha **staliou**, **inizi** ha **brini**.

- An anvioù enno un dibenn a zeu alies evel **-enn**, **-ez** gwregel, **-erezh**, h.a. **Penn** a gloto gant **gwezenn**, hogen ne gloto ket ar ger-mañ gant **dervenn**.

Bez' e c'hellor avat lakaat da glotañ dibennoù a rummadoù disheñvel. Evel-se, **merc'hed**, **yec'hed** ha **kanet** a gloto mat-tre etrezo.

AR GLOTENN DIABARZH



24. - AR GENGANEZ - Evel m' hon eus gwelet uheloc'h en arroudad 17 e vez kavet c'hoazh e brezhoneg krenn un doare kenganerezh all : hini vogalennoù pe gensonennoù, n' eo mui etre div werzenn, hogen e diabarzh ar werzenn hec'h-unan. Ar c'hlotennoù graet ganto neuze a reomp anezho klotennoù diabarzh hag eus an doare ober ar genganez ez-strizh.

Gant ar genganez eo o deus graet ivez barzhed Kembre hag Iwerzhon. A-bouez eo eta evidomp studi an doare-se da werzaouiñ.

113

25. - AR GENGANEZ E KRENNVREZHONEG. -  
Ur genganez silabennek eo kenganez brezhoneg ar Grenn-amzer.

Setu amañ un nebeudig skouerioù hag a roio da gompren he lezennoù ( miret eo bet an doare skrivañ kozh) :

Dre compassion	Evit hon Salvder,
Ouz an passion	Rae dre e douczder
hon Roe debonER	Dez guener an CroAS
Ez dle pep heny	Hep ober nep drouc
Goelaff a devy	Na breig oar he chouc
Nac eu mar fiER	Hon drouc a dougAS

(" B. B. Jezuz ".)

Jesus, maestr **quer**, mar em querET  
Ret eu huy ho tut deputET  
Ez deuhech hep quET sellet poAN  
Gueneff en effet credet dIFF  
A pret na leset ho pedIFF  
Sentit ouzIFF da dibrIFF coAN.  
(" B. B. Jezuz ".)

Pan ve a plen quement den so en bET  
Gytibuan, bras ha bihan, ganET,  
Na so bezET na so quET en bET mAN,  
Ne vent hanter en guer da disclaeriaF  
An poaniou bras diblas, ar re brasAF  
Spont ve contaF quentaF han falhaF poAN.  
(" B. B. Jezuz ".)

Ael mat, quae en stat mAN a bremAN voar AN, bET  
Bede PatriciUS ioaeUS gra escUS nET  
Mont voar tech an Lech hONT ; dezaff gra prONT cONTET  
Querzet certen dren brO : enO ne chomO quET.  
Lauar dezaff parfET diuzET ezaEDI  
Gant Doe iust ha leAL reAL dre e ALY  
Da pen tregont bloaz EO ez duy bEO sant DEWY  
Aman dabout ganET : proficiET EDY.  
(" Buhez Santez Nonn ".)

Diwar ar skouerioù e c'hellomp dastum dre vras ar reolennoù heuliet :

a) Er gwerzennoù berr ( 5 mouezhiadenn), ne vez ket kavet a glotennoù diabarzh. Graet e vez ganto avat er gwerzennoù hiroc'h : peurvuiañ e kengan div wech ar son er gwerzennoù eizh mouezhiadenn, ha teir gwech er re a zek.

114

b) Er gwerzennoù ouzhpenn dek mouezhiadenn e kaver ivez klotennoù diabarzh en darnoù gwerzenn. Gwelet hon eus uheloc'h ur skouer gant gwerzennoù daouzek mouezhiadenn, setu unan ennañ gwerzennoù c'hwezek mouezhiadenn :

Euit loezn du me so cruEL : ha garu maruEL mar en guELaf ;  
Me meus liffrini raliET a groay aprET ho diffreTaff.

(" Buhez Santez Nonn ".)

k) Silabenn an arsav pennañ eo a gengan dalc'hmat, peurluviañ gant son eil mouezhiadenn diwezhañ ar werzenn (n'eo ket ret-ret evelato, ha pa vez an eil mouezhiadenn diwezhañ didon e c'hell an trede diwezhañ kenglotañ).

d) Er gwerzennoù n' eus ket enno a glottenoù diabarzh en darn dirak an arsav, ez eus atav un darempred etre klotenn dibenn gwerzennoù a zo ha klotenn diabarzh ar werzenn gentañ gant ur glotenn disheñvel a zeu war-lerc'h. Bez' e kaver evel-se strolladoù peder, hag aliesoc'h re c'hwec'h gwerzenn (gw. § 34).

e) N' eus liamm ebet etre lec'h ar glotenn hag an taol-mouezh.

26. - AR GENGANEZ E KEMBRAEG. - Met evit gouzout petra a c'heller ober gant ar gengan eo dav dimp treiñ war-du ar c'hembraeg. Gwerzoniezh kembraek ar Grennamzer a heulie reolennoù strizh-meurbet, diazezet war meur a zoare kenganez. Studiet eo bet doare-ober ar « c'hewez » gant Roparz Hemon (" Gwalarn " 128/129. pp. 64-68) ; hag evit reiñ deomp gwelloc'h da gompren ar reolennoù heuliet en deus savet e-unan ur pezhig barzhoniezh, "Hent Peredur ", a vo kemeret ganeomp da skouer :

Da vogañ 'r flamm divougas  
A bar, glan, espar, a-us  
D' am zal bepred, ma sellan  
D' an nec'h. Ha dinec'h ne dan  
Nepred. Dre ar bed a-bezh,  
En anken pe levenez,  
E klevan, pa riskl avel,  
Tourni boud taran a bell :  
Aroun a goun aet da get,  
Pe glemvan an dic'hanet ?

115

Ar pezh barzhoniezh-se a zo mentet reizh : gwerzennoù seizh mouezhiadenn int holl, darn start ha darn laosk. Kenganerezh eo, avat, a gaver dreist-holl enno. Bez' e kaver :

A) Klotennerezh dibenn. Strollet eo evel-se ar gwerzennoù div-ha-div : **divougas, a-us ; sellan, dan ; a-bezh, levenez ; avel, a-bell** ; hag all. Ne c'hell ur vouezhiadenn doniet klotañ nemet gant un dibenn didon e doare ma vez strollet atav ur werzenn start hag ur werzenn laosk.

B) Klotennerezh diabarzh. Hemañ a c'hell bezañ diazezet war gengan ar sonennoù (cynghanedd sain) pe war gengan ar c'hensonennoù hepken (cynghanedd brost).

1) Kenganez son. Houmañ eo dre vras an hini hon eus graet anaoudegezh ganti e krennvrezhoneg. Diazez ar c'hengan eo ar sonenn, peurluviañ avat e vez harpet gant ar gensonenn pe ar rummad kensonennoù war-lerc'h. Bez' ez eus daou zoare kenganez son e Kembre :

- kenganez stlej (cynghanedd lusk). Kenganez ar brezhoneg krenn eo : eil mouezhiadenn diwezhañ ar werzenn a zle kenganañ gant dibenn unan eus ar gerioù a-raok, peurluviañ hini an arsav.

Dleet eo ivez da eil mouezhiadenn diwezhañ ar werzenn bezañ toniet (daoust ma 'z eus skouerioù enep).

En anKEN pe levENEz...  
Pe glemvAN an dic'hANet...

- kenganez son liesdoare (cynghanedd sain rywiog). Tostaat a ra houmañ ouzh ar c'henganerezh klotennoù : dibenn daou c'her a rank bezañ heñvel

er werzenn. Ouzhpenn-se ez eus un ere etre ar ger diwezhañ hag ar glotenn-dibenn : ar gensonenn, pe ar strollad kensonennoù, a zo dirak sonenn bouezmouezhiet ar ger a zle bezañ an hevelep hini, pe an hevelep re a zo dirak ar glotenn.

D' an NEC'H. Ha DiNEC'H ne Dan  
NepreD dre ar BED a-Bezh...  
ArOUN a GOUN aet da Get.

Ar gwerzennoù-se a zo rannet eta e teir darn adalek an dibenn : ar « glotarn. » (ne dan, a-bezh, aet da get), ar « c'hourzarn » enni ar « gourglot » (ha dinec'h, dre ar bed, a gown) hag ar « rakzarn » gant ar « rakklot » (d' an nec'h, nepred, aroun).

116

2) Kenganez prost. Amañ n'eus mui a gengan nemet etre ar c'hensonennoù. Daou zoare a zo ivez :

- kenganez treuz (cynghanedd draws). E gwerzennoù a zo e kaver en derou hag en dibenn aridennadoù kensonennoù o kenglotañ :

Da vogañ 'r flamm Divougus...  
D'aM ZaL bepreD, Ma SeLLan...  
E KLEvan, pa risKL avel...  
DoaN ha Turmud DiN aTav...

Er gwerzennoù-se e kaver an aridennadoù kensonennoù-mañ :

D V - G	D V - G
D M Z - L	D M S - L
K L - V	K L - V
D - NT	D - NT

An tired lakaet etre ar c'hensonennoù a verk lec'h ar vogalenn doniet. Ar vogalenn, pe ar strollad vogalennoù, toniet a zle bezañ en hevelep lec'h en div aridennad kensonennoù, hogen bezañ disheñvel etrezo. Bez' e ranker menegiñ c'hoazh div reolennig :

a) H ha W ne gontont ket evel kensonennoù. E brezhoneg ne gontfe ket N na Y kennebeut, anat eo, na V pa vez hanter-vogalenn evel e **liv** ;

b) div gensonenn heñvel o tont an eil war-lerc'h eben ne gontont nemet evit unan.

E gwerzennoù ereet gant kenganez treuz ez eus teir darn : ur rakzarn en-dro d' an taol-mouezh kentañ hag ur glotarn en-dro d' an taol-mouezh diwezhañ a-raok ar glotenn-dibenn. Holl gensonennoù an div rann-se a glot kenetrezo nemet ar re a zeu war-lerc'h ar glotenn-dibenn. Etre an div rann-se emañ al lanv diglot. Seul vui ez eus a gensonnoù o klotañ, seul verroc'h e teu da vezañ.

Hervez niver ar c'hensonennoù o kenganañ e lavarer ez eus kenganez unglav, daouglav, tric'hlav, pevarc'hlav, h.a. Er skouerioù roet ez eus kenganez tri- ha pevarc'hlav.

- Kenganez kroaz. Pa steuz al lanv e doare ma kengan holl gensonennoù ar rann gentañ gant holl gensonennoù an eil rann a-raok ar glotenn e lavarer ez eus « kenganez kroaz ». Ne deo eta nemet ur genganez treuz strishaet.

Tourni boud taran a-bel

117

Bez' e c'hell evelato bezañ un **n** e penn ar rakzarn ha ne vez ket lakaet da genganañ.

Evel skouer eus implij an doareoù kenganañ-se e kembraeg, setu ur pennad eus " Eiddig " gant Dafydd ap Gwilym bet embannet ha troet e " Gwalarn " :

Ni CHar nag eos, Na CHog,	( kenganez treuz daouglav)
Na LLiNos mwy, Na LlwyNog,	( kenganez treuz tric'hlav)
Na CHoAD Tew, Na CHae Tywyll,	( kenganez kroaz)
Na CHaNu Cerdd, Na CHNau Cyll	( kenganez treuz pevarc'hlav)
Clywed can adar Man Mai	( kenganez son liesdoare)
A DaL iR a ' i DoLuRiai !	( kenganez kroaz)
SiaRad bronfraith iS iRwydd	( kenganez treuz daouglav)
A-G eoS Fwyn ei GaS Fydd ;	( kenganez treuz tric'hlav)
CasbETH gan Eiddig fETHiant	( kenganez stlej)
GlyWAID byTHEuAID a Thant.	( kenganez son liesdoare)

Er pennadoù meneget a-us ez eus kenglotererezh son etre an dibennoù. An doare-se eo a gaver an aliesañ. Bez' e kaver ivez avat kengloterezh diazezet war ar c'hensonennoù : ur strollad peder gwerzenn a zle echuiñ gant un hevelep kensonenn pe strollad kensonennoù.

a) Ar vogalenn dirazo a vez disheñvel er peder gwerzenn. Bez' e vez neuze « kensonerezh kengemmus ». Setu ur strollad gwerzennoù klotennet en doare-se :

Gwelout a raimp-ni kant-ha-kaNT  
 O vonet du-hont gant an heNT ;  
 Ha 'n ur dremen, taer ha dispONT,  
 Kozh ha yaouank, holl e kaniNT.

b) Ar gwerzennoù a c'hell ivez kenglotañ div-ha-div dre ar vogalenn diwezhañ, « kensonerezh chadennek » a vez neuze. Setu an hevelep strollad un tammig kemmet e doare klotañ evel-se :

Ha 'n ur gerzhout, taer ha dispONT,  
 O gwelout 'rejomp-ni o tONT,  
 O tremen du-hont gant an hENT  
 Kozh ha yaouank, holl e kaneNT.

118

27. - AR GENGANEZ EN IWERZHONEG. - Er varzhoniezh iwerzhonek e kaver ivez kenganerezh : an hini implijetañ, avat, a zo disheñvel bras diouzh an hini a veze graet gantañ e Kembre hag e Breizh. E-lec'h kengan etre vogalennoù an hevelep gwerzenn e vez kengan etrezo ha vogalennoù ar werzenn war-lerc'h.

Setu e berr gomzoù reolennoù an doare-gwerzaouiñ anvet **amhràn** (distaget oràn), roet hervez pennad O. D. Mac Cartha Üileas e niv. 12 " Gwalarn " :

a) n' eus klotenn-dibenn ebet ;

b) n' eus o kenganañ nemet ar vogalennoù ha nann ar c'hensonennoù ouzh o harpañ ;

k) diazezet eo ar genganez war un niver merket (pemp peurvuiañ) a silabennoù toniet e pep gwerzenn. Ne ra forzh niver ar mouezhiadennoù didon a vez etre ar re doniet ;

d) vogalenn pep mouezhiadenn doniet a gengan gant vogalenn ar vouezhiadenn a hevelep renk er werzenn war-lerc'h.

28. - AN OBER GANT AR GENGANEZ. - Klasket em eus displegañ en o hed reolennoù ar genganez e krenn-vrezhoneg hag e kembraeg, rak ur skouer a dalvoudegezh vras int evidomp. Sellet dre vras e seblant marteze bezañ gwall strizh ; anat eo kement-se evit ar genganez kroaz hag an doare-gwerzaouiñ iwerzhonek heuliet strizh.

Spletus evit ar barzh e vefe, avat ober implij eus an doareoù all o-unan pe gemmesket : kenganez stlej, kenganez treuz unglav pe daouglav hag ivez kenganez son liesdoare, kevreet pe nann gant klotennerezh dibenn. Bez' e c'heller ober ivez gant klotennerezh kenson en dibenn. Setu, a gredan, reolennoù dre vras a vije mat degemer :

a) ne c'hell ur vouezhiadenn doniet klotañ, koulz en diabarzh hag en dibenn, nemet gant ur vouezhiadenn didon. Ma kengan meur a wech an hevelep son e-barzh ur werzenn, ez eus, anat eo meur a glotenn didon pe doniet ; an eil-diwezhañ hag an hini dirak an arsav eo a rank bezañ disheñvel e-keñver an ton ;

b) mar deo hir ar werzenn, enni ouzhpenn eizh mouezhiadenn, e c'hell bezañ kenganez ivez er rann gentañ.

(Da genderc'hel. )

## **ROJE CASEMENT**

Roje Casement a zo bet krouget e toull-bac'h Pentonville, d' an 3 a viz Eost 1916. Ganet e oa bet Casement d' ar c'hentañ a viz Gwengolo 1864, e-kichen Dulenn, en un tiegezh a orin manavat. Goude sevel danevelloù a-bouez diwar-benn ar waskerezh war ar re zu er C'hongo ha war an Indianed er Putumayo, e oa deut en-dro, distrujet e yec'hed, da Iwerzhon. Eno, e 1913, en doa savet, gant keneiled all, emsav an Irish Volunteers, ha deut e oa da vezañ teñzorier an Arme. E 1914 e oa aet d' an Amerika da glask arc'hant, goude-se en Alamagn da glask armoù ha da sevel ur Vrigadenn iwerzhonat, erfin e oa distro da Iwerzhon, e 1916, war vourzh ul lestr-spluj alaman, da gemer perzh en emsavadeg Pask.

Abaoe e varv e oa Iwerzhoniz o c'houlenn ma vefe daskoret dezho e relegoù. Betek-hen e oa bet nac'het gant ar gouarnamantoù saoz. Met hiziv an deiz emañ gouarnamant London o klask kompezañ an traoù gant Dulenn, ha da heul un emvod etre ministred saoz hag iwerzhonat goude douaradur Churchill, en deus asantet ar Ministr Kentañ Harold Wilson reiñ en-dro ar relegoù. Diaes eo bet marteze kavout relegoù Casement, rak douaret e oa bet e bez kumun an toull-bac'h, en ul liñser hepken, hep arched ebet, ha distrujet eo bet dre zarvoud roll ha niveradur an douaradurioù. Tud eus gouarnamant Iwerzhon a oa war al lec'h pa 'z eo bet digoret ar bez, avat, hag asuriñ a reer ne oa tu ebet da faziañ, dre an abeg ma oa Casement mentet uheloc'h eget an darn vrasañ eus an dud.

Obidoù broadel a zo bet graet da Casement d' an deiz kentañ a viz Meurzh. Emañ bremañ e relegoù e bered Glasnevin, e-lec'h m' emañ beziet kel lies brogarour iwerzhonat.

PER DENEZ.

## **KOMZOU CASEMENT**

« Iwerzhon n' he deus gwad ebet da reiñ da vro ebet, da uhelvennad ebet, nemet da Iwerzhon e vefe. Hon dlead evel kristenien eo chom hep skuilhañ gwad hag hon dlead evel Iwerzhoniz eo reiñ hor buhez da Iwerzhon.

...Ma tle gwad Iwerzhon bezañ « ar siell a unano Iwerzhon en ur vroad hepken hag en ur frankiz kevatal ha boutin d'an holl », neuze ra vo skuilhet ar gwad-se en Iwerzhon, al lec'h nemetañ ma c'hell bezañ skuilhet ez-reizh evit gounit ar frankiz-se.

...Mad Iwerzhon a zo brasoc'h eget mad forzh peseurt strollad : brasoc'h eget talvoudegezh forzh peseurt den : pinvidikoc'h en e baourentez eget holl binvidigezhioù an Impalaeriezh. Ma veskomp hiziv uhelvennad Iwerzhon en un treuzvarc'had mezhus, neuze e tiskouezimp n' omp ket dellezek eus ar frankiz - ez omp ur ouenn war-ziskar a graklakizien a zo aet da hesk ar gwad gouron en o gwazied. Mar deo hon dlead bremañ en em gannañ, neuze en em gannomp war an douar-se e-lec'h ma 'z eus kement a rummadoù Iwerzhoniz lazhet o renoz gant enor ha brud. »

( Lizher Digor d' ar Bobl Iwerzhonat, 1914.)

« Paouez a rin bremañ da gomz diwar va fenn, pe diwar-benn va zonkadur,

evit treiñ ouzh ur gudenn mallusoc'h, ankeniusoc'h kalz - neket tonkadur un Iwerzhonad a c'hell bezañ strivet ha c'hwitet, met gwirioù ha tonkadur ar vro n' he deus ket c'hwitet. Iwerzhon n' he deus ket c'hwitet. Iwerzhon a vev hiroc'h eget c'hwitadenn he goanagoù - ha goanag he deus c'hoazh. Iwerzhon he deus gwelet he mibien, hag he merc'hed ivez, o c'houzañv a remziad da remziad, atav evit an hevelep uhelvennad, sammet atav gant an hevelep tonkadur ha gwasket atav gant an hevelep galloud. Ha padal atav ez eus bet ur rummad nevez evit sevel a-enep d' ar gwaskerezh. Rak mar deo hollvedel galloud Bro-Saoz - ur galloud anezhañ, evel ma lavaras an Ao. Gladstone, a ya betek bevennoù pellañ an douar - goanag Iwerzhon a zo brasoc'h eget ar galloud-se, kreñvoc'h eget e levezon, hag e nevesa gant pep remziad nevez, stourm ar remziad a-raok. An uhelvennad hag en deus ganet ken didrec'hus pennegezh, an uhelvennad hag en deus ganet ar galloud da ziwall a-hed kantvedoù a davantegezh an eñvor eus ar frankiz kollet, an dra-se sur a zo an uhelvennad brasañ en deus biskoazh den stourmet evitañ, bevet evitañ, marvet evitañ. Mar deo an uhelvennad-se ez on hiziv tamallet gantañ ha barnet evitañ, neuze en em gavan e kompagnunezh vat hag en un heuliad dellezek.`

121

...N' eus nemet en Iwerzhon, en ugentved kantved-mañ, e vefe al lealded un torfed. Mar deo al lealded nebeutoc'h eget ar garantez ha muioc'h eget al lezenn, neuze hon eus bet hol lodenn a lealded evit Iwerzhon hag Iwerzhoniz. An emrenerezh a zo hor gwir deut deomp pa omp bet ganet, un dra na c'hell ket bezañ muzuliet deomp na berzet ouzhomp gant pobl all ebet, pas muioc'h eget ar gwir da vevañ - pas muioc'h eget ar gwir da santout gwrez an heol, da c'hwesa frond-se, evit torfedoù graet ha prouet, hag Iwerzhon, han' he deus graet droug da zen ebet, ha n' he deus graet kamm da vro ebet, ha n' he deus klasket gwaskañ pobl all ebet, Iwerzhon a zo graet outi hiziv, e-touez pobloù an douar, evel pa vefe bet barnet evit an torfedoù brasañ. Mar deo stourm a-enep d' un tonkad ken enep-natur, mar deo se treisoni, neuze ez eus lorc'h ennon o vezañ emsaver, hag e chomin stag ouzh va emsav betek beradenn diwezhañ va gwad. Ma n' eus ket ar gwir da emsevel a-enep ur seurt stad, ha na vefe gouzañvet hep stourm gant poblañs gouez ebet, neuze ez on sur ez eo gwelloc'h d' an dud en em gannañ ha mervel hep kaout ar gwir d' hen ober, eget bevañ dindan ar seurt gwir. Pa'z eo deut ar pezh a zo deoc'h gwirioù da vezañ evidomp gaou berniet war c'haou, ma tle hon tud goulenn ez-avel an aotre da vevañ en o bro, da soñjal o soñjoù, da ganañ o c'hanaouennoù, da vediñ frouezh o labour ha, zoken p' emaint oc'h aspediñ, pa rankont gwelout o zraoù tennet diganto, neuze, sur-mat, kadarnoc'h, yac'husoc'h ha gwirionoc'h ez eo en em sevel, dre gomz ha dre ober, a-enep d' ar seurt doareoù eget asantiñ dezho, ez-doñv, evel pa vefent lodenn natur mab-den.

»

(Diskleriadur d' e varnerien, 1916.)

## **DASKOR RELEGOÙ R. CASEMENT**

Abaoe ur pennad e rede ar vrud e oa ar Saozon o vont da zaskor relegoù Casement da Iwerzhon. Pa c'hoarvezas, d' an 23 a viz C'hwevrer, ne oa den ebet ouzh hen gortoz : prientet e oa bet pep tra dre guzh, hag ar c'heloù ne voe embannet nemet dambrestik kent d' an arched degouezhout gant ar c'harr-nij en aerborzh-arme Baile Ui Dhomhnaill e-kichen Dulenn. Dres d' an ampoent e kemenne Harold Wilson e Ti ar Gumun ha Séan Lemass en Dáil e oa bet emglev etrezo a-zivout an daskor. Renket e oa bet an traoù evel er c'hoariva.

Roge Casement a oa bet krouget e toull-bac'h Pentonville, London, e miz Eost 1916, ha beziat eno en ur c'hlaziad raz. Ne oa anv na merk ebet war e vez. Gant harp an dielloù e voe gallet adkavout hemañ evelato, hag evit ar gargidi Iwerzhonat a evezhias an dizouaridigezh n' eus mar ebet ez eo relegoù ar stourmer meur o deus degaset en-dro d' ar vro.

H. Wilson en deus sevenet evel-se ar gouestl en doa roet warlene da vare an dilennadegoù e Breizh-Veur. E bal a oa neuze gonit ur milion bennak a voterien iwerzhonat d' e gostezenn. Ezhomm en devo moarvat eus o mouezhioù adarre hep dale.

A-raok mont d' ar groug en doa aspedet Casement e geneiled : « P' o devo echuet ganin, na lezit ket ma c'horf el lec'h euzhus-mañ » Diskleriañ a reas e c'hoant bezañ adveziet e-kichen Bae Muirloch en hanternoz Antrim.

Abaoe ouzhpenn 40 vloaz e oa un niver brasoc'h-brasañ a dud o c'houlenn e ve sevenet ar c'hoant-se. Kannaded 'zo eus Kostezenn al Labour e Breizh-Veur o doa savet o mouezh a-du ganto.

N' eo ket e Muirloch ez eo bet adveziet koulskoude met e Glas Naion (pe Glasneven, Dulenn). Amañ emañ beziat un darn vat eus ar re a voe lazhet e Dulenn o stourm evit Iwerzhon. Seurt beredoù zo lec'hioù a birc'hirinaj. Setu perak moarvat n'eo ket bet aotreet gant gouarnamant Belfast e ve degaset relegoù Casement da Antrim. Gouarnamant Dulenn a gavas digarez : e Muirloch n' eus bered a-feson ebet ; ul lec'h distro eo. An tostañ e oa da galon Casement.

123

E-kichen Dulenn e voe ganet e 1864. E dad a oa protestant, eus Bro-Oula (Ulster), met e ziagentidi a oa deut eus Enez Vanav. " Casement " zo deveret eus Mac Casmonde, Mac Asmund, un anv lec'hlenat keltiekaet. Adkeltiekaat a reer bremañ e anv da Ruairi Mac Easmuinn, pe R. Mac Asmuint.

Pezh a laka ac'hanon da soñjal e Padraig Pearse. En ul lizher d' ar gelaouenn ROSC e skriv J. E. Jones e oa hennezh a ouenn gembreat. Pearse zo deut eus Price, stumm saoznekaet Ap Rhys. Kement-se zo talvoudus evidomp-ni hag a glask startaat an ereoù etre an holl Gelted. Touellus lavarout eta ez eo Pearse un hanter-saoz. E skouer a dleor menegiñ pep gwech ma vo anv eus Lloyd George, mevel bras ar Saozon.

Casement a c'honzas brud etrevroadel gant an imbourc'hadennoù a reas er C'hongo Belgiat diwar-benn gwallgaserezh ar Vorianed ha diwezhatoc'h er Putumayo (Brazil) diwar-benn hini an « Indianed » gant eveshaerien kompagnunezhioù-splet. Konsul e oa evit Bro-Saoz er broioù-hont.

E-kerz un ehan en Iwerzhon e reas anaoudegezh gant ar vrogarourien amañ. A-drugarez da Gevre ar Gouezeleg dreist-holl e teuas eñ ivez da vroadelour. E 1913, aet fall e yec'hed, e roas e zilez eus Servij Kannadouriezh Bro-Saoz hag e tistroas da Iwerzhon. Bez' e voe unan eus ar re a grouas Urzhiadur ar



Stourmerien (Irish Volunteers). E 1914 ez eas d'ar Stadoù-Unanet da zastum arc'hant evito. Ac'haleno, pa grogas ar brezel, ez eas d' an Alamagn da glask sevel soudarded e-touez ar brizonidi-vrezel iwezhonat ha kavout armoù digant an Alamaned. Ne reas ket berzh e-touez ar re-hont ha re nebeut a ouestlas ar re-mañ reiñ. Pa glevas e oa divizet emsevel e Dulenn a-benn Sul Fask 1916 e c'houlennas distreiñ diouzhtu. Degaset e voe gant ul lestr-splujer hag e touaras war un draezhenn nepell eus Trá Lí, e Kerri.

Gleb-par-teil e oa ha skuizh-divi. Mont a reas da c'hourvez en ur park, tra ma 'z ae e genseurt Monteith da c'houzaouiñ brogarourien ar c'horn-bro. Gwelet e voe avat gant ur c'houer bennak, a gavas iskis e emzalc'h hag a yeas da reiñ keloù d' an archerien. Hep dale e voe harzet ha degaset da archerdi Trá Lí.

124

E 1965 ez eus bet roet enorioù bras d' e relegoù e kêrbenn Iwerzhon, ofisourion, dellezeien ha brieien ar Stad hag an Iliz ouzh o ambroug. E 1916 e oa bet diskuilhet gant ur c'henvroad dianav dezhañ, ha harzet gant kenvroiz e servij ar Saozon. Gant c'hwervoni e lavarer o dije gallet ur bagadig Stourmerien e zieubiñ pa voe degaset e kêr Trá Lí ha dalc'het en toull-bac'h eno. Aes eo abegiñ war-lerc'h an drougeur. Ma vije bet klasket e zieubiñ e vije bet lakaet un embregadenn all en arvar : Stourmerien Gerri a oa da reiñ dorn evit dilestrañ armoù diwar vourzh ur vag alaman e Bae Trá Lí. An taol-mañ a droas da fall ivez.

Eus Baile Ui Dhomhnaill e voe degaset relegoù Casement da Iliz Cnoc an Arbhair (Arbour Hill), e kornog kêr : er Vered vihan eno emañ beziet P. Pearse ha renerien all 1916.

Chom a rejont en iliz-se betek ar Sul 28 a viz C'hwevrer. Etre 30 ha 40.000 den a zeuas di da desteniekaat o doujañs evit an den en doa roet e vuhez evit Iwerzhon. En o zouez e oa ur bagadig a 13 gwaz o paouez dont er-maez eus toull-bac'h Mountjoy, e-lec'h ma oant bet 5 pe 6 sizhun en abeg d'an trouz o doa graet a-enep donedigezh ar briñsez saoz Margret e miz Genver.

Ur bern kurunennoù a voe degaset war an arched. Pevar Breizhad - N. Henaff, L. Feutren, Y. Goulet ha me - a lakaas unan graet gant skourroù siprez, stag outi ur seizenn wenn hag unan du, hag ur gartenn ma oa skrivet warni :  
BRETON BRIGADE  
Thaispeáin sé an bealach dúinn  
(Bez' e tiskouezas an hent deomp)

An diskleriadur-mañ a rojomp d' ar c'helaouennoù :

« Broadelourien Vreizh a voe atizet gant renerien 1916 en o stourm a-enep ar C'hallaoued. Skouer Casement a voe graet dioutañ gant ar Vrezhoned a-ratozh-kaer div wech e-doug ar brezel diwezhañ.

E 1940 e voe dileuriet Debauvais, rener Strollad Broadel Breizh, d'an Alamagn evit sevel un Unvez Vreizhat a-douez ar prizonidi-vrezel. 200 anezho a oa bodet e Luckenwalde pa zisac'has an talbenn gall.

Atizet adarre gant skouer Casement, broadelourien Vreizh a savas Bezen Perrot e 1944 da stourm a-du gant an Alamaned a-enep distro an alouberien C'hall. E miz Mae 1945, e voe divodet ar Bezen. Kalz anezho a voe lazhet gant ar C'hallaoued. Holl o devoe da c'houzañv. Darn anezho a gavas un eil bro gelt en Iwerzhon, bro Casement. »

125

Estreget ar gurunenn vreizhat e voe lakaet div all gant nann-Iwerzhoniz : unan flandrezat (en iwerzhoneg) hag unan alaman.

D' ar sul 28 e voe degaset an arched d' an Iliz-Veur katolik e-kreiz kêr : stag e oa war ur c'harr-kanol, koronalet o kerzhout en daou du dezhañ, sonerezh kerzh-kañv meurdezus, hag un engroez vras da heul hag en daou du d' ar straedoù.

Ar bannieloù a oa ouzh hanter-fust, met un trec'h lid e oa kement hag ur gerzhadenn-gañv.

Antronoz, d' al Lun, e voe ambrouget ar relegoù da vered Glas Naion. Ar Prezidant de Valera, o komz da gentañ en iwerzhoneg, diskabell ha sonn dindan an erc'h o kouezhañ, a ziouganas e teufe Iwerzhoniz ar remziadoù-da-zont d' al lec'h-mañ da glask awen evit adunaniñ ar vro. Degas a reas da goun penaos e 1917, pa voe dalc'het a-gevret gant Eoin Mac Neill ha stourmerien iwerzhonat all e-pad un nebeut devezhioù e toull-bac'h Pentonville, e teujont a-benn da gavout al lec'h ma oa beziet Casement. Mac Neill a gutuilhas un nebeut geotenoù diwar-c'horre ar bez, evit o degas da Iwerzhon. Anavezout a rae Casement, rak dre ar C'hevre Gouezelek eo e oa deut hemañ da strivañ evit ma vefe Iwerzhon peurzizalc'h. Karout a rae an iwerzhoneg, rak gouzout a rae ez eo ar merk anatañ eus broadelezh Iwerzhon.

Kannadourjen ha dileuridi eus "ur bern broioù a oa deut da enoriñ anezhañ : re ar Stadoù-Unanet, Bro-Saoz, Belgia, Sveden, an Alamagn, h.a. Un dra heverk avat : ar c'helaouennoù ne reont meneg eus kannadour na dileuriad gall ebet. A bell e teuas - digant Nkroumah, da skouer - kemennadennoù o tisplegañ pegen anaoudek e tle an holl dud bezañ e-keñver un den hag en doa stourmet ken kalonek evit gwirioù an holl re wasket koulz hag evit e vro. Evit ar Stad gall avat ez eo atav un treitour.

## **BODADEG AR C'HEVRE KELTIEK**

(6-7 Meurzh 1965)

Abaoe ur pennad mat e oamp o kas aozañ ur vodadeg eus Kuzul ar C'hevre. Graet e oa bet ur c'houlennadeg evit bout gouest da zibab un deiziad hag ul lec'h hag a zerefe d' ar muiañ a dud ar gwellañ. A-benn ar fin, e voe divizet en em vodañ d' ar 6 ha 7 a viz Meurzh e Kaerdiz.

En em gavout a ris en aerborzh Dulenn gant an daou Vreizhad all hag a oa o tont : Yann Goulet ha Yann Fouere. Pignat a rejomp da 11.000 troatad, a-zioc'h ar mor sioul hag ar maeziou erc'hek, ha hep dale edomp e kêrbenn Kembre. Edo J. E. Jones ouzh hor gortoz e burev Strollad Broadel Kembre. Hor pediñ a reas da verenniñ gantañ.

Da beder eur e krogjomp gant al labour. Degouezhet e oa Gwynfor Evans, Pádraig O Conchúir ha R. Green. Demnes goude e oa erru W. E. Chapman ivez. Daou gelenner eus Skol-Veur Kaerdiz, an Ao.Ao. Jarman ha Rowlands a oa deut ouzhpenn-se, kouviet gant J. E. Jones.

Evel ar wech all e Bangor, ar P-Kelted a oa a bell ar re zikañ !

Goude un nebeut komzoù digant Gwynfor Evans, da zegemer ac'hanomp, e voe lennet roll ar re o doa en em zigarezet peogwir ne oant ket bet evit dont. Sekretourien Vreizh ha Bro-Skos, kenskriver Celtic News e Bro-Skos, ha sekretourez Enez Vanav n' o dije ket bet a-walc'h gant an dibenn-sizhun evit ober ar veaj hag o doa ranket eta kroazañ warni. Edomp dres o kregiñ gant danevelloù ar sekretourien pa bellgomzas Mona Douglas, evit rente kont eus stad he skourr.

Evel-se e oa keloù eus pep skourr. Degemeret em boa skridoù digant ar sekretourien ezvezant. Hag ar re a oa amañ a zisplegas o danevell, pet ezel a oa war o rolloù, pegement a arc'hant o doa dastumet. Digant R. Green hor boe un daolenn glok ha resis : un den pervezh eo, ar pezh a vez divizet ganeomp ober a vez graet buan ha mat en e skourr. Al labour a ra gant Mebyon Kernow zo talvoudus evit Kernev-Veur. Ne reont ket a ziskleriadurioù entanus, talañ a reont avat ouzh kudennoù dilorc'h evel hini ar c'hehenterezh (hentoù-houarn hag all) pe hini ur Skol-Veur Kerneveurat ; diskouez a reont evel-se ez int war evezh ha gouestlet da zifenn mad Kernev-Veuriz. Ne reont ket fae evit keloù-se war ar c'herneveg. Nevez zo e kemmañ din Chapman en doa gonezet 80 ezel nevez da v-Mebyon Kernow e-korf ur miz.

127

Em danevellskrid e tiskouezis e oa kresket-mat niver an izili en holl abaoe hor bodadeg e Bangor, hag e oa dinec'hus a-walc'h stad hor c'hef. Hep dale avat e vo levr-bloaz 1964 da baeañ, ha mouladurioù all. Ezhomm hon eus eta da gaout skodennoù an izili a zo diwar-lerc'h, ha da c'honit izili nevez. Strivet e vo da c'honit 200 ezel nevez e-kerz an 12 miz a zeu, ha merket e voe e lodenn eus ar sifr-se da bep skourr.

Displegañ a ris perak ez eo levr-bloaz 1964 ken diwezhat o tont er-maez. Ret e oa aozañ an testennoù breizhat, skosat ha kembreat gant ar brasañ aked peogwir e oa divizet ober ganto ivez evit sevel ur c'hounskrid da vout kaset d' ar Broadoù Unanet.

Meur a wech ez eo bet dastumet an holl arguzennoù a-du gant frankiz politikel Breizh en ur skrid evel-se. Biskoazh ne oant ket embannet a-gevret gant breudennoù Kembre ha Bro-Skos koulskoude. O skignañ skouerennoù eus ar skrid boutin-se dre ar bed hon eus spi e taolor muioc'h a evezh ouzh kudennoù an teir bro. Bruderezh e vo paneveken.

Evit Breizh ez eo bet diskouezet penaos ez eo chomet difrouezh ar strivadegoù a zo bet graet gant tud hag a chome leal d' ar Stad c'hall, ken evit kaout ar brezhoneg er skol hag evit diorren arboellerezh Breizh. Anat eo bremañ ne ray ket ar Stad c'hall ar pezh a zo ezhomm evit adsevel Breizh. Bez' e rankomp adkemer an emell eus hor bro ; hor gwir eo. N' eo ket hepken en abeg da zarvoudoù 1789 hogen en abeg ivez - ha dreist-holl - m' he deus gwallveret ar Stad c'hall hon danvez hag hor glad sevenadurel. Goulenn a reomp gwarez an urzhiadurioù etrevroadel.

Anv zo da reiñ diazezoù nevez da Urzhiadur ar Broadoù Unanet. Deomp eo diskouez, pa ne ray netra da harpañ hor bro, ez eo didalvoud an Urzhiadur-se bremañ da ziwall ur vroad vihan hag a zo e dalc'h unan eus e izili galloudusañ. Marteze ec'h atizimp ar re a vo en o c'harg addiazezañ anezhañ da zegemer reolennoù hag a aotrefe ur vroad diwarez da c'houlenn harp hep bezañ paeroniet gant ur Stad-ezel.

128

Evel just ez eus nebeut da c'hortoz eus an tu-se. Ar gefridi gentañ evel ma skrive O. Mordrel, a chom : lakaat buhez ha nerzh en hon emsavioù gwan.

Divizet hon eus kenderc'hel da embann Celtic News en hevelep stumm ha betek-hen, o reiñ ar vegenn eus nevezentioù an tri miz a-raok. Strivañ a raimp da embann ul Levr-bloaz all a-benn Nedeleg. Gant hor skiant-prenet eus an hini a zo bremañ dindan ar wask ec'h ouzomp e vo ret « bountañ », evit tizhout ar pal-se. Dibabet e vo div pe deir zachenn eus ar vuhez vroadel e pep tir ha displeget pezh a vo bet c'hoarvezet war an tachennoù-se e-doug ar bloaz.

Arabat disoñjal : ar c'heleier hag an diskleriadurioù a gaver en hon embannadurioù diwar-benn ar vro-mañ-vro zo evit kelaouiñ lennerien ar broioù all.

Yann Goulet a zisplegas pegeit e oa aet gant e arnod da aozañ un diskouezadeg. An diouer a arc'hant evit feurmiñ salioù a oa bet ar brasañ skoilh. Klasket e vo tu da seveniñ ar mennad koulskoude.

Kaset e vo ur c'helc'hlizher da gannaded Bro-Skos, Kembre ha Kernev-Veur e Ti ar Gumun, o c'houlenn outo enebañ ouzh lamedigezh an hentoù-houarn en teir bro-se : displeget e vo er skrid-se peseurt gwall-heuliadoù a vefe evit o arboellerezh ma vefe kaset ar mennad-se da benn.

Da geñver bodadegoù ha skolioù-hañv ' vo e klasko ar C'hevre Keltiek tu da zisplegañ prezegennoù diwar-benn an darvoudoù pouezusañ er broioù keltiek.

A-benn bloaz e vo bodadeg ar C'hevre e Dulenn, war-dro Pask. D' ar mare-se e vo lidoù da gounaat taol-dispac'h 1916 en Iwerzhon.

A. HEUSSAFF

## AL LEVRIOU

A. HEUSSAFF

THIS IS ELLAN VANNIN. - " Setu Enez Vanav ", diskouezet gant MONA DOUGLAS. Ul levr a 134 fajenn, a goust 10/6. - Times Press, Athol Street, Douglas, I. of Man an embanner.

Gouzout a raen un dra bennak a-zivout Tynwald hag ar manaveg ; gouzout a raen e ra Manaviz gant an Teiresker da arouez broadel, hag e vagont ur ouenn gizhier besk dre natur. Bremañ em eus desket un tamm mat ouzhpenn : graet em eus anaoudegezh gant ur steudad a Vanaviz hag o deus servijet o bro e doare pe zoare adalek ar 17<sup>vet</sup> kantved betek bremañ : melestrourien, moraerien, lenneien, arzourien ha micherourien. E-ser displegañ o buhez he deus deskrivet Mona Douglas ar c'hornioù-bro m' o deus bevet. Klokaet eo an daolenn gant pennadoù diwar-benn an hengounioù hag ar boazioù broadel, ar re a denn da lidoù an Tynwald, da Ouelioù Berc'hed ha Katell, d' ar Gourdeizioù, d' ar redadegoù, h.a.

Lakaet he deus Mona Douglas aked bras ha karantez-vro da sevel ar 44 fennad-se. Imbourc'het he deus kalz el Levr di hag er Mirdi broadel, hag e-touez an dud ivez he deus dastumet diskleriadurioù. Ken alies ha ma kav tu e laka bommoù manaveg, gant un droidlgezh saozneg avat. Klasket em eus kompren an arroudoù-se war-bouez an iwerzhoneg, met c'hwitet em eus alies en abeg d' an doare-skriavañ : ne zere ket mat ar gwiskamant-se d' ar yezh. Dre gamm-dro ar saozneg ez eo aes anavezout ar gerentiezh keltiek.

Ar Vikinged o deus lezet o roudoù e pep lec'h en enezenn ; degemeret eo ar pezh o deus degaset da genlodenn e broadelezh Vanav. E meur a geñver e vefed luziet ivez o klask diforc'h an elfennoù nordek diouzh ar re geltiek ! Tynwald da skouer zo un anv lec'hlennek, met n' eur ket kaer evit lavarout petra en ensavadur-se a zo deut digant ar Vikinged ha petra digant ar Gelted. Bodadegoù bras a seurt-se a veze dalc'het er-maez gant an div ouenn gwechall-gozh.

Pouezañ a ra Mona Douglas war berzhioù keltiek Manaviz avat. Alies e keñver anezho gant Iwerzhoniz ha meur a hengoun a gaver boutin d' an daou skourr gouezel. Redadegoù-kezeg Manav - en enor da Vannanan - zo bet kemeret o lec'h nevez 'zo gant redadegoù marc'hoù-dre-dan tra ma chom o c'hevatal bev-tre e Konnac'ht hag e lec'h all en Iwerzhon. Amañ e pigner atav war Cruachán Aighle d' ar sulvezh diwezhañ a viz Gouere (pirc'hirinaj Cruach Pádraig eo ar stumm gristenaet) e-lec'h en Enez Vanav e pigned war an uhelennoù d' ar sulvezh kentañ a viz Eost ; bez' e oa c'hoarioù-drevez ha hemolc'h al laouenan, an draouennig-vihan, en Enez Vanav, evel ma 'z eus c'hoazh er vro-mañ, d' ar 26 a viz Kerzu. (Ar pezh a zispleg Mona Douglas a laka ac'hanon da faltaziañ ez eo kar ar ger *draouennig* d' an hini en deus roet hon *drouiz*, dre hanterouriezh *drev* ; gouzout a ran ez eo *drev* kenster gant *laouen* ; ne zislavar ket koulskoude.)

130

Kalz eus an hengounioù a chom bev en Iwerzhon, tra ma 'z int steuziet en Enez Vanav. Evel ma skriv M. Douglas hec'h-unan tre e dibenn he levr : hep hengounioù e varv ur vroad. Dalc'hmat ec'h atiz he c'henvroiz da adkemer boazioù hag o deus dilezet :

« Ur wech ar bloaz e vez roet anaoudegezh kefridiel d' hor yezh : da geñver lidoù an Tynwald, d' ar 5 a viz Gouere, e vez lennet al lezenoù nevez e manaveg. Perak e kanomp neuze hor c'han broadel e saozneg ? Perak ne zasorc'homp ket ar Pemzektevezh Foll, - ar Gourdevezhioù ? Gwechall ne veze graet tamm labour ebet e-pad ar mare-se, nemet ar pep retañ-holl. Gouel a veze, bag ar c'hanañ hag an dibuediñ a oa kevrenn er gouel. Pa veze echu e veze tremen un tamm mat eus miz Genver hag e oa an nevez-amzer war wel : kalon a veze adarre d' al labour.

« Darn eus boazioù an Dibenn ha Derou Bloaz zo bet adkemeret. Padal ne vez ket ganto kement e laouenidigezh hag a frankiz ha ma veze gwechall : ret e vefe deomp bout dibrederoc'h e-kreiz ar goañv, gouzout mont war hor goar e-pad ar Gourdevezhioù. »

Unan eus an arroudoù dudiusañ eo ar pezh a zanevell diwar-benn Koroll-Kleze ar Rouaned. Diskleriet ha dañset e voe dezhi gant ar pesketaer J. Kermode, en e di, tre war ar c'hro, e biz Enez Vanav. E wreg o kanañ dezhañ « port y beayll », da lavarout eo « ton ar genou », evel an *tralala laleno* e Breizh, n'eo ket 'ta ? Da echuiñ e rede ar C'hermod er-maez hag e chome a-sav war ar c'hro, sonn e gleze, troet war-du ar reter. (Kement-mañ a glot mat gant gerdarzhadur reter hervez L. Fleuriot : rec-ter rac-ter - pezh zo dirak.)

Hervez Kermode e veze desket an dañs-se d' an dierned yaouank gant an drouized. Pa veze kurunennet ur roue nevez e veze dezhañ ober an dañs-se, anezhañ ul lid relijiel da ouestlañ e gleze moarvat. Treiñ a rae en ur c'helc'h evel ma tro an heol hag ec'h echue gant e eneb ouzh ar reter : dezhañ da zegas sklerijenn ha frankiz d' e bobl. Setu un diskleriadur un tammig disheñvel diouzh hini Kervarker (p. 48, Barzaz Breiz, 1959), met un ere a weled gwechall etre nerzh an heol, frouezhusted ha rouantelezh.

Diwezhatoc'h pa zeuas rouaned loc'hlannat e voe graet an dañs evito gant Manaviz, en Tynwald. Diagentidi ar C'hermod a oa bet korollerien-rouaned a dad da vab. Pa zeuas Saozon da vistri e rejont fae war an dañs, met dalc'het e voe da lid ar c'hleze. Hiziv an deiz, pa zeu ur gouarnour nevez, hag eñ dileuriad ar Gurunenn Saoz, e vez dalc'het ar c'hleze sonn dirazañ, war-du ar reter.

131

Kermode, « mab ar Bod », a zeskas ar c'horoll da Vona Douglas war an diviz ne vefe gwech dañset ganti penn-da-benn. Arabat d' ur vaouez hen ober. Da seniñ « port y beayll » avat e tle bezañ ur vaouez nes d' ar c'horoller. Desket e voe evel-se d' ur Manavad yaouank hag a viro an hengoun.

Manaviz a briz ar frankiz a chom ganto da ren o bro. Ne welan ket avat e lakont o emrenerezh da gadarnaat o dibarded sevenadurel, o broadelezh eta. E derou ar c'hantved-mañ e voe goulennet e vefe desket manaveg er skolioù kentañ hag eil-derez. Edo ar yezh war he zalaroù, met saveteet e vefe bet marteze. Ne voe roet nemet un tammig harp a-berzh Stad evit klasoù abardaez. Traoù heñvel ouzh « diarbennou » Lezenn Deixonne hag ar vunutenn hanter war ar pellwel, meulet ra vezo !

Ur pennad zo gouestlet da Sophia Morrison hag a reas he seizh gwellañ evit lakaat an dud da zeskiñ manaveg. Bez' e oa e penn ar gevredigezh **Yn Cheshaght Ghailckagh**. Reiñ a reas skoazell da gement hini a labourere evit ar sevenadur manavat, ne vern e pe stumm. Ren a reas *Mannin*, « unan eus ar gwellañ kelaouennoù lennegel e Breizh-Veur ». Pa varvas - gwall abred - ez eas Mannin diouzhtu da get (1917).

Evit ar manaveg ez eus bet kevredigezhioù eta, ha skolioù abardaez ha dastumerien c'herioù ha kanaouennoù, hag ur mor a druez o welout « unan eus pinvidigezhioù ar vro o vont da goll ». N' eus bet taol dispac'h ebet. Ober a reer atav kentelioù en abardaez. Un nebeut lenneien a vo atav da zeskiñ manaveg. Met hemañ n' en deus ket ket mui perzh leun er vuhez kevredigezhel e neb lec'h, 'm eus aon. Keit ha n' en devo ket, e vo damvarv.

Mona Douglas a gomz gant doujañs eus ar yezh kozh. N' eo ket din da rebech dezhi ober gant ar ger-se. Kozh a dalvez moarvat : a zo bet aze abaoe pell pell ; a dleer diwall a deurel kuit dibreder. E kelaouennoù Breizhat ' zo em eus evezhiet ar ger-se ivez (e galleg, evelato). Aze e tisplij-krenn din. C'hwezh fall a gavan gantañ. Peseurt brizh-trivliaderezh a ziskuilh ? Degemer a reer gantañ termenou an enebourien. Kozh ? Yezhoù ne vezont na kozh na yaouank keit ha ma vezont bev ha yac'h. Doujañs d' ar re gozh, met n' eo ket doujañs a c'houlennomp d' ar brezhoneg. Karantez ne lavaran ket. Gant an traoù yaouank eo e vezer dedennet ar c'hreñvañ. Boulc'het en deus ar brezhoneg hentoù nevez er

c'hantved-mañ. Komzomp eus hor yezh yaouank eta !

D' am meno, seurt gerioù zo adskedoù eus doare-spered o distagerien.

M' emao'h e soñj mont d' ober un droiad en Enez Vanav, lennit levr Mona Douglas da gentañ : kalz frouezhusoc'h e vo ho troioad, rak gouzout a reot e pelec'h kavout roudoù eus Manaviz anvek. Ha ma n' hellit ket mont, e teskot ur bern traoù digant ur geneilez vat d' ar Vrezhoned.

132

PER DENEZ

TRO I'R YSWISDIR " gant J. E. JONES. Llyfrau'r Dryw, Llandybie, 1964. - Priz : 12/6.

N' ouzon ket mui piv en deus lavaret na gase ket un den e vro gantañ stag ouzh seulioù e voutoù. Koulskoude, evit J. E. Jones, ar c'hontrol an hini eo a zo bet gwir : o vont evit ur pennad ehan-labour da vro-Suis en deus kaset gantañ e vro ha n' eus tra ebet en dije gwelet, pe klevet, hep kavout enni, ha gant gwir abeg, ur gentel evit Kembre.

Bez ez eo bet J. E. Jones Sekretour Strollad Broadel Kembre evit un tregont bloavezh bennak - ez resis eus 1930 betek 1962, pa voe trec'het gant ar c'hleñved. Komz diwar e benn a zo komz diwar-benn ar strollad, ha ne c'heller ket komz diwar-benn ar strollad hep komz diwar e benn. Un abostoler eo J. E. Jones. Neb en deus e welet, evel m' am eus e welet-me, o tremen pep munutenn eus ur veaj-war-vor etre Kembre hag Iwerzhon o skrivañ lizheroù, pe o sevel kaieradoù notennoù diwar-benn ar pezh a oa da ober er gêr, a gompren mat-tre ne c'hell, e doare ebet, lezel Kembre war e lerc'h.

Ha pegen aes eo tennañ ur gentel vat eus skouer Helvetia ! Setu aze ur vro vihan, hep nemeur a binvidigezhioù, gant peder yezh, enket etre amezeien c'halloudus, hag a gav an tu da vezañ ur pimpatron a beoc'h, a binvidigezh, a zemokratelezh. E bruderezh hor strolladoù broadel ez eus bet div vro, dreist-holl, hag o deus pourchaset deomp arguzennoù diniver : Helvetia, en abeg da gudenn ar yezhoù dreist-holl, Danmark, en abeg da verz al labour-douar, ar c'henlabour hag ar skolioù broadel. Aes e oa 'ta da J E Jones rein, da bep kammed, ur gentel. Siwazh, un diforc'h a zo etre Kembre hag Helvetia, evel ma lavare R. E. Jones, eus Llanberis : Kembreiz a zo houarn ganto en o douar, met Helvetiz a zo houarn ganto en o gwad.

Goude kement a lavaran diwar-benn ar skouerioù-mat, arabat e vefe krediñ hon eus aze un oberenn a-seurt gant lennadenn-a-berzh-stad ar skolioù gall un amzer zo bet : « Le Tour de France de deux enfants ». Ur gwir veaj a gont J. E., en un doare bev-meurbet, ha bezañ e karantez gant Kembre a lak anezhañ da welout, da gompren ha da brizout gwelloc'h Helvetia. A-hend-all, Breizh a zo e-barzh al levr ivez, e stumm un harluad, Le Roux, tec'het e 1944 diouzh kasoni ar C'hallaoued, hag o vevañ abaoe en Helvetia : eñ, evel ar C'hembread, a anavez resis niver ar romanchegourien koulz ha feurlinennoù ar c'henwerzh hag an ijinerezh. Ne c'helle ket bezañ gwelloc'h kendivizourien diwar-benn Helvetia eget an daou Gelt-se. A-hend-all, pa gomzont diwar-benn kas ur pennad-skrid d' AR VRO, daoust hag e c'hellont bezañ estreget dedennus ? !

133

J. E. Jones, e gwir, n' emañ ket Kembre en e galon gantañ hepken : kavout a ra roudoù eus Kembreiz en Helvetia. Da skouer, e Geneva, e burevioù Sekretourva Etrevroadel al Labour, delwenn Robert Owen, ar sokialour ; da skouer c'hoazh, pa ya da glask an ti e-lec'h m' eo bet Syr O. M. Edwards o vevañ ; pe pa weladenn, e-kichen Lausanne, ar skol m'en deus labouret enni, 95 bloaz zo, Emrys ap Iwan. « E kement lec'h ma tremen an heol, e tremen ar Breizhad », a lavarer. Heñvel-tra a seblant bezañ gwir diwar-benn Kembreiz.

PER AR BIHAN

" A CONTRE-COURANT ", gant Jean-Yves KERAUDREN.

Al levrioù savet e galleg en Emsav o deus holl un hevelep pal : rein da anaout ez eo c'hoazh Breizh ur Vro hag ober enepbruderezh e sell da stourm ouzh hollc'halloud Bro-C'hall ha pouez he mererezh hag he binvioù-kelaouiñ. Al levr-mañ n' eo ket disheñvel er feur-se hogen nevez un tamm eo ar stumm dibabet gant an oberour ; hemañ a zezrevell e vuhez stourmer ha darvoudoù e c'hwec'h bloavezh a garc'hariad. Ar fedoù roet a zo prizius da anavezout e-keñver istor an Emsav. Talvoudus eo ivez an oberenn dre bersonelezh daer ar skrivagner, anezhañ « ur stourmer kalonek hag ur penn kalet a zen » hervez lavar Yeun ar Go. Ar stumm-skriavañ a zo bev ha dichek un tamm, ha ne laosker ket al levr da gouezhañ pa groger gantañ. Amañ avat e ranker ober un tamall. Bet eo an oberour flemmus evit tud o deus stourmet ivez gant o ferzhioù dezho o-unan ha gouzañvet ivez evit ar Vro.

Peogwir e vez kont eus politikerezh, keuz hon eus n' eo ket aet pelloc'h J.-Y. Keraudren war an hent a seblante graet evitañ - eñ ganet er bobl ha dezhañ galloud da vezañ selaouet gant tud vunut an uzinoù hag al labouradegoù - bezañ en Emsav rener ur gostezenn a vicherourien.

134

Kompren a ran mat perak en deus miret ar skrivagner un ton faro d' e frazennoù, zoken pa vez o kontañ darvoudoù euzhus e amzer vac'h. Dre se, ar from ne dizh ket mat al lenner. Amañ marteze n' eo ket aet don a-walc'h an oberour gant e labour, aon o vezañ gantañ marteze da chom pell war-lerc'h oberennoù brudet evel levr ar beleg Jean Popot " J'étais aumônier à Fresnes ". Hogen kontañ a reomp J.-Y. Keraudren (un anv-pluenn n' eo ken, anat d' an holl) e-touez kenlabourerien vat AL LIAMM ha gouzout a reomp emañ o prientiñ eñvorennoù all, e brezhoneg. Prouet en deus bremañ ez eo dornet mat. Kontañ a reomp e raio gwelloc'h c'hoazh eget d' e daol kentañ ha spi hon eus e ouestlo en oberenn nevez - heñ hag en em lavar a-du gant an unvaniezh - e holl vinim d' an enebourien, evit brasañ mad an Emsav.

" A CONTRE-COURANT ", levr a 190 pajenn, a zo e gwerzh e ti ar « Scorpion », 1 straed Lobineau, Paris, 6vet. - Priz : 11 lur.



## NOTENNOU

Savet pe gempennet eo het an notennoñ-man gant Per Penneg, A. Heussaff, Per ar Bihan ha Ronan Huon

### HOR MIGNONED

Jean-Louis PEROT zo laouen o kemenn deoc'h e eured gant Marie-Louise ARGWEGEN e Brest, d' an 10 a viz Ebrel.

Yann Ber PIRIOU zo laouenn da gemenn deoc'h e eured gant France LE BRANCHU, e chapel ar Yeoded (Bro Dreger), d'an 7 a viz Ebrel.

Andrev hag Ingeborg LESTARQUIT a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Gwenola, e Wiesbaden, d' an 3 a viz Ebrel.

Klevet hon eus keloù ganedigezh Gwenaël PLANTEG e Brest.

Kresket eo an dud e ti Mari-Sklara ha Lusian RAOUL, gant levez e kemenn deoc'h Mari-Anaig ha Gaëla ganedigezh o c'hoarig Brenda, e Sant-Brieg, d' ar 5 a viz Ebrel.

-Hor gwellañ goarc'hemenoù hag hor gwellañ hetoù d' hor mignoned.

### KANŃ

Jean CHOLEAU, unan eus koshañ stourmerien an Emsav, a zo marvet, d' an oad a 86 vloaz, e Gwitreg e vro c'hinnidig. E penn ar gelaouenn " Le Pays Breton - Bro Vreizh " e oa.

### PROFOU

Degemeret hon eus ar profoù-mañ e-korf an daou viz diwezhañ :

#### C'HEWEVRER :

Erwan Gelezeau, 5 lur ; Jakez Konan, 10 ; F. ar Bleiz, 5 ; Ao. Erwan Minou,- 5.  
- War un dro, 25 lur.

#### MEURZH :

A. ar Berr, Brest, 10 lur ; Yann Thomas, 10 ; P. M. ar C'hozh, 5 ; Erwan Gwegen, 30 ; J. de Lesquen, 10 ; M. an Foazer, 10 ; Dll M. Minou, 5 ; Itron V. de Sant Pierre, 40 ; Dr K. Delalande, 20 ; Yann ar Beg, 150 ; Y. L. Perot, 10 ; Dll O. Chevillotte, 10 ; G. ar Menteg, 5 ; Dr Leon, 10 ; R. Pellen, 10 ; Yann Rohou, 5 ; Erwan Artur, 30 ; Per Roy, 20 ; R. Corre, 5 ; Gab Mahe, 5 ; A. ar C'halvez, 30 ; R. Delaporte, 5.

- War un dro, 435 lur.

Profet eo bet d' " Al Liamm ", abaoe deiz kentañ ar bloaz, 1.175 lur. Bennozh Doue d' hor skoazellerien galonek.

### LIZHER

Digant unan eus hor c'houmananterien gentañ :

« Kas a ran deoc'h va skodenn evit va c'houmanant etre Gwengolo 64 ha Gwengolo 65. Evel just e trugarekaan ac'hanoc'h evit an niverenoù bet kaset din memestra, daoust d' am c'houmanant bezañ echu. An ebestel ne oant nemet daouzek. Ret eo en em laouenaat da vezañ dija c'hwec'h kant. »

B. B.

### KAMP AR VREZHONEGERIEN

Kamp ar Vrezhonegerien renet gant Per Penneq, Vefa de Bellaing ha P. Calvez a vo dalc'het e derou miz Eost e Rostrenen evel 5 bloaz 'zo. Skrivañ d' ar sekretourez : V. de BELLAING, 28 str. an 3 Breur ar Goy, Bant-Brieg (Pellg. 26-06).

#### **OFERENNOU KENTAÑ E BREZHONEG E BREST**

An teir oferenn gentañ e brezhoneg zo bet lavaret e parrez Sent-Mark e Brest da geñver beilhadegoù Koraiz. War ar pemdeiz eo bet lavaret an oferennoù-se. D' ar merc'her 24 e oa deut war-dro 250 den, an eil merc'her e oa tost da 400. Ar wech diwezhañ ez eo bet lavaret an oferenn gant an Aotrou 'n Eskob Fave dirak 500 a dud. Morse ne oa bet klevet an dud o kanañ kement na ken mat en iliz.

#### **REIZHADENN**

Ur fazi hon eus graet en notenn " Arc'hanterezh an Emsav " Diwar an 2.000 Lur kaset da Guzul ar Brezhoneg gant an F.C.B. hag a ra war-dro ar gest, ez eus bet roet 1.000 lur da Embannadurioù Al Liamm. Ar 1.000 Lur all zo bet rannet etre Skol Ober (500 lur) ha Levrioù ar Vugale (500 lur). Ne chome eta netra evit Embannadurioù ar Bibl, Preder, Hor Yezh ha Skol. Diwar gef ar C'huzul e unan ez eus bet roet 300 lur da S.A.D.E.D. Pediñ a reomp hor mignoned d' hon digareziñ.

137

#### **DA GAEZAR...**

Er pennad diwar-benn " Kannadig Kêr-Vreiz " eo bet meneget ar studiadenn « An nevezc'herioù e brezhoneg » hep lavarout anv an oberour hag a zo Goulven Pennaod. Pediñ a reomp hor c'henlabourer d' hon digareziñ.

#### **" BARR-HEOL "**

Niverenn 42 Barr-Heol a zo ur mell niverenn, 98 pajenn enni. An danvez a zo Oferennoù ar C'horaiz hag ar Basion. Ul labour pouezus-tre eo hag a c'hello servij diouzhtu d' ar veleien a raio hervez al liderezh nevez. - Koumanant : 9 lur. Abbé LE CLERC, recteur, Buhulien. - K.R.P. 91 764 Roazhon.

#### **" AR BED KELTIEK "**

Tevoc'h-tevañ e teu ivez Ar Bed Keltiek da vezañ. En niverenn 75 ez eus 30 pajenn : pennadoù istor, barzhonegoù, ur gontadenn gant Roparz Hemon, raktres ar geriadur ha notennoù ar miz. Koumanant 10 lur. 21, rue de Dixmude, Brest.

#### **" PREDER " : Tonkad 64**

Lennet bon eus gant plijadur kaier 58 Preder. Goulennet e oa bet digant emsaverien skrivañ " Un devezh eus o buhez ". An darn vuiañ eus ar pennadoù a zo bet savet e stumm kontadennoù pe evel kontadennoù gwirion evel re O. Mordrel, Abanna, Erwan Gwegen ha Youenn Gwernig. Re all a zo eñvorennoù (V. de Bellaing) pe pajennoù un deiz-levr (Youenn Olier) pe rentañ kont un devezh diouzh sav-poent ar Breizhad hepken (A. Heussaff, Brendan J. L.) pe ur seurt prederiadenn evel hini Goulven Pennaod. Ar skridoù a zo disheñvel-tre an eil ouzh egile hag dedennus-tre da lenn.

Koumanant 12 niverenn 45 lur. G. ETIENNE, K.R.P. 16 093 13 Pariz.

#### **" OGAM " niv. 94-96**

Laouen omp bet o welout Ogam oc'h adkregiñ gant ar stagadenn vrezhonek. Ar stagadenn ez eus anezhi 16 pajenn vras enno kement a zanvez hag en eizh pajenn ha daou ugent eus " Al Liamm ". Danvez puilh eta evit ar ouizieien. Ar pennad-stur ha Notennoù a relijionouriezh a zo diwar zorn F. ar Rouz, un droidigezh diwar Taliesin, Notennoù a c'herdarzhadurezh vrezhonek ha keltiek ha Dornlevr an iwezhoneg krenn gant C. J. Guionvarc'h.

Koumanant : P. LE Roux, B. P. 2, 2, rue Léonard-de-Vinci, Rennes.

138

#### « COTES D'ARMOR »

Ar gelaouenn sizhuniek " Côtes d'Amror " eo ar gelaouenn c'halleg nemeti a veneg " Al Liamm " bep gwech ma teu er-maez. An daolenn a vez moulet penn-da-benn. Trugarekaat a reomp ar rener Yann Poilvet.

#### **KANTVET DEIZ-HA-BLOAZ GI ROPARTZ**

Da geñver kantvet deiz-ha-bloaz Gi Ropartz ez eus bet aozet ur sonadeg relijiel en iliz Sant-Jelvez e Pariz d' an 31 a viz Meurzh. C'hoariet eo bet lod eus oberennoù ar mestr breizhat ; e oferenn en enor da Santez Anna hag e bezhioù evit an ograoù.

E Roazhon ez eus bet roet ivez un abadenn sonerezh Gi Ropartz, kan ha c'hoariva, d' ar 4 a viz Ebrel gant ar C'helc'h Sevenadurel.

#### **EMGLEV AN TIEGEZHIOU**

Teirvet abadenn kreizenn Roazhon Emglev an Tiegezhioù zo bet roet d' ar Sul 25 a viz Ebrel e leurgêr al Lisoù.

#### **LEVRDI KELTIEK PARIZ**

Al levrدي keltiek en deus embannet e miz C'hwevrer rollad al levrioù kozh ha nevez diwar-benn Breizh hag a zo e gwerzh en ti. 536 oberenn a zo meneget el levrig 50 pajenn (108 bis, rue de Rennes, Paris 6e. - Pellgomz LIT 54 08).

#### **LABOUR EVIT AR BREZHONEG**

Aozet eo bet e Sal Ker Varker (15 straed Gi Moquet, Pariz) etre ar 6 hag an 13 a viz Meurzh un diskouezadeg vray a levrioù brezhonek, enni lod bras eus mouladurioù an 40 vloaz tremenet. Ur plas a enor a oa eveljust evit ar c'helc'hgelaouennoù. Daoust d' ar bruderezh bet graet, zoken war journalioù bras Pariz, n'eo ket deut un niver bras a weladenourien. Gwir eo n' eo ket anavezet mat c'hoazh hent Ker Varker gant tud an Emsav evel m' eo hini kêr-Vreiz, tostoc'h ivez eus Porzh-houarn Montparnasse.

D' ar 27 a viz Meurzh en deus distaget Yann Gerlann ur brezegenn vev e kêr-Vreiz (43 straed Sant Placid, Pariz) diwar-benn c'hoariva Youenn Drezen ha c'hoant en deus roet da veur a hini da lenn pe da adlenn oberoù ar skrivagner bigoudenn.

Da geñver ur fest-noz hag ur gorolladeg aozet gant studierien Roazhon d' an 20 ha d' an 21 a viz Meurzh ez eo bet embannet ur skritell e brezhoneg ha peget eo bet war ar mogerioù e pevar c'horn ar gêr.

139

#### **KUZUL AR BREZHONEG**

Bodadeg nevez-amzer Kuzul ar Brezhoneg a zo bet dalc'het e Keresperz, parrez Louaneg, d' ar Sadorn lañ a viz Mae.

#### **EUROPEAN PUBLISHING CLUB**

Nor-Da-Nor, European Publishing Club a zo anv ur Gevredigezh evit araokaat ar filologiezh kelt-nordek. Enni ez eus oberourien Euskarat, Breizhat ha Norman hag a ra war-dro arz, yezh hag istor o bro. O oberennoù a vez embannet ha brudet gant ar C'hlub. Sed amañ titloù : « An hengoun keltiek en arz roman » gant Marcel Moreau, « Yezhadur keñveriet an Euskareg, an Etruskeg hag an Islandeg » ha. gant M. Guignard.

M. GUIGNARD, Burg Puttlingen, Puttelange-les-Thionville (Moselle).

#### **UR GELAOUENN C'HALL A EMBANN**

War niverenn an 19-25 a viz Ebrel ar gelaouenn c'hall L'EXPRESS ez eo bet embannet kement-mañ :

« Euzul Difenn ar Yezhoù Rannvroel zo o paouez goulenn digant an O.R.T.F. gouestlañ un hanter- eur pellwel ar sizhun da yezhoù ar rannvroioù : brezhoneg, okitaneg, katalaneg, h.a.

« N' eo ket goulenn re, eme ar C'huzul ; ar c'hembraeg a vez roet dezhañ 15 eur bep sizhun e Breizh-Veur. »

### **AR C'HEMBRAEG ER MELESTREREZH**

Ar Gevredad evit ar C'hembraeg a stourm evit ledañ tachenn ar c'hembraeg e melestrerezh Kembre hag a harp pep triv embreget er c'heñver-se. Setu un nebeut skouerioù.

Ur C'hembread, Hywel ab Dafydd en deus nac'het diskleriañ ganedigezh e vab d' an Ti-kêr betek ma vo roet dezhañ paperennoù e kembraeg. Kuzul-kêr Bethesda en deus divizet lakaat enskrivadurioù e kembraeg war bep tra perc'hennet gant an ti-kêr (Savadurioù, kirri-samm hag all) ha roet urzh d' ober gant ar c'hembraeg en holl diskleriadurioù ofisiel.

Respontet eo bet du-mañ e oa «diseven » ober gant ar brezhoneg en ul lizher kaset d' ur melestrerezh. (Sell. Breiz, niv. C'hwevrer 1965.)

140

### **KEMBRE : Yr Urdd (An Urzh) e 1964**

... Anavezet eo en Emsav « Urdd Gobaith Cymru » a c'hoari ur roll ken pouezus e Kembre : 42.706 ezel, e-barzh 773 c'hevrenn e 1964 ; dalc'het 'z eus bet kampoù-hañv (3.289 den yaouank a zeuas) hag Eistezvodoù : 57 Eistezvod-rannvro, 13 Eisteddvod-kontelezh, un Eisteddvod broadel. 30.000 den yaouank o deus kemeret perzh er c'henstrivadegoù. Pep bloaz abaoe 1937 e vez aozet gant tud yaouank an « Urdd » gwerzh al levrioù kembraek : 502.114 levr kembraek a zo bet gwerzhet ganto eus 1937 da 1964 ; 11.015 e 1964 ha gwerzhet eo bet ouzhpenn 477.000 skouerenn eus kelaouennoù an « Urdd ». Enkefadurioù 1964 a sav da 72.000 Lur saoz (12.000 Lur saoz a brofoù) ar pezh a dalv war-dro 985.700,00 Lur gall nevez.

(Tennet eus Celtic News, niv. Nedeleg 1964.)

### **AN IWERZHONEG EL LIDEREZH**

Lidet eo bet un oferenn iwerzhonek gant ar c'hardinal Conway, Eskob-Meur Iwerzhon, e kelenndi Sant-Franzesad Gormonston d' ar seizh a viz Meurzh, an deiz end-eeun ma tlee bezañ lakaet da dalvezout ar c'hemmoù aotreet el liderezh gant pennadurezhloù an iliz. Deuet e oa d' an oferenn Eamonn de Valera, Rener Meur Iwerzhon, gant darn eus ar vinistred ; diskouezet eo bet an oferenn er pellwell. Digoret eo bet goude gant ar Rener Meur ur greizenn Iwerzhonek savet gant Tadoù Sant Fransez harpet gant ar Stad.

### **STUDIERIEN BILBAO O C'HOULENN AN EUSKAREG ER SKOL-VEUR**

Studierien Gevrenn ar Skiantoù arboellerezhel ha politikel Bilbao o doa goulennet ouzh an Dean, Señor Fernando Sanchez Caiero, an aotre da grouiñ ur « gador » evit an Euskareg er c'hevrenn ; paeet e vije bet ar c'helenner gant ar C'hambr sindikadel ha nann gant ar Skol-Veur. Nac'het eo bet an aotre gant an Dean, war an digarez « ne oa ket an Euskareg ur yezh kenwerzhel ». Trouz zo savet e-touez ar studierien, ken m' en deus an Dean - roet e zilez, e miz Genver 1965.

### **" STUDIA CELTICA "**

Ur gelc'hgelaouenn nevez, a vezo anvet " Studia Celtica " da c'hortoz ma vo kavet un anv gwelloc'h, a vo embannet dindan renerezh ar C'helenner J. E. Caerwyn Williams, eus Skolaj Bangor ar Skol-Veur Kembre. Pledañ a ray d' ar yezhoniezh keltiek. Keleier a vo roet ganti eus disoc'hoù nevez en enklaskoù ar geltiegourien, ha burutellañ a ray levrioù diwar-benn o danvez ivez.

Embannet e vo ur wech pe ziv ar bloaz, hervez ma teuy pennadoù puilh be builhoc'h betek he rener. E saozneg e vo dreist-holl. Degemer a ray avat pennadoù er yezhoù keltiek, koulz hag en alamaneg hag e galleg. Degemer vat a vo graet da genlabourerien, ha d' ar re a roy atizoù evit kreskiñ talvoudegezh ar gelaouenn. M' hoc'h eus keleier eus ar seurt a zere d' ar gelaouenn, o c'hasit d' ar rener, University College of North Wales, Bangor, Caeru. Kembre.

An niverenn gentañ a zeuy er-maez a-benn Nedeleg 1965 moarvat.

### **BLEIMOR-SANA. - « Ar Stivell »**

Ar gevredigezh-mañ a zo bet savet gant ar skouted Bleimor klañv e mil nav c'hant daou hag hanter kant. Met pell 'zo eo digor d' an holl. He fal eo labourat evit ma vo « anavezet ha karet gwelloc'h hor Bro, skoazellañ ar re glañv, skañvaat o foanioù, sikour anezho da gaout ur vuhez gwelloc'h hag eürusoc'h ».

Evit kement-se hon eus bremañ :

- Ul levraoueg dre lizher : " Ar Stivell " a brest levrioù, kelaouennoù, pladennoù gallek, brezhonek pe saoznek war Vreizh hag ar broioù keltiek. Tri c'hant levr a zo bremañ war ar roll, hag ur pevar ugent bennak a zo e-brezhoneg.

- Ur Servij Prestad-Pladennoù gant binioù, dañsoù, sonioù pe da zeskiñ brezhoneg ; ober a reomp ivez skol vrezhonek dre lizher.

- Sevel a reomp « diskouezadegoù ha gwerzhadegoù » levrioù, pladennoù, kartennoù er gouelioù hag er pardonioù evit ma vo anavezet ha brudet istor, yezh ha sevenadur Breizh. E-pad ar goañv gant kelc'h keltiek «Dalc'hmat» Savigny ez eomp da reiñ abadennoù koroll, kan ha sonerezh da glañvdioù ar vro.

Izili ar gevredigezh a bae pemp lur ar bloaz ha mizoù kas al levrioù pa c'hellont. Ar re yac'h a bae dek lur ar bloaz.

Setu amañ ur ger war labour ar bloaz tremenet. Tregont den bennak o deus resevet levrioù pe traoù all. Lod bep teir sizhun lod all nebeutoch hervez goulenn pep hini. Prestet hon eus war-dro kant levr graet unnek diskouezadeg ha gwerzhet war-dro pevar-ugent levr, hanter-kant pladenn hag ur bern arouezioù, kartennoù ha bannieloù breizhek.

Petra ve mad da ober ouzhpenn en amzer da zont ?

Marteze kaout un oaled e-lec'h ma ne vefemp mui e ti an estren met er gêr, da lavaret eo e-lec'h ma c'hellfe « spered ar vro » bleuniañ ha tarzhañ en e holl frankiz.

Trugarekaat a reomp a greiz kalon ar re a ro deomp o skoazell ha lavarout a reomp dezho holl mil bennozh.

Oaled Champrosay - Ao. GwI KREACH, 37, str. A.-Daudet, Draveil - K.R.P. 16 421 18 Pariz.

### **S. A. D. E. D.**

#### **DANEVELLOU 1964 S. A. D. E. D.**

Emvodoù Trede Bodadeg Vloaz Strollad An Deskadurezh Eil Derez zo bet dalc'het e Kallag d' ar 16 a viz C'hwevrer 1965. 29 den zo deuet d'ar vodadeg. Pemp danevell zo bet roet, raktresoù evit ar bloaz 1965 hag un displegadenn : Talvoudegezh an Istor en Deskadurezh.

Embannet ez eus bet e 1964 :

520 pajenn, rannet evel-hen : 395 pajenn gentelioù, 125 pajean deulioù evit ar

c'hevrennoù. Graet ez eus bet kentel Fizik, 10 kentel Brezhoneg, 6 kentel Krennvrezhoneg, 6 kentel Kimiezh, 5 kentel Douaroniezh, 2 glokadur Brezhoneg.

Sed amañ war he hed an displegadenn Talvoudegezh an Istor en Deskadurezh :

Brudet a-walc'h eo S A D E D en abeg d' e strivoù evit brezhonekaat tachenoù zo eus ar skiantoù arnevez, ken e kredfe marteze da hinienoù ez omp ur strollad skiantourion hepken. Koulskoude, ar gelennadurezh a roomp zo kalz ledanoc'h eget ar skiantoù, peogwir e pled ivez gant al lennegezh, gant ar c'hrennvrezhoneg, hag en diwezh gant an istor.

Daoust d' an alioù roet dezho ez eo bet alies souezhet ar studieron war an istor gant ar c'hentelioù daveet dezho. Fellout a ra deomp hiziv spisaat petore talvoudegezh a roomp-ni da studi an istor.

Unan eus ar goulennoù graet ouzhimp eo homañ : « Perak n' eus ket muioc'h a c'houlennoù war an darvoudoù etre an 10vet hag ar 15vet kantved, ha perak en enep e chomit keid-all da studiañ an 20vet kantved a zo anavezet mat gant an holl ? »

Aes e vez kas ar studier a ra hevelep goulenn d' an alioù roet dezhañ e derou ar bloavezh-skol hag ankounac'haet gantañ daoust pegen pouezus e oant : « Ul lodenn gentañ, ha hi berr a-walc'h, zo gouestlet da Istor Breizh er c'hantvedoù tremenet ; un diverrañ n'eo ken, un addisplegadur eus ar pezh a zo bet diazezet gant hon istorourion vroadel ha d' o heul gant levr Danio ».

« An eil lodean, an hirañ, a bledo gant Breizh a-vremañ ha peurgetket gant Istor an Emsav. Kinniget e vo deoc'h ur gelennadurezh dibar, anezhi an arnod kentañ da strollañ an darvoudoù kempredel. Tennañ a ra ar c'hentelioù-mañ o mad eus labourioù Youenn Olier ha Per Denez, hag ivez eus al levrioù embannet abaoe an eil brezel-bed gant gallegerion ; diazezet int dreist-holl war dihelloù diembann koulz hag embannet. »

Istor Breizh ne vez ket kelennet e skolioù ar C'hallaoued. N' eus remet e skolioù an Emsav, pe diwanet dre levezon an Emsav, e reer anv eus un Istor Breizh. Meur a zoare zo koulskoude da sevel «un » Istor Breizh. Pa zigorer al levrioù a zo warno an talbenn-se e teu anat an diseurtiezh.

Bez' ez eus an « Istorioù Breizh » a lak fin da bep tra gant an Dispac'h politikel ha frammet ar vro.

Skolidi S.A.D.E.D. o tibab ar rummadoù kentelioù skiantel a ziskouez o youl da enframpañ o bro er bed arnevez ; o tibab niverus rummad an Istor avat, e tiskouezont bezañ meizet mat talvoudegezh an Istor evit o stummidigezh a saverion-vro.

143

Gonit a reont spered an unvaniezh, dre ziverkañ diouzh o meiz, diouzh o buhez an troc'hoù bet lakaet enno gant an impalaerelouriezh.

Gonit a reont spered ar wirionez istorel, na oant ket bet evit deskiñ keit ha ma vezent diskibion c'hall war Istor Frañs ; Istor Frañs ne c'hell bezañ evidomp nemet Istor hor mac'homerezh. Istor Breizh zo alies istor un diskar, istor c'hwitadennoù bras, istor paouridigezh hor pobl ha distreserezh hor sevenadur. Splannoc'h a-se ez eo istor ur galonegezh kantvedel, istor ur feiz noaz didrec'hus en hor gwad hag en bon tonkad. Diaes eo a-greiz klod ha galloud an impalaeriezhoù kemer preder ouzhpenn gant ar wirionez. Evit Breizhiz avat, meur a wezh en o istor ne chomas dezho e-kreiz an dismantrou nemet o feiz hag o nerzh-kalon. N' eus par da seurt reuziadoù evit lakaat an dud da stekiñ ouzh ar wirionez ha d' he c'harout. Setu perak e reomp eus ar skol Istor Breizh skol ar gadourion wirion, skol ar saverion vro.

**KELENNADUREZH EVIT PEVARE BLOAVEZH SKOL S. A. D. E. D.**  
(1añ Gwengolo 1965 - 30 Ebrel 1966).

1. - Roll ar rummadoù kentelioù.

Dek rummad kentelioù a vo aozet er pevare bloavezh-skol. E daou vlizen int rannet

a) kentañ blizen :

Brezhoneg, kentañ rummad (dek kentel)

Istor (dek kentel)

Douaroniezh (dek kentel)

Fizik, kentañ rummad (dek kentel)

Kimiezh (dek kentel)

Jedoniezh (dek kentel)

Bevoniezh (dek kentel)

b) eilt blizen :

Brezhoneg, eil rummad (dek kentel)

Krennvrezhoneg (dek kentel)

Fizik, eil rummad (dek kentel)

Ne vo aotreet da enroulañt evit rummadoù an eil blizen nemet ar skolidi bet kaset da vat ganto rummadoù 'zo eus ar c'hentañ blizen :

- evit an eil rummad Brezhoneg : ar c'hentañ rummad Brezhoneg,

- evit ar rummad Krennvrezhoneg : ar c'hentañ rummad Brezhoneg,

- evit an eil rummad Fizik : ar c'hentañ rummad Fizik.

2. - Deziadur. -

Padout a ray ar marevezh enrollañ adalek an 20 Mae 1965 betek an 20 Eost 1965.

Ne vo ket aotreet Gwazva ar C'helenn da zegemerout enrollidigezhioù goude diwezh ar marevezh enrollañ.

144

Padout a ray ar c'henteliezh dre lizher adalek ar 26 Eost 1965 betek an 21 Ebrel 1966.

3. - Enrollidigezhioù.

Diwar ar bloaz-mañ ne vo enrollet nemet an danvez-skolidi o devo graet berzh en Trec'h Kentañ aozet gant Skol Ober. Hevelep reizhenn koulskoude ne dalvezo ket evit ar re o deus heuliet gant berzh unan eus tri bloavezh skol kentañ S.A.D.ED.

4. - Gwirioù enrollañ

Ar gwirioù enrollañ 20 F (ugent lur gall) evit pep rummad kentelioù.

Evit goulenn enrollañ, skrivañ da : M. P. CALVEZ, Saint-Didier, CHATEAUBOURG - 35.

# AL LIAMM 110

Mae - Mezheven 1965

21 añ Bloavezh

## TAOLENN

An Tokarn gant Youenn Gwernig	147
Ar Bleiz gant Roger Gargadeneg	155
Diazeroù ar sevel gwerzioù (kendalc'h) gant F. Kervella	183
Buhez ar Gêrbenn gant Youenn Olier	194
A-dreuz-lenn	199
Notennoù	203



**AN TOKARN**

Youenn GWERNIG

- Petra an diaoul... houarn bremañ ?

Diouzh nerzh an emstok ha garm ar gontell Yann a ouie mat n' en doa d' ober, en dro-mañ, gant koad na maen.

Distokañ a reas skouarn an alar. Sioul e vane ar jav.

Ne oa ket aes tennañ an dra-se diouzh an douar. Ma vije bet ur maen, e c'hellje bout ur mell hini. Met houarn ?

- Piv ar c'hast a c'hell douarañ houarn ?...

Sellout a rae Yann ouzh an dra en doa tennet diouzh an douar. Diouzh e zouar. Douar e hendadoù. Un tokarn.

En oabl digoumoul ha ken glas e plave ur gudon. Hiziv oa un deiz kaer, hiziv oa brav arat. An takad-mañ a ranke bezañ troet kent mare merenn vihan. N' en doa ket amzer da goll.

Yann a vannas an tokarn merglet dreist ar c'hleuz.

Pa darzhas ar c'hentañ taol kurun, souezhet-mik, e sellas ar paotr ouzh an oabl, deut teñval ha gourdrouzus, a-daol-trumm.

- Biskoazh kemend-all...

D' an eil e strakas an ifern war ar marc'h hag an den. Klevet e voe a-bell. Ar c'houer na glevas mann ; brallañ a rae, bouzar ha dall, war an douar nevez troet. Ne welas ket e loen astennet, an nervennoù o krenañ c'hoazh en e gorf foeltret.

Tec'hout a reas hep klask e hent, e-giz un den mezv, en ur yudal.

\*

- Ar spontusañ arnev am eus bet gwelet biskoazh, e soñje an Ao. Person o stourm ouzh an avel hag ar glav foll, en ur stlejañ e varc'h-houarn a-hed an hentig kromm. Ken kaer e oa an amzer bremaik am eus nac'het gwiskañ va mantell c'hlav. « Kaer ha sklaer, o kinnig dont da vezañ koumoulek diwezhat en abardaez, » e lare paotr an amzer er skingomz ! Paeet eo ar re-se evit ober goap ouzh an dud. « Diougan amzer gaer evit ar sizhunvezh a-bezh, Aotrou Person... » a lare ar sakrist er beure-mañ. Emichañs eo bet tapet ar c'hwil all-se en e bark gant ar barr-amzer !

148

Mont a rae ar beleg kozh gant e hent, e soutanenn c'hleb staget ouzh e zivesker treut. An dour o tiverañ puilh diouzh erien e dog, en em sile dre e gerc'henn, gleb oa e roched, ur mantr.

- En dro-mañ avat e tapin va marv Hopala ! Ul lec'h kaer en deus dibabet hemañ evit e gousk kreisteiz...

Ar beleg, stouet e benn ouzh an avel, n' en doa ket gwelet ar c'horf hanter c'hourvezet e-kreiz an hent, darbet e voe dezhañ strebotin warnañ. Ur bugel e oa. Ne rae van ouzh skourjez ar glav, ne rae van ouzh e wele pri : stardañ a rae etre e zivrec'h ur pikol tra verglet ha diaes e oa gouzout pe ar

glav pe e zaerou oa a ruilhe war e zivjod. Sevel a reas e zaoulagad glas war an den gwisket e du.

- *Que fais-tu là sous la grande pluie, mon pauvre petit ? e c'houlennas ar beleg leun a druez. Eh bien, réponds ! Es-tu blessé ?*

Ne fiñvas ket ar bugel. E don an daoulagad sklaer paret warnañ, ar Person a verzas skeud un hiraezh divent. Uhel a-us d' o fenn er gwez dirollet, e youc'he ar seizh avel. Ar gurun a bellae.

Chom a rejont ur pennad da sellent an eil ouzh egile : ar beleg kozh fromet holl, n' ouie mat perak, ar bugel ken difiñv hag un delwenn. Un delwenn ganti neuz ar vuhez, kenedus meurbet.

Neuze e lavaras, goustadig.

- Kae gant da hent, den estren.

Un hiboud ne voe ken, hogen ar c'homzoù a darzhas e divskouarn ar beleg evel un taol kurun. Den ebet betek-hen ne doa kredet dismegañsiñ anezhañ e-giz-se. Gant doujañs e komze outañ an holl er barrez, na pa vije bet un doujañs a-ziavaez. Ha dreist-holl e krede dezhañ ne oa bugel ebet ken dre-amañ gouest d'ober c'hoazh gant yezh ar vro.

Ne sante mui an dour o tiverañ ouzh e vell-kein, ne gleve ken tousmac'h an avel ; en e spered trelatet en em ganne trivliadoù damc'hwerv, drailhennoù eñvorioù nodet o tihuniñ, gerioù, komzoù bet tost d' e galon gwechall, gwechall...

- *Petit vaurien...* e krogas.

Skeudenn ur paotrig melegan e zaoulagad glas, o sevel diouzh latar an eñvor. Paotrig a Vro-Leon o tizoleiñ ar bed dre gomzoù flour e vamm. Komzoù brezhonek.

149

Hogen se oa pell zo. Ne rae ken ar vugale gant ar brezhoneg. Hemañ, surmat, a ranke bezañ mab unan eus an oristaled-se a felle dezho herzel ouzh red an araokaat. Klevet e doa kontañ diwar-benn ur mezeg ha ne gomze met brezhoneg ouzh e vugale, klevet e doa komz diwar-benn ar c'helenner-se ha na rae met gant ar brezhoneg en e diegezh. Ne oa ket a-eneb an dud-se, eveljust. Morse n' en doa c'hoarzhed goap outo evel ma rae pep hini : n' helle e galon, manet dreguzh ken tost ouzh yezh e yaouankiz, magañ goaperezh na kasoni outo. N' helle ket evelato mont a-du ganto. O c'heñveriañ a rae gant un enezennig e-kreiz ar mor. Danvez ur barzh a oa ennañ : savet en doa un dornadig kantikoù, e galleg anat deoc'h, bleunioù rouez e c'helled kutuilh e liorz h c'hlac'harus dastumadenn Kantikoù an Eskopti.

Un enezennig e oant d' e veno, un enezennig nemetken. N'hell den en e skiant vat klask stourm ouzh un enezennig kollet e-kreiz ar mor, n' hell ket kennebeut ober enni e annez : ret eo d' an dud bevañ war an douar bras ha heuliañ doareoù an dud all. Dre m' eo deut pep hini er vro da gomz, pe da vihanañ da veizañ ar yezh c'hall, ret mat ober ganti : *vox populi, vox Dei*.

Implij a rae ar *vox populi* bep sul evit ar seurezed hag o div zousen merc'hedigoù, an dornadig merc'hed yaouank eus al laz-kanañ, bagad ar maouezed deut war an oad, ar sakrist hag an daou varchigod, an Ao. Klec'h hag a rae an dro gant ar plad, an daou pe dri c'hozhiad eus an ospital...

Ar bobl avat a vane er-maez eus e iliz. Mont a rae da besketa, da chaseal, da c'hoari kartoù, da verc'heta, da evañ gwin ha da c'hoari boullou.

\*

D' an ampoent e ranke implij yezh e vamm. Ur brezhoneger dispar e oa anezhañ, evit brasañ dudi e genvreudeur kozh da zibenn pred an « deiz » miziek.

- Arsa, mabig, emezañ, me n' on ket ur gwall zen. Selaou 'ta, me 'gomz brezhoneg ivez...

- ...

- Pe zroug 'zo c'hoarvezet ganit ? Lavar din dizamant, ne venn din met da skoazellañ.

- ...

- N' hellez ket chom dindan ar glav bras-mañ, a-benn bremañ e rank da vammig bezañ gwall nec'het war da benn.

150

- N' hell ken va mamm bout nec'het : marv eo.

- Doue d' he fardono, va faotrig kaezh. Gwellout a ran, evelato, ez eus bet tud kalonek oc'h ober war da dro, maget mat e seblantez bezañ ha gwisket a-zoare. Moarvat out deut gant da dadig da chaseal war zouarou Kerwegan, gwelet am eus...

- Aet oa va mamm d' an anaon nepell goude oa bet lazhet va zad er brezel.

« Pupille de la Nation », a c'hellje a-walc'h bout bet desavet war ar maez gant ur voereb kozh, e soñjas ar beleg. Eus ur barrez-all e ranke dont evelato, rak ouzhpenn tregont vloaz 'zo n' oa bet kavet brezhoneger ebet e-touez paotred ar c'hatekiz. Hemañ da welout a c'helle bezañ war-dro oad e bask prevez.

Gwall nec'het en em gave Yann Blouzeneg, person unan eus ar « rusañ » parrez a Vro-Gernev. Se n' oa ket traoù d' ober d' un den deut d' e oad. Glebdour-teilh e oa hag aet ar yenijenn tre betek mel e eskern. Mall oa dezhañ mont d' ar gêr, gwiskañ dilhad sec'h hag evañ un draig tomm bennak. Amañ oa un emzivad kluchet dindan ar glav bras e pri an hent, ur bugel ha na zouge doujañs ebet evitañ en despet d' e oad ha d' e wiskamant beleg, ur bugel a n' helle komz met brezhoneg ! Ret oa d' un den gouzañv a bep seurt er bed-mañ, memestra.

- Mat, emezañ. A-walc'h evel-se. Lavar din bremañ gant piv hag e pelec'h emhout o chom.

- ...

- Un ti e rankez kaout, un ti, triblidie ! Pep hini en deus un ti er vro-mañ, emzivad hag all...

- N' am eus ti ebet ken, rostet eo bet hag aet e vein d' ober ur c'hraou moc'h.

Sellout a reas pizh ouzh ar bugel. Ha kollet oa e skiant gant ar paour-kaezhig ? Ha ma vefe eñ un tec'hiad o klask troc'hañ dezhañ gevier groñs ? En un doare re zidro e teue gantañ komzoù ken sebezus all evit bezañ gwir. A-walc'h a skiant-prenet en doa ar beleg kozh evit gouzout e kemer alies ar gaou neuz ar wirionez ar glanañ war zremmoù an dud deut, kerkoulz hag ar vugale.

- Evel-se 'mañ, neketa ? Ma, va faotrig kaezh, m' ac'h eus na kerent na ti e rankez dont ganin d' ar vourc'h. Amañ ne vez ket lezet ar vugaligoù da foetañ bro o unan-penn, ul lezenn a zo, te 'oar. Bez dinec'h, tud eus an dibab a gavi evit ober war da dro.

151

- N' on ken va unan-penn, a eilgerias ar bugel en ur stardañ kreñvoc'h an dra verglet etre e zivrec'h.

N' en doa ket betek-hen taolet pled an Ao. Plouzenneg ouzh an dra, an dra verglet etre divrec'h ar bugel melegan. Sellout a rae outañ bremañ, souezhet holl. Kluchañ a reas zoken, evit gwellout pishoc'h.

- Lavar din, mabig, lavar din, a hiboudas en diwezh, hag e pelec'h ac'h eus kavet an dra-se ?

- Amañ. Dizouaret ez eo bet.

- Un dra talvoudus eo, va faotrig kaezh, un dra talvoudus meurbet...

- N' ouzon ket. Tokarn va zad an hini eo.

\*

- Ya, er " British Museum " end-eeun...

- Hañ !... Va digarezit, Aotrou Person, hogen... un dra souezhus eo, neketa ? N' omp ket kustum amañ eus ar seurt kavadennoù. Archer !...

An archer Gwichaoua, manet e genou digor dirak ar beleg azezet war ur gador e-kreiz burev an archerdi, a reas ul lamm hag a vanas sonn dirak e vestr.

- Archer, it da gerc'hat an 2 C. V. diouzhtu : kefridi ispisial...

Aet an archer er porzh, ar brigader a savas diwar e gador-vrec'h. Kinnig a reas ar beleg sevel d' e dro.

- Nann, nann, Aotrou Person, me ho ped, na fiñvit ket, amzer a-walc'h hon eus. Moarvat ne rafe ket drouk deoc'h ur banne kafe tomm, aozet e vo raktal gant va gwreg.

- Re vat oc'h, Aotrou Dupuy, na zirenkite den ebet, me ho ped...

- O, me ho ped, Aotrou Person, n' eus direnkamant ebet : ur plijadur eo.

Hep dale e teuas an Ao. Dupuy war e giz gant ar c'hafe berv.

- Hemañ a raio vad deoc'h. Doutaj eo oa bet ret d' ho kure mont da Gemper hiziv gant ho karr-tan anez-se n' ho pefe ket tapet ar seurt glebiadenn ha... marteze en dije asantet ar bugel pignat en ho karr.

- N'ouzon ket, a respontas an Ao. Plouzenneg.

- Ma, ret eo din mont bremañ. Kemerit hoc'h amzer avat, Aotrou Person ; n' hoc'h eus ken 'met ar ru-Vras da ziskenn kent bout er gêr. A ! un dra ouzhpenn : edo ar bugel er c'hentañ korn-tro goude an dornerez piz-bihan, neketa ?

152

- Ya.

- Neuze e ranke bezañ e-tal park bras an Daëron...

- Ya, war-dro un ugent metrad diouzh an toull-karr, ya...

- Mat. Skrivañ a rae war e garnedig, en ur zistagañ ar gerioù a vouezh uhel : « ...propriété Le Daëron Jean... ». Trugarez, Aotrou Person. Kenavo ar c'hentañ, ha, bezit dinec'h, kavet e vo an tu da zichoual ho... hendraour bihan diouzh e glud !

\*

Er c'harrig, a skare ar buanañ ma c'helle war hent Kastell-Nevez, e vane

dilavar ar brigader. An archer-blenier Gwichaoua, avat, n' helle ket padout gant ar c'hoant kaozeal. Manet e oa un dra war e galon, anat, met ne grede ket direnkañ e rener en e brederiadennou. Gouzout a rae dre skiant prenet n' helle ket gouzañv an den meur ur seurt dismegañs. Hag hemañ, evel boas, a veize c'hoant kuzh e archer hag a rae dezhañ gortoz un tammig pelloc'h eget kustum.

A-benn ur pennad, ha graet gantañ ur sellig a-gleiz hag a-zehou, e lavaras evel dezhañ e-unan :

- Souezhus... ehanet ar glav ken souden ha m' en doa kroget...

- Ya, brigader, evel-se 'mañ dalc'hmat gant an arnev, a eilgerias an archer, stad ennañ ; dont a rae ar gerioù ken buan d' e c'henou ma sante e gorzailhenn c'hwezhet holl. Ha c'hoazh, eürusamant eo manet an arnev en tu all d' ar stêr, panevet-se en dije padet ar barrad daou pe dri devezh ouzhpenn. Tapet mat eo bet ar Person, hañ ?

- An dro diblijus-se a c'hellfe c'hoarvezout gant n' eus forzh piv, abeg ebet d' ober goap, a droc'has an Ao. Dupuy.

- O, ne ran ket goap, a reas Gwichaoua, distanet. Paourkaezh den kozh krenañ a rae tout. Evelato, aet eo re gozh evit al labour a zo d' ober er barrez-mañ ; bez' ez eus tud estregedon a soñj eo poent bras degas deomp ur person yaouank ha modern.

- Deomp, Gwichaoua, deomp ! a estlammas ar brigader. Ar wech kentañ din ho kwelout kemer perzh e traoù an iliz, avat.

- Tud an iliz e oa va zud, ur voereb seurez am eus hag ur c'henderv aet d' ober ur mestr-skol-Frer da Bont 'n Abad, hag e soñj on kas va merc'h da « Gouent c'hlas » an Ursulinezed e Gourin, ha...

153

- Ha d' ar sulvezioù ma vezit dieub ez it da besketa.

- Me ' gred er relijion met ne gredan ket er veleien...

- Setu ur menoz uhel ha divoutin-tre : krediñ er sonerezh hep krediñ er sonerien. Bevet an Arz, ha bec'h d' an arzourien ! Gwichaoua, danvez ur prederour a zo ac'hanoc'h.

Berr e chomas an archer, ne wele ket petra e teue ar sonerezh d' ober amañ. Hogen, ha daoust ma veize edo e vestr oc'h ober fent gantañ adarre, e felle dezhañ diskargañ ar peurrest eus e banerad. Manet e oa ar pep saourusañ war e galon.

Goude an diwezhañ korn-tro er stankenn, en em gavas ar wetur a-dreñv ur c'harrad teilh. En ur vallozhiñ ar blenier a zifonnas, trumm. Edo an traktour o kemer e lañs a-raok tuchennig Keredeg, berr met tenn a-walc'h.

- Ma 'z eo ar reor tev-mañ o vont da Lourd Leuhan eo koulz deomp lakaat ur c'hornad-butun, a c'hrozmole an archer.

- Alan Sikin an hini eo. Ne daio ket pelloc'h eget beg an duchenn.

Dizale ervat, e troas ar c'harrad frondus, hej-dihej, keflusker galloudus an traktour o strakal, tre un toull-karr.

- Ya, m' hel lavar deoc'h, brigader, aet eo ar Person re gozh, randoniñ a ra, anat, ha 'm eus aon eo kroget bremañ da welout traoù.

Dilavar e vane Dupuy.

- Ur bugel brezhoneger, biskoazh kemend-all ! Ur bugel brezhoneger gant un tog-houarn saoz, kluchet e-greiz hent Kerwegan dindan ar glav bras. Ur bugel divarrek da gompren ur ger gallek memes, hiziv an deiz, er Finister !...

- Oc'ho, e Breizh emaoamp, neketa ? Du-mañ em rannvro Berry e kaver c'hoazh kalz tud, bugale koulz ha kozhidi, oc'h ober gant o zrefoedach kuit a gaout mezh.

Reutaat a reas an archer. Dichek a-walc'h e teuas ur mousc'hoarzh d' e ziweuz : dizoloet e doa ur mank e gouiziegezh ledan e rener.

- N'eo ket ar brezhoneg un trefoedach, ur yezh ne lavaran ket, a gentelie bremañ ar C'hernevad. Ur yezh dezhi he yezhadur, he geriadur hag ur... ur siñtaks ha tout. Skrivet e vez levrioù holl e brezhoneg zoken.

Klask a reas Dupuy levarout un dra bennak met dirollet e oa da c'hoarzhin. Ha c'hoarzhin a rae c'hoazh a galon vat pa vanas ar c'harrig a-sav war hentig Kerwegan dirak toull-karr park bras an Daeron.

\*

154

Sioul kenañ e oa pep tra. E-touez an deil skuizh e c'hrougouse ur gudon. War gern uhel ar wezenn sapr en tu all d' ar park, ez embanne ur vran donedigezh an daou zen. Goustadig e taskrene ar gwez kistin dindan an avel skañv, hag a vare da vare e veze klevet strakig an takennoù dour glav o kouezhañ war zeliou kraz ar c'hleuz. Ur gaerell a dreuzas, prim, an hent dizarempred.

Bugel ebet. Na roud na skeud anezhañ, neb lec'h. Ne voe ket souezhet Dupuy. En gortoz edo a gement-se. Krediñ a rae e dezrevell an Ao. Person, he c'hredet en doa raktal. Hogen ne voe ket souezhet : gouzout a rae n' en dije kavet tra na zen. Amañ e oa. Sellout a rae ouzh ar roudoù en douar blod : roudoù ar botoù-ler pounner ha rodoù mistr ar marc'h-houarn, kemmesket. Amañ oa en doa paouezet ar beleg, un ugent metrad diouzh an toull-karr.

Ur c'hwitelladenn estlammet a reas dezhañ sevel e benn. Harp ouzh ar gloued edo Gwichaoua o sellout, alvaonet, war-du park an Daeron.

- Ac'h, hemañ adarre... a c'hrozmolaz ar Gall. Hag a nevez bremañ, Gwichaoua ?

- Ur c'horf marv, brigader, ur jav !...

Tostaat a reas ouzh ar gloued. Ur jav gell e oa, korf ur jav gell astennet divuhez war an irvi nevez troet. Manet e oa an alar plom, ar soc'h sanket don en douar druz.

Un trouzig neuze a savas er sioulded, flikflok heuzioù gom gwevn war zouar gleb an hent. An Daeron an hini oa. Ken gleb e oa ho pije kredet en doa splujet er stêr dilhad ha tout.

Gant sebez e selle ouzh an archerien.

- O gast, emezañ, ha deut oc'h dija ?

- Ken buan hag eo bet kemennet deomp...

- Peoc'h, Gwichaoua ! a droc'has Dupuy.

Dorn an Daeron a grene war goad rust ar gloued. Sellout a rae ouzh e bark, ouzh e zouar, douar e hendadoù, ouzh korf marv e jav, dezhañ liv an douar, dija.

- Ar gurun, emezañ, ar gurun. Chañs am eus bet. Ma, ret mat vo din bremañ

prenañ un traktour.

**AR BLEIZ**

gant Roger Gargadeneg

Pezhc'hoari evit ar skingomz pe ar fiñvskeudennoù

(Arabat d' an istorourien klask o danvez en oberenn-mañ : mesket eo bet an traoù ganin, n' am eus ket heuliet strizh an istor.)

R. G.

MOUEZH AR BARNER - (Taboulinoù)

" HA SETU, DRE M' EN DEUS, EDER MANERKAER ANZAVET ' E WALLOU, HIZIV, DIRAK AR BARNER, E GONDAONIÑ A RAN HA D' AR MARO. TORRET ' VO E ESKERN HA DIBENNET E VO ! "

Taboulinoù - Musik

156

UR VOUEZH

EDER MANERKAER ! Bleiz Kernev ! FONTANELLA  
 Hiziv c'hoazh, pa glevomp distagañ  
 Seurt anvioù, spontus a-wechall  
 A ouie lak' an dud da skrijañ  
 Pe da dec'hout kuit 'n ur youc'hal  
 Hiziv c'hoazh e rankomp krenañ  
 Nag iskis ha na kriz eo bet giz an den-se  
 E-kreiz an Noblañs vras ' oa ganet, koulskoude,  
 Ha, dre-se, pep hini 'n defe gallet krediñ  
 E vije bet onest buhez an denjentil :  
 Kaset oa bet d' ar skolaj e Pariz, gant e dad  
 " Ar Jezuisted " - eñ grede - a zegasfe hennezh  
 Da vrudañ e anv o servij ar Roue !...

(Ur c'hloc'h a son ; klevout a reer an trouz a ra ar studierien en ur stekiñ ha ruzikal o seulioù war vein ar c'hloastr. Mouezh ar Mestr ivez : « Peoc'h mar plij, Aotrounez ! Aotrou Gwidomar ! C'hwi skrivo din kant linenn ! Gwerzennoù latin ! - Aotrou Stivell ! Chomit diouzh renk ! - Aotrou Manerkaer, ha petra 'm eus lavaret ? Pemp kant linenn!... » ,Kreskiñ a ra an trouz. Un nor-dal a glever o wigourat, a zo digoret evit leuskel ar baotred er sal-debriñ. Ur bern reuz a sav c'hoazh e-doug m' emañ an holl o klask azezañ war ar bankeier ouzh taol, pep hini en e blas. Ar Mestr a sko taolioù reolenn war ar gador-brezeg. Peoc'h a reont a-benn ar fin.)

AR MESTR

Aotrounez ! Plijadur 'm eus hiziv o kemenn deoc'h amañ  
 'Zo degouezhet un enor bras d' ar skolaj-mañ :  
 Hep dale e vo ret degemer - da greisteiz -  
 Estrañjourien vrudet - Deputeed a Vreizh  
 Deut da welout penaos e kresk gant o studi  
 Tudjentil eus o bro, en hon touez, ganeomp-ni  
 Goulenn a ran neuze diganeoc'h, Aotrounez,  
 Diskouez dezho resped ha bezañ war evezh :  
 Mar pli) d' an Deputeed, 'vel m' hon eus o fedet  
 Klask gouzout tra pe dra eus perzh unan bennak  
 Ra vo respontet !



Ra vo fur ar respont ! Ha distag !  
Ha bremañ, gervel ' ran ar c'hlasoù  
Pep hini a savo da c'halv an anvioù !  
- SEXTA GRAMMATICAE !

AR RE C'HALVET  
Amañ.

AR MESTR  
QUINTA !

AR RE C'HALVET  
Amañ.

AR MESTR  
TERTIA !

AR RE C'HALVET  
Amañ...

(Mouget eo ar mouezhioù a-greiz-holl gant ur safar a sav adarve ; an nor-  
dal a zo digoret bras. Ur vouezh, skiltrus :)

AR VOUEZH  
Aotrounez DEPUTEED BREUDOU BREIZH !

(Antreal a ra ar re-mañ.)

AR MESTR  
Aotrounez ar Breudoù ! Bodet 'm eus dirazoc'h 'vel pedet  
Hon holl studierien. En o zouez Bretoned !...  
Aotrounez studierien ! Sellit pizh ar re-mañ.  
Brudet int en o Bro ha dibabet du-mañ  
Dre o skiant hag o zalvoudegezh  
( M' o deus e-leizh ! )  
Evit difenn, er Breudoù, Gwirioù Breizh !  
Ra gresko ho spered, en ur studiañ mat  
D' ar memes uhelder, pa vezoc'h deut en oad !  
Azezit 'ta bremañ ; galvet e viot raktal :  
Deuit d' ho tro d' ar gador... Rak mall  
'Zo gant 'n Aotrounez-mañ d' ober ganeoc'h  
Gwelloc'h anaoudegezh...  
...Aotrou Jakez Kerloc'h !...  
Aotrou Per ar Marc'heg !... Aotrou Jos Gubaer !...  
Aotrou Eder Manerkaer !  
158

(Eder a zeu war-bouez, rok an tamm anezhañ.)  
...Aotrou Eder ! Setu amañ, en va c'hichen  
Un Aotrou Chaloni... a gav tenn  
Pezh 'm eus laret dezhañ diwar da benn  
War da vuhez diroll er skolaj... hag ouzhpenn  
War da amsentidigezh a goll da holl studi !  
Anveout mat da familh a ra ar Chaloni,  
Deus da zisplegañ deñ - da-unan - da veno !

AR C'HALONI  
Na peseurt darvoud, mab a c'hoarvez war da dro ?  
Dispuijet emañ, kalz, 'n ur glevout kemend-all :  
Da vistri en em glemm... Da studi a zo fall...  
Penaos ' c'hellez-te padout bezañ ken divergant ?  
Petra ' lavarinn-me, d' az tad, 'n ur rentañ kont  
Eus ar weladenn-mañ. Emichañs, d' am goulenn  
E c'hellfes 'vit gwellaat ober ur strivadenn ?

AR MESTR

Koll a reot ho poan, ken, Aotrou Chaloni...

AR CHALONI

Ma c'houlennan digantañ, koulskoude, touiñ  
E sento ouzh e vestr, en em lako da glask  
Bezañ, a-barzh bremañ, ur paotr fur hag habask ?

AR MESTR

Ne gredan mad ebet ! - Sellit ! dec'h 'n ' eus torret  
Brec'h ur c'hamalad bihan. Dre drubardiz 'deus skoet !

EDER

« Buzhug pe naer  
« Aonig pe daer  
« Breviñ ' ran pezh a zeu etre va zreid !  
« Ne ran forzh-me ! Ne sellañ ket keit ! »

159

AR MESTR

Gra peoc'h !

EDER

...Fiziañs am eus em flanedenn, e ma-unan !

AR C'HALONI

Doue nemetken a c'hell lavar diougan  
War pezh a zo da zont, siwazh !

EDER

N' am eus kilet biskoazh  
Ha biken na gilin ! Atav ez in war-eeun !  
Gant an hent a fell din !

AR C'HALONI

Eus an hent-se 'm eus aon !

- II -

(Eder hag ur c'hamalad a vale dindan ar c'hloastr.)

EDER

Ha petra lavarez Rosmar eus an taol-se ?

ROSMAR

Re bell 'maout aet : da vestr ne bardono morse !

EDER

Eus va mistri, kamalad, ne ran van  
Ne dremenin ket mui kalz amzer ken dindan  
Hep dale 'maon o vont da gitaat an ti-mañ...

(A vouezh uhel.)

Ha krediñ ' rafes ' c'hellfen chom pelloc'h amañ ?  
Renet gant tud a fell dezho kelenn ar re all  
Pa n' int o-un' nemet kozh prezegerien dall !  
Ha soñjal a reont e teuint da benn  
Da gemmañ din va flanedenn ?

160

ROSMAR

Na chomez ket kement, Eder, ma vez klevet  
Paket e vimp... ha kastizet !

EDER

Ne ran forzh-me, laret 'm eus dit, ha va menoz  
'Zo graet ganin tec'hout fenzh  
Deut eo ar mare evidon  
Re-bell a zo e c'hortozon  
Re 'm eus sentet ; deut eo c'hoant din  
Bezañ ar Mestr ha kaout ganin  
D' am zro, em DALC'H, war va ROUDOU  
Tud da sentiñ ouzh va urzhioù !  
Ouzhpenn, 'vit gounit va frankiz  
'Vit mont a-raok ha diouzh va giz  
Biken ne vo kaeroc'h amzer  
Va gwad ennon 'zo o virviñ  
Er vro 'maint holl o vrezeliñ  
E pep lec'h e-giz ma ouzez  
N' eus kaoz nemet eus " UNVANIEZH "  
- Me 'vo ofiser ! Me 'm bo nerzh !  
'Barzh pell ' po keloù eus va ferzh !

-III-

(Deuet eo an noz. - tir vouezh.)

AR VOUEZH

Peder eur ! Peder eur ! Koustit mat !  
Kouskit e peoc'h, tud vat !...

EDER

Deut eo an eur !... Meur a eurvezh  
'M eus ranket tremen gant hiraezh  
Deut eo an eur a-benn ar fin !  
...Gwiskomp buan hor roched lin !  
Pelec'h 'm eus kuzhet va otoù ?

(C'hoarzhin a ra.)

161

Warc'hoazh vintin 'vo gwall bennoù  
Er skolaj-mañ... Gouez ' yel' ar Mestr  
Pa welo emañ digabestr  
Bec'h a vo ! Ha, setu va c'hleze,  
Hag eñ graet, koulz ha va ene  
Gant dir kalet... Dec'h 'm eus gwerzhet  
Va c'hozh levrioù... hag e brenet !  
Ar c'hleze-se 'vo trec'h atao !  
Ar c'hleze-se a dalvezo  
Da bep enebour a gavin  
Bezañ troc'het a dammoù fin

(Mont a ra betek ar prenestr.)

...Ar prenestr-me, diouzh a welan  
En deus barrinier siellet don  
Ne dalv ket ar boan 'n em chalañ  
Ne vin ket pell d' o heskennañ

(Trouz an heskenn a glever.)

Setu amañ war var da leuskel war va lerc'h  
Hep keuz, hep glac'har hag hep nec'h  
Toull-bac'h daonet ar Jezuisted !  
Eno, va faour kaezh kenseurted  
Ne raint nemet dastum ha gregaj ha latin  
E-lec'h deskiñ penaos brezeliñ gant ijin !  
...Tan an ifern ! Ar prenestr-mañ

En deus barrinier ken ledan  
Ma 'z eo diaes din terriñ 'ne'o  
Heskennomp adarre, ra blego  
Ar varenn verglet-se... Deuet eo  
Setu 'mañ toull digor hag a c'hellan bremañ  
Ober un taol lagad ' raok skarzhañ an ti-mañ  
N' eus den er vanell ? Gwell a se ! Aesoc'h 'vo  
Din-me da lammet kuit ! Poent bremañ ! Kenavo !

162

- IV -

(Ur vandenn soudarded, bodet e kreiz ur c'hoad, kaouenned a gan. Roñseed o tispac'hañ a glever ivez.)

KALVEZ

Ha da c'hortoz piv 'ta, e chomomp-ni amañ ?  
An denjentil yaouank ne zeuio mui bremañ  
Tremenet hanternoz hag abaoe pell 'zo  
Tlefe bezañ degouezhet...

AR FLOC'H

Me 'zo sur e teuio...  
Gant an Aotrou Merkeur omp bet ni kemennet  
D' en em vod' er c'hoad-mañ ha kaout pasianted  
'Vit gallout degemer hor c'habiten nevez  
...Eus Pariz betek amañ, hir eo an hent, Kalvez !

KALVEZ

Ya, Ar Floc'h, Gou't a ran, ha padal a gredan  
N' eo ket mui ret gortoz... Nann !... Selaou ac'hanon :  
Reishoc'h e vefe deomp kentoc'h, giz kabiten  
Lakaat unan bennak ac'hanomp en hor penn !

AR FLOC'H

Aze 'mañ da vennad ? - Gouezet 'm befe diouzhtu  
Pell ' zo d' e gas da benn emañ o klask an tu  
Te ' fell dit bezañ 'r Mestr, eveljust, neketa ?

(D' ar re all.)

N' eo ket gwir kement-se paotred ? Hoc'h ali ?

AN HOLL

Eo gwir eo penn-da-benn Ne oar ket komandiñ.

KALVEZ

Ha te 'ouio gwelloc'h ? Goulenn a ran ganeoc'h,  
Ha c'hwi a valefe dindan beli Ar Floc'h ?  
Un den a zo Hugenod !... Ma 'z eo deut ganeomp  
N' eo nemet 'vit laerezh hor preizhoù diwarnomp !

163

AR FLOC'H

Eus da c'herioù Kalvez, tuchantik az po keuz  
Kurun ! Me ' gaso dit da dammig penn a-dreuz  
Diwall diouzh va c'hontell !

KALVEZ

Neuze diwall ivez  
Rak va dorn a zo prim ha n' eo ket ur skourjez  
Am eus ganin em dorn ! Gant un tenn pistolenn  
Me a vougo da c'hourlañchenn  
Hag e giz-se e chomi mut !

(En em gregiñ a reont. E-doug an amzer-se ur marc'heger a zegouezh :  
lammat a ra d' an douar diwar gein e varc'h hag e komz.)

AR MARC'HEGER

D' an holl amañ Salud !  
Lavarit din mar plij, petra a zinifi  
Ar reuz a zo amañ, ha perak 'vel daou gi  
En em gann an daou zen ?

UR SOUDARD

Peogwir ken  
I, n' en em renkont ket en ur glask tu d' hor ren  
An eil 'vel egile a fell dezhañ kemer  
Ar penn eus hor bandenn...

AR MARC'HEGER

Se a fell deo ober ?  
Gwelloc'h e vefe deo leuskel din an enor  
Ha mont, dres, d' an ifern. An nor a zo digor !

KALVEZ

Da gentañ, piv oc'h c'hwi ? Respontit me ho ped !

AR MARC'HEGER

Teodeg a baotr ! Me a vepred  
On enep da c'houlennerien  
Ha lazhañ ' ran ar furcherien !

164

AR FLOC'H (a vouezh izel)  
'Michañs n' eo ket hennezh an hini ez omp bet  
O c'hortoz betek-hen ?

KALVEZ (d'ar Marc'heger)

Pell 'zo hon defe goueet  
N' hoc'h eus tra da welet ganeomp !  
Kerzhit gant hoc'h hent pe ' po plom  
Pistolennoù 'zo ganeomp-ni  
Ouzhpenn ur bernad kontilli !

AR MARC'HEGER

Hoho ! Na pezh teod en un taol !  
Ne vefe ket ur wall goll  
Ma vije bet dit-te troc'het  
Pa oas gant da vignon kroget !  
(C'hoarzhin a ra )  
Tra-walc'h bremañ ! Poent ober peoc'h !  
Re a amzer 'kollan ganeoc'h  
Skubit an teodeg diouzh va gwell  
Pe ' tiskarin an istrogell !  
Ouzh ur wezenn stagit an den  
Boued d' ar bleizi - ma ne ra ken -  
'Vo mat d' ober ! Hastit buan !

KALVEZ

Va fistolenn ! Tenn kuit ac'han !  
Pe ma ' doullo dit da groc'hen !

AR MARC'HEGER

Neuze ober penn a glaskfes ?  
Ober eneberezh, paour kaezh !  
Sevel ouzh urzhioù tra na dal  
Sell penaos e ran dit da stal...  
Dizarmet 'vi gant an taol-se !...

Ur c'hoari eo 'vit va c'hleze !...  
Dal ! Kerzh war-lerc'h da bistolenn !...  
(D'ar re all sebezet-holl.)

165  
O c'hortoz peseurt oferenn  
E chomit-c'hwi, ho peg digor ?  
Roet 'm eus un urzh, soudarded lor !  
Ne zaleit ket, it da glask  
'Vit stagañ hemañ start, un nask !  
...Sentus oc'h bremañ ? Gwell a se  
'M bo ket da louzañ va c'hleze  
A-dreuz ho korfoù milliget !  
Staget eo start ? Skoulmet eo ret ?  
Mat ! Neuze ' tisoñjin va c'hounnar  
Hag e tiskleriin an afer  
He deus va degaset 'n ho touez  
Selaout pizh, taolit evezh !  
Komz a rin sklaer, a c'herioù berr :  
Me zo Eder Manerkaer  
Anvet ivez Fontanella  
Dre urzh e teuan d' ho renañ  
Kemennet gant Merkeur hon Dug bras  
D' ho kas e pep lec'h d' ober laz  
Evit gloar an Unvaniezh  
Ma 'z eus enep din 'n 'ho touez  
Ha pa vefe ' met un bennak,  
Ra dec'ho kuit  
N' eus den a-stag !

(C'hoarzhin a ra.)

AN HOLL  
Komz a ra mat-tre an Aotrou  
Kaloneg eo ! Eñ deus bouzelloù !

AR MARC'HEGER  
War a welan, asantiñ ' rit  
Da gabiten am c'hemerit :  
N' ho po ket morse keuz da gaout  
Ganeomp, bep taol, ' yelo ar maout  
En emgannoù. Ha da laerezh  
Ni a gavo aour ha perlez !  
'Barzh ar c'hêrioù ni ' vo mistri  
Ni raio chervad gant gisti !

UR VOUEZH  
Kurun ! Me n' am eus klevet morse  
Ur c'habiten ken a-zoare !  
Yaouank-flamm oc'h, hogen, ne vern  
Me 'yelo ganeoc'h d'an ifern !

166  
EDER  
Se a zo mat ! Pe anv 'c'h eus ?  
Karout a ran ar re o deus  
Stripoù, d' am reiñ barnedigezh  
Pe d' ar c'houlz mat a sav o mouezh !

LABOUL  
Laboul ez on, dre va ano.

EDER  
An eil-vestr, neuze, te a vo !  
War-raok bremañ, deut eo an eur,  
War-raok 'vit an Aotrou Merkeur

Pep hini war e varc'h ! D' argadiñ  
Kerzhomp ! Kerzhomp ! da vrezeliñ  
D' am heul an holl ! Hep ehanañ !  
Marc'hegerien Fontanella.

- V -

(Trouz ar redadeg.)

MOUEZH UR SOUDARD

Souezhus gwelet pegen garv  
Ar c'habiten ! 'trezek ar vro  
Omp bet o redek 'doug an deiz  
Hep paouez ha gant droug dargreiz  
Ha deut eo an noz adarre !  
Skuizh-marv on, naon 'm eus ivez !

UN ALL

Gwir eo ! Va marc'h ha me kerkoulz  
'Vit mont pelloc'h e rankfed poulz !

UN ALL

Ne vevan mui, re 'm eus trotet  
Va reor paour 'zo diskroc'henet !  
Aotrou Laboul lavarit din  
Pedavare ec'h ehanin ?

167

LABOUL

Du-hont ! Sellit ! Gouloù un ti !

EDER

Ur c'hopr mat 'vo da bep hini...  
En dro d' an ti-se 'n em vodit  
Hag eus kein ho marc'h diskennit !  
Laboul ! It da skeiñ war an nor  
Ha goulenn deomp prim an digor !

LABOUL (o skeiñ)

Sac'h an diaoul ! Ha n' eus den e-barzh ?  
N' ez eus nemet ar c'hi a harzh ?  
Buan ! Digorit dor ho ti  
Pe me a darzho anezhi !

UR VOUEZH AONIK (en diabarzb)

Piv izo aze ? Piv en deus skoet ?

LABOUL

Goulennata ' rit re abred  
Digorit da gentañ, goude-se  
Amzer a-walc'h ho po neuze

(Digoret e vez an nor, goustad.)

EDER

Aon da lakaat ho peg er-maez  
Hoc'h eus kemend-all va zud kaezh ?  
Perak e prennit evel-se  
Da wreg ha te dor ho palez  
Ha ne n' hon laoskit ket da zont tre ?

LABOUL

Ar re-se n' o deus ket truez

Eus pirc'hirined war 'n hentou  
Kalz re bizh int war o madoù !

EDER

An dra-se 'gemmo en un taol !  
Ale ! Boullc'hurun ! Boued war an daol !

168

AR PEIZANT

Eus tud paour, ni ho ped, Aotrou  
Ho pet truez !...

LABOUL

Serr da c'henou  
Milc'hast ! Hag hastit da blegañ  
D' an urzh roet gant Fontanella !

AR PEIZANT

Met boued ebet n' eus en ti !  
D' ober yod ha krampouezh ne chom mui  
Na laezh nag an disterañ bleud  
N' eus kig er charnell kennebeut...

LABOUL

Ha goap a rafes ?

EDER

N'eo ken gaou  
Boued forzh pegement 'zo 'n o c'hraou.  
O moc'h hag o yer a raio  
Kig da leuniañ pep kof goullo  
Laboul ! Ra vezo kempennet  
Diouzhtu ar c'hig-se, hag aozet !

LABOUL

Pevar soudard d' al labour-se !

GWREG AR PEIZANT

Va Doue !

EDER

Ouzh taol en em lakimp goude !

(Klevout a reer al loened, ar soudarded o wadañ anezho.)

169

- VI -

(Peurechuet eo ar pred. Soudarded mezv o kanañ.)

EDER (o c'hoarzhin)

Ho, Laboul ! Ne lavarez grik,  
Hag out-te ivez mezv-mik ?  
Distinget oa ar sistr, hag ar c'hig a oa mat ;  
Hon ostizien, me ' gred, e tlefemp-ni, avat.  
Komplimantiñ bremañ ! Da belec'h eta int aet ?

LABOUL

A-dreñv an drustuilh int kuzhet !

EDER

Deuit da gerc'hat ho kopr : tostait.

LABOUL



Alo ! loened brein !

EDER

Mar kirit  
Laosket e voc'h da vont e peoc'h  
Un enor bras am eus graet deoc'h  
En ur ziskenn amañ 'n ho ti  
Ha gortoz a ran meuleudi...  
Kompren a rit ?...

LABOUL

Tud a netra  
Baleit da glask ' peadra !

EDER

Diskouezit deomp ho pezhioù aour !

AR PEIZANT

N' hon eus hini ! Ni ' zo re baour !

170

EDER

Laboul ! Kas da dud da zastum  
Keuneud pe lann evel kustum  
Ret-bras eo, me ' soñj din, lakaat  
Troid an treitour-mañ da rostat !

AR VAOUEZ

Aotrou, Aotrou, en an' Doue  
Laoskit va gwaz.

LABOUL

Kerzh da c'hourvez !

EDER

Kerzh da lavar da chapeled  
War 'r solier gant va soudarded !  
Na setu aze ur wrac'h kozh !  
Ata maouez ! Beilh war da vroz !

UR SOUDARD

Prest an traoù ! Kroget eo an tan...

EDER

Mat ! Sailhit war an den-mañ buan,  
Tennit dezhañ e c'hozh votoù  
Hag astennit ouzh ar flammoù  
E dreid lous...

AR PEIZANT

Ho va buhez !  
Aiou ! Aiou ! pet truez !

EDER

E p'lec'h emañ da yalc'h ganit ?

AR PEIZANT

Ho va Salver !

171

EDER

Koll a reomp hon amzer ; eñ ne lavaro ger !  
N' eus aour ebet e-barzh an ti  
Deomp kuit ac'han !

LABOUL

Da bep hini  
An urzh a vo roet raktal ;  
War varc'h, hag en hent hep termal !

EDER

A-barzh kuitaat gwitibunan  
Ra vezo sanket mat an tan !

-VII -

(E-barzh ur vourc'h e Kernev-lzel. Devezh ar marc'had eo. Tud, loened,  
trouz.)

PER

Eskern 'maout o klask gwerzhañ, pe marteze krogenn ?  
Re voan da loen, Jakez ! Da vuoc'h ' zo 'r ganakenn !

JAKEZ

Mar he c'havez re ger, Per, kae da welet pelloc'h !  
Hogen war ar blasenn na gavi ket gwelloc'h  
Droug a-walc'h am eus bet o kaout treujennoù kaol  
'Vit magañ al loen-se ; n' hellan ober distaol !

PER

N' eus par neuze dezhañ ? Gwir eo marteze 'vat,  
Na moc'h lart na saout brav ne zeuont d' ar marc'had  
N' eus mui nemet loened o kreviñ gant ar naon  
Ouzhpenn, 'vit o frenañ, den n' eus arc'hant m' eus aon !

JAKEZ

Melchon n' eus mui nep lec'h 'vit ar saout da beuriñ...

172

PER

Ne chom ket gant an dud kalz muioc'h da zebriñ :  
Gou't ouzez mat penaos, evit ober soubenn  
E ranker - un druez - mont da zastum triñchenn !  
Hor c'hof a zo goullo koulz lavar !

JAKEZ

Gwashoc'h c'hoazh  
A-benn nebeut amzer e rankimp mont e-noazh  
Peogwir hon eus ivez hor chakodoù goullo !

PER

Moneiz 'zo c'hoazh gant lod, met kuzhet eo ganto...

JAKEZ

Mat a reont e guzhat, rak bremañ noz ha deiz  
Ne weler ken laeron o redek en hor c'hreiz :  
Soudarded ar Roue, pe o enebourien  
Gallaoued 'vel Spagnoled ; holl int torfedourien  
Prest da lazhañ an dud ha da sevel tailhoù !

PER

Feiz sur ! Fall ' ya an traoù ; arabat koulskoude  
E-keñver ar vourc'h-mañ, c'hoazh, en em zrailhañ re  
Rak dezhi betek-hen, tremenet int e-biou.

JAKEZ

Ha daoust d' o fiñvidigezh, bourc'hizien ar barrez

A gousk, sioul a-walc'h, 'n o ziez.

(Kloc'h an iliz.)

Petra c'hoarvez !...

PER

Gast ! 'maint o tokañ ar c'hleier !...

CHOUADENNOU AN DUD

D' ar BLEIZ ! D' ar BLEIZ !

173

JAKEZ

Ar Bleiz EDER

Re evurus oamp, kamalad

Eder ' zo ' tont gant e vagad !

PER

Mallozh deomp ! AR FONTANELLED !

JAKEZ

Ne chomomp ket dispourbellet

Da c'hortoz amañ ar Bleizi ;

Tennomp hor botoù, dav tec'hiñ

'Vit 'n em zifenn, al lec'h 'zo fall

Hep falz, hep falc'h, hep forc'h houarn

N' hon eus netra 'tre hon daouarn !

PER

Siwazh ! lazhet 'vimp an taol-mañ...

...Rivinet sur, d' an nebeutañ...

JAKEZ

Salvet e vimp mar 'n em hastomp

Selaou ! 'Maint o tennañ warnomp

Redomp d' an daoulamm d' an iliz

Du-se 'mañ 'r gwellañ

PER

...Sankomp tizh

- VIII -

(E ti ar Gouarner-kêr.)

UR GARD

'Tal an nor, Aotrou Gouarner

'Zo un den goullet...

AN ITRON

Va salver !

174

AR GARD

'M eus ket gallet gwelout e zremm

Gwad 'zo war-c'horre... Kalz e klemm

Hogen dre c'hiz e wiskamant

E ouzon ez eo ur peizant

Eus ar barrez.

AN AOTROU GOUARNER

Gard ! Laosk anezhañ da zont tre !

Keloù a gas deomp marteze.

AN AOTROU PERSON

Aotrou Gouarner, me 'm eus aon  
E vefe re ziaes d' hoc'h itron  
Gouzañv ur seurt gwell...

AN AOTROU GOUARNER

D' an eur-mañ  
Pa 'zo lazadeg kenañ-kenañ  
Koulz eo d' am gwreg chom ganeomp-ni !  
Aotrou Person, ret eo pediñ  
Aotrou Doue d' hor saveteiñ.

AN ITRON

Arabat deoc'h 'n em dregasiñ  
Kreñv a-walc'h on, ne zemplin ket  
Ouzhpenn, bremañ, d' am gwaz eo ret  
Ober diouzh e garg Gouarner !

AR GARD

Setu an den !

AN ITRON

Gwerc'hez Vari !

AR PERSON

Va Doue, ar paour-kaezh kouer.

175

AN AOTROU GOUARNER

Deus tost din-me, va faour-kaezh den  
E peseurt stad out ! Te a gren !  
Lavar din : 'n em zifenn a reomp ?  
Piv a ren ar re 'zeu warnomp ?

AN DEN

Aotrou, klevout 'rit an tennoù  
Klevout ' rit ar chouadennoù !  
Ho ! Spontus eo ! Spontus Aotrou !  
Gwad hor re a red er ruioù !  
D' en em zifenn n' eus tu ebet  
Ar vourc'h ' zo leun a soudarded  
Hag int, en tiez en dro dezho  
'Maint o lazhañ an dud eno !...

AN AOTROU GOUARNER

Siwazh !

AR PERSON

Neuze ni 'zo kollet !  
Kouezhet ar vourc'h !

AN AOTROU GOUARNER

N' eus netra graet !  
Mistri n' int ket c'hoazh ! Er gêr-mañ  
Zo 'r c'hastell a c'hellomp mont ennañ :  
Aotrou Person ; hoc'h iliz kozh !  
A-dreñv he dorioù serret-kloz  
Ni a vo gouest da zerc'hel penn  
Keit ma vo ezhomm, d' ar vandenn !  
Kemeromp diouzhtu, asamblez  
Hent an Iliz...

AR PERSON

Na drugarez  
En deus Doue evidomp-ni !

AN ITRON  
Saveteet e vimp en e di !

176  
AN AOTROU GOUARNER  
Te, den paour, deus 'ta em c'hoste  
Ha me da sikouro bale...

AN DEN  
Aotrou Gouarner, bale ' rin...

AN AOTROU GOUARNER  
En ur vont, neuze, lavar din  
Soudarded gouez 'ch eus gwel't e-leizh  
Gout a rez piv int ?

AN DEN  
Re Ar Bleiz !

- IX -  
(E-kreiz ur safar spontus.)

EDER  
Laboul !

LAROUL  
Aotrou Eder !

EDER  
Penaos 'n em gav an traoù e kêr ?

LABOUL  
Ar vourc'h a zo deomp, kabiten... dre vras !...

EDER  
Petra ! ha n' eo ket peurechuet c'hoazh ?

LABOUL  
Koulz ha peurechuet avat  
N' eus mui nemet un dastumad  
A vourc'hizien sot a fell deo  
Derc'hel penn deomp en iliz-treo !  
Se ' ro d' hon tud un tammig bec'h  
Hogen kemeret 'vo al lec'h  
Mod pe vod, a-barzh pell, m' hen tou

177  
EDER  
Drailhit neuze, prim, an norioù !  
Plantit al loened-se er maez  
Emichañs an dra-se ' zo aes ?  
Dav eo deskiñ d' ar vourc'hizien  
N' int gour dirak brezelourien !  
Ret eo ivez diskouez piv on  
Re a c'hoap e reer ouzhon !

LABOUL  
En diabarzh, danvez a briz  
A zo ganto bet dastumet  
An dra-se, Aotrou, 'm eus klevet..

EDER

Gwell a se, Laboul, gwell a se !  
Aesoc'h da skrapañ 'vo goude  
...Ah ! setu 'mañ-hi aze war well  
Ar gozh iliz troet da gastell !

LABOUL

Selaout ar c'hoad o strakal  
'Mañ ar soudarded o tarzhañ  
A daolioù bouc'hal dorioù-tal  
A Porched...

EDER

Perak keit all  
O deus gortozet ? Pennoù beuz !  
Ale soudarded ! D' an toull freuzh !

LABOUL

Klevet hoc'h eus ! An holl e-barzh ! Dao !  
Aon rak bourc'hizien ho pefe ? Dao warno !

178

EDER

Te, Laboul, selaou ac'hanon  
Ra vo degaset dirazon  
'N holl bennoù bras ha renerien  
A gavoc'h 'touez ar vourc'hizien !

LABOUL

'Vel-se vo graet !

EDER

'Maon o c'hortoz...  
.....

LABOUL

Bez' on bet ' welout a-ratozh :  
Preizhoù 'zo etre hon daouarn !

EDER

Hag an dud ?

LABOUL

Finoc'h int eget al louarn  
'Barzh an Iliz n' eo bet kavet  
Nemet tud kozh ha peizanted !  
E-laez d' an tour, gant an diri  
Pignet ' re all dindan hor fri !

EDER

Teileged !

LABOUL

Roet 'm eus diouzhtu  
Urzh da vont war o lerc'h ; n' eus ket tu  
Re strizh, n' eus lec'h 'barzh an diri  
Nemet d' un den hepken da vont e-laez hep mui !  
Ouzhpenn eus al lec'h m' emaint, al lorgnez a daol mein  
Hag a ruilh penn-da-benn d' an traoñ war hor c'hein :  
Kalz eus hor soudarded 'zo bet flastret dija !

179

EDER

Malastou ! Re a c'hourzh eus ar FONTANELLA  
Ne chomo ket pell digastiz...  
Gwrac'hellit lann 'kreiz an iliz !

LABOUL  
Sac'h an diaoul ! Pebezh kavadenn  
Kaer ' vo an tan-se kabiten !

EDER  
Tuchantik eus an tour mogedet  
Gwelet 'vo o tiskenn ar razhed !

- X -

EDER (paz gantañ, en abeg d' ar moged)  
Selaouit bremañ, bourc'hizien !  
(Paz...)  
C'hwi ' zo trikamarderien  
O klask troioù droch ha direizh !  
Ret eo diskenn eus ho neizh  
Pe ' viot rostet gant an tangwall :  
(Paz dezhañ e unan )  
Paz a ra din ar moged fall !

LABOUL (paz gantañ ivez)  
Ar moged brein 'ya kuit dindan  
Ha d' ar re e-laez ne ra van :  
Re a doullou 'zo en tour-se  
Ne zeuimp ket a-benn e giz-se.  
(Paz adarre.)

EDER  
Daoust ha 'mañ ket an diaoul 'n o zu ?  
Doue e gaso d' an harlu.  
(C'hoarzhin a ra.)  
Laboul, forzh penaos 'teuin a-benn  
D' ober d' al loened-se diskenn !  
Sell !  
(Da re an tour.)

180  
Ho ! C'hwi du-hont ! Ar greñvañ oc'h  
Ne dalv mui ar boan stourm ouzhoc'h  
Setu ar pezh a ginnigan :  
C'hwi ' ziskenno. Goude, ac'han  
C'hwi ' yelo kuit holl asamblez  
Gant ho kwalenn hag ho puhez  
Ha me EDER MANERKAER  
Touiñ ' ran deoc'h se ' zo va ger !

LABOUL (izel)  
Gwall drugarezus oc'h hizio  
Da se n'oc'h ket boazet Aotro !

EDER  
Laboul e pelec'h 'mañ da benn ?  
N' anvevez ket da gabiten ?

AN AOTROU GOUARNER  
Ho klevet 'm eus Fontanella !  
C'hwi ur forban eus ar gwashañ  
Hogen denjentil oc'h ivez  
Fiziañs ' rankomp kaout a-neuze  
Dieubit, mar plij, an diri.

LABOUL

'Maint ' tont en traoñ !

EDER

Ni ar Vistri !

. . . . .

LABOUL

Deuet int er-maez... Ha bremañ...

EDER

Krougit anezho, ha buan !

MOUEZH AN ITRON

Va gwaz ! Va gwaz ! Ho, d' am buhez !

(Ar safar a zo spontus.)

181

AR GOUARNER

Izel emac'h kouezhet, Eder, n' oc'h eus ket mezh ?

Ul loen vil ha fallakr

Hep an disterañ resped 'vit traoù sakr !

EDER

Aotren a ran d' am soudarded

Ober diouzh o giz ! N' eus torfed

Na vil na bras a-walc'h, me gred da gastizañ

Ar re a grede de'o heudañ Fontanella !

AR GOUARNER

Mallozh deoc'h, Baron, mallozh deoc'h !

EDER

Hep dale 'vi krouget, ha neuze e ri peoc'h

Met da gentañ, sell ouzh da wreg,

Sell anezhi 'ta, sell he beg !

AR PERSON

Eder, torret hoc'h eus ho le !

EDER

Te beleg, gwelloc'h dit soursial eus da ene

Ha kanañ deomp da bedennoù

Pe a-hend-all serr da c'henou

(E-kreiz ar chouadennoù, al lazhadeg o vont a-raok, kleier an iliz ;  
a glever a-greiz-holl.)

EDER

Petra 'r gurun ! Laboul ! Hag un bennak 'nezho

A zo chomet e-barzh an tour ?

LABOUL

Den !

EDER

Tec'homp dillo !

An doare-se a zo iskis...

Saotret hon eus ni un iliz...

Laboul, 'mañ 'r Werc'hez o fachañ !



182

LABOUL

War varc'h an holl ! Ar buanañ !

(Son ar c'horn-boud, redadeg.)

(Sioulder a-benn an diwezh... Mouezh an Itron a sav.)

AN ITRON

Va gwaz ! Va gwaz ! Pelec'h oc'h c'hwi ?

E pelec'h 'mañ, Gwerc'hez Vari ?

(da genderc'hel.)

## **DIAZEOU AR SEVEL GWERZIOÙ**

( Kendalc'h )

PENAOB STUMMAÑ HA PENAOB STROLLAÑ AR GWERZENNOU

29. - STUMM AR GWERZENNOU. - Betek-hen hon eus heuliet an tri hent disheñvel : kehed, kellusk, kengan - an eil goude egile. En em gavet er penn hon eus da welout penaos ez int bet pleustret gant ar varzhed ha penaos o deus lakaet ar re-mañ diazezoù disheñvel da vont an eil gant egile. Bez' hon eus da studiañ eta tro-ha-tro :

- hed ar werzenn ;
- lec'h ar glotenn pe ar c'hlotennoù ;
- lec'h an arsav pe an arsavioù ;
- lec'h hag heuliad an taolioù-mouezh.

Hed ar werzenn a dalvezo da ziazez. Bez' e kaver gwerzennoù a bep ment, adalek unan betek pemzek ha zoken seitek mouezhiadenn. Mentaoù a zo avat a vez graet ganto aliesoc'h eget ar re all. E brezhoneg krenn da skouer, e kaver dreist-holl gwerzennoù pemp, eizh ha dek mouezhiadenn : er gwerzioù hag er sonioù pobl dreist-holl re eizh ha trizek mouezhiadenn.

Un nebeud skouerioù a roimp evit pep hed gwerzennoù. Tri rummad a raimp anezho : gwerzennoù berr betek seizh mouezhiadenn ; gwerzennoù etre, dezho eizh, nav pe dek mouezhiadenn ; gwerzennoù hir, dezho daouzek mouezhiadenn pe ouzhpenn.

184

30. - GWERZENNOU BERR. - Gwerzennoù unan, div, teir ha peder mouezhiadenn ne vezont kavet nemet kemmesket gant re hiroc'h ; doare estlammadennoù int, ma karer, dreist-holl ar re verrañ :

Treitour ! ah !  
 Mallozh dit !  
 Mallozh d'it 'ta !  
 Treitour ! ah !  
 Mallozh d'it 'ta !  
 (" Marv Pontkalleg " e BARZAZ BREIZ.)

Tio ! Tio !  
 Noz eo.  
 Den ne glev,  
 Kousket eo,  
 Mut, mut, mut  
 Eo an dud.  
 Trouz ebet  
 Dre ar bed  
 Nag er c'hoadoù  
 Nag er maezioù.  
 (G. HORELLOU.)

Gwechoù 'zo koulskoude e tegouezher war heuliadoù berr a werzennoù peder mouezhiadenn :

Laouenanig  
 Ken sioulik

Ha ken koantik ;  
Te, labousig,  
Eo va dousig ;  
Kouig, kouig, kouig, kouig ;  
Te 'dec'ho kuit  
Eus da neizhig...

(AL LOUZAOUER.)

Ur c'hoari eo ar pezhioù-se, avat, kentoc'h eget pezhioù barzhoniezh gwirion.

185

Ar gwerzennoù pemp mouezhiadenn a veze kavet alies heuliadoù anezho e « buheziou » pe « misterioù » ar brezhoneg krenn :

Pan oa e kouvi  
Etre tud e di,  
Hor Roue benniget,  
Ec'h erruas plen  
Mari-Madalen  
A oa e pened.  
(" B. B. Jezuz ".)

Dioscorus bras  
En em avizas  
Hag a lakas plen  
Tud a bep labour  
Da ober un tour  
Ha micherourien.  
(" Buhez Santez Barba. ")

Ne vez ket e gwirionez e genganez e diabarzh ar gwerzennoù-se, daoust ma 'z eus bet klasket lakaat a-wechoù.

E " Barzaz Breiz " e kaver gwerzennoù pemp mouezhiadenn a bep eil gant re a deir e " Gwin ar C'hallaoued " :

Gwell eo gwin gwenn barr  
Na mouar !  
Gwell eo gwin nevez  
O ! na mez !  
Gwell eo gwin ar Gall  
Nag aval !

Ur barzh bennak a zo en deus graet ganto ivez en amzer vremañ :

An haleg a bleg  
E skourr ken dichek  
War ribl ar stêr ;  
An avel a wask  
Ha netra ne glask  
Eus kêr da gêr.  
(F. ABGRALL.)

Ar gwerzennoù c'hwec'h mouezhiadenn a vez implijet a-wechoù o-unan, dreist-holl pa ne vez ket re hir ar pennad. E gwerzennoù c'hwec'h mouezhiadenn eo ez eo savet kantig brudet ar Baradoz :

Chwi 'zo em baradoz  
Evel bokedoù roz  
A zivleun d' ar mare  
Hag a vleun adarre.  
(BARZAZ BREIZ.)

Kavet e vezont a-wechoù e sonioù pobl :

Ha ma n' eo ket kontant,  
 Penaos ober outañ ?  
 Her boutañ en toull plouz,  
 Reiñ bazhadoù dezhañ !  
 (Gw. ha S. BRO-WENED.)  
 Ne din ket ken d' ar c'hoad  
 Rak bez' zo razhed koad !  
 (id.)

hag implijet eo bet ivez e brezhoneg krenn :

Orzca ,cza tut ma ty  
 Tut a brut a study  
 Un sourcy am gruy bras  
 Oz deuet en bet man :  
 Ez duy sascun unan  
 Causit breman an cas.  
 (" Buhez Santez Nonn

Setu ur skouer yaouankoc'h :

Karout a ran dreist-holl  
 Arvestiñ ouzh an heol  
 Pa strink, diouzh ar beure,  
 Dreist kribell ar mene ;  
 D'abardaez pa guzh  
 'Barzh ar mor islonkus,  
 O tanañ an neñvoù  
 Ha kern ar gwagennoù.  
 (P. PROUZ.)

6 An eon 'zeu da wennañ  
 5 War ar bezhin glas,  
 6 Ar wagenn da gannañ  
 5 War ar rejet bras,  
 6 Ar barradoù avel  
 5 A zo deredet,  
 6 Al lien evel eskell  
 5 A zo digoret.  
 (F. ABGRALL.)

5 War ar pradeier,  
 6 Bout a zo bokedoù ;  
 6 D'ar serr-noz o c'hlever  
 6 O strewiñ o frondoù.  
 5 Bout a zo re wenn  
 6 Ha re c'hlas ha re ru,  
 6 Pampilhet o bevenn  
 6 Ha livet e pep tu.  
 (" Efflam Koet Skau ".)

Ar werzenn seizh mouezhiadenn a vez kavet implijet a-wechoù er gwerzioù ha sonioù-pobl :

Da glask dour e voen kaset  
 Gant ur podig pri torret.  
  
 Gant ur podig pri torret  
 Hag ur c'hozh sailh dizeeunet !...

Ma rozell, ma falikenn,  
A oa c'hoazh er bod kelenn !...  
(Gw. ha S. BRO-wENED.)

Serrit an nor 'ta, paotred,  
Setu ar gorriganed !  
'maint o tont e-barzh ar porzh,  
'maint holl ennañ 'tañsal forzh !  
(Gw. " Breizh-Izel ", ar C'hemener hag ar C'horred.)

En em gemmeskañ a ra mat-tre gant gwerzennoù c'hwec'h mouezhiadenn,  
dreist-holl gwerzennoù laosk a seizh na gwerzennoù start a c'hwec'h :

War ar mor hag ar maez  
Eo diskennet an noz ;  
Emañ 'n teñval o tiraez  
Bevenn bellañ ar barroz.  
(D. K. KONGAR.)

31. - GWERZENNOU ETRE. - Er gwerzennoù hon eus studiet betek-hen ne veze  
ez-reizh nag arsav ret na kenganez strizh. Er gwerzennoù hiroc'h, avat e vez  
graet ganto.

Ar c'hehed treuz a EIZH MOUEZHIADENN eo bet a-viskoazh an hini a vez kavet  
an aliesañ. Eus ar stankañ eo en oberoù krennvrezhoneg :

189

(e skritur bremañ)

(3+2)+3 Ha ni 'ya, GwegEN, d' ar mENez,  
3+(3+2) Da vireT hon deñVED fETez,  
(3+2)+3 Hag eno, dre m' feZ hor beZO  
(2+4)+2 AmZER evit obER chER vat.  
4+4 Me 'm eus a-grENN silzigENN blat  
4+4 Ha boutailhAD a win mAT 'zo.  
(" B. Santez Barba ".)

(e skritur kozh)

4+4 Non eus heñOAEZ, siOAEZ en bet  
4+4 Na ty na cOYGN da bout lOYGet  
4+4 En quoaet han roch eval goezet  
5+3 Ez clesquomp hon leCH da tECHet.  
3+(2+3) Ma quenderou selLET hon fETou ;  
5+3 Collet eo hon gloAT, hon mADou,  
4+4 Hon herytAIGE, hon astAYCHou,  
4+4 Goude hon stAT, hon pompADou.  
(" Buhez Sant Gwenole ".)

( En trede gwerzenn ha n' eo ket klotennet e ranker sur a-walc'h lenn  
brochet ['bro:xet], e-lec'h goezet ['gwe:zet].)

Bez' e kaver eta peurvuiañ div vouezhiadenn o kenganañ, a-wechoù teir,  
atav hini an arsav pennañ ha peurvuiañ an eil diwezhañ :

Ar c'hehed treuz eo a gaver a galz an aliesañ er gwerzioù hag er sonioù  
pobl :

4+4 N' eo ket 'vit mont da glask o boued  
2+4+2 Em eus va zregont mab ganet ;

4+4 N' eo ket evit dougen keuneud  
5+3 O ! na mein ben'rezh kennebeut !  
(BARZAZ BREIZ, ar Falc'hun.)

4+4 Na mar karje Landregeriz  
4+4 Alc'houezañ kloz dor o iliz  
4+4 Ne vije ket ur bugel koar  
4+4 Bet badezet e skeud al loar.  
(Gw. " Breizh-Izel ", ar Bugel Koar.)

2+4+2 Tuchant ec'h erruo an hañv,  
4+4 Hag e kano ar bobelan ;  
4+4 Ar bobelan hag an eostig,  
4+4 Ar voualc'h arc'hant, an hoperig,  
(3+2)+3 E kano ar goailh er Pradoù,  
4+4 E tigorero ar bokedoù.  
(Gw. ha S. BRO-WENED.)

189

2+6 Hep gout ar pezh a dremene,  
2+6 Neuze, ur pennad ac'hane,  
4+4 En e balez, ar roue kozh  
4+4 A oa kousket e-kreiz an noz.  
(Gwerz ar Roue Gralon ha Kêr-Iz ".)

Alies-tre o deus graet ivez ar varzhed pennañ gant ar c'hehed-se. Setu  
amañ un nebeud skouerioù :

5+3 An avel spontus a sourre  
5+3 Hag en divskouarn a yude,  
4+4 Bep an amzer e skoe taolioù  
4+4 Hag a groze evel tennoù.  
(2+3)+3 Ur skrij oa sellout ouzh ar mor  
4+4 Oc'h eonennañ gant ar fulor ;  
4+4 Gant an tourmant, ar mordarzhioù  
3+5 A save 'vel kern menezioù ;  
3+5 Ar gwagoù, en o c'hounnar,  
4+4 A zilamme war-du 'n douar  
4+4 Hag a strinke an eonenn  
4+4 Dreist ar c'herreg, a-zioc'h hor penn.  
(G. MORVAN.)

4+4 Kalon ar barzh hag ar vleuñvenn  
3+5 'zo heñvel an eil ouzh eben :  
3+5 Dre ar rev, dre ar gwall avel,  
3+5 Ar vleuñvenn 'vez goeñvet kent pell.  
(F. ar MAY.)

4+4 Taolet em eus ar vleuñvenn c'hwerv  
4+4 Ha kutuilhet war ribl an erv,  
4+4 E-touez 'bleunioù 'n douar-labour,  
4+4 Un dro-heolig erc'h hag aour.  
(E. VERTOU.)

(2+4)+2 A-bell e trid an heol, o deus !  
4+4 Laouen ha berr e vo hon deiz,  
(2+2)+4 Bleud c'hwek ha laezh ha mel hon eus,  
4+4 Ha bleunioù fresk ha flour e-leizh.  
(R. HEMON.)

190

Evel ma weler e vez peurluviañ an arsav goude ar pedervet mouezhiadenn hag  
e vez troc'het evel-se ar werzenn dre an hanter ; alies ivez e kaver an arsav

war-lerc'h an trede pe ar pempet mouezhiadenn, rouesoc'h war-lerc'h an eil pe ar c'hwec'hvet, neuze gant un adarsav.

Ar WERZENN NAV MOUEZHIADENN a vez kavet ivez meur a wech er gwerzioù ha sonioù pobl :

5+4 Anna 'r Gardian, 'vel ma klevas,  
4+5 En ur penn-bazh kerkent a grogas ;  
4+5 En ur penn-bazh kerkent eo kroget,  
5+4 Brec'h he breur-mager he deus torret.  
(Gw. " Breizh-Izel ", Anna 'r Gardian.)

3+(3+3) Rak, allas, ma c'horf paour ne day ket,  
5+4 E kostez ur c'hleuz e vo taolet,  
3+(3+3) Da zebriñ gant brini ha piked !  
5+4 Tammou gant bleizi ar Pontkalleg...  
(Gw. ha S. BRO-WENED, Mab ar Brigant.)

5+4 Yannig, va mignon, distroit en-dro,  
6+3 Ha me ' yelo d' hoc'h heul e pep bro ;  
5+4 Ha me ' gemero boteier koad,  
5+4 Ha me ' yay ganeoc'h da labourat.  
(BARZAZ BREIZ, Jenovefa Rustefan.)

Er bloavezhioù diwezhañ eo o deus un nebeud barzhed gwelet pegen heson e oa ar c'hehed-se :

3+3+3 Un aezhenn a luskell ar gwinizh,  
4+5 Melen evel blev flour da bried,  
4+5 Aezhenn ken glan hag he bizied  
5+4 Pa evi warno dour an diskuizh.  
(P. M. MEVEL.)

4+5 Son gant ar c'horn, marc'heg kenedus,  
5+4 Son ma tregerno an heklevioù  
3+(3+3) Da vrudañ ar frankiz daskoret  
4+5 D'an eneoù o gwisk du ha gwenn.  
(ABEOZEN.)

5+4 Ne c'houlennan ket ar baradoz ;  
3+6 N' em eus naon nemet a garantez.  
4+5 Peur ' c'hellin-me morediñ laouen  
4+5 Etre divrec'h ar gour a garin ?  
(ABEOZEN.)

191

Evel ma weler e vez koulz lavaret atav an arsav goude ar pedervet pe ar pempet mouezhiadenn ; a-wechoù koulskoude e c'hell bezañ ivez goude an trede pe ar c'hwec'hvet. Neuze avat e vez hogos atav un adarsav war-lerc'h ar c'hwec'hvet pe an trede.

Souezhus a-walc'h eo ne gaver ket a werzennoù DEK MOUEZHIADENN er sonioù nag er gwerzioù. Graet e veze ganto, avat, e krennvrezhoneg :

(e skritur bremañ)

6+4 Barba, ma c'hoAR gLOUAR, hep ambLOARi,  
4+6 Entent abrET, klev nET ma c'hefrEDi,  
5+5 Me 'sertifi dit hep si, ent dien,  
4+6 Ez out gant DOUe da wir rOUe anVE'et  
4+6 Da holl vennAD 'zo dit pep stAD grATAet  
4+(4+2) Ha konsedet ha permetet, kred plen.  
(" B. Santez Barba ".)

(e skritur kozh)

4+6 Pan ve a plEN quement dEN so EN bet,  
4+(4+2) GuytibunAN, bras ha bihAN, gANet,  
4+6 Na so bezet, na so guet en bet man.  
4+(2+4) Ne vent hanTER en guER da disclaERiaf  
4+(2+4) An poanyou brAS, diblAS, an re brASaf.  
4+(2+4) Spont ve contaf quantaf han falhaf poan.  
( " B. Bras Jezuz ".)

Evel ma weler e vez neuze atav teir vouezhiadenn o kenganañ er werzenn, en o zouez atav ar bedervet (arsav pennañ).

Ar varzhed nevez o deus graet ivez alies implij eus ar c'hehed-se :

4+(2+4) Bemdez kazi, me 'ya, ar-dro serr-norz,  
4+6 Evit ma fe'ar blank, da vale ar ar mor ;  
4+6 Bemdez kazi, me 'ra d' am zreizhour kozh  
4+6 Kanañ ar werz a gan kement treizhour.  
4+6 Lies an dar a zeu d' am daoulagad !  
4+6 Perak enta, perak e ouelan-me ?  
(ar Joubius.)

192

6+4 A-dreñv linennoù du gwez efl hag oulm,  
4+6 War-sav hep deil war ribl an dremmwel hir,  
2+2+6 E par a-us ur morad aezhenn c'hlas,  
4+6 Dremm Menez Bre evel war neuñv en oabl.  
(MAODEZ GLANNDOUR.)

4+(3+3) Eno n' eus c'hoarzh, na c'hoari, na didu,  
4+(3+3) Tra nemet gloAZ, hag anken hag AZrec'h,  
5+5 Preder ar spered ha strIV an dIVrec'h  
4+6 Ha dremmoù tUD glas evel al lUDu.  
(R. HEMON.)

(3+3)+4 A vignon, n' on na fur, na mat na taer,  
4+(3+3) Ha krenañ 'na va c'halon 'vel ur flamm  
4+6 A bleg, disliv, ouzh skañvañ trid an aer,  
4+(3+3) Ha petra 'rin, petra 'vin, n' ouzon tamm.  
(R. HEMON.)

Setu ur skouer ma 'z eus kemmesket enni gwerzennoù a zek hag a bemp :

4+6 Gwelet em eus an heol kaer o sevel  
War rac'h an deizioù  
4+6 Ha niveret ar stered o vervel  
War volz an nozioù ;  
4+6 Bamet on bet gant an ein o tozviñ  
E pep nevez-hañv,  
2+2+6 Spontet dirak an dervenn o kreniñ  
En avel c'hoañv.  
( " Efflam Koet Skau ".)

An arsav a c'hell bezañ war-lerc'h ar pempet mouezhiadenn, hogen, hag ar skouerioù roet en diskouez splann, hogos atav e vez goude ar bevare (gant un adarsav d' ar seizhvet) pe ivez goude ar c'hwec'hvet (adarsav war-lerc'h an drede). Ma seller pizh ouzh gwerzennoù Maodez Glandour ha Roparz Hemon e weler ouzhpenn ez eus enno ur c'hellusk strizh. Ar barzh mañ en deus kemmesket ivez en e varzhonegoù pennañ (Pirc'hirin ar mor, Al lestr, Lazhadenn unvab Aife, Gwarizi vras Emer) ar c'hehed-se gant ar c'hehed UNNEK MOUEZHIADENN a zo stumm gwerzennoù laosk an hini kentañ :



4+6 Faezhet em eus er gwalarn hag er biz,  
 3+4+3 Er gevred hag er mervent tro-ha-tro  
 4+7 Brini ar c'hoabr ha naered ar wallamzer,  
 5+5 Ramzed ar c'hazarc'h war o mirc'hed du,  
 6+4 Ha sorserezed hakr e pleg ar gwent.  
 (" Lazhadenn unvab Aife ")

-+5 Kaner flour ha feuls  
 4+3+3 Heñvel bepred ha kemmus, hag a zoug,  
 4+(3+3) E donder boull da c'hrec'hier ha da zremmwel,  
 4+(4+3) Heklev ar c'han a skiltras pell em c'halon,  
 3+3+3 Pa greden, teoget mik ouzh skleur va fougé,  
 4+7 Bamañ ar bed gant ur sonerezh ramzel,  
 5+6 'vel kruz da donnoù war ar groioù ledan,  
 7+- Dindan an oabl digenvez.  
 (" Pirc'hirin ar mor ".)

An arsav a vez, evel er gwerzennoù dek mouezhiadenn, dreist-holl war-  
 lerc'h ar bedervet.

(da genderc'hel.)

## **BUHEZ AR GERBENN**

E Roazhon ez eo buhezek a-walc'h an emsav evitañ da vezañ liesseurt ha dizunvan a-walc'h. E miz Meurzh hag e derou Ebrel eo ret notañ ar brezegenn a zo bet graet gant G. Etienne, rener " Preder " ha " S.A.D.E.D. ", dirak studierion Skol-Veur Roazhon, e ti ar studierion, straed Sant-Erwan, war c'houlenn ar J. E. B. Ur c'hant hanter-kant bennak a studierion a oa deuet. Uhel e voe danvez ha stumm displegadenn G. Etienne hogen gouzout a reas ar prezeger derc'hel evezh e selaouerion betek ar fin. Darn o doa aon e vije re daer ar prezeger. E Breizh eo a-walc'h lavarout ar wirionez evit bezañ taer. Bezet a vezo, diskouez a reas ar studierion dre o stlakadegoù-daouarn e oant a-du gant rener S.A.D.E.D

Re hir e vefe addisplegañ e brezegenn amañ. Ur rentañ-kont anezhi a zo bet embannet war " O.-F. ". Evit krennañ e c'hellfed lavarout en deus diskouezet G. E. e klote rik stad ar yezh gant stad ar gevredigezh he c'homz. Pareañ ar gevredigezh a ranker m' eur mennet da bareañ ar yezh hec'h unan. Ne c'heller ket plediñ gant ar yezh nemetken.

Er sizhun war-lerc'h e oa bet aozet un nozvezh e sal an Arzoù kaer gant S. K.E.D., ur stroll nevez a ra war-dro an ergerzherezh dreist-holl. Daou film diwar-benn Iwerzhon, prestet gant e Aer Lingus » a oa da vezan luc'hvannet. Ur c'hant bennak a arvesterion a oa deuet. Ar filmoù a oa mat a-walc'h nemet e tiskouezont dreist-holl an tu livus eus Iwerzhon (e gwirionez int bet savet e sell da zedennañ touristed da Iwerzhon) ; sportoù, gweledvaoù, h.a. Ne ziskouezont ket a-walc'h an Iwerzhon wirion he deus strivet d' en em zieubiñ. Eveljust ez eo gwell seurt filmoù eget netra hogen mantrus e vefe barn ur vro diwarno. Ar wech a zeu, spi a zo, e vezo luc'hvannet « Mise Eire » o devoe tro kendalc'herion Landreger da welout e 1962.

A-raok ma vije luc'hvannet an daou film-se em boa graet un tamm kaozeadenn diwar-benn istor Iwerzhon ha kerentiezh an div vro. Ret eo tennañ mad diouzh pep degouezh evit kounañ d' ar Vretoned an ereoù o stag ouzh ar broioù keltiek all.

195

D' ar Sul 4 a viz Ebrel e kemeras lec'h abadenn vloaziek ar C'helc'h Sevenadurel e Roazhon. Padout a reas etre div eur hanter ha seizh eur. Goude-se e voe ur «bal breizhat » a badas betek 10 eur hanter (meur a gorolladeg seurt-se a zo bet aozet gant ar studierion e Roazhon er bloaz-mañ koulz ha warlene).

Marteze ne oa ket deuet kement a dud d' ar c'helc'h P. B. ha ma oa deuet warlene d' ar palez Sant-Jord.

En em c'houlenn a ran ha n' eo ket re hir seurt abadennoù peder eur hanter en holl. Gwell e ve marteze ober div abadenn a ziv eur (ma vefe tu) e-barzh karterioù disheñvel, ha da noz : da sul ez a kalz Roazhoniz war ar maez gant o c'hirri adal m' eo erru an nevez amzer.

Ret eo lavarout he deus koustet an abadenn-se kalz a labour da baotred ar c'helc'h. Kanaouennoù e-leizh hag a bep seurt o deus desket ; a-hend-all, sonourion a zo deuet da seniñ tonioù savet gant sonourion vreizhat, Guy Ropartz peurgetket. Ar pep pouezusañ en eil lodenn an abadenn, avat, e oa ar pezh-c'hoari an « Anv bras » gant Per J. Helias. Tremen a ra an darvoudoù anezhañ war aod kreisteiz Kernev korn-bro Pont 'n Abad (perak implijout ar ger « bro ar bigoudenned » e-giz pa ne vije nemet merc'hed etre ar gêr-se ha Pouldreuzig). Emañ skrid ar « reuzc'hoari »-se em levraoueg hogen gwall bell zo n' em eus ket bet tro d' hen lenn. Daoust ma seblant ar skrivagner marteze bezañ bet soñj eus pezhioù-c'hoari saoz-ouezel zo e-giz « War varc'h d' ar mor » - lennegezh rannvroel iwerzhonat - ez eo prederiet a gav din, gant kudennoù kevredigezhel e

gorn-bro en amzer wechall (en amzer wechall, a lavaran mat, rak en deiz a hiziv n' o deus ket mui nemeur a bouez evit tud ar c'hornioù-bro-se zoken, da skouer e Gwaien). Ur gevredigezh a-bezh a zo aet da get e Breizh abaoe derou ar c'hantved-mañ.

Brizh-reuziek em eus kavet testenn ar pezh-c'hoari dre vras, un tammig hir a-wechoù. C'hoariet e voe mat gant paotred ar c'helc'h a zisplegas warlene « Karr-kañv an Aotrou Maer » eus Youenn Drezen, gant kement a ampartiz. Salv ma kendalc'hint gant o labour.

Peogwir emañ gant P. J. Helias e c'hellan komz eus unan eus e levrioù a zo bet kaset din nevez zo en eskemm va... levr da zont. Un dastumad barzhonegoù a zo anezhan « Maner kuzh » e anv. Bez ez eo ul levr divyezhek embannet gant al levrdirer gall André Silvaire e Pariz e diwezh ar bloaz tremenet, 24 fezh barzhoniezh ennañ.

Un nebeut pismigadennoù a rankan ober da gentañ. Da gentan, ar skritur hec'h unan eveljust a zo an hini skolveuriek (hini touell-c'hoanagoù ar bloavezhioù 1951-1958). Seurt skritur ne zere ket nemeur hag hi mennet da vezañ « poblek » ouzh ur skrid a lennegezh uhel evel hemañ ha na vo lennet ha tañvaet moarvat nemet gant un dibab a lennerion da c'hortoz ma vo savet ar stad breizhat broadel a aotreo da bobl Vreizh adperc'hennañ ar skrid-mañ evel re ar skrivagnerion vrezhonek all a zo barnet, n' eus forzh penaos, da gomz er gouelec'h, evit ar poent. Gwir eo n' eus ket nemeur a chañs e vo degemeret er stad breizhat skritur ar skol-veur c'hall hogen gwell e vo d' ar skrid-mañ bezañ studiet ha lennet er skritur peurunvan eget tamm ebet. Hon emsav-ni a zo chañs nemeti hor skrivagnerion rannvroel.

196

E-keñver yezh, fazioù ha troioù ponner souezhus am eus kavet a-wechoù : **koeñviñ** e-lec'h **gweñviñ** ha rannyezhekadurioù kasaus evel ar « stad outañ », « deuzoutañ » e-kichen « diouzhon » ha « diouzhin ». E-touez troioù ponner, d' am zañva-me setu unan : « m' o zorr an avel e rez penn » ; gwell e vije bet implijout an droienn wenedek « torret d' an avel a rez penn ».

Bremañ an divyezhegezh. Un arouez a rannvroelezh ez eo daoust m' o deus graet ganti broadelourion zo e-giz Roperzh ar Mason ha Loeiz Herrieu (hogen gwenedourion dres hag o devoa ur c'hemplez bennak abalamour d' o rannyezh).

Ar gwashañ zo eo n' en deus ket klasket Helias treiñ e varzhonegoù e galleg hepken hogen o adskriñ, o adsevel, ar pezh a zo arvarus bras rak c'hoarvezout a ra gant al lenner kavout aesoc'h ha bravoc'h an doare galleg eget an hini brezhonek. War ar marc'had, bewech ma chomo al lenner boud dirak ar skrid brezhonek - ar pezh a c'hoarvezo aliesik rak n'eo ket sklaer na boull bepred displegerezh ar skrivagner - e vo techet, evel maz eo natur, treiñ war ar skrid galleg evit klask un «droidigezh » ha disoñjal a ray ar skrid brezhonek.

Doujañ a c'heller a-hend-all n' en deus asantet ar skrivagner da lakaat un droidigezh c'hallek nemet dre ma soñje n' en dije ket kavet lennerion d' ar skrid brezhonek e unan : d' ar c'houlz-se, perak chom hep skrivañ e galleg diouzhtu ?

E gwirionez, evel m' em eus merket, diaes a-walc'h eo an displegerezh ha dreist da intent ar brezhoneger boutin ma ouiije lenn e yezh zoken. Moarvat ne gaver ket kalz a c'herioù nevez pe ziaes ; un nebeudig a zo evelato e-giz « euzhviled », « nevezadur », « derc'henn », « rannved », « rolloù stadel », h.a., hogen ober a ra ar barzh ivez gant troioù espar evel « sioulañs », « kemerer » (« an hini a gemer »), « ar c'hig bevek », « pedenniñ », « manegiñ », da skouer :

Da beilh (kroc'hen) a vaneg strizh da eskern...

Ober a ra a-wechoù ivez gant ereadurioù lennegel a lak da soñjal er re a gaver e skridoù barzhed kembraek an XIXvet kantved, lakaomp, o lakaat an anv-

gwan a-raok an anv-kadarn, da skouer er gwerzennoù-mañ :

O tougen, frouezh un arvarus aradur,  
ar c'hounioù sec'h a-dreuz an irvi...

Kement-mañ a verkan n' eo ket evit pismigat hogen evit diskouez ne c'heller ket tec'hout diouzh ar brezhoneg lennegel adal ma kroger da skrivañ e brezhoneg, evel maz eo kaer gortoz. Talvoudus eo al levr-mañ dre vras evelato. Skrivet eo gant aked ; pezhioù zo a zo kaer kenañ hag ar barzh a ziskouez kalz a wirionded hag a gizidigezh.

197

Gwall deñval eo awenadur an dastumad-mañ a-hend-all, dispi koulz lavaret :

E teuan gant va foan skoulmet e toull va gouzoug...  
Hag ez in pe gozh pe grenn  
d' an tremenvan va unan penn...

Evit darn e teu marteze an dic'hoanag-se eus dic'halloud ar barzh dirak dismantr kement en deus karet en amzer e vugaleerezh en e gorn-bro. Ne c'hortoz ar barzh advuhez ebet dezho. A-hend-all, trubuilbet eo gant eñvor loskus an eurvad damwelet, ha steuziet (Maria, Pennhérez ar Palud). Ar marv a zo o tont abred (Marc'h ar bed). Diboell eo ar bed :

Hag anat maz eo d' ar bed war du-gin  
e kerzh eeun ar c'hrank, a-dreuz ar paotr fin...

E vuhez n' he deus ster ebet : *Sorc'henn, sorc'henn va buhez...* Ha war un dro, daoust da se, en em ziskouez ur garantez ouez evit ar vuhez vresk-se profet deomp gant hor c'horf (Teir nozvezh). Klask a ra ar barzh kempouezañ e zispi gant ar soñj ez eo an den dreist d' an hollved a-bezh, e-giz ma rae Pascal gwechall ; an den a ro e dalvoudegezh d' an hollved :

Met ar bed  
a dalvez leun dre berz buhez Mab-den...

E lec'h pe lec'h, met dreist-holl e diwezh ar varzhoneg-se e tarzha ar spi ez eus un tu-hont d' ar vuhez-mañ ha d' an den e-unan :

Emaon war-bouez mont er gwir da vat...

Ha dreist-holl dibenn ar pezh diwezhañ " Maner kuzh " :

A-walc'h e vefe digeriñ an nor  
Hag an holl draoù a gavfe o zu reizh...  
War ziwezh an diwezhoù, un dorn a bouezo war un nor,  
Un tan a strinko da zizoleiñ un dremm bennak..  
Rak gouzout a ran ez eus un bennak...

E gwirionez, ne skriver ket mui evit ar bobl hag ar skridoù a anver poblek n' o deus ket kalz muioc'h a lennerion eget " Preder " e-unan. Evelato e kaver c'hoazh un nebeut skrivagnerion a zo techet da skrivañ ar brezhoneg evel pa vije bepred lennerion e-touez tud ar bobl. Nevez zo, da skouer, em eus bet tro da lenn " Kaozioù Tintin Mari " gant Ernest er Barzhig a zo ur skrivagner o chom e Roazhon. Seizh a gontadennoù a zo en dastumad-mañ ha tennañ a reont muioc'h d' ar werinoniezh eget d' al lennegezh. Lod eus ar c'hoñchennoù-mañ bet dastumet war vaezioù Treger a lak da soñjal e kontadennoù broioù all evel " Ar c'hemener bihan " pe " Meudig " pe " Ali-Baba ".

198

Eeun ha skañv eo ar yezh ha plijus da lenn hogen ne gav ket din ez eo an dud eus ar bobl dedennet tre hiziv gant hevelep lennegezh, nemet ar re gozh e ve. N'eo ket skrivet e brezhoneg unvan kennebeut.

Evit echuiñ eo ret lavarout un nebeut gerioù diwar-benn an abadenn aozet gant ar vugale vrezhonegerion e Roazhon dindan paeroniezh " Emglev an Tiegezhioù " ha renet gant an It. de Rohan-Chabot. Displeget eo bet e sal ar C'helc'h Sevenadurel d'ar sul diwezhañ a viz Ebrel. Leun chouk e oa ar sal hag arvesterion a oa deuet eus Gwened ha Sant-Brieg zoken. Evit gwir ne voe ket klasket displegañ lennegezh uhel : re vihan e oa ar vugale alies hogen liesseurtoc'h ha pinvidikoc'h e voe an danvez eget warlene. A bep eil e voe c'hoariet " Ar gorriganned ", " Mont d'al Loar " gant Erwan Kervella, mab ar skrivagner, hag ur pezh-c'hoari berr savet gant an It. de Rohan-Chabot, an darvoudoù anezhañ o tremen en amzer ar c'houanerezh hag a voe displeget gant ar re vrasañ eus ar vugale, gant ampartiz a-hend-all ; erfin ur jestraoueg harpet gant pennadoù-komz enskrivet war ur sonenroller. Teir eurvezh bennak eo padet an abadenn. Dav eo ober gourc'hemenoù d'ar vugale koulz ha d' ar re o deus gourdonet anezho.

Kement-se a ziskouez ez eus tu atav da vagañ ur vuhez sevenadurel en degouezhennoù diaesañ. Implij ar sonenroller en deus va lakaet da soñjal ez eus tu da aozañ a bep seurt abadennoù bihan er gêr gant ar vugale : o lakaat da zeskiñ ha da zibunañ barzhonegoù, da aozañ ha da zisplegañ ur pezh-c'hoari. Gant ur c'hamera ouzhpenn e c'heller o lakaat da sevel filmoù-komz bihan. Moarvat ne vo ket oberennoù uhel hogen reiñ a raint tro d' hor brezhonegerion yaouank da gemer perzh en ur vuhez sevenadurel modern. Seurt embregerezh a c'hell o broudañ da zoonat ha da wellaat diwezhatoc'h an hent o devo toullet ha pleustret ez vihan.

## A-DREUZ-LENN

Youenn OLIER

CONAIRE (Padraic O.). - Deoraidheacht. Uirsgéal. An dara eagran. - Baile Atha Cliath agus Corgaigh, Comhlucht oideachais na Eireann, hep amzeriad. - In-8°, 149 p.

Setu troidigezh an talbenn : Harlu. Romant. Eil mouladur. N' em eus kavet amzeriad ebet war al levr. Marteze e tro 1955. Skrivet eo avat er skritur kozh. Berzh he deus graet an oberenn avat peogwir hon eus afer ouzh un advouladur.

Evel ma lavar an talbenn ez eo " Deoraidheacht " ur romant. E gwirionez ez eo skrivet er c'hentañ gour evel ul levr eñvorennoù pe un deizlevr. Ur paour kaezh den a gont deomp e istor : bevañ a rae e Londrez e-lec'h e oa divroet eus Galiv da c'honit e damm greun. Mac'hagnet eo bet avat en ur gwallzarvoud, diskaret gant ur c'harr-tan. Goude mizvezhioù hir en ospital e teu e-maez a-benn ar fin hogen bale a ra war-bouez flac'hoù ha n' eo ket mui gouest da c'honit e vuhez. A-benn chom hep mervel gant an naon, ur wech m' en deus dispignet an tammig digollamant en deus bet digant an Asurañs, e asant da ginnigoù Alf Trott, rener ur sirk bihan a gantren a gêr da gêr war an hentoù bepred. C'hoari a ra e roll den ar c'hoadoù, treuzwisket dindan foulenn ul loen gouez, ur gontell wadek en e gichen ha lakaat a ra da vamiñ an arvesterion a zeu d' e weladenniñ en e gaoued en ur leuskel bep an amzer ur c'harmadenn skiltrus. Ha diskouez a reer ouzhpenn, neuze, ar gontell leun-wad m' en doa lazhet tud ganto d' ar c'houlz maz eo bet paket.

Kendalc'het en defe gant ar vicher-se (ober a reer pezh a c'heller !) anez he dije merc'h Alf Trott, ur mell lardonenn a blac'h lakaet en he fenn dimeziñ gantañ. Mont a ra betek pokat dezhañ p' emañ ar sirk o tremen e Galiv, kêr c'henidik ar paotr. Souprenet eo avat gant an tad a zegouezh d' ar mare-mat hag a ra van da grediñ ez eo ar paotr an hini en deus klasket loavañ e verc'h. E vad a ra Alf Trott eus ar blegenn-se evit rediañ an den kaezh da zimeziñ. D' en em zieubiñ e tiskuilh hemañ neuze da noz d' an arvesterion e ra mestr ar sirk goap outo ha n' eus ket anezhañ tamm ebet un « den-ar-c'hoadoù ».

200

En eil lodenn e adkavomp ar paotr e Londrez endro, en e garter kozh, e-touez Iwerzhoniz divroet, peorion ha tavanteion. Adarre n' en deus tamm arc'hant ebet. Gant sikour un den a lezenn e klask kaout digant Alf Trott ar paeamant a zo dleet dezhañ evit al labour en deus graet en e sirk hogen ne zeu ket a-benn. Mervel a ra gant an naon koulz lavaret. Skoazellet eo un tammig gant ur vaouez en deus anavezet a-raok mont kuit gant ar sirk. En diwezh ez eo adkavet war un dro gant e zanvez-pried kozh n' en doa ket mui klasket daremprediñ war-lerc'h e wall-zarvoud, genidik eus Galiv, ha gant merc'h Alf Trott a fell dezhi atav lakaat an arigrap warnañ. Ne zimez na gant an eil na gant eben. En dibenn e welomp ar c'haezh den o klask ur plas beilhour noz : c'hwitañ a ra gant e vennad hag en em lazhañ a ra a-benn ar fin.

Ur romant gwall drist evel ma weler. E gwirionez, daoust ma tremen e-touez tud eus ar bobl, e-mesk tavanteion a bep seurt, e vefe reiñ re a bouez d' al liv kevredigezhel en oberenn-mañ. Da soñj ar skrivagner moarvat ez eo an dic'hañs hepmuiken kiriek da donkadur e haroz : n' eus netra direishoc'h eget ar vuhez. Ar vuhez hec'h unan a zo tamallet eta ; houmañ a ra goap ouzh an dud, a ra anezho marmouzion barnet da glask un eurvad lu an eil gant egile, evel ar paotr ungarek gant al lardonenn.

Daoust hag ar skrivagner a gendaon Doue hag ar bezoud evit se ? Ne seblant ket. Tudennou ar romant a asant d' ar vuhez e-giz m'emañ hep ober goulennou. C'hoarvezout a ra gant an hini mac'hagnet ouzh ar re a ra war e dro, da skouer. Hogen ne varn ket ar bed.

Ur varzhoniezh souezhus a zo er romant-mañ. Diseurt eo an aergelc'h hag ar

c'helc'hiadur. An tudennoù ivez a vev e-kreiz an natur a zihuz anezho. Taolennadurioù zo a zo kaer ha dedennus kenañ, evel hini an noz ha tarzhan-deiz e diwezh ar gentañ lodenn.

Ur romant dudius ha nerzhus, muioc'h orinel ha dioutañ e unan eget meur a romant kembraek am eus lennet nevez zo hag a hañvale goular a-walc'h. Muioc'h a entan hag a awen a zo marteze en ur vro dieub eget en ur vro sklav hag a zegemer re aes he sklavelezh.

\*

201

Jord KLER

STEPHAN (Enno). - Geheimauftrag Irland = Deutsche Agenten im irischen Untergrundkampf (1939-1945). Troet e galleg e 1964 : " Espions Allemands en Irlande

" England's difficulty is Ireland's opportunity. "

Kalz a levrioù a vez embannet ingal hag ingal diwar-benn darvoudoù skrijus, buhez risklus ar spierien. Lennet hoc'h eus, a dra sur, oberennoù Jean Bruce (O.S.S. 117) hag hini John Le Carré : " The spy who came in from the cold ". Houmañ a reas berzh. Al levr embannet gant ti-embann Trévis e dibenn 1964 n' eo ket un oberenn savet diwar faltazi ur romantour o neuziañ gant ijin buhez arvarus ur spier bennak. Nann. Ul levr a istor eo. Setu ar pezh a zo skrivet er raskrid gant an oberour : « El levr-se e vez dibunet istor darvoudoù un dachenn-vrezel - an hini vihan - eus ar stourm ramzel a zaoubennas ar bed eus 1939 da 1945. En Iwerzhon, an Alamaned n' o deus bet nemet un den lazhet hag eñ eo an hini en em lazhas goude ar brezel ».

Danvez al levr ? Pa darzhas ar brezel, an Alamaned a esaeas skoulmañ darempredoù kuzh gant izili an I. R. A. « Mar lezit ac'hanomp da zont da Iwerzhon, mar asantit reiñ deomp ur skoazell a-enep ar Saozon, e c'hellimp ho harpañ en ho stourm. Kontelezhioù hanternoz a gouezho en ho ser. » Setu dre vras ar pezh a gane an Alamaned d' an I. R. A. Siwazh, kalz enebourien a gavjont. Da gentañ holl, ar Saozon evel just, met Renner Gouarnamant Dublin ivez, Eamon De Valera, a reas e seizh gwellañ evit mirout e vro - pell diouzh an emgann. Dont a raio ar maout gentañ. Danvez al levr n' eo nemet danevell ur stourm didruez, daoust dezhañ da vezañ kuzh. A dra sur ez omp estonet bras ha dedennet war un dro o lenn an istor-se, leun a zarvoudoù skrijus ha farsus a-wechoù.

Darvoudoù skrijus : marv Russell, rener an I. R. A., e bourzh ul lestr-spluj e donvor Galway ; c'hwitadenn ar c'homandant Görtz (hemañ eo en em lazhas e Mae 1947. Sebeliet eo bet e bered Deans Grange e Dublin).

Darvoudoù fentus : beaj ar vag " Anni-Braz Bihen ", eus Douarnenez, deoget gant an Alamaned ; istor Schütz a zeuas a-benn da dec'hout eus toull-bac'h Mountjoy, treuzwisket gant dilhadoù merc'hed. Darvoudoù 'zo a chomo kevrinus. Penaos e varvas Sean Russell ? Peseurt roll a c'hoarias Hayes, warlerc'hiad Russel ? Hayes a anzavas ur bern traoù luziet. Pelec'h emañ ar wirionez e-mesk ar rouestladegoù se ? Un treitour eo ? Penaos e teuas a-benn da vont kuit en ur laerezh pistolenn ar soudard karget d' ober war-e-zro ? Piv a zo kablus eus bac'hidigezh Görtz (27-11-1941) ? Fazi ? Trubarderezh ? Taol-yud ? E gwirionez, meur a zarvoud a zo chomet kuzhet ha biken ne vo diskuliet traoù ' zo.

El levr-mañ e vez dibunet ar pennadoù istor-se en un doare bev ha serz. Ul levr istor eo met lennet e vez gant kement a blijadur hag ur romant-polis. Ne c'heller ket serriñ al levr a-raok tizhout ar bajen diwezhañ. E-keñver an dielloù, anat eo en deus graet an oberour e vad outo. Dastumet en deus enne diskleriadurioù a-bouez. Reiñ a ra deomp un daolenn, un oberenn dalvoudus ken evit istor Iwerzhon hag an Emsav broadel I. R. A.

202

Bremañ e welomp darempredoù nevez o kregiñ etre Iwerzhon ha Gouarnamant ar

C'hwec'h Kontelezh. (D' ar 14vet a viz Genver, Sean Lemass a yeas da Velfast da weladenniñ O'Neill, rener ar C'hwec'h Kontelezh.) Bez' e c'hellomp laveront n' eo ket bet displetus labour I. R. A. N' eo ket bet displetus kennebeut da Stephan hon lakaat da anavezout ar stourm-se. Ar pezh a welomp hiziv - hag ar pezh a welimp warc'hoazh, a zo bet fardet gant kalon ur bern tud yaouank pe gozh, brogarourien daer anezhe. Ur gentel eo ! Chom a raio bev en hor spered tud evel Jim O'Donovan, Sean Russell, Caitlin Brugha, intañvez Cathal Brugha, haroz meur eus ar stourm evit dieubidigezh Iwerzhon, lazhet ur bistolenn gantañ e pep dorn.

Erbediñ start a ran al levr-se. Ur pikol oberenn eo, 344 pajenn enni, kaeraet gant 20 luc'hskeudenn eus ar gwellañ, ha dibabet mat.

Ar re hag a blij dezhe anavezout gwelloc'h istor Iwerzhon e-pad ar brezel diwezhañ - hag int niverus - a lenno gant plijadur al labour-se hag a zegas sklerijenn war ur prantad dianav a-walc'h da veur a hini.

Ur ger all a-raok echuiñ : troet eo bet " Espions Allemands en Irlande " gant Herri Thies ha J.-J. Villard. Un taol-mestr eo.

Embannet eo al levr e ti-Trévisé, 34, rue de Trévisé, Paris (9'). - 16 lur e koust.



## **NOTENNOU**

Savet pe gempennet eo bet an notennoù-mañ gant Per Penneg, Y. B. Piriou, Per ar Bihan ha Ronan Huon

### **Hor Mignoned.**

Lidet eo bet eured Jorj KADOUDAL ha Nikol KEMENEUR d' ar 5 a viz Mezheven, e iliz-parrez Magor.

Rozenn de LANGLAIS ha Xavier de COLLART he fried o deus bet ur mab, Gwendal e anv.

D' ar 26 a viz Mezheven ez eo bet lidet e Iliz Antrain-sur-Couesnon, Ill ha Gwilen, eured Yann KERGALL ha Viviane de ROHAN-CHABOT.

Gwennole ar MENN ha Garmenig IHUELLOU e bried zo laouen o reiñ deoc'h da c'houzout o deus bet ur mab Brieg Iwan, e Sant-Brieg d' ar 16 a viz Mezheven.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

### **Kañv.**

Klevet hon eus ez eo aet da anaon mamm Charlez ar GALL, rener abadennoù brezhonek ar skingomz hag ar pellwel.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d' hor mignon ha koumananter.

Ronan HUON a drugareka a greiz kalon an holl re o deus diskouezet o mignoniezh dezhañ ha d' e diegezh da geñver marv trumm e dad degouezhet d' an 30 a viz Ebrel e Brest.

204

### **Profoù.**

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e korf an daou viz diwezhañ:

#### **EBREL :**

Dll A. M. Rivalin, 30 lur ; Erwan an Heveder 5 ; Klaoda Soulabail, 5 ; F. R. Moyse, 7,40 ; Bartrig Basclet, 5 ; Remont Tassel, 75 ; M. Blanchard, beleg, 5.  
- War un dro, 132,40 lur.

#### **MAE :**

Kl. Barbotin, 5 lur ; Yann Gamilh Hanus, devezh ar brezhoneg, 10 ; Lusian Chalier, d. ar b., 10.  
- War un dro, 25 lur.

Profet eo bet d' AL LIAMM, abaoe deiz kentañ ar bloaz, 1.332,40 lur. Trugarez bras, hag a-greiz hor c'halon, d' an donezonerien galonek.

### **569 Koumananter.**

569 koumananter a gonte AL LIAMM e dibenn miz Mae (537 warlene d' an hevelep mare). Gant un tamm mat a labour hag un tamm bihan a chañs e tleomp e miz Kerzu tizhout an niver a 600. Lakait ho keneiled da goumanantiñ pe da adkoumanantiñ, pe neuze kinnigit dezho ur c'houmanant-bruderezh evit 15 lur. Roit deomp chomlec'hioù.

### **Priz ar moulañ.**

Koustet en deus niverenn 108 AL LIAMM 1.737,61 lur (gant ar mizoù-kas), tra m'

en deus savet priz an niverenn 109 da 1.831,17 lur. An div niverenn a gont 72 pajenn ha tennet ea bet 700 skouerenn eus pep hini. Ar mouler, goulennataet ganeomp, en deus respontet e oa bet uhelaet ar goprou ha resisaet deomp ouzhpenn e oa ur c'hresk all da c'hortoz a-benn miz Here. Derc'hel a reomp priz ar skodenn da 20 lur, hogen ar striv kentañ d' ober eo kavout koumananterien nevez.

#### **Niverennoù kozh da werzhañ.**

Gallout a reer prenañ rummadoù klok a niverennoù embannet er bloavezhioù-mañ :  
1958 (61-71), 1959 (72-77), 1960 (78-83), 1961 (84-89) : 15 lur ar rummad.  
1962 (90 - 95), 1964 (102 - 107) : 20 lur ar rummad.

Kas ar goulennoù hag an arc'hant da Ber ar Bihan, sekretour.

#### **Lizhiri.**

Sed amañ lizher ur paotr yaouank nevez koumanantet :

« Degemerit, me ho ped, va gourc'hemenoù : plijet-tre on bet gant ho kelaouenn peurvuañ, daoust ma 'z eus pennadoù a-wechoù diaes da lenn, va lakaat a reont da zeskiñ traoù dianav din meur a dro ha gallout a ran dreist-holl heuilhañ bremañ an nevezenti lennegel e Breizh ha war un dro gwellaat va brezhoneg ivez. »

F. B.

205

Digant P. P. :

« Kas a ran deoc'h va adkoumanant (war baper kaer - kalz bravoc'h eo an hini hoc'h eus dibabet abaoe warlene) hag ur prof. Spi am eus e vo stanket toull ar c'hef a-raok dibenn ar bloaz hag e kendalc'ho da sevel niver ar goumananterien. »

#### **Ul levr nevez gant Langleiz.**

Romant Langleiz « **Enez ar Rod** » bet embannet e brezhoneg hag e galleg 20 vloaz 'zo a vo adembannet e galleg hepdale gant Denoel. Un abadenn skingomz a vo graet e Lausanne diwar-benn al levr.

Ul levr all gant Langleiz « Romant ar Roue Arzur » a vo ivez embannet e galleg hepdale, gant " Les Editions d' Art Piazza ". 15 skeudenn a vo ennañ. Laouen e vijemp avat o welout « Romant ar Roue Arzur » embannet e brezhoneg un deiz.

#### **Levrioù war baper kaer.**

Chom a ra da werzhañ un nebeut levrioù war baper kaer e ti AL LIAMM :

- **An Aotrou Bimbochet e Breizh**, romant gant Roparz Hemon, war Arches, 7 Lur. Pourwerzhzet eo ar skouerenoù boutin.
- **Dremm an Ankou**, kontadennoù gant Abeozen, war Arches, 7 Lur.
- **Evit ket a netra**, romant gant Roperzh ar Masan, war Arches, 8 Lur.
- **Istor Al Lennegezh**, gant Abeozen, ur skouerenn war Alfa 15 Lur ha 2 war Rives 20 Lur.
- **An Tri Boulomig kalon Aour**, romant gant Roparz Hemon, ur skouerenn war baper kaer « Marais » 22 Lur, ha re all war Lafuma 18 Lur.
- **Abrobin**, gant D. de Foe ha Yeun ar Gow, war Lafuma 18 Lur, war Rives 25 Lur.
- **Diamantoù Keroulaz**, romant gant Roparz Hemon, war Lafuma 18 Lur, war Montgolfier 32 Lur.

#### **Ar Post hag an anvioù-lec'h e brezhoneg.**

Dievezh hon eus kaset un niverenn d' ur c'houmananter en ur verkañ war ar vandenn : BENAC'H, Aodoù an Hanternoz, Benac'h o vezañ evel ma oar pep hini Belle-Isle-en-Terre e galleg. Distroet eo bet an niverenn deomp goude bezañ aet d' ober un dro dre BENAC (Pireneoù Uhel) ha BENAC, dre v-BRASSAC (Ariel).

**Gouel Sant Erwan.**

Lidet eo bet e brezhoneg oferenn Sant Erwan d' an 19 a viz Mae en iliz-veur Sant Kaourintin a Gemper, gant an Tad Chapel, dirak ur 150 bennak a dud. Ur gaer a brezegenn a voe graet ouzhpenn gant an Tad Chapel.

Da geñver Gouel Sant Erwan ez eus bet ivez lavaret un oferenn vrezhonek e Ti ar Studierien Gatolik e-kreiz kêr Vrest, dirak 300 den bennak, hag e Sant-Mark da Lun ar Pantekost.

**Ar c'hoari mell-droad hag ar bruderezh.**

D' an 10 a viz Ebrel da geñver ur gevezadeg vell-droad e Roazhon ha pa oa deut di laz an Naoned e oa bet dispaket gant paotred kalonek hag ampart diskennet war al letonenn panelloù warno « M.O.B. : Parlement Breton » ha « Du travail en Bretagne ». Un taol efedus pa oa 25.000 arvester war an dachenn ha reoù all kalz niverusoc'h dirak o benveg-pellwellerezh.

Evit match diwezhañ « Kib-Evañ Bro-C'hall » a stourme eviti lazoù mell-droad Roazhon ha Sedan e oa deut niverus ar Vretoned, ha komzoù ha kanaouennoù brezhonek koulz ha mouezh ar biniou a voe klevet e Park ar Priñsed Pariz. Paotred an Hent-houarn Brest a ziskoueze ur skritell vras, warni « Atao araok Roazon » tra ma stlake stank en aer ar bannieloù gwenn ha du. Pa voe trec'h ar Vretoned, en em zastumas c'hoarierien Roazhon dindan ar bannieloù evit al luc'hskeudennoù, embannet goude-se war gelaouennoù evel Le Figaro, Paris-Match, h.a. Bannieloù broadel c'hoazh war luc'hskeudenn vras Ouest-France pa voe distro d' ar gêr laz Roazhon.

« Kib Evañ Bro-C'hall » evit Roazhon ha kentañ plas « Kevezadeg vloaz Vro-C'hall » evit an Naoned o deus roet lorc'h da bobl Vreizh, ha mat eo d' an Emsav bezañ roet un tamm liv broadel d' an trec'hioù-se.

**Ar Skol-hañv Gembraek.**

Ar Skol-Hañv Gembraek a vo dalc'het e Coleg Harlech eus ar 7 betek ar 14 a viz Eost. An Dr Laurent (Santé Départementale, Gwened) a c'hell reiñ diskleriadurioù diwar-benn ar skol hag an doare da vont du-hont.

**War ar c'helaouennoù.**

War niverennoù diwezhañ ar « Peuple Breton », kelaouenn an U. D. B., hon eus lennet gant plijadur pennadoù hor c'henlabourer Yann-Ber Piriou diwar-benn hol lennegezh. Al lodenn sevenadurel he doa betek-hen graet diouer d' ar gelaouenn-se.

Adkroget eo an « Avenir » ivez da embann burutelladennoù war " Al Liamm ". Savet e vezont gant Millo Kerham.

207

Yann Poilvet a zalc'h da embann taolenn pep niverenn " Al Liamm " war ar sizhunieg « Seine-et-Orse » ha « La Gazette de Fille-de-France ».

**Kamp ar Vrezhonegerien.**

Kamp 1965 a vo dalc'het e Rostrenen azalek an 29 a viz Gouhere betek ar 15 a viz Eost e skolioù ar vourc'h. Sed amañ ar pep pouezusañ diwar-benn ar c'hamp tennet eus ar c'hannadig ar « Skol-hañv » :

« Distreiñ a raimp d' al lec'h e oamp bet degemeret ken mat e 1959.

Hor soñj a zo resev ar vugale evel ma reomp abaoe daou vloaz. Koulskoude ne vo sevenet ar mennad-se, nemet ma kavomp trawalc'h a evezhourien d' ober war o zro. Kavet 'z eus bet unan, met ezhomm hon eus unan all c'hoazh, d' an nebeutañ.

Ar gerent o defe c'hoant kas o bugale d' ar c'hamp o zo pedet d' her c'hemenn

deomp ar c'hentañ ar gwellañ evit ma c'hellfemp aozañ pep tra e koulz.

**Ar Vuhez er C'hamp.** - Diouzh ar mintin : Kentelioù (meur a rummad diouzh derez ar skolidi). Prezegenoù war danvezioù o tennañ da bep seurt kudennoù, graet gant skrivagnerien, skiantourien, arzourien anavezet.

Diouzh an abardaez : Ur gentel diwar-benn un danvez o tereout ouzh an holl : lennegezh pe sonerezh-pobl, pe c'hoariva. Goude-se, ur valeadenn, a vo d' he heul un eurvezh-kanañ evit ar re a blij dezho ar sonerezh.

Goude Koan, un « Nozvezh laouen » a lakaio da dalvezout ijin an dud pe an traoù desket e-kerz an eurvezhioù-labour.

**Pezhioù-c'hoari.** - War-lerc'h hol lizher diwezhañ eo deut deomp kinnigoù evit ar pezhioù-c'hoari. Dibabet bon eus an div oberenn-mañ :

- « Meurlarjez » gant R. Hemon (embannet war " Walarn ", niv. 114, Mae 1938), 4 c'hoarier (2 baotr, 2 blac'h) ;

- « Dogan » gant S. Riou (embann. " Skrid ha Skeudenn ", 1943), 4 penn-c'hoarier + 5 all o rolloù berr-tre. Paotred hepken o c'hoari ;

hag un trede a vo tu aozañ ma vez kavet c'hoarierien niverus a-walc'h :

- « Ar Vrud a Red » gant Lady Gregory (embannet war " SAV ", niv. 18, 1940), 10 c'hoarier : 7 paotr ha 3 plac'h.

Mat e vefe kregiñ diouzhtu gant deskiñ ar rolloù, en doare ma ne chomfe nemet studiañ ar c'hoari e-pad ar c'hamp. Ar re troet gant ar c'hoariva hag a garfe kemer perzh en abadennoù a c'hell skrivañ deomp. Ma n' emañ ket an testennoù en o c'herz, ra lavarint deomp ha kaset e vo dezho un eilskrid.

**Trec'h Kentañ.** - Ma n' hoc'h eus ket tremenet an Trec'h Kentañ, c'hwi a c'hello e dremen e kamp Rostrenen. Goulennit ouzhimp an danvez ret da c'houzout. War ho koulenn e vo kaset deoc'h ivez Diazezoù Istor Breizh evit an amrouenn Istor.

208

Penaos mont da Rostrenen ? Dre ar c'harr-boutin. Linennoù : Kemper - Sant Brieg - an Oriant, Sant Brieg-Karaez, ha linenn douristel Sant Malo - Kemper.

Priz an devezh a vo resisaet war hol lizher Miz Gouhere, pe kaset d' ar re a c'houlennno.

O c'hortoz hoc'h enskrivadurioù emaoamp, ha spi hon eus e vint niverus-tre ! » Skrivañ da : V. de BELLAING, 28, Str. an 3 Breur Ar-Gov, SANT-BSIEG (Pell. 26-66).

**Eskennoù sevenadurel.**

Gab Cherel e niverenn miz Mae ar gelaouenn « Breiz », o venegiñ an eskennoù a bep seurt etre broioù, kêrioù... a ginnig ober ivez eskennoù a vugale. Gant se e vije posupl, emezañ, d' ar re a fell dezho e teskfe o bugale brezhoneg, lakaat anezho e tiez brezhonegerien. Mat eo ar menoz eveljust ha da studiañ eo. Ar re o deus o soñj war ar gudenn a c'hell skrivañ da G. Cherel, 10, rue de la Cochardière, Roazhon.

**Dornlevr krennvrezhonek.**

Savet eo bet al levr-mañ war c'houlenn S.A.D.E.D. gant Goulven Pennaod en deus graet evit hen ober e vad eus oberennoù E. Ernod, R. Hemon, Abeozen, P. ar Rouz, H. Lewis, A. Even, L. Fleuriot hag eus e labourioù-eñ ivez. Talvoudus e vo an dornlevr da bep hini a fell dezhañ klokaat e anaoudegezh eus ar brezhoneg. Goulenn anezhat digant « Preder », Maen ar Ya, Kastellin. Priz : 13,50 lur.

**Studi hag Ober**

Ken plijus ha biskoazh vez lenn " Studi hag Ober ", menegomp en niverenn 2-3 : **Ar Gouelec'h, Donedigezh ha Ar Rouantelezh vev**, barzhonegoù dreist gant Maodez Glanndour. Ken e komz-plaen, ken e gwerzennoù e oar Maodez Glanndour kavout ar gerioù hol laka da gridiennañ gant an esmae :

Tremenet eo o lezel tres e dreid  
Enlouc'het e pri hon hentoù...  
Hag engroezioù an dad a heulie son e vouezh  
Tremenet eo,  
Ha bepred e teu, bepred e teu.

Skriavañ da L. ar Floc'h, Louannec (C.-d.-N.). - C.C.P. Rennes 519-40.

209

#### **Gwir Vretoned.**

Dindan an talbenn-se ez eo bet embannet e niverenn 28-29 « Skol » un dastumad a 74 kanaouenn, gant an notennoù. E penn al levr e kaver ur rakskrid savet gant Maodez Glanndour, ma studi ennañ **ar** skeulioù-kan implijet er sonerezh.

« Paol ar Flemm, en ur studiadenn diwar-benn ar sonaozourien a-vremañ e Breizh, a lavar gant gwirionez ez eo lourennel hor sonerezh : fellout a ra dezhañ displegañ hon ene, hor Mister diabarzh... Gant ar c'hentañ klevout e seblantje a-walc'h bezañ unton, dilufr. Ur seblant n' eo ken. Rak pinvidigezh eston a zo gantañ. Evel ene hor bro ez eo ! Sellet eus a-bell, e hañval dremm hor maezioù bezañ plat hag eeun. Met gwelet a-dost, n' eus nemet sav-diskenn ha liesdoare. It e-diabarzh Koadeg Brekelien, ha selaouit he breoù. Traoù henamzerel, kounadurioù a-wechall, galvadennoù-hud, danevelloù meur, eo ar re a glevot, mesket gant trouz-bond un taboulin o skeiñ kadarn. »

Piv a c'hellfe komz gwelloc'h eus sonerezh Breizh nemet unan eus he vrasañ barzhed ?  
Priz al levr 6 lur. - C.C.P. Revue SKOL Rennes 19011-06.

#### **" Ar Vro ", niverenn 30**

Pennedoù mat gant ar rener hag Alan ar Banner. Pennadoù brezhonek, diwar-benn Roje Casement, Skourr Breizh. Skridoù fromus da geñver marv ar stourmer H. Delaporte. Gant an notennoù pinvidik o danvez, setu un niverenn a-bouez. Ouzhpenn gouestlet eo enni 20 pajenn leun da gevredigezhioù ha kelc'hgelaouennoù Emsav ar Yezh ; ur gaer a skoazell eo evit pep hini anezho. « Ar Vro », koumanant 20 lur, J. Desbordes, B. P. 48, Brest. - K. R. P. 1439 79 An Naoned.

**Dafar evit ur c'heriaoueg a 'n ardamezouriezh** gant Yellen hag abEnnez.

An oberenn-mañ, paeroniet gant Akademiezh Vreizh, a zigor hentoù nevez d' hor yezh. E Breizh n' hor boa betek-hen met « Armorial de Bretagne » gant de Courcy hag e galleg e oa. Ar c'heriaoueg-mañ a zo frouezh ugent vloaz labour. An ardamezourion kar-o-yezh a gavo amañ peadra da dremen meur a eurvezh blijus hag ar re douget d'ar varzhoniezh pe zoken d' an huñvre, gerioù livus ha kaer da vagañ o rambreoù. Bazilisk, kaouan-gazh, unkorn, leonerer, meurc'hurlaz, erez daoubennek, korrgi, moroc'h, keurgazh, ha ne gaver ket alies al loened-mañ o tifenn dorioù Kastell ar Vojenn ?  
Embannet gant H. HILLION, Arzon (Morbihan). - C.C.P. Rennes 120-68.

210

**" Catholicon Yann Lagadeuc "** gant Per Trepos, kelenner e Skol-Veur Roazhon.

Advoulet eo bet gant " Emgleo Breizh " pennad hir Per Trepos en " Annales de Bretagne ". Pemp kantved 'zo e voe embannet ar « C'hatolicon e teir yezh, da lavarout eo brezhoneg, galleg ha latin ».

Yann Lagadeuc eus parrez Plougonven en doa poaniet kalz e-unan evit mestroniañ ar galleg da gentañ hag al latin. Brezhoneger a-vihanik e oa ha klasket en deus

gant e g- « Catholicon » sikour ar « paour kaezh kloer breizhat » a gave an hevelep diaesterioù hag eñ.

En tu-hont d' an interest bras a gavomp el levr evit pezh a sell stad ar brezhoneg er pemzekvet kantved ez eus ivez diskleriadurioù a-bouez diwar-benn istor ar moulerezh e Breizh war ar seblant e voe diazezet an ti-moulerezh kentañ e 1484 e Brehan-Loudieg, gant skoazell an Aotrou Rohan.

Menegomp ivez ar rakskrid gant Killivere hag a zo bet adembannet ivez war niverenn 30 Ar Vro.

**" Lec'hanvadurezh aochoù ar Mor Bihan hag an trowardroioù "** gant Gweltaz Bernier. Embannet gant « Annales Hydrographiques ».

Hor mignoned Ar Berr, Ters ha Gwilcher o deus roet deomp dija studiadennoù a-bouez diwar-benn Kreisteiz Penn-ar-Bed, aochoù ar Goelo, re Waien ha lenn-vor Brest. Setu unan all en tu-hont graet an dro-mañ gant Gweltaz Bernier, diwar-benn ar Mor Bihan hag an trowardroioù. Skoazellet gant pesketaerien ha tud kozh an G. Bernier en deus savet ur roll klok eus anvioù brezhonek ar rannvro. Peur e teurvezo pennoù bras ar c'hadastr ober kemend-all evit an holl anvioù-lec'h e Breizh-a-bezh ?

### **Pladenn gentañ Glenmor.**

Pladenn gentañ Glenmor, a voe e-pad ur pennad mat ul lenner eus Al Liamm, a zo o paouez bezañ embannet. Peder c'hanaouenn a zo warni « Les Nations » en o zouez. Bez ez eus ivez unan e brezhoneg : Viviana. Glenmor en deus skrivet ivez - ha kanet - e brezhoneg ha spi hon eus e c'hell dastum dizale lod eus ar c'hanaouennoù-se en ur bladenn all. Evit kaout an disk, ret eo kas 10 lur d' an Ao. GUILLERM, KRP 2265-51 Roazhon ha reiñ e anv ha chomlec'h da S.C.E.B. Disques KORNNOG, 2, rue Lesage, Brest.

211

### **Un doare aes da harpañ an Emsav : dastum timbroù.**

Ma c'hellfe holl izili an Emsav dastum an timbroù war al lizhiri kaset dezho e c'hellfe bezañ dastumet evel-se ur bernig arc'hant bep bloaz ; aes eo hen ober peogwir n' eus ket ezhomm distagañ an timbr diouzh golo al lizher met kemer anezhañ gant ar paper stag outañ ; an timbroù boazetañ a c'hell bezañ kemeret ivez.

Setu pezh a vez graet gant un nebeut Bretoned e kêr-Vreiz ; dastumet e vez an timbroù gant an Ao. Rafael Drean, teñzorer, hag an arc'hant gounezet a gouez e-barzh kef kêr-Vreiz.

D' an holl Vretoned o chom e Pariz ez eo aes kas an timbroù o devo dastumet da gêr-Vreiz (pep sadorn d' abardaez) ha reiñ anezho d' an Ao. R. Drean ; ar re all a c'hell kas anezho dre ar post, nemet ne dalv ar boan hen ober pa vez dija un niver bras bennak, rak gwerzhet e vez an timbroù dre ar c'hilo. Mat e vefe kavout e pep kêr un den a heuilhfe skouer an Ao. Drean ; an arc'hant gonezet a c'hellfe mont da harpañ, da skouer, Kuzul ar Brezhoneg.

Degas a reomp da goun chomlec'h KER-VREIZ : 43, rue Saint- Paris (6') ; an timbroù a c'hell bezañ kaset ivez da : Ao. R. DREAN, 48, rue du Docteur-Roux, Choisy-le-Roi, Seine, Bro-C'hall.

### **An divyezhegezh barnet gant ur C'hanadian-Gall.**

« An divyezhegezh a zo ur fed kevredadel ; ur Parizian hag a oar div yezh n' eo ket un den divyezhek...

« En ur vro divyezhek, n' eus ket a genvezañs, n' eus nemet un argadadeg dibaouez renet gant ar yezh greñvañ. Hag an distruj gwsañ a vez graet dreist-holl war dachenn an emframmoù kevredadel hag arboellerezhel. " Il faut bouffer ". Ar gumuniezh yezhel kreñvañ, dre an niver pe ar galloud arboellerezhel, a

voug didruez ar gumuniezh gwanañ en un aergelc'h a youl vat hag a gengarantez. An argadadeg diehan-mañ a zeu a-benn da seizhañ yezh **ar** bihanniver ; an hini a gomz ar yezh-mañ a zo estrenekaet diouzh e galloud-krouiñ. Emañ war an difenn, tuet d' en em gwareziñ ha nann da grouiñ. Dont a ra tamm-ha-tamm e emzalc'h yezhel da vezañ ragaozet gant ur menez a dreist-vevañs. N' eo ken ar yezh-mañ en ur stad a emled naturel ; mogeriet eo bet : en em valzamiñ a ra. Ul lec'hiadur dialektikel anavezet mat gant an istor a gavomp amañ... »

« Ur bobl a gomz yezh e lec'hiadur, » a skriv Maurice Beaulieu. « Ne vimp gouest da addeskiñ ar galleg nemet pa vo ganimp ur gelc'hiadur gevredigezhel hag arboellerezhel gall. » (" Le Devoir ", 16 Meurzh 1964.) Ret eo neuze empennañ hon emframmoù a-nevez, ober un dasorc'hidigezh... Anat eo ret deomp ober ur striv bras war an dachenn arboellerezhel, evit adkavout talvoudegezh d' hor sell-ni hag evit gonit ur galloud gwirion ; hogen ma ne zeu ket hor politikerien, hon teknokrated, hor sindikalourien, hag hor c'hellennerien da emskiantiñ pegen grevus eo kudenn ar yezh, darbet eo dezho dihuniñ un deiz o terc'hel ur galloud armerzhel kreñvoc'h, hep mar, met o vezañ ivez renerien ur bobl o vont da get. Hon « denelourien » vras a fell dezho bezañ gwirvoudelerien ha tud sirius ma teuont hep gouzout dezho da genlabourat da zistrujidigezh (« génocide ») o fobl. Hor yezh a zo un emframmm kevredadel a c'hortoz diskoulmoù kement hag an emframmm arboellerezhel. Kudenn ar yezh a dleer reiñ dezhi diouzhtu ur stumm politikel. N' eo ket ar veleien a saveteo ar yezh e 1964, rak ar yezh ne warez ken ar feiz ; ar re a gomz hiziv eus « ouennelouriezh » pe eus « diktatorelezh » n' o deus skiant ebet eus ar vuhez, nag eus ar politikerezh, nag eus an istor. Daoust hag ez eus un doare gwirvoudeloc'h da vevañ eget nac'h mervel ? Evit tud 'zo koulskoude, nac'h mervel e 1964 n' eo ket bezañ « pratique »...

212

Meur a arroudenn ken pouezus all a c'hellfe bezañ kemeret e pennad Fernand Ouellette, **La lutte des langues et la dualité du langage**, in " Liberté ", kelaouenn krouet e 1960 gant un toullad skrivagnerien ; arroudennoù hir eus ar pennad-mañ hag eus pennadoù ken pouezus all a gaver e niverenn ar gelaouenn gall " Esprit ", C'hwevrer 1965 (Le Canada Français, controverse sur un nationalisme, gant J.-M. Domenach).

**A-zivout pennad an Aotrou Troal : " Betek Dent-Heskenn an Andoù " ( « Al Liamm » n° 109).**

D' hol lennerien e tegasomp da goun ez eo bet embannet war Barr-Heol ur pennad diwar-benn Indianed an Andoù : Bolivia : Proletarion o yezh (" B.-H. ", N° 30, Meurzh 1962, troidigezh ur pennad embannet war ar gelaouenn " Missi ", gant evezhiadennoù war implij ar c'hetchoua gant an Iliz ; ul lizher d.-b. an hevelep kudenn a gaver war an N° 32).

Spi a zo ganeomp e skrivo an Ao. Troal pennadoù all d.-b. Indianed an Andoù ; d' ar re o deus kavet dudi en e bennad ec'h aliomp lenn levr Alfred Métraux : **Les Incas** (Editions du Seuil, 1962 ; 191 p.) gouestlet da istor ar sevenadur inkaek betek hon amzer. Treiñ a reomp aman un nebeut arroudennoù o tennañ da gudenn ar yezh :

« An Indianed n' o deus ket lorc'h gant o yezh, » a skriv A. Métraux ; « techet int da sellout outi evel un toullbac'h a vefe mat dezho dilezel evit bezañ gouestoc'h d' en em zifenn hag evit en em deuziñ e peurrest ar boblañs. Pa fell d' ar vistri-skol deskiñ d' ar vugale lenn ha skrivañ yezh o hendadoù, ne vezont ket atav komprenet gant ar gerent, a c'houlenn ma vo desket spagnoleg dre ma kavont ez eo deskadurezh ar c'hetchoua un doare pilpous da serriñ anezho en o stad. Bez' e c'heller kaout spi e teuio a-benn an doug hag ar garantez o deus lenneien an Tu-Kleiz hag an indianegourien evit pep tra indien hag evit folklor an Andoù da gemmañ an emzalc'h-mañ hag e teuio adarre implij ar « Runa Simi (1) un abeg a lorc'h. »

Daoust d' o c'hemplezh-izelder : « An holl Indianed o komz ketchoua o deus an emskiant da vezañ lod ur vroad, hini an Inkaed, hag o deus evel-se un herezh boutin disheñvel diouzh hini ar re-wenn hag an hironed. Ledamant an deskadurezh

a ra dezho anaout anvioù an Impalaered veur hag ivez pinvidigezhioù hag eürusted ar pobloù a oa sujidi. P' en em saso warc'hoazh ar bobl indian evit goulenn start ar reizhded hag an douaroù bet lamet dezhi e welimp trede Azginivelezh an Inkaed ».

(1) Runa Simi, « yezh an dud », anv gwirion ar c'hetchoua.

213

### **Gorsedd e Pennpont.**

Pedet omp da embann kement-mañ :

« Goursez » Skol-Veur Drouized, Barzhed hag Ovizion Vreizh a vo dalc'het e Pennpont d' an 21, 22 ha 23 a viz Eost 1965.

Lakaet eo dindan arouez an Unvaniezh hervez reolenn-stur ar Vreuriezh a gendalc'h dibaouez he strivoù evit bountañ ar Vretoned emskiantek da labourat asamblez etrezek an hevelep palioù a hell bezañ o re hep koll o frankiz speredel.

Renerien ar strolladoù a gejo an eil re gant ar re all e-pad an tri devezh-se evit keñveriañ o menzioù e-doug ar c'helc'hioù-studi kenkoulz hag e-doug an ehanoù.

Izili ha Poellgor ar Skol-Veur a gred start o deus un tu da zirouestlañ kudenn unanidigezh ar vrogarourion dre o c'hevredigezh a zoujo atav kredennoù pep den.

Setu roll an devezhiadoù :

- Bodadegoù ar c'hevrannoù-labour,
- Arnodennoù war ar brezhoneg ha war ar Geltiegezh,
- Un oferenn en iliz-barrez,
- Lidoù-degemer an nevezianted,
- Ur Veilhadeg sevenadurel,
- Ur bourmenaaenn gant displegadurioù...

Strollad Gouelioù Pennpont a savo ur gouel folklorel gant ar gwellañ kelc'hioù hag ar gwellan bagadoù eus ar rann-vro. Ar gouel-se a zeuio da vezañ unan eus ar re vrasañ en ul lec'h a liamm Breizh-Uhel ha Breizh-Izel.

Keneiled an Emsav a zo pedet da verkañ ar pevarvet sul a viz Eost en o spered. Un deiz bras e vo e-touez an deizioù a zegas adc'hanidigezh ar Vro gant skoazell ar Vretoned a zeu-touez da gemer perzh enno. »

En anv ar Poellgor :

A. RUSSON.

### **Diskleriadurioù evit an danvez-skolidi da geñver ar pevare bloavezh-skol S.A.D.E.D.**

ALIOU DRE VRAS.

Mar doc'h bet skoliad c'hoazh er bloavezioù tremenet, dalc'hit kont eus alioù ho kelennerion evit dibab ar rummadoù kentelioù a heuliot e-doug ar pevare bloavezh-mañ.

Mar n' oc'h ket bet skoliad c'hoazh, ha mar fell deoc'h gouzout hag-eñ e klot ar rummad-mañ-rummad gant ho live deskadurezh, goulennit kuzul digant ar gelennerion, dre skrivañ d' ar C'hreizennerezh.

Evit ho skoazellañ en ho tibab ez embann amañ da heul Gwazva roll ar c'hentelioù a ya d' ober pep rummad-studi.

Taolit evezh avat : techet e vez ar skolidi nevez da lakaat o anv evit un niver re vras a rummadoù-studi. Gwelloc'h eo kas da benn-vat ur rummad nemetken eget



rankout lezel e darn ur bloavezhiad re sammet.

214

ROLL AR CHENTELIOU DRE RUMMAD-STUDI.

1. - Brezhoneg (kentañ rummad).

Studi dek pennad tennet eus oberoù dek skrivagner eus an 20vet kantved ; e sigur pep pennad, un amwelad war buhez ar skrivagner, selledoù dezvarnel war e oberoù, war an oberenn debarzhet pergen, plaenadur testenn ar pennad e-keñver yezh ha mennoziou, e-keñver gwerzaouerezh pa 'z eo ur varzhoneg ; da boelladenn e studi ar skolidi, war skouer ar gentel, ur pennad all tennet eus oberoù an hevelep skrivagner.

Skrivagnerion studiet : Meven Mordiern, Maodez Glanndour, Roparz Hemon, Tangi Malmanche, Abeozen, Roperzh ar Mason, Youenn Drezen, Jakez Riou, Youenn Olier, Per Denez.

2. - Brezhoneg (eil rummad).

Evel ar c'hentañ rummad evit doare ar studi.

Skrivagnerion studiet : Roparz Hemon, Meavenn, Herriou, Maodez Glanndour, Yann-Vari Perrot, Langleiz, Yeun ar Gow, Kerverziou, Kervella, Ronan Huon.

3. Istor.

Breizh politikel adalek donedigezh ar Vrezhoneg en Arvorig betek ar bloavezhioù da heul an eil brezel-bed : rouantelezh Vreizh, dugelezh Vreizh, Breizh emren, Breizh oc'h adsevel, an Emsav kentañ (1843-1918), an eil Emsav (1919-1927-1939-1944), ar stourm sevenadurel, an trede Emsav (1945-). Da boelladenn da heul pep kentel o deus ar skolidi da aozañ un displegadenn war danvez ar gentel.

4. - Douaroniezh,

Studi ar glenn, an dud, an armerzh en un nebeut riezou diorreet pe war ziorren : ar Stadoù-Unanet, Kanada, Argantina, Brazil, an Unaniezh Soviedel, Sina, hag ur gentel war armerzh ar bed. Da boelladenn da heul pep kentel o deus ar skolidi da aozañ un displegadenn war danvez ar gentel.

5. - Fizik (kentañ rummad).

Studi savoniezh ar c'haledoù : nerzhou, labour, galloudezh, lankadoù, ijinenoù eeun, kreiz-kerc'hell, mentelioù, pouezder ha tolzder ec'honel. Da boelladenn da heul pep kentel o deus ar skolidi da ziskoulmañ kudennoù o tennañ da zanvez ar gentel.

6. - Fizik (eil rummad).

Studi savoniezh an heverennoù : gwask, gorre digor al liñvennoù, penvon an doursavoniezh, gwirienn Arc'himedes, korfoù war-neuñv, aerwask, aerbouezerioù, gwaskventerioù, savelenn Boyle-Mariette. Poelladennoù evel er c'hentañ rummad.

215

7. - Krennvrezhoneg.

Studi dek pennad tennet eus al lizheradur krennvrezhonek ; e sigur pep pennad, un amwelad hanezel war an aozerezh hag ar skridoù-orin, plaenadur testenn ar pennad e-keñver geriadur, yezhadur, aozadur, mennoziadur, ha pa vez tro, gwerzaouerezh. Da boelladenn o deus ar skolidi da studiañ, war skouer ar gentel, ur pennad all tennet eus an hevelep oberenn, pe eus an hevelep rumm skridoù.

Skridoù studiet : Buhez Santes Nonn, Buhez Santes Barba, An Vuhez Sant Gwenole, Melezour an Marv, An Basion ha goude an Resureksion, An Nouelou ansien ha devot, Buhez Mab-Den.

8. - Kimiezh.

Dourioù naturel, dour pur, kenaoz an dour, atom ha frammadoù atom, goulakadenn Avogadro, notadur kimiek, oksigen, hidrogen, perzhioù kimiek an dour, klor, amsav an elfennoù, kloridenn hidrogen ha trenkenn glorhidrek, soda, raz. Da boelladenn da heul pep kentel o deus ar skolidi da ziskoulmañ kudennoù o tennañ da zanvez ar gentel.

9. - Jedoniezh.

Mentoniezh plaen :lunioù pennañ, kemparzh, parded ha dibarded an tric'hornioù, kensturiennoù, kensturiegezh, hirgarrez, lankell, karrez, tristuriegezh, kensturiennoù keitpell, lakadurioù keñveriek ur c'helc'h hag un eeunenn, lakadurioù keñveriek daou gelc'h, korn kaeet, lec'hioù mentoniell, savidigezh an tric'hornioù. Da boelladenn da heul pep kentel o deus ar skolidi da ziskoulmañ kudennoù o tennañ da zanvez ar gentel.

10. - Bevoniezh,

Boudoù bev ha nann-bev, unded ar vuhez, stummadur ar gellig, rannidigezh ar gellig, fiñv ha broudadusted ar gellig, an emvoueta, an analat, aerveved, anaerveved, distaolidigezh an dilerc'hiadoù, kelc'htroioù N, C hag O, treluskerioù bevedel. Da boelladenn da heul pep kentel o deus ar skolidi da aozañ un displegadenn war danvez ar gentel.

DORNLEVRIOU.

E derou pep rummad-studi e vez roet d' ar skolidi roll an dorn-levrioù o devo ezhomm evit heullañ ar rummad.

Aliet eo skolidi an holl rummadoù da gaout en o c'herz ar rummad kaieroù savet gant KIS-SADED hag embannet gant " Preder " : DAFAR 63, 64, ha. EVIT AR GERIADUR BROADEL.

DISKLERIADURIOU all

Ho holl zarempredoù gant S.A D E D a dle tremen dre ar C'hreizennerzh. Dre-se, ho koulennoù diskleriadurioù, ho koulennoù enrollañ, kement kasadenn a rit da S.A D E D a dle bezañ graet da :  
M. P. CALVEZ, Saint-Didier, 35 - CHATEAUBOURG  
C. C. P. Rennes 728 63

**" A Contre-Courant "**.

Pedet omp da embann al lizher da heul :

« Bennozh Doue deoc'h evit ha rentañ-kont eus " A Contre- Courant " e niverenn 109 « Al Liamm ».

216

Ho pediñ a ran diouzhtu da reizhañ un danevellig a-zivout Olier Mordrel.

Bet am eus ar c'heloù er beure mañ (25 a viz Mae) eus Bro-Alamagn.

Ne oa ket manet e 1940 gant plac'hed kaer war aod ar Mor Baltek (se am boa klevet digant teodoù lemm eus ar S. B. B.).

Chom a reas e Berlin evit pleustriñ war donkad ar brizonidi vrezhon.

Evel-se e vo adsavet ar wirionez.

Ez leal atav er stourm evit Breizh.

J. Y. KERAUDREN. »

**Celtic Youth Conference.**

Pedet omp bet da embann kement-mañ :

« Kentañ bodadeg ar yaouankiz keltiek a zo bet dalc'het, etre an 29vet a viz Meurzh hag an eil a viz Ebrel, e Garthewin, Llanfair Talhaiarn, Abergele (Kembre). Bez e oa eno dileuridi kembreat, skosat, iwerzhonat ha breizhat ha prezegerien ampart a zibunas meur a zanvez-kaoz bourrus-tre. Goude bezañ taolet ur sell war stad pep hini eus ar broioù degaset gant e gannaded, kudennoù a bep seurt a voe studiet, dreist-holl ar c'henober didroidell, ar renerezh, hag an doareoù aesañ evit kenstrollañ strivadennoù broadelourien an holl vroioù keltiek. Ar breutadennoù a ziskouezas pegen tost e oa ar re yaouank an eil ouzh egile hag o youl da c'hounid an emrenerezh rik evit ar broioù keltiek.

E dibenn ar c'hendalc'h eo bet krouet ur « Celtic Youth Congress » (Kreizenn ar yaouankiz etrekeltiek), ur huzul a vo e bal, a-hed ar bloaz, ober gant an

doareoù rekis war-dro darempredoù broadelourien yaouank ar seizh bro keltiek (da gentañ ober anaoudegezh gant re yaouank enez Vanav ha Kerne-Veur). Neuze e voe savet ar reoladurioù ha dilennet izili ar c'hentañ burev pe strollad-oberier :

- Prezidant : R. O. F. WYNNE (Kembre) ;
- Chairman : Ian TAYLOR (Bro-Skos) ;
- Sekretour meur : Sean O'CIONNAITH (Iwerzhon)
- Karget eus an embannadurioù : Loeiz LULLIEN (Breizh) ;
- Eil sekretour : Menna WYNNE (Kembre).

Ar strollad oberier en deus dalc'het raktal e gentañ bodadeg ha diazezet e labour evit ar bloaz-mañ. Ur c'hannadig, « Freedom » a vo embannet bep eil miz hag en tu-hont ul levr bep bloaz.

Kentañ kendalc'h « Celtic Youth Congress » a vo bodet e Dulenn (Iwerzhon) da geñver Pask 1966 a vo hanter-kantved deiz-ha-bloaz emsavadur 1916. »

### **Chomlec'h.**

Hor mignon Jarl PRIEL hag en deus 80 vloaz er bloaz-mañ a gemenn deomp eo deut da vezañ ur moko-rik peogwir emañ o chom e Marsilha. Setu amañ e chomlec'h : Jarl PRIEL, chez Mme RENAUD, 60, rue E.-Rostand, Marseille.

# AL LIAMM 111

Gouhere - Eost 1965

21 añ Bloavezh

UR SKOUER HEPKEN !	219
Pirc'hirined an didermen gant Yann-Ber Piriou	221
Force de frappe gant Yann-Ber Piriou	222
Keloù d'ar muiañ-karet gant Jorjina Manac'h, gwreg Kerlann	223
Ugent vloaz 'zo gant Kerlann	227
Ar Bleiz (kendalc'h) gant Roger Gargadeneg	228
Hol lennegezh kollet gant Arzel Even	252
Diazezoù ar sevel gwerzioù (kendalc'h) gant F. Kervella	261
Ronan Huon gwelet gant Skolidi S.A.D.E.D.	275
Notennoù	281

## **UR SKOUER HEPKEN !**

Blaenau Ffestiniog, ur gêr vihan en hanternoz Bro-Gembre. 90 % war 6 000 annezad a gomz kembraeg.

Rener ul labouradeg vihan a zifenn ouzh e vicherourien komz o yezh en o divizoù el labouradeg, kerkoulz e-pad an ehanoù hag e-pad an eurioù labour. Goulenn a ra digant e zek implijad sinañ un Emglev oc'h asantiñ ne gomzfent ket kembraeg pe e vefent taolet er-maez.

Daou implijad a nac'h sinañ hag a ya kuit.

Tennet eo evez ar c'helaouennoù hag ar gouarnamant war ar gudenn. Zoken ar Western Mail ha ne vez ket peurvuiañ a du gant ar c'hembraeg a damall doare ober ar rener, o lavarout en deus pep den ar gwir da gomz e yezh.

Diaes-bras eo kavout labour er c'hornad, ar pezh a c'hell didamall an implijidi o deus asantet sinañ ar feur. Un trede micherour koulskoude a guita al labouradeg.

War-se, 65 000 mengleuzier a sav a-du gante, Sindikad ar Vicherourien hag ar C'hirri ha kannad ar Merioneth a glask lakaat ar rener da blegañ, en aner. Galvet eo neuze e Londrez gant ar Sekretour Stad evit Kembre hag ec'h asant lezel ar vicherourien da gomz o yezh.

Un dra a bouez : evit ar wech kentañ eo ez eo kaset war raok ar stourm evit ar Sevenadurezh gant tud dister, tud eus ar bobl ha nann gant tud a studi.

Aner eo moarvat soñjal e c'hellfe micherourien stourm evel-se er vro-mañ.

Den kennebeut ne c'hell ijinañ, e Bro ar Sevenadurezh hag ar Frankiz, e c'hellfe sevel 65 000 labourer ha sindikadoù evel ar C.G.T. pe ar C.F.T.C. a-du gant difennourien hor Sevenadur pe ur yezh a fell dezhe mirout, ha nann evit madoù danvezel hepken. N'eo ket doujañs pe skoazell a c'hellfent gortoz. Goaperezh ne lavaran ket.

Ra vo eta al lorc'h o deus ar Gembreiz-se evit o yezh hag an doujañs a ziskouez an dud e-karg evit an DEN, evit ur Sevenadurezh hag evit kalonegezh un nebeut labourerien, ra vo kement-se, evidomp, ur skouer da soñjal ennañ, ur skouer hepken ma n' hell ket bezañ muioc'h.

221

Yann-Ber PIRIOU

## **PIRC'HIRINED AN DIDERMEN**

Hor bag a sko davet un enez,  
un enez-tasmant-e-liv-koar.  
Hor bag a sko davet un enez  
un enezenn e-barzh al loar.

Ergerzh a reomp en ec'honder  
stered ha bedoù niverus  
o klask achantouriezh ha splannder  
Enez ar Vuhez Peurbadus.

Broudet gant galv doueoù kuzhet  
n' eus ket a ziwezh d' hor c'hantren  
a-dreuz paradozioù dilezet  
Pirc'hirined an Didermen.

Un deiz, a dra sur, e touarimp  
er porzh hurivreet a bell 'zo.  
Ha sur omp neuze ec'h adkavimp  
levenez ar c'hantren garo.

222

Yann-Ber PIRIOU

## **Force de Frappe**

War " don begelier ar peoc'hourien ".

Teñval an noz, teñval an deiz  
Mut eo ar mor, mut eo ar gwez.  
Mut eo bremañ kement awen  
da virviken.

Trouz ebet nemet an avel  
un avel skorn o tezrevell  
d' ar sterenoù diseblant ha kri  
Mojenn ar C'horred disoursi.

Emzivad mantrus an doueoù  
intañv an dour bev hag an tan  
ne gano ken al laouenan  
absolvenn veur da veureoù.

Poultrenn a sav, stered a gren.  
Amañ, gwechall, e oa mab-den,  
o ren.

223

## **Keloù d'ar muiañ-karet**

Sant Wenole, 1945.

Skrafig (\*) vihan, gwenn en deiz goañv  
Te hag a vourr ' c'hoari ker skañv  
Spluiañ e houl an dour glas sklaer  
Ha pa vez yen ha yac'h an aer

Karout a rez aod kuñv hor bro  
Daoust ha m' eo kriz ar mor pa sko  
Ouzh ar c'herreg, ker kreñv e nerzh  
Ma lamm an donn gant ar roc'h serzh

Mont a rin hiziv 'n ur soñjal  
War zu ar mor, ar mor teñval  
Gervel a rin a-bouez va fenn  
Ar skrafig kuñv, ar skrafig gwenn

Krediñ a ra din e veizo  
Pegen don ha pegen c'hwerv  
E skrign ennon va anken  
Ken e vevan hep sklerijenn

Asant skrafig, atav seder,  
Tosta amañ, deus dibreder  
Mar am c'hredez, tro kein bremañ  
D' az karantez vras nemetañ

Nij davet ar menez sonn  
" A-us d' ar blaenenn 'vel ur vronn "  
Hag etrezek Torgenn Gador  
A viromp outi an eñvor

224  
Eno, e-doug nozvezhioù glan  
E tasonas laouen hor c'han,  
E tiwanas hor pedennoù :  
" Torr, o Doue, hor chadennoù ".

Dalc'h penn, stourm ouzh an avel,  
Na glemm ket evel ur bugel !  
N' eo ket termen d' az kefridi,  
Striv diehan, nij disoursi.

Gouzout a ran eo gwenn a erc'h  
Al lann, ar brug. Ur c'hreunenn gerc'h  
Ne gavi ket, er geunioù gouez  
Evit terriñ da naon du

Aspediñ 'ran, kae hep skuizhañ  
Davet va hini karetañ,  
Setu Kastell-Nevez ar Faou,  
E-lec'h m' en em garjomp hon daou

Toennoù glas ar Feunteunioù  
A glevas hor bugaligoù  
Stêr Aon lor, lINTR, ledan, boull,  
Grougouz an dour, pupli sioul,

Haleg a heuilhis alies  
Va dorn ouzh brec'h va Yannig kaezh.  
Degouezhet out er Menez Du !  
Ne vlazez ken holen ar fru

A zo chomet pell a-dreñv dit !  
Distro e vi, moarvat, evit  
An noz ? Ur strivad c'hoazh

Pa ne teufes nemet warc'hoazh !

Gwelout a rez kloc'hedioù uhel  
Gwintet ken lorc'hus en avel ?  
Hep bezañ digalonekaet  
E kêr Gemper out erruet

225

Serr da lagad, pleg da askell,  
Klask goudor enep an avel,  
Diskuizh ervat e skeud Gralon,  
Emaout e penn, kemer kalon,

Ha meul leal, ouzh lein an tour  
Ar goantañ gêr, o gedour flour,  
Dremm kuñv he merc'hed blev melen  
Heson o mouez, gwenn o c'hroc'hen.

Stêr Oded a ruilh, gorrek  
E traoñ Menez Fruji, koadek.  
O, koun am eus. Amañ ive  
Omp bet eürus, ma Yann ha me.

Sel! dre amañ. Spurmantiñ 'rez,  
War an tu-se 'mañ Sant Charlez  
E-lec'h ma kloz gwarded ker kriz  
Va c'haredig 'n un toullbac'h strizh

Tud digalon, ken fallakr all.  
Pe neuze marteze int dall.  
Emañ war zu an hanternoz,  
Diouzh e brenestr e wel ar roz

Ha netra ken. Saout o peuriñ  
- Amzer a gav d'o niveriñ ! -  
Ouzh barrinier sanket disi  
E harp bemdez e benn divi

Tosta goustad, kannadig koant  
Truez outañ, hag eñ ken drant  
En diagent, karantezus  
Ouzhimp holl, pa vevemp eürus !

Ha displeg dezhañ fraezh penaos  
E soñjan ennañ deiz ha noz  
'Vidon ez eo goullo ar bed  
Ha va daeloù, c'hwerv, a red.

226

Pell dioutañ n' on mui netra,  
Va ene zo hep feiz, hep joa.  
Te a zo harluet ivez  
Kav evidon gerioù nevez

'Vit komz c'hwek eus e vro,  
Eus eur benniget an distro  
Eus al levenez a vo trec'h  
P' am zalc'ho etre e zivrec'h !

Hor c'harantez 'vezo divrall  
Kreñvoc'h, gwelloc'h eget gwechall,  
Ni ' ouezo hen brasaat divent,  
Digas, diseblant ouzh ar gwent



Kaer ' vo bevañ - hen lavaret  
Pa vezimp hon daou unanet  
Nag e chomin bepred laouen  
Ha disoursi, en e gichen !

C'hoantaat a ri, va c'hannad,  
Neuial e lenn c'hlas e lagad.  
Goustad e astenn e zorn kuñv  
Da dañvaat douster da bleuñv

Gwarizius on... Tro kein ha deus,  
Distro bremañ ! Aon am eus  
'Vije 'vidout an allazigoù  
'Ra ken diouer din a-wechoù.

Bennozh dit hogen hast buan  
'Mañ 'n noz o tont. klev ar gouelan  
Az kalv d' ebatal war an donn  
A sav, divent, eus ar mor, sonn !

Ar mor a gan ar ganenn gozh  
O kan, ha klemm, ha garni, ha kruz  
Ha bev !... Buhezek eo ivez em c'hreiz  
Elfenn ar spi, elfenn a feiz.

JORJINA MANAC'H,  
gwreg KERLANN, + 1963.

(\*) Skrafig = Skravig, skrevig, gant un f kreñv, e Sant Wenole - Penmarc'h.

## **Ugent vloaz ' zo**

D' an 8 a viz Mae diwezhañ eo bet lidet e Bro-C'hall ugentvet bloavezh trec'h ar Re-Unanet war an Alamaned en eil brezel bed. E pelec'h edon neuze ? Gant broadelourien all evel don, serret e prizon Sant-Charlez e Kerfeunteun. Mizvezhioù hon eus tremenet eno, o c'hortoz an deiz da zont er-maez. Ne oa ket peurflastret c'hoazh an arme alaman. Derc'hel a rae c'hoazh an Oriant. An Amerikaned avat o c'hase d' ar gêr e-lec'h all hag o faezhe, betek en o bro, keit ha ma tostae ar Rused ouzh Berlin. Ar C'hallaoued, e diabarzh, kalz a Vretoned ouzh o heul, a stourme hag ouzh an Alamaned, hag ouzh kement hini enebour dezho, da lavarout eo ar gwir Vreizhiz.

Diouzh va frenestrig barrennet e welis ar bannieloù gall savet war an tiez. Deiz an Trec'h e oa : an 8vet a viz Mae 1945. Disrannet e oamp diouzh hon tud, ni, ar Vreizhiz gwir. Kalz a labour a chomje ganeomp da ober c'hoazh, ur wech aet er-maez diouzh an toull, evit stourm adarre da zieubiñ hor gwir vro : Breizh.

Ugent vloaz goude ez embannan al lizher-mañ da heul, skrivet e gwerzennoù. Lavaret em boa, dre lizher, e konten ar saout a welen o peuriñ, du-hont, trema Lokorn, hag ar skreved a droidelle tostik-tost d' hor barrinier. Sevel a raemp d' hor gwelva dre bignat war ur skabell sichtet war ar gwele bountet harp ouzh ar voger simant, dindan ar prenestrig. Ne oa ket Yann Naour, en toull ganin evit sellout er memes amzer, mont a raemp a-bep-eil. Pelloc'h, e voe ijinet gant hor gwarded stoufañ deomp gant plankenoù hor prenestrig war an uhel met gant tammoù melezeur torret e oamp deuet a benn da welout piv a zeue dre zor ar prizon, da weladenniñ hini pe hini ac'hanomp.

KERLANN.

**AR BLEIZ**

Gant Roger GARGADENNEC.

Pezhc'hoari evit ar skingomz pe ar fiñvskeudennoù  
(kendalc'h)

- XI -

(Mintin eo. E porzh ur maner emamp bremañ. Tud ha loened o tihuniñ. Ur c'hilhog a gan. Ar vevelien a ra war-dro ar roñseed. Ur vatezh a zo o tennañ dour er-maez ar puñs. A-greiz-holl ur plac'hig a drizek vloaz marteze a zered er-maez en ur c'hoarzhin, he c'hi war he lerc'h, o chalpat.)

AR VATEZH

Pelec'h 'maoc'h ' vont Marig ? Da bourmen ?  
Diwezhat ' viot d' an oferenn !

MARI

N' eus bet nemet ar son gentañ  
A-barzh an eil, tintin Anna  
Pell 'zo e vin distroet d' ar gêr.

AR VATEZH

N' it ket re bell eus ar Maner  
Aotrou Kont ne vo ket kontant  
Mar klev emaoch aet hoc'h-unan...

229

MARI

Kerse ne larot grik dezhañ  
'Trezek ar pradoù 'z an buan  
Da gutuilh bleunioù...

AR VATEZH

Koulskoude  
N' eo ket re fur, sur, an dra-se  
Va dimezell ! Drouk ' c'hellfec'h kaout !  
Kavout a c'hellfec'h, e-lec'h saout  
Bleizi du spontus war ho hent !  
Gout ' ouzit pegen hir o dent !  
Pe rederien all, re fallañ  
Tud heñvel ouzh Fontanella !

MARI

N' am eus ket aon eus ar re se  
Tintin Anna  
Ne risklan tra !  
Va c'hi bihan am difennfe !  
. . . . .  
Gant bleunioù brav, gant bleunioù kaer  
Me a leunio va zavañjer...

(Mont a ra kuit en ur c'hoarzhin.)

-XII -

(Ur marc'heger o treuziñ ar prad. Kanañ a ra.)

AR MARC'HEGER

Biken den, na diaoul, na doue

N' am rafe stouiñ d' ar Roue  
Pe neuze ' vefen gwall souezhet  
Hogen pep hini 'n defe c'hoant  
D' ur plac'hig koant am c'hasfe drant  
Da stouiñ d' he fenn garlantezet...

(Mut e chom pa glev ar c'hi... hag an dimezell o c'hoarzhin.)

230

MARI

...Na petra... Da biv ar c'hi-mañ ?  
Hoho ! Mouezh ur plac'h yaouank bremañ !  
Mintin-abred 'mañ-hi o redek...  
Mall bras 'm eus da welet he beg !

MARI

Tê ! Va c'hi bihan, Tê !  
'Maout 'vont da rogañ din va sae  
Ha neuze e vin skandalet !

AR MARC'HEGER

Blev melen de'i, daoulagad glas !  
Brav-eston 'mañ-hi, Gastou, biskoazh  
N' am eus gwelet ur seurt cheorenn !

MARI

Ma Doue ! Kollet on a-grenn !

AR MARC'HEGER

Ne spontit ket, va dimezell  
Plijet ' vefen d' ober skoazell  
Deoc'h evit kutuilh ho pleunioù :  
Kemend-all ' zo a bep seurt lioù !

MARI

Marc'heger, n' am eus ket aon mui  
E soñje din ' oa ar bleizi  
A zeue da lammat war va choug  
Hogen ganeoc'h n' am bo ket droug !

AR MARC'HEGER

Bez' zo tud gwashoc'h 'vit bleizi !

MARI

Gout a ran ivez : va zinti  
'Deus laret din... Hag ar fallañ  
E ano ' zo Fontanella !

AR MARC'HEGER

Ha ma tegouezhfe an den-se ?

231

MARI

Aon ebet neuze n' am befe  
Rak, evit gwir, kar on dezhañ !

AR MARC'HEGER

Penaos ?

MARI

D' ar C'hont a ren war 'n douar-mañ  
Me a zo merc'h. Eontr eo va zad...  
Da Fontanella.

AR MARC'HEGER (dezhañ e unan)  
Sed aze 'vat,  
Un taol ne oan ket o c'hortoz !

(D' ar plac'h yaouank.)

Vitañ da vezañ fall ha faos  
Hag e zoare gwall gasaüs  
Kavout a ran kalz evurus  
Hep mar ebet, ar brezelour :  
Kenderviañ 'ra ur plac'hig flour !  
E giz-se... anveit anezhañ ?

MARI

N' hellan lavar. Pa oan bihan  
Meur a wech eñ 'zo deut d' hon ti  
Meur a vloaz 'zo ne zeu ket mui  
Ankounac'haet 'm eus e figur.

AR MARC'HEGER

Plijadur ' pefe kasi sur  
Mar teufe en-dro d' ho pouchañ ?  
- Pelloc'h me ' gred, n' eo ret kuzhañ :  
An hini a zo dirazoc'h  
P' en deus en em gavet ganeoc'h  
A gerzhe gant e hent dalc'hmat  
War-du ho maner : rak d' ho tad  
Eñ a zo niz!

MARI

Fontanella !

232

EDER

Penaos e kavit ac'hanon, 'ta ?  
Strafulh 'm eus roet deoc'h ? Lod a lar  
Emaon ur bleiz !

MARI

Gaou eo, me ' oar !  
C'hwi ' zo jentil... C'hwi a zo brao  
Plijañ rit din kalz, va c'hendro !  
(Kloc'h ar chapel.)

Se 'mañ 'n eil son ! Mont a ran kuit  
Me ho ped : va digarezit  
Me a rank mont d' an oferenn  
Ni 'n em gavo tro mare merenn  
Kenavo deoc'h, va c'hendro ker.

EDER (dezhañ e unan)

Va c'halon bleiz a zeu tener !

- XIII -

(Daou zen a vale betek kreiz sal vras ar Maner.)

AR MEVEL

Aotrou Kont, setu ar Baron !

AR C'HONT

Gantañ ma-un', laosk ac'hanon !  
...Petra nevez neuze va niz ?  
Kavet ac'h eus en-dro ar c'hiz  
Da zont d' am gwelout 'vel gwechall ?

EDER

Gout ' ran oc'h douget da damall  
Pep tra 'ran evit an UNVANIEZH  
Ha d' ho meno, fallagriezh  
Am eus e-leizh ! Hogen, ne vern !  
A familh n' am eus ket ur bern  
Setu on deut d' ho saludiñ  
Peogwir ' tremenen tost d' ho ti !

233

AR C'HONT

E gwirionez, ne garan tamm  
Ur soudard prest da werzh' e vamm  
Ha da lazhañ e dad a-grenn  
Evit un Dug ken didalvoud !  
Allas ! Bemdez ' c'hellan klevout  
Kaoz eus kement taol vil ' vez graet  
Eus lazhadeg, eus traoù laeret  
A-zindan da renadur-te !

EDER

Kabiten on 'b'lamour da se  
Brud vras am eus, ha madoù puilh !

AR C'HONT

Te ' zo kollet gant an ourgouilh !  
Nag un druez eo. Em amzer  
Ur brezelour ' rae e vicher  
Hep gwaskañ tud kozh ha merc'hed...  
Santez Berc'hed ! Pegen kemmet  
Emañ an traoù ! Tud a galon  
Ne gaver mui siwazh...  
          'Vidon

Ne glaskan ket an enorioù  
Sioul e vevan, hep trubuilhoù  
Ha ma kemeran ma mousked  
N' eo mui nemet evit monet  
Da chaseal.

EDER

Bleizi ?

AR C'HONT

          Hag all...  
N' eus forzh, plijet on memes tra  
Da wel't ac'hanout en ti-mañ  
Goude kemend-all a vloazioù  
Tremenet ganeomp hep keloù !  
'Michañs e chomi da gousket ?

235

EDER

Ho tirenkañ me ne fell ket...

AR C'HONT

Diotachoù ! Ne zirenki den  
Gra e-giz ez ti, m' ac'h eus yen  
Azez tost d' an tan  
...Me bremañ 'z an buan  
Da renkañ kement tra ' zo ret, da reiñ urzhioù  
D' am mevelien, evit ar boued hag ar c'hambroù !

(Kuit ez a, Fontanella chomet en e-unan a sell pizh ouzh an arrebeuri a  
briz a zo e-barzh ar sal en-dro dezhañ.)

EDER

Kempennet mat an traoù amañ !  
Pinvidik eo ar Maner-mañ  
An arreubeuri a zo kaer  
An arc'hant sur n' eo ket dister  
A-zindan doenn ti ar C'hont  
Mat-tre e ran a-benn ar gont  
Kaout fiziañs em flanedenn !  
...N' en deus laret ger diwar-benn  
E verc'h... Koantik eo honnezh koulskoude...  
Re a rebechoù a roe  
Va eontr, pa oa o prezeg din  
Eñ en do keuz warc'hoazh vintin !

- XIV -

(Mare koan. Trouz an asiedoù...)

AR C'HONT

Va merc'h ! Erruet mare koan  
Hag emamp amañ hon-unan...  
Gout a rit pelec'h ' chom Eder ?

235

MARI

Gantañ on bet goude merenn  
Da bourmen betek ar c'harzh spern  
E park ar Maner... Ha neuze  
Laret en deus din e soñje  
Ober un droig betek kêr.  
Ha setu me ' zo deut d' ar gêr.

AR C'HONT

Eñ a zo gwall bell gant e dro !

EDER (oc'h erruout)

Salud va eontr ! N' on ket maro !  
Am digarezit, dimezell.  
Gout a ran on chomet re bell  
N' hellen ket e-giz all ober  
Traoù 'm boa da brenañ : ur prof kaer  
Am eus degaset evidoc'h.

MARI

O, va c'hendro, re jentil oc'h !

EDER

Evit gwir, n' eo ket kalz a dra  
Peogwir n' eo ken...

MARI

Diskouezit 'ta !

EDER

Nemet un davañjer seiz melen.

MARI

Un davañjer ! Na pegen kaer.

236

AR C'HONT

Honnezh he deus sur koustet ker !

Evit ur wech, neuze, Marig  
E c'hellit ober ur bouchig  
D' ar paotr yaouank-se, mar kirit !  
...A-walc'h ! A-walc'h 'ta ! Ehanit !  
Poent bras eo n' em lakaat ouzh taol  
Debromp hag evomp mat dreist-holl !  
Ha leugn mat da gof te va niz  
Goude e c'helli 'n em ziskuizh.  
Hag antronoz, da darzh an deiz  
E vi war vale...

Me, d' ar Bleiz  
E rankan mont, dres, an noz-mañ  
Ur pezh mell loen a zo du-mañ  
'Barzh ur c'hoad tost d' ur gêriadenn  
O c'hortoz pakañ en e benn  
Plom va mousked !

MARI  
Galvet oc'h bet ?

AR C'HONT  
Gant tud diwar ar maez, ya, int ' oar  
Pelec'h e kuzh al loan  
D' e gaout me n' am bo ket poan  
An noz ' zo brav ha bez' zo loar !

- XV -

(Klevout a reer an horolaj o seniñ hanternoz. Un trouz spontus a sav er-  
maez : tennoù pistolenn, chouadennoù, hag ar c'hi o harzhal eveljust. Da greiz-  
holl e klevet taolioù stankoc'h ha kreñvoc'h ; unan bennak a zo o skeiñ war dor  
kambr VARIG.)

MARI  
Va Jezuz ! Piv ' zo aze ? Petra ' zo ?

EDER  
Marig ! Larit, c'hwi ' zo eno  
Respontit diouzhtu, me ho ped :  
Un taol spontus 'zo c'hoarvezet  
Savit buan !

MARI  
Ha c'hwi 'ni eo ?  
Em gwele emañ, va c'hendro !

237  
EDER  
Gant al laeron emañ troet-holl  
N' ez eus ket ur munud da goll  
Gwiskit ho tilhad mar gellit  
Met, en anv Doue, 'n em hastit !  
Gwelloc'h deoc'h leuskel a-gostez  
Ho koef hag ho tirouestlerez  
Raktal e rankomp tec'hout kuit...  
D' ho saveteiñ on deut ! Selaouit !

MARI  
Va Doue 'ta, na pebezh euzh !

EDER  
Ha klevout a rit-hu ar reuz ?  
Er-maez emaint n' ouzon pet laer  
O klask d' en em sil' er Maner.



Selaouit ! Tennañ, youc'hadennoù !  
Emaint o trailhañ an norioù.

MARI

Kendro, diouzhtu, 'maon 'tont diouzhtu  
(Digeriñ a ra do he c'hambr )  
D' en em saveteiñ ' zo c'hoazh tu ?

EDER

Plac'hig, ho pet fiziañs ennon  
Ne laoskin biken al laeron  
Ober deoc'h an disterañ droug  
Ho tifenn ' rin ouzh boued ar groug !  
Va gortozit !... Mont a ran prim  
Da welout dre b'lec'h e c'hellimp  
'N em dennañ kuit ac'han...

MARI

Taolit evezh !

EDER

Dav kaout un tu da vont er-maez !

238

- XVI -

EDER (izel ha rok)  
LABOUL !

LABOUL

Aotrou Kabiten ?

EDER

Betek-hen, lavar  
Mont a ra pep tra giz ma kar' ?

LABOUL

Pep urzh hoc'h eus roet deomp a zo kaset da benn  
Ar Maner ' zo kemeret hep torr-penn !

EDER

Ar vevelien ?

LABOUL

N' o deus ket klasket 'n em zifenn  
Ret eo bet koulskoude astenn  
Un hanter dousenn anezho...

EDER

Vad hoc'h eus graet ! Labour brav ! Ha bremañ ?

LABOUL

Emañ hon tud, hep ehanañ  
Pep hini gant e sac'h o riñsañ tra pe dra !

EDER

Mat ! Na vastorc'hit ket al labour :  
Forzh pegement ' arc'hant hag aour  
A vo kavet 'barzh ar Maner  
D' e skarzhañ kemerit hoc'h amzer !  
...Me ' ya kuit bremañ araozoc'h  
Te ha da dud, echu ganeoc'h  
En em lako en hent goude :  
Ra vo dibret ur marc'h din-me

Ha digoret ar marchosi !  
(Klevout a reer ur c'hi o yudal.)  
Ha ra vo krouget an torc'hki !

239

- XVII -

MARI  
Va c'hendro, e pelec'h emaoch ?

EDER  
Amañ, va dousig, e-kichen deoc'h !  
Re bell on bet ? Aon ho poe ?  
...War am eus gwel't, risklus e ve  
Tec'hout kuit ac'han dre an nor  
N' eus mui nemet un hent digor  
Dre ar prenestr... Uhel n' eo ket  
'Barzh al leur, tost d' ar marchosi !  
Hastomp neuze, dousig MARI !

MARI  
Geo, Geo ! EDER, me ' ya ganeoc'h  
Rak karout a ran ac'hanoc'h !  
D' ho heul me yel' gant levez  
Da viken ez aimp asamblez !

- XVIII -

(Straedoù GWENED - Kirri - Tud.)

UR VAOUEZ  
Na pegement a dud er straedoù ?  
Ur gouel bennak a zo hirioù ?

240

UR VAOUEZ ALL  
N' eo ket posubl ! N' ouzit netra ?  
Eus pelec'h 'maoc'h ' tont Marianna ?  
Hiziv 'mañ devezh ar BREUDOÙ ;  
Ne welit ket, a-rummadoù,  
Aotrounez vras a Vreizh-Izel  
O kerzhout war-du ar c'hastell ?  
Merkeur hon Dug a zo du-mañ  
Renet 'vo ar Breudoù gantañ !

MARIANNA  
Se 'n hini eo ! Kerse ganto  
A zo gwiskamantoù ken brao  
Sellit ! En tu all eus ar ru  
Ar marc'heger-e-vantell-ru  
Na fichet eo ! 'Mañ o stagañ, 'kreiz ar c'hirri,  
E varc'h ouzh tal an ostaleri.

-XIX -

(Kan ha c'hoarzhadeg a ya en-dro en ostaleri.)

UR VOUEZH  
Ur volennad a yafe c'hoazh ganin !

UN ALL

Tavarnour ! Ur varikennad din !

UN ALL

Sec'h-glas eo va gourlañchenn...  
Ar sistr-daonet-se a ziskenn,  
Gwelloc'h 'get dour benniget eo avat,  
Lonkañ ' rin c'hoazh ur bannig mat !

(Dor an ostaleri a zo digoret a-grenn a daolioù botoù. Un den gwisket-kaer  
- ur vantell ruz a zo gantañ - a zeu tre. An everien, sabatuet-holl, a chom  
mut.)

241

EDER

Mañ ket an noter. Yann GERDREZ  
Amañ ganeoc'h-c'hwi en ho touez ?

UR VOUEZH

KERDREZ ? Eo 'vat ! Ganeomp emañ  
Hogen ab'lamour da betra  
'Fell deoc'h aotrou gwel't an den-se ?

EDER

N'emañ ket hennezh den Kerne  
Ha n' emañ ket ' vont d' ar Breudoù ?

UR VOUEZH

Se ' zo gwir, eñ 'ni eo Aotrou

EDER

Neuze pelec'h emañ eta ?  
Galvet eo gant FONTANELLA !  
Ha mut oc'h-holl lonkerien vreïn  
Ha da gaout respont ret eo skeiñ ?  
Ur c'hleze pik a zo ganin  
Distagañ rik ho teod a rin !

AN TAVARNOUR (izel da skouarn FONTANELLA)

Ar c'horrig, azezet du-se  
Hag a zoug un tog 'giz Kerne  
Hennezh, Aotrou, eo Yann GERDREZ.

EDER

Ha ! Eñ 'ni eo ! (d' an den) markez lorgnez  
Sav da reor alese, kozh noter !  
Ha selaou mat Aotrou EDER !  
War 'r pezh am eus klevet hiriou  
Emaout e soñj mont d' ar Breudoù  
Da gontañ gaou, da goll va Brud  
Dirak an Dug hag an holl dud ?  
Perak e krenez evel-se ?  
Ha n' emañ ket gwir marteze  
Ac'h eus c'hoant bezañ tamaller  
Enep d' EDER MANERKAER ?

242

YANN GERDREZ

Penaos Aotrou ?... E pe zoare ?

EDER

Arabat dit ober al leue...  
Klevout a rez mat va goulenn !

YANN GERDREZ

Touiñ ' ran Aotrou... War va fenn...  
Me n' am eus ket a rebechoù  
D' ober hiziv sur er Breudoù  
D' ar c'habiten FONTANELLA !  
...Gwir, urzh am eus da damallañ  
Met n' eo nemet d' e soudarded !  
INT o deus graet meur a dorfed...

EDER

Ata loen ! Debrouer krogen sec'h !  
War va zud klask teurel ar bec'h !  
Seurt digareziou a zo lous  
Arabat treiñ yod da grampouzh !

YANN GERDREZ

Met...

EDER

Gwel't a rez laonenn va c'hleze ?  
Dal ! Setu 'mañ-hi war da c'houg !

YANN GERDREZ

Am laoskit, Aotrou, 'n anv Doue !

EDER

Seul vui e kreni... az po droug !  
...Selaou, Yann GERDREZ ; ar wech-mañ  
Da leuskel ' rin da vont ac'han.  
...D' ar Breudoù ' c'hellez mont ivez...  
Hogen, diwall ! Bez war evezh !  
Mar deo re hir da deod du-se  
Dispennet ' vi prim ganin-me !  
Ale ! Foei ! Mont a ran Paotred...

(Kuit.)

243

YANN GERDREZ

Ar Bleiz !

Dalc'het vo, 'barzh pell, ha barnet !

-XX-

(E sal vras ar c'hastell.)

UR VOUEZH SKILTR

Aotrou MERKEUR, DUG E BREIZH !

AN DUG

Aotrou Deputeed ! Hervez ar Reizh  
Ha peogwir ganin 'mañ 'n enor :  
SETU AR BREUDOU-MAN DIGOR !  
Ra savo pep hini d' e dro  
Da ziskuliañ klemmoù e vro :  
Hini kêr Bempoull da gentañ  
Selaouomp neuze anezhañ !

KANNAD KER BEMPOULL

Aotrou, dre berzh va c'henvroiz  
Me ' zo deut da c'houlenn kastiz  
Evit soudarded ferv  
Hag o c'habiten garv  
O deus, a-enep d' hoc'h urzhioù  
Graet en hor c'hêr gwall reuzioù !

AN DUG

Pe anv 'n deus ar c'habiten ?

KANNAD PEMPOULL

FONTANELLA !

244

AN DUG

...Biskoazh kement !...

Me a anavez ar Baron

Servijet mat 'n deus ac'hanon

Meur ' wech ! Daoust ma kredan e gwirionez

Mañ-eñ feal d' an UNVANIEZH

An tamall-se eo ret skrivañ

War ar paper e-giz pep tra !

Selaouomp neuze goude-se

Klemmoù kannad kêr Landerne.

KANNAD LANDERNE

Aotrou Dug, dre berzh va c'henvroiz

E c'houlennan ivez kastiz

'Vit an hevelep forbaned !

Graet o deus-i nouspet torfed :

Bountet an tan amañ, laeret traoù e lec'h all

Lazhet tud eus ho tu koulz ha re an tu all

Ur gwall gabiten oa ganto

Me ' gred eo EDER e ano

Evidomp avat eo ar BLEIZ !

AN DUG

Adarre ! Eñ a waskfe Breizh ?

Eñ ken dispar, ken talvoudus

Trubard e vefe din ? Mantrus !

Azezit, kannad Landerne

Klevomp hini Kastellneve !

KANNAD KASTELLNEVE

Aotrou Dug, en hevelep giz

En em glemm va holl genvroiz

Eus doare an hevelep den

Kastiz, Aotrou, d' ar c'habiten !

AR GANNADED

Kastizit anezhañ, Aotrou !

Kasit anezhañ d' ar justisoù !

AN DUG

Gwall gablus eo, diouzh an doare...

Testoù ' rankan kaout koulskoude

Bez' a zo c'hoazh unan bennak

En deus testeni da zistag ?

245

YANN GERDREZ

Me, Aotrou Dug !

AN DUG

A b'lec'h ' teuez-te ?

YANN GERDREZ

Eus kichen Kemper, Bro-Gerne

Noter dre va stad, den desket

Me, Yann GERDREZ on bet kaset

D' ho kaout dre berzh va c'henvroiz  
'Vit tamall gwalloù d' un den kriz !...  
Hag e oufec'h an trubuilhoù  
Hag e oufec'h ar gwalleurioù  
Hon eus-ni holl douget du-se  
Ha neket dre faot ar Roue  
Hogen eus perzh an Unvaniezh !  
Pe gentoc'h, yao, e gwirionez  
Kentoc'h eus a-berzh soudarded  
Hag a rae van, an drubarded  
Da vrezeliñ a-zindanoc'h...  
Selaouit ! Kredit mar karoc'h  
An taol gwashañ bet graet ganto.  
Goude bezañ gwastet ar vro  
Int, loened gouez, int deut a-benn  
Da zismantrañ naet hor c'hêrbenn ;  
Entanet o deus hon tiez  
Ha lazhet hon tud hep truez.  
Se n' oa ket a-walc'h evito,  
Kant gwech, mil gwech mantrusoc'h eo  
Ar pezh o deus graet en iliz  
Eno, va faour-kaezh kenvroiz  
Spontet-holl ' oa aet da guzhañ  
Siwazh ! Dezho ne dalve tra  
Klask e-giz-se d' en em dennañ...  
Eus krabanoù ar forbaned !  
An tan deus ar re-mañ bountet  
E-barzh an iliz.  
Na pegen kriz  
Lazhet o deus ar Gouarner  
A oa deut er-maez diwar c'her  
- Roet gant ar soudarded fall -  
Ne c'hoarvezfe droug dezhañ na d' ar re all !  
Ar ger-se a zo bet torret !  
Va Doue n' eo ket aotreet !  
A-barzh bezañ lazhet, gwel't en deus  
Un treitour o wallañ - pebezh euzh -  
E wreg dirak e zaoulagad...  
Ret eo din, eus kement, ober stad  
Ha koulskoude, ur ranngalon  
Eo din pa soñjan d' an itron.

(Safar.)

AN DUG  
Mezhus ! Ha fallakr eo, gwir eo !  
Lavarit buan, pe ano  
En deus an hini a rene  
Ar soudarded divezhet-se ?

YANN GERDREZ  
AR BLEIZ ! Aotrou, FONTANELLA !  
E plasoù all anvet eo c'hoazh  
Baron EDER MANERKAER  
Ul lazher ! Ur gwaller ! Hag ul laer !

AN DUG  
Ra vezo kaset d' e gerc'hat  
An archerien !

YANN GERDREZ  
Aes da bakat  
Ur frapad ken ac'han emañ  
E welet 'm eus ! E Gwened 'mañ !

EDER

DUG ! Evit gwir ! Amañ 'maon  
Da reizhañ an traoù e teuan !!!

(Un taol-kurun : sabatuet an holl.)

247

- XXI -

AN DUG

C'hwi MANERKAER ! C'hwi d' ar Breudoù !

EDER

Deut on da lavar deoc'h, Aotrou  
N' am eus-me graet d' an UNVANIEZH  
Nemet enor ha largentez !  
Gone'tet 'm eus deoc'h kêrioù e-leizh  
Savet 'm eus tailhoù, meur a breizh  
Am eus dastumet evidoc'h  
Larit din-me ma 'z eus gwelloc'h  
Kabiten egedon 'n hoc'h arme ?

AN DUG

Hag ho torfedoù ?

EDER

N' eo ket me !  
Kaout a reer atav bourevien  
E-touez an holl vrezelourien  
Hag e-touez va re-me evel 'touez ar re all  
'Vit kennebeut n' eo ret tamall !

AN DUG

Grit peoc'h, EDER, ha respontit !  
Ur vantell gaer a zo ganit  
- Ha gant arc'hant pet korf marv  
'C'h eus he frenet ?... Ho, c'hoarzh atav !  
'Barzh pell e kavi barnerien !  
- Dalc'hit anezhañ, archerien !

248

-XXII -

(Emaomp e Pariz, e-barzh ar C'hastellig, EDER a zo tennet er-maez eus an  
toull-bac'h ha degaset dirak ar Barner.)

AR BARNER

Gward ! Kasit ar prizoniad amañ !

(Klevout a reer an nor bonner o wigourat hag ar prizoniad hag ar gward o  
tont en trepas.)

AR BARNER

Da ano ha da stad, da gentañ !

EDER

EDER MANERKAER, anvet e Breizh  
Baron FONTANELLA... Pe ar BLEIZ !

AR BARNER

A-raok ma vo douget ar varn  
E vi raktal etre daouarn  
Ar bourev ! Tou e lari

Ar wirionez ha nemeti !

EDER

Touiñ a ran !

AR BARNER

Prest out da lakaat  
'Barzh ar waskerell... da droad ?

EDER

Ya !

AR BARNER

Bourev ! 'n em lakit d' e c'hennañ  
Ur genn nemetken.

(Lakaet eo ar genn a daolioù morzhol. Fontanella a glemm war bep taol.)

249

...Ur wech c'hoazh  
Goulennet ' vo ganit, EDER  
Anzavout ar wirionez, sklaer !  
Pe neuze ' vi gwall vac'hagnet !  
...Ha tud n' ac'h eus ket drouklazhet  
Te da-unan, e Breizh-Izel ?

EDER

N' am eus graet nemet ar Brezel !

AR BARNER

Bourev ! Sankit mat an eil genn !  
...Lavar din bremañ, diwar-benn  
Maner da eontr, e-lec'h n' out bet  
Nemet da laerezh : gwir n' eo ket ?  
Gwashoc'h ! 'deus ket ranket ar verc'h  
Skrapet ganit, mont war da lerc'h ?

EDER

Asantet he doe mont ganin  
...Hi am c'hare... Dimeziñ ganti ' felle din !

AR BARNER

Lakait mar plij ur genn all c'hoazh !  
Ha n' ac'h eus ket, dindan ar groaz  
Saotret un iliz ? Krouget tud ?  
Ha kollet d' un itron he brud ?

EDER

Nann ! Nann ! N' eo ket gwir, me a nac'h !

AR BARNER

Donoc'h ar genn !

EDER

Nann, pa laran, diwar va fenn !  
Se n' eo ket gwir ! A-walc'h ! A-walc'h !

250

- XXIII -

UR GWARD

Ur vaouez ' zo er-maez, goulenn ' ra da zont tre !

AR BARNER

Penaos ! Da zont amañ ? Hag hi ' deus un aotre ?



AR GWARD

Ya !

AR BARNER

Iskis eo ! Atav direnkamant...

Mat-tre... Kas hi e-barzh peogwir ' deus c'hoant !

(Ur vaouez a zeu tre.)

EDER (hanter-vare)

MARI ! C'hwi aman !

MARI

Sellit ! Pezh o deus graet dezhañ !

Ho va gwaz paour ! Ho va Jezus

Na da stad a zo truezus !

(D' ar Barner.)

Aotrou Barner ! Ho pediñ ' ran !

Ho pet truez outañ !

Ho pet truez 'ta eus va gwaz !

AR BARNER

Evit kaout gwalc'h eus e wall bras

Mervel a ranko !

MARI

E buhez

Laoskit anezhañ, den garo !

AR BARNER

NANN!

EÑ IVEZ A OA DIDRUEZ !

251

- XXIV -

AR BARNER (o lenn). - Taboulinoù a glever.

" HA SETU, DRE M' EN DEUS, EDER MANERKAER

ANZAVET E WALLOU, HIZIV DIRAK AR BARNER

E GONDAONIÑ A RAN D' AR ROD HA D' AR MARO

TORRET ' VO E ESKERN, HA DIBENNET E VO ! "

Mir Meurzh 1961

E Kernevez ar Roue.

Errata el Lodenn Gentañ

P. 155 - e-lec'h : « E GONDAONIÑ A RAN HA D' AR MARO... »,

lenn : « E GONDAONIÑ A RAN D' AR ROD HA D' AR MARO... »

P. 157 - e-lec'h : « Sellit pizh ar re-mañ »...

lenn : « Sell't pizh ouzh ar re-mañ »

P. 158-159, e-lec'h : « AR C'HALONI », lenn : « AR CHALONI ».

P. 159 - e-lec'h : « e ma-unan », lenn : « e va-unan ».

P. 160 - lenn : « Peder eur ! Peder eur ! Kouskit mat ! »

P. 161 - e-lec'h : « Setu amaon war var... »

lenn : « Set emañ... »

P. 162 - warlerc'h ar werzenn : « Te ' fell dit bezañ 'r Mestr, eveljust, neketa ?

lenn : « Hogen n' out gour, Kalvez,  
n' out mat d' ober netra ! »

P. 163 - e-lec'h : « Am eus ganin em dorn ! »...

lenn : « A zo ganin em dorn ! »...

P. 170 - e-lec'h : « Tennit dezhañ e c'hozh votoù »...

lenn : « Tennit gantañ e gozh votoù »...

P. 177 - e-lec'h : « A Porched », lenn : « Ar Borched ».

P. 181 - e-lec'h : « Sell anezhi 'ta, sell he beg ! »

lenn : « Sell outi 'ta, sell ouzh he beg ! »

EVEZHIADENN : paj. 180 :

ar werzenn : « Gant ho kwalenn hag ho puhez », a zo troidigezh ar gallek kozh :  
« Bagues et vies sauvés », nemet dre m' eo ar ger « Bagues » evit : Bagages  
(evel ma oar n' eus forzh pe istorour), gwelloc'h eo lakaat « madoù » e-lec'h «  
kwalenn ».

« Gant ho madoù hag ho puhez ».

## HOL LENNEGEZH KOLLET

A-drugarez da labourioù an Ao. Fleuriot, na c'hellomp ket meuliñ re, hon eus bremañ ur vraskeudenn eus henstad hor yezh, ha gouzout a reomp e oa (kenkoulz hag ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg) ur yezh skiantel, implijet evit skridoù a yezhadurezh, a lezennouriezh, a vezekniezh hag a steredoniezh, d' ur mare ma ne oa ket ar galleg ur yezh lennegel zoken. Met diwar al lennegezh vrezhonek kempred n' hon eus ket zoken bruzhunou.

Skortoc'h c'hoazh eo hon anaoudegezh eus ar c'hrennvrezhoneg koshañ - eus an XIIvet d' ar XIVvet kvd. N' hon eus ket evit an amzer-se ar glosoù puilh hag a zo hon andon pennañ evit an henvrezhoneg, ha ret eo dimp tremen gant un niver anvioù divoutin tennet eus an dihelloù. Kollet eo ivez lennegezh ar mare-se ; hogen da vihanañ, n' omp ket peurzic'houzvez anezhi. Ur skeud anezhi a zamverzomp a-dreuz al lennegezhioù gallek ha saoznek - romantoù Chrestien, barzhonegoù Mari, kontadennoù Chaucer.

253

Ur rendael hir a zo bet e-touez ar ouizieien a-zivout emledidigezh « danvez Breizh » - penaos eo deut mojennoù keltiek-rik, gwriziennet en hengounioù koshañ Breizh-Veur hag Iwerzhon, d' en em silañ el lennegezh c'hallek hag ac'hann da aloubiñ Europa a-bezh. Joseph Bédier a roe ar perzh pouezusañ d' an delennourien ha danevellourien a Vreizh-Vihan, a oa brudet dre-holl en XI-XIIvet kvd. ; divyezhek ma oant, e oant barrek da adaozañ e galleg mojennoù ha kanennoù kaerañ o bro. Kalz a Vreizhiz a oa aet da heul Gwilherm an Alouber, ha kenkoulz hag an Normaned o doa resevet digantañ domanioù e Bro-Saoz (ha zoken e Kembre : Jafrez a Venoe a oa ur Breizhad, war a greder bremañ, ha n' eo ket ur C'hembread) ; hep mar ebet o doa degaset o barzhed ganto, hag ar re-se o doa adkavet e Kernev-Veur hag e Kembre hengounioù o bro, en ur yezh a gomprenent c'hoazh mat-a-walc'h, ha treuzkaset ar « mojennoù arzhuriek » d' an Normaned. Difennet eo bet ar menoz-se gant ar ouizieien alaman (Zimmer, Brugger) ha - souezhus a-walc'h - gant Kembreiz (T. Stephens, W. J. Gruffydd), ha kaset d' ar pal pellañ gant ar « arzhuregour » amerikan brudet R. S. Loomis (s. ur rentañ-kont eus unan eus e levrioù gant Roparz Hemon, " Al Liamm " 42 pp 30-34). Gouez da hemañ, da Vreizhiz hepken eo dleet an enor da veza skignet brud Arzhur, Merzin, Trestan, ar Graal hag an Daol Grenn ; re a gasoni a oa etre Brezhoned Breizh-Veur hag o alouberien gall-norman evit ma c'hellfed soñjal e levezon lennegezh ar re drec'het war an drec'hourien ; ar Vretoned, avat, a oa kevredet gant an Normaned ha klask a oa gant ar re-se war an delennourien hag an danevellourien vreizhat. Zoken Bleheris, ar barzh-kaner kembreat brudet e lez Poitiers (Bledri e oa moarvat e anv kembraek gwirion), en dije implijet hengounioù a Vreizh-Vihan kentoc'h eget re e vro-eñ.

Kontrol-rik eo menoz hor c'henvroad Jozeb Loth hag ar C'hallaoued F. Lot hag, en hon amzer-ni, Jean Marx. Hervezo, e Breizh-Veur hepken o dije ar C'hallaoued graet anaoudegezh gant « danvez Breizh » - rak-eeun digant Kembreiz, Kerneviz hag ivez Brezhoned an Hanternoz (Cumberland ha Kreisteiz Bro-Skos) (1) ; Breizhiz n' o dije bet perzh ebet e kement-se, pe ur perzh dister-kenañ.

Goude bezañ studiet ar gudenn un tammig va-unan, e teuan da soñjal evel oberourez an dezenn a gomzan anezhi pelloc'h (ha J. Marx e-unan, da varn diouzh e levr diwezhañ, a zo tuet bremañ da gemer ur savboent heñvel a-walc'h) : dizifennadus eo an daou c'houlakadur ma vennont bezañ « netra-ken ». Paotred ar « goulakadur breizhveurek » a bouez war ezvezañs ar skridoù kozh e brezhoneg, keñveriet gant pinvidigezh al lennegezh kembraek kempred. Disoñjal a reont pegen pouezus eo al lennegezh dre gomz en holl vroioù keltiek ; hag hep kalz a reizhpoell e roont ur perzh bras a-walc'h da Gernev-Veur, n' eo ket he lennegezh skrivet pinvidikoc'h, koshoc'h na dibareloc'h eget hini Vreizh, er c'hontrol.

Ouzhpenn-se, evel ma welimp, ez eus abegoù da grediñ ez eus bet testennoù brezhonek dre skrid, kollet bremañ, e marevezh koshañ ar c'hrennvrezhoneg .

(1) Miret eo bet o yezh gant ar re-se betek an XIIvet kvd. S, K. Jackson, " Angles and Britons in Northumberland and Cumbria " ; Angles and Britons, Cardiff 1963, pp. 60-84.

254

N' eo ket diougeloc'h arguzennoù ar « goulakadur breizhek ». Diazezet eo dreist-holl war ar gerioù implijet er skridoù gallek ha latin pa venegont mammennoù ar mojennoù diwar-benn Arzhur pe an danevellerien o deus o skignet : bepred e komzer eus Bretons pe Britones, gwech ebet eus Gallois pe Walenses. Loomis dreist-holl en deus roet kalz a bouez d' an anvioù-se, a zo hervezañ ur brouenn direndael n' o dije bet Kembreiz perzh ebet e skignidigezh an danvez arzhuriek. Met pa seller a-dost, n' heller ket difenn ar menoz en ur stumm ken dibleg. Gwir eo e talv Bretons kement ha « Breizhiz » e galleg an XIIvet kvd., met er yezh voutin hepken ; n' eus nemet pennaouiñ avat e skridoù ar mare evit dastum skouerioù niverus ma vez implijet ar ger en ur ster lennegel pe istorel : « Brezhoned » eus ne vern pe vro. Mari a Vro-C'hall, da skouer, a ro war gont « « Li Bretun » meur a zanevell hag a c'heller prouiñ n' int ket deut a Vreizh-Vihan. Gwiroc'h c'hoazh eo evit al latin *Britones*. A-hend-all, penaos krediñ e vevas Kembreiz ha Normaned kichen-ha-kichen e-pad kantvedoù, evel pa vefe o treiñ kein an eil re d' ar re all, hep ma vije etrezo darempredoù sevenadurel ? N' eo ket naturel, ha dislavaret eo gant an istor. Levezon al lennegezh c'hallek hag ar sevenadurezh gall war Gembre n' hell bezañ nac'het, ma n' eo ket bet ken kreñv ha ma 'z eus bet klasket hen prouiñ, ha diwirheñvel eo e vije bet al levezon diouzh un tu hepken. Da drede, arvarus-meurbet eo darn eus an anvioù « brezhonek » implijet gant gouizieien na oant ket brezhonegourien na zoken keltiegourien evit prouiñ orin breizhek ar mojennoù arzhuriek.

Diwar gement-se e ranker dastum, a gredan, o deus ar C'hallaoued degemeret « danvez Breizh » digant ar Vrezhoned : Breizhiz e Breizh-Vihan, Breizhiz annezet e Breizh-Veur, Kerneveuriz, Kembreiz ha « tud an Hanternoz », hep ma c'hellfed lavarout e voe pouezusoc'h lodenn ar re-mañ, ar re-se pe ar re-hont. E gwirionez, unvanoc'h e oa ar bed breizhek (sensu lato) en XIIvet kvd. eget ne greder ; ha Breizh-Vihan, kevredet gant ar rouantelezh saoz-ha-norman, a droe kein d' an Douar-Bras hag he deveze darempredoù stank gant Kernev-Veur ha Kembre.

\*

255

Un druez eo n' eo ket bet dedennet hor c'henvroiz, abaoe amzer Loth, gant studi al lennegezhioù gallek ha saoznek (ha lennegezhioù europat all, alamanek dreist-holl) e-sell adkavout enno ar pezh o deus miret eus hol lennegezh kollet. Labour pouezus war an dachenn-se a zo bet graet e Breizh-Veur, er bloavezhioù diwezhañ, gant div itron, ur Gembreadez hag ur Saozez. An It. Bullock-Davies, eus Bangor, he deus difennet dirak Skol-Veur Kembre ur pikol tezenn doktorelezh (ouzhpenn 600 pajenn) diwar-benn buhez hag oberoù Mari a Vro-C'hall hag he darempredoù gant Kembre. Prouet he deus da vat, hañval ganin, un dra hag a oa diskred warnañ abaoe pell zo ; e oa ar varzhez-se an un plac'h ha Mari, hanter-c'hoar avoultr ar roue Herri II hag abadez Shaftesbury ; diskouezet he deus ivez e vevas Mari e-pad ur pennad mat gant he c'henderv Gwilherm a Gloucester, aotrou Caerlleon, hag ez anaveze mat Kreisteiz Kembre.

Darempredoù gant Breizh he devoe ivez, ken en he bro c'henidik (Outillé, e-kichen Le Mans), ken e lez he breur : eno e oa barzhed ha kanerien a Vreizh, a-gevret gant daou Vreizhad desket, Richard, sekretour ar roue, ha Salaun, sekretour ar rouanez. Sklerijennet eo bet ivez perzh ur rummad tud na soñjer ket bepred enno : al « latinerien » pe jubennourien, e latin *latinarii*, e galleg kozh *latiniers* pe *latimiers*. Ar re-se, en o amzer vak, a vourre o kontañ da dud al lez danevelloù o bro c'henidik, pe traoù o doa lennet pe glevet e yezhoù all ; hag en o zouez e oa Breizhiz pe tud hag a ouie brezhoneg. Ar *Roman de Garin* a lavar diwar-benn unan anezho :

*Latinier fu, si sot parler Roman,  
Englois, Gallois, et Breton et Norman.*

Keñveriañ a c'heller gant komzoù Mark e *Tristan und Isolt* Gottfried a Strassburg :

Tristan, ich hôrte dich doch ê  
britûnisch singen und gâlois,  
guot latine und franzois.

N' eus arvar ebet enta e oa ar brezhoneg unan eus ar yezhoù a gomzed en XIIvet kvd. e Bro-Saoz hag e lez Herri II end-eeun. Tro a-walc'h he deveze Mari, gant-se, da glevout al lais a oa Breizhiz ken brudet evito.

256

Met petra ez-resis e oa al *lais*-se ? Kant pajenn a zo gouestlet d' ar gudenn-se e levr an It. Bullock-Davies - kant pajenn leun-tenn a ouiziegezh n'eo ket hepken war istor al lennegezh hogen ivez war istor ar sonerezh er Grennamzer. Diskouez a ra splann e oa al *lai* (diwar heniwerzhoneg *laid* « kan, d.h. an evned », bremañ *laoi*, skoseg *laoidh*) da gentañ-holl ur pezh-sonerezh, luziet ha gouiziek-kenañ, evit an delenn pe ar c'hrouzh (1). Savet e veze ul *lai*, peurliesañ, evit eñvoriñ un darvoud pouezus, glac'harus pe blijus - e-giz « *Lai an Aod* » bet savet evit Gwilherm an Alouber gant an « *Itron Ruz* » a Vreizh, hervez ar varzhoneg skandinavek *Strandarliodh* (s. rakskriz Ar Braz da *Musiques bretonnes* Duhamel) ; ha pa veze c'hoariet re bell goude an darvoud, pe re bell diouzh al lec'h ma oa c'hoarvezet, e veze boas ar soner da ziskleriañ an istor d' ar selaouerien a-raok kregiñ da c'hoari. Alies - ket bepred avat, ret eo pouezañ war ar poent-se - e-lec'h kontañ an danevell e kane anezhi war un ton savet gantañ war an taol hag a gendonie gant sonerezh an delenn ; e komzoù all, ar vouezh eo a geneile an delenn, ha n'eo ket ar c'hontrol. Damheñvel e oa e-se ouzh ar *canu penillion* chomet ken poblek e Kembre betek hon amzer.

Lavarout a ra Mari, e derou pe e diwezh hogozik pep *lai*, he deus desket an istor digant *li Bretun*, met evel m' hon eus gwelet, ne dalv ket bepred « Breizhiz ». Rendaelou a zo bet diwar-benn orin darn eus al lais. En ur studiañ pizh an anvadurezh hag an douaroniezh eo deut an It. Bullock-Davies a-benn da didoueziañ ar pezhioù « breizhek » diouzh ar re « breizhveurek ». E-touez ar re gentañ ez eus *Guigemar* (Bro-Leon), *Equitan* (Naoned), *Le Fresne* (Dol), *Le Laustic* (Sant-Malo) ha *Chaitivel* (Naoned). *Bisclavret* a zeufe kentoc'h a Gernev-Veur. *Milun* hag *Eliduc* a dremen en div Vreizh, hogen prouiñ a c'heller ez int bet stummet e Breizh-Veur. *Lanval*, *Yonec* ha *Le Chevrefoil* a zo breizhveurek. *Les Deus Amanz* a dremen e Pitres, e-kichen Rouen, hag hervez an It. Bullock-Davies e teufe eus ur vojenn c'halian heñvel ouzh istor Kulhwch hag Olwen (ar pezh a gavan tenn da grediñ). E-touez al lais na lakaer mui war anv Mari, *Guingamor* (un eilstumm eus *Guigemar*), *Graelent*, *Tyolet*, *Tidorel* a hañval bezañ breizhek a orin.

(1) Ar c'hrouzh (kembraeg *crwth*, galleg *kozh rote*) n' en deus mann d' ober gant ar violoñs, evel ma kreder alies. Un doare lourenn e oa, da gentañ krafet, diwezhatoc'h taravet gant ur wareg. Implijet eo bet e Kembre betek diwezh an XVIIIvet kvd. ; ur benveg damheñvel a gaver c'hoazh e Skandinavia.

257

Ur studiadenn a-bouez bras diwar-benn ar « mojennoù a roueelezh » a zo bet graet un nebeut bloavezhioù zo gant an It. Bromwich, eus Skol-Veur Kergront (anavezet dreist-holl evit he levr diwar-benn Triadennoù Enez Preden). Ar mojennoù-se, stank en henlennegezh Iwerzhon, a vez enno ur vaouez oc'h aroueziañ ar vro, hag an hini a zimez dezhi pe en em bar ganti (pe zoken, e mojennoù zo, a bok dezhi) a zeu da vezañ roue ha tad ur rummad roueed. A-wechoù ez eo ar vaouez un « doueez-anverez » (eponym), a zoug anv ar vro, evel **Eriu**, **Banba** ha **Fotla**, gwraeg an tri roue gourvibien **Dagda** (1). Darvoudoù all a c'heller kavout ivez en danevell, a-unan pe asambles, hag an istor klok a hañval bezañ evel-hen : an haroz a ya d' an hemolc'h ; heuliañ ha lazhañ a ra ul loen, peurliesañ ur c'harv

gwenn ; deut ar sec'hed warnañ, e klask ur feunteun ; an hini a gav a zo diwallet gant ur wrac'h euzhus, a nac'h reiñ dour dezhañ anez e kousk ganti (pe e pok dezhi). Asantiñ a ra, hag ar wrac'h a dro raktal d' ur vaouez yaouank kaer a bromet dezhañ ar roueelezh.

Anavezet eo bet ar seurt mojennoù e Breizh, gouez d' an It. Bromwich. Unan anezho a zo bet mammenn romant brudet Chrestien a d-Troyes, *Erec et Enide*, damheñvel ouzh mabinogi *Gereint hag Enid* ( troet gant Abeozen, " Gwalarn ". niv. 93). Dizoloet e oa bet pell zo e oa **Erec** ar brezhoneg-krenn **Guerec**, abretoc'h **Uueroc**, anv ar pennbrezelour hanter-vojennel, diazezour rouantelezh Wened, ha douget ivez gant meur a hini eus e warlerc'hidi ; ha kredet e veze peurliesañ e oa bet savet romant Chrestien diwar un danevell vreizhek amprestet digant Kembreiz, gant anv un den-meur a Vreizh-Vihan lakaet e-lec'h an anv damheñvel Gereint, dianav du-mañ. Met kevrinus e chome anv ar plac'h **Enid** (2), hag amañ he deus an It. Bromwich diskouezet hec'h ijin : evel ma teu **Erec** diwar Bro-(W)erec, e teu **Enid** diwar Bro-(W)ened. Hi eo doueez-anverez ar vro, ha Gwereg, en ur zimeziñ ganti, a c'hounez ar rouantelezh evitañ e-unan hag evit e ziskennidi (kurunennet eo Erec hag Enide e Naoned e diwezh an istor, met sur a-walc'h en danevell-orin e oa e Gwened). Temoù ar c'harv gwenn hag ar wrac'h a gaver roudoù anezho en **Erec**, hag i gwall-zisleberet. Ret eo gant-se goulakaat ez eo aet an danevell a Vreizh da Gembre, ha n' eo ket ar c'hontrol ; e-lec'h un den-meur breizhat dianav e anv dezho o deus Kembreiz lakaet an danevell war gont **Gereint**, roue Kernev-Veur, a zo bet skrivet e varvnad e kembraeg e *Levr Du Caerfyrddin*. Ar romant gallek a grog gant ar gerioù- mañ : « Ar roue Arzhur a zalc'he e lez e Caradigan » ; hama, Ceredigion eo stumm kembraek anv kontelezh « Cardigan », hogen ar gêr hec'h-unan a zo bet anvet a-viskoazh Aberteifi gant Kembreiz ; anat eo enta he deus an danevell beajet a Vreizh da Gembre pa ro da Aberteifi un anv gall-ha-norman, implijet moarvat gant Breizhiz annezet du-hont.

(1) D'Arbois de Jubainville, *Cycle mythologique*, p. 68.

(2) Ar ger « hengembraek » **enit**, troet « wood-lark » e geriadurioù zo, a hañval bezañ ur « ger-tasmant ».

258

Heklevioù all eus ar vojenn-roueelezh a gavomp e tri lai gant Mari (pe bet lakaet war hec'h anv, e gwir pe e gaou ne vern dimp) : **Graelent**, **Guigemar** ha **Guingamor**. **Graelent** a zo ur marc'heg yaouank kadarn e gwazoniezh gant roue Breizh. Kouezhet en drouk-c'hras dre warizi ar rouanez, ez a un deiz d' an hemolc'h e-unan-penn hag e red war-lerc'h ur c'harv gwenn, a vlegn anezhañ betek ur feunteun dour boull m' emañ un dimezell gaer o kouronkañ. Goude un nebeut ardoù ez asant d' e garout, hag anzav a ra edo aze ouzh e c'hortoz. Prometiñ a ra dezhañ a bep seurt pinvidigezh, gant na lavarar mann da zen ebet war he divout (n' eo ket ret dimp heuliañ an istor betek ar penn). Anat eo hon eus amañ tem ar « wreg-voudigez » a zegas pinvidigezh gant ma chomo kuzh d' an holl nemet he fried, hogen kemmesket gant ur vojenn-roueelezh. **Graelent** a zo anv roue kentañ Bro-Gernev, en henvrezhoneg **Gradlon**, aet abred-kenañ da **Graeleun**, **Graelen** en distagadur, daoust ma kendalc'hjod da skrivañ **Gradlon**, **Grazlon**, **Glazren** betek ar XVIIvet kvd. (1) ; meur a roue war e lerc'h a zougas an hevelep anv. Rouantelezh Kernev, evel hini Wened, a voe roet gant ur voudigez d'ar roue kentañ.

An elfennoù-se - hemolc'h ar c'harv gwenn, ar wrac'h, ar wreg-voudigez, ar roueelezh - a weler ivez, gwall-gemmesket, e **Guigemar**. Un dra avat a zo sklaeroc'h el lai-se eget er re all : **Guigemar** a zo mab d' ar « sire de Liun », ha gouzout a reomp e voe savet kontelezh Leon gant Uuihomarch, un anv aet da Guiomarch e brezhoneg-krenn (bremañ Gwiomarc'h pe Gwioñvarc'h) ; evel Uueroc ha Gradlon, e voe un anv herezhel el lignez-se, hag evit gwir, ur Guyomar, beskont Leon, a oa e-touez ar Vretoned e lez Herri II. Un dra dudius all eo e lavar Mari :

sulunc la letre e l'écriture  
vos mosterrai une aventure.

(1) A-zivout an -t (ma n' eo ket un doare-skrivañ gallek), s. L. Fleuriot, *Etudes Celtiques*, 9, p. 185 ; *Le vieux breton*, p. 111.

N' eo ket re sklaer ar gerioù-se, met an It. Bullock-Davies a gav dezhi e tiskouezont e voe tennet mojenn **Guigemar** gant Mari diwar un destenn dre skrid. Krediñ a ran ez eo kadarnaet he martezeadenn gant an anvioù-tud a gaver er varzhoneg, evel **Meriaduc** : ur stumm skrivet eus an XIIvet kvd. eo, o klask aroueziañ un distagadur « Meriadök » ; n' eus ket da grediñ e vije bet skrivet e-giz-se gant ar C'hallaoued diwar glevout ar stumm komzet (1). Istor **Gaingamor** a zo damheñvel ouzh hini **Guigemar**, ha kemmesket eo bet an daou anv, daoust ma teuont diwar anvioù hen-vrezhonek disheñvel (Guigemar diwar Uuihomarch, Guingamor diwar luncomarch).

Marteze e kavo da dud zo ez eo un tamm re ijinus pezh-labour an It. Bromwich. Me a zo tuet da grediñ emañ ar gwir ganti. Adkavet he dije evel-se roudoù ur c'helc'h mojennoù o plediñ gant savidigezh rouantelezhioù Gwened, Kernev ha Leon (klaouestre e oa ivez ur vojenn heñvel diwar-benn Riuual, diazeour rouantelezh Donvez (Domnonea), hogen kollet da vat e hañval bezañ). Ur c'helc'h mojennoù hag a adskoulm hon darempredoù gant amzer-dremenet koshañ hor gouenn.

\*

Gwelout a reer gant ar skouerioù-se pegen frouezhus e c'hell bezañ ur studi pizh eus an elfennoù breizhek strewet e lennegezh Europa. E gwirionez, an oadvezh-se na ouzomp koulz lavarout netra diwar e benn a voe moarvat an hini skedusañ en istor hol lennegezh. Ma vije bet miret skridoù eus an amzer-se, e c'hellfemp hep ruziañ kemer hol lec'h e-kichen Kembreiz hag Iwerzhoniz. Da vihanañ e c'hellomp klask dastum gant doujañs *membra disiecta* al lennegezh-se.

(1) Kemend-all a c'heller lavarout diwar-benn an anvioù all en **-uc, -us, -ues**, a zo stank er mojennoù arzhuriek. Unan anezho, Garadues Briebras (« brec'h verr », diwar dreuzkompren ar gerioù brezhonek !), a dle dont diwar stumm brezhonek an XIIved kvd., \* Caraduc Brech Bras (e kembraeg Caradauc Vreich Vras) ; n'eo ket graet ar c'hemmadur, pezh a brou ivez e voe amprestet an anv-se digant ar brezhoneg skrivet. Un tenn a labour avat. Aesoc'h emichañs lavarout n' eus ket bet anezhi...

#### LEVRENNADUREZH BERR

- BROMWICH, Rachel S. : « Celtic dynastie themes and the Breton lays », Et. Celt. 9, 439-474 ;  
 BULLOCK-DAVIES Constance : Marie de France and South Wales, Ph. D. thesis, University of Wales, 1963 (diembann) ;  
 LOOMIS, Roger S. : The development of Arthurian romance, London 1963 ; (et alii) : Arthurian literature in the Middle Ages, Oxford 1959 ;  
 LOTH, Joseph : Contributions à l'étude des romans de la Table Ronde, Paris 1912 ;  
 MARX, Jean : La légende arthurienne et le Graal, Paris 1952 ; Nouvelles recherches sur la littérature arthurienne, Paris 1965.

## DIAZEZOÙ AR SEVEL GWERZIOÙ

( Kendalc'h )

32. - GWERZENNOU HIR. - Ar gwerzennoù bet meneget betek-hen, daoust dezho da vezañ troc'het gant arsavioù, a zo anezho un ezel start koulskoude. Ar re emamp o vont da welout bremañ a zo enno en enep, div zarn rannet mat gant un arsav bras. Ar gwerzennoù bras-se a zo unton ha meurdezus ha mat da zisplegañ traoù uhel.

DAOUZEK MOUEZHIADENN : Un implij ledan-tre a zo bet graet eus ar c'hehed-se er c'hantved diwezhañ, da heul boaz gall an « alexandrin » moarvat. Hogen ne oa ket dianav er gwerzioù nag e krennvrezhoneg. Ar pennarsav a vez atav war-lerc'h ar c'hwec'hvet mouezhiadenn.

(skrivadur kozh)

Dour erch ha dour grisILL, ho pIL re peur cILLant.  
LangOUR quez quen GOURmANT, meschANT dicarANTEz  
DisaçUN ho pUNIS, pep guYS maz eo trISTez :  
PrydirY an rUYN, maz termin ho finuez,  
PechET neudeu quET splAN, nep queffrAN en ANhez.  
(" Melezour ar Marv ".)

Pan guelAF na rAF muY gant sourcY han muYhaf,  
PresANT dyouz ho bANDEN evalhENN eu ez af.  
Her Doe, hep mAR, gARDYS a duY da punYSSaf.  
Dyde YS Peur dISPAR, hep mAR en lavARaf.  
(" Buhez S. Gwenole ".)

262

(skrivadur nevez)

Krediñ a zleomp glAN e voe hemAN gANet  
A gorf gwERC'H ur vERC'HIG dousezIK, bennIGet,  
Hag e teus wAR AR bED, - kredET, bezET sEDer -  
Da yUN en UN dezERZH ha da vezañ mERZHer.  
(" Noueloù ".)

Gwelout a reer aze e kengan dre reolenn ar c'hwec'hvet mouezhiadenn gant unan pe ziv all en eil darn hag ez eus ouzhpenn kenganez en darn gentañ.

Hag hi he deus ganet ur mab kaer evel an de,  
Ken na larer ez eo d' ur priñs pe d' ur roue.  
(Gw. " Breizh-Izel ", ar C'hont Gwilhoù.)

Ur gwele mat a bluñv az pezo da gousket  
Evel don-me gwechall, pa oan gant va fried ;  
Ne gousken ket neuze er c'hraou gant al loened,  
Nag e skudell ar c'hi ne veze ket graet ma boued,  
(BARZAZ BREIZ, Gwreg ar C'hroazour.)

Kavout a reer ivez alies ar c'hehed-se e gwerzennoù barzhed nevez, a-wechoù kemmesket gant gwerzennoù eizh, c'hwec'h pe zoken peder mouezhiadenn :

6+6 Setu me dirazoc'h 'vel ar c'hlasker-bara  
4+4+4 'ya da c'houlenn an aluzen a zor da zor ;  
4+2+6 Ma nerzh a waz, henoazh, a zo aet da netra,  
6+6 Ma glac'har 'z on e-barzh 'vel ur c'helan er mor.  
(Y. B. KALLOC'H.)



E toull-kuzh ar gouli e strilh un daeraouenn  
Evel ur berlezenn e luc'h glizh ar beure,  
Ur berlezenn dreist priz, berradur an hollved.  
(M. GLANNDOUR.)

Pa c'hellehemp ac'hoel... hervez ho Polontez,  
Stlejal ganeomp ar soñj eus an eost o tostaat !  
Bihanoc'h riv hor bo e mikadur ar hez  
Ma vez glas ar bloaziad.  
(" Efflam Koet Skau ".)

263

Merc'hedigoù yaouank, displegit ho koefoù,  
Ha c'hwi, gwraez,  
'N em vantellit e du, rak hirie 'zo kañvoù  
E gwirionez.  
(E. VERTOU.)

Ar GWERZENNOU TRIZEK MOUEZHIADENN a zo bet graet ganto meurbet er  
werzaouriezh pobl. Ar mentad-se a zere mat-tre ouzh skridoù dalc'hus unvan :

Kentañ 'lakis ma louzoù da c'hout hag-eñ oa mat  
Oa er maezaouad segal en doa hadet ma zad.  
(Gw. " Breizh-Izel ", Janedig ar Sornerez.)

Pa oa an tad glac'haret oc'h ober e gañvoù,  
Ez oa e vab Silvestrig 'toull an nor o selaou.  
(id., Silvestrig.)

Ur youc'hadenn a glevis, youc'hadenn ar peurzorn  
Adalek Krec'h Sant-Mikael tre betek traoñ Elorn.  
(BARZAZ BREIZ, Alan Al Louarn.)

Va botoù-koad 'm eus kollet, roget va zreidigoù  
O vont da heul va dousig d' ar parkoù, d' ar c'hoadoù ;  
Pa vez ar glav, ar grizilh, an erc'h war an douar,  
Kement-se n' eo ket un harz da zaou zen a 'n em gar.  
(id., Ar c'hloareg paour.)

Bolz an neñv 'zo digoumoul evel seiz glas,  
An heol a weler enni, evel ur roue bras,  
O kerzhout, gorrek ha drant, da ober gweladenn  
D' ar frouezh a daol an douar, d' o dareviñ d' an den.  
(Y.-V. ar YANN.)

Degemeret mat eo bet ivez ar mentad-se gant ar skrivagnerien nevez.

Diwall, mab melen an Deiz ! Setu ar Wrac'h euzhus !  
Dav ganti ! Sav adarre da gleze lugernus !  
Siwazh ! Setu eñ tizhet ! Er-maez eus e c'henou,  
Redek a ra, stank ha ruz, gwad a vervadennoù.  
(T. MALMANCHE.)

264

Ha me, maget a geuz, simudet em izili  
Gant va c'horf saotret holl e pri pegus an estren,  
Pa vin beuzet e c'hwezh an elestr hag ar raden,  
A glevo c'hoazh em c'hreiz gwrezenn va gwad o virvi.  
(P.-M. MEVEL.)

An arsav a vez ez-reizh war-lerc'h ar seizhvet mouezhiad, bez' e c'hell

bezañ ivez evelato, evel er skouer diwezhañ goude ar c'hwec'hvet.

AR WERZENN PEVARZEK MOUEZHIADENN a vez kavet gwech a vez er werzaouriezh pobl.

Hag ar spas eus a seizh miz, ar spas eus a seizh miz kloz,  
Eo bet ar vinorezig hep gwelout na deiz na noz ;  
Met an daou jakob yaouank 'ya daveti bemnoz.  
(Gw. " Breizh-Izel ", An daou vanac'h.)

Kerzhit c'hwi, evnig bihan, gant ho pluñv, ho tivaskell,  
Kerzhit da glask ma yaouankiz, o ya, d' ar broioù pell !  
(Gw. ha S. Bro-WENED, Disul da vintin.)

En dastumad-mañ e kaver meur a skouer eus an heuliad 12/14 :

12 Gwell a vije ganin dour a gorn prad ma zad  
14 'Get gwin evet gant ur baron ha bout pell diouzh ma zad !  
(" Merc'h dug an Naoned ".)

An arsav a vez hogos atav war-lerc'h ar seizhvet mouezhiad, a-wechoù war-lerc'h an eizhvet.

N'eo ket bet adkemeret ar c'hehed-se gant ar varzhed a-vremañ.

E " Barzaz Breiz " e kaver skouerioù a werzennoù PEMZEK MOUEZHIADENN evel " Ar re c'hlas ", " An Hollaika ", " An Droukrañs ".

Ha n' hoc'h eus ket sentet ouzhin, hag hoc'h eus digoret,  
Ha setu goeñvet ar vleuñvenn, kollet ganeoc'h ho kened.  
(" An Droukrañs ".)

Evel ar bleuñv melen balan pe 'vel ar rozennig c'houez,  
'vel ar rozenn c'houez 'touez al lann, oa etrezo va mestrez.  
(" An Hollaika ".)

An troc'h a vez peurlvuiañ war-lerc'h an eizhvet mouezhiad.

265

E krennvrezhoneg ez eus erfin gwerzennoù C'HWEZEK MOUEZHIAD, troc'het etre div zarn a eizh mouezhiad :

Bez goAZ gant goAS nedoan boASET, da ober nem boe quET en bET man  
Na nem bezo mUY bizUIquEN, breman certEN men soutEN glan.  
Me a requET an sperET glAN hac a bremAN ez diougANaf  
Miret ma cORF oz pep tORFET, hennez beprET a appETaff.  
(« Buhez Sautez Nonn ».)

Setu e skrivadur bremañ, ur skouer all ma 'z int kemmesket gant re eizh mouezhiad :

Ur sterenn en AER ar sklaERAÑ, da desteniaÑ kentaÑ pred.  
A deuz sedER er c'harterER-MAÑ ha diouzh hemaÑ, p' an voe gANet,  
Ha tud a enOR, koskor pastORED a deus d' e weLET abred-mat  
Dre an ael gwENN o c'hemENNad.  
(" Nouelou ".)

Aze ivez e vez div wech kenganez e pep gwerzenn. N' eo ket bet adkemeret kennebeut ar gwerzennoù pemzek ha c'hwezek mouezhiadenn en amzer-vremañ. Aesoc'h eo ober gant re a eizh ha re a seizh.

gwerzennoù hep liamm ebet etrezo. Peurvuiañ avat e vez un ere etrezo, pa ne ve nemet ar glotenn dibenn. Evel ma 'z eo ar werzenn drezi hec'h-unan ur strollad mouezhiadoù ha darnoù e vez savet en doare-se strolladoù brasoc'h : pozioù pe goubladoù. Ret-mat e vo deomp avat ober an diforc'h etre ar strolladoù skrivet hag ar strolladoù gwirion.

Er-maez eus ar « c'houblad » e toug ar strolladoù anvioù, savet gant niver ar gwerzennoù : triadenn, pevaradenn, c'hwec'hadenn, hag all.

266

34. - KOUBLADENN. - Ar « c'houblad » gwirion a zo ennañ div werzenn. Ereet e vezont peurvuiañ gant ur glotenn-dibenn. An heuliad koubladoù eo a gaver hogos atav er gwerzioù :

Teir noz 'zo n' m' eus kousket banne,  
Henozh ne rin ket adarre ;

Nag o klevet an naer-wiber  
'c'hwibanat war vordig ar stêr.  
(Gwerzioù " Breizh-Izel ", Janed ar Wern.)

Ne oa ket ar ger gantañ peurlavaret mat,  
Ma kan ar c'habon rostet, a vouezh sklaer, war ar plad ;

Ma kan ar c'habon rostet war ar plad, a vouezh sklaer ;  
Neuze 'vat e voe kredet kloaregig ar gevier.  
(Gwerzioù " Breizh-Izel ", Marc'harid Laorañs.)

Pa 'z oc'h paotred hag o deus fri,  
Piv 'zo furch-difurch dre an ti ?

Piv an itron aet da vatezh,  
Kollet ganti bleuñv ha perlez ?  
(BARZAZ BREIZ, Tröad an Eginane.)

Daoust hag-eñ, paotred Kernev, e c'houzañvimp da viken,  
E c'houzañvimp ar vac'herien a wask al labourerien ?

Gwallet gante hor merc'hed koant ; lazhet mamm ha mab ha den  
Lazhet zoken an dud klañv paour 'balamour d'o daouarn gwenn.  
(BARZAZ BREIZ, Ar Re C'hlas.)

E krennvrezhoneg ez eo rouez ar c'houbladoù gwirion, nemet er pennadoù enno gwerzennoù hir :

An trede  
Euit loezn du me so cruel : ha garu maruel mar en guelAFF,  
Ma meus liffrini raliet a groay apret ho diffretAFF.

An pevare  
Gat na louarn ne espernAFF euit ho tagAF quentAF pret,  
Mar ho cafaf moan voar an reau delcher ez veo lampereuet.  
(" Buhez Santez Nonn ".)

Bez goaz gant goas nedoan boaset ; da ober nem boe quiet en bet mAN ;  
Na nem bezo muy bizuiquen breman certain men souten glAN.

Me a requet an speret glan hac a bremAN ez diouganAF  
Miret ma corf oz pep torfet hennez bepred a appetAF,

Bezaff auster a prederAFF hac a abstinAF a mennAF dON,  
Bara ha dour eo ma sourcy hep caffout muy refectiON.

( " Buhez Santez Nonn ".)

Evel ma weler ne dint ket koubladoù gwirion peogwir ez eo ereet gwerzenn diwezhañ ar c'houblad gant gwerzenn gentañ ar c'houblad war-lerc'h : klotenn dibenn ar c'hentañ a zeu da vezañ klotenn diabarzh an eil.

Un doare koublañ a denn da hennezh a zo bet implijet gant X. de Langlais er skouer da heul (bez' ez eus ivez kenganez e diabarzh pep gwerzenn) :

A-drEUZ d' ar c'hleUZ an heol o tihUN  
A sUN ar glIZH e kalIR ar rOZ,  
KLOZ tuchantIK ha bremañ dIGOR,  
GlebOR an noz A Ruilh war AR pri.

Ar c'houblad a zo bet graet gantañ alies gant ar varzhed, anat eo, a-wechoù eo kuzhet dindan stummoù skrivañ : pevaradenn, c'hwec'hadenn, eizhadenn...

Ma mab a zo bet kollet war ar mor er bla-mañ,  
Biken ken ne vo kavet ha bepred hen klaskañ.

Bep beure e-tal an aod, ma ' ya 'vit hen kaouet,  
M' her goulenn ouzh ar mor don, ar mor ne respont ket.  
(DIR-NA-DOR.)

E tan a ziabell. He daoulagad a splann  
'vel an heol lugernus war ar bodigoù lann.

Daoulagad ma dous, daoulagadigoù,  
C'hwi a sell ouzhin... ya, re zousigoù.  
(P. LAORANS.)

Evit ur bec'h ker moan ha skañv  
nag a geuz pounner hag a gañv !

E-keñver gwad ur gwaz,  
nag a wad, nag a c'hloaz !

E-keñver ur pezhig gwalenn,  
nag a zaeloù, nag a anken !  
(T. MALMANCHE.)

Dre hent bras hir an tergen kras, mont kuit un deiz,  
Ha kerzhout daou-ha-daou, ar frankiz en hor c'hreiz ;

Ha bale goustadik hed-ha-hed an hent hir  
P' hon eus lezet er gêr hor spered evit gwir.  
(D. K. KONGAR.)

a) AN DRIADENN. - Ar gwerzennoù a zo strollet a-deirioù. Pa vez klotennoù dibenn e kenglot an teir gwerzenn.

Hag outañ ker kaer pa selle,  
Ha da boket dezhañ pa 'z ae,  
E zaoulagad a zigore.  
(BARZAZ BREIZ, Ar bugel lec'hiet.)

Neb a vije bet er c'hedenn  
En dije gwelet ar verc'h wenn  
Goustad o vont tre, diarc'henn.  
(id., Livadenn Gêr-Iz.)

Mab ar c'hadour a lavare,

'Lavare d' e dad, ur beure :  
Marc'hegourien war lein ar bre  
(id., Bale Arzhur.)

E bro Elliant, hep laret gaou  
Emañ diskennet an Ankaou,  
Maro an holl dud nemet daou.  
(id., Bosenn ELLiant.)

Un doare strollañ dibaot-tre eo hennezh evelato ha ne ziskouez ket bezañ  
bet adkemeret en amzer-vremañ.

b) PEVARADENN. - Kalz pouezusoc'h eo ar strollad peder gwerzenn. Diazez ar  
bevaradenn a zo moarvat ar stumm a gaver alies er gwerzioù : gwerzenn diwezhañ  
ur c'houblad a vez adlavaret e doare ma vez peder gwerzenn kenglot (bez' e ve un  
driadenn a ve adlavaret enni ar werzenn greiz) :

269

Hanter-kant nozvezh ez on bet  
'n ur parkig bihan balanek ;  
  
'n ur parkig bihan balanek  
O klask laerezh kleier 'n Drinded.  
(Gw. B.-I., Bosenn Elliant.)

'Vit hoc'h eureujiñ ne rin ket  
Me 'zo dime'et hag eureujet

Me 'zo dime'et hag eureujet,  
Bet ur mab bihan d' am fried.  
(id., An Aotrou Nann.)

An derzhienn 'zo ganin he deus ma gwallaozet.  
Mar karfec'h dibriñ boued goude 'pe he c'hrenet ;

Mar karfec'h dibriñ boued goude 'pe he c'hrenet,  
Kreñvoc'h 've ho kalon da stourm ouzh ar c'hleñved.

Ar bevaradenn glotennet a genglot enni ar peder gwerzenn. Hounnezh a oa ar  
reolenn heuliet e krennvrezhoneg :

Dren leunez affoe oz clasq  
Oz cafout lamet a goasq  
Hac eff sauet torret e nasq  
Pan aez en neffou dan iou pask.  
(" Pemzek leunez Maria" )

Hac en neur maz ganat an merch  
Goude guenell Doe ez voe guerch,  
Ha maz eu flam quir mam ha merch  
Hy so bleuzuen quen quenn han nerch.  
(" Tremenvan an Itron Gwerc'hez Maria ".)

En arrach outrachy, affuy ha drougiaez,  
Hep respit tristic, hac en quisidiguaz :  
Ez vezont bizhiquenn, hep quen a leuenaez,  
Goa certain an heny ayel dy en diuaez.  
(" Melezour ar Marv ".)

Evel etre ar c'houbladoù e vez ivez alies un ere etre ar pevaradennoù :  
klotenn ar bevaradenn a gengan e gwerzenn gentañ ar bevaradenn war-lerc'h :

270

Eua, hon quentaff mam he deffoue ur blam brAS  
Ouz sentiff re buhan da saouzan SathanAS,  
Dre atys an Serpant, ha hy a consantAS  
Terrif gourchemen Doue, hon Roe, nep hon croueAS.

Dre un tam aual glAS ez viomp oll tASset  
Da bezaff bizuiquen en ancquen ha penet.  
(" Nouelou ")

Lazet prysonet an bet OLL  
Un hevelep han fur han fOLL,  
Gentyl ha commun en un strOLL  
Ez omp aet en un tat da cOLL.  
Goude an corOLL han fOLLez  
So guenemp pemdez a bezcoaez...  
(" Buhez S. Gwenole ")

Adalek ar c'hrennvrezhoneg, evelkent, e kaver pevaradennoù ha n'int ket  
kenglot atav. Diwezhatoc'h eo deuet an dra-se da vezañ ar reolenn : ar  
bevaradenn a zo war ziv glotenn a c'hell bezañ plaen, kroaziet pe a-bokez.

Ar bevaradenn klotennet plaen ne deo nemet div goubladenn lakaet en ur  
gichen, un doare skrivañ eo ha tra ken :

An avel, er gwez uhel, a c'hourdrouz an douar,  
An heol a zo dislivet ha heñvel ouzh al loar ;  
Ne gaver mui a domnder dindan bolz an neñvoù,  
Al laboused a dav mik ha sioul eo ar c'hoadoù.  
(Y.-V. ar YANN.)

Ar wareg-glav hag ar stered  
'zo daou dra dudius er bed ;  
Met muioc'h e touch ma c'halon  
Mousc'hoarzh pe daeloù ma mignon.  
(F. ar MAY.)

Pa 'z oa deuet kreisteiz e oamp faezh ha skuizh,  
Rak an hent oa serz hag an heol oa kriz ;  
Hag e kanemp start, hag e kanemp gwell  
D' hon huñvreoù kaer a oa tec'het pell.  
(R. HEMON.)

271

Klotennoù kroaziet :

Sonit, kleier Plouiel ha kleier Sant Erwan  
'Us d' an div stêr ;  
Gant mouezhioù glac'harus, kleier, klemmit hon foan,  
War vaez, e kêr.  
(E. VERTOU.)

Deut on... Diwezhat eo. An noz dall a zisoc'h,  
A c'hronn ar mor, hag an tier, hag ar maezioù ;  
Hoc'h ilizoù, pa gouezh an noz, a zo dousoc'h,  
Laoskit-me da ziskuizh un eur ar an treuzoù.  
(Y.-B. KALLOC'H.)

Azezet war an traezh,  
Selaouomp a bep tu  
Heklev c'hwero an hiraezh  
Davit drantiz ha didu.  
(D. K. KONGAR.)

Klotennoù a-bokez :

Hir an hent, ha setu an noz  
O tont. Ganin pa vije c'hoazh  
An divhar 'm boa da ugent vloaz !  
N' eo ket brav, va den, bezañ kozh.  
(R. HEMON.)

Sellit ! E goudor  
Ar c'hleuzioù kistin,  
War an diribin,  
Ar roz a zigor.  
(X. de LANGLAIS.)

Neuze, bannoù an heol, dreist bevenn mor ha menez,  
O sec'hiñ diouzh va jod beradoù dour an daeloù,  
Eus levenez an den a skuilho din ar c'heloù,  
Pa vez distro d' e barrez, ur sulvezh d' ar pardaez.  
(P.-M. MEVEL.)

En e adstummadur diwar Omar C'hayyam en deus graet Roparz Hemon gant pevaradennoù dek mouezhiadenn, klottennoù diabarzh e pep gwerzenn, klotennoù dibenn etre ar gwerzennoù unan, daou ha pevar, dibenn an drede o klotañ gant kenganez ar bedervet.

272

Nag a dabut etre tud a studI !  
Nag a vabouz hag a drouz, fri-ouzh-frI !  
Da seurt kleñved spered ez erbedIN  
Ul louzoù fIN, brintlN, chug ar gwINI.

.. .. .. .. ..  
Ur fri mic'hi a oar c'hoari bili-bANN,  
Hag un doktor a zigor ar C'horAN.  
Te, lak e plac'h pe wrac'h da albac'hENN.  
Gwin em gwerENN hepKEN a c'houlENNAN.

k) PEMPADENN. - Ne vez ket kavet a bempadennoù gwerzennoù kenglot. Rouez a-walc'h eo ar re all zoken. Alies e vez berroc'h ar pempet gwerzenn.

Bezañ evel saout hualet !  
Bevañ 'vel loened mut mouget !  
Kentoc'h kleuziñ leur ar vered  
Ha reiñ ma c'hig bev, d' ar preñved !  
Torr e benn !  
(E. VERTOU.)

Meur a zoare a zo, anat eo, da lakaat ar gwerzennoù da glotañ.

d) Ar C'HWECHADENN a zo, avat a-bouez bras. Bez' ez eo e gwirionez diazez startañ gwerzaouriezh ar brezhoneg-krenn :

Foll az hol mat haznat atau,  
Nemet pemp planquen a prenn fau  
Moan ha tanau daz distauAFF,  
Ne day ez querchen a tensor  
Goude da glat, plat ez cador,  
An hol cosquor daz enorAFF.  
(" Buhez Mabden ".)

Me hoz guinhezl a quehezl mAT  
Hac a goar an tro voar tron choAT,  
Me goar ho greAT quen nATUR,

Hac an hol loznet mo guedO,  
Bleiz ha heizes mo encresO.  
Mar bez en brO, mo cavO sUR.  
(" Buhez Santez Nonn ".)

273

Gwelout a reer e klot an trede hag ar c'hwec'hvet gwerzenn. Klotañ a ra ivez ar gentañ hag an eil, ar bedervet hag ar bempet. Ouzhpenn-se e kengan dibenn an div gentañ en drede, hag er c'hwec'hvet gwerzenn dibenn ar bedervet hag ar bempet. Pep tra a zo eta evel ma ve aze div werzenn hir teirzarn.

En amzer-vremañ ez eus bet graet alies gant c'hwec'hadennoù, hogen bez' ez int kentoc'h rannadurioù war ar paper eget strolladoù start. Ar stumm tostañ d' an doare kozh eo moarvat an hini a genglot ennañ an trede hag ar c'hwec'hvet gwerzenn hag ar re a zo etrezo div-ha-div.

Skeudenn da vuhez  
Eo al lestr a welez,

Tremen 'ra pep tra !

E roudoù er mor  
'Zo kloz a-vec'h digor

Tremen 'ra pep tra !  
(" Kantikoù ".)

E lod da bep hini : an nerzh d' ar yaouankiz,  
Al labourioù pounner, ar brezel tenn ha kriz,  
Ar c'hoarzh digor, an ebatoù ;  
Ni etrezomp, tud kozh, a gar son ar c'hleier,  
Sae ruz ar gurusted, ar fleur ouzh an aoter,  
An ezañs hag ar c'hantikoù.  
(Yann WILHOU.)

Setu ur skouer diazezet war ziv glotenn :

Ha pa oan bihan, gwiv 'vel ul labous,  
Kousket em c'havell e-tal he gwele,  
Hi ma luskelle, hi ma luskelle  
En ur ganañ din sonennoù ken dous  
Ma te daeroù din, ha me a ouele,  
Me ouele didrouz o klevout ma dous,  
(Y.-B. KALLOC'H.)

Aliesoc'h e vezont diazezet war deir glotenn.

274

e) Rouez-tre eo ar SEIZHADENN. Setu ur skouer, koulskoude :

Petra 'larin Deoc'h, o Doue strizh,  
Mor madelezh ?  
Ar baourentez 'zo c'hwerv he laezh ;  
Ar bleuñv disec'het ' c'houlenn glizh ;  
An douar-mañ 'zo lous e follezh.  
Petra 'larin Deoc'h, o Doue strizh,  
'Met ez on skuizh !  
(Y.-B. KALLOC'H.)

f) An EIZHADENN a vez kavet stank-tre. Hogen evel ar pevaradennoù ne deo peurvuiañ nemet un doare rannañ war ar paper.

Pevar goublad strollet :



Paotr yaouank Gwiskriv, lemm e sell  
En deus lagad damc'hlas pe c'hell ;  
Blev hir ha didailh liv kesten  
A vouch e dal hag e gerc'henn ;  
E vrusk rouzet dre an amzer  
Da bep amzer a ziskouez sklaer  
Ez eo kalet e pep labour  
Ha digustum eus an tracoù flour.

(F. ar May.)

Berr eo bremañ an hent, a welomp dirazemp,  
Ken hir da ugent vloaz ! Rac'h, neuze, tro-ha-tro,  
Ni 'gane 'vel evned ; ar gouel-hont a vevemp  
'vit adsevel ene hor Bro.

Laouenik hor c'halon, birviñ a raemp bepred  
Ha ni 'yae, disuj kaer, ha meur a wech diroll ;  
Krediñ a raemp penaos hor buhez n' helle ket  
Bout 'met un dro-goroll !

(" Efflam Koet Skau ")

g) Bez' e kaver strolladoù all : navadennoù (*Kanenn Vrezel R. Hemon*),  
degadennoù, daouzegadennoù, pevarzegadennoù (*Barzhoneg evit Kreiz ar Bloaz R.*  
*Hemon*), c'hwezegadennoù, h.a., hogen hirik e teuont da vezañ evit en em heuliañ  
reizh a-hed ur varzhoneg.

(da genderc'hel.)

## **Ronan Huon gwelet gant skolidi S.A.D.E.D.**

(1)

A-zivout Ronan HUON ez eo ugentvet kentel lennegezh roll kelennadurezh S.A.D.E.D. Gant aotre ar Strollad hag hini ar skoliad ez embannomp amañ unan e-touesk ar gwellañ poelladennoù, - dizanv hervez ar Reizhennoù.

(1) Evit pep diskleriadur diwar-benn Strollad an Deskadurezh Dit Derez, skrivañ da : SADED, St-Didier, 35-Châteaubourg.

TESTENN : Savit, e-keñver yezh ha mennozioù, plaenadur an destenn da heul, anezhi diwezhañ barzhoneg Ronan HUON embannet war " Al Liamm " (84/4).

### AR SKLUZIOU

Ar skluzioù bras a zo freuzet !

An doureier melen a gas gante limouz don ar stêrioù, broenn ha korz ar Pradoù bet morgousket hag e-lec'h ma eve, sioul, an tropelloù babouzek.

An nadozioù-aer n' aint ket mui da droiellat war o zro, na da ziskuizhañ war o c'horzennoù.

An dourioù a zo dispac'het hag ar c'hemener dilu habresk eo echu e rikladennoù warne, en endervezhioù gor.

Amouruzien landrennek an dourioù n' eus mui anezhe.

An avel eo a gomz, diredit !

An dourioù a zo koeñvet, hag en ur vourbouilhat o deus freuzet skluzioù kantvedel o c'harc'har.

276

Emañ an edoù o tiwan kaeroc'h.

Er gwez e tarzha un eil broñsador !

Mor ar parkoù melen a 'n em zispak o vougañ dreog ha louzoù.

Ar skluzioù a zo freuzet.

Ha setu a-greiz-holl ma tav d' am skouarn soroc'h an doureier !

A-greiz-holl ma tav d' am sell ar parkeier o tiruilhal.

Daoust hag ar broñsoù o c'henel ne zaskrenont ket mui ?

Ar skluzioù bras a zo freuzet.

Nann ! Ar skluzioù kantvedel a zo bepred eno e poultrenn o spoum beuzet.

Un huñvre e oa.

Hag an nadozioù-aer a ra bepred o lez d' ar broenn.

Nann, un huñvre e oa, ar skluzioù, siwazh n' int ket freuzet !

N' eus avel ebet, sioul eo an oabl, ar c'horz ne fiñv tamm, an dud a zo kousket, evel kent, evel kent siwazh !

### POELLADENN.

Ar Yezh a zo dilorc'h, hep ficherezh na kinkladur, boutin a-walc'h, a-wechoù ez eus ganti un tammig blaz tregeriek, met ar gerioù a zo arouezius ha kevrinel kenan.

Evit an tregerieg, e lennan : « doureier melen a gas gante ; e rikladennoù warne ; n' eus mui anezhe - e plas *ganto*, *warno*, *anezho*. Ar gerioù a zo dibabet mat ha strollet en doare da sevel taolennoù spis dirak hon daoulagad, evel e : « limouz don ar stêrioù » - « broenn ha korz morgousket » - « tropelloù babouzek »...

277

Gwelout a ran amañ arz ar skrivagner, gouest gant gerioù boutin da grouiñ

un aergelc'h e-lec'h ma kemer ur plas bras pep tra dister ennañ e unan, evel : ar plantennoù, an anevaled, an traoù. Gwelout a reomp amañ : ar broenn, ar c'horz, an edoù, ar gwez, an dreog ; an nadozioù-aer, an tropelloù, ar c'hemener ; an doureier, an avel hag ar skluzioù dreist-holl. Hag ar pezh a ra talvoudegezh ar gerioù-se eo e ro dezho buhez : an nadozioù-aer n' aint ket mui da droiellat ; evit ar c'hemener dilu eo echu e rikladennoù ; an avel eo a gomz ; an dourioù koeñvet a soroc'h o vourboulhat, mor ar parkoù o vougañ dreog ha louzoù ; ar broñsoù o c'henel ; ha dreist-holl « an dud a zo kousket » hag « ar skluzioù a zo freuzet » !

#### MENNOZIOU.

Bras eo bet va souezh ha va c'herse o lenn ar « Skluzioù » evit an dro gentañ. Ne gomprenen ket perak ur seurt dibab, peogwir en doa Ronan HUON savet traoù ken brav hag « ar Gouestl », da skouer. Ne welen amañ nemet dorioù bras evel re ar stêr Saena, on kustum da welout. Met aet on d' ober tro e skridoù el " Liamm ", da adlenn hag adlenn " Evidon va unan " hag ar studiadenne roet deomp war ar gwez avaloù. Neuze tamm-ha-tamm em eus kemmet va soñj, war an destenn-mañ, ha bremañ e kavan anezhi dispar ha brav kenan.

Soñjal a ran da gentañ eo « ar Skluzioù » gwir alc'houez arouezius ar varzhoneg-mañ. Ha Maodez Glanndour e raskrid " Evidon va unan " a lavar deomp eo Ronan HUON evel pep barzh hoalet gant ar pezh a zo a-us d' ar bed boutin. Ar pezh a glask eo kentoc'h mont e-barzh ar gwirvoud da welout ar pezh na wel ket ar re all, da glevout ar pezh ne glevont ket, da dizhout buhez diabarzh ar bed « ene boemus an traoù », evit gellout reiñ deomp goude un arouez eus ar gened damwelet gentañ.

278

Setu perak e kredan e c'heller sevel un daolenn arouezel fromus war bep linenn eus an destenn-mañ. Setu pa skriv « ar skluzioù bras a zo freuzet », e kredan eo ret kompren eo deuet « eur Breizh », deiz he dieubidigezh hag he dasorc'hidigezh. Sevenet eo va fedenn a zo hini Ronan a Germene e : "Pa vin Marv" : « trec'het eo ar Gall... enebour Breizh... » Ar Skluzioù a zo c'hoazh an Darvoud ramzel ha meur, ar brezel pe savadeg ar gouerien kaset da benn, ur seurt reveulzi hag a dorr naet hor chadennoù hag a gemm hon Istor. Breizh a zo a-nevez ur vro dieub a-zindan an heol, ni a zo « ni hon unan ».

An doureier melen a gas gante limouz don ar stêrioù a vefe an dud lazhet, harzet, toullbac'het marteze, rak diaes eo siwazh gellout tremen hep kement-se.

Broenn ha korz ar pradoù bet morgousket zo ar Vrezhoned ne reont netra evit o bro, n' ouzont ket ez int chadennet ouzh karroñs aour Bro-C'hall.

E-lec'h ma eve sioul an tropelloù babouzet zo ar re a lip treid estrenien, hor mistri.

An nadozioù-aer zo ar rannvroelerien ; ar c'hemener dilu zo ar re a ra al lez dezho : an amourouzien landrennek : ar re a ya d' o heul.

An avel eo a gomz, arouez an Awen, an dasorc'h, ar Spered-Santel... Deuet eo deiz : avel an trec'h, al Lun-Fask, hon huñvreoù kaer a zo deuet da wir, pep tra a dle bezañ nevezet ! Diredit buan : Arzhur ha Nomenoeoù Breizh, d' hor sikour, ha kement breizhad en deus ur galon yac'h en e greiz. Rak « an hini gozh » a zo dasorc'het, « yaouankoc'h eget biskoazh ». Ganto holl diredet an dourioù a zo koeñvet hag en ur vourboulhat o deus freuzet skluzioù kantvedel o c'harc'har, beli Bro-C'hall.

Emañ an edoù o tiwan kaeroc'h, Breizh nevez a zo o c'henel.

Er gwez e tarzha un eil broñsador, ur wir sevenadurezh vreizhek.

Mor ar parkoù melen zo pinvidigezhioù Breizh hag un nerzh nevez, souezhus

adkavet.

A 'n em zispak o vougañ dreog ha louzoù = da lavarout eo an dilerc'hioù eus sevenadur ha levezon an estrenion.

Ar skluzioù bras a zo freuzet : graet eo an taol, er wech-mañ, ereoù Bro-C'hall a zo torret, an naer Gobra a zo mouget mik ! Tarzhet eo ar volz hag evel Lilliana e " Enez ar Rod ", Breizh a wel an heol ruz, an heol gouez, an heol ! « Heol he dieubidigezh »... Piv en defe kredet kement-se !

Met setu en un taol ma tav d' am skouarn soroc'h an doureier : Breizh nevez oc'h echuiñ da c'henel.

Ma tav da 'm sell ar parkeier o tiruilhal : trouz an emgann.

Daoust hag ar broñsoù o c'henel ne zaskrenont ket mui ? Pep tra a oa o c'henel hervez stumm nevez hor bro.

Ar skluzioù bras a zo freuzet. Siwazh, siwazh. Siwazh n' eo ket gwir.

Nann ! ar skluzioù kantvedel a zo bepred eno, atav emamp a-zindan seulioù an estren.

E poultrenn o spoum beuzet = a-zindan gouarnamant Bro-C'hall. Un huñvre e oa : Breizh n' eo ket dieubet !

Hag an nadozioù-aer a ra bepred o lez d' ar broenn. Ar rannvroelerion, ar vrezhoned c'hallekaet a ra bepred o lez d' ar vistri.

Nann, un huñvre e oa, ar skluzioù, siwazh, n' int ket freuzet = hor bro skrapet n' eo ket dieubet !

N' eus avel ebet, sioul eo an oabl, ar c'horz ne fiñv tamm : avel trec'h Breizh n' eo ket c'hoazh ganet, netra a-nevez ! an dud a zo kousket, evel kent, evel kent siwazh ! n'int ket c'hoazh dihonet da garantez hor bro, ha chom a reont gant o digasted dirak kudenn hor bro, siwazh !

Peur e tihunint ? Me ' gred pa vezimp dellezek eus he dieubidigezh. Da c'hedal eo ret labourat start eviti, hag evit prenañ digasted hor c'henvroiz.

KLOZADUR.

280

Dizoloet em eus amañ meur a dra nevez war Ronan HUON ha war sturiennoù pennañ e vuhez, war e varzhoniezh, kizidik ha c'hwerv war un dro. Plijus ha kentelius kenan em eus kavet ar studiadenn-mañ. Reiñ a ra tro din da gompren gwelloc'h linennoù stur " AL LIAMM " ne ra nemet kenderc'hel gant labour " GWALARN ". Da gentañ : ober eus ar brezhoneg Yezh an tiegezh ; d' an eil, ez eo ret e vefe unvan Breizh a-bezh ha d' an trede e ve al lennegezh-se ur berc'henniezh etrevroadel digor frank war ar bed. Gouzout a raen kement-se pell 'zo, met amañ e teu an dra-se da vezañ kalz sklaeroc'h d' am spered, goude ur seurt studiadenn. Setu perak e kredan eo frouezhus kenan evidon. Ha bremañ e komprenan gwelloc'h perak eo bet dibabet " AR SKLUZIOU " evit klozañ hor bloavezh labour. En amzer da zont eta e welin skluzioù ar Saena gant daoulagad all. Marteze gant un damskleur eus re ar barzh Ronan HUON. Dezhañ ha da S.A.D.E.D. e lavaran mil bennozh.

Notenn : 16/20.

EVEZHIADENNOU HOLLEK

Poelladenn savet gant gred. Dispar eo ho studi war arouezelezh ar

varzhoneg ha talvezout a ray ar boan bezañ roet da skouer d' ho kenskolidi. Un nebeut rebechoù : ho studi war yezh zo skort ; muioc'h a skouertioù a oa da reiñ, studiañ ar geriadur, ar yezhadur, ar gwerzaouerezh. Ho yezh deoc'h, evit bezañ gwellaet kenan a vir he si : ar fazioù skrivadur. Dre vras, e tleit en em laouenaat eus ho ploavezh-skol. Araokadennoù bras hoc'h eus graet e pep keñver.

## **NOTENNOU**

Savet pe gempennet eo bet an notennoù-mañ gant Per Penneg, Per ar Bihan ha Ronan Huon

### **Hor mignoned**

Kristian SIMON ha Gwenola GERAOD a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Nolwenn e Pariz, d' ar 5 a viz Mezheven.

Fransez ar C'HALONNEG hag e wreg zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh c'hoar vihan Herve hag Arzela, Gwenola eo bet anvet (St Servan d' ar 17 a viz Gouere).

Gwenaël ROPERS zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh he breur Erwan, e Loudieg, d' ar 7 a viz Eost.

Gouezet hon eus e oa ganet ur mab, Roparzh e anv, e ti Julian Per CORAUD, rener " Ker Arvor ", e Naoned d' an 9 a viz Gouere.

Mari-Ael ha Joel SEVELLEG o deus al levenez da gemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Olwen, e Rijsel d' ar 24 a viz Eost.

D' an 28 a viz Eost ez eo bet lidet eured Anaig DOUSIN ha Ronan LARNIKOL.

D' ar 4 a viz Gwengolo eo bet lidet eured Chantal VERGER ha René FRANÇOIS e St-Nazer.

D' ar 4 a viz Gwengolo ivez eo bet lidet eured Goulven GWILCHER, mab hor mignon Andreu Gwilcher, kelenner er Sorbonne, hag Yvette PELLAT, e Bourg-la-Reine.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

282

### **Kañv**

Klevet hon eus gant doan e oa aet da anaon hor mignon ar chaloni Per TANGI, e Bignan d' an 12 a viz Mezheven.

Souezhet omp bet ivez o klevout e oa bet lazhet en ur gwall-zarvoud ar broadelour yaouank Gerard TOUBLANC

Hor gourc'hemennoù a gengañv ha gasomp d' e diegezh ha d' e holl vignoned.

### **Marv Jarl Priel**

Kerse bras eo ganimp kemenn d' hol lennerien ez eo aet da anaon hor mignon ha kenlabourer Jan PRIEL d' an 19 a viz Eost. Aet e oa da chom da di e verc'h e Marsilha hag en e 80 vloaz e oa.

Jarl Priel a oa e-touez hon puilhañ skrivagnerien betek un nebeut bloavezhioù zo, daoust m' en devoa kroget da skrivañ e brezhoneg da 57 vloaz.

Pediñ a reomp e verc'h, e verc'h-vihan hag e holl diegezh da grediñ e kemeromp perzh en o c'hañv.

### **Lizhiri**

Digant J. L. B. hon eus bet al linennoù-mañ :

« Aotrou,  
« Ne fell ket din va adkoumanantiñ. Re ziez eo ho lenn. »  
Respont a reomp : eveljust, ret e vije deskiñ brezhoneg a-raok, sed amañ  
chomlec'h ar skol dre lizher gwellañ : Skol OBER, 30, rue Victor-Hugo,  
Douarnenez.

Digant Y. G. H.

« Setu 25 lur evit va adkoumanant. Bez ez eo an trede bloavezh ma lennan " Al  
Liamm ". Ur gazetenn dudius eo, dremm Breizh nevez. »

Digant Ch. M.

« ...Fellout a ra din tennañ hoc'h evezh war ur c'hraf a soñj din bezañ a-bouez  
bras. Perak ez eo ken rouez ar pennadoù a-zivout istor Breizh pa vez ken stank  
an danevelloù diwar-benn ar vro-mañ-bro, hogos atav diseblant d' an darn vuiañ  
eus lennerien " Al Liamm " ?

« Me gav din ez eus aze ur mank bras a ranko bezañ kempennet hep dale. E  
gwirionez ne ra ket diouer en Emsav an isterourien hag a zo barrek da skrivañ  
deomp ur bajenn pe ziv diwar-benn hon istor azalek douaridigezh ar Vretoned e  
Breizh vihan betek an amzer a-vremañ.

« Sed amañ ur gudenn a zellez bezañ pleustret warni evit mad an holl ha dreist-  
holl hini ar re yaouankañ... »

283

### " An Teodeg "

An Teodeg zo anv ar c'hannadig embannet gant Kelc'h " Dugelez Breiz " (Les  
Lilas) Meur a bennad e brezhoneg a gaver ennañ, er yezh peurunvan. Pep sizhun e  
vez graet, e ti ar c'helc'h, skol vrezhonek gant an Ao. Calvé, rener. Bretoned  
St Jermen o deus ivez abaoe meur a vloaz, ur c'hannadig talvoudus : " Yaouankiz  
", gouestlet d' hor yezh ul lodenn anezhañ.

### Reizhomp

Poellgor-Leviañ Strollad an Deskadurezh Eil Derezh a bed Rener Al Liamm da embann  
ar reizhadenn-mañ da heul ar pennad gant Youenn OLIER, embannet war an niv. 110,  
p. 194 :

Meneg zo graet div wezh e kentañ dilinennad ar pennad eus «rener S.A.D.E.D. ». N'  
eus den e SADED gant an titl a « Rener ». Fiziet eo renerezh ha mererezh ar  
Strollad e daou boellgor : ar Poellgor-Leviañ hag ar Poellgor-Harpañ.

### Dafar 64

Dafar 64 evit ar geriadur broadel a gaver ennañ termenoù tennet eus ar  
c'hentelioù embannet gant SADED e 1964. Kerkoulz eus ar c'hentelioù war ar  
Fizik, al Lennegezh, ar Gimiezh hag ar pemp kentel gentañ eus ar rummad  
Krennvrezhoneg. An Dafar ez eus 119 pajenn ennañ. Ar c'haier a goust 12 lur.  
Sekretour : P. CALVEZ, St-Didier, Châteaubourg (I.-et-V.).

### " Lo Gai Saber "

Ar gelc'hgelaouenn-mañ, moulet en okitaneg al lodenn vrasañ anezhi, a zo  
gouestlet d' al lennegezh. Hogen er skridoù ha barzhonegoù e tarzha karantez-vro  
Okitaniz. Notomp ez eo bet embannet Lo Gai Saber abaoe 44 bloaz hag ez eo  
niverenn Mae-Mezheven 1965 an niverenn 320. Moarvat e vez tennet un toullad mat a  
skouerennoù, rak ne goust ar c'houmanant nemet 7 lur (Abbé Salvat, 31, rue de la  
Fonderie, Toulouse).

### Livadurioù Rieg-Jestin

Livadurioù Rieg-Jestin a zo bet diskouezet etre ar 16 a viz Mezheven hag ar 25 a

viz Gouere e ti M. Benezit, 29, rue de Seine, Pariz, a-gevret gant oberennoù nav arzur all, en o zouez meur a anv anavezet. Hor gourc'hemmennoù d' hor c'heneil.

284

### **C'hoariva Poblel Breizh**

Gant ar strollad Les Comédiens Bretons ez eo bet c'hoariet warlene hag er bloaz-mañ e Lokorn hag e Josilin, **Gurvan, Nomenoe-oe, Bretagne Légendaire**. E galleg ez eo bet displeget an arvestoù-se, hogen menoz ar rener Yann Moign, a zo prientiñ ivez abadennoù brezhonek. Ouzhpenn-se emañ e soñj ar strollad kinnig e 50 kêr a Vreizh abadennoù, pep abadenenn enni ur pezh-c'hoari, ur brezegenn, un diskouezadeg hag ur film. Eveljust, danvez an abadennoù a vo breizhek pe geltiek peurvuañ ha n' eus ket ezhomm da bouezañ war dalvoudegezh an oberenn-mañ. Gallout a reer skoazellañ ar gevredigezh en ur zont da vezañ ezel anezhi (skodenn, 10 lur) pe en ur breñañ kenlodennoù 100 lur. " Les Comédiens Bretons ", 43, rue St-Placide, Paris 6°. - C. C. P. Paris 11 480 35.

### **William Butler Yeats (1865-1939)**

Setu kant vloaz m' eo bet ganet Yeats, unan eus ar vrasañ barzhed iwerzhonat e saozneg, ul liv broadel a oa koulskoude war e oberoù hag e-touez gwellañ skrivagnerien an « Azginivelezh iwerzhonat » e oa hag unan eus diarezourien C'hoariva an Abati. Kanet en deus emsavadeg Lun Fask 1916 :

...Mac Donogh and Mac Bride  
And Conolly and Pearse  
Now and in time to be  
Wherever green is worn  
Are changed, changed utterly :  
A terrible beauty is born.

Anvet senedour gant Cosgrave, ne blije ket dezhañ koulskoude pep tra en Iwerzhon dieub, ar buritanelezh da skouer. E vrud a oa etrevroadel, ha gonezet en deus ar priz Nobel e 1923.

Lidet eo bet kantvloaziad e c'hanedigezh gant an holl ensavadurioù-stad en Iwerzhon hag un timbr nevez a zo bet graet en e enor.

### **Alioù**

Meur a goumananter a glemm pa vez embannet ur pezh-c'hoari e tammoù. Evit pezh a sell an niverenn diwezhañ e vefe bet ret lezel da gouezañ pennad Kervella hag a oa kendalc'h an niverennoù a-raok, ar pezh ne oa ket posubl. A-hend-all an niverenn a-bezh a vefe bet leuniet gant ar pezh-c'hoari.

285

### **14 kelenner evit 184 diskibl**

Hennezh eo niver ar gelennerien hag hini ar skolidi war an Arabeg e liseoù Bro-C'hall, hervez Ministr gall an Deskadurezh (" Kelaouenn a-berzh stad ", 24-7-1965). E gwirionez ne vez ket kavet kelennerien war an Arabeg e pep korn pe gentoc'h e pep Akademi eus Bro-Chall. Bez ez eus anezho e hanterenn greisteizel Bro-C'hall, en Okitania dreist-holl, da lavarout eo e Akademioù Aix, Bourdel, Lyon, Montpellier, Toulouza e-lec'h ma 'z eus 10 kelenner ha 157 skoliad. Met bez e kaver ivez tri c'helenner e Akademi Pariz evit 24 skoliad, unan e Strassburg evit tri skoliad. Er stad Gall a-bezh ez eus neuze, well-wazh, 13 skoliad evit ur c'helenner, met pet skoliad war an Arabeg ez eus en ur c'hlas ? N' ouzomp ket pet vloavezh e pad studi ar yezh : 3 pe 4 bloaz da nebeutañ, hag e tle pep kelenner kaout tri pe bevar skoliad (d' ar muiañ) en ur c'hlas ; evit Pariz ha Strassburg ne reomp ket ar jedadenn. Ha pet anezho a dremen ar vachelouriezh ? n' eo ket bet lavaret gant ar ministr. Dudius e vefe bet gouzout koulskoude, rak n' hon eus ket ankounac'haet e oa bet kemennet, pa oa bet keal



eus lemel an arnodenn war ar yezhoù « rannvroel » un nebeut bloavezhioù zo, e oa ken nebeut a skolidi o vezañ tremenet an arnodenn-se ma ne dalveze ket ar boan mirout anezhi.

Evit an Arabeg n' eo ket heñvel ar gont, tamm ebet. Kerseet eo ar Ministr, va zud kaezh, o welout ez eus ken nebeut a skolidi o kemer an arabeg evel yezh estren, ret pe diret. Ul lizher kelc'h zo bet kaset d' ar 16 a viz Gouhere 1965 da Renerien an Akadmioù evit o lakaat da anavezout pouez ar yezh arabeg hag o c'hourc'hemenn dezho, e kement lec'h ma 'z eus kelennerien war an arabeg hep « Kador », tennañ evezh ar gerent hag ar skolidi war bouezusted studi an arabeg evel yezh estren.

Lakaet e vo hep dale an arabeg e-lec'h ar galleg e Maouritania. Setu pezh en deus embannet kannad kentañ Republik Islamek Maouritania da Vurev-Kelaouiñ ar Reter Nesañ e El Kahira d' ar 4 a viz Eost. Kement-se a vo graet a-benn ar bloaz a zeu, gant harp ar broioù arabek. Betek-hen ez eo chomet ar galleg yezh a-berzh stad e Maouritania, tra ma oa an Arabeg yezh vroadel. Graet e veze dreist-holl gant ar galleg er skolioù modern hag er melestrerezh.

Ur gudenn a chom evit Morianed o vevañ a-hed ar stêr Senegal, e Kreisteiz Maouritania. Muzulmiz int, met ne fell ket dezho degemer an arabeg da yezh stad.

### **Keleier Frisia**

(Tennet diouzh " Frisian News Items ", kannadig miziek embannet gant " The Frisian Information Bureau ")

### **Ar stourm evit ar yezh e Norz-Frizia.**

Emañ Norz-Frizia en Alamagn, er Schleswig, a-hed aod Mor an Hanternoz, eus harzoù Bro-Danmark betek ar stêr Eider (sellout ouzh ar gartenn e-barzh Niv. 27 " Al Liamm ", gouestlet da Frizia, p. 4) ; met war 55 000 Friziat (pe a orin friziat), n' eus nemet 12 000 o komz frizeg, tra ma oa 39 000 anezho ur c'hantved ' zo.

Stourm a ra ar vrogarourien evit derc'hel bev ar yezh hag ar sevenadurezh met rannet int abaoe ur c'hantved etre ar re a zo evit Bro-Alamagn hag ar re a zo evit Bro-Danmark. Bodet e oant e daou strollad distag, unan gant un anv alamanek, egile gant un anv danek. Met, evit ar wech kentañ, deuet eo an daou strollad da genlabourat evit krouiñ a-gevret un Ensavadur, an **Nordfriisk Instituut** (un anv frizek ar wech-mañ) a zo e bal difenn ha ledañ ar yezh hag ar sevenadur frizek. Roet eo bet d' an Ensavadur-mañ evit 1965 ur yalc'h a 80 000 mark (d.l.e. 97 800 Lur nevez) an tri c'hard o vezañ roet gant gouarnamant rannvroel ar Schleswig-Holstein, ar peurrest gant gouarnamant Bro-Danmark. An Ensavadur nevez a zo kroget gant al labour, da gentañ o reiñ lans da Skol-Uhel Norz-frizek ar Bobl, krouet un nebeut bloavezhioù ' zo ; muioc'h a gentelioù a vo roet er skol-mañ war yezh, sevenadur hag istor Norz-Frizia.

286

Krouet e vo hep dale gant an Ensavadur ur C'huzul evit an Deskadurezh, a vo e roll krouiñ kentelioù frizek er skolioù hag ensellout outo (evit kudenn an deskadurezh divyezhek gwelout studiaden an Ao. Kalvez en e gelaouenn " Skol ").

Embannet e vo ur gelc'hgelaouenn peder gwech ar bloaz hag ut levr bloaziek ; betek-hen pep strollad a embanne e hini ; diwezhatoc'h e vezo embannet geriadurioù, yezhadurioù ha levrioù all.

### **Teodor Storm.**

Teodor Storm a oa un Norz-Frizat, met skrivet en deus en alamaneg. Spi hon eus o deus holl goumananterien " Al Liamm " lennet an div droidigezh kaer bet embannet gant hor c'helaouenn eus **Aquis Submersus** (troet gant Per Denez) hag eus " **Immensee** " (troet gant F. Kervella).

**300vet bloavezh marv Gysbert Japiks a vo lidet e 1966.**

Brasañ ha brudetañ barzh Frizia, Frizia a C'hornog ar wech-mañ, a zo Gysbert Japiks (1603-1666). Ur c'huzul zo bet savet evit aozañ ar gouelioù a vo graet e 1966. Savet e vo un delwenn e Bolsaert. Kaset e vez profoù gant tud eus pep korn a Frizia ha gant Friziz strewet dre ar Bed evit tizhout an 90 000 gilders a zo ret kaout evit paeañ ar savadur hag aozañ ar gouelioù.

### **Ar skolioù divyezhek o vont war-raok.**

N' eus ket pell eo bet degemeret ar Frizeg er skolioù. Aotreet eo bet gant gouarnamant an Izelvroioù e 1955 goude ma oa bet trouz e Frizia. Efedusoc'h eo bet manifestadegoù 1951 e Ljouwert eget re Vrest ha Kemper e 1961.

Abaoe lezenn 1944 an deskadurezh a c'hell bezañ graet e frizeg e-pad an daou vloavezh kentañ, met goude e vez roet muioc'h-mui a lec'h d' an nederlandeg tra ma vez kendalc'het gant kentelioù frizek. Emañ niver ar skolidi divyezhek war greskiñ : gant div skol protestant hag o deus degemeret nevez 'zo an divyezhegezh ez eo savet o niver da 85.

### **Al lennegezh e Frizia.**

287

Bev-buhezek e seblant bezañ al lennegezh frizek bremañ ; ma ne c'hell ket ar gelennadurezh divyezhek herzel ouzh kiladenn ar yezh wanañ e c'hell da nebeutañ stummañ skrivagnerien ha reiñ dezho lennerien. A bep seurt levrioù a vez embannet e Frizia ar romantoù a zo puilh a-walc'h ; ur romant skrivet gant ur paotr yaouank flamm, **Trinus Riemersma**, en deus lakaet trouz da sevel, ha gwerzhet ez eus bet dija tri mouladur anezhañ ; ar pevare a zeuio er-maez hep dale, hag ivez un droidigezh nederlandek eus «Fabrik» a vo lakaet e gwerzh evel levr-godell gant ti-embann Ditmar e Amsterdam. Emañ Trinus Riemersma o paouez echuiñ e eil romant "**Wilma Berg**". Deut zo er-maez, abaoe derou ar bloaz, romantoù all, dastumadoù barzhonegoù, ul levr o tastum istor buhezioù ar Friziz brudet en o bro (levr embannet gant Akademiezh Frisia), un adembannadur eus Istor Frizia...

Emeur ivez o prientiñ un adembannadur eus **ar Bibl** e frizeg ; an hini diwezhañ a oa bet embannet e 1942. Krouet he deus an Iliz Protestant ur c'huzul evit studiañ gant kannaded an ilizoù all ar c'hemmoù da zegas en embannadur da-zont.

Lec'h ar frizeg er radio a zo c'hoazh gwall strizh ; n' eus nemet div abadenn frizek bep sizhun. Goulennet en deus nevez 'zo ar strollad Broadel Frizat digant Ministr Izelvroat an Deskadurezh ma vo roet un eur bemdez d' an abadennoù frizek ha ma vo roet ivez ar c'heleier e frizeg. N' eo ket deut c'hoazh ar respont.

### **Keleier Euskadi**

#### **An Iliz hag an Euskareg.**

Eskibien Euskadi o deus aotreet, hervez ar reolennoù nevez, ober gant an euskareg el liderezh. Oferennoù en euskareg a zo bet lavaret dre ar Vro a-bezh, en teir rannvro dindan dalc'h Bro-C'hall hag er peder rannvro dindan dalc'h Bro-Spagn, zoken er c'hêrioù bras (e Baiona hag e Bilbao da skouer). Met ar bersoned n'int ket holl a-du, hag e parrezioù 'zo ez eo bet nac'het krenn. A-wechoù ar barrezianiz o doa goulennet ma vefe lavaret an oferenn en euskareg a zo bet diskuliet o anvioù d' ar polis ha lakaet ez eus bet telloù-kastiz warno.

Setu dres pezh a zo c'hoarvezet e Turre. Pemp den o doa sinet ur c'houlennadeg evit ma vefe lavaret un oferenn en euskareg. Nac'het eo bet ha kondaonet int bet da baeañ telloù-kastiz eus 5 000 betek 25 000 pesetas. 11 den o doa lavaret e oant a-du gant ar c'houlennadeg a zo bet lakaet telloù-kastiz warno ivez.

E Lemona, ar person en deus respontet d' ar re a c'houlenne un oferenn en euskareg : « Me zo karlour (" carlista ") ha tra ma vin-me person ar barrez-mañ, ne vo graet en iliz nemet gant ar spagnoleg ». En Algerta, ar person en deus

lavaret d' an dud a ginnige dezhañ ur c'houlennadeg sinet gant pemp kant penn-tiegezh e oa an dra-se ober politikerozh, ur respont heñvel a zo bet roet e Breizh ivez evel ma ouzer.

E Neguri, ar person en deus lavaret d' ar merc'hed a ginnige ar c'houlennadeg e vefe degemer an euskareg en iliz kement ha lakaat kasoni e-touez ar bobl, hag ouzhpenn e oa Neguri e Bro-Spagn ha biskoazh ne oa bet ken brav ar vuhez ha dindan Franco.

E meur a barrez avat ar person an hini eo a zo bet ar c'hentañ oc'h ober gant an euskareg hep gortoz goulennadegoù ar barrezianiz.

288

### **Al lennegezh euskarek.**

An dastumad « Auspoa » gouestlet d' al lennegezh poblek en deus embannet dija 40 levr. An daou levr nevez-embannet zo danevelloù-buhez, ar re gentañ embannet en euskareg ha skrivet gant tud ar bobl ; ar yezh anezho n' eo ket reizh-tre met pinvidik ha saourus. An hini kentañ " Neronek Tirako ruzkin " (" Me eo marteze en deus tennet warnout ") gant **Sebastian Salaverria**, a zo istor un tiegezh euskarat en hon amzer, an daou vreur o vezañ unan en arme Euskadi egile dindan Franco. El levr all " Lardasketa " **José Maria Zubilloa** a gont istor e vuhez abaoe e vugaleaj en ur gêriadenn er Gipuzkoa, e zisparti da 20 vloaz, e 1911, da Argantina hag ar vuhez kalet eo bet e hini du-se. Daoust ma 'z eus bremañ hanter-kant vloaz ez eo aet kuit diouzh e vro, chomet eo Euskarat penn-kil-hatroad.

Daou levr war ar varzhed poblek (ar « bertsolari ») a zo bet embannet hevlene, o daou savet gant leaned ; unan gant an Tad Zaoala, ur Jezuist, e spagnoleg ha n' eo nemet ur vras taolenn ; an hini all, skrivet en euskareg gant an Tad Onaindia a zo kalz klokoc'h ha pouezusoc'h.

### **Lizherennegoù nevez en Afrika Du**

Emañ an U.N.E.S.C.O. o studiañ, war c'houlenn gouarnamantoù afrikat (re ar Ghana, ar Mali, an Nijer da skouer), kudenn an doare-skrivañ evit ar yezhoù afrikat. Ur c'hendalc'h a zo bet dalc'het e Accra (Ghana) evit studiañ ar gudenn. Meur a yezh afrikat n' int ket bet skrivet koulz lavaret, tra m' eo pinvidik-mor al lennegezh dre gomz. Reoù a zo bet skrivet met gant lizherennegoù disheñvel hervez al lec'h hag o tegemer rannyezhoù evel yezh lennegel. Kuzul oberiant an U.N.E.S.C.O. ha kreizenn rannvroel Accra (evit Afrika ar C'hornog) o deus degemeret ur raktreslabour ha krouet kuzulioù arbennigourien evit studiañ ar gudennoù a sav evit skrivañ c'hwec'h yezh pennañ Afrika ar C'hornog : an haoussaeg, skrivet abaoe pell. Stadoù Norz-Nijeria, Nijer, ar Sonrhäi-Djerna (Nijer), ar mandingeg (meur a rannyezh : Mali, Ginea), ar peuleg pe gentoc'h poular-eg komzet gant ar pobloù anvet Peulh pe Foulbe eus ar Senegal betek ar C'hameroun, an tamac'heg yezh an Touareg : Mali, Nijer). Teir reolenn a vo ret ret heuliañ : eeunañ, stabilaat, unvaniñ, evit krouiñ pep yezh pennañ (pe pep strollad rannyezhoù) ur yezh lennegel unvan skrivet heñvel e pep lec'h. Prientet e vo levrioù-deskiñ ha levrioù-skol er yezhdù lennegel-se. Echu e vo al labour e 1967.

# AL LIAMM 112

Gwengolo - Here 1965

21añ Bloavezh

## TAOLENN

Kenavo, Jarl Priel gant Ronan Huon	291
Eil marv Salaun ar Foll gant Herry Caouissin	296
Jarl Priel gwelet gant ar re Yaouank gant Garmenig Le Menn	299
Nag a Wad gant Jarl Priel	301
Ailil, va c'hazh rouz gant Maodez Glanndour	317
Galv an noz gant Per Diolier	318
N'eo ket ar marv a zeu da vab den gant Yeun ar Gow	319
Mintin Eured gant Glenmor	321
Diazezoù ar sevel gwerzioù (dibenn) gant F. Kervella	322
Breizhiz war hent o c'hrenn- hag o henyezh gant abEnnez	333
Al Levrioù	338
Notennoù	351

Ar skeudennoù a zo perc'henniezh Al Liamm ha n' hellont bezañ implijet nemet  
gant ar meneg " Skeudenn Al Liamm "  
Ronan HUON

## **Kenavo, Jarl Priel**

JARL PRIEL zo aet da anaon d' an 19 a viz Eost 1965. E lizher diwezhañ am boa bet e miz Mezheven, da geñver marv va zad, falc'het gant ar memes kleñved hag eñ.

Ur miz bennak a-raok e oa degouezhet ganin ul lizher all digantañ o kemenn din e oa aet da chom da Varsilha : « Setu me deut da vezañ ur moko-rik, pennkil-ha-troad, peogwir emañ bremañ o chom e Marsilha, kêrbenn ar Vokoed... Petra bennak n' on ken ken klañv ha warlene em eus c'hoazh da glemm diwar-benn va yec'hed, rak, mabig, bremañ am eus pevar-ugent vloaz. Dre se, n' ouzon ket daoust hag-heñ e c'hellin kemer warnon ur veaj ken hir, eus Marsilha bete Priel ; marteze e vo evelkent tro da vont da Vreizh er bloaz-mañ ».

Kantadoù a lizhiri am eus bet digant Priel pa embannen e levrioù dreist-holl pe e bezhioù-c'hoari war Al Liamm, ha tu a vije da sevel ur pevare levr eñvorennoù gante, ma vefe amzer hag arc'hant. Hogen ne vennegin nemet unan all skrivet din d' ar 26 a viz Kerzu 1963, un nebeut amzer goude ma oa kouezhet klañv ha ma oa en dienez bras war un dro dre ma oa koustus-kenañ e gleñved :

*La Penne 26/XII/1963.*

*Keneil ker,*

*Erru eo ho lizher hag an arc'hant d' am bete ; ho trugarekaat a ran a-greiz kalon ha n'ouzon ket peseurt gerioù dibab evit diskouez va zrugarez, o vezañ m'en deus fellet deoc'h bezañ ur " Père Noël " ken brokus em c'heñver. Mont a ran evelkent war wellaat un tammig, petra bennak ma kouez warnon c'hoazh reuziadoù poan, da skouer en derc'hent Gouel Nedeleg. Pa vin en tailh da vont e-maez, e vin kaset d'Aubagne, ur gêrig damdost da La Penne evit tremen dirak daou ardivink radio ha neuze marteze e teuo a vedisined a-benn da c'houzout gant petore tamm eus va faour kaezh korf e vefe mat dezho plediñ da vat, met n' eo ket se eo se ; setu tremenet gouelioù Nedeleg hag emañ an deiz kentañ bloaz o tostaat a gammedoù bras. Dre-se e fell din kinnig deoc'h ha d' ho tiegezh a-bezh, gwreg ha bugale va c'halonekañ hetoù. Bloavezh mat deoc'h holl, yec'hed e-leizh eus an eil penn ar bloaz d' egile, eürusted, levenez, hag ur bern lennerien ouzhpenn d' Al Liamm. Ra blijo gant Doue reiñ deoc'h, Ronan, yec'hed, nerzh ha kalon evit kenderc'hel gant al labour ken talvoudus a rit evit Breizh, ar yezh hag al lennegezh.*

Da heul e roe din un nebeut diskleriadurioù am boa goulennet digantañ a-zivout e bezh-c'hoari diwezhañ ma oa traoù digomprenus ennañ, hag en ur goude-skrid e kemenne din « kerkent ha ma vin war vale e krogin da vat gant an danevell am eus komzet diouti : An eil sulvezh goude ar Pantekost ; d' am meno unan eus gwellañ tra skrivet ganin ».

Graet am boa anaoudegezh gant Jarl Priel war-dro 1948. Aet e oan betek Priel da glask e lakaat da skrivañ adarre, rak abaoe ma oa kouezhet ar gelaouenn SAV e oa merglet e bluenn. En em dennet en devoa en e di kozh war dorgenn veinek Krec'h Eliez, o krediñ e oa echu pep tra evit ar brezhoneg. Digalonekaet e oa ha gant kalz a boan eo e teuis a-benn d' e lakaat da skrivañ en-dro.

Ne oa ket aes kavout e lochenn hag erruout betek enni. Ret e oa, da gentañ, kuitaat an hent bras a gas da Briel, kemer neuze un hent don dirañvet ha meinek, o tiskenn hag o pignat a bep eil hag a-daol-trumm. War un tu kleiz e oa

ur seurt kloued dirapar gant ur voest-lizhiri houarn a-istribilh ha neuze ur wenodenn hanter c'holoet a c'heot hag a drez hag a grape serz betek an ti kuzhet adrek ar brouskoad.

A-c'halese avat, war an dorgenn e oa kaer ar gweled : an draonienn zon ma red enni ar Gindi ha war an diribin en tu all d' ar stêr, koad an Eskopti, ha dreist d' ar gwez, tourioù gotek ha roman Iliz Veur Landreger.

Alies e veze klañv Priel, d'ar mare-se, gant an droug-avu. An eil gwech ma 'z is d' e welout edo en e wele en ur c'horn eus ar pezh bras. Gwele e wreg hag a oa klañv pell a oa, seizhet he divhar, a oa er penn all e-kichen ar prenestr en doare ma c'helle ober war-dro ar podoù bleunioù a c'holoe ar barlenn anezhañ.  
293

Edo Jarl Priel o labourat. Fichet en devoa ur seurt daol-skrivañ a veze sklerijennet zoken war an deiz gant ur gleuzeur, ur c'horned paper journal endro dezhi o kas ar sklerijenn war ar skrid. En e gichen e tiskouezas din un tamm kartoñs peget warnañ taolenn ar c'hemmadurioù tennet diouzh yezhadur kentañ Roparz Hemon. « A-drugarez da Roparz Hemon, emezañ, ec'h on en em lakaet da vat d' ar brezhoneg. *Ur Breizhad oc 'h adkavout Breizh* en deus digoret va daoulagad. Biskoazh n' am bije dleet skrivañ en ur yezh all. »

O vezañ m' edon o chom e Lanuon ez aen alies d' e welout, war varc'h-houarn, hag e konte din gwech un tamm eus e vuhez, gwech un tamm all, gant farsadennoù e-leizh, a lakae birvilh en e zaoulagad bihan. Kement ha ken bihan ma c'houlennis digantañ skrivañ ar pezh a gonte din en ul levr. Gant diegi eo en deus kroget gant e eñvorennoù avat, ha ret eo bet din ha da Ber Denez hag a rae neuze ganin war-dro Al Liamm e hisañ d' al labour. Gwelloc'h e oa dezhañ skrivañ pezhioù-c'hoari, daoust ma sellan e eñvorennoù evel e benn-oberenn.

Evel m' en deus danevellet en e dri levr en doa kroget da skrivañ e galleg : kontadennoù, da skouer, unan eus ar re vravañ " An eil Sul goude ar Pantekost " a oa bet embannet gwechall er gelc'hgelaouenn « Les Marges », brudet en amzer-se met « hir daonet » e oa, evel ma skrive din, ha ranket en doa troc'hañ un dek pajenn bennak. Skrivet en devoa ivez e-barzh « Les OEuvres Libres », « Mercure de France », « Candide », « Gringoire », hag unan eus e bezhioù a oa bet c'hoariet e ti Dullin. Daou romant e galleg a oa bet embannet ivez, unan anezho " Le Trois-Mâts errant " a zo deut da vezañ " An Teirgwern Pembroke ". Troidigezhioù e-leizh en doa graet, diwar ar rusianeg, ar saozneg, an alamaneg ha zoken al latin. Troet en deus ul levr gant Nabokov, oberour brudet " Lolita " hag e oberenn kenwerzhel diwezhañ am eus gwelet er stalioù eo troidigezh " Tarass Boulba " gant Gogol, en un embannadur « club » keinet kaer.

E 1942 eo en deus kroget da skrivañ e brezhoneg. Savet en devoa e Priel ur strollad c'hoarierien hag evit Bleun-Brug Landreger e oa bet goulennet digantañ c'hoari ur pezh e brezhoneg. O vezañ ma ne kave hini ebet o plijout dezhañ en doa skrivet " An Dakenn dour " evel ma c'helle, ha reizhet e oa bet gant e vignon an Ao. Even a oa noter e Landreger ha brezhoneger ampart. Diwezhatoc'h eo deut Andrev Daniel da c'houlenn ar pezh-c'hoari digantañ evit e embann war SAV.

294

Ha diwar neuze n'en deus ket ehanet. Kroget en deus da zaremprediñ hor bodadegoù. Dudi a gemere e-touesk ar re yaouank ha bep bloaz, pa veze yac'h, e teue-d'ober un dro ha da dremen zoken meur a zevezh e Kamp ar Vrezhonegerien, pa ne chome ket penn-da-benn ar c'hamp.

Hogen mont a rae war an oad hag e vouezh a oa deut da vezañ raouliet. E wreg o vezañ marvet e teuas e verc'h Anna, d' ober war e dro e Priel. Kempenn a reas an ti, toullañ ur prenestr evit ma vefe splannoc'h ha distrouezhañ al liorz. Aozet he devoa ivez ur seurt saloñs bihan, ennañ ur gador-vrec'h evit he zad, ha war dumenn ar siminal e oa renket e oberennoù war baper kaer, azalek troidigezhioù Ivan Bounin betek re Erasm.

E dibenn 1963, p' edo en e 78 vloaz, e c'houlennis digant Rojer Laouenan

mont da Briel, da filmañ ar skrivagner. Ar film a oa da vezañ graet dindan anv Al Liamm, hag an Itron Rohan Chabot he doa roet din un tamm arc'hant evit va sikour da gas da benn ar menoz. A-drugarez dezho e chomo ganeomp un nebeut skeudennoù bev eus Jarl Priel pa veve e zeizioù diwezhañ e Krec'h Eliez. Rak nebeut goude ez ae kuit da chom e kreisteiz Bro-C'hall, e La Penne-sur-Huveaunne gant e verc'h a oa dimezet du-hont (1).

Morse ne vanke Jarl Priel da gas e hetoù d' e vignoned ha da vare Nedeleg diwezhañ (21-12-1964) e skrive : « Nepell 'zo on bet war var da vont da anaon gant un « infarctus du myocarde » ha betek-hen ne welan ket c'hoazh pegoulz e krogin da vont war wellaat. Skrivañ al lizherig-mañ a zo evidon zoken ul labour start ». Ar poan en devoa kemeret memestra da skrivañ din : « Bloavezh mat, yec'hed ha levez eus an eil penn ar bloaz d' egile » ha va fediñ a rae da embann kemend-all war Al Liamm evit e vignoned. E vloavezh mat diwezhañ e oa.

Er bloaz-mañ n' he devoa ket kredet e verc'h e gas da Vreizh gant aon e skuizhañ. D' an 18 a viz Eost en deus paket anoued hag an deiz war-lerc'h da noz e ehane e galon da skeiñ. P' en deus santet edo o vont da vervel en deus dastumet e holl nerzh evit lavarout d' e verc'h : « Me fell din mervel en da zivrec'h, mougañ ran... » Echu e oa.

(1) Enrollet eo bet ivez mouezh Jarl Priel gant Per Denez hag Abanna.

295

Douaret eo bet e Marsilha e-lec'h m' emañ o vevañ an hini a gare hag e gare ar muiañ, e verc'h Anna ma responte dezhi pa c'houlenne-hi - « Marteze e vefe bet gwell ganit chom e Priel ». - « Na rez ket a viloù, da heuliañ a rafen bete penn all ar bed hag en em gavfen mat ».

E genavo en devoa lavaret va mignon Jan Priel dek vloaz zo e dibenn e drede ha diwezhañ levr eñvorennoù " Amañ hag Ahont ". Ur c'henavo fentus ha fromus war-un-dro, evel ma ouie ober : « Manet on bremañ da chom e Krec'h Eliez gant va merc'h Anna hag va merc'h-vihan Mari-Eva, hag a ra o div eus o gwellañ evit harpañ kozhni un den o vont goustadik war an diskar. A-drugarez d' o c'harantez, e kenderc'hin 'ta ur pennadig c'hoazh da skrivañ evit dudi ha fent va c'henvroiz, rak evel ma teue gant egile : *Petit bonhomme vit encore*, ur frazennig hag a c'hellfe bezañ troet egiz-mañ e brezhoneg : *petra bennak ma 'z eus erc'h e-leizh war an doenn, n' eo ket c'hoazh peurvarv an tan en oaled. Kenavo 'ta d' an holl !... »*

Ar pezh a gont n' eo ket chom hep kouezhañ, met adsevel bep tro ma kouezher.

Confucius.

## **EIL MARV SALAUN AR FOLL**

UN nebeut deizioù a-raok Pardon ar Folgoad e teuas din keloù doanius marv, pell diouzh e vro, an hini a roas buhez da Salaun ar Foll, dre benveg ar fiñvskeudennerezh : JARL PRIEL.

Lavaret eo bet eus ar c'hoarier brudet hag ampart Pierre Fresnay en devoa gant ar film " Monsieur Vincent " diazezet skeudennadur Sant Visant a Baol. Mat, hep aon da faziañ, e c'heller ober an hevelep meuleudi da Jarl Priel ; roet en deus un dremm ivez da Salaun ar Foll hag hel lakaet da advevañ dirak hon daoulagad.

Hiviziken, pa soñjer e servijer paour an Itron Varia e Breizh e teu d' hor spered dremm fromus Jarl Priel evel m' her gweler en hor film « Mister ar Folgoad ».

Morse ne drugarekain a-walc'h ar Spered Santel pa zeuas soñj din da zibab hor skrivagner evit gwiskañ kroc'hen Salaun ar Foll.

Rak bez' e oa, hep mar, ur c'hoarier a ijin ; graet en devoa ivez er skolioù war an dachenn-se gant Konstantin Stanislavski, ar mestr c'hoarier brudet rusiat, e C'hoariva Arzek Moskov. Ya, c'hoariet en deus Jarl Priel " Hamlet " e ruseg ! Ha goude ar brezel 1914-18 e teuas da vezañ kenlabourer daou vestr all eus ar Arz dramatikel : Charles Dullin ha Louis Jouvet.

Hogen, Priel n' en devoa ket pleustret war dachenn ar fiñvskeudennerezh. Met adal ma voe gwisket gantañ ur c'habig louet hag ur vragez kozh, gant en dro d' e gof ur gordenn evel gouriz, gant e varv hag e vlev hir, Salaun ar Foll a oa, splann, dirazomp !

E welout a ran c'hoazh o kerzhout treid noazh dre hentoù don Bro-Leon pe ar c'hoadoù, harpet war e bennbazh, pe o pediñ e skeud ur piled, pe o c'hoari hag o c'hoarzhin gant ar vugale, ar re-mañ o kanañ laouen en-dro dezhañ, pe o c'houlenn an aluzen ! Ken gwirion e oa Jarl Priel e roll Salaun, m' o devoa tud ar Folgoad ha Plouneour-Traezh un doujañs vras evitañ. Pedet e oa zoken da leinañ, pe da goaniañ

297

- E pelec'h an diaoul eo aet Priel ? a c'houlennemp a-greiz-holl o welout ne oa ket war lec'h ar c'hoari. Pedet e oa da verennañ, na petra 'ta ! Hag e kaven va « Salaun » dirak ur mell banne kafe, bara, amann ha kig sal, hag ur banne gwin, war an daol, en ur vereuri !

- Pa lavaren deoc'h e tapfen va fegement ! a lavaras Priel d' e ostizez !

- Alato ! eme homañ din : n' eo ket gant ar greunenn vara a zo en e sac'h e leunio e gof, ar paour kaezh Salaun !

Ha Priel da lavarout din goude se : Brittia films a zlefe bezañ laouen, rak n' am befe nemet lavarout ya hag e vefen bouetet gant an holl dud vat amañ !

Ar vugale zoken a oa pedet outo gant o c'herent da vezañ « chentil » gant Salaun hag enoret e oa meur a hini o stardañ e zaouarn.

Morse n' am eus klevet Leoniz oc'h ober outañ : An Aotrou Priel, met Salaun ar Foll !

Jarl Priel a ouie c'hoari gant e zremm, hep distagañ ur ger. N' eus nemet



e welout er film, o sellout gant truez ouzh ar soudarded c'hall pe saoz o frikotañ gant ar gisti, e-pad ar brezel a rae e reuz e Breizh etre Bleiz ha Montfort. Ha selloù don e zaoulagad pa lavar : « Me eo servijer ar Werc'hez Vari ! »

An daoulagad-se, serret da viken gant an Ankou, a chom bev atav dirazomp dre vurzhud ar Fiñvskeudennerezh.

Met eus an amzer c'hwek ma savemp " Mister ar Folgoad " daou dra a chom atav sanket em spered :

Marv Salaun ar Foll ! Da gentañ, pa roas Jarl Priel d' e zremm liv ha skeud ar marv, gant e zaoulagad hanter-serret, buhez ebet ken enno. Estlammus e oa ! Sellit ouzh al luc'hskeudenn, kalz gwelloc'h eget komzoù !

D' an eil, pa voe douaret ar paour kaezh Salaun. Jarl Priel ne fellas ket dezhañ, daoust d' e oad, e vefe lakaet unan all er bez ! En em ledañ a reas war an douar noazh ha yen (e miz Du e oamp) hag e-unan e roas urzh da deurel douar warnañ, rak ar gouerien ne gredent ket re hen ober.

- O alato ! eme ur vaouez kozh, n' it ket da ober an dra-se dezhañ !

298

- Fei eo avat ! a respontas prim Priel, eus donder ar bez !

Pa voe echu finvskeudenniñ an daolenn-se, e c'houlennis digant Jarl Priel ma ne oa ket bet re sammet gant ar bouledoù douar stlapet warnañ.

- Nann ! Met evelkent, em eus santet daou pe dri maen o skeiñ war ar bouton-kof... Peadra d' am lakaat da ziroll da c'hoarzhin !...

\* \* \*

Goude roll Salaun, kinniget em boa da Jarl Priel bezañ n' eo ket mui ur c'hlaser bara, met ur roue ! Ha peseurt roue ? Ar Roue Gralon, er film nevez a aozen er mare-se : KER-IS. Siwazh, n' hon eus ket gallet kas an huñvre kaer-se da wir, dre ziouer arc'hant, na petra 'ta !

Pebezh Gralon meur ha breizhat war ar marc'had e vefe bet Jarl Priel !

\* \* \*

War dachenn ar c'hoariva, hon eus graet da Briel o krouiñ e Pariz (e 1951) e zrama : AN ANKOU en « Théâtre de Poche », gant ar strollad an Ed Nevez. Morse c'hoarilec'h bihan Montparnasse ne oa bet ken leun, gant ur pezh-c'hoari e brezhoneg !

Graet em boa ivez un nebeut bloavezhioù 'zo gant Priel ar soñj da denañ ur film eus " An Ankou ", film komzet e brezhoneg penn-da-benn, gant is-talbennoù gallek. Atav an diouer arc'hant a viras ouzhimp da gas da benn hor c'hefridi. Daoust ha ne vefe ket talvoudus ha kaer tizhout ar pal-se bremañ, e koun hor skrivagner hag evit sked hor yezh.., gant ma vezo kavet ar « gwenneien » ! ! !

\* \* \*

Ur gerig evit klozañ : pa welan em film Jarl Priel « beziet » e douar Breizh, poan e ra din soñjal ne ra ket e gousk diwezhañ e douar e gavell badeziant, e Bro-Dreger, e skeud iliz-veur Sant Erwan. Ret eo esperout, un deiz pe zeiz, e kavo tu ar vrezhonegerien da gas en-dro da Vreizh relegoù ar Breizhad a ouenn vat hag en deus servijet mat e vro dre e ijin ha dre e bluenn, en ur c'hoari hag en ur skrivañ e brezhoneg.

Dous r' hen pardono !

## JARL PRIEL GWELET GANT AR RE YAOUANK

AET eo Jarl Priel da Anaon, Doue d' e bardono, skoet gant an Ankou d' an oad a 80 vloaz. Pell ' zo endeo edo « Paotr e falc'h o lemman e venveg » en-dro d' e wele, evel ma lavar e-unan, en eil eus an tri levr ma kont enno e vuhez.

Buhez souezhus ! Foetet en deus hent dre ar bed, ha bevet gant tud a bep bro, e Rusia, e Polonia, en Aljeria, en America... Kaset ha digaset eo bet gant ar Brezel-bras a-dreuz Europa. Kenlabouret en deus ivez gant pennoù ar C'hoariva : Dullin, Jouvét, Pitoëff. E-touez an toullad pezhioù-c'hoari en deus skrivet, e oa soñj Louis Jouvét c'hoari daou anezho, ma ne vije ket aet re abred da Anaon : " Ar Spontailh " ha "Tri devezhour evit an Eost ".

Troet en deus un niver mat a levrioù diwar ar rusianeg, an alamaneg, ar saozneg, al latin... Met n' eo deuet, siwazh, nemet war an diwezhat da skrivañ en e yezh c'henidik.

E levr kentañ e vuhez e kont penaos eo degouezhet dezhañ skrivañ e brezhoneg, hag al levezon o deus bet warnañ F. Even, R. Hemon ha Ronan Huon evit kenderc'hel gant an hent-se.

Dudi a gavo pep brezhoneger o lenn eñvorennoù Jarl Priel : " Va zammig buhez ", " Va buhez e Rusia " hag " Amañ hag ahont ".

Skrivet en deus en ur brezhoneg bev-buhezek, awenet gant spered Tregeriz. Un oberenn e-touez ar re wellañ eus hol lennegezh eo.

Un dra hepken a souezh en e zoare da skrivañ : diaes eo gouzout petra en deus lakaet anezhañ da skrivañ a-wechoù frazennoù direizh a-berzh un den gouiziek war e yezh ha brezhoneger a vihan ouzhpenn. Da skouer traoù evel « Marteze me a yelo » e-lec'h « Marteze ez in »...

300

Niverus eo e bezhioù-cloari ha tu zo da rannañ anezho e daou seurt : ar re skrijus hag ar re fentus ; ken plijus an eil re hag ar re all. Er re gentañ e vez kavet ur Breizhad troet e spered davet kudennoù an Dianav, koroll ar Vuhez hag ar Marv, ha sonerezh ar Garantez. En eil re, e sailh an Tregeriad goapaer, lemnaet e deod gant ar mousfent.

Ur garantez vras en deus maget Jarl Priel evit tud ha traoù ar mor, ha dezrevellet eo kemend-all en e romant " An Teirgwern Pembroke ".

Ur yezh vev eo e hini. brezhonek-rik en he stumm ha puilh enni gerioù pinvidik ur yezh lennegel met gouest da vout intentet gant ar bobl. Lieslivet eo e oberennoù gant troioù-lavar e Born-bro genidik, troioù-lavar broadel, peogwir ez eus roud anezho ivez e holl rannoù-bro Breizh, hag i a genlabour da reiñ buhez d' ar yezh :

...Daoulagad sanket don en o foull..  
 ...Gortoz e vramm diwezhañ..  
 ...Bloavezh mat ha ti dilogot ...

Ha mil all hag unan strewet e pep pajenn eus e skridoù.

Danvez oberennoù Jarl Priel a zo ar vuhez, he darvoudoù eo a zo livet ar muiañ gantañ ; hag en e skridoù e trec'h ar galon war ar spered. Neb en deus lennet " Va zammig buhez " n' ankounac'hay morse ar pennad gouestlet da varv e vamm.

Ar pezh a zo plijus en e oberennoù ivez eo : n'eo ket troet da werzennañ gwaskadur Breizh, da lenvañ war tonkadur hor yezh... Gwelloc'h en deus kavet kanañ he buhez. Seul vuioc'h e vez lavaret eo moustret Breizh, seul vuioc'h eo kevatal hec'h emzalc'h d' ar c'hempleg-se. N' en deus ket kollet e amzer. Komz a ra eus hor bro evel eus n'eus forzh peseurt bro yac'h. Gant pezh en deus skrivet en deus roet an tu d' e lennerien da zigerin o spered war broioù all. Kenlabouret en deus da rentañ he flas d' hor bro er bed. Ne vefe nemet evit-se, e c'hellfe bezañ trugarekaet Jarl Priel. Hag ouzhpenn en deus lezet ganeomp, rummadoù a-vremañ, ha da zont, an tu da anavezout ha zoken da garout mil skeudenn hag unan eus hor yezh pinvidik. Frouezhus eo bet e « dammig buhez ».

## **NAG A WAD**

(pezh-c'hoari en un arvest)

TUD AR C'HOARI

KLITEMNESTRA, rouanez Argos  
EGISTES, he mutañ-karet  
ELEKTRA, he merc'h  
UR PRIZONIAD BREZEL, eus Troaz, ar gêr holl-vrudet

302

Rakkambr ar roue Agamemnon, war-dro hanternoz, an noz ma tistroas ar roue d' ar gêr, goude brezeliañ den ne oar pegeit amzer. Bez eus un nor war an tu dehou hag un all war an tu kleiz. Pa sav ar ouel, emañ Egistes e teñvalijenn kambr ar roue. Rak n' eus gouloù ebet nemet sklaerder al loar silet dre un tamm prenestr hir ha moan. Hanter guzhet gant ur stign seiz melen, e chom Klitemnestra daoubleget e toull an nor. Da gentañ ne rann ger ebet, met damdost goude e vouskomz ar rouanez.

KLITEMNESTRA. - Ac'hanta, peurechu eo da labour ?

EGISTES (er gambr all, a vouezh izel ivez). - War vete nebeut, ya.

KLITEMNESTRA. - Hast buan.

EGISTES. - Ha kavout a ra dit e vefe ur c'hoari ober kement-mañ pa ne welan takenn ?

KLITEMNESTRA. - Ne badan ken gant an anken hag an aon.

(Tevl a reont ul lajadig, ha goude e tifloup Egistes e-maez ar gambr teñval.)

EGISTES. - Deut eo ganin evelkent ha setu graet an taol.

KLITEMNESTRA. - Intañvez on 'ta d' an diwezh ?

EGISTES. - Ya, Rouanez, ha fellout a ra din stouiñ penn dirak danvez va gwreg.

KLITEMNESTRA. - Ro din ur pok, Egistes.

EGISTES. - Pep tra en e goulz. Diskenn kentoc'h ur bannac'h dour war va faour kaezh daouarn.

KLITEMNESTRA (en ur sentiñ outañ). - Fromus eo teurel ur sell war da vizied gant kement a wad peget outo.

EGISTES. - ...Gwad hag eoul, rak o klask stourm ouzhin, en deus stlepet al lampr d' an douar.

KLITEMNESTRA ( a vouezh uhel). - Ha talvout a ra bremañ ar boan kenderc'hel da sozoc'hal evel tudigoù spontik ?

303

EGISTES. - E gwirionez nann, poent eo paouez da grenañ peogwir on deut diwar hirie da vezañ penntiegezh amañ ha dre n' eus nemedout te, Rouanez Veur, o ren

war Argos,

KLITEMNESTRA. - Ya, tec'het ac'h eus Agamemnon a-ziwar hon hent.

EGISTES (en ur dorchañ e zaouarn ouzh an danvez seiz stignet ouzh dor ar roue).  
- Ma ! tremen bec'h am eus bet o tont a-benn dioutañ ; biken n' am bije kredet e oa c'hoazh ken stag ouzh ar vuhez.

KLITEMNESTRA. - Mat am eus graet 'ta o weañ war zigarez c'hoarzhin va gouel gant mailhoù bras alaouret en-dro d' ar Roue, rak diwar neuze en em gavas sac'het gwashoc'h eget ur pesk en ur roued.

EGISTES. - Marteze ne vijen bet biken trec'h dezhañ panevet d' az taol-yud.

KLITEMNESTRA. - Noz ha deiz, koulz eo lavarout, am boa steuet hon irienn penna-da-benn ha dre ar munut ha dre-se n' hellen ket c'hwitañ war va c'hildro.

EGISTES. - Koulskoude meur a wech e tegouezh d' ar gwellañ horolaj sac'hañ war ur c'hreunenn.

KLITEMNESTRA (en ur ziskouez gant he biz kambr ar Roue). - Met an dro-mañ eo deut an traoù da vat, hag emañ Agamemnon gant e holl lorc'h ha daoust d' e vrud ledet war lein e gein en ur poullad gwad hag eoul. (Skrignal a reont o daou ha war var emaint d' en em vriata pa glever ur youc'hadenn hir ha difraezh. Raktal e souz ar Rouanez betek ar voger ha krenañ a ra he mouezh pa stag da gomz.) Piv 'ta a vlej e-giz-se ?

EGISTES. - Hervez ar reolenn e tle gedourien an nor-dal hag an tour meur hopal evel-se da beb div eur kement ha diskouez n' int ket moredet.

KLITEMNESTRA. - Hag e vez klevet o zourni diouzh ken pell-se ?

EGISTES. - Sioul eo an noz hag o mouezh a zo skiltr.

KLITEMNESTRA. - Gant se pa grogas ar roue da yudal e nijas marteze e glemmoù bete meur a skouarn ?

304 305

EGISTES. - N' ouzon ket, met gallout a ta bezañ.

KLITEMNESTRA. - Gwelloc'h e vije bet dit 'ta en em gemer gantañ kalz primoc'h hag akwitoc'h !

EGISTES. - Brav eo dit tamall, met n' am eus ket bet diganit nemeur a skoazell e-keit ma ranken en em zibab gant ar pep gwashañ.

KLITEMNESTRA. - Allas, gwall groget en devoa ennon ar c'hi brein-se pa fellas din stouvañ e c'henou gant va dorn ; sell pegen koeñvet eo va biz-meud !

EGISTES (war evezh ha digor mat gantañ e zivskouarn). - Tav !... ha selaou !...

KLITEMNESTRA. - Petra ' zo ?

EGISTES. - Ne glevet ket fiñval ?

KLITEMNESTRA. - Pelec'h ?

EGISTES (en ur astenn e vrec'h war-du ar gambr all). - Du-hont !

KLITEMNESTRA. - Ha piv 'ta ?

EGISTES (a vouezh izel). - Da bried... Agamemnon... ar Roue !

KLITEMNESTRA (a nerzh he fenn). - N' eus en ti-meur-mañ roue ebet nemet Egistes

dre ma vo arc'hoazh va den.

EGISTES (a vouezh izel). - Ro peoc'h !... (Stagañ a ra ivez ar Rouanez da selaou hag o vezañ ma vanont o daou dilavar e klever fraezh-mat ur glemmadenn.) Daoust ha gaou am boa lavaret ?

KLITEMNESTRA. - bev eo !

EGISTES (e benn stouet a-us da doull an nor). - Emañ o ruzañ war e grabanoù... ha bremañ, dallet gant ar gwad o flistrañ eus e dal, met harpet gantañ e gein ouzh ar voger e ra e seizh gwellañ evit mont en e sav...

KLITEMNESTRA (a-bouez-penn). - Kae dezhañ !

EGISTES. - Ur wech ouzhpenn ?

305

KLITEMNESTRA. - Kas da benn al labour strambouilhet ganit ! (Gant e gleze en e zorn e lamm Egistes er gambr nesañ. Klevout a reer trouz ur c'horf pounner o kouezhañ d' an traoñ ; goude, div pe deir roc'hadenn ha netra ken. Berr eo warnañ pa zeu Egistes er-maez ha diouzh e welout e kren dindanañ e zivesker.) Ha bremañ ?

EGISTES (o lemel gant e zorn ar c'hwezenn o pizenniñ war e dal). - Torret oe dezhañ ar c'hoant sevel a varv da vev.

(Kerkent e skoer war an nor dehou.)

UR VOUEZH (er-maez). - Digorit... digorit raktal...

EGISTES (a vouezh izel). - Piv an tanfoeltr a zo war vale d'ar c'houlz-mañ noz ?

KLITEMNESTRA. - Va merc'h... Elektra...

ELEKTRA. - Ne glevit ket ?

EGISTES. - Ac'hanta, divorailh an nor...

KLITEMNESTRA. - Biskoazh kemend-all ? Koll penn a rez, am eus aon ?

EGISTES. - Dibrenn an nor hep goulenn na perak na penaos, pe daoust ha gwell eo dit e tihunfe da verc'h kement den a zo war-dro ?

KLITEMNESTRA. - Ma ! ober a rin 'ta diouzh da c'hoant.

(E-keit m' emañ ar rouanez o tigeriñ an nor dehou en em sil Egistes er gambr deñval. Kerkent e tired Elektra, ur gouloù savet ganti a-us d' he fenn.)

ELEKTRA. - Petra, va mamm ? ha c'hwi a welan amañ ?

KLITEMNESTRA. - Ha lavar din pelec'h e tlefen bezañ mar n' eo ket e-kichen va den, nevez erru er gêr ? Petra ' fell dit moustamall, Elektra ?

ELEKTRA. - Netra, va mamm, netra met...

KLITEMNESTRA. - Gout'ouzout pet eur eo ?

ELEKTRA. - Nann, rak kousket e oan evel ur broc'h.

306

KLITEMNESTRA. - Kae d' az kwele !

ELEKTRA. - Hag a rin raktal p' am ho komzet gant ar roue.

KLITEMNESTRA. - Goude un treuz ken hir ha ken arvarus, ne gred ket dit en deus gounezet ar gwir da ziskuizhañ ? Red 'prim d' az kwele !

ELEKTRA. - Kousket mik e oan, pa lavaran deoc'h, hag a greiz-holl on bet dihunet a-daol gant ur youc'hadenn spontus : « Ar roue, emezon, ar roue o krial forzh e vuhez ! »

KLITEMNESTRA. - O huñvreal e oas. Red d' az kwele, Elektra, n' out ken ur grennardenn.

ELEKTRA. - Huñvreal am eus graet a dra sur, met ken hakr e oa va spont ma sailhis e-maez va gwele heg e tiredis amañ evel ma oan, hep koll amzer da wiskañ va dilhad.

KLITEMNESTRA. - Ha n' ac'h eus ket mezh ? Merc'h ar roue, diblañsonet he blev, hanter-noazh ha diarc'hen, o skarañ e-kreiz an noz eus ar penn all d' ar palez d' egile ? ha hi o leñvañ didruez war var da spouroniñ pep hini, bras ha bihan, abalamour d' un huñvre ?

ELEKTRA. - Ho pediñ a ran, va mamm, d' am digareziñ.

KLITEMNESTRA. - Kae d' az kwele ha kousk sioul ha dinec'h betek ar beure.

ELEKTRA. - Sentiñ a rin ouzoc'h, met da gentañ va lezit d' en em zidamall dirak va zad

KLITEMNESTRA. - Ro peoc'h dezhañ, emañ o paouez da venel kousket.

ELEKTRA. - Trouz ebet ne rin ; a-walc'h e vo din teurel ur sell warnañ.

(Kerzhout a ra disaon etrezek ar gambr all.)

KLITEMNESTRA. - Chom amañ, n' a ket pelloc'h !

ELEKTRA (sebezet). - Ha petra 'virfe da... Met krenañ a rit evel ur barr delioù, liv ar marv a zo en ho kerc'henn !... (A-nerzh he fenn.) Va zad a fell din gwelout !... Perak ne sav ket da ziboaniañ e verc'h, kaer he deus huanadiñ ? (Gant he biz e tiskouez ar stign seiz.) Siwazh, gwad a welan aze... e wad eñ !... Lazhet hoc'h eus ar roue ! Va gervel a reas davetañ ar paour kaezh, keit ha m' oac'h o troc'hañ e c'houzoug. Tavit din, va mamm, hag hen touiñ a rafen, emac'h o vont da zibunañ gevier. Muntret eo bet va zad. muntret ganeoc'h c'hwi ! Skoazell, tudoù, skoazell, mevelien ha soudarded !...

307

(Fellout a ra dezhi redek e-maez ar rakkambr, met herr warnañ e sailh Egistes eus ar gambr teñval ha kerkent emañ a-dreuz he hent.)

EGISTES. - Goustadik, va flac'h, anez-se az po keuz !

ELEKTRA. - Ar bleiz !... Aze ' oas 'ta, bleiz milliget, bleiz hep feiz na kalon, o c'hedal distro al leon kanmeulet dre ar bed holl ?

EGISTES. - Ne davi ket ?

ELEKTRA. - Geo, rak ar wirionez a zo ganit. Peseurt skoazell am eus ezhomm peogwir a-benn bremañ eo pouloudennet gwad ar gour kontellet ganit dre ur fallagriezh bennak, ha moarvat a-greiz e gousk ? Nann, skaazell ebet, met den ne viro ouzhin d' ober gwall ouzh gwall evit ur marv ken kriz.

(En em strinkañ a ra etrezek ar prenestr, met he mamm a zo du-hont en he raok.)

KLITEMNESTRA. - Gwelet e vo 'ta !

(Emaint ur pennadig krog ha krog, mamm ha merc'h, met dont a ra ar rouanez a-benn da bellaat Elektra diouzh ar prenestr ha da ziframmañ diganti ar gouloù.)

ELEKTRA. - Allas ! va mamm ,n' eo ket c'hoazh gweñvet ar bleunioù hag ar bodoù glas ho poa gourc'hemennet strewiñ war an hentoù dirak ar soudarded a zouge va zad kaezh war o divskoaz, ha gantañ ur gurunenn lore war e benn, ha bremañ eo reut ha sklaset izili an trec'hour beuzet en e wad. Ha piv a zo kiriek da gement-mañ ? C'hwi, gwreg diwir, c'hwi, rouanez fallakr !

KLITEMNESTRA (da Egistes). - Arsa, ne gavi ket tu d' ober da houmañ paouez gant he dismegañsoù ?

EGISTES (e gleze en e zorn). - Dre gaer pe dre heg e torro dezhi kent na vo pell.

308

KLITEMNESTRA. - N' out ket evelkent e sel da sevel warni da gleze ?

EGISTES, - Desk din ur stumm all d' ober dezhi serriñ he genou.

KLITEMNESTRA. - Gortoz ur pennadig.

EGISTES. - Koll poan hag amzer a ri o klask he gounit gant gerioù flour ha kuzulioù fur.

KLITEMNESTRA. - N' on ket evit da leuskel d' ober ar gwall daol-se !

EGISTES. - A-drugarez dezhi e teuio prestik ar soudarded da c'houzout e pe zoare ha war c'hourc'hemenn piv e kouezhas ar roue karet ganto kement hag un Doue. Bez eus ennout nerzh ha kalon a-walc'h evit stourm ouzh o c'hounnar hag evit ober dezho plegañ ?

KLITEMNESTRA. - N' eus forzh ! Va merc'h eo, ur bugel ganet diwarnon. N' he deus bet magerez ebet nemedon ha nag e oa karet ganin pa oa bihan.

ELEKTRA. - Ha krediñ a rafec'h anzav dirazon n'hoc'h eus biskoazh karet ar pried emaoc'h o paouez lazhañ ?

KLITEMNESTRA. - Ha mar bez ret lemel diganti he buhez, ne vo graet droug ebet dezhi dirazon.

ELEKTRA. - Mouchit 'ta ho taoulagad, mamm dener, met ezhomm ebet n' ho po da stouvañ ho tivskouarn, rak pa vin skoet ne laoskin ket an disterañ klemmadenn. Laouen e varvin o vezañ m' oc'h bremañ war-nes dispakañ bemdez doue ha dirak an holl al loustoni ho poa betek-hen kuzhet gant ar vezh. Hag ar vastarenn-se n' on ket evit he gouzañv. Sko 'ta, kiger, ha hast buan, rak war a welan e kren da zorn war da gleze. Sko, met un deiz da zont, e vi diwadet d' az tro gant va breur Orestes...

EGISTES. - Marteze ! Nep a vevo a welo.

ELEKTRA. - Marteze, emezout ? Ken sur ha graet ! Pe grediñ a rafe dit eo va breur ur c'had evelout-te ?

EGISTES. - Koulz hag ar re all e tichañso d'Orestes klevout ar c'heloù hudur-mañ : « Ne oa na re c'hlan, na re reizh karantez Elektra e-keñver he zad ! »

309

ELEKTRA. - Da lavarout eo ?

EGISTES. - N' eus netra, va flac'hig, sentusoc'h eget ur c'horf marv. A-walc'h e vo dimp stummañ diouzh-se hoc'h izili hag o tilhad ho taou evit reiñ liv ar wirionez d' ur gaou bras.



ELEKTRA. - Biken ne gredfec'h ober kement-se !

EGISTES. - Biken, e kav dit ?... hahahahaha ! Ha neuze, fae ganti o welout un dra ken heugus, e stago da vamm da grial forzh ; diredek a rayo ar sklaved, ar mitizhien, ar soudarded, pennoù bras al lez, ha ken buan ha m'o devo taolet ur sell warnoc'h, e souzo pep-hini en ur skrijañ. Kerkent e vo brudet ar c'heloù fromus dre gêr-veur Argos, ha goude...

ELEKTRA. - Daoust hag-eñ, rouanez, ne vo ket gourc'hemennet ganeoc'h troc'hañ un teod ken lous ?

EGISTES. - ...Ha goude e nijo primoc'h eget ul luc'hedenn ar gwall-vrud-se tro-dro hag e pep lec'h hag anzav a ranko pep-hini : « Ya, n' eo ket hep gwir abeg he deus Klitemnestra barnet d' ar marv daou dorfedour ken vil ! »

ELEKTRA. - Ne deurvezo den ho krediñ.

EGISTES. - Dont a rayo ar rouanez a-benn da douellañ an neb a chomfe war vete-gouzout.

ELEKTRA. - Kaer he devo poanial, ne blego hini ebet da lonkañ he gevier.

KLITEMNESTRA. - Ha perak-se ? Pelec'h e vefe kavet ur vamm en-tailh d' ijinañ ar seurt traoù diwar-benn he merc'h ?

ELEKTRA. - Brumennet eo va daoulagad, ha kouezhañ a rafen d' an douar nemet ma fell din en em virout da fallaat dirak daou loen eveldoc'h c'hwi. O va zad paour, abalamour da betra n' oc'h ket bet lazhet war an dachenn-vrezel gant un enebour diwidre ?... E wreg, e gurunenn, e vuhez, Egistes, pep tra ac'h eus laeret digantañ. Ha bremañ, goude n' en deus netra ken nemet e vrud, emhout o klask e ruilhal er fank, en doare ma vo dismegañset gant an holl keit ha ma pado ar bed !

KLITEMNESTRA. - Se sell ouzhit !

310

ELEKTRA. - Gant ar vevh, va mamm, chomit da vihanañ hep emellout en hor marc'had... Rak mar deurvez an amprevan-mañ tremen hep labezañ anv mat Agamemnon, ne asanto, emichañs, da devel nemet ha stouvañ a rafen ivez va genou?

EGISTES. - Deut eo ganit, ha disklaer raktal war pe du e troez.

ELEKTRA (a-benn ur pennadig). - Ac'hanta, ne lavarín ger peogwir n' hellan ket ober a-hend-all, met taolit pled, un dro bennak e tiskoulmo va zeod hag en desped din e laoskin ar wirionez da zifloupañ.

EGISTES. - Goude ma vin azezet da vat war gador-veur Argos n' am bo ken aon rak al latennoù re hir.

ELEKTRA. - Gallout a ran bremañ tec'hel kuit. (Souzañ a ra Egistes a-ziwar he hent en ul lakaat e gleze er feur. Daoulinet eo Elektra dirak kambr ar roue.) Ene va faour kaezh tad, grit ma chomo bev tan ar gasoni a zo a-benn bremañ krog em spered hag em c'halon ; ra vin suilhet gantañ e n' eus forzh pe vro e tegouezho din bevañ, ha ra flammino ken taer hag en noz-mañ kent ne vo bet gwalc'het kement takenn wad a zo bet skuilhet henozh, petra bennak ma rankfen evit-se ober fae war gerentiez, lezennoù an dud ha zoken lezenn Doue.

(Sevel a ra en he sav ha tremen e ra dirak an daou genwaller hep teurel ur sell outo.)

EGISTES. - Gortoz ul lajadig... O vezañ m'eo ret mat dimp, n' eus forzh petra ' zo er mare-me war da spered, bevañ a-gevret e-pad pell amzer emichañs dindan an hevelep toenn, e tleomp en em glevout ha reizhañ divizoù n' heller ket tremen hepto. Ra vo 'ta da gasoni...

ELEKTRA. - ...Ha va fae !

EGISTES. - Evel ma kari... ra vezint peurbadus, se sell ouzhit, met ret e vo dezho chom kuzhet ouzh an holl, rak ar vaouez-mañ a zo bepred da vamm hag ar rouanez keit ha ma vevo, ha dre se e ranki merkañ e pep lec'h hag e pep degouezh an doujañs ha zoken ar garantez ac'h eus marteze diskouezet dezhi betek-hen...

311

ELEKTRA. - O vezañ m' eo bremañ intañvez, netra ne viro moarvat ouzh gwreg Agamemnon da zimeziñ ganit ?

KLITEMNESTRA. - Evit gwir, sed aze hor menoz fraezh ha splann.

ELEKTRA (da Egistes), - Gant se 'ta, e vin dalc'het d' ober ivez an neuz kaout doujañs ez keñver.

EGISTES. - Ret e vo dit tremen dre eno, ha ken start e kavi plegañ d' ar seurt ardoù, ma vefe mat kustumiñ raktal, a-dal an noz-mañ. Ne dalv ket ar boan dispourbellañ da zaoulagad... Netra n' az po d' ober nemet lavarout nozvezh vat d' az mamm, d' ar rouanez... nozvezh vat traken, gant doujañs, evel pa ne vefemp ket hon unanoù...

ELEKTRA. - Biken ken, treitourien, ne viot hoc'h-unan ha dibaouez e stago ouzhoc'h anaon Agamemnon.

EGISTES. - 'Kement-se ne sell nemet ouzh danvez va gwreg ha me. Ac'hanta, lavar nozvezh vat d' az mamm. (Kerzhout a ra Elektra etrezek ar rouanez met chom a ra hep dont d' he bete.) Ken diaes tra a c'houlennan diganit ?... Koulskoude ne c'hourc'hemennan ket dit pokat dezhi !

ELEKTRA. - Nozvezh vat !

EGISTES. - Ha goude ?...

ELEKTRA. - Nozvezh vat deoc'h, va mamm !

(Stagañ a ra da ouelañ.)

KLITEMNESTRA. - Gouelañ a ri ez kambr kement ha ma kari, met diwall da skuilh daeroù dirak an dud all.

EGISTES. - Ha perak ne rafe ket ?... Den ne vo sebezet gant he glac'har, peogwir emañ o paouez klevout ec'h eo aet kuit he zad kerkent ha distro d' ar gêr, hep kemer zoken ar boan da vriata e verc'h...

KLITEMNESTRA. - Klevet ac'h eus ?... Sed aze ar c'heloù a dleez leuskel da redek... « Aet eo adarre ar roue e-maez ar vro ha pell pell e pado e dro »...

EGISTES. - Marteze zoken ne zeuio biken d' ar gêr.

312

ELEKTRA. - C'hoarzhit ha grit goap ouzhin mar plij deoc'h, met gwech ebet ne vin gwelet o ouelañ dirazoc'h, nemet dre levenez e vefe, ha neuze 'vat e vo ar marv nepell diouzh ho tor !

(Mont a ra e-maez, he fenn sonn ganti.)

EGISTES. - Ar pep diaesañ am eus bremañ d' echuiñ, rak ret eo din en em zizober diouzh ar c'horf marv.

KLITEMNESTRA. - Ha penaos en em gemeri gant se ?

EGISTES. - Selaou ar c'hezeg o pavata er porzh, emañ aze va frizoniad brezel ouzh va gortoz gant ur c'harr skañv..

KLITEMNESTRA. - Daoust ha trelatet e vefes o tiskuliañ d' un estren, d' un enebour un dra kuzhet ouzh an holl nemedomp hon daou.

EGISTES. - Trugarez en deus ouzhin dre m' am eus laosket gantañ e vuhez, ha n' eus forzh petra a rafe kement ha plijout din. A-hend-all n'hellan ket tremen hep skoazell ur gwaz kreñv, rak pounner da zougen e vo da zen. (Hopal a ra dre ar preneustr.) Klev 'ta, pign war-eeun bete kambr ar roue... (Da Glitemnestra.) Kerkent ha diskarget hor samm er c'harr, e skarimp d' ar pevar lamm betek an aod, ha du-hont a-ziwar lein ur garreg e vo tanfoeltret ar c'horf en donvor gant ur pikol maen stag mat ouzh e vandenn, ha fin dre eno.

(Dont a ra tre ar prizoniad.)

AR PRIZONIAD. - En ho kourc'hemenn, Aotrou !

EGISTES. - Ne gavez ket c'hoazh re hir da vuhez ?

AR PRIZONIAD. - Petra, Aotrou, en arvar e vefen da vervel ? (A uouezh uheloc'h.) Bremañ p' eo erru ar roue en e di-meur, e c'hellin en em glemm dirazañ mar bez graet gaou ouzhin.

EGISTES. - N' az po ken tu da gejañ gant ar roue, hag anatoc'h eo se dit eget da n' eus forzh piv all.

AR PRIZONIAD. - Siwazh, Aotrou, n' intentan ket ho komzoù.

EGISTES. - Daoust ha n' out ket aet gantañ e-maez ar gêr-veur bete ribl ar mor ?

313

AR PRIZONIAD. - Pegoulz, Aotrou ?

EGISTES. - Hirie, da serr-noz.

AR PRIZONIAD. - Piv 'ta ?... Me ?...

EGISTES. - Ankounac'haet ac'h eus e pignes dirazout war vourzh ul lestr estren ha zoken ar c'homzoù a glevis digantañ kent ne savas ar ouel ?

AR PRIZONIAD. - Deut eo va blev da louediñ, Aotrou, ha va eñvor n' eo ken gwall lemm, met m' ho pefe ar vadelezh da zegas din da goun kimiad Agamemnon e talc'hin da viken soñj dioutañ.

EGISTES. - « Mont a ran kuit adarre, emezañ, ha pell amzer am eus aon e pado va zro. Ul le a vir ouzhin da ziskleriañ hirie na da belec'h, nag evit pegeit amzer, nag abalamour da betra e rankan pellaat eus Argos. Dre ar munut e vo dizoloet ar c'hevrin-se d' an holl pa vin distro d' ar gêr, ha da c'hortoz, ra gendalc'ho ar rouanez da ren ar vro evel m'he deus graet e-pad ar brezel. »

AR PRIZONIAD. - Bremañ 'vat, Aotrou, e teu da soñj din ha sed aze ar c'heloù a rin da c'houzout da gement hini ar va hent, ha mar karit e stagin raktal gant ar gefridi-se.

EGISTES. - Mat tre ! Met da gentañ ac'h eus un tammig labour d' ober. (En ur ziskouez dezhañ ar gambr teñval.) Sav ar stign melen se... Kae e-barzh !...

AR PRIZONIAD. - D' an eur-mañ noz, Aotrou ?... E kambr ar roue ?

EGISTES. - Arsa, ken abred ac'h eus ankounac'haet emañ ar roue war vor pell-pell ac'han ?

AR PRIZONIAD. - Allas, ya, mont a ran, pa lavaran, war goshaat.

(Sevel a ra ar stign ; ur gammed en deus graet er gambr ha kerkent e

souz, liv ar strafuilh warnañ.)

EGISTES. - Petra ' c'hoarvez ganit, genaoueg ?... Daoust ha mut e vefes ?

AR PRIZONIAD: - Nann da, Aotrou, met dall e teuan da vezañ bewech mar bez ret.

314

EGISTES. - Ac'hanta, an dra... a zo aze...

AR PRIZONIAD. - ...An dra n' am eus ket gwelet ?

EGISTES. - Ya, ret eo en em zizober diouzh an dra-se en noz-mañ, hep dale. Pak anezhi ar gwellañ m' helli gant pallennoù, tap ivez ar stign-mañ ha va mantell ruz. Diwall da ruzañ da dreid er gwad, ha dreist-holl diwall da lugudenniñ... Goude ma vo sammet an dra-se er c'harr e raimp hon daou ur valeadenn betek er mor. (Mont a ra ar prizoniad er gambr.) Ha te, Klitemnestra, manet out aze difiñv ha dilavar. Kilañ a rafes 'ta dirak an islonk ? Gwell e vefe ganit en em daolfen ennañ va-unan ?

KLITEMNESTRA. - Ha te a gemerfe ar gwall war da chouk, goude m' out bet broudet ganin e-pad ken pell amzer ! Ya, a c'hrad vat am bije gwechall klevet e oa manet Agamemnon war an dachenn-vrezel e-keit ma lugerne e vrud en hec'h uhelañ. Tonket e oa da vervel er gêr, met piv nemedon en deus aozet ar seurt marv evitañ ? Piv a-hed an noz pa ne gouske ket, ha zoken piv dre e gousk a vale hag a vandrouilhe dibaouez en he spered ar gwellañ stumm d' e voureviañ ? Da vrec'h en deus skoet, met ar penn, ar galon a zo bet en gwirionez tad ha mamm ar muntr a zo amañ dirazout, va re me int ! Red 'ta, Egistes, d' hon dieubiñ diouzh ar skoilh diwezhañ ha deus prim war da c'hiz. Da garout a ran ha te ' vo roue meur Argos.

EGISTES. - E-keit ma vin du-hont, e stagi gant ur c'hrogad gwall lous ha n' heller ket leuskel gant ur vatezh. Kerc'h dour, dour e-leizh ha gwalc'h da vat roudoù va labour noz. Diwall na vanfe an disterañ takenn wad na war al leur, na war ar voger. (D' ar prizoniad.) Prest out ? Tap krog en ur penn d' ar bec'h ha me a zougo egile... Ro sklerijenn dimp, Klitemnestra... Ne vin ket pell...

(Mont a ra e kambr ar roue, ha kent na gouezh ar gouel e chom Klitemnestra en he sav rak toull an nor, o sevel a-us d' he fenn ar gouloù diframmet digant Elektra.)

KLITEMNESTRA. - Nag a wad !... Nag a wad !...

AR OUEL

OBERENNOU JARL PRIEL

An Teirgwern Pembroke, romant skeudennet bras 218 pajenn 17,00 L

Va Buhez e Rusia (192 pajenn) 5,50 L

Amañ hag Ahont (290 pajenn) 8,00 L

Amañ hag Ahont (war Alfa) 12,00 L

Va Zammig Buhez a zo peurwerzhet

C'HOARIVA :

Ar Spontailh, drama 3,50 L

Ar Spontailh, (war Alfa) 4,80 L

Kleñved an Togn, pezh-c'hoari fentus 2,00 L

HOLL OBERENNOU EMBANNET GANT " AL LIAMM "

~

Kasit ho chekenn gant ho koulenn en ul lakaat 10 % ouzhpenn evit ar mizou-kas da : R. HUON, 2, Vennelle Poulbriquen, Brest

C. C. P. Rennes 1629 14

316

317

MAODEZ GLANNDOUR

"Va levrig-skeudennoù"

## **Ailil, va c'hazh rouz**

Perak am eus graet Ailil ac'hanout,  
Roue an targizhier ?  
O vezañ ma oa melen-rouz da greoñ hir,  
Liv gwenn hepken gant da jave  
Ha da bavioù maneget-kann ?  
N'eo ket souezhus bremañ  
Mar plij dit tronañ  
Er gador-vrec'h stumm impalaeriezh.

Pe gwechoù all e pucbez war lein ar ganastell  
Hag e chomez aze difiñv, o vegañ soñj uhel  
Hanter-gloz da zaoulagad alamandez,  
Da varo hir o kouezhañ skañv war da vruched,  
Prederour Koreat.

Met ar sioulder-se a guzh  
Kalon dispont ur brezelour :  
Mar kavez er-maez war da dachenn  
Un targazh gwerinel,  
Neuze diouzhtu setu tennet da gleze dir,  
Ha c'hoari mibin, ha luc'hed,  
Ha kri ha krog ha gwad  
Betek ma tec'ho kuit an tregaser.

Hag e tistroez d'ar gêr  
Reut da zivesker,  
Savet uhel kribell da lost,  
Da benn o splannañ lorc'hus war da frezenn wenn.  
Denjentil meurdezus eus amzerioù Merkeur.

318

Per DIOLIER

## **GALV AN NOZ**

Pa zistroin arre da vaezioù va soñjenn  
E kuitain an ti e stalafioù postek  
Da vare ar beuznoz e liñsel al luserin.  
Er vali deñval-hud e-kreiz gwez ar sapreg  
E skrijin a-nevez ouzh heklev va c'hammed.  
Gant, nij dall o eskell o fraoñval, ar gloued  
Tostoc'h-tostañ bepred o monedone mouest  
Am lusko me lugut davet penn an alez.  
Klevout a rin endev kant kammed kent degouezh'  
Gwigour ar gloued kozh a zigorin goude.  
War ar wenodenn war ' en em goll er radenn  
Ar plantennoù uhel a grogo d' am luziañ  
O divrec'h o spegañ pegus ouzh va c'herc'henn  
Hag o kinnig ganas va zreid da vat liammañ.  
Pa vennin dedec'hout, ponner er penngennoù

Graet gant rod ar c'hirri e strebotin en-dro.  
Pa vezin war an hent ur c'hard-lev goude  
E tassono ar mein gant taolioù va c'herzhed  
Hag e c'hoarzhin uhel da spontañ an teuzioù  
Kuzhet o strolladoù a-dreñv d'ar brouskoadoù  
Ken e savo sklasus e-kreiz an noz teñval  
Garm ur c'hi o yudal etrezek Koadkoñval.  
Krenañ a rin neuze o santout gant anken  
Betek mel va eskern yenijenn ar vrumenn.  
Kregiñ ' rin da redek 'kreiz an deñvalijenn  
Va spont gant divhar hir o tont a-drek d' am c'hein

319

YEUN AR GOW

### ***N'eo ket ar marv a zeu da vab den...***

N'eo ket ar marv a zeu da vab-den,  
Davet an Ankou hemañ eo a ya.  
E-doug e vuhez, pep devezh n'eo ken  
Met ur gammed hir war an hent a ra.

War an hent, siouazh ! a zo berr e hed,  
Da yaouank pe gozh, da vaouez pe waz.  
Tra ma kred an holl e vo hir o red  
Hep soñjal ervat e disoc'h arc'hoazh.

Un delienn bemdez, e-keit ha ma pad  
E tro amzer e levrig pep den.  
Anezho n' ouzer na niver na stad  
Nemet troet holl ha pa ne chom ken.

Ar vuhez a denn d' ul lestr ouzh an eor,  
Pa saver hemañ e kemer an hent  
Ha deizioù pep den, heñvel ouzh ul levr  
Peurlennet a-bezh, a echu kerkent.

Nemet ur gudenn, rouestlet hag a-fuilh,  
Eo da zeizioù, den, da zibunañ klok  
War ganell ken herr da vuhez a ruilh  
Evel ar rod-karr na gav skoilh na stok.

En dornell a dro, hogen, pa vi peg,  
Nep fazi na ra pe, brein a-hend-all  
E torrfe a-stroñs, dre nerzh pe dre heg,  
An neudenn ken bresk a yafe da fall.

320

Ma rafes seurt gwall gant skiant, va c'hred,  
E ve damant bras forañ e gaou  
Neudennig ken bresk ar gudenn 'zo bet,  
Un deiz, roet dit gant Mestr an holl draoù.

Ha Doue a oar lakaat da bep hent,  
Da gement kudenn hirder ha ment reizh,  
A vuzul hiziv, 'vel ma reas kent,  
Padelezh an holl, pinvidik pe geizh.

8 Mat 1962

## **Mintin Eured**

N' eus nemet koantiz  
Koantiz heol, menez ha feunteun  
Enni  
C'hwez-vat  
C'hwez bleuñv, c'hwez brug glizhet,  
C'hwez geot tomm ha glebiet,  
Koantiz, splannder,  
Nemet splannder,  
Nemet koantiz  
Enni.

Gwenn eo, gwenn-kann  
He daoulagad glebiet-mik  
Divjod ruz-flamm  
He muzelloù ruz-gwad  
Ruz evel glaou o teviñ  
Tomm evel kalon an ifern.

N' eus tra nemeti war ar bed  
N' eus splannder ken splann hag hec'h hini  
Va c'halon a verv  
Sioul ennon  
N' on ken nemet ur sell c'hoantus  
E kreiz ur sav-heol peoc'hus.

## DIAZEZOÙ AR SEVEL GWERZIOU

(DIBENN)

PENAOE E VEZ ROET NEUZ D' UR VARZHONEG

35. - DOARE LEDAN HA DOARE STRIZH. - Betek-hen hon eus gwelet tro-ha-tro an doare da sevel ar gwerzennoù hini ha hini hag an doare d' o strollañ evit sevel pozioù. Bremañ emamp o vont da welout penaos e vez graet ganto e-kerz ur varzhoneg a-bezh.

Bez ' ez eus evit-se heñchoù ledan hag heñchoù strizh. An doare ledanañ eo moarvat lakaet un aridennad gwerzennoù da zont an eil goude eben. Evel-se eo en deus graet Roparz Hemon en e varzhonegoù bras evel *Pirc'hirin ar Mor, Lazhadenn Unvab Aife* h.a. Aliesoc'h e vez rannet an heuliad e koubladoù (ar pep brasañ eus ar gwerzioù pobl, e triadennoù (gwerzioù pobl 'zo, *Kanaouenn eured Mab an Argoad E. Vertou...*), pevaradennoù (*Melezour ar Marv, Buhez Sant Gwenole...* ha kalz barzhonegoù nevesoc'h), c'hwec'hadennoù (an darn vrasañ eus skridoù ar c'hrenn-vrezhoneg).

Bez e c'heller, avat, sevel barzhonegoù hervez reolennoù kalz strishoc'h. N' eo ket hepken niver ar mouezhiadennoù er werzenn a vez divizet, an doare da strollañ ar gweriennoù kenetrezo, hogen ivez niver gwerzennoù ar varzhoneg. An hini anavezetañ eus ar barzhonegoù savet evel-se eo ar sonedenn. N' eus nemet ar stumm-se a ve bet graet gantañ ledan e brezhoneg ; e gwerzaouriezh Kembre, avat, e kaver meur a hini all.

323

36. - RUMMADOU BARZHONEGOU. - Aner e ve moarvat klask rannañ ar varzhoniezh vrezhonek hervez reolennoù ar C'hresianed pe al Latined. Amañ evel e pep lec'h e kaver danevelloù-meur (*Argad Aber Ac'h Goulc'hen Morvan* a zo ur skouer), barzhoniezh-displegañ (*Levr al Labourer* Gwilhom eo an hini anavezetañ), misterioù ha dramaoù gwerzennet (*Buhez Santez Nonn, Buhez Santez Barba, Burzhud bras Jezuz*, h.a., e krennvrezhoneg ; *Buhez Louis Eunius, Santez Trifina hag ar Roue Arzur*, e-touez ar re dastumet diwezhatoc'h e-touez ar bobl : *Gurvan Tangi Malmanche*, h.a.). Un doare barzhoniezh en deus graet berzh souezhus e-pad kant vloaz da nebeutañ eo ar vojenn savet hervez skouer den meur ar vojenn, ar Gall La Fontaine (Rikou, Gwesbriant, Paotr Treouere, h.a.), dedennusoc'h eo kalz o oberoù e-keñver ar yezh eget e keñver an dalvoudegezh lennegel pe werzoniel.

Daou zoare barzhoniezh pobl a gaver avat hag a zo a-bouez o menegiñ : ar werz hag ar son. An dastumad kaerañ a werzioù hag a sonioù hon eus eo " Barzaz Breiz " brudet Kervarker ; F. an Uhel en deus lakaet embann ur pikol dastumad " Gwerzioù ha Sonioù Breizh-Izel ", dastumadoù all a zo bet graet en 19vet kantved gant Penvern, G. Milin (nevez embannet e " Gwerin "), an itron de Saint Prix, h.a., hag en 20vet kantved eo bet embannet " Gwerzennoù ha sonennoù Bro-Wened " Loeiz Herriaou. Pouezusoc'h e vez alies ar re ziwedhañ-mañ en abeg d' an tonioù notennet gant M. Duhamel, eget e-keñver ar c'homzoù.

Ar werz a zo danevell un darvoud truezus bennak. Au dud a vez lakaet peurvuiañ da gomz, e-doare ma vez ur seurt drama berr. Ar stumm gwerzaouiñ a zo an heuliad koubladoù. Hed ar werzenn a c'hell kemman, hogen an hini a gaver a-bell an aliesañ eo an hini eizh mouezhiad. Alies a-walc'h ivez e vez kavet re 13 ha 12 mouezhiadenn, ar re 9 ha 15 a zo kalz rouesoc'h.

Diwar an dastumadoù bet graet, ha dreist-holl diwar hini an Uhel, e c'heller gwelout e heulie ar werz reolennoù ' zo, e veze savet hervez ur patrom,



komzoù ' zo a zistro dalc'hmat, un doare ' zo da zigeriñ, da zegas ar goulennou, h.a.

Ar son a zo enni danvez plijus pe damblijus, o tennañ peurvuiañ d' ar garantez. E-keñver ar gwerzaouañ e tenn ar sonioù d' ar gwerzioù, nemet e vez enno alies-tre gerioù ha na vezont ket kontet e stumm ar werzenn pe ar poz hag a dalvez da ziskan.

Bez' ez eus c'hoazh un nebeut kanaouennoù ha ne dint ket eus rummad ar gwerzioù nag ar sonioù : kanaouennoù bugale pe draoù fentus a bep seurt. Tost dezho emañ ivez ar c'hanennoù sakr pe gantikoù hag a vez kanet kalz anezho war don gwerzioù.

324

E-touez ar werzaouriezh-pobl e ranker menegiñ ivez ar rimadelloù-bugale, krennlavarioù hag ivez road divinadennoù a zo. Barzhoniezh gwirion a zo enno alies.

37. - AR SONEDENN. - N' eus ket bet a vuhez lennegel kreñv a-walc'h e Breizh evit ma vije diwanet stummoù resis a varzhonegoù. Unan a zo bet implijet alies a-walc'h koulskoude eo hini ar sonedenn. Ur pezh gwerzennet a bevarzek gwerzenn eo ar sonedenn, rannet etre pevar foz, an daou gentañ a beder gwerzenn, an daou all enno bep a deir.

Klotennet strizh e vez peurvuiañ ar sonedenn. Peurvuiañ e vez lakaet klotennoù a-bokez en div bevaradenn gentañ hag e kenglot ar re-mañ etrezo ABBA, ABBA. Ar c'hwec'h gwerzenn all a vez enno teir c'hlotenn renket da skouer KDE, KDE pe c'hoazh KKD, EDE.

E meur a zoare e c'heller kemmañ ar sonedenn, anat eo : peder c'hlotenn a vez lakaet alies en div bevaradenn, ha div hepken e-lec'h teir en triadennoù. Lech ar c'hlotennoù a vez kemmet ivez.

Setu skouer ur sonedenn beurglok (gant kenganez ouzhpenn e pep gwerzenn).

AR ROZENN DU

En ur saonENN e kresk va rozENN du,  
Dindan un oabl teñVAL ha leizh dALbec'h,  
Gant tiez HAKR stlabezet traoñ HA KRec'h,  
Ha murioù gLEB ha ramzel a bep tu.  
Eno, n' eus c'hoarzh na c'hoari na dIdu,  
Tra nemet gloAZ, hag anken hag AZrec'h,  
Preder ar spered ha strIV an dIVrec'h,  
Ha dremmoù tUD glas evel al lUDu.  
Padal, beprED e ren en o mETou  
Ur goanAG kuzh ; e don o daoulAGad,  
un tan iskIS a bar, yen ha dISKed.  
Ur fervder siOUL, ur splannder dic'houLOù  
A sav, trec'h d' ar galON ha d' he zONkad,  
Diouzh ar rozENN, peurbad en he c'hENed.  
(R. HEMON.)

325

Setu ur skouer gant klotennoù e-kroaz er pevaradennoù ha klotennoù plaen en triadennoù.

ENEZ EUSA

E-kreiz mor brumennus an Hanternoz, kollet,  
Enez Eusa, enez an euzhusted, evel  
En ur c'havell a hun, hep arsav luskellet  
Gant grozmol ar c'hoummoù ha yud gouez an avel.

'Mesk ar reier a nij 'us dezho morvrini  
 E vev paotred hardizh, hep aon rak an arne ;  
 Ha merc'hed koant ha fur, mes leun a velkoni,  
 Ha gant broud an anken strafuilhet o ene.  
 Rak tro-dro dezhi, ar morwragez daonet  
 A vouskan hag a chalm dre selloù entanet  
 O c'halonoù da galz eus he merdeidi.  
 Hag int, un deiz pe zeiz, en em daol gant dudi  
 'N o divrec'h 'vit gellout (hervez an danevel!)  
 Tañvaat ur pennadig o c'harantez varvel.  
 (MATHALIZ.)

Pelloc'h e c'heller mont hag amañ da heul ouzhpenn kengloterezh kroaz e  
 dibenn ar werzenn, ez eus c'hoazh kengloterezh plaen etre kreiz ar gwerzennoù,  
 nemet kreiz an 11vet hag ar 14vet gwerzenn hag a gengan gant klotenn an 10vet  
 hag an 13vet,

MA 'Z AFEMP-NI...

Ma 'z afemp-ni un dEIZ, 'n ur c'hoari mil-ha-kazh,  
 Da reiñ un abeg rEIZH da wask ar goanag dall  
 A vag evit ur pAL hor bezañs gwell-ha-gwazh,  
 Ar vuhez ha ne dAL nemet e meiz un all ;  
 Ma 'z afemp-ni hon-dAOU, 'n ur selaou ouzh an dud,  
 Da santualoù 'r gAOU da walc'hiñ merk hol le,  
 Ha mont 'vel ar re ALL da glufañ en hor c'hIud  
 'Keit ha m' emañ ar GALL o waskañ war hor re ;  
 E teufemp, a dra sUR, da c'hounit stad ha brUD,  
 E vefemp anvet fUR war rolloù mestr ar vrO,  
 E klevfemp war hon trO o nijal bommoù hUD.  
 A geneil, petra C'HOAZH ? - Ne ran forzh petra 'vO  
 Pa savo heol warC'HOAZH e tor ur beure pUT :  
 Da veure un deiz yUD eo 'z ay an toaz e gO.  
 (D. K. KONGAR.)

326

AR WERZONIEZH HAG AR YEZH

38. - GWASKEDIGEZH. - E gwerzaouriezh muioc'h eget e lavar-plaen e tleer  
 teurel evezh da chom hep lakaat sonioù 'zo da gouezhañ an eil e-kichen egile.  
 Setu ur werzenn a zo bet roet alies evel displijus d' ar c'hleved :

Breizh, douAR AR Sent kozh, douAR AR VARzhed.

Evit skañvaat al lavar - hag ivez evit kaout an niver mouezhiadennoù ret -  
 e c'heller lakaat silabennoù 'zo da waskediñ; da lavarout eo ne vezont mui  
 kontet evel mouezhiadennoù distag.

Setu ur roll eus ar gerioù a wasked an aliesañ. Peurvuañ ez int  
 rannoùigoù ha gerioù didon.

a) Ar ger-mell strizh **AN, AR, AL** a ro alies-tre 'n, 'r, 'l, dreist-holl  
 war-lerc'h **a** :

Emañ 'n teñval o tiraez...  
 Emañ 'r pred da blegañ e benn.  
 Emañ 'l loar gann o sevel.

Gwech ebet avat ne zleer lakaat ar ger-mell amstrizh da waskediñ.

b) Aliesoc'h c'hoazh e steuz ar rannig-verb **A** :

Petra ' nevez ' zo e Breizh ?  
Te ' oar hoalañ meur a zen.  
Meur ' wech em eus soñjet.

Evel ma weler e talvez ivez evit an araogenn **A**.

k) Ar rannig **E** a steuz hag **EZ**, hag **EC'H** a ro 'z hag 'c'h :

Lavagnon 'z eus hiziv.  
Pa 'z int skuizh o leñvañ.  
Mouget 'vije bet, a-dra-sur

d) Ar rannig **O**, **OC'H** a steuz pe a ro 'c'h a-wechoù :

'Klevis an er 'c'hervel en noz.  
'Klask va huñvre 'maon henozh.

327

e) Ar rannoùigoù-hetiñ **RA** ha **DA**, ar stagelloù **PA** na **MA**, an araogenn **DA** a ro alies-tre : **r' d', p', m', d'** :

M' am bije gouezhet kuzhat...  
P' hor gwelint e raint deomp sin...  
Sonerezh flour d' o skouarn ha d' o c'halon.

f) Ar rannig-nac'h **NE** a ro alies **n'**, a-wechoù zoken e c'hell steuziañ a-grenn. **NEMET** a zeu da **'MET** :

N' afe d' e loch gant mai a herr.  
Pa n' vo ken trouz ebet.  
A-us d' ar vro a-bezh ' welez 'met digenvez.  
Pelec'h ? 'Di ket da leñvañ war...

Peurvuiañ, avat, e tremenor hep lakaat **NA** da waskediñ.

g) An araogenn **E** a c'hell steuziañ, er strolladoù **EN EM** hag **EN UR** dreist-holl e teu alies a-walc'h **EN** da vezañ 'n :

It d' ho neizhig ' skeud ar bod roz.  
'N o sav dirak ar Gour eus bro an dud.  
'N ur lezel war e-lerc'h e roudoù en tirienn.  
Er sioulded o 'n em astenn.

h) Ar raganvioù-gour **HE** hag **O** a c'hell steuziañ e displegadur ar verb endevout, **AM (EM)**, **AC'H (EC'H)**, **EN**, **HON**, **HOC'H** ha dont da vezañ 'm, 'c'h, 'n, 'c'h.

Dreist-penn 'm eus hen stlapet el lann.  
O sourrañ en avel, ma 'c'h eus soñj.  
Piv 'n deus kavet evidout ur goudor evel-se ?

Ar strollad **ME A**, **TE A** a c'hell, dirak ur ger o kregiñ gant **a** dont da vezañ **m' t'**, ivez dirak **hen**, **her**.

M' her goar (a c'hellje bezañ me 'r goar)  
Gantañ m' anave al lec'hioù sioul ha kuñv.

ch) An araogennoù **GANT** hag **EUS** a c'hell a-wechoù gwaskediñ e **g'** hag 's :

Mont g' an hent bras.

c'h) An araogennoù kevrennek o kregiñ gant **A** pe **E** a steuz alies an darn-se :

Stivelloù fresk o ouelañ 'kreiz ul liorz.
'Us da goadoù izel, inizi an aber.
'Hed ar c'hoadoù war ziribin.
Ha sed ez out un estren 'barzh da vro.
'Lec'h peragiñ dalc'hmat ha dizeriañ er c'heuz.

328

Er rummad-se emañ ar geriennoù skrivet koulskoude hep tired evel AVAT, ADAL, EVIT, EVEL, EGET, ETRE, ETREZEK, ETA, h.a...

'Dal ma weljont ar Furlukin.
Te 'vat, bev ! setu kemenn hon anaon.
N' eo ket kan ha koroll 'vel gwechall.

i) Er stagell NEMET e steuz alies an ne :

Netra 'met traezh ha dour ha bili ruz.
A-us d' ar vro a-bezh , welez 'met digenvez.

y) EME hag e stummoù displeget a zeu da vezañ 'me, 'mezon, 'mezout, h.a. :

Gralon, Gralon, 'me Wenole.

j) Er stummoù lec'hiañ EMAN, h.a., EMEDI, EMEDON, h.a., e kouezh alies an e kentañ :

Met 'vel 'mañ 'n amzer, hen lamer...
'Klask va huñvre 'maon henoz.
'Medi tout an dud o vale.

l) Xement-se a c'hell c'hoarvezout evit ar gerioù divsilabennek toniet war ar silabenn diwezhañ : amann, ac'hann, h.a.

m) Hag ivez evit displegadur an araogenn A : ac'hanon, ac'hanout, anezhañ, h.a., ac'halenn, ac'halese, h.a., a c'hell dont da reiñ : 'c'hanon, 'c'hanout, h.a., 'c'halenn, 'c'halese, h.a.

n) Dibenn an anv-verb a c'hell kouezhañ gwechoù 'zo :

Ar Vretoned a welis o lemm' o c'hlavier wall.

329

39. - STRISHIDIGEZH, STUMMOU RANNYEZH. - Pa skrivan

Un den jentil ' oa brav a-walc'h,
'Met ' oa e dreid 'vel treid ur marc'h.

e skrivan en ur waskediñ mouezhiadennoù 'zo, hogen en un doare reizh hervez reolennoù ar brezhoneg lennegel. Ma skrivan avat :

Seizh taol kontell de'i 'm eus roet.

e lakaan ouzhpenn ur stumm rannyezhele (de'i) o tont diwar ur strishadur (ar z o kouezhañ a ra ma n' eus mui nemet ur vouezhiadenn, e-lec'h div e dezhi).

a) Diazez ar strishadur a vez kavet en degouezh ma teu div vouezhiadenn, unan voull hag unan serr, da stekiñ an eil ouzh eben : lakaet, pellaat, graet, abardaez, kerc'heiz, h.a., na vez kontet enno ar strolladoù ae, aa, ei nemet evit ur vouezhiadenn, tra ma 'z eus div hervez orin ar ger.

b) Un doare strishadur eo ivez pa vez kellet ur vouezhiadenn e diabarzh ur ger hir : an'vezout evit anavezout.

k) Diwar strishadur e vez kollet, gwechoù 'vez, ur vouezhiadenn ouzh

dibenn ur ger. Pa vez hir ar vogalenn er silabenn a-raok e teu neuze da vezañ berr. Setu un darn eus ar gerioù-se :

amanenn a ro amann  
ac'hanen a ro ac'hann  
goulenn a ro goull  
erer a ro er  
gwalenn a ro gwall  
milin a ro mill  
gwenan a ro gwenn  
h.a.

Stummoù rannyezhel int ha ne c'hoarvez kement-se nemet pa vez didon ar silabenn a steuz, hag atav en enep e kaver : amanennañ, gwalennoù, miliner, h.a.

d) Unan eus ar stummoù rannyezhel a gaver ar muiañ eo steuzidigezh ar **Z** blot, a c'hoarvez tost da vat en trifarzh a Vreizh-Izel. Diouzh ret e vo gellet eta lakaat gerioù evel menez, nevez, ruz, bleiz da glotañ gant gerioù en **e, u** hag **ei**.

D' an hevelep reolenn ( daoust d' ar skritur) e tenn ar stummoù **de'i, d'añ, anê** evit **dezhi, dezhañ, anezhe**, h.a.

e) Ar **V** a gouezh ivez alies a-walc'h. Ac'hano ar stummoù evel **an'** evit **anv** (en an' Doue), **nê** evit **nevez** (**Z** o koezhañ ivez), **laret** evit **lavaret** ha dreist-holl e displegatur ar verb endevout : en dez, en doa, en deze, en do, h.a., e-lec'h en devez, en devoa, en deveze, en devo, h.a.

330

40. - Ar c'hevreañ o vezañ hebleg-tre e brezhoneg, ne vo ket da ober gwall alies gant ur gwir lec'hdilec'hiañ. A-wechoù koulskoude e c'hell bezañ plijus kemmañ trumm stumm ur frazenn. Setu ur skouer :

Eno, koumoul gwenn a-founn,  
Mor o kanañ eno e hirvoudoù.  
(D. K. KONGAa.)

EVIT KLOZAÑ

E-pad tost da dri c'hant vloaz eo bet ar gwerzaouañ brezhonek un adskeud eus an hini gallek. War-dro fin an 19vet kantved o devoa santet tud 'zo evel Erwan Vertou herezh an amzer dremenet dre levezon ar c'hembraeg dreist-holl, hogen re greñv e oa an aer evit tud gwan Vreizh-Izel. Ha goude ar Brezel Bras kentañ, ur wech savet Gwalarn gant Roparz Hemon, eo e teuas fiñv e-touez hor barzhed hag hor gwerzaouerien. Ar bloavezhioù etre an daou vrezel a zo bet dreist pep tra un amzer a enklask ; kentañ tra a reas ar varzhed peurvuiañ eo teuler kuit ar frammoù diamzeret evit en em zieubiñ ha tizhout a se ar vouedenn ; ul lusk eo bet el lennegezh hollvedel, tremen hep reolenn strizh ebet hag heuliañ hepken plijadur ar menoz hag ar skouarn. Kentelius evit displegañ abegoù an ober-se e oa pennad Roparz Hemon, e niverenn 12 Gwalarn (goañv 1927-1928).

Hogen tamm-ha-tamm e teuas c'hoant d' hor barzhed adkavout reolennoù a lakafe kened an diavaez da glotañ ouzh kened an diabarzh. Hag ouzh pennad Roparz Hemon meneget uheloc'h ez eo plijus keñveriañ ur pennad all gantañ e niverenn 126 Gwalarn (miz Mae 1939) : " Gwerzaouriezh ". Ha plijus eo heuliañ strivad hor barzhed davit ur werzenn kempouezet mat. Mar deo chomet Jakez Riou ha Youenn, Drezen er-maez a bep stumm strizh, ma n' en deus taolet Abeozen kalz evezh nemet ouzh ar c'hehed ez eo bet Kenan Kongar, ha dreist-holl Maodez Glanndour, dedennet gant meur a zoare gwerzaouañ, ha graet o deus meur a amprou.

331

N' eus avat nemet unan, hor barzh brasañ, gwir eo, Roparz Hemon, en devije heuliet strizh un hent. E varzhonegoù brasañ : *Barzhoneg evit kreiz ar Bloaz, Listri Noz, Pirc'hirin ar Mor, Al Lestr, Dour ar C'halvar, Lazhadenn unvab Aife, Gwarizi vras Emer* - a gaver enno kehed ha kellusk pervezh ha gant an div oberenn-mañ en deus boulc'het da vat hent ar c'hengan, hent brezhoneg gwechall. O klozañ ar pennad meneget eus 1939 e skrive Roparz Hemon kement-mañ : « Va c'hredenn start eo e teuo er bloavezhioù da zont ar glotenn-diabarzh da vezañ anavezet adarre evel sichenn ar werzenn. Diouganañ a ran e welimp, ac'hann da ziwezh ar c'hantved, hon holl varzhed a-nebeudoù o tilezel an hent ledan, ha zoken an hent damstrizh, da gemer an hent strizh pe, ma kavit gwelloc'h, an hent broadel ».

Pemp bloaz warn-ugent a zo tremenet abaoe. N' eo ket bet eilpennet hor barzhoniezh abaoe, kaeraet ha kresket eo bet ha dreist-holl gant ar vistri a oa d' ar mare-se - Maodez Glanndour ha dreist-holl Roparz Hemon. Hemañ en deus lakaet ac'hanomp da ober anaoudegezh - war zigarez lakaat ac'hanomp da anavezout barzhoniezh ar reter - gant bravigoù priziüs-meurbet Omar C'hayyam kinklet gant stern peurreizh brezhoneg ar Grennamzer. Ha goude bezañ lennet e werzennoù el " Liamm " ne vo den hep anzav pegen espar e teu gantañ ar gwerzennoù o kenganañ strizh. Adlennit, da skouer :

Dre ar vein sec'h, 'kreiz ar gouelec'h ec'hon,  
Geot a ziwan, ha man 'tal an andon.  
Perak nepred ne ve kresket eta  
Ken dister dra e gouelec'h va c'halon ?  
Gwel ez kichen ar Rozenn, tremeniad,  
Hag a zispak, dirak da zaoulagad  
He c'hened fresk ha bresk, hag e teski  
Bout evelti difrom, hag hi dibad.

Krediñ a ran start e vo kavet dizale barzhed all da vale war e roudoù ; p' o devo ar re a c'hellomp lenn bremañ barzhonegoù awenet mat graet ganto - el " Liamm " da skouer - desket embreger an benveg-se, on sur e kavint ar gened en ur bleustriñ an hent a zo hon hini.

Salv e roje al levrig-mañ ar c'hoant da unan bennak da sevel gwerzioù kaer. A-benn pe da vare an diskuliadenn par da hini " Troellennoù glas " Maodez Glanndour e 1937 ?

332

LEVRENNADUR AR WERZAOURIEZH

1847 - Stagadenn da levr yezhadurezh " Breuriez ar Feiz ".

1850 - HERSART de la VILLEMARQUE - " Comparaison de la poésie galloise avec la poésie bretonne e Mémoires de l'Association Bretonne, II, eil lodenn, pp. 117-159.

1853 - ZEUSS - " Grammaire Celtica ", stagadenn.

1865 - HERSART de la VILLEMARQUE - " Le Grand Mystère de Jésus ". Pennad er rakskrid, pp. C-Cy.

1871 - ZEUSS-EBEL - " Grammatica Celtica ", stagadenn, 962-977.

1876 - HERSART de la VILLEMARQUE - " Poèmes bretons du Moyen Age ", pp. 162-164.  
HERSART de la VILLEMARQUE - " La Poésie bretonne sous Anne de Bretagne ".

1888 - ERNAULT (Emile) - " Le Mystère de Sainte Barbe ", pp. VI-XI.  
ERNAULT (Emile) - " Sur la rime intérieure en moyen-breton ".  
Revue Celtique, XII, pp. 228-247.

1895-96 - Revue Celtique - " Glossaire moyen-breton ", pp. VII-IX.

- 1900 - Revue Celtique - " Sur la versification du moyen-breton ", XXI, pp. 403-411.
- LOTH (Joseph) - " La Métrique du Moyen Breton ". Revue Celtique, XXI, pp. 203-235.
- LOTH (Joseph) - " La Métrique galloise ", 3 levr. En trede levr, pp. 177-198, ec'h adkaver ar pennad meneget a-us. 1912 - ERNAULT (Emile) - " L'ancien vers breton ":
- 1912 - BERTHOU (E.). - " Kevrin Barzed Breiz ". Houmañ eo ar studiadenn gentañ e brezhoneg diwar-benn ar varzhoniezh hag ar werzaouriezh.
- 1927 - KERRIEN (Jakez) - " Ha reizh eo ar werzaouriezh vreizek ? " Gwalarn, niv. 12, pp. 62-67 ; Feiz ha Breiz, 1927, p. 247 ; 1928, p. 143.
- 1927 - TALDIR - Le Consortium Breton, III, n. 18, p. 359.
- 1927 - HEMON (Roparz) - " Stumm ar Varzhoniezh ", Gwalarn, niv. 12, pp. 74-79.
- 1939 - HEMON (Roparz) - " Gwerzaouriezh ". Gwalarn, niv. 126, pp. 33-35.
- HEMON (Roparz) - " Studiadenn war ar werzaouriezh kembraek ". Gwalarn, niv. 128-129, p. 54.
- 1939 - 1939 - FLOC'H (L. ar) - Gwalarn, niv. 128-129, p. 82.
- 1941 - GLANNDOUR (Maodez) " War hentou meut ar gwerzaoua ". Sav, niv. 18, pp. 31-45.

## **Breizhiz war hent o c'hrenn- hag o henyehz**

Dornlevr Krennvrezhoneg. I. - Yezhadur - gant Goulven PENNAOD (Kis-Saded - Preder, niv. 59-61).

Eus an Henvrezhoneg d' an Nevezvrezhoneg : En ur lenn levrioù Loeiz FLEURIOT; gant Yann PLERGER (Hor Yezh, niv. 44-45).

Daou levr, disheñvel o falioù ha-disheñvel o zalvoudegezh. Kement on bet plijet gant an hini kentañ, kement on bet displijet gant an eil.

Diharaket skrid da lenn, an hini m' emañ Yann PLERGER o tismantr gerioù zo evit \*ambarañ (n' eo ket \*ampar) reoù all ne ouezer kammed pe e zoare.

Dle eo din anzav on bet souezhet gant un oberenn ma ranker klask ur bern gerioù e dibenn al levrenn, ma ranker tremen diouzh « Uhel Yezhadur » Yann Plerger ha ma ranker adsevel alies ar stumm brezhonek bremañ e-lec'h an hini plergeriek...

Uhelyezhadur a lavaran mat, an hini a dalvez d' ur skrivagner da freuzhiñ kement lezenn yezhadurel anavezet en hon yezh evit mont ha skrivañ « Her gouzomp dre hini... » (p. 7) - « E c'hoarvez ma c'hoari... » (p. 56), ha. : re hir eo moarvat skrivañ « Her gouzout a reomp » h.a. pe daoust hag emañ ar c'hembraegitiz gant Yann Plerger ? Mat e vo dezhañ neuze gouzout ez eo diforc'hek a-walc'h an div yezh evit tremen hep keñveriañ bewech hag ober diouzh ar c'hembraeg kentoc'h eget diouzh ar brezhoneg

334

Ma 'z eus dizurzh e doare-skrivañ ar brezhoneg, pe lec'h en deus Yann Plerger distoket, dre ziv wech, « harzhoù (pe daoust hag-eñ ez eo ur vi-koukou ?) - « er-ziwez » ha traoù all en doare-se. Perak skrivañ « arwarek » hag « ar men gear » - meneget o daou evit BrE. (p. 9). Ha petra zeu ar gerioù kembraek « gourivel » ha « benivel » da ober amañ ? Hag-eñ n' eo ket a-walc'h - ha berroc'h - « gourel » ha « benel ».

Ur bern notennoù am bije da reiñ da Yann Plerger. Setu amañ un nebeudig :

P. 5 : \* angal : \* ankal, kentoc'h.

P. 6 (ADAS) : Gw. erlañne (sic). Me 'c'hal a-beban e teu ar stumm-se. Da vihanañ ez eo dianav din ( W )arlene a zistager / arlan' ne / pe / arlan'ni /. Marteze e venn Yann Plerger menegiñ ar stumm /erlan'ne/ ? Met perak gwered ar rotaegezh war ar stumm-se ?

« Hevlene » zo dianav da deodyezhoù Bro-Ereg a gement a ouzon. Evit gwir, ne veizan tra !

P. 6 (A INSCUDETICAD) : nBr. \*emskuzHidigezh \*eskuzHidigezh, en arbenn eus BrE. Kuh-

P. 10 (lin. 5) : \* gouzhaviñ : R. H. Gouzaouiñ.

P. 11 (AROEDMA) : dispis e vije \* arouezva e ster « signal ». Kinniget em boa a-werz-zo arhent < BrE. /ar'(h)ènt/, kevatal da /'(h)ènsan/ \*Arouezva a vije ledanoc'h e ster, moarvat.

P. 19 (4) : Gw. ket, krennadur kehet. Menegiñ a vennan e vez graet gant /avèj'tset/ (evit ket) gant ur ster peuzhañval ouzh « evit netra ». Tro-lavar all « netra ha ket ha netra ». O keñveriañ gant « mont da get » - « kas da get



», e kred din hon eus bep tro ar ger « ket » a gaver e «n'eo ket ».

P. 22 : (COULO(n)COU) : nBr \*keolong, eme Yann Plerger, me 'gav din e vije kentoc'h \* keoloue, evel mong- > moue, spong- > spoue...

P. 24 : (DEHINT) « beaj » - kv. BrE. « henterion » (beajerion). Evit ar verb avat e reer gant / boja'zenn /.

P. 32 : (GAL ha GALEG) « a skrivomp gant 2 l ». Gant gwir abeg, Yann Plerger, e keñver ar yezh a-vremañ. Em zeodyezh, e tistager / ga'lèG / ha n' eo ket / ga:lèG / evel / ba:l / . Ur meneg all « monet d' ar vro c'hall » / mu'nè d ar vru gal/ a dalv monet d'ur vro estren (Br. Alrae).

P. 38 : ( HAN-) : anez < hBr. \* a-nit. Disheñvel e vije BrE. anesoc'h ?

P. 48 : PETRUSASONT : brBr. \* petruzañ : kentoc'h \* peruzañ (?)

335

GRAMADEG :

(p. 39) : Gw. En-Inis-Er-Vanach. Da gentañ, perak un hevelep treuzskrivadur : gwell e vije bet /an i/niz er me'nax/ ? D' an eil, perak « ar Vanach » ? Daoust hag-eñ e vije gwregel ar venec'h evit Y. Plerger ? D' an trede n' ouzon doare man en deus an oberour rozellet ar stumm-se. Ar stumm hBr. anavezet zo « Inis-Manac » ( Enez-Vanac'h e brBr., gouez din).

(p. 59) : Adarre treuzskrivadurioù ne aroueziont mann ez-skiantel. Penaos distagañ **leah** ha **keah** : « rin kevrinel hag arrinel ». BrE. en deus, a gement a ouzon, / lex / - / kex / ha / ljax / - / kjax/. Evel-mañ e tistagañ a-viskoazh. Keñveriañ moarvat evit BrE. gant distagadur amanenn e kostez kêr Wened / amu'njann / ha pemp / pjènmP / : an « iotaegezh » eo moarvat e pep degouezh.

(p. 77) : « A-wechioù e kaver an daou stumm a-gevret : Kiberoen/Kiberen... » « Kiberoen » zo hBr., dilez ! ha diarver hiziv an deiz. Ha « Kiberen » da vihanañ evel ma skriv Yann Plerger, n' eus ket anezhañ e BrE. Rankout a reer lavarout e tistager / tsibi'renn / e Keberen, ha / tsiba'renn / e lec'h all - nBr. KEBEREN.

(p. 287) « Adstummadur Gw. « kénévé » eus « ken-na-ve »... Biskoazh kemend-all ! BrE. / kiena've / - / kiana've / hogen kammed / keneve / , pezh zo diwenedek a-grenn.

D' ar echuiñ e lavarinn, n' eus ket traoù fall hepken e levr Plerger : mennozioù mat zo ivez. Hogen ret-mat eo d' al lenner bezañ war e ziwall a-hed al levr.

336

Levr PENNAOD en eskemm em eus bourret ouzh e lenn.

Kerse eo ganin - ha moarvat gant an holl re o deus bet heuliet kentelioù Brk. SADED warlene - ne vije ket bet embannet ur yezhadur krBr. kent hor bout deraouet plidiñ gant hor c'hrennyezh. Bez' e c'hello ac'hoel ar re a studio ar Brezhoneg-Krenn en dazoned, tennañ o mad eus levr Goulven Pennaod.

Pa weler ez a 130 ledeneb da ober lodenn gentañ an dornlevr (Yezhadur) e c'haller krediñ gant gwir abeg ez eo al levr klokañ bet gouestlet d'ar c'hrennvrezhoneg.

Evit daou abeg, a gredan, e oa mat kaout hevelep levr en hon yezh : da gentañ, evel reizh, evit studial ar yezh krenn ; d' an eil evit anaout gwelloc'h ar yezh a-vremañ. Hag ar studierion o devo etre o daouarn ul levr skriverzet ervat (meuliñ a ranker an hini he deus graet ar stensiloù), urzhiet mat (nemet e vankfe marteze taolenoù e dibenn al levr), leun a skouerennoù evit aesaat ha skoazellañ (n' eus ket re anezhe, rak diuzet mat ez int hag ouzhpenn-se re nebeut e oa anavezet ar krBr. Betek-hen).

Laouen e c'heller bezañ ivez eus ar skrivadurezh skoueriekaet a aesa d' al lenn hep koll talvoudegezh an distagañ (nemet, evel ma lavar Pennaod e unan, e vije bet gwell skrivañ « anezañ » h.a., evel « kouezañ »...). Mat e vo neoazh d' ar studier distreiñ d' ar skridoù-orin, daoust dezhe bezañ diaes da lenn a-wechioù (mat e vije bet moarvat sevel ur pennad a-zivout doare(où)-skrivañ ar grennyezh, o venegiñ talvoudegezh ar skrivadoù...).

Keuziañ a ran n' en dije ket Pennaod spizet gwelloc'h ar mad a c'heller tennañ diouzh e labour e keñver ar yezh a-vremañ. Alies e teu dindan e bluenn ar gerioù « evel er yezh a-vremañ ». Perak, da 'm meno, skrivañ, da skouer, p. 20, § 50 : « Disheñvel e veze e krBr. arver ar raganvioù-gour evel renadennoù ar verb ». Ne deo disheñvel nemet dre ma z eo bet war baoureat ha war drefoetaat hor yezh abaoe ar Grennamzer. An teodyezhoù - hag a-wechioù ar yezh lennegel - a ro ur skouer fall er c'heñver-mañ. N' eus nemet gwelout an arver eus « anezhañ » er gwellañ oberoù skrivet e Br. (da sk. « me 'm eus gwelet anezhañ » a vije meizet e BrE. evel « un tamm, ul lod anezhañ »). Reishoc'h hag hengounel ez eo arver ar raganvioù-gour evel renadennoù ar verb e BrE.

337

Pismigañ a c'hallfed evel-reizh, evel kement tra skrivet e Br. Burutellet e vezo Yezh uhel Goulven Pennaod, ar gerioù dioutañ e unan. Evit echuiñ e lavarín hepken : « n' omp ken » en amzer ma oamp marmouzion ». Ha Pennaod - e-ser kelennerion arall SADED - a ziskouez an hent d' ur yezh uhel a c'hello keveziñ gant yezhoù arall ar bed. Me ' gav din ez eo an \* diouloc'h gwellañ a c'hellan ober da C'houlven Pennaod evit e zornlevr Krennvrezhoneg.

NOTENN WAR TREUZSKRIVADUR AR SONIADOU.

Dre ziuver a arouezioù soniadoniel e ti ar mouler ez eus bet pellaet diouzh doare ober an IPA war ar c'hrefen-mañ :

- /s/ = ch brezhonek ; / z J = j brezhonek ; .
- un n bihan, a-us d' al linenn a verk friadur ar sonenn ;
- / oe / a verk un eu brezhonek kensonennel ;
- / è / a verk un e digor ;
- dalc'hit soñj e talv /j / kement ha y brezhonek, ha /a'/ eleze un e eilpennet, ar sonnenn greiz anavezet a-vechioù evel « e mut » ar galleg ; an arouez / x / a dalv c'h kreñv ar brezhoneg.

DISPLEGADURIOU.

- ambarañ : sevel.
- gwered ar rotaegezh en deus c'hoariet, da skouer, war ar ger dezvezh, deut da vexañ dervezh.
- BrE : gwenedeg.
- BrK : brezhoneg-krenn.
- arver : implij.

## AL LEVRIOU

A. HEUSAFF

" SELF-GOVERNMENT FOR THE CELTIC COUNTRIES "

Dindan an titl-se ez eo deut er-maez levr 1964-65 ar C'HEVRE KELTIEK. E saozneg eo, ha 96 pajenn ennañ. Da heul raklavar Gwynfor Evans emañ displeget perak o deus Breizh, Kembre ha Bro-Skos ar gwir ha dreist-holl perak o deus ezhomm d' en em c'houarn. Pelloc'h e tiskouezer petra he deus graet Iwerzhon he 26 Kontelezh a-drugarez da 40 vloaz a frankiz. Pennadoù berr a denn da c'houlennoù Kernev-Veur ha Manav hag evit klozañ ez eus un droidigezh eus ur brezegenn a reas ar c'helenner P. Naert diwar-benn talvoudegezh ar yezhoù bihan, e skol-veur Turku-Abo.

Gwynfor Evans ne nac'h ket ez eo ivez dre o gwall o-unan ma chom an darn vrasañ eus ar Gelted bazhyevet. Digarez mat o deus evelato pa 'z eo ken tost ha ken galloudus ar stadoù a zo mistri warno. Ar galloud o deus ar re-mañ d' o stummañ diouzh o mennadoù, d' o dedennañ en o servij ha d' o zreiñ a-enep d' ar vrogarourien. Ar C'hallaoued hag ar Saozon a lavar eveljust ez eo evit hor mad e talc'hont hor broioù dindan o beli. Nevez ' zo o deus ranket anzav na oa ket ken spletus-se o gwardoniezh hag e reont van da rannvroelaat o mererezh. Reiñ an emell deomp eus hon aferioù ne fell ket dezho avat.

An displegatur a gaver el levr-mañ eus breudennoù Breizh, Kembre ha Bro-Skos zo embannet ivez e stumm ul levrig distag hag a vo kaset da Sekretour Bras ar Broadoù Unanet, da zileuriadurioù ar stadoù hag a zo izili eus an Aozadur-se ha da gelaouerien ar c'hazetennoù bras hag ar servijoù skingomz ha pellwel.

\*

Ar skrid breizhat, dezhañ 31 bajenn, zo diazezet war destennoù Aozadur ar Broadoù Unanet. Dezrevellet hon eus en derou ar re anezho a denn d' hor c'hudenn ; pa oa re hir an arroudoù, hon eus o berraet en ur lakaat anat avat ez eo gwareziñ ar c'henelioù diemren (minorities) unan eus kefridioù pennañ A. B. U.

339

Aozadur ar Broadoù Unanet n' en deus ket bremañ ar galloud nag ar benvegadur lezennel rekis evit hon harpañ. Perak 'ta kas dezho hor c'hounskrid ? An Aozadur a voe krouet en abeg ma oa ezhomm da reoliañ an darempredoù etrevroadel (« etrestadel » a vefe reishoc'h). Nammek eo, met ma teu da vezañ difraeüs, ma sav bec'h a-walc'h, e vo dav pe ret e wellaat. Deomp da zisklêriañ hor breud ha tennañ evezh par ma c'hellomp war an testennoù-se hag a bled d' ar c'henelioù diemren. Eno e veneger an ezhomm da wareziñ ar seurt kenelioù ha da ziwall na ve gwallziforc'het rummadoù tud ' zo - lakaat a reer an div gefridi-se e-touez kargoù pouezusañ an Aozadur zoken. Ma vern da A. B. U. chom en e blom hag ober berzh adarre, e vo ret kemmañ meur a dra en e reizhadur. Spi hon eus e tiwano diwar an div sturienn-hont ur c'henreizhadur hag a vo muioc'h a-du ganeomp eget betek-hen. Seul vuanoc'h e tiwano ma vo anat an ezhomm da galz tud. O tisklêriañ hor c'haoz e tiskouezomp dre skouerioù, dre fedoù ha dre sifroù ez eus e kornog Europa broadoù bihan hag a zo en arvar hag en argoll zoken.

Testennoù ar Broadoù Unanet a ziforc'h etre gwir ar c'henelioù diemren da vout gwarezet ha gwir ar c'henelioù (broadoù) d' en em ren. Kalz helavaroc'h int diwar-benn ar gwir kentañ : aesoc'h e vefe moarvat lakaat ar B. U. d' e anzav en hor c'heñver. Tra ma viomp hor gwir d' en em ren - ha ma tleomp stourm evit e c'honit ni hon-unan ne vern pegen nebeut e vemp harpet ha komprenet en estrenvro, e c'hellomp ober hor mad eus stummoù an Aozadur etrevroadel evel m' emaint ha keit ha ma tizhont. Galvomp ar broioù all d' hor skoazell gant ar soñj e lakay ar galv-se ar stad c'hall da laoskaat he c'hrog e Breizh ha da deurel evezh.

Efedusoc'h e vefe ar c'hounskrid ma c'hoarvezfe birvilh ha trouz e Breizh, evel ma voe a-daoladoù e-doug ar 5 vloaz tremenet, dres d' ar mare ma vo skignet. N' eo ket en hor galloud atizad hevelep birvilh. Fall a-walc'h eo aet an traoù e Breizh avat evit krediñ ne ray ar c'hounskrid gaou ebet ouzh ar re a zo e-tailh da brientiñ displegadegoù, rak evito da vezañ graet muioc'h eget ar vroadelourion da dennañ evezh an holl war stuz Breizh, n' o deus ket graet muioc'h a verzh, ha ne gav ket deomp e raint keit ha ma chomint gant o goulennoù er stern gall.

\*

Kudenn Vreizh a ro moarvat gwelloc'h abeg eget re Gembre ha Bro-Skos da c'houlenñ skoazell ar broioù all. Da vihanañ e hañval bezañ bet aesoc'h aozañ hor breudenn hervez testennoù ar Broadoù Unanet. Dezrevellet hon eus e penn kentañ hor skrid kinnigoù a voe graet gant strolladoù-studi ar B. U. hag a c'houlenne ouzh an Aozadur anavezout gwir ar c'henelioù diemren da vout gwarezet gant ar broioù all. Disklêriet eo eno e vefe dleet studiañ pervezh hag a-zevri kudennoù ar broioù bihan-se e sell da ober diarbennoù efedus d' o gwareziñ ; dleet reiñ tu da strolladoù - koulz ha d' ar gouarnamantoù - da sevel klemm pa vez gwallet gwirioù an dud ha dleet dastum disklêriadur klok ha resis diwar-benn ar pezh a vez graet gant ar stadoù evit diwall ar c'henelioù bihan dindan o beli diouzh gwallziforc'h. En unan eus an testennoù ez eo spisaet peseurt doareoù a dlefe kaout ar c'henelioù da vout gwarezet ha peseurt skoazelloù (aesterioù) a dlefe bout pourchaset dezho gant ar gouarnamantoù : spisaat a ra ar meizad « kenel diemren ».

340

Ar vreadenn vreizhat a bleustr roudenn an testennoù-se : hor broad zo ur genel eus ar seurt a zellez bout gwarezet hervez ar spisadur meneget ; o vezañ n' eus ket da c'hortoz e rofe ar stad c'hall disklêriadurioù a-zivout hor broad hag e ra ar c'hontrol eus ar pezh a vez erbedet e-sell d' he gwareziñ, e roomp-ni disklêriadurioù klok ha resis a-zivout strivadoù ar Vrezhoned war bep tachenn hag a-zivout eneberezh ha gwallegezh ar Stad-C'hall e-keñver hon ezhommoù.

An testennoù a zegaaomp zo tri seurt anezho : istorel-gwiraour-iezhel - pep remziad Vrezhoned he deus ar gwir da adsevel ar stad vreizhat ; yezhel-sevenadurel - stanket eo an hent da gement araokaat er stern gall ; arboellerezhel - goude dek vloaz a stourm hag a raktresoù hervez al lezenn c'hall ez eo anat n' eus diskoulm ebet er stern-se kennebeut.

Pobl Vreizh he deus diskouezet e oa a-du gant ar goulennoù sevenadurel koulz hag arboellerezhel. Stourm ar Vrezhoned a destenieka ur youl gevredel, c'hoant da virout o c'hevredigezh hag o disheñvelded : o broadelezh e gwirionez. Mennadurezh ar stad c'hall er c'hontrol eo kas ar vroad da get, ha dispenn ar gevredigezh vreizhat. Arabat d'ur vroad en argoll lezel pelloc'h he zonkadur etre daouarn hec'h enebourez. Kollet he deus ar stad C'hall pep gwir d' hor gouarn, ha reizh eo deomp, diwar-bouez c'hwec'h kraf kemeret e testennoù A. B. U. goulenn harp ha gwarez digant ar broioù all.

KEMBRE. - Ar vreadenn gembreat a ziskouez ez eus ur vroad eus Kembre, ur vroad en arvar avat, ezhomm dezhi en em ren evit chom bev ha kreskiñ. Berrdreset eo amañ istor Kembre : penaos e teuas ar skiant a vroadelezh da greñvaat d' ar mare end-eeun ma tisklêrie ar Saozon o youl da saoznekaat ar vro ha penaos e viras ar yezh ul lec'h pouezus er vuhez kevredigezhel. Lorbet e voe brogarourien Gembre e-pad pell amzer gant gouestladennoù ar strolladoù saoz - ur gentel evit Breizhiz : dezho da ziwall diouzh ar strolladoù gall a ra bremañ van da deurel evezh e « kudennoù » Breizh.

341

Plaid Cymru en deus graet berzh a-walc'h evit rediañ ar gouarnamant saoz da zamantiñ muioc'h da ezhommoù ar vro ha d' he damanavezout da unvezenn bolitikel hag arboellerezhel. Daoust hag ez a mat an traoù neuze ha n' o deus

ket Kembreiz abeg da glemm a-enep ar Saozon war an dachenn etrevroadel ? Dezhobout gonezet kalz war an dachenn sevenadurel ha kaout bremañ ensavadurioù dizalc'h koulz hag a-berzh-Stad ; pezh a ziskouez ez eus buhez vroadel, lec'hier \* ar galloud a chom gant ar Saozon : an arc'hanterezh, ar bruderezh, al lezennerezh. Ur rannvro a reont eus Kembre. Evit mont war-raok o deus ezhomm Kembreiz eus an emell klok avat. Kement-se a vez miret diouto. Abeg a-walc'h da sevel klemm en A. B. U.

BRO-SKOS. -- Ar vreudenn skosat zo disheñvel diouzh an div all dre ma ne ra stad ebet eus an abegoù sevenadurel. Diskouez a ra ez eo Bro-Skos diforc'h diouzh Bro-Saoz dre hec'h istor, hag ivez dre ma 'z eo he foblañs a orin keltiek dreist-holl : da c'hortoz oa eta e rafe muioc'h eget damveneg dibarded sevenadurel Bro-Skos. Padal, ne rann grik eus ar gouezeleg. Klouarder ha finesa ar bolitikerien moarvat : an dra-se hon eus e Breizh ivez. Spletusoc'h e vefe komz fraezh. Abeg zo da gaout kerse o welout reiñ kennebeut a bouez d' an elfenoù keltiek en ul levr embannet gant ar C'hevre. N' eo ket deomp koulskoude da gemenn da Skosiz petra dleont ober.

A-hend-all ez eo frammet-mat o breudadenn. Un alberz zo war o istor ha war an ensavadurioù o deus miret eus amzer o frankiz : binvioù ur vroad hep galloud. Ar renkamant a zo bremañ evit al lezennadur, ar mererezh-arc'hant, an arboellerezh, an deskadurezh hag ar bruderezh politikel a zo fall-ki : teurel a ra da saoznekaat ar vro ha da vougañ ar pezh a chom eus speredegezh dibar Bro-Skos. Skouerioù zo roet amañ a gement-se.

Pouezañ a ra kalz war gudenn ar c'henreizhadur. Dudius eo adkavout an hevelep doare-gwelout pe menoziad gant Skosiz diwar-benn beli o rouaned hag hini o Breudoù ha ma oa gant Breizhiz gwechall : tamm ebet doare-gwelout ar Saozon hag ar C'hallaoued. Peurlaeret eo bet galloud Skosiz gant Breudoù Westminster, renet int gant ur vuianiver saoz. Distrujet eo bet diazez lezennel an Unaniezh : ar gwir o deus Skosiz da adkemer o stadelezh, dre gaer pe dre heg.

IWERZHON. - Aozer ar pennad-mañ zo Ristead O Glaisne, ur protestant kar-e-vro, skrivagner e bluenn fonnus hag e venozioù kempouez. Bez' e vez pennadoù digantañ hogozik en holl gelaouennoù iwerzhonek.

Goulennet hor boa digantañ diskouez pegen spletus ez eo bet d' ar vro-mañ, d' an darn vrasañ anezhi evit lavaront mat, kaout ur gouarnamant dezhi hec'h-unan. Kement hag atizañ ar Gelted all da stourm evit o frankiz ivez.

\* liester loc'h.

342

Stad Dieub Iwerzhon a voe start dezhi diloc'hañ, ac'hubet ma voe gant ar brezel diabarzh ha rendaeloù politikel. Penaos e plegas De Valera d' ar framm a oa bet degemeret gant Feur-Emglev 1921, penaos e tilezas Iwerzhon Dieub ar framm-se tamm-ha-tamm, petra zo bet sevenet war an dachenn etrevroadel dreist-holl abaoe ma 'z eo kenezelet da Aozadur ar Broadoù Unanet, kement-se zo displeget ampart. A-drugarez d' ar atad ez eus bet graet ur bern labour war an dachenn arboellerezhel-kevredigezhel ivez, emeur bremañ o seveniñ an eil raktres da greskiñ produadur ar vro ha da uhelaat he rez-bevidigezh. An disoc'h a vo evit kalz diouzh ma troy an traoù gant arboellerezh ar broioù amezek, hini Bro-Saoz dreist-holl (dres en devezhioù-mañ emeur o prientiñ ur feur-emglev evit ur c'henvarc'had breizhveurat-iwerzhonat hag a ereo an div stad startoc'h e-keñver arc'hanterezh hag arboellerezh !).

Diaes eo lavarout pegement a vefe bet graet hep ur gouarnamant e Dulenn : e pep lec'h ez eo uhelaet ar rez-bevidigezh e-kerz an 40 vloaz tremenet. Diforc'hoù zo etre Kembre ha Bro-Skos diouzh un tu hag Iwerzhon diouzh an tu all : yac'hoc'h eo « tech » an arboellerezh amañ eget ahont, a-drugarez da veli Iwerzhoniz war o feadra ; evit ar yezh pegen gorrek bennak e vefe hec'h adsevel, kalz muioc'h a abeg a c'hoanag zo amañ eget e Bro-Skos, ha gant o benvegadur-

stad emañ ar c'hartoù etre daouarn Iwerzhoniz evit gonit war Gembreiz er bloavezhioù da zont ivez.

Pell emañ Iwerzhoniz a vezañ peursevenet o mennadurezh-stad : galloud o deus avat dre berzh o stad da vont war-raok. **Frankiz a gresk dre ma vez boaziet.**

KERNEV-VEUR. - Kerneveuriz n' hellont ket ober stad eus diazezoù lezennel nag eus ur yezh vev : en abeg da se ne vo ket kaset o skrid da Aozadur ar Broadoù Unanet. Ar pezh a rank ar vroadelourien ober da gentañ eo mirout bev ha nerzhekaat ar skiant a vroadelezh e-touez o zud. Setu ul labour hag a vez graet a-zevri gant Mebyon Kernow.

Seul uheloc'h an derez a frankiz a vo tizhet gant ar Gelted all, seul boellekoc'h e vo kavet mennadoù M. K. Ur mell eo Kernev-Veur er chadenn geltiek. Hen kompren a ra izili ar C'hevre er vro-se.

MANAV. - Broadelourien Vanav a wel ervat ez eo deut o c'henvroiz da vout digas ouzh renerezh o aferioù, daoust d' o zeulioù a emrenerezh : rak gant ar gouarnour eo e vez gouarnet an enezenn e gwirionez, hag hennezh ne vez ket anezhañ ur Manavad. Kouezhet eo Manav e stad un drevadenn. Penaos tizhout kaout frankiz wirion hep dilezel ar « Rouantelezh » ? Me ' gred ez eo gwall-eeun an diskoulm kinniget gant Ewan Kelly...

343

Prezegenn-derou ar C'helenner P. Naert hon eus embannet, dindan an titl " Yezh ha Sevenadur ", en abeg d' he zalvoudegezh evit ar c'hwec'h bro. Da herzel hon eus ouzh an impalaeregezh yezhel deskrivet gantañ ha mat e vo deomp anaout ar respont a ro d' ar goulenn hag en e c'hounez unan bennak diwar lazhañ ar yezhoù distad. Kentelius em eus kavet an evezhiadennoù diwar-benn ar Saozneg Eeun hag a vez kinniget gant darn da yezh etrevroadel an amzer-da-zont : ur benveg evit astenn doare-gwelout ha levezon ar Saozon ez eo ivez.

Ezhomm zo da zeskiñ yezhoù bras, n'eo ket unan pe ziv, eizh pe zek ne lavaran ket ! Evit ar re n' o deus ket amzer evit-se, hag an darn vrasañ eus an dud ez int, e tlefed degemer un adyezh neptu, - evel an esperanto. Amañ e klever diouzhtu stirlink ha storlok ar rakvarnoù hag e serr ar geltiegerien daer o daoulagad, o divskouarn hag o divfronell. Ret eo bezañ fin ha klouar ivez, gant aon rak ar re daer. Bez' hon eus da c'hounit koulskoude o tegemer kinnigoù P. Naert. Eñ e-unan a lavar n' eus ket difrae gant an adyezh, tra ma ranker tennañ ar yezhoù distad diouzhtu e-maez ar skoasell.

\*

Izili Skourr Breizh ar C'hevre Keltiek a resevo o skouerenn eus al levr digant ar sekretour breizhat, Charlez ar Gov, B. P. 48, Brest. D' ar mare ma skrivomp, n' eo ket sur e kendalc'ho hor c'heneil da seveniñ ar gefridi-se ha marteze e rankimp envel ur sekretour all. Degas a reomp da goun ez eo 10 lur gall ar skodenn-vloaz hag e vez kaset ul levr ha peder niverenn eus ar c'hannadig " CELTIC NEWS " en eskemm da bep ezel. Priz al levr evit ar re n' int ket izili zo 12 lur, da gas da Dr Noelle Davies, Coolagad, Greystones, Co. Wicklow en ur verkañ mat abeg ar gasadenn, hag anv ha chomlec'h ar c'haser. (Gwelout notenn izeloc'h.) Evit skignañ ar c'hounskrid meneget a-us (ennañ breudennoù Breizh, Kembre ha Bro-Skos) e karfemp kaout ar muiañ ar gwellañ chomlec'hioù tud a levezon war an dachenn etrevroadel, pe tud hag a ve dre berzh o fost pe o micher e-tailh da advrudañ ar breudennoù-se (kelaouerien gazetennoù, skingomz ha pellwell, h.a.). Kas hevelep chomlec'hioù da J. E. Jones, Melin-y-Wig, 1 Heol Esgyn, Cyncoed, Caerdydd, Kembre, pe da Sekretour-Kreiz ar C'hevre.

Notenn : Miz zo he deus bet an Dr N. Davies ul lizher arc'hant (gant un timbr gall warnañ), hep disklêriadur anv nemet « Jaquet » ha hep chomlec'h. Peditañ a reomp ar c'haser da spisaat an traoù.

Muioc'h evezh er pobloù diemren ?

Daoust hag emañ Aozadur ar Broadoù Unanet o vont da deurel muioc'h evezh er pobloù ha n' o deus ket a stad dezho o-unan ? E-pad dek devezh e-kreiz miz Mezheven, ez eus bet graet ur rummad breutadegoù - « un dishilhadeg » - e Ljubljana (Slovenia) diwar-benn gwirioù ha gwarez ar seurt pobloù. Aozet e oa gant ar Broadoù Unanet ha gouarnamant Yougoslavia a-gevret. Hervez danevell an Observer (20-6-65) e oa eno dileuridi a Vreizh-Veur, Rusia, ar Stadoù-Unanet, India ha 16 bro all. Ma oa Gallaoued, n' eo ket hañval e tougjont ur mell maen d' ar savadur ! N' eus meneg anezho.

Ar wech kentañ e oa da A. B. U. kaout ur c'hendalc'h-studi, war un diazez bedel, da vreutaat kudennoù ar c'henelioù diemren ha gwirioù an dud. Daou vennad a oa dreist-holl : da gentañ ober diarbennoù evit reiñ frankizoù-diazez d' an holl dud hep gwallziforc'h etrezo ; d' an eil, ober diarbennoù evit m' o defe ar rummadoù disheñvel dre ouenn, relijion, yezh pe vroadelezh ar gwirioù dibar hag a ra diouer dezho bremañ evit diwall o hengounioù, o spisverkoù, o c'henskiant vroadel.

Dileuriad ar Broadoù Unanet a lavaras ne oa ket bet adkemeret gant e Aozadur ar strobellad « binvioù » ha reolennoù hag a oa bet kalfichet a-raok ar brezel gant Kevre ar Broadoù. Bez' ez eus un is-strollad eus A. B. U. hag a zo karget da studiañ penaos rakdiwall ouzh gwallziforc'hoù ha gwareziñ ar pobloù diemren met n' en deus bet tu ebet da ober netra a-bouez e-sell da seveniñ an eil gefridi-man. Marteze, eme an dileuriad, ec'h atizo breutadegoù Ljubljana Aozadur ar Broadoù Unanet hag e taolo evezh en-dro er pobloù diemren.

Merket e voe ez a war rouesaat ar stadoù hag a zo unvan doareoù o foblañs, ez eo er c'hontrol lieskenel, liesyezh, liesouenn pe lieskred an darn vrasañ eus stadoù ar bed.

Pa droas an dileuridi da vreutaat gwirioù ar pobloù diemren ez eas an traoù war-raok plaenoc'h ha parfetoc'h eget e-pad breutadeg gwirioù an dud ; anat koulskoude diouzh evezhiegezh darn anezho e oa koustiansioù broadel gwiridik ha kizidik en-dro d' an daol.

Koshañ stadoù ar C'hornog o deus ivez kudennoù-kenel hag a c'houl bout diskoulmet : re ar Flamanked hag ar Walloned, Gallegerien Ganada, Svediz Finlann, Breizhiz, Euskariz hag Alamaned Su-Tirol.

A-du e oa peurvuañ an dileuridi evit ma rojed gwirioù dibar d' ar c'henelioù diemren (minorities), dreist-holl war an dachenn sevenadurel, e kement lec'h ma vezont goulennet a-zevri gant an dud.

Menoziù dishenvel a oa avat a-zivout ar seurt kempouez a dle bezañ etre al liesseurtiezh hag an ezhomm o deus ar stadoù a unanded. Er broioù war ziorren ez eur tuet da lakaat muioc'h a bouez d' an ezhomm da gaout ur yezh unanaus hag ur benveg a zarempredoù etrevroadel eget d' an emrenerezh yezhel lec'hel. E Ghana da skouer. Er broioù diorroet e kejer gant doareoù-gwelout liesneuz : er Stadoù Unanet ez eo ar pal unvanaat, e-lec'h e Kanada e virer an disheñvelderioù a ouenn hag a sevenadur. Unaniezh ar Soviedoù, eviti da vout ur stad kevreadel lieskenel, zo kreizelaet kalz muioc'h eget Yougoslavia.

Breutaet e voe ivez gwir ar c'henelioù diemren da gevrediñ an eil re gant ar re all a-dreuz d'an harzoù-stad. Rusiz ne blijas ket dezho mennadoù dileuridi Breizh-Veur, Tchekoslovakia ha Yougoslavia a-du gant ar gwir da gevrediñ evel-se war dachennoù dibolitikel. Evit Yougoslaviz, ez eo ret d' ar stadoù digeriñ o harzoù ken evit mad o c'henelioù diemren hag evit mad an darempredoù etrestadel o-unan.

Sebezet e voe ostizidi Yougoslaviz gant ar pezh o deus graet ar re-mañ evit diorren o femp broad koulz hag o nav c'henel keit-ha-keit en arboellerezh.

Slovenia a gav dezhi ez eo ur republik-skouer er c'heñver-se hag he c'hêrbenn, Ljubljana, a c'houl ec'h anavezfed anezhi evit ar gêr araokaetañ, ez danvezel hag ez sevenadurel, er rannved komunek.

Broadelouriezh en 20ret kantved

Ul levrig embannet dindan an titl-se e saozneg a gaver displeget ennañ menozioù Dr Frederick Boland, un Iwerzhonad hag a oa e-tro 1960 kadoriad Bodad Bras ar Broadoù Unanet. Un adklev a ro eus ar vrud a oa d' ar vroadelouriezh e penn kentañ an 19vet kantved, hag eus he droukvrud goude ma voe lakaet da spletiñ gant stadoù 'zo evit goulenn douaroù pobloù all ha kaout digarez da greskiñ o nerzhioù-brezel d' ur rez gwall-arvarus. Boland a daol ar garez war an Alamagn, Italia ha broioù all e-kreiz Europa, kement hag ober evel Kornogiz all. Plediñ a ra da vroadelouriezh broadoù nevez Azia hag Afrika, met kavout a ra dezhañ ez int prederiet kalz muioc'h gant distro an entrevadourien, e stumm pe stumm, eget gant ar striv da virout o spisverkoù broadel. Ar gomunourien a atiz o disfiziañs e-kenver o mistri diagent hag a glask bout degemeret ganto evel difennourien o frankiz. Moarvat ne zisfiziont ket kement diouzh ar gomunourien ha ma reont diouzh an « impalaerourien », evit ar mare. Fellout a ra dezho chom neptu ha mirout darempredoù kenspletus gant stadoù ar C'hornog. Mar deo gwir ez eo troet Sinaiz ha Rusiz da gevezata evit gwelout piv zo reizh, ar re a brezeg ar genvuhez e peoc'h pe ar re a vount d' an dispac'hoù-pobl er broioù diorroet-fall, e teuy moarvat an disfiziañs outo da greskiñ ivez. N' eus ket da grediñ e karfe an dud bet-trevadennet eskemm ur rummad renerien estren evit unan all. Merk o broadelouriezh eo o enebiezh ouzh pep aotrouniezh estren.

E reter Europa e chom ar spered broadel bev-buhezek ivez ha Rusiz ne gredont ket e voustrañ re start. Evit Kornog Europa, Boland zo laouen gant mennad gouarnamant Dulenn mont e-barzh ar C'henvarc'had ken abred ha ma plijo d' ar C'hallaoued, oc'h asantiñ d' ar c'holl a zreistveli evel ma 'z eo merket e Feur-Emglev Rom. Met evitañ da bouezañ kalz war vreudeuriezh an dud hag an ezhom o deus ar broadoù da harpañ an eil re ar re all, ec'h anzav gant Churchill : « Pennabeg kreñvañ an denelezh a-vremañ eo ar vroadelouriezh ». Gouest eo ar broadelour ivez da gaout ur welidigezh ledan, da gaout ur skiant a gumuniezh vrasoc'h. Foll e vefe klask sevel riezhoù douarbrazel pe vedel hep derc'hel kont eus ar broadoù; rak betek-hen n' o deus ijinet an dud furm bolitikel bevus ebet keneve ar stad vroadel, gouest ma 'z eo-hi da enaouiñ o feiz hag o emrousted. Evidon, eme v-Boland, ez eo a-bell ar gwellañ stern politikel da reiñ tu d' an dud da seveniñ en-leun ar pezh ez int barrek da ober war dachenoù ar spered hag an danvez, e peoc'h, e frankiz ha gant dellezegezh.

A. H.

346

Goulven PENNAOD

STUDI HAG OBER, Nn 4 (rumm. nev.), 6 F, Dim. St Gal de Pons, Louannec, 22. - C.C. P. Rennes 519 40.

Mantret eo bet sur a-walc'h an holl gatoliked - hag ar re n' int ket, ivez - pa baouezas a zont er-maez Kaieroù Kristen. Bez' e chome, evel reizh, kelaouennoù katolik all, hag i savet mat, Barr-Heol da skouer, met mantrus e oa gwelout o vont da get ar gelaouenn nemeti a blede gant un uhelzeskadurezh kristen en hor yezh. Soñj a raemp er pezh a veze graet en Euskadi gant Yakin (« preder ») oc'h embann en euskarek pennadoù a deologiezh hag a brederouriezh kristen.

Adkroget eo bet gant an Ao. Floc'h ha setu nevez deut er-maez pevare niverenn ar rummad nevez eus Studi hag Ober, ha pennadoù pouezus-dreist enni.

\*

347

Da gentañ « Notennoù a deologiezh » gant Maodez Glanndour, enne div



gentel, an eil « war enklask an Deologiezh wirion », eben « war enklask an Doue bev ». Diaes eo evidon barn reizh savboent an Aozer, rak, evel ma skriv (p. 3), an notennoù-se « n' int ket ur sammad a Deologiezh, nag ur skrid-kenteliañ... Evidon-me, pep mister doueel a zo en tu-hont d' hor gerioù ha d' hor meizadurioù... Estr eget pell a zo en oberennoù Doue, hag ar Christ ne oa ket karteziat. Ne welan ket neuze perak e vijemp ». Anet eo e tle an deologiezh bezañ klevet ha neket meizet, tizhet dre an diabarzh, dre zon donañ an ene. Setu, da nebeutañ pezh a ginnig dimp Maodez Glanndour hag an holl ac'hanomp a vez boaz gant e skridoù, e varzhoniezh pe e bennadoù predererezh, ne vint ket souezhet. Anat eo ivez, neuze, n' eus nemet ur c'hristen, pe nep piv bennak a glask sevel ennañ e-unan spered ur c'hristen - gant ma vo gallus - a c'hello gounit ar c'hengloterezh, ar *Stimmung*, ret evit dont da vezañ eñ e-un ur Maodez Glanndour all. D' am soñj, hevelep hentenoù a gaver e predererezhioù all (hag anv Sri Aurobindo pe Vivekananda a zeu dindan va biz e-kichen hini Eckhart) a c'hell bezañ risklus kenañ evit pezh a sell ouzh frouezh ar preder. Meur a hini a vo hoalet muioc'h gant ar c'han hag ar varzhoniezh eget gant ar poellataerezh, hogen, mat pe fall, evel-mañ e vez stummet hor bed kempredel, ez omp-ni holl mui pe vui, karteziatoc'h eget kevrinelat. Ur riskl all a welan ivez : hini dont da gouezhañ er « santimantelezh ha subjektelezh » a roas traoù ken divlas ha klouarik ha *Fioretti* sant Fransez ; met amañ, re emouez eo Maodez Glanndour eus ar riskl-se (a varn reizh-tre pp. 7-8) evit kouezhañ ennañ : « Diazezañ hor buhez speredel, emezañ, war ar santimantelezh eo sevel anezhi warnomp hon-unan, war an traezh ». Souezhet on bet avat gant ur frazenn a skriv (p. 8) : « N' eo diwanet an hiniennouriezh er vuhez speredel nemet diwar an diouer a vuhez lidadurel, an diouer a deologiezh vev goude an 12-vet kantved » (islin. ganen). Feiz ! Mar sellomp ouzh nep buhezskrid anezhañ, e c'hellomp lenn : « Tomaz Akuino, 1226-1274 » ha setu ar *Summa Theologica* renket e-touez oberennoù an « deologiezh varv » ? ? ? Gwir eo n' eo ket an Aozer (p. 5) evit kuzhat e zisfiziañs ouzh ar « sistemadoù prederouriezhel denel » a glask kompren « gant soñjoù ar boellegezh den... Sistemad Teilhard de Chardin a zo dizoloadenn diwezhañ ur seurt *gnosis* (naouegezh) ». N'eo ket me a zislavaro barn garv Maodez Glanndour a-zivout ar farouell diwezhañ-mañ a ra ur meskaj euzhus a vrizhkredennoù amouiziel (evit kement ha na sell ket ouzh an danvez a oa arbennigour warnañ, an henzenoniezh) hag a gredennoù « speredel » a ziskouez bezañ o c'hen brizh... Hogen, me gave din memestra e oa diazezet un tamm mat ar brederouriezh kristen, betek amañ, war hini Domaz.

Ne gav ket din kennebeut e ve fur-tre komz eus « reuz ar boellegouriezh » evel ma ra pp. 15hh. Gwir eo e teuer da vezañ disec'het gant ar boellegouriezh, met ken gwir all eo n' en deus mab-den, betek amañ, kavet benveg ebet a ve gwell eget ar poell evit klask kompren ar bed. Talvout a ra evidomp-ni Breizhiz dreist-holl, bet tamallet abaoe pell, hag ent-reizh, da vezañ re dechet d' ar faltazi. Amañ en em ziskouez Maodez Glanndour evel hêr hon tadoù kozh... Ne fell ket din prezegenñ a-enep an hengoun, rak an dra-se ne vije ket pardonet din..., met rankout a ran anzav ne vije ket bet fall evit hor bro mar bije aet hon hendadoù da soubañ un tamm muioc'h o spered er sec'hañ poelloniezh.

348

Kemend-all a lavarfen evit pezh a sell ouzh an eil notenn : un doare arguzenniñ e kelc'h a gaver amañ, rak evit tizhout un « anaoudegezh diboellataet eus bezoud Doue », eo ret klevout en an-unan ar « bezoud »-se. Kompren a reer Maodez Glanndour pa skriv (p. 22) : « Doue n' hall ket bezañ klozadur ur silogismenn » : c'hwitadur an holl « brouennoù » brudet en dikouezfe anat ha neuze « bezoud Doue a zo kentoc'h ur gudenn a weledigezh eget un afer a arguzerezh ». Met evit lies hini hiziv an deiz e teu « Doue » da vezañ ur vartezeadenn diret evit diskleriañ va hanvoud kenkoulz dirvoud ar bed en-dro din, ha pennaenn veur an armerzh poelloniell a gelenn dimp n' eus ket ezhomm a vartezeadennoù diret. Hag amañ e vin a-du penn-da-benn gant klozadur an Aozer : « Me gav din eo ret en-fed d' an den kaout ar c'hras dreist-naturel evit anavezout an Doue unan, bev ha gwirion ».

Pinvidik meur eo an div studienn-se a vo ret d' an holl gatoliked vreizhat a fell dezhe bevañ ent-emouez o feiz lenn aketus meurbet. Ur blijadur eo forzh penaos, evit an holl, lenn ar pennadoù-se, bezent kristen pe andoueat, rak re

rouez eo c'hoazh en hor yezh ar skridoù uhel skrivet en ur yezh uhel ha kaer.

Ha kaer eo yezh Maodez Glanndour, ken kaer en oberennoù kalvezel a brederouriezh hag e barzhoniezh. Ar varzhed avat o deus ar gwir « da bennaouiñ e-lec'h ma karont, en teod-yezhoù koulz hag er yezhoù estren » (Dafar 64, 4) evit pinvidikaat o geriaoueg. Yezh ar brederouriezh, evel pep yezh kalvezel, a c'houl ur c'heriaoueg resis, hag a-wechoù, d' am sonj, Maodez Glanndour a hañval bezañ tuet da dreiñ ger evit ger diwar geriaoueg ar brederouriezh skolastek. Kemeromp da akouer ar ger **bezoud**. Ober a ra gantañ evit **existentia**. Met, da gantañ, un tamm *ad hoc* eo sevel un diforc'h **bezout** : : **bout**, rak bezout n' eo met un hiron nevez a-walc'h savet dre gemmeskañ bout ha bezañ. Lakomp avat e klotfe - a c'hell bezañ - bezoud gant existentia (Dei), e sav an diaester-mañ : kendeuzet eo evel reizh furmoù displeget ar verb **bezout** gant re **bout**, ha ret eo neuze ober gant troiennoù evel « bout ac'hanon, ac'hanout, ac'halese, dres : hanvout. Met muioc'h ez eus, rak ne gav ket din e c'hallfe nep teologour bennak na prederour bennak kammveskañ « bezoud » Doue gant « hanvoud » mab-den, hag iskis a-walc'h e son a skriv p. 20, 11. 20-23, ha p. 23. Disfiziañs am eus ivez rak ar « gerioù etrevroadel » er brederouriezh. Pe e tiwan hor prediri eus an donañ ennomp, ha neuze e rankomp hec'h esteurel gant gerioù gwriziennet don en hor yezh hag en hon hengoun, pe ez eus anezhi ur ouezoniezh-ergorel, ha neuze an etrevroadelañ geriaoueg ar gwellañ. Met evit unan evel Maodez Glanndour a bouez kement war ar c'hlevout hiniennel, e kavan un tamm souezhus implij gerioù evel **akt, fed, rezon, mister**, ha. Diaes eo krediñ ne sell ouzh ar gerioù-se met evel **naouegezh**, da skouer, evit **gnosis**, sl. krBr. **gnou, gneuiff, gnouhat** : rouez e oa ar strollad /gn/ e brezhoneg, krenn, met n' eus arvar ebet e vije aet da /n/, hag ur fazi a voe graet nevez zo gant kinnig gerioù e **gn-** na oar den penaos o distagañ: /g-n/, /kn/ pe zoken /ñ/ evel e spagnoleg piv oar!

\*

349

War-lerc'h an « Notennoù a Deologiezh » e kaver un droidigezh eus Sir haSirim ar bibl, dindan an anv « Kanenn ar c'hanennoù », gant Maodez Glanndour lvez. En holl yezhoù koulz lavarout e vez troet ger-ouzh-ger anv ar varzhoneg-se, ha neuze e vijen deut fall mar rebechjen an droidigezh vrezhonek, met, e anzav a ran, karet em bije dreist lenn en hor yezh « Ar Ganenn veurbet » oc'h ober adarre gant an anv-gwan **meurbet** disoñjet evel anv-gwan abaoe tri c'hantved : albac'henn ur c'hrennvrezhonegour ! Met ivez dre ma tro reizh ster an droienn hebreek. Petra lavarout a-zivout an droidigezh-se keneve meuliñ an oberour ? Unan eus bravañ barzhonegoù karantez eus an henamzer eo ; ur barzh a ranke he brezhonegañ ha barzh ebet estr eget Maodez Glanndour ne oa gousesoc'h d' e ober. O lezel ar c'homzoù hebreek da ganañ ennañ en deus gouezet adkavout lusk an henskriz, drantiz ha fromm ar bried, birvilh ha tan ar pried. Ur faziig am eus merzet : 1, 5, treiñ a ra He. **sêhôrâ** gant **duard** : « duard ez on, met kenedus evelato, merc'hed Jeruzalem », met ar ger hebreek a dal du hepken, evel m' en diskouez ar c'henarroud : da grediñ eo ez oa duardezed d' an ampoent-se evel hiziv eus holl verc'hed Jeruzalem, ha neket meleganezed svedat, ha d' ar werzenn se n' eus ster all ebet met « daoust din bezañ ur vorianez, ez on kaer... ». Nebeut a dra eo a-hend-all na vir ket ouzh an droidigezh bezañ chomet peurliesañ tost-tre ouzh ar skrid orin ha bezañ skrivet en ur brezhoneg espar.

\*

Evit echuiñ ar c'haier ez eus notennoù gant Benead. Unan anezhe dreist-holl zo kentelius tre : « un targom diwar-benn levr Yob » bet adkavet e Qûmran. Keuzius eo ne vije ket bet komzet muioc'h betek amañ e brezhoneg a-zivout kavadennoù Qûmran pe re Khenaboskion ha ma vemp rediet da vont gant ar saozneg, ar galleg pe an alamaneg pa fell dimp gouzout muioc'h war o divout. Ha padal ez eus e Breizh tud a ve gouez da sevel studiennoù dudius war ar c'havadennoù-se. Hetomp e plijo da Venead hor c'henteliañ hiroc'h adarre.

\*

350

Evel a weler, prizius kenan eo Nn 4 Studi hag Ober. Spi am eus e vo

heuliet gant meur a hini all. Spi am eus dreist-holl e kavo Maodez Glanndour kenlabourerion evit e skoazellañ da adsevel - en diwezh ! - ul lennegezh kristen uhel e brezhoneg. Met setu n' eo ket ar gatoliked desket a vank e Breizh. Kalon a-walc'h dezhe evit prederiañ o feiz e brezhoneg ne lavaran ket... Spi am eus e' m lakaint da c'haouiad.

G. P.

## NOTENNOU

Savet pe gempennet eo bet an notennoù-mañ gant Per Penneg, Per ar Bihan, Gwion ar Menteg ha Ronan Huon

### Hor Mignoned

Tangi LEPROHON zo laouen o kemenn ganedigezh e c'hoar vihan Katell, e Roazhon d' an 11 a viz Here.

### Kañv

Glac'haret omp bet o klevout e oa aet da anaon unan all eus hor c'houmananterien, an Itron René LE BEC, eus Kemper.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d' he ziegezh ha d' he mignoned.

### Profoù

Degemeret hon eus ar profoù-mañ e-korf ar pevar mizdiwezhañ :

#### MEZHEVEN :

Loeiz Morvezen 5 lur ; Dr A. Rousseau, 10 ; R. M., Kemper, 10 ; Alan al Louarn, 6 ; Per Penneg, 50 ; Perig Vallerie, 20 ; J. ar C'hov, 5 ; Andrev Daniel, 30 ; It. Maze, devezh ar brezhoneg, 10 ; Dll Anjela Duval, 5.

- War un dro, 151 lur.

#### GOUHERE :

Joel ar Gwern, 5 lur ; Loeiz Bihannig, 80 ; Herri al Lann, 5 ; Yann Thomas, 10 ; It. Sant Per, 50 ; Marsel Aodig, 10.

- War un dro, 190 lur.

#### EOST :

Dr Yann Ezel 100 lur ; Lusian Chalier, 30 ; Yann-Ber ar Go, 5 ; J. Le Brun, 1 ; Yann Bizien, 2 ; Andrev Gornig, 5 ; Devezh ar brezhoneg, dastumet e ti Kenskoazell ar Vretoned ha Mision Breizh Pariz, 40,80 ; Yann Biriou, 10 ; It. ar Gwern, 5.

- War un dro, 198,80 lur. -

#### GWENGOLO :

Jos Habask, 10 lur ; H. ar Bitouz, 5 ; Dll St Gal de Pons, 5 ; Paol Gwithern, 10 ; Dastumet e Mision ar Vretoned, 10 ; Per Bourdelles, 30 ; F. A. Moyse, 5.

- War un dro, 75 lur.

1.947,80 lur a zo bet profet AL LIAMM adalek derou ar bloaz. Bennozh Doue d' an holl donezonerien !

### Lizhiri

Sed amañ arroudeñnoù tennet eus lizhiri hor mignoned, da gentañ ali hor c'houmananter feal J. C., kelenner :

« Traoù zo (pezhioù Tchec'hov, hag a vez kavet e-barzh " Ar Bed Keltiek " hag a vefe gwelloc'h lakaat e-barzh " Al Liamm ". Re lennegel eo evit ABK. Skañv, plijus ha kempouez e kavan ar gelaouenn a-hend-all. »

Digant J. K. :

« Plijadur a-walc'h am eus o lenn " Al Liamm ", nemet karout a rafen lenn enni ivez pennadoù war an arboellerezh, daoust d' " Al Liamm " bezañ troet war al lennegezh. Soñj am eus bezañ lennet war un niverenn bennak unan o klemm war diouer al labourerien douar, brezhonegerien lod brasañ anezho, e-touez al lennerien. Evidon-me n' on ket souezhet, rak peurvuiañ an dud diwar-ar-maez a

glask lenn traoù diwar-benn o micher kentoc'h eget traoù all. A-benn o lakaat da lenn muioc'h a vrezhoneg e rankfent kaout muioc'h a bennadoù hag a blijfe dezho hag aes da lenn. Ul labour a vije, evit ar re a glask ober eus hor yezh ur benveg evit komz eus pep tra, pleustriñ war ar poent-se. Yezh al labourerien-douar a zo un tammig kemmet ivez. Meur a c'her, aozet gant ar c'hallegerien evit traoù nevez ar vicher n'eo ket bet troet e brezhoneg, pe n' en deus ket e bar, hag an trefodaj a ya war washaat. Daoust ha ne c'heller ket ober un dra bennak, rak lod brasañ ar vrezhonegerien a zo c'hoazh tud diwar-ar-maez, kaouerien dreist-holl ? »

**Respont :** Laouen-bras e vefemp o welout ar gouerien o lenn brezhoneg. Hogen ar gudenn n'eo ket ken eeun ha ma seblant. Da gentañ ar gouerien a lenn nebeut-tre, zoken e galleg, statistikoù zo ouzh hen prouiñ. Aliis, dre ma n' o deus ket amzer. D' an eil ez eo rouez kenañ, e-touesk ar gouerien yaouank dreist-holl, ar re a zo barrek da lenn ar yezh, aes pe ziaes, dre ma ne vez desket dezho e skol ebet hag ez eo aet da get ar skol vrezhoneg diwezhañ a oa ar c'hatekiz. A-hend-all degemer a raimp laouen pennadoù war an arboellerezh pe an istor evel ma c'houlenne ur c'houmananter all.

### **Priz " Al Liamm ". Kuzulioù**

War greskiñ ez a atav priz ar moulañ. Niverenn 111 Al Liamm, he deus koustet 1.813,05 Lur gant as mizoù-kas. Goulenn a reomp eta digant hor c'houmananterien paeañ e koulz o c'houmanant evit ma teufemp a-benn ives da baeañ hon dleoù.

353

Renan Huon, o vezañ gwall sammet gant e vicher, gant renerezh Al Liamm, gant embann ha gant gwerzh al levrioù, a c'houlenn digant lennerien Al Liamm aesaat dezhañ e labour dre gas dezhañ notennoù skrivet splann ha difazi. Goulenn a ra ivez bezañ digarezet ma chom hep respont da lizhiri zo.

Ma prenit levrioù, kasit war un dro gant ho koulenn ar chekenn en ul lakaat 10 % evit as mizoù-kas (chekenn en anv : R. Huon).

An dornakridoù a rank bezañ, ar muiañ posubl, skriverezet, hag adwelet pe reizhet gant ur mignon ampart war ar yezh. Skrivañ diouzh un tu hepken war follennoù ment kenwerzhel. Trugarez en araok.

### **Bodadeg Al Liamm**

Dalc'het ez eus bet ur vodadeg gant skoazellerien Al Liamm e Menez Kamp, Spezed, d' ar 17 a viz Gouere. Pleustret ez eus bet war gudennoù-embann, kudennoù-burev, al levrioù, ar bruderezh ha kudenn skoazellerien ar gelaouenn. Per ar Bihan, Yann ar Beg, Yann Souffès-Després, Alan al Louarn, J. Desbordes ha Ronan Huon o deus kemeret perzh er vodadeg.

### **Trugarez**

Trugarekaat a reomp F. Moyse evit al levrioù en deus profet d' Al Liamm, evit bezañ gwerzhet.

Ra vo trugarekaet ivez ar vignoned a zo krog da sikour reizhañ amprouennoù Al Liamm, evel Kervella-Kongar, Yann ar Beg, an Ao. Klerg, Abanna hag ivez Gwion ar Menteg evit bezañ savet skrid an deiziadur godell.

### **Deiziadur Godell Al Liamm 1966**

Hon deiziadur evit ar bloavezh 1966 a zo deut er-maez.

Gwerzhet e vezo 4 lur an dek. Evel boaz ne vez ket gwerzhet a-unanoù. Tu ez eus da gaout skouerennoù gant « Bloavezh mat » skrivet warne. Distaol evit kant pe mil. Kasit ho chekenn hag ho koulenn war un dro da R. Huon, 2, Venelle

Poulbriquen, Brest. - C. C. P. 1629-14 Rennes.

### **Ar C'helaouennoù ha Jarl Priel**

Pennadoù diwar-benn hor mignon Jarl Priel zo bet embannet war " Lannion Républicain " d' ar 4 a viz Here ha war " Ouest-France " d' ar 27 a viz Eost. An daou bennad a oa mat-tre hag a vennege " Al Liamm ". Un trede pennad, hir a-walc'h, zo bet skrivet gant P. Helias e brezhoneg hag e galleg, o tiwall mat avat, da vennegiñ gant piv e oa bet embannet oberennoù Jarl Priel hag e pelec'h e vezent kavet.

354

### **Geriadur Gallek-Brezhonek Roparz Hemon**

Adembannet hon eus Geriadur Brezhonek-Gallek Roparz Hemon abaoe un nebeut mizioù. Kas a reomp da soñj d' hon lennerien ez eus 30 pajenn ouzhpenn en embannadur-se eget en hini kent. Deut eo er-maez ivez ar Geriadur Gallek-Brezhonek. Al levr-mañ en deus 420 pajenn evel an embannadur kent. 4.500 skouerenn zo bet moulet anezhañ. Priz pep skouerenn boutin a zo 10 Lur, ha 13 Lur gant ur golo plastik. R. Huon, 2, Venelle Poulbriquen, Brest. C. C. P. 1629-14 Rennes.

### **Kevre Keltiek - Celtic League**

Per Denez ha Charlez ar Gov o vezañ roet o dilez a gensekretourien, E. Gwalereg zo bet anvet da sekretour Skourr Breizh ar C'hevreur. D' ar re a garfe kaout al levr-bloaz " Self-government for the Celtic Countries " pe diskleriadurioù a-zivout an aozadur skrivañ dezhañ d' ar chomlec'h :  
c/o Kerlann, kêr-Vreizh, 43, rue St-Placide, Paris 6°  
Niverenn 11 " Celtic News " zo deut er-maez.

### **Kelc'h Brezhonegerien Kemper**

Savet ez eus bet nevez zo ur C'helc'h brezhonegerien e Kemper. O bodadegoù kentañ zo bet dalc'het e ti-kêr Kemper. Ar re a fell dezho gouzout hiroc'h a c'hell goulenn diskleriadurioù digant Yann ar Beg, apotiker, straed ar C'hroc'hu, Kemper.

### **Embannadurioù**

Degouezhet eo ganimp, roneoskrivet gant ar gelaouenn " Skol ", ul levrig pouezus-tre : Penaos niveriñ, kontañ ha muzullañ e brezhoneg. Merzet hon eus e oa bet miret ar stummoù implijet en embannadur kentañ : kenstrolladur, diskontadur, lieskementadur. Arabat eo kempañ diezhomm termenadur ar gerioù, met arabat eo ivez kaout meur a dermenadur war un dro. Setu perak en em c'houlennan hag-eñ ne vije ket bet gwell derc'hel kont eus stummoù kinniget war «Al Liamm» gant Jakez Konan hag implijet mui pe vui gant SADED : sammadur e-lec'h kenstrolladur, lamadur e-lec'h diskontadur ha dreist-holl, marteze, liesadur e-lec'h lieskementadur hag an arouez mui pe lies (SADED). Ur gudenn da studiañ eo. " Skol ", embannet gant A. Le Calvez, Crec'h Avel, Lannion.

### **Arnodennoù an Trec'h e Kamp Rostren**

Degemeret eo bet ar re da heul :  
Trec'h Meur :  
Erwan GWEGEN gant ar meneg mat a-walc'h.  
Goulven PENNAOD gant ar meneg mat a-walc'h.

355

Trec'h kentañ :  
Pierrette KERMOAL, meneg mat-tre ha meuleudioù.

Herve ar MEE, meneg mat-tre.  
P.-Y. MOIGN, meneg mat-tre.  
Anna PALARIG, meneg mat-tre.  
Gaid PENNAOD, meneg mat.  
Genovefa STEVEN, meneg mat.  
Gabriel CHEREL meneg mat.  
Fransez SOUFFEZ-DESPRE, meneg mat.  
Marsel POULAIN, meneg mat a-walc'h.  
Channig HITIER, meneg mat a-walc'h.  
L. BOURDIER.  
Maela SOUFFEZ-DESPRÉ.

### **Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion 1965**

E Rostren edo triwec'hvet Kamp ar Vrezhonegerion, hevlene. War-dro 160 den zo tremenet, an darn-vuiañ tud yaouank. Ur c'hamp plijus eo bet, daoust ma 'z eus bet labouret betek re, gouez da dud zo. D'ar re n' o deus ket bet an eurvad da vezañ eno ganimp da varn diouzh an notennoù-mañ.

Roll an devezh zo bet hini ar bloavezhioù kent, tost da vat. Eilpennet e oa bet koulskoude amzeriadur ar ger-stur hag al lein.

Da nav eur ha kard, e veze kentelioù, rannet e pevar rummad : skol ar re vihan, gant Yeun Gourvez, Mari-Elena Maze ha Ronan ar Glew ; an eil rummad, Skol Izel a veze kenteliet gant Kerlann ; skolidi an Trec'h Kentañ a veze e karg Paol Kalvez ; gant tud bet e skol gant SADED e veze kelennet ar pevare rummad. Da eo deomp reiñ amañ roll ar c'hentelioù displeget gante :

30.07 : Lennegezh (Gwion ar Menteg).  
31.07 : Krennvrezhoneg (Rohan Jolais).  
02.08 : Lennegezh (Youenn Olier).  
03.08 : Kimiezh (Gwenael Maze).  
04.08 : Yezhadur (Ronan ar Glew).  
05.08 : Lennegezh (Erwan Gwegen).  
06.08 : Istor (Mari-Elena Maze).  
07.08 : Istor (Youenn Olier).  
09.08 : Kerneveg (Goulven Pennaod).  
10.08 : Gwerinoniezh (Gwennole ar Menn)  
11.08 : Jedoniezh (abAnna.)  
12.08 : Prederouriezh (Loeiz Lemoine).  
13.08 : Lennegezh (Ivona Konan).  
14.08 : Istor (Youenn Olier)

Diduelloù nevez zo bet savet. Da ziv eur bemdez (pe dost), e veze c'hoariet " Den ar C'hentañ Kantved Warn-ugent " ma veze lakaet pep hini d' e dro da respont d' ur goulenn war un danvez dibabet gantañ (Istor, Douaroniezh, Lennegezh, Sonerezh, Sportoù). Goude-se ez aemp da vale en ur ober aliles un doare « Rallye » a-zivout al lec'hioù ma tremenemp dreze.

356

Da zegentañ, d' ar gwener, 30, e voemp kaset, e-ser c'hoari « Rallye » da glask en iliz roudoù ul livour ha da sevel ur sonenn war don ar « Bempoulladez ». An deiz war-lerc'h e voemp kaset « da vuzuliañ ha da zornata » Peulvan (pe v-maenhir) Groñvel ha da lakaat anezhan da gomz war hon divout : petra, emezañ, a zeu tud KEAV da ober amañ ? Gwechoù all, e voemp kaset da c'houlennata an dud a-zivout « Tarzhadenn Roazon » pe « an niverenn 13 »...

Devezhioù all, ez ejomp da vale e Duod, Sant-Servez, Kergrist-Moeloù, Karaez pe da ziskuizhañ e-kichen Stankell ar C'horonk e Groñvel.

Diouzh an noz, e voe graet abadennoù disheñvel bemdez, aozet gant pareoù (strolladoù) a-zoare : gwech e veze charadennoù, gwech all c'hoarioù, pe « sevel ur brezegenn war ar prim » ; bez' ez eus bet un abadenn gant ar vugale, un arvest luc'hvannerezh gant Youenn Olier hag Ivona Konan, kaniri gant al laz pe

gant Pêr-I. Moign ha Dunvel ar Benn... Dre ziv wech ez eus bet c'hoariet pezhioù-c'hoari (Dogan ha Meurlarjez).

D' ar yaou 13 e teuas Charlez ar Gall ha kalvezourion ar Skingomz. Enrollet e voe gante : kentelioù, kaniri, pennadoù-komz, ken gant ar re vras, ken gant ar vugale. Tennañ a rejomp ivez o mad diouzh an daou bezh-c'hoari bet desket e-pad ar c'hamp a vo skignet gant Roazhon-Breizh.

Setu roll ar prezegennoù bet graet e-doug Kamp Rostren :

30.07 : Yeun Gourvez : Ster dispac'h Iwerzhon.  
31.07 : Erwan Gwegen : Petra eo al Lennegezh ?  
02.08 : Youenn OLIER : « An Avel » hag « Avel an Trec'h ».  
04.08 : Goulven PENNAOD : Gwanadurezh ar c'hensonennoù.  
04.08 : Fañch SOUFFEZ-DESPRE : Va beaj en Iwerzhon.  
Yann KERLANN : Ar Vro-Vigoudenn.  
05.08 : AbANNA : S. A. D. E. D.  
06.08 : Ivona KONAN a lennas ur penad skrivet gant he zad « Al Lavar Reizh ».  
Gwion ar MENTEG : Simon Bolivar, « Libertador » Amerika ar Su.  
07.08 : Gwion ar MENTEG : An Ardamezouriezh.  
09.08 : Itron KERVELLA : Bro-Dreger.  
10.08 : Gwenole ar MENN : Ar Werinoniezh.  
11.08 : KERLANN : Ar Vro-Vigoudenn (heuliad).  
12.08 : Maodez GLANNDOUR : Ar Verb " Bezañ ".  
13.08 : R. DELAPORTE : An Emsav.  
D. LOYER : Ar Gristeniezh Kelt.

Daeroù a oa e daoulagad meur a unan, pa sonas koulz an disparti, d' ar sadorn 14, hag evel ma lavare ur baread bennak :

« Kent deomp kimiadiñ diouzh Rostren,  
Emañ hor c'halon o rannañ ;  
A-benn bloaz e teuimp laouen  
Vit komz brezhoneg ha kanañ. »

G. M.

357

### **Galv ar " C'hoursez " e koun G. Toublanc**

Pedet omp gant ar C'hoursez da embann kement-mañ :

« Keloù marv hor c'henvreur yaouank ha kalonek Gerard TOUBLANC a zo bet degemeret gant tristidigezh e pep lec'h.  
Hor c'henvroiz ne fell dezho gwelout nemet e Feiz virvidik, e haelled hag e strivoù dizehan evit adsevel hor Bro.  
Spi o deus an holl e vo degaset e gorf da ZINARZ, e gêr c'henidik. Mat e vo ivez lakaat war e vez, ur blakenn o tiskouez splann anaoudegezh-vat an Emsav broadel.

O heulian ali un niver mat a geneiled, e kred ar C'hoursez ez eo he dlead dastum ar profoù dre he c'hont-red " Gorsedd - 1907-81 - Nantes ". Ar c'helaouennoù a roio da anavezout petra a vo aozet hervez an arc'hant resevet. Trugarez en araok. »

### **Goude Gorsedd Pennpont**

Kavout a reer amañ da heul roll an dud a zo bet degemeret er C'helc'h evel diskibien hevlene :  
- an It. Mona Koarer, kelenneriezh, o chom en Naoned ; an Ao. Ch. Forget, implijad G. D. F., Naoned ; an Ao. Andrev Lestarquit, beajour-kenwerzh, Wiesbaden (Bro-Alamagn) ; an It. Madalen Morvan, arzourez war an uhelwrierez, Pariz ; an An. Alan Le Noac'h, implijiad P. T. T., Loudieg ; an Ao. Per Tourmen, sekretour, Naoned.

Degemeret e vo e 1966 :



- an It. Gaid Pennaod, kargadez, Paris.

Evel Barzhed pe Ovizion a enor :

- an It. S. Konan, o chom e Varese (Bro-Itali) ; an It. A. Gaudebert (Cl Kerlaz), skrivagnerezh, Reminieq ; ar Jeneral Per Vallerie, Pariz.

Degemeret e vo e 1966 :

- an Ao. A. Le Cozanet, Aljer (Bro-Aljeria), kelenner.

Evel Drouiz a enor :

- An tad Yann Calvard, kelener, Roazhon.

Setu roll an diskibien o deus diskouezet e oant barrek a-walc'h war ar brezhoneg evit bezañ anvet da Varzh pe Oviz oberiant :

- an Ao. Per Manac'h, kabiten a vor, Naoned ; an An. M. Duval, doktor war al Lizhiri, doktor war ar Reizh, Roazhon.

Roll ar Varzhed pe Ovizion oberiant a zo bet kavet dellezek da vezañ anvet da Zrouiz oberiant goude un arnoden war ar Geltiegezh :

- an Dr. A. Morvan, mezeg, Valencijs (Bro-Flandrez) ; an Ao. Fr. Marker, kelenner, Redon.

358

### **An iwerzhoneg war ar c'hirri-boutin**

Coras Iompair Eireann (Kevread Iwerzhonat evit an dezougerezh dre girri-boutin ha hentoù-houarn) he deus divizet kemmañ anvioù ar plakoù a vez lakaet war penn-araok ar c'hirri-boutin da verkañ ar gêr ma 'z eont daveti : lemet e vo an anvioù saoznek ha lakaet e vo en o lec'h anvioù iwerzhonek : Gallimh e-lec'h Galway, Baile Atha Cliath e-lec'h Dublin, Corcaigh e-lec'h Cork, h.a.

### **Bodadeg an U. N. E. S. C. O. e Teheran war an deskiñ-lenn ha skrivañ**

Deuet eo da Deheran, e-pad miz Gwengolo, dileuridi eus pevar c'horn ar bed evit rentañ kont eus ar pezh a zo bet graet en o broioù evit lakaat an dud da lenn ha da skrivañ ; studiet eo bet ar c'hudennoù a sav war dachenn ar gevredigezh (e broioù 'zo an dud a ankounac'hae ar pezh o doa desket a-benn un nebeut mizioù dre ma vevent en ur bed e-lec'h n' o doa ket ezhommm lenn ha skrivañ) hag ivez war an dachenn tec'hnek (implij ar radio, h.a.) ; met alioù disheñvel a zo bet klevet diwar-benn ar yezh da implij evit deskiñ lenn ha skrivañ, kannaded 'zo oc'h aliañ ober gant ar yezh komzet gant an dud, ar re all o vezañ a-du gant implij ar yezh vroadel nemetken, pe gentoc'h ar yezh-stad.

Kannad an U.R.S.S a zo bet e-touez gwellañ difennourien ar yezhoù a vez graet anezho « lec'hel », hini Bolivia ivez ha diskleriet en deus hemañ e reer en e vro gant ar yezhoù indianek er rannvroioù e-lec'h ne vez ket komprenet ar spagnoleg : « Prientet hon eus lizherennegoù evit div rannyezh indianek komzet pep hini gant ur milion a dud » (ar c'hetchoua hag an aymara hep mar). Met dileuridi all o deus en em ziskleriet a-enep, hini ar Mali da skouer, rak du-se e vez desket lenn ha skrivañ e galleg : « Ar yezh a zo simant an unded vroadel, en deus lavaret ; deskiñ lenn ha skrivañ er rannyezhoù a zo adreiñ nerzh d' ar spered « meuriadel » ; bez' e c'heller trueziñ ouzh ar rannyezhoù tonket da vont da get, hogen c'hoarvezet eo an dra-se er broioù diorreet ivez. E Bro-Chall an darn vrasañ eus an trefoedachoù o deus kilet dirak emled ar galleg ».

### **Ar skrivagnerez Kate Roberts enoret e Kembre (1)**

Ur galv broadel a zo graet evit enoriñ Dr Kate Roberts, sellet evel brasañ skrivagner kembraek bev o skrivan e komz-plaen ; ar pal a zo dastum arc'hant a-walc'h evit prenañ ti kozh Kate Roberts, a zo war var da gouezhañ en e boull ; kempennet e vo ha miret e vo ennañ dornskridoù ar skrivagnerez ha skouerennoù eus holl mouladurioù e oberoù ; digor e vo an ti d' ar weladennerien.

ñEmbannet he deus Rate Roberts e oberenn gentañ e 1925, ar bloavezh m' eo bet krouet Strollad Broadel Kembre hag emezelet he deus diouzhtu ; deuet eo hi bep bloaz da Skol Hañv ar Strollad, hag an 40vet gwech e oa e 1965 ; graet eo bet ur gouel en he enor e-pad ar Skol-Hañv.

(1) Embannet eo bet gant " Gwalarn " (niv. 4, 1926) un droidigezh gant Roparz Hemon eus « An Intañvez », istor berr gant Kate Roberts ha meur a hini gant " Al Liamm ", troet diwar ar c'hembraeg gant Klerg ha R. Huon.

359

### **An Okitaneg er skolioù**

Hervez un enklask graet nevez 'zo, 2.541 skoliad o deus heuilhet, e-doug er bloavezh skol 1964-1965, ar c'hentelioù war an okitaneg hag ar c'hatalaneg er skolioù eil-derez ; 394 anezho o deus goulennet tremen an amodenn war ar yezhoù-madi er vachelouriezh.

Embannet eo bet gant « Kuzul difenn ar yezhoù hag ar sevenadurioù rannvroel » e vo skignet gant Pellwell Montpellier abadennoù en okitaneg, evel un taol-arnod.

### **Bodadeg Kuzul ar Brezhoneg**

Bodadeg Kuzul ar Brezhoneg a zo bet dalc'het e Menez Kamp, Spezed, dindan renerezh an Ao. Floc'h, d' an 10 a viz Here. War-dro 30 den a oa deut d' an emvod.

An Ao. Floc'h o tigeriñ ar vodadeg en deus pouezet war ar c'henskoazell a ranke bezañ etre an izili. Emglev an Tiegezhioù o c'houlenn mont e-barzh ar C'huzul ez eo bet displeget petra oa palioù ar Gvredigezh-se hag a zo bet degemeret a-unvouezh.

Da heul ez eo bet roet gant pep Kevredigezh danevell he labour e-pad ar bloaz tremenet hag evit ar bloaz da zont. Pep danevell o vezañ displeget gant unan eus izili ar C'huzul :

*Kendalc'h Glasc'how* gant Per Denez ; *Al Liamm*, An Embannadurioù ha Kevredigezh ar Skrivagnerien gant Ronan Huon ; *Barr-Heol* gant an Ao. Thomas ; *Wanig ha Wenig* ha *Skol* gant Armañs ar C'halvez ; *Hor Yezh* gant Janed Keilhe ; *Studi* hag *Ober* gant an Ao. Bourdelles ; *Kamp* ar Vrezhonegerien gant Vefa de Bellaing ; *Preder* gant Abanna ; *Skol Ober* gant Marc'harid Gourlaouen ; *An Unvaniezh Speredel* gant an Dll St Gal de Pons ; *Stad* ar c'hef gant Lili Morvezen, teñzorer.

Ur wech echu al labour en deus rener ar C'huzul, an Ao. Floc'h, kinniget d' an holl ur banne kafe a-raok dispartiañ. Ur vodadeg eus ar re blijusañ eo bet, o reiñ tu d' ar vignoned d' en em adkavout ha da varvailhat en en-dro ken kaer Menez Kamp.

### **Nevez Embannet**

Emañ ar gelaouenn BARR-HEOL o paouez embann div levrenn dev : **Ofisoù ar Pantekost** (1 Mae-30.Gwengolo) enni 124 pajenn hag **Ofisoù Pask** (1 Here - 30 Ebrel) enni 122 pajenn. Ret eo d' ar gatoliked trugarekaat an Ao Klerg evit al labour ramzel en deus graet ha spi hon e vo implijet er parrezioù ma 'z eus brezhonegerien enne.

Priz pep niverenn : 5 lur. Abbé Le Clerc, Buhulien-Lannion - C. C. P. 917 64 Rennes.

# AL LIAMM 113

DU KERZU 1965

BLOAVEZH MAT  
NEDELEG LAOUEN

TAOLENN

Kanadeg evit Nedeleg gant M. Glanndour	363
Pellgent Loc'h Laoual gant Y. Drezen	376
Bro-Dreger gant Y. an Dred	383
Mousc'hoarzh Jarl Priel gant M. Glanndour	395
D'am mignon kozh gant A. Ar Chalvez	398
Roll Oberoù brezhonek Jarl Priel	402
Prederiadennoù Jarl Priel gant Y. Olier	409
An Tad Aleksî Presse gant M. Glanndour	413
A-dreuz-lenn gant G. Pennaod	418
Endro da bennad G. Pennaod gant M. Glanndour	421
Al Levrioù	425
Notennoù	428

**Kanadeg evit Nedeleg**

MAODEZ GLANNDOUR

1. - WAR HENT AN ILIZ

Ar Vugale

N' eo ket alies e kouezhfe an erc'h da vare Nedeleg,  
 Bravoc'h a se pa c'hellomp, evit ar bloaz, hen frikañ dindan hon treid,  
 Erc'h gwennoc'h eget gloan an deñved e sklaerder ar c'hraou,  
 Hag evelato, e oant bet, sur mat, gwelc'het gant ar vesaerion, a-raok bezañ  
 degaset d' ar Mabig Jezuz.

Ar Merc'hed

Erc'h ken divlaz d' ar c'halonoù kabac'h krinet gant ar pec'hed hag an  
 amgredoni,  
 Met drantiz leun evit ar vugale a gorf hag a spered !  
 Hizio kannder an neñv 'zo diskennet war an douar,  
 Brasat levenez d' an eneoù puraet !

Ar Wazed

Hizio ar bed 'zo yaouankaet !

364

Ar Vugale

Dindan da bokoù yen e c'hoarzh hor c'horfoù gren,  
 Erc'h divent ha splann !  
 Evel pa vije kresket d' hor c'halonoù, diwaskell elerc'h,  
 Gant c'hoant da zibradañ ha da vont d' an ec'hon.  
 Hag ur wech savet uhel, uhel, teurel en aer skeltr, ur youc'hadenn vras...  
 Setu perak e lammomp en erc'h o c'hoarzhin... Pe marteze n' ouzomp ket perak.

Ar Merc'hed

Nann ! N' ouzoc'h ket perak, bugaligoù !  
 Rak ar c'han-se a glevit gant c'hoant nijal  
 Eo hini hoc'h Aeled gwenn o komz ouzhoc'h en ho kalonoù,  
 Kanenn korioù an Neñv, en noz-mañ evel gwechall,  
 Oc'h embann keloù mat hor frankiz.

Ar Wazed

O kemenn dimp ar yaouankiz.

Ar Merc'hed

Rak setu dija nav miz echu, m' eo diskennet Gabriel, ul lilienn 'n e vizied,  
 Ha m' en deus lavaret a-berzh an Tad, gant salud bras hag azaouez,  
 E c'houlenne bremañ ar Verb diskenn er bed, evit lidañ Mister ar Gomz.  
 Ha Mari en he c'halon he deus degemeret ar c'heloù mat gant asant izelek ha grad  
 :  
 Frond ar vleunienn a zo chomet en ti, frond ar vleunienn a leugn anezhi.

365

Ar Wazed

Kanenn ar Verb a leugn Mari.

Ar Vugale

Hag echu gantañ lavarout e gentel,  
Petra 'n deus graet an Ael ?  
P' eo distroet da lein an neñv,  
En deus fichet e lilienn  
E-touez ar steredennoù,  
Evit ma lugerno da bell...  
Hag ar Vajed ouzh he gwelout  
O deus diouzhtu sammet o c'hañvaled.

Ar Merc'hed

Gwelit en noz, pobloù an Inizi, selaouit, broioù pell.  
Kannaded a beoc'h dre ar pevar avel a embann deoc'h ivez ar c'heloù mat,  
War lein an tuchennoù, e kreiz ar c'hroazhentoù e kri servijerion ar Furnezh  
D' ho kouviañ ivez da dañva e Bezlehem bara ar Vuhez.  
Deredomp holl, bras ha bihan, etrezek Mari, gant mall ha doujañs,  
Rak pep iliz 'vel ar Werc'hez, a zoug enni ar Verb santel, ar veuleudi c'hlan ha  
disi.

Ar Wazed

Ha frond an ezañs a leugn an ti.

366

2. - EN ILIZ

Ar Vugale

O ! paramantet eo bet ar c'hraou :  
Blev Aelez a-istribilh  
A luc'h laouen er sklerijenn !

Ar Merc'hed

Sed an iliz kenedus-holl a-ziabarzh, ar vamm-gwerc'hez,  
O c'hervel he bugale holl a-gevret,  
Da welout ar bugel-Doue.  
Sellit ouzh Mari santel o tiskouez dimp he Mab,  
Jezuz, gwir steredenn ar bed.

Ar Wazed

Ar vamm-gwerc'hez, tron ar Furnezh.

An Oferenner

Hizio 'mañ an deiz peurbad m' en deus an Tad ur Mab e levenez ar Spered Glan,  
Hag hizio 'mañ an deiz tremeniat ma teu ar Mab da vezañ den, hag eñ bugel Mari,  
silvidigezh dimp-ni.  
Pegen souezhus, pa c'hell an Tad en neñv, ha Mari war an douar,  
Lavarout hizio war un dro, an hevelep komzoù eus ar Salm :  
Te eo va Mab, hizio em eus da c'hanet, eus donder va askre, a-raok gouloù-deiz.

367

Ar Wazed

Mab an Tad en peurbad,  
ab ar Werc'hez en amzervezh.

Ar Ganerion

Noz a lak ar bed nevez-flamm  
O tic'haouiñ pec'hed Adam,  
O noz a arg ar bed a joa  
O tiverkañ pec'hed Eva.

An Oferenner

Sklerijenn eus Sklerijenn o skediñ a-raok gouloù-deiz ar bed,  
Hag o parañ bremañ warnomp en he splannder diarvar...  
Setu adnevesaet beure kentañ ar bed,  
Rak hizio 'mañ gouel pep gwerelaouen.  
Pep ginivelezh o lugerniñ,  
Pep krouidigezh o tinodiñ,  
Pep bleunienn o tigeriñ.

Ar Wazed

Ha pep ene o tasorc'hiñ.

Ar Ganerion

Teir ginivelezh dreist-doare  
En deus Jezuz, gwir vab Doue :  
Ar gentañ 'ra dezhañ e Dad,  
An eil, Mari, mamm dous ha mat  
Ar c'hinivelezh an trede  
A glask Jezuz en hon ene.

368

Ar Vugale

Mabig Jezuz, ken koant er c'hraou,  
Daoust hag e vefe breur dimp pa lavarar eo Mab Doue ?

Ar Merc'hed

Ur bugel a zo dimp ganet, ur mab a zo dimp roet,  
Dimp-holl gant Mari, evel breur henañ un tiegezh diniver.  
Rak da gement den a gred ennañ en deus roet galloud  
Da vezañ ganet endro a spered, en dour ar vadeziant,  
En askre an Iliz mamm ha gwerc'hez,  
Ha da vezañ bugel da Zoue :  
En doare ma c'hellomp gant Jezuz, lavarout souezhus :  
Hon Tad hag a zo en Neñv...

Ar Wazed

Hizio 'mañ deiz hon advabelezh  
Hizio omp hêred ar Rouantelezh.

Ar Merc'hed

Hizio 'mañ gouel pep tiegezh,  
Hizio 'mañ gouel ar vugale.  
Ha setu perak, evel ar vamm Iliz,  
Hon eus prientet levenez al lidoù tiegezhel  
Ha c'hoarielloù Nedeleg, dirak ar c'hraou, e kambr ar vugale.  
Rak noz an donezon eo houmañ.  
Ha gant hor pedenn dirak ar Mabig Jezuz du-mañ,  
Hon eus laket ar foeon prim hor boa plantet en douar ha दौरaet mat en arbenn d'  
ar gouel  
Ha setu int o steredenniñ hag o kanañ.

369

Ar Wazed

Ur greskenn a ziwano diwar gef Yese,  
Hag ur vleunienn a savo eus e wrizienn :  
Ur steredenn a baro eus Yakob hag ur rener eus Israhel.

Ar Merc'hed

Rak hor mister dimp-ni, gwrazez,  
Eo dastrewiñ en hon tiez,  
Fronn diabarzh ha douster.  
Hor roll hag hon tachenn eo ar galon.  
Ha rak-se e tegasomp henozh,  
Evit o c'hinnig deoc'h, Aotrou, da zonemat,  
Hor c'halonou, evel karget a vokedou,  
Enno levez ar stered.

Ar Wazed

An Aotrou, eus an Neñv, en deus skuilhet e vennozh,  
Hag an douar en deus roet e frouezh.

Ar Ganerion

Piv a nacho reiñ e galon  
Da Jezuz mab an donezon :  
Evidomp holl dre garantez  
Ez eo ganet er baourentez.

An Oferenner

Eskeñmadenn estlammus : Mab ar Veurdez er vrasañ distervezh,  
E baourentez 'zo kaoz d'hon holl binvidigezh.

370

Ur Beleg

N' emañ ket amañ ar gwir vadoù :  
Ar bed a drell hon daoulagad  
Gant e fals-c'houloù.

Ar Merc'hed

Jezuz ganet pell diouzh ho ti  
E-kreiz beajiñ.

Kor ar Jipsianed

N' en deus ti ebet, nemet an Hollved.

Ur Beleg

Jezuz tremeniat,  
Ganet en ur c'hraou, marvet ouzh ar c'hoad,  
E penn ho puhez hag en diwezh,  
War varlenn ho mamm, bet mailhuret ha lienet,  
Ar wech kentañ er joa 'vit ar c'hloc'har,  
Hag an eil gwech, er boan evit ar c'hloar,  
Ha c'hwi bepred, hep terriñ ar sielloù.

Ur Beleg all

Perak ar wech kentañ m' eo bet ganet e oa en ur vougev,  
Hag an eil gwech e groc'h ar bez ?

Ar Wazed

Sed hon douar en deus roet e frouezh

371

Ar C'hure yaouank

Ne gomprenan ket perak e talc'h ar person d' ober ur c'hraou a c'hiz kozh.  
Ijinañ a rafen a-walc'h un dra bennak gant siminalioù ul labouradeg,  
Pe c'hoazh, riboul ur vengleuz gant ar Mabig Jezuz er bagonig.  
Deuit, Aotrou, d' en em gorfañ en hor labourioù, en hor poanioù.

Ar Person

N' hoc'h eus ket ezhomme, Aotrou, eus hon tiez, nag eus hon ijinadurioù :  
Ne fell ket deoc'h anezho ! C'hwi 'venn bezañ ganet e kreiz ho krouadelezh,  
E kreiz bed an natur ganet eus ho lavar ;  
Rak deuet oc'h, beleg hervez urzh Melc'hisedec'h  
Evit liderezh an hollved.  
Deoc'h eo ar vestroniezh en deiz ho kinivelezh...  
O den, kae er-maez, mar gellez, eus lorc'h da gêrioù bras, eus pinvidigezh da  
ijinadurioù.  
Evit en em adkavout da-unan e paourentez an natur hag e vi pinvidikaet.

Ar Ganerion

E kraou an deñved eo ganet  
Jezuz, pastor ar fideled :  
D' ar bastored, roit keloù,  
Aeled santel an Neñvoù.  
O noz serten karget a joa  
E Bezlehem, allelouia !

372

Ar Merc'hed

Setu digor da vat darempredoù an neñv hag an douar,  
An Aelez o tiskenn hag o sevel a-us da Vab an den :  
Ha ni pedet gant ar beleg da unaniñ ganto mouezhioù ha kalonoù.  
Gant strollad-kan ar Serafined,  
Meulomp trugarez an Doue teir gwech santel,  
Rak hizio eo leun gant e c'hloar an neñv hag an douar.  
Ra vo benniget ar Mesiaz,  
A zeu davedomp, en ano Doue, karget a c'hras.

Ar Wazed

Ar c'han hizio a zo dimp ganet, an hozanna !  
Ha dija e leugn ar bed, allelouia !

Ar Merc'hed

Pebezh kan e kalon Maria !

Ar Vugale

Diouzhtu e vo ar gorreoù, hag e sono ar c'hloc'hig,  
Seizh gwech gant son sklintin,  
Da gemenn dimp donedigezh  
Jezuz war an aoter.



An Oferenner

Jezuz a-nevez 'zo ganet eus an nec'h  
War al lienenn glan evel erc'h.

Ar Merc'hed

Sellomp ouzh hor Salver, ni holl, gwall bec'herion :  
Emañ ar beleg ouzh e ziskouez evel Mari d' ar vesaerion.

373

An Oferenner

Na vezet, kristenien, nep hini  
Na rentfe klod ha meulodi,  
D' an Tad, d' ar Mab, gant bras detri,  
Ha d' ar Spered Glan, letani

Ar Ganerion

Gloar da vugel Maria,  
O salutaris hostia !

Ar Wazed

Ar c'han doueel,  
Bara peurbadel hon eneoù.

Ar Merc'hed

Hizio pep iliz er bed 'zo Bezlehem, ti ar bara,  
Rak setu bara an Aelez diskennet eus an neñvoù.

Loened ar C'hraou

Laket omp bet amañ, ni an debrerion-foen,  
N' ouzomp ket perak, ne gomprenomp ket kalz er pezh a dremen.  
Met peogwir e komz al loened e noz an Nedeleg  
Hag e tremen hizio ar wirionez dre o genou,  
E tleomp lavarout uhel ez eus e-touez an dud gwashoc'h egedomp :  
Rak klevet hon eus en ofis ar vijeledoù,  
Ha miret mat en hon eñvor, komzoù ar Profed Isahia :  
Pep korf a zo foen,  
Hag e holl gened evel bleunienn ar maezioù ;  
Ar geot a zisec'h hag e weñv ar bleunioù.  
Ya sur, evel geot emañ klod an dud.  
Met lavar an Aotrou a chom da virviken.

374

Ar C'hlasker bara

Aotrou, n' eo ket foen a c'houlennan  
Met ho para dreist-douarel :  
Grit ac'hanon an hini en devez bepred naon,  
Bepred o kestral hoc'h aluzon,  
Ha bepred kleuz evel un toull don,  
Un islonk o c'harmiñ gant ar c'hoant d' ho tebriñ.  
Hag evit ho para, diganin, Aotrou, na c'hortozit netra.  
Me 'zo dibourvez,  
Nemet a galon e lavaran deoc'h trugarez,  
Tra ken.  
N' ouzon nemet goulenn,  
Setu va fedenn.

An Oferenner

Amen.

Evurus ar re o deus naon ha sec'hed,  
Rak gant an Aotrou e vezint gwalc'het.

Ur Bugel

Gwennael ! Me 'zo krog da vezañ ken ponner va fenn ma kouezh war va bruched.  
A drugarez Doue, emañ ar beleg oc'h echuiñ,  
Hag e vennozh warnomp o skediñ.

Mamm ar Bugel

Piv eo Gwennael ? N' eus amañ Gwennael ebet !

375

Ar Bugel hanter-gousket

Ano va Ael-mirer ez eo : hen lavaret en deus din

Ur Vaouez kozh o vont er-maez

Maria, mater gratiae  
Mamm da Jezuz, mamm a druez,  
Bezit 'vidomp advokadez :  
Hon difennit ouzh pep saouzan  
Dreist-holl en eur hon tremenvan,  
D' hor c'has ganeoc'h da di ar Joa  
Da ganañ gae Allelouia !

Mouezhioù o pellaat

Hor pastor, hon Doue, hor Jezuz benniget  
A-vremañ ni ho ped, ouzhimp ho pet truez,  
Pa guitamp ar bed, hor resevit 'touez hoc'h Aelez.

Kanerion all

Al laboused bihan  
Hag a gane,  
Al laboused bihan, en noz-se, a gane  
Meuleudi da Vari ha d' he Mabig Doue.

An Evned bihan

An dud o tistreiñ d' ar gêr, leun a soñjoù speredel,  
A luc'h evel stered en noz...  
Kouskit er peoc'h, bugale an douar,  
Ni 'chomo da veilhañ gant Aelez ar c'hlod  
Da ganañ Mestr ar Sabaoth.

## PELLGENT LOC'H LAOUAL

KONTADENN NEDELEG

Ar c'heloù a oa redet, dre ar vro, evel an tan :

- An Aotrou Manac'h, person Goulien, a gano Oferenn Hanter-Noz. En em gavont abred, abalamour d' ar mor, e Kougon Galon, etre Beg ar Van ha Loc'h Laoual.

Setu perak, kerkent ha ma voe diskennet an noz war ar C'hap, un noz dudall, karget a goumoul, e voe gwelet, o hastañ didrouz, war-du ar Beg, tiadoù tud, gwazed, merc'hed ha bugale, labourerien-douar ha martoloded.

\*

An dra-mañ a c'hoarveze d' ar mare ma oa an Dispac'h oc'h ober e reuz milliget betek goueled an douaroù pellañ. Ar C'hap Sizun ne oa ket bet espernet, Goulien ha Plogo, ha Kleden, e oa bet ret d' o beleien skoachañ pe zivroañ. Evit diwall he relijion, e ranke katolikañ bro ar bed, Breizh-Izel, mont da bediñ e keo ar c'herreg, evel ar gristenien gentañ. An taol-mañ, end-eeun, ne oa ket bet kavet ur santual dizañjerusoc'h d' he fideled eget keo un tornaod, e-tal bae an Anaon, - Doue d' o viro !

\*

An diouer en doa graet broud d' ar feiz. Ha promesa an Aotrou Manac'h - un den, henezh, hag a zalc'he d' e c'her ! - n' he doa ket kavet skouarn vouzar. Ar C'hap a-bezh a bigne war-du Beg ar Van ha keo Kougon Galon.

Ar wazed e oa ganto fuzuilhioù pe bizier-krog o beg houarn ; hag ar merc'hed o doa gwisket o mantilli kañv. Lavaret e vije bet e oant o vont d' ur servij evit soudarded lazhet er brezel, ha n' eo ket da gemer joa gant Ginivelezh Doue ar Peoc'h.

377

Dizoloet e oa bet gant an izel-vor ur vevennad traezh **hag** hastañ a rae an dud dre eno, rak aesoc'h e oa kerzhout war an aod eget diskenn, en deñvalijenn dall, dre gwenodennoù serz ha kamm-digamm an toraod.

Grozmol an tarzhoù a c'holoe traskadeg an treid.

Mont a ment, e-pad ur pennad, a-hed moger sonn ha du ar c'herreg, a save ouzhpenn tri c'hant troatad a-zioc'h ar pennoù. Hep gouzout dare da zen, ne vezent ket gwelet mui. Lonket e oant bet gant Kougon Galon.

Digeriñ a rae frailh Kougon Galon etre div voger uhel-spontus, heñvel a-walc'h ouzh kant ha kant keo all, nemet e oa kalz donoc'h. Ne c'helled mont e-barzh nemet dre izel-vor, evel henozh, nozvezh benniget ar Pellgent. Bremaik, end-eeun, e vo stanket an hent gant al lanv ; ha ne c'hell den dont da ober diskan fallakr da gantikoù ar Mabig Jezuz.

\*

Tin Urkun, eus porzhig ar Vorlenn, a oa e toull ar frailh, harpet war e vazh-krog, o tiskouez an hent d' an dud ne ouient ket, - hag e oant niverus, e c'hellit krediñ.

- Hag a nevez ? emeve dezhañ. Hag erru eo an Aotrou Manac'h ?

- N' eo ket ; mes gwelet eo bet ur goulouenn er-maez da C'horle-Bellañ. Ne zaleo mui.

- Poent eo ; mall al lanv o c'hounit.

- Ha Republikaned ar Pont ? a c'houlennas an Urkun. Sellout a ris ouzh va fuzuilh, hep respont, ha me tre er c'heo da heul ar re all. Bale a raemp, da gentañ, war ur gwiskad traezh louet, ha, goude, war ar bili. Pelloc'h, e oa ur seizennad bezhin, o verkañ an harzoù tizhet gant ar mor. Unan bennak a enaouas ul letern evit sklêrijennañ. Kougon Galon a yae don-don dindan an douar. Rankout a rajomp pignat un doare dirioù mein, tremen, en ur zaoublegañ, dre ur riboul strizh evit degouezhout en ur c'hav ken frank, pe dost, hag iliz Sant Korantin Kemper.

Un aezenn tomm ha yen a c'hwezh er c'hav, pep ar mare. Sardon ar mouezhioù a drouze eno evel an dour o virviñ en ur gaoter bras-mantrus. Fanolioù, istribilhet, du-mañ du-hont, ouzh roc'h ar speurennoù, a daole en-dro dezho kurunennoù a sklêrijenn melenek ha pikous, tra ma chome ar gristenien en deñvalijenn.

378

Tre da laez, emañ an aoter, ma vo kanet an oferenn bremaik : ur maen plat diwar an aod, e traon ul lien-bag dalc'het war stign gant roeñvoù, ha kempennet gant bodoù banal nevez-troc'het : ur baradoz dister, siouazh ! dister evel kraou Bethleem, da reiñ degemer da Vab Krouer ar Bed.

Ne oan ket evit mirout da skrignal ouzh ar re a oa deut da lakaat dispac'h en hon touez, rak ne lavaremp tra dezho, ha ne c'houlennemp tra diwar-benn hor relijion...

...Pa savas kemmesk, du-hont, e toull an nor. Klevout a ris :

- A ! an Aotrou Manac'h !... Deut eo !

Ha, kerkent, evel ur bennozh Doue galloudus, e tarzhas kan an Ebestel, testeni bras ar feiz : " Credo in Deum... "

Ya ! me gred en Iliz Santel Katolik... er Vuhez Eternel. Evel-se bezet graet !

\*

Ne oa ket tavet mat an heklek, ma tregernas ar c'hornboud.

Ur vouezh a hope :

- Paotred Trougêr, amañ !

Me oa eus Trougêr. Petra a c'hoarveze 'ta ? Ha perak e oan-me aet ken don er c'hao ?... Poan ar mil mallozh am boe o troc'hañ va hent a-dreuz an dud startoc'h-start e Kougon Galon. Pa voen deut a-benn d' en em dennañ, ne oa mui, er-maez, gant e fanol, nemet Tin Urkun, eus ar Vorlenn. Edo an tarzhoù-mor war ar bili, sko ennomp.

- Aet eo kuit ar bagoù, eme an Urkun. Ma n' ac'h eus ket aon terriñ da zivesker, e ranki pignat dre an tornaod, aze. A-hend-all, chom en oferenn...

- Petra a c'hoarvez ?

- Soudarded ar Pont ha, marteze, re Douarnenez.

- Neuze 'ta !

- Eo ! eo ! Edo em c'hichen ivez ur c'hrennard o tianalañ atav gant ar redadenn souezhus en doa graet. Soñjit pet lev ez eus etre ar Pont-e-Kroaz ha Beg ar Van !

E berr gomzoù, e tisplegas din ar c'heloù. Redet en doa ar vrud, e kêr, edo ar Chouaned ha Dijentiled ar roue dibennet, o vont da zilestrañ un arme e Beg ar Raz, evit lakaat ar vro da sevel a-enep ar Republik. Gwelet e oa bet, a-hend-all, tud ar C'hap o vont d' ar Beg, a-vil-vern. Ne c'helle ar re-se mont di nemet evit reiñ degemer d' ar Re-Wenn. Ne oa ket bet pell ar Republikaned o sternañ hag o vont en hent, evit ober ivez, evel just, degemer en o doare d' an estranjourien. An hent, avat, a oa fall-du... hag ar grennarded, o c'haloupat diarc'hen, dre ar gwenodennoù-treuz, a oa degouezhet a-raozo.

379

Gwazed Plogo ha Priveilh, eus un tu, re Gleden ha Goulien, dre an tu all, o doa sammet o fuzuilh, kounnar enno.

- Ma n' eo ket unan zoken evit klevout un oferenn e peoc'h ! Gwelet ' vo !...

Ya ! Gwelet e vo. Sellout a ris ouzh kerreg sonn Kougon Galon. Kavout a rin toullouigoù, mechañs, da harpañ va zreid ha da sankañ va ivinoù. Stagañ a ris va fuzuilh, a-drenv va c'hein, gant ur funenn ; diwiskan a ris va botoù ha, hop ! ha me ha kregiñ da grapat penn-da-benn an tornaod, a-zioc'h an toull du, ma kroze ennañ tarzhiou ar mor gouez.

.. .. .. .. ..

Avel mouest an dorgenn a voe sec'het prim ganti c'hwezenn ruz va izili, ha me, tizh warnon, ha stouet va fenn war ar wenodenn strizh, o vont, dre ar waremm, war-du Trougêr. Trouz ebet en-dro din, nemet klemm an avel war al lann berr un tu bennak, garm ul labous-mor, o huñvreal, mechañs. Mont a raen.

A ! Setu un hent-karr ledanoc'h, gant mogerigoù mein sec'h en daou du. War va dorn kleiz, ar waremm, an noz du-pod ; war an dorn dehou, tre en traoñ, loc'h Laoual, o skediñ, evel ma lavarar, gant an tan en dour ; un tammig sklêrijenn dister ha dilufr.

Chom a ris a-sav da anaout va hent. Neuze, e teuas betek ennon, pell du-hont, en tu all d' al loc'h, evel ur gurun ingal, evel ur vandennad tud o vale war douar kalet un hent bras.

Soudarded ar Pont !... 'M eus aon e vo tomm an abadenn, bremaik, rak gwazed ar C'hap, eus o c'hostez, e tle bezañ digor o lagad, un tu bennak, war an torgennoù.

Re a evezh am oa lakaet da selaou paotred an tu all d' al loc'h. Ma kinnigas va gwad treiñ da zour, en un taol-trumm. A-dreñv va c'hein, ha sko ennon, o tiskenn gant an hent-karr, e oa tud o tont ivez, ur bern tud. N' am boe nemet amzer da lammat dreist ar c'hleuz, ha da stouiñ em c'hogn.

380

A ! tudoù. N' on ket aonik, ha ne oan ket mezv, an nozvezh-se, nann, siouazh ! ne oan ket mezv, ha diskiant, nebutoc'h c'hoazh. Ma ! Krenañ a raen e-giz ur c'hi kozh dindan ar glav ; krenañ a raen gant ar spont ha gant an nec'hamant, rak ar re a oa o tiskenn e-biou din, en hent-karr meinek ha leun a doullou, ne oant ket evel ar gristenien a hiziv, hag a c'houlenne doujañs. Ha komz a raent :

- Evelato eo tremen poent echuiñ ar binijenn.
- Yen-sklas eo an dour.
- Mil bloaz 'zo emamp o tiwaskañ poan.

- A ! Dont en-dro war an douar evit gounit repoz ar Baradoz !

- Gallout, ur wech, a-benn ar fin, respont d' an " Ite, Missa est ! " Gallout echuiñ an Oferenn, bet boulc'het e Kêr-Is, ha bet krennet dre bec'hed ar Briñsez !...

Hag e welen, o vont goustad, etre an div voger mein sec'h an eskibien trist meurbet o selloù, ha glas o zremm : an dijentiled, fichet gant ar seiz hag ar voulouz ; an itronezed kran ha dimezeled, brav evel ma ne welin biken mui heñvel outo, hogen laosk o eskern ha glas o liv, glas evel an dud beuzet - Doue d' o fardono ! - ha pobl ar Gêr Villiget, bern war vern, o strebotiñ war ar begoù mein, hag o teurel klemm hag hirvoud. Un diskan, avat, a save, ur wech ar mare :

- Pedomp evit Kêr-Is ! Sevel a ray en-dro Kêr-Is.

\*

Bremañ, hep fiñval diouzh va c'hogn, e kleven, mesk-ha-mesk, prosesion an Anaon, o tiskenn davet loc'h Laoual, ha bale sec'h soudarded ha kezeg an tu all o tostaat muioc'h-mui.

Hag e teuas soñj din eus ar gontadenn gozh.

Bep bloaz, e sav paotred Kêr-Is eus strad an dour da glask an Oferenn, e traonienn loc'h Laoual. Pa vo bet klevet gant ar beleg ar respont d' e " Ite, Missa est ! " e vo echu ar binijenn, hag e tarzho en-dro palezioù aour ar roue Gralon war-c'horre ar mor.

Tud paour Kêr-Is, ur mare fall ho peus dibabet. Ni, hon unan, an dud bev, a zo ret deomp skoachañ evit kaout an oferenn, ha difenn hor relijion a daolioù fuzuilh. Ar Priñs Ruz, hen, n' eo ket bet beuzet, ha n' en deus ket echu ober droug deoc'h, reuzeudien gaezh !

381

Bremañ, me oa trellet va daoulagad, ha va divskouarn ivez. Sklêrijennet e oa Loc'h Laoual e-giz un iliz. Un iliz, avat, dezhi na toenn na dor, gleb, ha glas gant ar bezhin, evel ar c'herreg-mor.

Edo un eskob oc'h oferennañ war an ton bras, dirak ur boblad tud daoulinet, ha, - m' hen tou ! klevout a raen o sevel, davet kourmoul an oabl, imnoù latin ha kantikoù brezhonek, hir, truezus, ha leun a feiz.

Daoulinañ a ris evit ar Gorreou estlammus. Respont a ris, war un dro gant an Anaon : " Et cum spiritu tuo ", gant doujañs ha gant feiz. Aet e oa krenn diwar va soñj Republikaned an tu all.

Ha, koulskoude, i ivez a dlee chom sabatuet gant an daolenn.

\*

A !... Straket en deus un tenn fuzuilh, hag ur youc'hadenn hir. Edo dres an Aotrou 'n Eskob o vont da lavarout : " Ite, Missa est ! " Re-Veuzet ar Gêr-Is, berr war o anal, edo war o zeod an " Deo gratias ! " salver, pa voe strafuilhet an noz gant ur cholori euzhus. Tennoù fuzuilh, youc'hadoù, kezeg o tripal. Lavaret e vije bet e oa aet fulor en oabl hag er mor, hag e oa an douar o krenañ. Ha, koulskoude, en oabl izel, e oa ar c'houmoul ken difiñv ha bremaik.

Daoust hag eñ e oa bet kemeret Anaon ar Gêr-Is evit ar chouanted gortozet, evit an arme deut dre vor da hisat ar vro enep ar Republik ?... N' ouzon dare.

Klevout a ris, fraezh ha splann : « Chargez ! » Gwelout a ris ar c'hezeg bras hag ar soudarded, e-kreiz luc'hed an tennoù, o tic'haloupat, d' an

daoulamm, war an diribin, dre dreuz ar waremm lann, davet loc'h Laoual. Birviñ a rae va gwad : pemp bolod am oa. Kargañ a ris va fuzuilh.

Ne yeas ket un tenn da goll.

Oferenn Kêr-Is, avat, ne oa ket bet echu. Pignet e oa un hirvoud skiltr a-greiz an iliz hep toenn na dor : n' eo ket ar wech-mañ c'hoazh e savo Kêr-Is d' ar gorre ; hag an Anaon, kounnaret trumm, o doa sailhet war ar soudarded dizoue. Luc'hed eus an neñv, luc'hed an tennoù fuzuilh, freuzh ha reuz, ronkelloù gwazed o veuziñ el lec'hid pe e-touez ar c'horzh ; mogerioù an iliz varzhus o tisac'hañ en ur poullad klogor, tra ma varve ar gouleier... A ! pa vevin kant vloaz, ne ankounac'hain biken an emgann iskis-se...

. . . . .

382

E-keit-se, kristenien ar C'hap a gave gant levenez Ginivelezh Hor Salver, e keo Kougon Galon. Na ne glevjont na ne weljont tra.

Ne voe gwelet, kennebeut, pa darzhas an deiz, na liv na roud eus soudarded ar Pont. Loc'h Laoual, don ha du, a ziwallas gantañ korfoù an estrañjourien ; hag ar glav, kouezhet kerkent goude an emgann, en doa gwalc'het ar gwad war lanneg an diribin.

Brest, 21 Kerzu 1929.

Ar Sevenadur zo un Emsav, n' eo ket ur stad, ur veaj eo, ket ur porzh.

Arnold Toynbee.

**BRO-DREGER a-wechall da vremañ**

(displeget e Kamp ar Vrezhonegerien)

AN Itron de Bellaing he deus goulennet diganin komz diwar-benn Bro-Dreger. Ya, met Bro-Dreger a zo bras he me n' anavezan nemet ul lodenn anezhi, lakaomp dre vras etre Landreger, ar Roc'h-Derrien ha Lannuon. Koulskoude emañ o vont da gontañ deoc'h un dra bennak eus ar pezh eo deuet da vezañ bremañ.

A bep seurt traoù a c'hellan kontañ deoc'h evel just, gwirionez ha gevier ivez, rak ma vez lavaret :

Laer evel ul Leonard,  
Brell evel ur C'hernevad,  
Sot evel ur Gwenedad,

e vez lavaret ivez :

Gaouiat evel un Tregeriad

Klask a rin daoust da se, lavarout ar muiañ ma c'hellin ar wirionez, rak tud a-zoare oc'h.

E-keñver douaroniezh, Bro-Dreger a zo un uhelgompezenn o vont eus ar mor betek Mene-Bre (302 vetrad) ha sevel war-du Kerne goude. Treuzet eo ar vro gant an Trev, ar Yeodi, al Leger. Ur gwiskad limouz (douar mat) a gaver ingal a-walc'h war an uhelgompezenn-se.

En istor a gaver roud abred eus Landreger (Ploulantreger), eus Lannuon (Lann Huon). Hentoù kozh graet anezho hentoù roman peurvuiañ a zo c'hoazh anezho. Lec'hioù evel ar Yeoded ( e-kichen Lannuon) a chom kevrinus a-walc'h an istor anezho. Treger a-vremañ eo dre vras an Domnonea, e-lec'h ma touaras Bretoned Tramor : Gireg, Goneri, Eliboubana, Effflamm, Enora, Tual ha meur a hini all.

\*

384

Seizh kant vloaz 'zo emañ Sant Erwan o reiñ brud ha sked da Vro-Dreger. Iliz-Veur Landreger eo al lec'h ar muiañ gweladennet e Breizh. Erwan Helouri a Gervarzhin a zo anavezet gant pep hini ac'hanoc'h. Met daoust hag eñ e anavezit Sant Erwan ar Wirionez ?

Chapel Sant-Erwan ar Wirionez a oa bet savet en tu all da borzh Landreger, e-tal an aod, el lec'h anvet Turzhunel e parrez Tredarzeg. Ar pelerinaj da Sant Erwan ar Wirionez ne oa ket unan ordinal ! Evit ar prosezou diaes, an tabutoù, diskoulm ebet dezho ez aed di peurliesañ. Graet e veze gant ur vaouez a vicher peurvuiañ. A-raok mont he lakae he c'hliant da lavarout war he lerc'h :

Aotrou Sant Erwan ar wirionez  
A oar deus an eil hag egile  
Laket ar gwir e-lec'h m' emañ  
Hag ar gaou gant an hini 'mañ gantañ.

Mont a rae goude-se da chapel Sant-Erwan ar Wirionez. Eno e kroge er sant hag en ur hejañ anezhañ e lavare : « Te eo sant ar wirionez, gouestlañ a ran dit hen-mañ-hen. M' emañ ar gwir gantañ, barn ac'hanon, met m' emañ ganin, gra ma varvo en amzer hag en koulz ». Reiñ a rae neuze ar prof d' ar sant hag e lavare



pedennoù, pater hag ave, met en ur gregiñ ganto dre an dibenn. Evit echuiñ e rae teir gwech tro ar chapel hep treiñ he fenn. Da c'houde ne oa tra ebet ken d' ober nemet gortoz barnidigezh ar sant. Dindan nav miz a lavar darn, darn all a lavar ur bloaz hag un devezh, e tlee an hini kablus mervel ! Teurel pled e varve peurvuañ an hini kablus gant kleñved al langiz. Se a zo da nebeutañ un doare d' ober met sur mat ez eus stummoù all.

Beleien 'zo o welout an implij-se a glaskas enebiñ. Met o welout penaos e talc'he an dud da vont d' ar chapel e rejont diskar anezhi. Ur maen bennak a chom memes tra diouti. Skeudenn ar Sant a voe kaset neuze da Dredarzeg. Ac'hanta ! Mont a rae an dud da Dredarzeg kement ha ken bihan ma voe lavaret (etre an daou vrezel) e oa bet devet ar skeudenn. Met klevet am eus bet lavaret ne oa ket bet devet a benn ar fin. Piv oar ? Daoust da se Sant Erwan ar Wirionez a chom bev e spered an dud. Klevet am eus bet me va-unan, lavarout war-lerc'h marv unan bennak : « Hennezh a oa bet gouestlet da Sant Erwan ar Wirionez ».

\*

385

Komzomp bremañ eus traoù all. Hervez muzulioù graet war an danvez-soudarded, eo e Treger, eo an hini a gaver an dud bihanañ e Breizh, muioc'h, e kanton Lannuon eo emañ ar re vihanañ holl.

N' ho pet ket aon n'int ket kornandoned, kreskiñ a ra o ment ingal, ingal ur pennad 'zo. Marteze ne zebrent ket a-walc'h a soub... pe marteze e tebrent re !

Setu un alberz eus ar bevañs, war-dro brezel 1914. Da lein (diyuniñ) soubenn al laezh en ur skudell ruz, kleriet gant un orjalenn evit ma na faoutje ket. Da verenn yod pe grampouezh, da goan avaloù-douar gant kig sall. Na pet gwech am eus klevet kanañ d' ar vugale :

Patatez ha laezh, patatez ha laezh  
Bichiganigoù mamm-gozh kaezh

pe c'hoazh :

Tamm soub ebet, tamm soub ebet 'met kig  
Tamm kig ebet, tamm kig ebet 'met soub.

Peogwir emaoamp gant an debriñ, setu penaos e veze aozet saladenn d' ar c'houlz-se. An hilienn a veze graet gant gwinegr ha sukr ha mesket gant ar saladenn. Bez e kaver tud kozh oc'h ober evel-se c'hoazh.

\*

Al labour bremañ. Tenn eo al labourioù war ar maez. Klevet am eus komz eus hadañ ed gant palioù e douaroù ' oa. Troc'hañ an eost gant filzier. E Treger e-lec'h ma oa ledet-kaer al lin e oa marteze an dennadeg lin al labour gwashañ. Displantet e veze al lin ha pa veze glebor pe gliz diouzh ar beure, an dud a veze gleb-dour-teil. Ne oa ket ral gwelout er parkeier eskouadennoù a dregont a dud e pep park. Ledennet e veze e labour da bep hini. A-benn an noz, eme va zad, e veze brevet an dud ha koulskoude veze ret adkregiñ gant ar memes labour an deiz war-lerc'h ha se e-doug teir sizhunvezh alies. Ur parkad lin en e vleuñv a zo un dra vray-kaer da welout. Ul liv glas dispar en deus. Ha setu un dra a veze graet dalc'hmat evit brasañ dudi al labourerien. Pa dremene unan bennak dre doull ar gloued e veze kroget ennañ dre e dreid ha dre e zivrec'h ha skoet d' an douar dre foñs e vragoù. Pakulañ a veze graet eus an dra-se.

386

An eost a veze dornet gant freilhoù e plasoù ' zo. Met ivez gant mekanikoù gant kezeg (ar manej) hag a droe dizehan war al leur. E Sant-Brieg e tiskouezer unan e-tal liorzhañ kêr. Ar c'hezeg a veze kemmet gwech an amzer ha roet dezho ur seurt bara a-ratozh : bara heiz. An dud avat ne vijent ket cheñchet ! Start ar

vicher, poultr e-leizh war al leur, hag an heol o tommañ muioc'h d' ar c'houlz-se eget bremañ a lavar din va zad. Memes tra, eme ar re gozh e veze plijadur.

Roet e veze d' an dornerien da lein soub en ur skudell ruz. Da verenn yod bet poazhet en ur gaoter vras ha lakaet war ur seurt trebez bras uhel anvet marc'h-yod ha lakaet e kreiz plasenn an ti. Pep hini a gemere ul loa-goad e kased al loaioù hag an holl en-dro d' ar gaoter da zebriñ yod kement ha ma kare. En tiez pinvidik 'veze roet ur bannac'h sistr da zebriñ ar yod, met e-lec'h ma oa fall ar « jeu » ne veze nemet dour. Goude ar yod, pep hini a zebre bara ha kig sall kement ha m' en deveze c'hoant. Da adverenn bara ha kig sall adarre. Diouzh an noz, e veze roet ur bannac'h brav a win-ardant en ur werenn. An dud a eve er memes gwerenn, an eil war-lerc'h egile. Ar merc'hed a eve ivez, rak poultr a veze kalz. Patatez a veze da goan. Bez e vezent en ur pod houarn bras pe en ur ridell. Ne veze gwech ebet asiedoù ( komz a ran eus a-raok brezel 14), ha pep hini a lakae e batatez hag e damm kig sall en e gichen war an daol ! Ar mitizien o deveze sur mat kalz a labour da walc'hiñ an taolioù goude-se. Berroc'h oa o labour koulskoude rak n' o doa na loaioù, nag asiedoù, na gwer da skaotañ. E pep penn d' an daol e veze ur c'helorniad dour hag ur chopin war-neuñv ennañ. Hag ar re sec'hedus a c'helle evañ. Koulskoude, eme va zad, ne veze ket trist an dud. Bet ur wastell, da lavarout echu an dornañ, e veze dañset betek hanternoz. Ha gwin-ardant ha sistr d' an dud ken na vezent mezv. An deiz war-lerc'h e ranked adkregiñ e ti un amezeg all.

\*

War-lerc'h kement a labourioù start hag evit kaout dudi hag un tamm diskuizh bennak e oa ret mat kaout un tamm plijadur. Ar gouelioù, ar pardonioù, an eurejoù a zegase bep ar mare kement-se d' an dud.

Gouelioù evel Nedeleg a zegase ganto boazioù hag a oa evel lidoù. Gwelet am eus moerebed o lakaat en oaled pikolioù kefioù hag o enaouiñ gant aked ha mirout al ludu goude-se. Al ludu a ziwalle an ti diouzh ar gurun.

387

Gwelet am eus bugale o vont a di da di da gwignaoua da zeiz war-lerc'h Nedeleg, ha klevet am eus bet gant an dud rimadelloù evel-hen :

Kwignaoua, kwignipi  
Minaoued, dour bervet, sac'h pipi  
Skaotañ he revr da Janed  
A zo en he gwele kousket  
N'he deus bet d' he c'hoan  
Nemet ur c'hozh grampou'enn gras  
Ha c'hoazh ne oa ket hanter-boazh !

Ar vugale ne ouient ket petra oa un aval-orañjez nemet da vare Nedeleg. Neuze e tegouezhe dezho kaout unan pe zaou. Goude ne veze ket gwelet al liv anezho ken ar bloaz war-lerc'h.

D' an Deiz Kentañ ar bloaz e veze an eil hag egile o lavarout hetoù, bepred an hevelep re. Abred-mat e oa bet desket deomp lavarout kement-mañ, a-barzh bezañ diseven :

Bloavezh mat a suitañ deoc'h  
Yec'hed ha prespolite  
Hag ar Baradoz da fin ho puhez.

Met an teodoù fall ha divergont a lavare :

Bloavezh mat a suitañ deoc'h  
Yec'hed d' ho pezhioù polennoù  
Ha kafe mat din en o leizhioù.

Meurlarjez a roe digarez d' un niver bras a dud war ar maez hag er bourkoù

bihan d' en em zic'hizhañ. Mont a raent eus un ti d' egile d' en em ziskouez, en ur ziwall mat avat na vefent anavezet. Kalz a blijadur o deveze sur rak youc'hal a raent :

Malarjez, Malarjez  
Me 'garfe badje bemdez  
An eost div wech ar bloaz  
Hag ar Gouel-Mikael bep seizh vloaz !

An deiz war-lerc'h avat e kroge ar yunoù hag ar vijilioù. Na kig, na vioù e-pad seizh sizhun. Gant hast e c'hortozed an evn da ganañ :

Kig ha vioù da Bask  
Eme an drask.

388

Er pardonioù ar baotred a c'hoarie gant ar berchenn, Mil ha Kazh pe plegañ ar pognez (an arzorn). Ar merc'hed o deveze kouignoù hag ar vugale a rae troioù war ar c'hezeg-mezevenn.

Evel e pep lec'h ar merc'hedigoù a c'hoarie gant pompinelloù graet er gêr gant danvez ha karget a bitrouilhez (gloan dispennet) pe gant polotenoù leun a galaj (kalaj a vez anvet e Treger ar pezh a chom war-lerc'h an didilhañ lin, plusk al lin).

Ar baotred vihan a veze en chakenn (en sae) betek pemp pe c'hwec'h vloaz. Ar re-se a c'hoarie gant kanetenoù pri hag en em ganne, evel just. An holl a c'hoarie bili-bann (pempigoù) gant bili bihan ront. E-tal an oaled ar vugale a c'hoarie bizibul (etivi, tan enno) a veze tremenet an eil d' egile. An hini a varve gantañ a veze koll. En ur dremen an eil d' egile e veze lavaret un dra bennak evel, *bizibul na varvet ket a gav din*.

Diouzh an noz e veze beilhadegoù. Lennet e veze ur pennad eus Buhez ar Sent, kanet ha kontet marvailhoù. Kalz a dud n' o doa nemet un deskadurezh dre gomz, met dre vras an dud ne oant ket dizesk war ar maez. Ur bern traoù a ouient. Lennet e veze koulskoude. Kavet am eus war-lerc'h kerent kozh e-touez kalz levrioù a zevosion, levrioù evel *Loeiz Ennius, ar Pevar Mab Emon, Pipi Gonto...* E-pad pell eo bet lennet kalz e Treger, *Kroaz ar Vretoned*.

Alies diouzh an noz e teue peorien da c'houlenn lojeiz er mereurioù. Lojet e vezent e kraou ar saout. Ar boaz oa ganto da dennañ plouz e-leizh evit ober o gwele. Laouen e vezen neuze, eme va zad, rak evel-se am beze plouz tennet evit daou zevezh. Met kalz anezho a oa didalvez hag e roent daou wenneg dezhañ evit kas ar plouz d' ar c'hraou, rak yaouank-kaer e oa va zad d' ar c'houlz-se. Kalz a glaskerien-vara a oa ha mont a raent eus an eil ti d' egile. Kontañ a raent ur bern keleier ha ne vezent ket gwir bepred, a lavar c'hoazh va zad !

389

Ur c'hlasker-bara brudet a zo bet er vro. Eus Plougoukant e oa. Kanam a oa anvet, se ne oa dezhañ nemet ul lesanv. Bouzar ha mut e oa hag ouzhpenn bras ha kreñv. Ur vazh a veze gantañ ha pa dostae d' an tiez e skoe gant e vazh hag e krie : Kanam... .Kan... am. Klevet e veze a-bell rak kreñv a oa e vouezh. Ne ouie lavarout tra all ebet nemet Kanam, ac'hane e lesanv. Spontañ a rae ar vugale. Ar re-mañ a rede buan d' ar gêr hag ar re vihanañ a ouie chouchal e lostenoù o mammoù. Netra nemet komz eus Kanam d' ar vugale, ar re-mañ a sente, zoken ar re zroukañ.

\*

Boazioù ' zo a veze heuliet strizh. Da skouer ar priedoù yaouank a ginnige nozvezh kentañ o eured d' ar Werc'hez. Peurvuiañ zoken n' ez aent da chom asambles nemet eizh deiz goude o eured. An Anaon ne veze ket ankounac'haet ha da

geñver an eured e veze un oferenn evit anaon an div familh. N' eus ket ken pell-se e oa c'hoazh evel-se.

Ar vugale vihan nevez-c'hanet a veze lakaet dezho o roched pe o brasierien war an tu gin. Se, evit diwall na vefent c'hoantaet pe sorset gant unan bennak. N' heller ket sorsañ unan bennak a vez gantañ ur pezh dilhad war an tu gin !

Hon tud kozh a rae war-dro o c'hleñvedoù int o-unan, evit ar re voutinañ da vihanañ. Darn anezho, evel va mamm-gozh a oa ampart-kaer da glask al louzeier d' ober traet (louzoù) pe evajoù evit pareañ ur bern poanioù.

Setu amañ bremañ traoù hag am eus klevet gant a bep seurt tud. Un den kozh (eontr ur genitervezh din hag a oa an 12vet bugel) a lavar e oa chomet bev, ha bevet en deus zoken en tu-hont d' e 80 vloaz, dre ma oa bet graet dezhañ evel-hen pa oa nevez-c'hanet. Evel ne grie ket e voe soubet a bep eil en ur pladad dour tomm ha kerkent en unan dour yen, ha se, ken na laoskas e griadenn gantañ. Met ar pezh a zo souezhus eo e voe tremenet dezhañ dre e fri ur bluenn yar o c'horriñ goude-se ! Gout a ouzon ez eus bet graet an dra-se da dud all c'hoazh.

Un eontr (bev c'hoazh) a voe pareet eus al leskadur kroc'henennoù penn pa voe lakaet dezhañ war e empenn ur goulm daouhanteret ez-bev !

Pa na zeue ket ar pare gant traoù ar bed, e troe an dud war-du ar sent. Lakaet e oant da vezañ galloudus.

Gwelet am eus un amezegezh kozh o vont da c'hlebiañ roched he mab-bihan e dour feunteun Itron Varia Traoñ-Meur en Tredarzeg, evit ma parefe ; e feunteun Sant Ivi e Logivi-Lannuon e raed-se ivez.

390

Gwelet am eus tud o vont da bediñ Sant Loup e Brelevenez, evit o bugale taget gant an droug-Sant-Loup (glizienn, barroù pe kouezhañ en arouez).

Ar mammoù e Langoad a laka o bugale d' ober tro bez Santez Koupaia en iliz (Santez Koupaia a zo mamm Sant Tual, eskop kentañ Landreger), evit ma kerzhfent abred. Lakaet on bet d' ober tro ar bez gant va mamm ha Santez Koupaia a zo ur santez vat rak kerzhout a ris da zek miz. Unan eus va bugale a reas gwelloc'h c'hoazh peogwir e kerzhe da nav !

Evit goulenn ma teufe ar gomz d' ar vugale ha na gomzent ket e oa un tammig diaesoc'h. Ret eo kemer ur vag ha mont da enezenn Riom. Un den a anavezan ha na gomze ket c'hoazh da bevar bloaz, a lavaras e c'herioù kentañ er vag en ur zistreiñ eus ur pelerinaj gant e vamm. Bremañ n' eus ket muioc'h latennet egetañ !

An heskidi (gorioù don) a vez pareet gant Sant Anton. N' eo ket Sant Anton a anavezer peurvuiañ, met ur sant Anton all, genidik eus an Azia-Vihan. E Peurit ar Roc'h emañ e chapel. Va mamm-gozh a c'hopraas un deiz ur vaouez, war c'houlenn he mab a oa war an talbenn e-pad brezel 14. Gouzañv a rae hemañ poanioù bras gant meur a hesked a oa deuet dezhañ war e c'houg. Achanta ! d' ar c'houlz ma oa ar plac'h kozh oc'h ober tro ar chapel en ul lavarout he fedennoù e tiskarge ar gorioù. Pedet evit an dud, e vez goulennet gantañ ouzhpenn gwareziñ al loened-korn. Bet on bet war droad gant ur voereb e Peurit ar Roc'h, ha begoù lostoù saout ganeomp da brofañ d' ar sant. Va moereb a rae tro ar chapel en ur lavarout he chapeled, neuze e kemere dour eus ar feunteun a oa da vezañ skuilhet war al loened. E-pad an amzer-se, me a veze er chapel o lenn war ar vogerenn gwenn-razet, buhez ar sant a zo displeget hirik eno ha skrivet e brezhoneg mat.

Ne oa ket dav bepred mont d' ober pelerinajoù ken alies gwech ma kouezhe ur c'hleñved bennak warnoc'h. A-wechoù e oa trawalc'h lavarout rimadelloù-hud. Evit ar gwenanennoù e oa ret lavarout komzoù diaes-kaer ha n' am eus ket soñj anezho bremañ. Evit ar pennsac'h e oa heñvel :

Pennsac'h 'r sac'h  
Va fenn er maez  
Ha me yac'h

a oa da lavarout nav gwech hep disalanat.

391

Evit bezañ distagellet mat e oa ret lavarout buan-buan :  
Kloc'h bras Gras  
Stag diwar-bouez al las.

Gras a zo ur barrez stok ouzh Gwengamp.

Anat eo e veze kontet ur bern rimadelloù heñvel d' ar re glañv e-giz farserezh.

\*

Traoù difennet bremañ. N' eo ket mat skubañ an ti goude koan. Biskoazh ne dije va mamm graet-se. Perak ? Se a vefe emezi, kas chañs vat an deiz kuit. Difennet groñs avat ober kouezh da Wener ar Groaz. Se a zo birviñ gwad Hon Salver. An dra-se ne ran gwech ebet kennebeut, rak re alies em eus klevet an difenn-se en-dro din e Bro-Dreger. N' ouzon ket hag eñ eo evel-se e lec'h all e Breizh.

\*

Bremañ un dra souezhus a-walc'h hag a zo bet marteze ur boaz gwechall-gozh. Digant ur vaouez, marvet oadet-kaer, n' eus ket keit-se am eus klevet kement-mañ. Da bep nevez-amzer, pa veze ar raden yaouank o poulzañ, e kemere unan hag e chaoke an tamm radenenn. Da virout na vefe flemmet gant un naer emezi. Rak an hini-gozh-mañ a dremene an hañv en-dro d' ar c'hleuzioù oc'h hadlannañ dastum had lann. Gwerzhañ a rae an had ur priz dereat, rak e-pad pell e Treger e veze hadet lann war ar c'hleuzioù ha zoken e tachennoù douar ' zo, rak lann drailhet a veze roet d' ar c'hezeg. Gwelet am eus zoken ardivinkoù aratozh da drailhañ lann evit ar c'hezeg. Aet eo ar vicher da fall, rak emeur o tifoeltriñ ar c'hleuzioù hag ar c'hezeg n' eus ket ken kalz anezho. Lorc'h a oa en hini gozh avat o lavarout ne oa bet biskoazh flemmet gant un naer. Galloud a reer teurel pled eo heñvel neuz ur radenenn yaouank o poulzañ ouzh un naer !

\*

392

N' heller ket komz eus Bro-Dreger a gav din, hep lavarout ur ger bennak diwar-benn pilhaouerien ha toerien maen-glas ar Roc'h-Derrien. Roc'hiz e-giz ma lavarer du-se. Disheñvel e oant e meur a-zoare eus an dud all a-ziwar-dro. Gizioù dezho o-unan, ur yezh ivez, an tunodo. Ha pa zeue da Roc'hiz ar soñj da sevel pe da aozañ ur gouel bennak ne oa ket par dezho. Berzh a raent. Brud o doa, mat ha fall. Ar bilhaouerien a rede ar maezioù oc'h eskemm, listri, bolennoù, mouchoueroù pe babu (ur seurt kerez) evit pilhoù, eskern, kozh-houarn ha me oar... Niverus e oa ar pilhaouerien ha ken niverus all e oa an doerien, paotred an tok-tok, rak er Roc'h e oa mengleuzioù maen-glas tev, maen-glas ar Roc'h a veze graet anezho. Ur perzh all da Roc'hiz : holl o doa ul lesanv, zoken ar person. Unan a oa bet hag oa anvet ar « c'hased horolaj ». Un den all a oa anavezet gant an holl Yann Galifourni e lesanv, dre ma oa bet an den du-se o klask aour. An heol a zo « huonig ». Kreisteiz, « an daouzek abostol ».

Ha setu petra a lavaras ur sulvezh an Aotrou Person er gador-sarmon : « Roc'hiz, va breudeur ker, tud a galon ha tud a boan sammet a-bell, sammet a-dost... sammet a-bell, sammet a-dost, met siwazh, ar wirionez rankout a ran he diskleriañ evel m' emañ... sammet eta, met siwazh, sammet gant traoù laeret alies... » O klevout an dra-se, Gwilh an Teuz e traoñ an iliz a roas un taol-illin da Chêl ar Babao en ur lavarout en e dunodo : « He, tunik ! e ambrelliñ, petra 'dunik hon rup vrez gant e jargilh raton ? Deus er-maez ar c'houez Manuel-mañ ! » Ar pezh a zo e brezhoneg mat : « He, selaou ta ! Ne glevet ket bremañ, petra lavar ar person ? Na pebezh teod fall, deus er-maez eus an iliz-

mañ ».

Roc'hiz n' en em glevant ket gant Langoadiz, labourerien-douar ar barrez-nesañ. Meur a son a zo bet savet gant an eil re hag egile, war ar sujed-se. Kanaouennoù ken hir, ken na oa fin ebet dezho. Soñj am eus eus unan hag a oa an diskan evel-hen :

Pipi Stoup, Pipi Stoup  
Merc'hed ar Roc'h 'zo pilhoù tout.

Pipi Stoup eo ar pilhaouer pe ar mitouz a labour al lin.

Roc'hiz avat a ziskane :

Pipi Stoup, Pipi Stoup  
Merc'hed Langoad, ' zo memes tra.

393

Pa vez gwelet unan bennak gant ur re votoù koad uzet-kaez, ken na vezont prest da doullañ, e vez lavaret : « Sell 'ta, emañ e votoù evel reoù merc'hed ar Roc'h », pe c'hoazh : « Botoù merc'hed ar Roc'h a zo ganti en he zreid ! » Ar boteier koad a ya er-maez eus c'hiz ivez. N' eo ket bremañ e vo lavaret d' ur bugel yaouank, lakaet en treñ e Pariz e penn kentañ ar c'hanved hag a dlee diskenn e Plouaret : « Diskenn a ri, paotr bihan, e-lec'h ma weli tud en hent-houarn gant boteier koad ! »

\*

An amzer e Treger a zo aet e-biou ha setu amañ traoù nevesoc'h. War-dro unnek vloaz 'zo eo bet kavet e Breizh an tamm uraniom kentañ. Ac'hanta, tudoù, e Bro-Dreger eo bet kavet hag e-kichen Bulien c'hoazh. Soñj mat am eus eus an deiz ma teuas du-mañ un den yaouank gantañ ar maen a oa ennañ an danvez-se ken prizius d' ar bed a-vremañ. Ma ! bez e oa ur maen hep stumm na feson ha diaes e oa soñjal en doa lakaet an dra divalo-se ar muzulier Geiger da benn-folliñ.

\*

Setu aze a-dreuz hag a-hed un toullad kaozioù diwar-benn Bro-Dreger. Traoù kozh ha traoù nevesoc'h. Traoù a vez dilezet, traoù all a vez krouet, lezenn ar vuhez eo. Keuz war-lerc'h ne dalv mann, a vez lavaret.

Pemp kant vloaz 'zo e vouled e Landreger « Catholicon » Jehan Lagadeuc ha derc'hel a reer da gomz, da lenn, da skrivañ ha da voulañ ar yezh. Brav eo deomp Tregeriz kaout Barr-Heol, Skol, Studi hag Ober, Wanig ha Wenig, holl e Treger. Arabat disoñjal ivez, eo e Treger eo bet savet ar c'hentañ skol vrezhonek penna-benn, hini Plistin.

War-lerc'h an Uhel, Vallée, ar Moal, Marc'harid Fulup, hon eus Jarl Priel, Maodez Glanndour ha reoù all.

Derc'hel a ra ar Beilhadegoù en un doare nevesoc'h ivez.

Ha daoust ha n' hon eus ket kredet zoken e 1962, un nozvezh bennak e Kendalc'h Keltiek Landreger e oa hon huñvreoù kaer o tont da wir ? Ken dispar ha ma oa bet aozet an traoù eno.

\*

394

Echuiñ a ran en ur hetin d' an Itron de Bellaing e kavje ul lec'h e Treger evit Kamp ar Vrezhonegerien a-benn bloaz. Evel-se e c'hellfec'h, va mignoned, ober gwelloc'h anaoudegezh gant ar c'horn-bro am eus roet deoc'h un alberz bihan-kaer anezhañ.

Ken ar bloaz a zeu, ha mar bez bolontez Doue hag hini Sant Erwan e vo e  
Treger. Ha bennozh Doue deoc'h da vezañ ma selaouet betek ar fin.

Displeget e Rostren d' an 9 a viz Eost 1965.

## MOUSC'HOARZH JARL PRIEL

YA, evel-se e oa ! Sellout a ran endro ouzh al luc'hskeudenn en deus lakaet Ronan Huon e penn kentañ e niverenn 112 diwar-benn Jarl Priel : e Kleden ar C'hab, 1954. Ne oa ket hepken evit un devezh o tremen, evel-se e veze : gant ur mousc'hoarzh war e vuzelloù, ha kemend-all war e zaoulagad hanter-serret. Evel pa vefe e spered lemm o spiañ a-drek stalafioù damzigor, ha roufennoù e ividig o tresañ ul lunarouez sinaat leun a fent, a widre hag a brederouriezh fin. Hag an den o sellout ouzh taolenn ar vuhez hag ar bed, da varn gant truez ha didruez kemmesket.

A-dal an oberenn gentañ en devoa roet dimp e brezhoneg, hor boa santet ur skrivagner ampart, a ouie reiñ d' e soñjoù stumm ha buhez gant ur c'hargad mat a ijin. Hag eñ o tont d' al lennegezh vrezhonek, kozh dija, goude bezañ bet hej-dihej war an dour glas, hini meurvorioù ar bed, evel hini ar micherioù hag ar soñjoù. Martolod a ouenn, avanturour evel e dadoù, n' en devoa ket kennebeut all serret kregin (dastumet arc'hant), met pinvidik e oa gant e skiant-prenet, ha goude dizoleiñ Breizh endro, eñ ivez, e felle dezhañ lodennañ d' e genvroiz e beadra. Ur binvidigezh dreist-holl, en devoa bet a hêrezh, en devoa miret, rak ne goller ket anezhi, skiant ar fentigell.

Evidomp-ni, Tregeriz, pa lennomp Jarl Priel, ez eo ur blijadur kaout dindan e bluenn, gerioù bev hor c'horn-bro, ha war un dro un doare mousc'hoarzh a zo d' hor spered, dudi hep e bar.

N' anavezan ket a-walc'h ar bobl dre Vreizh a-bezh evit gouzout hag-eñ e talv evit ar vro penn-da-benn, kement ha kement, ar pezh a zo gwir evit Bro-Dreger. Met hen krediñ a rafen a-walc'h : ne dle ket bezañ ken bras-se an digemm.

Sellit endro ouzh skeudenn Jarl Priel : emañ o vousec'hoarzhin, met ne gouezho ket e gorn-butun eus e c'henou. Arabat sklokal a-bouez-penn ; se a zo mat evit ar veulkeed hepken. Ur farser speredek a oar stekiñ skañv gant penn e viz, deoc'h-c'hwi da zivinout ar peurrest, peogwir e tleit bezañ c'hwi ivez ken speredek all. Setu reolenn ar c'hoari !

En deizioù-mañ e welen un den a ya gant skipailh Beilhadegoù Bro-Dreger dre parrezioù ar c'hornad. Ha komz a raemp diwar-benn an abadennoù, petra a veze kanet, petra displeget. Anezhañ e-unan eo en em lakaet ar paotr da abegiñ traoù 'zo, farsadennoù re bonner, emezañ, komzioù pout, n'eo ket se diouzh an doare da blijout dimp : traoù hanter-lavaret a zo kentoc'h.

Farserion diseblant ! Gallout zoken chom hep c'hoarzhin pa lakaer ar re all d' hen ober, setu ar sin uhelañ a spered. Soñj am eus eus Priel o c'hoari e bezhioù, farsus bepred evel just, met ken dic'hoarzh ha tra. Pe c'hoazh un nebeut bloavezhioù 'zo, Priel a oa bet pedet, evit bodadeg skolidi gozh Sant-Josef, Lanuon, da eñvoriñ troioù e yaouankiz e Kloerdi bihan Landreger : un dudi e oa bet e brezegenn penn-da-benn, souezhus, fentus, hag eñ, ur skleur hepken o parañ war e vuzelloù, a zalc'he da vont gant e roll.

Trugarekaat a ran an Aotrou Doue evit bezañ roet din anavezout a-walc'h tud ar bobl war ar maez, tud Bro-Dreger, tud ar barfetiz, meurdeus un tammig betek bezañ pompus a-wechoù, met war un dro, fenterion prest bepred da flemmañ ar sotoni. Gouenn gizidik, a vir bepred, daoust da bep tra, e don he c'halon, un emskiant bennak eus he finvidigezh hag eus he galloud a-wechall, evel tudjentil diberc'hennet ! Ret eo bezañ garz evit gallout skrivañ diwar-benn hor pobl frazennoù ken disprizus en he c'heñver hag ar re am eus lennet n' eus ket pell. Petra 'ra kement-se ? Ar re-se n' anavezont ket ar bobl, n'int ket aet da welout ; ar pezh o deus merzet o deus en distummet gant raksoñjoù o spered gallekaet.



Pediñ a ran al loukezion yaouank pe gozh-se da zigeriñ oberoù Jarl Priel. Eno e kavint remed d' o spered pariziat. Dindan e bluenn e vleugn hag e verv fenterezh Tregeriz. Dour glanaüs feunteun Varenton ! Skañvder, bevder, mesket gant pebr hag holen, pezh 'zo a-walc'h.

397

Marteze e vefe mat digeriñ oberennoù Jarl Priel ha lenn ganeoc'h. Met lemm eo ho spered, n' eo ket 'ta ! Petra 'm eus c'hoazh da zeskiñ deoc'h ? Penn-da-benn, n' eus forzh pelec'h, e vo kavet an hevelep mousc'hoarzh. Pe lennit kentoc'h e eñvorennoù yaouankiz, ur blaz ken poblek ganto.

Met pa droan pajennoù Priel, pa dañvaan ar fent-se ken tost d' am c'halon, e soñjan ez eus ennañ muioc'h eget ur c'hoari, muioc'h eget an tech ken tregeriat da doullgofañ ar sotoni, da zic'hwezhañ al lorc'haj, da zifaeltrañ kribell Yann Vras. Evel gant tud va fobl, ez eus amañ ganit, Jarl kaezh, evel prederouriezh subtil, evel un doare evit ar spered da drec'hiñ war an danvez pounner.

Bez' e c'hell un den chom hep gounit arc'hant, hep bezañ kontet e-touez an dud vrudet, evitañ da vezañ ken ampart ha ken gouiziek ha n' eus forzh piv, petra 'vern ? A-us da gement-se e c'hell ar spered kaout e zigoll, ennañ e-unan, ha trec'hiñ gant ar c'hoarzh hag ar goap ouzh an nerzhioù izel ha pampes.

Distreiñ a ra em spered gwerzad ar salm diwar-benn enebourion Doue : « An Aotrou a c'hoarzh goap outo ». Ha soñj ivez eus ur pennad am boa skrivet gwechall diwar-benn c'hoarzh Doue. Koun am eus e oa bet divarc'het a-grenn gant ar pennad-se pezh a oa eus spered ur chaloni, en devoa kavet dizereat a-grenn va menozioù. Gwelet em eus koulskoude abaoe, n' em boa dizoloet netra o skrivañ kement-se.

Ya, ur c'hoarzh 'zo a zo gwellaouriezh, yec'hed speredel, trec'h peurbabel. A-us d' an droug o c'hoari en deñvalijenn, d' ar sotoni gurunet, ez eus un dreistelezh n' hall ket bezañ laeret na lazhet, ez eus un dic'haou a dregerno evel ur c'han en tu-hont d' ar varn diwezhañ, evidout ivez, Jarl Priel, « ar mousc'hoarzh-se a vo da wellañ goap » (1).

(1) frazenn diwezhañ al levr *Va buhes e Rusia*.

## **D'AM MIGNON KOZH**

Va Darempredoù gant Jarl Priel

GWELET em boa Jarl Priel evit ar wech kentañ e Gwengamp er bloaz 1943, evit emvod ar Framm Keltiek. Ur c'hloareg yaouank ne oan ken d' ar c'houlz-se. Gant kalz a zoujañs e sellen hag e selaouen ouzh tud vras an Emsav, hag en o zouez e lakaen Jarl Priel daoust m' en doa skrivet nebeut c'hoazh e-keñver an oberoù niverus a anavezomp hiziv.

Soñj am eus dalc'het eus ur gentel yezhadur roet gant an Ao. Bourdellès diwar-benn urzh ar gerioù e Brezhoneg. Anavezout a rit ar reolenn : ar ger pouezusañ da gentañ ha raktal goude ar verb. Ar c'hentelioù yezhadur a vez dalc'hmat arabadus, met houmañ a oa bet bev dre m' en doa klasket ar c'helenner e skouerioù fall e skridoù Roparz Hemon ha Priel, hag a c'hoarzhe e-keit-se.

Moarvat e oan bet ouzh e saludiñ war un dro gant an Ao. Lec'hvien, person va farrez c'henidik, hag a oa bet er skol war un dro gantañ e Kloerdi Bihan Landreger. Ur bloavezh hepken en doa Jarl warnañ. Gwech an amzer e komze an Ao. Lec'hvien diwar-benn an hini a veze anvet gantañ Jarl Tremel, hag a oa e anv gwirion, met n' em boa ket klevet kalz tra digantañ. Ha neuze an Ao. Lec'hvien a voe lazhet e miz Eost 1944, a-raok m' en doa bet amzer e genskoliad da sevel e oberoù talvoudusañ.

Un nebeut bloavezhioù diwezhatoc'h em boa bet tro d' ober gwelloc'h anaoudegezh gantañ, e skol Sant-Erwan e Ploueg-Ar-Mor, e-doug « Kamp ar Vrezhonegerien » a voe dalc'het eno div wech, e 1952 hag e 1956.

399

Pedet e veze ar skrivagner kozh da zont bep tro gant ar renerien ha plediñ a rae mat gant al labour a c'hortozed digantañ : displegañ ur brezegenn bennak e dibenn ar beurevezh ha marvailhat gant ar vrezhonegerien yaouank. Goude merenn ne dae ket peurvuiañ da vale ganto, re skuizhus e kave mont da redek war an traezh hag ar reier, hag e chome da droiata er skol en ur sachañ war e sigaretenn. Gwech an amzer e veze tapet ganin o kontañ fentigelloù d' ar c'heginerezh hag o lipat bannac'hoù kafe. Lenn a rae ivez kalz etre ar predoù ha goude koan, ha dont a rae da furchal em levraoueg. A bep seurt levrioù a yae gantañ, levrioù en brezhoneg evel just, met ivez en saozneg hag en alamaneg. Ne veze ket spontet gant levrioù tev, er c'hontrol. Un dra am souezhas ur wech : daoust ma lenne saozneg hep an disterañ poan ha hep geriadur ne oa ket bet barrek da zistagañ un nebeut frazennoù er yezh-se ouzh div Gembreadez eus ar C'hamp.

Un deiz bennak e kontis dirazañ un divinadell fentus ; e oan d' ar mare oc'h aozañ an dastumad « 300 Divinadell ». C'hoarzhin a reas leizh e gorf hag e lavaras din « Honnezh n' eo ket kouezhet war an douar ». Neuze e tisplegas din penaos en em gemere da reiñ lufur ha liv d'e yezh. Pa geje gant un dro-lavar saourus bennak e veze adskrivet gantañ ha silet a-ratozh kaer en e skridoù.

Tamm-ha-tamm e savas mignoniezh etrezomp ha digarez hor beze ouzhpenn da genskrivañ pa zeuas kendalc'h Bleuñ-Brug Treger dre ma raen dalc'hmat war-dro kenstrivadegoù ar skolioù. Miret em eus e lizhiri hag o adlennet em eus an deizioù-mañ gant doujañs ha karantez. Holl ez int plijus dre ma klaske dalc'hmat troioù skeudennus, fentus ha hir da zisplegañ e soñjoù, met ivez diaes da lenn a-wechoù en abeg d' e skritur-kazh, d' e skrabadennoù-kazh evel ma lavare eñ e-unan. Siwazh n' eus ket tu d' o embann war o hed dre ma tisplege e soñj dichek diwar-benn tud ' zo eus an Emsav, hag o doa displijet dezhañ e stumm pe stumm.

Evel an holl Dregeriz kar-o-yezh ez on bet meur a wech e pelerinaj e Krec'h-Eliez. E 1956 e oan bet evit an dro gentañ. Fellet en doa din gwelout al lec'hioù taolennet gantañ gant kement a galon en e eñvorennoù, lec'hioù e yaouankiz hag e gozhni : feunteun Soaz Sapeur, e vamm-gozh, an ti bihan war vord an hent, hag a dalveze dezhañ da vurev e-pad ar brezel. Pignet e oan war an dorgenn dre ur wenojennig betek e di hanter-droet war-du kêr Landreger gant hec'h iliz-veur hag he c'hloerdi kozh, war-du stêr ar Gindi ha Koad an Eskopti : dre-holl eno en doa c'hoariet, studiet ha pedet Jarl Tremel.

400

E Itron a gavis gourvezet war ur gwele bihan dirak ar prenestr. Teñval a-walc'h e oa an ti o vezañ ne oa nemet ar prenestr-se warnañ d' ar mare, met alese e c'helle lenn hep skuizhañ re he daoulagad, hag ober ur sell gwech an amzer ouzh ar bed diavaez. Ne oa ket an dro gentañ din d' he gwelout. Graet em boa anaoudegezh ganti e-kerz gouelioù ar Bleuñ-Brug en Landreger, e 1952, e-pad abadenn c'hoariva ar sul da noz. Degaset e oa bet eno war he gwele evit m' he defe he lod eus an enorioù rentet d' he fried : tri fezh an abadenn a oa bet skrivet gantañ (*En-dro da Vari-Sent, an Ankou, Kleñved an Togn*) ha Jarl Priel e-unan a oa e-mesk ar c'hoarierien. E-pad an ehan ez is d' he saludiñ hag he fried e-unan am lakaas d' ober anaoudegezh ganti. En doare ma komze an eil ouzh egile em boa santet diouzhtu ar garantez don ha kizidik a unane an daou bried kozh.

Pa varvas an Itron, e voe kemeret ar plas ouzh ar prenestr leun a sklerijenn gant Jarl Priel. Degaset en doa eno e daol vihan evit skrivañ ha lenn. Ha lenn a rae kalz. Peurvuiañ e veze goloet al leurenn en-dro dezhañ gant ur wrac'hell kelaouennoù ha romantou-polis. Setu kentañ tra a weled pa antreed en ti : Jarl Priel o sellout ouzhoc'h dreist d' e lunedoù diskennet war veg e fri gant e zaoulagad lufre ha bev hag e vinc'hoarzhin hegarat. An ti a oa paour, met ne daed ket kuit hep ur bannac'h hag ar binvidigezh a oa e diabarzh an den : ur galon dener hag ur spered lemm.

Ha setu perak moarvat em eus bourret kement o lenn e levrioù eñvorennoù, dreist-holl an hini kentañ, *Va Zammig Buhez*. Adkavout a raen enno ar marvailher ganet ma oa, barrek da zisplegañ, an eil war-lerc'h egile, traoù tener, fromus pe fentus. Adkavout a raen ivez troioù-lavar ar bobl hag ar gerioù na vezont klevet nemet e Bro-Dreger.

Plijet on bet ivez gant e bezhioù-c'hoari, nemet gant unan, a gav **d**in, *Ar Spontailh*, dre ma ne oan ket deut a-benn da gompren menoz ar skrivagner. C'hoarzh et em eus bet o lenn e gomediennoù ha tañvaet em eus kaerder e zramaoù daoust ma vezont kriz peurvuiañ. War ar poent-se ez eo bet levezonet marteze gant tud evel Montherlant, hag a blije dezhañ kalz. Met ar vuhez ivez a oa bet kriz evitañ alies, hag en e zramaoù kentoc'h eget en e eñvorennoù e c'hellfed marteze dizoleiñ e venozioù.

401

Ur bloavezh, e-doug hañv 1957, e teuas da dremen un eizhtevezh da Skol Sant-Erwan. Meur a gudenn en doa ranket diluziañ a-raok kuitaat Krec'h-Eliez. Ha soñj am eus dalc'het hepken eus an hini bouezusañ : penaos ober war-dro e gizhier e-keit ha ma vefe du-mañ ? Ret e oa bet gortoz distro e verc'h evit ma c'hellfed plediñ ganto.

Fellout a rae din e lakaat da aozañ pezhioù evit ar vugale hag ar re yaouank. Gouzout a raen ne oa ket gwall atahinet war ar c'hinnig, met bez' e oa d' am soñj an doare surañ d' e lakaat da labourat. Ur gambr vrav a oa bet kempennet evitañ, gant ur prenestr troet war ar mor hag inizi Bro-Ouelou, met plijusoc'h e kave mont da vale pe dont da c'hoari gant va c'hazh er gegin eget chom da zuañ paper. Faziet em boa war natur an awen pa greden e c'helled gourc'hemenn dezhi. Dont a reas a-benn memes tra da skrivañ daou bezhig : *Al Louzaouenn Nevez* ha *Yann Seitek*. Diwezhatoc'h e kasas din daou vister evit klokaat an dastumad a zo bet embannet e " Skol " dindan an titl : « *Nedelec en Breizh, Pevar Fezh-C'hoari* » (1).

Met muioc'h eget se en doa lezet ganin : ar soñj eus un nebeut devezhioù

tremenet e kompagnunezh ur den kozh ken plijus e gaoz gant e anaoudegezh eus an dud hag eus ar bed, ken bev e lavar gant e ampartiz war ar yezh komzet, ken brav e zaremprediñ en abeg d' e garantez wirion evit e diegezh hag e vignoned, evit e vro hag he fobl.

(1) E gwerzh e ti SKOL evit 5 lur (C.C.P. Revue SKOL, Rennes 1911 06).

**Roll Oberoù Brezhonek Jarl Priel**

(savet gant Amañs Ar C'halvez)

## PEZHIOU-CHOARI

Embannet war " SAV " :

An Dakenn Dour	25/6	1942
Ar Baleer Bro	26/63	1942
Ar Vatez Vihan	29/4	1943

Embannet gant SKOL :

Nedeleg en Breizh	2/2	1958
Ur wech a voe	2/28	
Al Louzaouenn Nevez	2/39	
Yann Seitek	2/46	

Embannet war AL LIAMM

Tri Deveihour evit an Eost	16/35	17/19	1949
Ar Spontailh (embannet distag gant AL LIAMM			1950
Paotr e Varv Ruz		19/24	1950
En-dro da Vari-Sent		23/21	1950
Gwener Ar Groaz		25/33	1951
Kleñved an Togn (emb. ivez distag)		30/29	1952
Erin Go Bragh	70/336		1958
Gouel Sant Jakez	83/364		1960
Kazh ha Logodenn	90/29	91/116	92/196
Nag a Wad (embannet goude e varv)	112/301		1965

403

## EÑVORENNOU

Va Zammig Buhez (diviet)	1954
Va Buhez e Rusia	1955
Amañ hag About	1957

## KONTADENNOU

Olga	69/257	1958
Ar Vorverc'h	79/72	1960
Vasili	99/261	1963
An Eil Sul goude ar Pantekost	103/101	1964

## ROMANTOU

An Teirgwern Pembroke (embannet distag gant "Al Liamm ") 1959

War Vourzh ar Honeymoon  
(pennadoù tennet eus)

Miss Redfern	58/13	1956
An Intañv	67/91	1958
Bran ar Mezeg	77/398	1959

## TROIDIGEZHIOU

PEZHIOU-C'HOARI :

???, gant J. M. Barrie 72/34 1959

## KONTADENNOU BERR

(troet holl diwar ar rusianeg)

Ul Lizher, gant I. Babel	46/25	1954
Piv eo I Babel ? (ur pennadig gant J. Priel diwar-benn ar skrivagner)	46/23	1954
Ar C'hi, gant Nikolaz Nikitin	42/7	1954
Sachka ar Bugel naoniek, gant V. Ivanovski	49/22	1955

Israel, gant Leon Luntz  
Ur Gontadenn, gant Mikael Zotchenko

65/26 1957  
82/293 1960

## **Prederiadennoù e sigur un nebeut skrivagnerion brezhonek : JARL PRIEL**

Kevrenn gentañ : e c'hoariva

1 E 1949 ha 1950 en deus embannet Jarl Priel an daou reuz-c'hoari o deus diazezet e vrud a zramaour. An hini kentañ a voe moulet e-barzh ar gelaouenn AL LIAMM e dibenn ar bloaz 1949 : " Tri Devezhour evit an eost ". Er bloaz war-lerc'h e teuas er-maez an eil reuzc'hoari : " Ar Spontailh " e stumm ul levrenn distag embannet ivez gant AL LIAMM.

Dramaek ha gwallzoanius eo e gwirionez danvez ar reuz-c'hoarioù-mañ, evitañ da vezañ boutin marteze. E-barzh unan anezho " An tri devezhour... " e konter deomp istor un den a glask tizhout al levnez da n' eus forzh peseurt priz hag e n' eus forzh peseurt doare. « Va levnez... Pa rankfen he dastum emesk ar fank, en ur poullad gwad... » Evit Erwan, an hini kamm, a gar e c'hoar-gaer, n' eus dibab all ebet. Tremen a ra e levnez dre varv e vreur. Ha ma nac'h Mari, an hini garet, e tisoc'h d' an drouklazh dre zroukrañs, ha d' an emlazh dre zic'hoanag.

405

Ken dilaouen all eo testenn ar *spontailh*, o lakaat zoken a-gostez an elfenn varzhus a zo bet degaset ennañ gant ar skrivagner en un doare diakuit a-walc'h, d' am soñj. Setu ur plac'h yaouank lakaet brasez gant un didalvez a zo tec'het kuit. Evit saveteiñ hec'h enor - hag hini an tiegezh, na petra 'ta ! - e taoler etre he divrec'h un den yaouank dianav, deuet ne ouzer a belec'h, seder hag hegarat, hogen na c'hell-hi karout. Pa grog avat da deurel evezh ouzh he gwaz, goude meur a vloavezh dimeziñ, e kouezh klañv he c'hrouadur ha d' e saveteiñ e rank he fried aberzhiñ e vuhez. Dre vras, setu an destenn, lakaet er-maez istor an diaoul a zo un « deus ex machina » penn-da-benn evel ma welimp.

Reuzc'hoarioù a gavomp eta er skridoù-mañ. Hogen n' en deus ket Jarl Priel tennet an danvez anezho diouzh buhez vourc'hizion evel ma c'hoarvez aliesik el lennegezh c'hallek, diouzh buhez kouerion Vreizh ne lavaran ket. Enno en deus livet Jarl Priel an dud diwar ar maez e Treger evel m' en deus o anavezet en e yaouankiz, da lavarout eo e derou ar c'hantved-mañ. En un doare ez eo an oberennoù-mañ - evel re P. J. Helias da skouer - oberennoù istorek kentoc'h eget gwirlivek : savet int bet diwar eñvoradurioù ar skrivagnerion o klask adsevel bed boemus o bugaleerezh. N' eo ket sur e klot an tudennoù en em ziskouez er pezhioù-c'hoari-mañ gant an dud wirion a vev e Breizh e 1965.

Evelato, al livadur-se eus ar vuhez war ar maez hag hi aet e-maez a c'hiz evit darn, a zo ar pep dudiusañ er reuzc'hoarioù-mañ. Pizh tre ez eo taolennet da skouer diabarzh ur vereuri ; ar pezhioù arrebeuri, ar renkador anezho el lojeiz, a zo deskrivet dre ar munud. Anat eo e oar Jarl Priel eus e petra e komz : bevet en deus e tiez seurt-se en e yaouankiz.

Temzoù-spered ar c'hoariva-mañ a zo mat diwar ar maez ivez ; o ferzhioù mat ha fall a zo da gentañ perzhioù kouerion ha perc'henned-douar. Tudennoù Jarl Priel kalet ouzh al labour ha garv ; o soñj a zo dreist-holl gant o danvez hag o gounid ; her c'hreskiñ a fell dezho, prenañ douar an amezeg pa vez tro da vrasaat o **feadra**, dastum ur bern mat e ti an noter (kv. Herri pe Fañch e-barzh " Ar Spontailh ").

406

Lorc'h a zo enno gant o micher a gouerion : ar re a guita an douar a zo

lezireion pe tud didalvez (kv. dispriz Herri er " Spontailh "). Prederiet int ivez gant o labour : ret eo d' an eost bezañ dastumet e poent. Prizout a reont ar re a zo war o zro diouzh maz int gouest d' o harpañ. Yann, ar "Spontailh " a zo ar gwellañ mevel a zo er bed ha rak-se e istimer. Erwan ivez a zo prizet evel ur marc'h labour. An dud-se ne roont netra evit netra. En o darempredoù gant Doue - pe ar bed-hont - en em zougont e-giz marc'hadourion er foar. Rak marc'hadou a reer gant Doue - pe an diaoul, e-barzh " Ar Spontailh " da skouer. God, ar vamm en em werzh d' an diaoul evit saveteiñ he merc'h, ha Yann e unan ivez da seveteiñ bugel e wreg. Arabat bezañ touellet gant vertuz an dud-mañ. An diavaez a gont evito da gentañ. Pa zistro ar verc'h d'ar gêr hag hi dougerez ez eur chalet da gentañ gant brud an tiegezh, e-giz m' em eus merket. Ur gevredigezh kriz ez eo houmañ, hini sklaved boazet da sentiñ hag o klask digolloù, dic'houest da vezañ dieub e nep keñver. Madelezh ebet ne bar e neb lec'h nemet marteze gant Mari, gwreg Weltaz, m' eo e vreur kaer e karantez anezhi. Hogen dre vras ez eo trec'h an droukrañs d' an holl berzhioù all a c'hell kaout tudennoù ar c'hoariva-mañ. Tud wan, a-benn ar fin daoust ma kasont trouz a-wechoù, daoust ma savont war o elloù bep ar mare : Herri a ra van da glask lazhañ e verc'h ; God hec'h unan n' eo ket evit seveniñ ar marc'had he deus graet gant an diaoul. Erwan hepken, ar paour kaezh kamm Tregoat e-barzh " An tri devezhour ", gant e naon du a eurvad, a garantez, gant e gasoni hag e gounnar a seblantfe a-walc'h bezañ nerzhusoc'h met en diwezh, eñ ivez, n'eo ket gouest da ober e soñj da vat. E zroukyoul hag e wall-vennadoù kentoc'h eget e oberoù o deus lazhet e vreur hag ar vaouez a gare war un dro.

En em c'houlenn a reer a-wechoù perak en deus dibabet Jarl Priel livañ kouerion Dreger e-barzh e bezhioù-c'hoari. Moarvat ez int buhezek tre ha gant pennadoù zo eus ar skridoù-mañ ez eus liv ur wirionez skodegus. Ar pennadoù-se avat a c'hellfe diboan kaer bezañ distaget diouzh an oberenn hec'h unan ha graet anezho kontadennoù berr e stumm divizoù, lakaomp. Disfiz am eus avat ne oa ket ratozh pennañ ar skrivagner livañ peizanted Treger evel m' en deus o anavezet. Hag amañ e stagan da zirouestlañ kudenn ar marzherezh er pezhioù-c'hoari-mañ. Ar pep pouezusañ a zo enno, dres, e oa emichañs, e soñj ar skrivagner, an elfenn voliac'hus a zo bet degaset dezho. An talbennoù o unan hen diskouez peogwir e aroueziont ar burzhud a zo e diazez an oberennoù-mañ : lazhet eo bet Gweltaz ha Mari gant Kain, an Ankou ha Youdaz. Yann n' eo nemet ur spontailh met buhez ha personelezh dezhañ gant an diaoul e unan.

A-raok klask reiñ ur ster d' ar marzherezh-se e lavarin da gentañ n' on ket a-du tamm ebet gant an implij anezhañ er c'hoariva. Terriñ a ra dramaegezh ar pezhioù-c'hoari-mañ peogwir ne glot tamm ebet gant an destenn hag an aergelc'h anezho a-hend-all. E-giz ma ouzer, kredapl e rank bezañ ur marzherezh evit bezañ degemeret el lennegezh. Moarvat en deus soñjet da Jarl Priel e oa Breizh bro mojenn an Ankou ha me ' oar-me, hag e oa dereat tennañ implij eus kredennoù tud ar bobl. E gwir, an diaoul eus " Ar Spontailh " a zo difluket hanter eus ar folklor, hanter eus ar c'hatekiz. A-benn ar fin ez eo ur paour-kaezh diaoul hanter e kartoñs-poazh hanter danvez plastik ha na ra aon da zen peogwir ne c'hell den krediñ ennañ. Ur bourc'hiz bihan ez eo an diaoul-se e gwirionez, ha n' eo ket gwall subtil a-hend-all. Ar pezh a zo kasaus avat e-keñver dramaegezh eo e vir hevelep tudenn a reiñ ur framm start d' ar pezh-c'hoari. Kement a c'hoarvez a hañval tidel, evit netra, hep penn na lost. Rak-se ivez ne c'heller bezañ na dudiet na fromet, - hep kontañ ne c'heller ket tommañ ouzh tudennoù a zo diwirion krenn, an « eontr » da gentañ penn, hag ar re all o deus darempredoù pemdeziek gantañ.

E-giz m' em eus notet, klasket en deus Jarl Priel end-anat ober « breizhek ». Deuet eo a-benn evit darn hag e gouerion peurvuiañ a zo gwirion a-grenn ha rak-se moarvat o deus plijet skridoù an aozer da zalc'herion Skol ar Falz. Hogen c'hwitet en deus, war va meno, oc'h esa ober gant un « dreistnatur » lu pe aroueziel hepmuiken.



dregorfoniezh bennak. Tudennou a zo ne vefent neuze nemet arouezennoù a zlefed jubenniñ. Manikeouriezh, holleneadegezh pe dreuzannezerezh-ene a c'hellfed damwelout evel-se a-dreuz darvezadur ar " Spontailh ". Istor ar "Spontailh " a zo e gwir un istor a dreuzannezerezh-ene : Ene Yann a zo bet gwechall hini ur morlaer. Anv a raen eus holleneadegezh. Setu komzoù God : « Al loened hag ar vugaligoù nevez deuet d' ar bed a zalc'h soñj eus traoù kuzhet ouzhimp ». Ha Mon en " Tri devezhour... " : « Al loened, Erwan, a wel hag a c'hwesha meur a dra kuzhet ouzh an dud ». Manikeouriezh bremañ : Korf Yann a zo bet krouet gant an diaoul ; « *Plouz ha ludu a zo, damdost, an hevelep loustoni, kwita* ». Ur c'hrouer ez eo an diaoul evel Doue e unan. Hag e gwirionez en em zoug an eontr evel un Aotrou Doue faltaziek, froudennek ha drouk, hep madelezh na truez ebet. Marteze ivez e vefe tamallet ar C'hrouer a-dreuz an Diaoul. Ha Yann an " Dañvad ", e-giz m' eo anvet gant Herri, a vefe ar C'hrouadur dinamm a damallfe e Grouer digalon. Pezh a gadarnafe ar goulakadur-mañ eo ar frazenn a gaver e-barzh an " Tri devezhour.., " : « Doue leun a furnezh hag a vadelezh, eme ar veleion... » hag a zo goapaus end-anat. Pe ivez ar perzh a vez prestet d' an diaoul war e grouadur : a-walc'h eo d' an diaoul-krouer chom hep teurel evezh ouzh an hini en deus tennet eus an Netra evit ma teufe hemañ da vezañ plouz endro. Karantez en deus an diaoul evit Yann a-hend-all, daoust d' ar garantez-se bezañ « pennboellek pe droet war an tu-gin ». Dre vras e klask Jarl Priel digareziñ an den dirak Doue. E-barzh an " Tri devezhour... " da skouer e tiskleir Erwan e ser e garantez evit e c'hoar-gaer : « N' em eus ket mezhañ bezañ nammet... N' on ket kiriek ». N' eo ket mui war e wall bezañ nammet a gorf eget a spered. Ha Mari hec'h unan er memes pezh-c'hoari a lavar : « N' eus den kiriek en ti-mañ... » A-hend-all, diwar c'hoari ha dre chañs hepken e vez divizet tonkadur an dud. Skouer : ar c'hoari kartoù en " Tri Devezhour... " azisoc'ho da varv an daou bried.

Evit anzav ar wirionez ne gredan ket penn-da-benn er jubennadur-mañ, ha betek gortoz e kavan gwell degemer en deus ijinet Jarl Priel steuenn e bezh-c'hoari " Ar Spontailh" dreist-holl evel ur mekanikadur dramael, di-ster a-grenn, mennet evelato da reiñ un arliv kevrinek - pe vrizh-kevrinek - ha breizhek - pe vrizh-vreizhek - d' ar pezh-c'hoari.

Estreget ar vrizh-kevrinegezh-se a zo evelato er pezhioù-c'hoari-mañ. Barzhoniezh a zo ivez. Pennadoù zo ned int nemet barzhonegoù e yezh-plaen gouestlet d' an natur ha dreist-holl d' ar mor « kanañ a ra ar mor o tarzhañ gwagenn ha gwagenn war ar bili... » pa zegoun Yann hep gouzout dezhañ ar beajoù en deus graet gwechall a-dreuz ar morioù war e lestr kourser.

409

Kaer eo yezh ar pennadoù-mañ, kellusket brav hag heson. Da eo merkañ evelato ez eo gwell a galz hini ar " Spontailh " eget hini an " Tri devezhour ". E-barzh " Ar Spontailh " en deus gouezet Jarl Priel implijout ur brezhoneg klasel tre, o kempouezañ mat an elfenn boblek hag an elfenn lennegel rik, start ha resis peurvuiañ. Ar yezh-se moarvat, daoust ma ra gant doareoù-lavar poblek rik, ned eo ket poblek e gwirionez (penaos e c'hellfe bezañ en deiz a hiziv ?) : c'hoarvezout a ra gant God zoken komz e-giz Kikero. E-giz m' emañ avat, dre al liesseurtiezh hag ar binvidigezh anezhañ, ez eo stumm-skrivañ Jarl Priel e-barzh " Ar Spontailh" dreist-holl e-touez ar re wellañ.

2.

Estreget ar pezhioù-c'hoari-mañ a zo hirik a-walc'h en deus skrivet Jarl Priel eveljust. Un toullad pezhioù-c'hoari berr en deus savet ivez.

Unan evel " Paotr e varv ruz " a voe embannet e 1950 e-barzh AL LIAMM a zo dedennus dre ma tenn an danvez anezhañ da hini an daou zrama emañ o paouez komz anezho. Dedennus eo ivez dre m'eo stag ouzh prouiadoù ha skiantprenet Jarl Priel e Rusia hag e Polonia e tro ar brezel bed kentañ. Tennet en deus ar skrivagner an destenn anezhañ diouzh darvoudennoù c'hoarvezet - pe a c'hellje bezañ c'hoarvezet - e-kerz ar brezel etre komunourion hag enep-komunourion e Rusia war-dro 1921. Berr-ha-berr e konter deomp penaos eo deuet un ofisour en arme

wenn a-benn da lezel bourreviañ ha lazhañ e vab a oa bet soudardet gant ar re ruz hag en doa dilezet lu ar re-mañ evit dont da gavout e dad. Hemañ n' hen anavez ket diouzhtu. Kemeret eo ar mab evit ur spier ; jahinet eo, anzav a ra pezh a garer, ha lazhet eo. War-lerc'h ar muntr hepken e anavez an tad e fazi.

Kriz eo an darvezadur adarre evel ma weler. Evitañ da vezañ berr ez eo aozet mat ar pezh-c'hoari ha fromus ez eo. Rentet mat ha livet pizh ez eo aergelc'h an un isba rusian , flamm eo liv-al-lec'h. Hogen, war un dro, ar gouerion a zo diskouezet deomp a zo buhezek ha dre ar yezh a gomzont e lakaont da soñjal hep mank e kouerion Vreizh. Moarvat ez eo ur yezh c'hros ha dizoare a-wechoù hogen a zere a-walc'h ouzh an temzoù-spered gouez a dud a zo o vevañ dirazomp.

410

Peseurt menoz a vefe e diazez ar pezh-c'hoari-mañ. Moarvat n' en deus ket fellet da Jarl Priel diskouez tezeñ ebet, nemet moarvat krizder ar brezel hag an tonkadur a-wechoù. Dre-vras, menoz an tonkadur eo a zo anat e pezhioù-c'hoari J. P. Erwan e-barzh an " Tri devezhour... ne oa ket kiriek d' e wall-c'hoantegezh. Lebediev a zo deuet da vezañ kriz ivez ; hogen gwallet ha lazhet eo bet e wreg dirazañ gant ar soudardet ruz : ul loen gouez a zo bet graet anezhañ ; kiriek n' eo ket ; an darvoudoù ha fallagiezh ar re all ne lavaran ket. Ha paotr e varv ruz a lazhe e vab hep gouzout dezhañ dre m' eo deuet da vezañ ul lazher a vicher, en abeg d' ar brezel end-eeun. Evel e-barzh OEdipous eus Sofokles e ra an dud an droug dre m'eo tonket dezho, dre maz int dall netra nemet binvioù etre daouarn an Tonkadur. A c'hell bezañ ez eo bet dedennet Jarl Priel gant ar c'hoariva gresianek kozh elec'h e oa displeget hevelep meizad alies. Darn eus Elektra en deus troet da skouer (kv. niverenn diwezhañ " Al Liamm "). E gwirionez ne ziskouez tudenn ebet eus c'hoariva Jarl Priel kaout gwir frankiz ebet. Hini ebet n' eo kristen da vat rak evit-se e rankfent anzav da gentañ o c'hiriegezh ; setu dres pezh a zistaolont avat. War ar re all, war ar bed tro-dro, war Zoue a-benn ar fin e sammont an droug a reont.

3.

Gant ar pezh-c'hoari fentus "Endro da Vari-Sent " embannet e-barzh niverenn 23 AL LIAMM e Du-Kerzu 1950 ez eo distroet Jarl Priel d' ar c'hoariva skañv en doa pledet gantañ da gentañ penn.

" Endro da Vari-Sent " a dremen e Breizh ha moan a-walc'h eo an destenn anezhañ. Ur paotr yaouank kozh a zo o vevañ e unan en ur vereuri gant ur vatezh kozh. C'hoant a-walc'h en deus da zimeziñ hogen ne dizh ket ober ober e venoz da vat. Goulennet en deus evelato digant ur wrac'h kozh mont da vazhvalan evitañ. Houmañ he deus dineizhiet ur goantenn e Landreger, ur bennhêrez yaouank pinvidik mor **ha** leun a berzhioù-mat. E-keit-se e tegouezh e vignon Alan a ginnig dezhañ e gas da Landreger war-dro Mari-Sent. Klask a ra deskiñ dezhañ penaos ober al lez d'ur plac'h yaouank. Pa glev Fañch avat ez eus meur a hini e soñj dimeziñ gant Mari-Sent e kav gwell chom hep en em lakaat war ar renk. En em sakañ a ra er gwele, dindan ar pallennoù - nemet en diwezh holl e sav o soñjal e vo graet goap anezhañ er barrez dre ma n' eo gouest da gavout ur wreg da zimeziñ.

411

Un destenn dister ha tanav evel ma lavaren bremaik. E gwirionez n' en deus klasket ar skrivagner nemet lakaat an arvesterion da c'hoarzhin. Ha deuet eo a-benn dre silañ pozioù a furlukinerezh bep an amzer. Da skouer, Alan oc'h ober skol da Fañch diwar-benn penaos ober al lez d' ur plac'h - pe, c'hoazh, p' emañ Fañch gant an hik hag ar re all o klask terriñ dezhañ ; erfin p' en em lak Fañch er gwele ha pa c'harm da c'hervel e vatezh ur wech ouzhpenn.

Drant ha leun a veoder, prim hag herrek ez eo ar pezh-c'hoari-mañ daoust ma ne c'hoarvez darvoud ebet ennañ. Kement-se moarvat en abeg d' an tudennoù o unan a zo buhezek ha livus kenañ, evito da vezañ divizel war un dro. A-hend-all ez eo daskoret mat er pezh-c'hoari-me aergelc'h ur vereuri e Breizh, evel e pezhioù-c'hoari all Jarl Priel.

Moarvat ez eo ar yezh hec'h unan darn eus ar beoder-se. Unan druz a-walc'h ez eo e gwirionez, elec'h e talc'h ar ger « revr » - e-touez re all - ul lec'h enorus meurbet. Hevelep yezh moarvat a zo da gentañ penn ur yezh wazed a gaver e-touez paotred o vevañ kenetrezo : galleg ar c'hazarnioù hag ar skolajoù, da skouer, a zo heñvel kenañ ouzh ar brezhoneg-se hag ennañ e talc'h ar gerioù evel « merde » pe « chier » ur renk eus ar c'hentañ. Ha da anzav ar wirionez - digarezet al lenner an distro-prezeg-mañ - ar seurt yezh n' eo ket deuet mat atav d' ar merc'hed ha soñj am eus e tamalle ur vaouez - a ouie gwell brezhoneg eget galleg hogen a oa a-du gant ar galleg - d'ar brezhoneg bezañ ur yezh c'hros. Dibab ar galleg a oa eviti dibab ur yezh seven ha flour. Bezet pe vezet, da veur a hini emichañs e plijo seurt yezh evelato, dre m'eo « poblek ». Ne gredan ket avat e c'hell ar boblegezh-se diouti hec'h unan bezañ un uhel pal.

412

Aet on un tammig diwar va arroudenn. Ur ger bennak a garfen lavarout bremañ diwar-benn ar pezh-c'hoari kentañ a embannas e 1942 an " Dakenn dour ". N' eus anezhañ nemet un tammig pezh-c'hoari berr a dremen etre ur pesketour Gwilho, e wreg Kato hag ur glaskerez-vara. Nebeut a dra eo adarre an destenn. Ar pesketour a zo o tont diwezhat d' e verenn ; e wreg Kato a zo aet skuizh ouzh e c'hortoz hag a nac'h reiñ boued dezhañ. Bec'h a sav etre an daou bried. Gwilho a ginnig skeiñ gant e wreg hag houmañ a zo prest da vont da gerc'hat an archerion. E-keit-se avat e tegouezh ur glaskerez-vara a ali Kato da chom hep respont d' he gwaz : a-walc'h e vo, emezi, derc'hel en he genou ur banne dour sorset. Kato a ra diouzh kuzul ar baouez hag an daou bried a zo adunvanet a-barzh pell.

Ur pezhig-c'hoari kentelius, poblek dre m'eo kentelius, setu pezh hon eus amañ, ha netra ken. Savet eo bet a-ratozh evit tud diouzh ar bobl en ur c'hornig a Dreger ha moarvat e oa graet diouzh plijout dezho : poltredoù anavezet oa adkavet ennañ gant an arvesterion : hini ar pesketour mezvier, ar wreg tagnouz, e klaskent c'hoarzhin diwarno evit chom hep leñvañ.

(da genderc'hel.)

#### LEVRIOU WAR BAPER KAER

GEOTENN AR WERC'HEZ gant J. Riou  
5 war Rives niverennet . 8,50 lur  
5 war Alfa niverennet .. 5,50 lur  
AMÃÑ HAG AHONT gant J. Priel (290 p.)  
war Rives niverennet 15 lur  
DREMM AN ANKOU gant Abeozen  
war Arches 7 lur  
EVIT KET A NETRA gant R. ar Mason  
war Arches 8 lur  
ISTOR AL LENNEGEZH gant Abeozen  
war Alfa 15 lur  
war Rives 20 fur  
AN TRI BOULOMIG KALON AOUR gant Roparz Hemon  
war " Marais " 22 lur  
war " Lafuma " 18 lur

## **An Tad Aleksî PRESSE, Abad Boken**

D'AR re a vev en darvoudoù o-unan eo diaes a-walc'h peurliesañ anavezout o fouez gwirion. Ar re a ra nebeut a drouz, ar re n' o deus ket evito na galloud an niver nag hini an arc'hant, ez omp techet da sellout outo evel ouzh tud dister. Moarvat an Tad Aleksî Presse en devoa lakaet da gomz diwar e benn, an dud a Iliz da vihanañ, p' en devoa ranket kuitaat Abati Tamier, ha dont endro d' e eskopti evit en em repuiñ dindan warez an aotrou Serrand.

Meur a hini ne welent aze nemet avantur speredel, personel, un den o klask en em zifreñ du-hont, e kreiz diaesamantoù a bep seurt : un afer n' he divije arc'hoazh ebet.

Ur souezh a oa bet gwelout an Tad o prenañ rivinoù Boken, atredoù kollet e-kreiz ur vro yen, gleb ha priellek, pell diouzh pep tra, pep kêr, hep hent ebet pe dost evit mont betek enno. C'hoazh bremañ, ha goude m'eo bet goudronet hag adreset un tammig ar chaoser, n' hellan ket chom hep en em c'houlenn pet gwech e ranker treiñ-distreiñ, diwall d' en em goll, a-raok tizhout ar pal e fin an hentoù.

War dachenn ar spered, ne glaske ket an Tad Aleksî, kennebeut-all, an aesamantoù. Petra ' oa evit al lodenn vrasañ eus an dud a vremañ, distreiñ da wirionez Reolenn Sant Benead, pa oa dija evito sant Benead un dra gwall-gozh, zoken goude bezañ bet adwelet hag adreizhet gant tud nevesoc'h ? Met dres, distreiñ endro da wirionez sant Benead a oa e soñj an Tad Aleksî adkaout yaouankiz ar vuhez vanac'h.

Klaoustre penn da benn !

414

Aet on d' e interamant. Ur bern tud diredet a bep lec'h. Menec'h evel just : holl vanatioù Breizh o devoa kaset tud. An holl eskoptioù a oa aze, an arc'heskob, an holl eskibion pe dost ; reoù 'zo, dalc'het gant ar Sened meur, ne oan ket er vro. Beleion e-leizh. Tud eus ar bobl niverus ha stank.

Setu m' en em gavemp holl en iliz an abati, a oa bet kavet gant an Tad, didoenn, ar prenestroù toull, o bannoù zoken aet da get, torret pe laeret, ar mogerioù dirapar, an drez hag ar gwez o sevel a bep tu. Ha bremañ dirazomp e oa pep tra adreset pe dost, leur, mogerioù, prenestroù, toenn. Hag an Tad aze e kreiz, en e arched digor c'hoazh, hervez giz ar Sistersidi, evel o kousket e peoc'h.

Koulskoude, Boken da welout diouzh an diavaezioù, ha goude m' eo bet adsavet al lojeriz hag an Iliz maz eus ket kavet arc'hant evit hen ober, pezh a zo ur burzhud, Boken a chom gant un toulladig a dud hepken. C'hwitadenn pe ziougan ?

Klaoustre penn da benn !

Evidon-me, diougan !

Tregont vloaz a-raok ar Sened meur, en deus an Tad Aleksî laket da vont ar soñjoù diazez a vo re ar vuhez relijius evit an Iliz da zont. Emañ dija ar manatioù all o 'n em stummañ dioutañ. Trec'het en deus.

N' ouzomp ket betek pelec'h ez aio e levezon. Pezh a zo souezhus koulskoude eo gwelout c'hoazh en Iliz levezon ar Gelted, ha goude ma seblantfent bezañ nebeut a dra, o levezon speredel o tarzhañ evel un taol kurun.

Pa lavaran levezon ar Gelted, ec'h ouzon petra lavaran. An Tad Aleksî en em sante kelt, penn-kil-ha-troad. Anzav a rae n' en divije ket bet ar soñjoù a oa e re, n' en divije ket en em gollet en ur seurt avantur, ma ne vije ket bet breton a ouenn vat hag a spered frank. Un tech anat a zo ennañ da lezel al lec'h kentañ da c'hwezh ar Spered santel, ha n' eo ket d' ar reoliadurioù : taolit pled e oa an Tad Aleksî un den barrek kenañ war ar Gwir kanonek ; nac'het en deus bepred evelato skrivañ evit Boken reoliadurioù resis.

\*

Gwelout a ran n' eo ket gwall-vev ar skeudenn a roan deoc'h eus an Tad Aleksî. Kentoc'h eo din lezel da gomz ouzhoc'h eñvoradurioù unan eus e vignoned fealañ, an Doktor Grall :

415

Ur seurt « Fioretti » saourusoc'h evidomp eget re sant Fransez.

\* Un deiz e welis o tegouezhout e Tamier, unan a zo bremañ Kardinal hag arc'heskob. M' ho piye gwelet anezhañ ! Un druez a oa e welout ken kastiz, ken disliv, ken skuizh ma oa. Skuizh-divi !

Goulenn a reas diganin ur steudad temoù evit ar prederiadurioù a oa e soñj d' ober evit ur retred en hon ti.

Kemer a ris ur vazh en ur c'horn, ha lakaat anezhi etre e zaouarn, ha lavarout dezhañ : « Dalc'hit 'ta, setu amañ danvez evit ho prederiadurioù. It da bourmen bemdez er menezioù. Ezhomm hoc'h eus a-grenn eus kement-se. Un urzh ez eo ! »

\* Pa welan un nevezriad o vezañ skuizh, e lezan anezhañ da gousket diouzh ar beure, ha goulenn a ran digant paotr al lizhiri degas dimp un tamm kig pe ur jelkennad morzhed-houc'h evitañ, met evitañ e-unan-penn.

Gant kement-se ec'h heulian Reolenn sant Benead, a zo larkoc'h eget na greder.

Pa ra skorn da faoutañ ar vein, e c'halvan a-wechoù va menec'h hag e ran dezho ur banne-flip tomm-mat. Ne c'hoarvez ket alies vat.

\* Hag-eñ e tebromp kig a-wechoù ? Ne brenomp gwech ebet, met c'hoarvezout a ra ganimp debriñ ur wech an amzer. Da skouer pa zegouezh gant gweladennerion an hañv, lezel dimp restachoù o fred. Ur pec'hed brasoc'h a vefe lezel an traoù-se da vont da goll.

Hag ivez, evit ar gouelioù bras, e c'hoarvez dimp lazhañ ur yar gozh, a fell dezhi chom hep dozviñ ken : kement-se a zo ivez hervez ar Reolenn.

\* Gwisket fall on ? Petra 'ra se. Amañ emamp e kreiz ar maezioù, er fank. Perak e fell deoc'h e vijen gwisket gwelloc'h eget ar venec'h all, me an Tad abad ? Holl ez omp eus an hevelep tiegezh.

Evel just, pa 'z an d' ul lid bennak, evel gouel St Erwan, e lakan ar pezh am eus evit-se, met ar paour kaezh sae a zo ken kozh ha me, ha didoulet eo bet meur a wech.

\* O ya ! Soursioù bras a zo war va spered a-wechoù ! Dreist-holl pa dosta an amzer-echu da baeañ un dra bennak.

416

Ober a ran neuze ur pirc'hirinded berr da chapelig Sant-Jozef e Koad-Meur Boken ; hag ec'h aspedan anezhañ da zont d' am sikour. Dibaot gwech goude-se e choman hep resev peadra d' en em zieubiñ. Ret eo en em goll gant ar fiziañs e Doue. N' on ket bet dilezet gantañ.

\* Pa oa o paouez degouezhout e Boken, e veze kalz eus ar weladennerion a lavare dezhañ : Tad, gant ar stumm a gemerit ne vo biken adsavet ho manati. - Ar beurbadelezh am eus evidon !... Ned on nemet un niverenn. War va lerc'h e vo reoù all, o kas an traoù war-raok.

\* - N' en em douellan ket. Keit ha ma vin en buhez, e vevo Boken, netra ken. Met goude va marv e welot ar manati kozh-se oc'h adkemer e splannder a-wechall.

Gwelout a rit an Tad Foucauld. N' en deus ket gallet e-pad vuhez lakaat un all da vevañ gantañ.

Ha bremañ Breudeur vihan Foucauld a zo ur bern anezho.

\* Pell diouzh ar vro eo d' an den dizoleiñ gant souezh an ereoù a stag anezhañ ouzh douar e dadoù : hag e verz pegement e vez karet gantañ.

\* Ya, hen karout a ran, ar chouanerezh-se eus Bro ar Menez, va bro ! Ho lakaat a rin d' ober tro ar Chouaned. Adkavout ar Mirlitantouille, Le Gris Duval, rouantelezh Bignan. Diskouez a rin deoc'h al lec'h ma voe gloazet ar Rouerie ; dizoleiñ an hentoù-kleuz, a gase ar Chouaned ac'han betek Kadoudal.

\* Esperet em boa o tont e Boken, stummañ un abati brezhon da vat. Met n' em eus ket bet tud o tont din eus Breizh-Izel.

Er soñj-se em boa berniet levrioù brezhonek el levraoueg, ha levrioù diwar-benn Breizh. Fellout a ra din ec'h anavezfe va menec'h danvez Breizh.

Gortozomp da welout petra fell d' an Aotrou Doue ober.

\* Goulenn a rit diganin penaos em eus addegaset amañ relegoù divroet hor sent kozh ? Un danevell hir e vefe ma vefe kontet penn-da-benn.

Pa dremenenn dre Bariz e oan kustum da vont da lavarout an oferenn en iliz Sant-Jakez du Haut-Pas. Bep gwech e oan dedennet ha nec'het gant relegoueroù poultrennek pignet war lein armelioù ar sekretiri. Ur beure ma oa aze ar person e komzis gantañ diwar o fenn : deskiñ a ris e oa dalc'het enno relegoù eus ul lodenn vras eus hor sent kozh.

417

Ar person a oa un den mat, digor e spered, hag ouzhpenn-se, a gredan, ur protestant distroet d' ar Gatoligiezh, ar pezh a leze anezhañ diseblant a-walc'h ouzh kehelerezh ar relegoù.

Evel-se on deuet a-benn, gant asant ar pennadurezhioù, da zegas en-dro d' o bro ar relegoù santel-se. Ha Boken en deus an enor d' ober gward warno bremañ.

DEIZIADUR GODELL 1966

An dek 4 lur

Ne vez ket gwerzhet a-unanoù

Distaol bras evit 500 ha 1.000 skouerenn

Kasit ho chekenn gant ho koulenn da R. HUON,

2, Venelle Poulbriquen, Brest - C.C.P. 1629-14 Rennes

**A-DREUZ-LENN**

G. P.

## STUDIENNOU KELTIEK

Christian-J. GUYONVARC'H - Dornlevr an iwerzhoneg krenn, en Ogam 16 (1964) 485-488 ; 17 (1965) 205- 208. (Koumanant : 50 F gant ar stagadenn vrezhonek ; P. LE ROUX, B. P. 2, 35-Rennes ; C.C.P. 29 368 Rennes).

J. R. F. PIETTE - Some Problems of Middle Breton Phonology and Spelling, e Bulletin of the Board of Celtic Studies, 21/2 (1965) 121-133.

Léon FLEURIOT Mélanges brittoniques, en Etudes Celtiques, 11 (1964-65) 137-164.

Luis MICHELENA - Románico y circunrománico sobre la suerte de latin « ae », en Archivum (Universidad de Oviedo) 14 (1965) 40-60.

Frealzus eo gwelout o vont war gresk niver an studiennoù gouestlet d' ar yezhoù keltiek ha d' ar brezhoneg dreist-holl. Diaes int da gavout, a-wechoù, dre m' emaint strewet e lies kelaouenn hag ivez dre ma c'houlennont alies meur a anaoudegezh war ar yezhoniezh. Un nebeut re anezhe am eus dibabet amañ evit reiñ d' am c'henvroiz un tañva eus ar pezh a vez graet bremañ, met Al Liamm n' eo ket ur gelaouenn gouestlet d' ar yezhoniezh ha neuze e klaskin chom hep reiñ re a vunudoù.

Anavezet mat eo al labour espar graet gant ar gelaouenn Ogam a embann bep bloaz abaoe 1948 ur seizh kant pajenn bennak diwar-benn an arkeologiezh, ar voneizawouriezh, istor ar relijionoù, ar yezhouriezh hag ar yezhoniezh keltiek. Gwecharall ez embann ivez ur stagadenn vrezhonek, met paouezet he devoa. Perak ? *Ni anse*, « n' eo ket diaes » evel ma lavare an Heniwerzhoniz ; dre ma veze lennet aketus Ogam gant an holl geltiegourion eus ar bed, nemet gant ar vrezhonegerion a gave o gwalc'h gant sorc'henoù brizhouiziek war o hendadoù : war am eus klevet, 95 % eus koumananterion OGAM n' int ket brezhon. Ar pezh na viro ket ouzh Brezhoned zo a ober « emskiantek » anezhe... Ur vezh eo ; e lavarout a ran krenn ha krak. N'eo ket gant sodien na gant tud na anavezont ket o hengoun istorel, relijiel, lennegel, e vo adsavet hor bro, nag hor yezh. Re hir e ve menegiñ an holl studiadennoù bet embannet gant OGAM, e galleg, hag a denn d' hor gwirionañ sevenadur hag a rankje bezañ anavezet gant an holl. E galleg... Evel-reizh, gant na felle ket d' ar Vrezhoned vrezhoneger skoazellañ ar gelaouenn. Abaoe 1964 avat ez eus bet adkroget gant ur stagadenn vrezhonek, fonnus, sonn ha reizh, ha souezhet on bet dre na welen danevellskrid ebet war he divout e kelaouennoù ar vro. Ha padal an *Notennoù a c'herdarzhadurezh* gant C. Guyonvarc'h, koulz hag an *Notennoù a relijionouriezh* gant F. Le Roux a zegas sklerijenn war gudennoù chomet rouestlet betek amañ.

419

Eus un oberenn all e fell din komz avat : an dornlevr krenn-iwerzhoneg bet savet gant an Ao. Guyonvarc'h. Evit a ouzon, bete-vremañ, n' eus bet savet met un dornlevr krenniwerzhoneg, hini Dottin, hag eñ fall a-walc'h, luziet, ha diviet ouzhpenn. Hini ebet en Iwerzhon a lavarar dieub ha keltiek ne glaskas sevel ul levr-deskiñ dereat evit an holl re a c'hoantafe dont da anavezout gwelloc'h kaerañ lennegezh ar grennamzer. Merzout a reer an diaesterioù a gavas dirazañ an Ao. Guyonvarc'h a zo hep mar unan eus ar re anavez ar gwellañ, war ar c'hevandir, ar yezh-se hag he lennegezh : meur a droidigezh en deus embannet endeo hag a chom un testeni eus e ouiziegezh don. Arabat en em douellañ : diaes eo ar c'hrenniwerzhoneg ha n' eo ket diwar labourat war ar sul hepken e teuer a-benn d' e zeskiñ mat. Met diaes e oa - dreist-holl dre na gave ket ar studier a youl vat ur benveg dereat d' e zeskiñ. An dornlevr-mañ zo bet savet evit tud n'

int ket yezhoniourion na yezhourion ; kemer a ra ur 8krid (Táin bó Fráech « Skrapadeg saout Fráech ») hag e tiskler pep diaester a-feur ma teu war wel ; lakaomp e ve - mutatis mutandis ! - ur meni « Assimil » o kompezañ hent al lenner. Heuliet e vo gant ur yezhadur hag ur geriadur. Ar vrezhonegerion « emskiantek » n' o devezo digarez ebet hiviziken da chom hep gallout adkavout ar geltelezh wirion anataet gant henvojennoù Iwerzhon. Lavarout a rin ouzhpenn ez eus stad ennon pa welan hor yezh implijet evit labourioù a dalvoudegezh etrevroadel evel hemañ. Ha keuz ivez, pa soñjan en niver ken bihan a dud, e-touez an holl re a embann ken fougüs o brezhoned, a ro o skoazell d' ar gelaouenn-se ha d' hec'h embannadurioù.

E saozneg eo bet embannet studienn Arzel Even war ar c'hrennvrezhoneg. Ne fell ket din amañ he barn dre ar munud. Evit traoù zo (lec'h krBr. **ç**, da skouer, e reizhiad kensonennel ar brezhoneg krenn) n' on ket a-du penn-da-benn gant an aozer, hag e zisplegañ a rin un deiz en Yor Yezh. Met amañ e fell din pouezañ dreist-holl war dalvoudegezh ar studienn dre vras. Tri zra a studi Arzel Even : ar skrivad **z** etre sonenn ha **l, r, n** (sk. krBr. **breuzr, Grazlon, aznauout** « breur, Graelen, anaout ») ; aroueziadur ar sonennoù fronellek , ar skrivad **c** en dic'hallekadurioù krennvrezhonek. Aketus-tre eo al labour-mañ hag a zegas meur a sklerijenn war gudennoù diaes ; n' eus nemet tud hegreidik evit soñjal ez anavezer pep tra ar c'hrennvrezhoneg ; e zistagadur dreist-holl a chom kevrinek a-wechoù en abeg d'un doare-skrivañ levezonet betek re gant hini ar galleg ha na c'halle ket aroueziañ azas (1) soniadoù hor yezh. Dre chañs evidomp e teuas betek ennomp kalz skridoù barzhoniel hag a drugarez da reizhiad espar ar gwerzaouañ gant hor c'hrennvarzhed e c'hellomp dirouestlañ meur a dra evel en diskouez an aozer.

420

Diouzh e du, L. Fleuriot a embann notennoù prizius-tre war ar c'heriaoueg kozh. An holl a oar pebezh furcher ampart eo an Ao. Fleuriot oc'h adkavout en dianavezetañ dornskridoù elfennoù prizius kenan eus hon hêrezh yezhel bet kollet gant ur bobl dizesk ha dizamant ouzh he yezh. E-touez re all, setu an henvrezhoneg latinekaet « Portus Limerçi », deut da vezañ Pont-Limier, nepell eus Dol. Diskouez a ra hon eus amañ an anv brezhonek gwirion, a vete \* lemarc'h, ls. \* lemerc'h hiziv, eus an « istr » (o tont hemañ eus al La. *ostrea*). Diskouez a ra anat ivez bezañs **le**, e-kichen **lec'h**, e brezhoneg, ar pezh a gadarna eleze (GIB 629), krBr. **elese** = \* **el le-se** ha neket \* **el lec'h-se** evel ma kave da dud zo. Talvoudus eo dreist-holl studiadennoù L. Fleuriot dre m' o c'haver er gelaouenn a geltiegouriezh embannet gant Skol-Veur Paris, na embanne ket kalz brezhoneg (nemet ur studiadenenn gaer an Ao. Quentel war ar bezhina ha notennoù yezhoniel gant an AoAo. Jackson ha Bachellery) , abaoe marv Emile Ernault. A drugarez dezhañ ez eus studiadennoù brezhonek e pep niverenn bremañ. Lennet e vo aketus ivez en niverenn-mañ barn an Ao. Bachellery war dezennoù Fleuriot ha barn Fleuriot war « Trois Poèmes en Moyen-Breton » R. Hemon. (pp. 191-203.)

Mar ne vije ket bet hegarat a-walc'h an Ao. Kel. L. Michelena evit kas din un dennadenn a-ziforc'h eus e studienn, e rankan anzav n' eo ket en ur gelaouenn embannet gant Skol-Veur Oviedo e vijen aet da glask notennoù war ar yezhoù predenek ! Ar C'hel. Michellena zo anavezet mat evit e studioù war an euskareg, met ur mailh eo ivez war ar c'heltiegoù. Gouestlet eo ar pennad-mañ d' ur c'hraf munut eus ar vouezhiadoniezh izellatin, met mat eo d' am soñj, e venegiñ. Betek amañ e veze rediet mui pe vui ar geltiegourion da c'houlenn skoazell digant ar romanegourion. Ar wech-mañ avat e verzomp pegen prizius ha spletus e c'hell bezañ anaoudegezh ar yezhoù keltiek evit ar re a studi emdroidigezh al latin, hag ent-reizh e klemm an aozer (p. 50) diwar-benn ar fae a gaver gant ar romanegourion a-zivout ar yezhoù keltiek : « *el campo de la lenguas célticas, en particular, es un coto cerrado en el que apenas se atreven a aventurar mas que los celtistas, y naturalmente los celtas. Asi se comprende que los esfuerzos de Kenneth Jackson para dar a conocer éste, entre otros punces importantes para el conocimiento de la fonología de un tipo de latin provincial, no se hayan divulgado tanto como merecian* ». Da skouer, el levr kinniget nevez zo d' ar studierion c'hall war an izellatin, *Introduction au latin vulgaire* gant Veikko Väänänen, ne gaver anv ebet eus ar yezhoù keltiek hag i o vezañ amprestet un 900 ger latin bennak a-raok ar 6t ktvd. ! N' eo ket souezhus neuze e kaver kement a



fazioù en dornlevr-se. A drugarez da Luis Michelena e vo komprenet gwelloc'h talvoudegezh ar yezhoù keltiek, zoken evit ar romanegourion. Met tud zo e Skol-Veur c'hall Roazhon a gavo gwelloc'h atav klask sklerijennañ (? !) ar verb brezhonek dre isteodyezhoù reter Bro-C'hall... Ur bobl he deus dalc'hmat ar ouizieion a zellez...

(1) azas : reizh, dereat (saoz : adequate).

421

\*

Maodez GLANNDOUR

Endro da bennad G. Pennaod, diwar-benn Studi hag Ober, niv. 4

Meuleudi ha trugarez a dlean da G. Pennaod evit ar vurutelladenn en deus gouestlet da niverenn diwezhañ Studi hag Ober : prederiadennoù aketus endro d' un destenn na vez ket dedennus evit an holl. Bennozh dezhañ evit ar bri diskouezet d' al labour.

Kentelius eo bepred evidon gouzout penaos e c'hellan bezañ komprenet gant ul lenner, ha goude ma vijen souezhet a-wechoù gant e soñjoù. Moarvat e vo talvoudus da lennerion Al Liamm anavezout menozioù an oberour e-unan dirak linennoù a gomz diwar e benn.

Ne gav ket din da skouer em bije ur gerentiezh bennak gant Eckhart. Lakomp en defe hemañ graet predererezh, hervez ma skriv G. Pennaod. Marteze ! Me a fell din ober prederouriezh, n' eo ket hevelep tra, hag e ran.

Pa skrivan a-hend-all ez eus bet diouer a deologiezh vev goude an 12-vet kantved, ec'h ouzon mat petra a skrivan. Ne lavaran ket avat ne vije bet e stumm ebet, gant hini ebet. Diouer ez eus bet koulskoude, ha diouer bras.

Ne lavaran ket kennebeut all e vefe teologiezh Tomaz Akuino, *teologiezh* varv. N'em eus ket skrivet se. Met kavout a ra din eo bet dija kontammet gant an Averroadegezh. Pezh n' eo ket hevelep tra. Pa fell deoc'h bezañ skiantel, na lakit ket war gont ar re all ar pezh n' o deus ket skrivet.

422

Tomaz Akuino n' eo ket ar prederour nemetañ eus an Iliz. Araozañ ez eus bet prederourion gristen, ha war e lerc'h ez eus bet, hag e vo, a drugarez Doue. Prederourion a-wechoù gwall-disheñvel dioutañ. Mar-deo bet erbedet prederouriezh St Tomaz evit ar skolioù, se ne lavar ket e vefe peurvat, nag e rankfemp asantiñ d' e holl dezennoù. Ar Pab Paol VI hen lavare adarre, nevez 'zo. Met keit ha n' eus ket un all aasetoc'h egetañ eo ret en erbediñ evit ar studioù izel a brederouriezh kristen. Netra ken. N' eo ket dre va faot mar ne vez ket kelenourion ar c'hloerdioù ampart da vat war ar trederouriezh kristen. Met ar gwir am eus da varn en un doare rakvoudel ha skiantel ha kristen prederouriezh St Tomaz, hep na vefe da souezhiñ : ne vin ket an hini kentañ ouzh en ober, nag an hini diwezhañ.

Evit ar pezh a sell ouzh ar yezh a implijan, e rankan lavarout kement-mañ :

Brezhoneg eo an hini a skrivan, ha n' eo ket kembraeg. **Hanvoud** gant ar ster **existere**, a zo kembraeg. Ar stumm krennvrezhoneg eus ar ger n' en deus ket, ar ster-se, met talvezout a ra « galloud, stad ». Ouzhpenn-se, hervez enklaskoù R. Hemon, stumm ar ger ne vefe ket **hanvoud**, met **hamboud** hepken.

Met, n' eus forzh peseurt stumm a virer, pebezh meskailhez a vefe implij ar ger-se : **an anvoud** a dalv **l'inexistence** ; an nannboud, hevelep tra, le non-être, da lavarout eo ar c'hontrol bev eus ar pezh a venner lakaat war an hanvoud.

Frankiz a gemeran hag a gemerin da implijout ar gerioù a zo er yezh, hag a c'hell bezañ sellet evel gwir vrezhoneg, ha pa seblantfent da hiniennoù bezañ hañval ouzh gerioù galleg pe latin a zo. Deuet int eus al latin, eus ar romaneg ? Marteze. Petra chomo eus ar brezhoneg ma talc'h hiniennoù da spazhañ anezhañ.

Evidon-me ne dle ket ar brezhoneg bezañ nag ur ghetto serret, nag ur sabir, na tunodoù (- brizh-yezh tregeriat ar Roc'h-Derien). Ar brezhoneg evidon a zo ur yezh digor war an amzer dremenet, war an da-zont, war ar bed.

Tennañ a reer pezh ar garer eus Geriadur Fleuriot war an henvrezhoneg, zoken ar bourdoù ar souezhusañ. Moarvat ne vo ket an holl a-du ganin, met tennet em eus-me kement-mañ : hon tadoù, d' an amzer ma oant tud, ha na c'houlennent aotre digant den, ne gilent ket dirak gerioù amprestet digant al latin. Brezhonekaat anezho a raent didrabas. Hen gouzout a raemp dija, abaoe labourioù Loth, met en ankouaet hor boa.

Souezhet e choman dirak frazennoù 'zo eus G. Pennaod, evel houmañ : « bezout n' eo met un hiron nevez a-walc'h savet dre gemmeskañ bout ha bezañ ». Hiron nevez a-walc'h ? Emañ ar ger *bezout* er c'hrennvrezhoneg, evel m' en diskouez Geriadur Istorel R. Hemon. Distreiñ a ra ken alies ha tra en *Noueliou Gwenedek* eus dornskrid ar 17-vet kantved. Hiron pe get ? Ne vern din tezennoù ' zo.

423

Evidon-me n' eus nemet ur ger evit lavarout **existentia**, pe gentoc'h, **esse** al latin, eo ar verb **bezout** e-unan.

Klask a ra G. Pennaod gwiriekat **hanvoud**, daoust da bep tra, hag en em harpañ a ra war ar gomzenn vrezhonek : « Me a zo ac'hanon ». Evidon, dres, an dro-lavar-se a zo liessteriek ha displann. Pe e talvezo : Me 'zo o vezout. Pe c'hoazh : Me 'zo ac'hanon va-unan. Ha setu daou ster disheñvel a-grenn.

Kenderc'hel a ra G. Pennaod o lavarout : « Disfiziañs am eus ivez rak ar gerioù etrevroadel er brederouriezh. Pe e tiwan hor prediri eus an donañ ennomp, ha neuze e rankomp hec'h esteurel gant gerioù gwriziennet don en hor yezh hag en hon hengoun, pe ez eus anezhi ur ouezoniezh ergorel, ha neuze an etrevroelañ geriaoueg ar gwellañ ».

Evit ma vo sklaeroc'h e troan gerioù 'zo evit ar re n' int ket kustum outo. *Gouezoniezh ergorel* a zo *gouiziegezh rakvoudel*. Lavarout a ran en ur dremen ne blij ket din *gouezoniezh* evit talvezout *gwiziegezh* : setu c'hoazh ur ger dibabet fall ; hervez ar pennreolennoù divizet gant Vallée e talvezfe : skiant ar skiant (epistémologie). Ergorel a zo eus e du un ijinadenn diaes da zegemer. Ar ger : **ercor**, en henvrezhoneg, ne dalv netra hañval ouzh ar ster a zo bet lakaet war **ergorel**.

Met distroomp war ar frazenn : « gerioù gwriziennet don en hor yezh hag en hon hengoun ». Pere ? ar re a ran ganto, a vez tamallet din, ha goude ma vefent en hor yezh hag en hon hengoun. Gerioù gwriziennet don en hor yezh hag en hon hengoun : gouezoniezh, ergorel ? Hag-eñ e fell dezhañ farsal ?

Ne welan ket kennebeut all perak e vefen rediet da zibab etre geriaoueg Pennaod hag ar c'heriaoueg etrevroadel. Perak ne vefe ket ar brezhoneg a-walc'h, anezhañ e-unan, evit displegañ gwir brederouriezh, skiantel, rakvoudel. Hag-eñ e vefe ar rakvoudelezh ur gudenn a c'herioù ?

Met gwelout a ran ez eus etre Pennaod ha me meizerezh gwall-disheñvel. Gwelout a ran anezhañ o reudiñ pa gomzan eus reuz ar boellegouriezh. Dres ! Reuz ar boellegouriezh a vir outañ da gompren ar pezh am eus skrivet, ha da vont em fennadoù.

Burutellañ a ra va fennadoù evel pa ne vije netra etre poellaterezh ha

santimantelezh. Ha peogwir ez on ivez ur barzh, eo techet d' am disteurel e renk ar santimantourion.

Evidon, sed ur fazi speredel a zo gall a-grenn. Er varzhoniezh e c'hell bezañ muioc'h a brederouriezh eget na greder. Perak n' hellfe ket ur barzh, pa fell dezhañ, skrivañ prederouriezh rik ?

Evidon-me, etre poellegouriezh ha santimantelezh, emañ ar meizerezh gwirion, a c'hell kaout stummoù lies ha disheñvel, adalek ar poellata betek doareoù tost d' ar varzhoniezh.

424

N' on ket souezhet neuze mar prizhfe G. Pennaod ar Garteziadegezh, kement-se. Gwell a se evitañ mar fell dezhañ chom kar-nes d' hon amezeion. Hogen ra chomo hep tamall d' ar brezhoneg bezañ en em viret well-wazh betek-hen eus ur seurt kleñved speredel. Ra blijo gant Doue e vefemp evit en em ziwall dioutañ, rak ar vosen-se eo an hini a gas bremañ Bro-C'hall d' ar marv.

A-benn ar fin, petra eo ar gerioù ? Nebeut a dra. Gerioù brezhonek-rik a c'hell kuzhat menozioù gwall-estren.

Etre ar boellegouriezh hag ar faltazi emañ ar gwirvoud. Hag ar poellegouriezh a zo keit-all diouz ar gwirvoud, keit hag ar faitazi hec'h-unan Mar-d eo bet a-viskoazh ar Vretoned techet d' ar fetis, d' ar gwirvoud, ne welan ket e vefe se da damall dezho ? Par ma c'hellin e tiskouezin dezho an hent-se a wirionez hag a silvidigezh speredel.

Ur ger erfin diwar-benn va zroidigezh eus Kannen ar C'hanennoù. An anv am eus roet eo hini ar varzhoneg en hebreeg : anavezet e vez evel-se en holl yezhoù pe dost. Ne gredan ket em bije da c'hoari gant an testennoù a droan. Na kennebeut all n' em eus ket da skrivañ e krennvrezhoneg.

Kilañ a ra G. Pennaod rak an droidigezh am eus roet d' ar gwerzad 5 : « Ar ger hebreek a dalv du hepken, evel m' en diskouez ar c'henarroud ». Dres eo ar c'henarroud a ziskouez ar ster a roan. Rak ar gwerzad 6 a lavar diouzhtu goude : « Na rit ket a van mar-d eo duaet va dremm, rak an heol en deus va rouzet ». Dhorme da skouer, ha goude ma vefe Dhorme, a dro e galleg ar gwerzad 6 gant kement-mañ : « Ne faites pas attention si j'ai bruni : c'est le soleil qui m'a hâlée ». Ar ger troet « bruni » gant Dhorme eo ar ger *sheharhoreth* o respont gant un hevelep gwrizienn-c'her d' ar ger *shehorah* er gwerzad 5.

Mar plij da G. Pennaod ijinañ ur vorianez, e c'hell hen ober. Mar kred zoken e vije diazezet e ijinadenn war an destenn, en deus frankiz da vont. Evidon-me avat, ne gav ket din he defe e vartezeadenn un diazez skiantel bennak en destenn.

Met kement-mañ a zo nebeut a dra e keñver ar mad en deus lavaret G. Pennaod eus va zroidigezh. Ne bouezan war ar munudoù-se nemet dre m' en deus e-unan laket e viz warno.

Notenn. - E pennad G. Pennaod ez eus bet lammet ul linenn a-bezh p. 348 « ouzh ar gerioù met evel » ha « naouegezh » eo ret lakaat « skritelloù. A-hend-all e c'haller e veuliñ evit nevezc'herioù zo en deus savet pe adkavet evel ».

## AL LEVRIOU

Y. B. PIRIOU

LE ROMAN DU ROI ARTHUR ". adnevezet gant LANGLEIZ.

Anavezout a reomp holl an Embannadurioù Piazza e Pariz. Embannadurioù Arz int. Bet hon eus dija digante levrioù gallek evel " Tristan hag Izeult " pe " Les lais de Marie de France ". N' ouzon ket hag-eñ n' eus ket bet ul levr gouestlet da g-Kouc'houlin. Rak an ti-se a bled dreist-holl gant an danevelloù kozh evel Mojenn Guillaume d'Orange, pe Roland, pe Furlukin Itron Varia Paris.

Ma, Arzhur eo o deus dibabet an dro-mañ. Ur wech ouzhpenn ez eo dasorc'het da vev dre ampartiz un achantour en deus bet kontet dimp dija en ur c'haer a levr, istor Tristan hag Izold. Meur a hini moarvat a rebecho da Langleiz bezañ embannet al levr-mañ e galleg, pa 'z eo ur brezhoneger ken akuit war hor yezh, met peadra hon eus da grediñ e tifluko ar skrid brezhonek, deiz pe zeiz, diouzh gwask ar mouler.

Adstummet eo bet Mojenn ar Roue Arzhur un tammig en doare m' eo bet graet evit Tristan hag Izold. Met an adstummadurioù-se ne reont nemet aesaat hol labour, rak n' eo ket n' eus forzh pe Yann a zo gouest da duriellat er skridachoù kozh, zoken pa 'z eo evit klask un tañvan eus awen an hentadoù.

Diaester ebet amañ, sklaer ar stumm-skrivañ, gant un nebeudig gerioù krennamzerel amañ hag ahont, kement ha reiñ un tammig blas divoutin d' ar re lipouz.

En e rakskrid e lavar an oberour, peseurt hent en deus heuliet : n' en deus graet, emezañ, nemet bale war roudoù diaraogerien vrudet evel Chrétien de Troyes, Wauchier de Denain, Gottfried de Strasbourg ha, diwezhatoc'h, e Bro-Saoz Thomas Malory. Lavarout a ra ivez en deus amprestet pennadoù zo digant ar Mabinogion, pennadoù an Tourc'h ha Feunteun Baranton da skouer. Ha sede aze furnezh ar skrivagner marteze, rak risklus-tre eo adkizellañ a vare da vare delwennoù an amzer-gozh. Romant ar Roue Arzhur a vo teir lodenn anezhañ, en hini gentañ e kaver karantezioù Marzhin ha Viviana, kurioù ar roue Arzhur ha marc'hegerien an Daol Grenn. En eil loden e vo bugaleaj Lanselod ha Gwenivar ha kest ar Graal Santel. An trede a vo enni istor Parseval ha Galaad hag ec'h echuo gant marv Arzhur.

Al levr a zo moulet kaer, ennañ lizherennoù engravet gant Langleiz e unan.  
426

E gwerzh emañ e « Editions d'Art H. Piazza », 21, rue du Cardinal-Lemoine, Paris (5<sup>e</sup>) - C.C.P. 21 645 62. Mouladur boutin 9 lur ; niverennet : 24 lur. Embannet eo bet ivez en deizioù-mañ " L'Ile sous Cloche " troidigezh " Enez ar Rod " gant X. de Langlais, e ti Denoel (224 p., 11 X 18).

Hor gourc'hemenoù kalonekañ a gasomp d' hor c'henlabourer.

\*

Per AR BIHAN

LES CHRETIENNES CELTIQUES gant Olier LOYER.

Setu ul levr e dalvoudegezh, hogen diaes eo sevel ur berrskrid anezhañ, o vezañ ma n' eo ket eeun tamm ebet danvez an destenn.

Da gentañ, menegomp ez eo ul labour a ouiziegezh. An oberour, kelenner aotreet war as saozneg, en deus heuliet ivez kentelioù Skol-Veur Bariz war ar yezhoù keltiek. Hogen, anat eo, devezhioù a furchadennoù hag a breder en deus

ranket tremen e-sell da zastum ha da vestroniañ danvez e skrid. Roll savourien al labourioù studiet gantañ e meur a yezh ne gont ket nebeutoc'h eget 45 anv. Hogen Olier Loyer, aet don en e enklaskoù, en deus ivez e soñjoù war ar c'hudennoù pennañ a zispleg : levezon ar Sav-Heol war Gristenelezh ar Gelted, talvoudegezh resis mision Badrig en Iwerzhon, orin an tresadennoù war ar parchoù iwerzhonat, perzh ar Gelted e stummadur sevenadurezh ar Grennamzer... Notomp ez eo fur-meurbet peurvuiañ arguzennoù O. Loyer hag o c'hinnigadur ; moustret en deus war e garantez-vro evit chom neptu hag ober ul labour talvoudus e-keñver an Istor.

D' an eil e tiskouez an Istor, gwelet eus tu Kristeniezh ar Gelted, un dremm nevez d' al lenner boutin evel don. A-bouez eo merzout an diforc'h etre Kristeniezh Roma, diazezet war ar c'hêrioù hag an eskoptioù hag hini ar Gelted, diazezet war ar manatioù, damheñvel d' ar c'humuniezhoù keltiek all, savet war ar maez ha renet gant an ebed. A-bouez eo gouzout e oa chomet nerzhus c'hoazh ar Gelted pa 'z eas menec'h Iwerzhon da visionerien e-touez barbarek Bro-Saoz ha re an Douar bras, o sevel manatioù e Galia koulz hag e Belgia, en Alamagn koulz hag en Italia. A-bouez eo sellout a-dost penaos e kemeras an iliz normanek lec'h an iliz keltiek ha penaos e tibabas Iliz Roma da vont a-du bep tro gant enebourien ar Gelted pe Romaned, pe C'hermaned, pe Saozon pe Normaned e vijent.

427

Al levr a zo e meur a zoare studiadenn kevredigezh ar Gelted ha klokaat a ra er feur-se hini Françoise Le Roux, " Les Druides ", embannet en hevelep dastumadenn. Moarvat ez eo levezonet en desped dezhañ ar skrivagner gant boazioù -displegañ e vicher a gelenner. Hogen sklaeroc'h hag urzhietoc'h a se ez eo al levr, plijus-meurbet hag aes da lenn a-hed e 138 pajenn. Graet en deus nevez 'zo Olier Loyer div brezegenn war an destenn-se, unan e Kamp Brezhonegerien Rostren, eben dirak izili Kêr-Vreiz e Pariz.

Goulenn al levr digant : Presses Universitaires de France, 108, Bd Saint-Germain, Paris 6e. - Priz : 8 lur.

## NOTENNOU

Savet pe gempennet eo bet an notennoù-mañ gant Per ar Bihan, Alan Heussaff ha Ronan Huon

### Kañv

Klevet hon eus keloù marv Tad Rojer LAOUENAN, diazezeur Beilhadegoù Bro-Dreger, e Brelevenez, d' an **oad** a 75 vloaz.

Klevet hon eus gant doan keloù marv an Ao. Rudolf HERTZ, a oa kelenner war ar Yezhoù Keltiek e Bonn, ha lenner feal hor c'helc'hgelaouenn.

### Hor Mignoned

Tangi, Malo, Lena, Nolwenn, Riwall, Goulven, Katell, Gwennael ha Tremeur LOUARN a zo laouen da gemenn ganedigezh o c'hoar vihan, Kristell Levenez, e Roazhon.

Klevet hon eus e oa bet gloazet hor mignon G. Ar MENTEG en ur gwallzarvoud hag e oa en ospital evit ur maread.

Hetiñ a reomp dezhañ pareañ hep dale.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-korf an daou viz diwezhañ:

HERE :

Frañsez Thomas, 10 lur ; Erwan Gwegen, 50 ; Per ar Meurt, 10 ; A. ar C'halvez, 20 ; Ronan Tremel, 20 ; R. ar Sklotour, 5 ; It. V. de Bellaing, 10 ; Frañsez Kervella, 60 ; Yann Thomas, 10.

- War un dro, 195 lur.

DU :

Jos Penneg, 10 lur ; It. V. de Bellaing, 50 ; Yann Gamilh Hanus, 15 ; Dll M. J. Marot, 10 ; Bartrig Basclat, 5 ; L. Andouard, 60,50 ; A. Herry, 30.

- War un dro, 180,50 lur.

Degemeret hon eus evit AL LIAMM abaoe deiz kentañ ar bloaz 2.323,30 lur a brofoù. Bennozh Doue d'hon donezonourien vat !

Prof d' an Embannadurioù : Runheol : 100,00 lur.

### Lizher da Rener " Al Liamm "

E-ser burutellañ STUDI HAG OBER Nn 4 e skriv G. Pennaod (A. L. 112) : « N' eo ket me a zislavaro barn garv Maodez Glanndour a-zivout ar farouell diwezhañ-mañ (T. de Chardin) a ra ur meskaj euzhus a vrizhkredennoù amouiziel hag a gredennoù « speredel » a ziskouez bezañ o c'hen brizh ». Setu an argadenn daerañ am eus lennet war T. de Ch. ha karget eo a drivliadoù. N' em eus ket gwelet STUDI HAG OBER Nn 4, n' ouzon ket eta peseurt garvder a zo kaoz anezhañ. Mar deo diazezet barn M. G. war « un anaoudegezh diboellataet », e vo diaes din he degemer marteze. Laouen e vefen ma plijfe dezhañ, ha da C'h. P. burutellañ sistemad T. de Chardin en un doare poellek a-walc'h hag eeun a-walc'h evit lakaat tud evel don ha n' int ket prederourien na kevrinourien da vout kenlodenn en o sklerijenn. A-du on gant G. P. pa lavar n' en deus kavet mab-den betek amañ gwelloc'h benveg eget ar poell evit kompren ar bed. Ne gomzan ket eus kompren Doue Hollc'halloudek. Hogen n' em eus ket kejet gant prederour ebet a vefe bet ken barrek da unaniñ relijion ha gouiziegezh rik ha T. de Chardin, pe c'hoazh da lakaat tud hag a varn kentoc'h hervez o foell eget hervez o skiant-diouzhtu da

gavout ur ster er gristeniezh.  
A. HEUSSAFF.

### **Lizhiri**

Setu amañ arroudennoù eus ul lizher hir ha dedennus a zo bet kaset dimp gant unan eus hor c'houmananterien fealañ :

« Degemeret am eus niverenn diwezhañ ho kelc'hgelaouenn nemet n' am eus ket he lennet rak, abalamour da skramm va lagad kleiz bezañ distaget hag emeur o klask adstagañ pe adbegañ adarre, ne vez ket erbedet din lenn.

Koulskoude, lennet em eus, e korn al lizhiri, al lizher kentañ hag ar c'homzoù ho poa-c'hwi lakaet ouzh e heul. Daoust d' al lizher-se bezañ berr-kaer ez eo talvoudus, d' am meno, prederiañ un tammig warnañ.

En ur ger berr, e skriv ur paotr ne lenno mui " Al Liamm abalamour ma 'z eo re ziaes evitañ ha c'hwi, neuze, a ali anezhañ, ken dichek ha tra, da studiañ ar brezhoneg hag evit-se da heuliañ kentelioù " Skol Ober " (1).

(1) Kement-se am eus graet o c'houzout ervat ne ouie ket mat e yezh. - R. H. 430

Emañ sur a-walc'h, ar wirionez ganeoc'h met ne gredfen ket lavarout emañ tout ar wirionez ganeoc'h.

Da gentañ ret eo anzav ez eo diaes-diaes lod eus ar pennadoù embannet gant " Al Liamm ", zoken evit tud eveldon-me hag o deus kroget da zeskiñ brezhoneg ouzhpenn 40 vloaz zo ha n' o deus biskoazh disternet dioutañ... Er-maez eus an danvezioù pe an testennoù a zo diaes enno o-unan ha pa vijent displeget pe e galleg pe e saozneg pe, gwashoc'h c'hoazh, pe brezhoneg, ret anzav ez eus skrivagnerien a ra o seizh gwellañ evit lakaat diaes pezh a fell dezho displegañ. Lavaret e vije e vefe o ger-stur « An diaesañ, ar gwellañ ! » Ur pleg-fall eo, eta, lakaat diaes pezh a c'hellfe bezañ aes ha ret eo, d' am meno, stourm outañ.

An diaes a zo e skridoù ar skrivagnerien a gomzan anezho a zeu, d' am meno, eus an daou abeg-mañ :

a) darn anezho ne ouzont ket a-walc'h a vrezhoneg o-unan ha neuze, aliesik, ne anavezont ket an doare reizh da zisplegañ o soñjoù. Her gout a ouzon a-walc'h va unan rak, p' am eus kroget da skrivañ brezhoneg, n' edon ket gwall-ampart ha ne gredfen ket lavarout ez on deuet da vezañ ur mailh abaoe !

b) An hevelep skrivagnerien, pe reoù-all, pa c'hellont dibab etre daou c'her pe dri, a zibab atav an hini « diaesañ », da lavarout eo « dianavezetañ », pe an hini keltiekañ, pe an hini koshañ, pe c'hoazh an hini gwenedekañ ha kement-se evit pinvidikaat ar yezh, sañset, pe he c'hllanaat. Abaoe m' eo bet kroget gant F. Vallée - Doue d' e bardono - da lakaat rolladoù « gerioù diaes » da heul e oberoù, kalz skrivagnerien n' o deus ken c'hoant nemet da ober kemend-all. Ha se, moarvat, dre lorc'h, evit diskouez ez int desketoc'h pa varrekoc'h eget ar re all. D' ur mare a zo e oa ret enebañ ouzh ar gerioù gallek, re stank en hor yezh vrezhonek, met daoust hag e vez ken ret all bremañ ? N' her c'hredan ket. Soñjal a ran kentoc'h e vefe retoc'h enebañ ouzh ar « peurc'hllanaat » pe ouzh ar « peurgeltiekaat ».

E gwirionez, stad ar brezhoneg a zo dibar hag aner eo peurluviañ (2), e geñveriañ ouzh hini yezh all ebet pe an iwerzhoneg pe ar c'hembraeg e vefe, pe, gwashoc'h c'hoazh, ouzh hini ar galleg pe ar saozneg. Rak se, ne c'hell ket ur skrivagner brezhonek ober evel skrivagnerien c'halllek pe saoznek. N' en deus ket sur a-walc'h an hevelep frankiz hag int. Tra ma c'hell ar re-mañ ober gant n' eus forzh peseurt gerioù pe ijinañ doareoù-displegañ nevez, da lavarout eo c'hoari gant o yezh kement ha ma karont. Sur ma 'z int da gavout lennerien, ne c'hell ket ar skrivagnerien vrezhonek disoñjal al lennerien distank gouest da gompren o skridoù. Kaer a vo ober, ne vo ket ar re-mañ, war dachenn ar brezhoneg, ken

desket ha Saozon pe Iwerzhoniz zo, bet heuliet ganto, e-pad meur a vloavezh, kentelioù skolioù-meur Londrez pe C'halliv. Souezhet e vezan - ha zoken sabadac'het-krenn - pa welan ar seurt brezhoneg a vez embannet war kelaouennoù zo graet evit an holl, gouest nemetken, hervezon, da lakaat kilañ da vat ha da viken ar vrezhonegerien na c'hellont ket anavezout ennañ ar yezh o deus desket war varlenn o mamm pe en-dro dezho e-pad o yaouankiz.

(2) Evit pezh a sell al lodenn-mañ eus lizher L. A. emañ a-du gant L. A. peogwir em eus displeget ar menozioù-se em fennad digeriñ « Lennegezh ha yezh » pemzek vloaz zo, war niverenn 19 Al Liamm.

431

Rak enno emañ an dalc'h. Un den « engouestlet », eo ar skrivagner brezhonek pe ar rener kelaouennoù brezhonek. Engouestlet eo ; d'am meno, a-ziwar an deiz m' en deus kroget en bluenn da skrivañ brezhoneg. E bal pennañ, e-touez meur a hini, a zo reiñ NERZH d' ar yezh, he lakaat da vezañ kreñvoc'h e doare ma c'hello kenderc'hel da vevañ war an dachenn a zo dezhi. Tud a zo, avat, a gav dezho emañ nerzh ar brezhoneg er yezh hec'h unan hag, evit e kreskiñ, n' eus tra ebet da ober nemet sevel gerioù nevez d' he lakaat gouest da zisplegañ n' eus forzh peseurt danvez - pe ouizieq, pe deknel e ve - pe d' he c'hllanaat (dalc'hit soñj eus ar bomm Mordiernek : « le purisme érigé à l'état de loi » . M' am eus soñj mat ar bomm-se a zo el levrig embannet dindan an talbenn : " L'enseignement du Breton " par M. Mordiern) dre gas kuit ar gerioù, romanek pe c'hallek o orin, da lakaat en o lec'h gerioù kozh, gerioù keltiek-rik o tont rak-eeun eus labourioù Fleuriot pe eus ar c'hembraeg pa n' eo ket an iwerzhoneg. D' am meno, ur pikol fazi a ra an dud-se rak ar brezhoneg n' en deus ket ezhomm da zisplegañ n' eus forzh peseurt danvez (3) barrek ma 'z eo d' hen ober dija gant ma chomo ur benveg gouest da greskiñ deskadurezh ar bobl nemetken ha neket ur benveg na c'hello bezañ dornataet nemet gant ur « specialist » (arbennigour ?) pe zaou. Ma plij d' ur brezhoneger o labourat e Saclay skrivañ un dezenn vrezhonek war ar skiant atomek, gwell a se, met, arabat en em douellañ, ne vezo kreñvaet tamm ebet stad ar yezh gant ur seurt « tour de force ». Evidon-me, er stad truezus meurbet m' emañ ar yezh bremañ, e chom nerzh ar brezhoneg en dud, niverus c'hoazh, kozh pe yaouank, a oar c'hoazh anezhañ kalz pe nebeut, mat pe fall. Gwashañ zo, avat, al lod vrasañ anezho a zo distag-krenn diouzh an emsav brezhonek ne ra, koulz lavarout, van ebet outo. Setu perak e lavaran n' eus ket labour retoc'h da ober eget klask, e pep doare, tostaat ouzh ar bobl, ouzh hor fobl kemeret en he fezh, ha neket treiñ kein outi. War dachenn ar yezh skrivet, da lavarout eo ho tachenn-c'hwil, dont en-dro da wir ijin ar brezhoneg, klask bezañ eeun ha sklaer, evel dour stivell, un dra diaes ma 'z eus, hen anzav a ran - a rankfe bezañ pal ar skrivagnerien pa ar renerien kelaouennoù brezhonek. Ret skrivañ evit al lennerien voaz met ivez evit, ya, evit ar vrezhonegerien a c'hellfe lenn ha na lennont ket c'hoazh.

(3) Amañ n' on tamm ebet a-du gant hor mignon. Pa fell deomp klask lakaat hor yezh da vezañ gouest da zisplegañ n' eus forzh peseurt danvez, e soñjan emañ ar gwir ganeomp. Fellout a ra deomp kaout ur yezh evel ar re all ha n'eo ket hepken ur yezh barrek da vezañ implijet ha komprenet gant tud damzizesk. D' ar mare-se avat eo arabat krediñ emeur o sevel ul lennegezh da vezañ lennet gant an holl, met oc'h aozañ evit an dazont ur yezh ma kredomp enni. N' eo ket ret hen ober gant ar gerioù an diaesañ posubl eveljust. N' eus forzh penaos ar yezh skiantel-se ne gemer ha ne genero ket kalz a lec'h e-barzh ur gelaouenn evel " Al Liamm " ha n' eo ket graet evit se. - R. H.

432

Setu eta pezh am eus soñjet p' am eus lennet al lizher meneget a-zioc'h. Va digarezit da gas deoc'h ul lizher ken hir, kalz re hir moarvat ha digempenn. Arabat deoc'h bezañ feuket gant ar pezh a lavaran rak n' em eus ken menoz nemet ho sklerijennañ - o lakaat oc'h eus ezhomm da vezañ, met piv n' en deus ket. » L. A.

Trugarekaat a reomp hor c'houmananter evit e lizher. Traoù zo ennañ a gredomp reizh, traoù n' omp ket a du ganto. Pedit a reomp anezhañ d'hon digareziñ ha spi hon eus ne vo ket feuket kennebeut gant ar respontoù hon eus roet da lod eus e



lizher. Ul lizher all peuzheñvel hon eus bet avat digant hor skoazeller Y. E. E gwirionez hon eus embannet ivez meur a wech lizhiri o lavarout ar c'hontrol eus ar pezh a gaver amañ. E-barzh Al Liamm ez eo ret reiñ e lod da bephini ha pephini a zibab ar pezh a blij dezhañ hag a lez ar peurrest a-gostez. Setu amañ lizher Y. B. :

« Niverenn diwezhañ " Al Liamm " am eus kavet diaes a-walc'h da len dreist-holl pennad Abenez hag hini Pennaod. Soñjal a ran el lenner ordinal hag en deus poan dija o lenn brezhoneg. M' hon eus c'hoant kreskiñ niver ar goumananterien pe ma n' hon eus ket c'hoant koll lod anezho, embannomp dreist-holl traoù aes a-walc'h pe d' an nebeutañ eeun a-walc'h. »

### **" Lizeri Breuriez ar Feiz "**

Ar gelaouenn-mañ, o tont er-maez bep tri miz, a ro keloù eus ar Misionoù. An niverenn Ebrel-Mezheven a zo enni ul lizher eus Papouazia digant Frañsez Gwivarc'h, genidik eus Landivizio, o meneg kudennoù an emrenerezh a soñj reiñ Aostralia d' ar Vroiz. En niverenn ivez, un notenn diwar-benn an Tad Erwan Troal hag ul luc'hskeudenn. Ha dreist-holl, pajennoù bev ha fromus karned an tad o tezrevell gouelioù Pask 1964 er Perou hag o pouezañ war reuzeudigezh poblañs ar Vro. Embannet eo ar pajennoù-se e brezhoneg peurunvan.

### **Ur romant nevez gant Youenn Olier**

Lodenn gentañ romant nevez Youenn Olier «Enez ar Vertuz» a vo embannet hep dale. Al lodenn-se e vo enni war-dro 150 pajennad hag a gousto 14 lur  
Kas an arc'hant da Y. Ollivier, 23, Bd Burloud, 35-Rennes - C.C.P. 1686-06  
Rennes.

### **Ar Brezhoneg ha " L'Avenir "**

En hon niverenn diwezhañ hon eus meneget ar c'helaouennoù gall o deus komzet eus Jarl Priel.

433

An " Avenir " ha n' eo ket da renkañ e-touesk ar re se, da vihanañ evit pezh a sell ar menoz, he deus embannet ur pennad mat e brezhoneg skrivet gant G. Ihuellou.

L'Avenir - B. P. 89, Brest - C.C.P. Rennes 1132-86

### **" Skol " - " Wanig ha Wenig "**

Erbediñ a reomp d' hol lennerien un nebeut levrioù embannet nevez 'zo gant Skol :

- GWIR VRETONEZ, ul levrig moulet, ennan 74 kanaouenn, en o zouez oberennoù gant Glenmor ha Y. Derrien ; priz : 1,50 lur (distaol bras pa gemerer meur a skouerenn).

- GWIR VRETONEZ, mouladur bras, 74 kanaouenn gant an tonioù ; priz : 6 lur.

- PENAOS NIVERIÑ, KONTAÑ HA MUZULIAÑ, gant Kelennerien " Ober ", eil mouladur kresket ha gwellaet ; priz 3 lur. Arnodennidi an Trec'h ha kement hini en deus c'hoant d' en em ampartaat war ar jediñ a rank e breñañ.

Skol a embann ivez kannadig BREURIEZH SANT ERWAN dindan an titl MOUEZH SANT ERWAN. En niverenn 2 (" Skol " niv. 30) e kaver ur studiaden diwar-benn Urdd Gobaith Cymru, gant Yann Talbot a dremenas ur mizvezh e kampoù an Urdd e 1964.

Koumanant da 4 niverenn SKOL - M.S.E. . . 12 lur

Koumanant da M.S.E. hepken 12 lur

C.C.P. Revue Skol Rennes 1911 06

Niverenn 32 Wanig ha Wenig a zo deut er-maez e miz Du, leun a skeudennoù hag a istorioù bourrus evit ar vugale evel atav.

Koumanant-bloaz da 6 niverenn : 4 lur adalek 1965  
Albomoù 1961, 1962, 1963, 1964 : 4 lur pep hini dre ar post  
C.C.P. Journal Wanig ha Wenig, Rennes 1705 06

Dever pep Breizhad eo harpañ gwellañ ma c'hell an oberoù a bled gant ar yaouankiz, amzer-da-zont hor bro.

### " Preder ", kaier 66

An niverenn-man zo un dastumad kentelioù graet gant kelennerien SADED e Kamp ar Vrezhonegerien. Setu amañ ar roll anezho :

Lennegezh - Gwion ar Menteg : « Y. V. Heneu ».  
Krennvrezhoneg - Ronan Jolais « Buhez Mab-den ».  
Lennegezh - Youenn Olier : « Loeiz Herrieu ».  
Atomouriezh - Gwenaél Maze : « Framm an Atomenn ».  
Yezhadur - Ronan ar Glew : « Ar sujañ e brezhoneg ».  
Lennegezh - Erwan Gwegen : « Roparz Hemon : An Tri Boulomig Kalon Aour ».  
Istor - Mari-Elen Maze : « An Emsav Kentañ : Spered ar Vro, Brug ».  
Istor - Youenn Olier : « An Emsav Kentañ : Brittia ».  
Kerneveg - Goulven Pennaod : « Sylvester ha 'n dhragon ».  
Gwerinoniezh - Gwennole ar Menn : « Petra eo ar Werinoniezh ».  
Jedoniezh - Abanna : « Diazezoù ar Jedoniezh ».  
Prederouriezh - Loeiz Lemoine : « Keal an Istorelezh ».  
Lennegezh - Ivona Konan : « Klerg An Eostig-Bailh ».  
Istor - Youenn Olier : « An Eil Emsav : Galv » .

An niverenn, 70 pajenn : 6 FF  
G. ETIENNE, C.C.P. 16 093 13 Paris

### Lec'hanvadurezh ar mor

Lec'hanvadurezh ar mor evit Enez Vaz hag an trowardroioù zo o paouez bezañ embannet gant « Les Annales Hydrographiques ». Ar studiadennoù zo bet kaset da benn gant L. Dujardin hag Alan ar Ber.

### " Sturier Bleimor "

Kaeroc'h-kaerañ e teu kelaouenn ar Skouted Vreizhat da vezañ. Ar skeudennoù hag aozadur ar pajennoù a zo dreist. Kavout a reer en niverenn 35 meur a bennad e brezhoneg, sinet int gant Y. V. Perrot ha Herry Caouissin.  
Koumanant 6 lur - Y. SALMON, 4, av. Cruchet, Gagny (S.-et-O.)  
C.C.P. 18 717 35 Paris

### Diskouezadeg levrioù brezhoneg e Ti-Kêr Dulenn

Darn eus lennerien Al Liamm a oar e oa unan eus mennadoù ar C'hevren Keltiek warlene aozañ diskouezadegoù lec'h-dilec'h evit diskouez ar pezh a vez graet er broioù keltiek evit diwall o broadelezh. Dre ziuver a arc'hant n' eus ket bet tu da seveniñ ar soñj-se c'hoazh. Ur sal vras a goustfe ker da feurmiñ a-hed ur sizhun, ha ret e vefe ober bruderezh, evit lakaat arvesterien da zont.

Mont a ris da welout Donnehadh O Suilleabháin, sekretour bras Kevre ar Gouezeleg, da c'houlenn e skoazell. Reiñ a reas degemer vat d' ar menoz. Anv a oa bet da aozañ un diskouezadeg levrioù iwerzhonek da geñver an Oireaehtas hevlene. Ar gouel-mañ - Gouel ar Sevenadur Iwerzhonat - a vez graet bep bloaz en

diskar-amzer. N' en doa ket gallet avat kavout un ti dereat, pe ur sal na vefe implijet nemet evit an diskouezadeg. A-benn bloaz marteze. Ne oa nemet un abardaevezh ma kavfenm tu da staliañ levrioù e-barzh unan eus ar salioù feurmet evit an Oireachtas : d' ar yaou 21 a viz Here e vefe « Te agus Sui Caidreamh » en Ti-kêr, en ur sal vras, ha plas a vefe evit div pe deir zaol hir a-hed ar voger.

Ha talvout a rae ar boan ober un diskouezadeg evit un abardaevezh hepken ? Dont a rafe marteze etre 3 ha 400 den d' an abadenn, koan da gentañ, sonerezh ha kan goude. Un taol-arnod e vefe. Un toulladig levrioù a oa bet dastumet warlene endeo, kaset gant Ronan Huon, an Ao. Kalvez hag Herve ar Menn.

435

Fellout a rae din diskouez embannadurioù e yezhoù keltiek all ivez, e doare da seveniñ ur wech en ur stumm bennak, ar mennad hor boa warlene. J. E. Jones, e Kaerdiz, a lavaras diouzhtu e kasfe din ur voestad levrioù ha kelc'hgelaouennoù kembraek. Kas a reas un tamm mat a skridoù politikel embannet gant Plaid Cymru, darn anezho e saozneg, pezh na blijfe ket d' ar « Gwir-Ouezeled » hep mar. Met oberennoù lennegezh a hep seurt, kelaouennoù ha kelc'hgelaouennoù a zeuas ivez digantañ. Skrivañ a ris da R. Huon en ur c'houlenn outañ kas din an traoù klodusañ en he stal, Tristan, An Teirgwern, Istor Lennegezh, h.a., hep disoñjal un nebeut skouerennoù eus Levrioù ar Vugale. Ha peogwir o deus ar c'helc'hgelaouennoù liesskrivet ul lec'h ken pouezus en hon embannadurioù e voe pedet o renerien da genreiñ lod eus an niverennoù talvoudusañ ha kempennañ en o dastumadoù. Kaset e voe keloù da Gernev-Veur, Enez Vanav ha Bro-Skos ivez evit un nebeut skouerennoù eus embannadurioù en o yezhoù.

Daou pe dri devezh a-raok an 21 e oa « c'hwen em loeroù », rak ne oa deut netra nevez eus Breizh Ret e vefe kemer a-douez ma levrioù-me, ar re anezho n' int ket bet gwallgaset gant an amzer... Padal, en devezhioù diwezhañ e tegasas paotr al lizherioù pakadoù ha pakadoù, a-walc'h da c'holeiñ n' eo ket un daol met div da vihanañ. Gant Yann Goulet eo e voe urzhiet an div daoliad, unan evit an embannadurioù brezhonek, unan all evit ar re kembraek. Un darn vat eus al levrioù kembraek o vezañ keinet-kalet, e oa tu d' o lakaat en o sav, tra ma oa ledet kelc'hgelaouennoù (Gwyddonydd, Hon, ha kaieroù bruderezh Plaid Cymru dirazo. A-dreñv, peget ouzh elvennoù kartoñs kalet, e oa kelaouennoù kembraek evel *Y Cymro*, *Y Ddraig Goch*, *Baner hag Amserau Cymru*). Diouzh an tu breizhat, e oa teir elvenn gartoñs harpet ouzh ar voger o tiskouez, war-bouez luc'hskeudennoù tennet diouzh kelaouennoù, darvoudoù c'hoarvezet e Breizh e-doug an nebeut bloavezhioù tremenet hag o tennañ d' hor stourm. Evit diskleriañ pep tra en iwerzhoneg en doa aozet Yann Goulet skritelloù gant lizherennoù tev.

Arabat e oa deomp direnkañ urzh abadenn an Oireachtas. An dud a zegouezhas abred a zeuas kalz anezho da welout petra oa diskouezet war hon taolioù, da follennañ al levrioù pe da ober goulennnoù ouzhimp. E-pad an ehanoù e teuas re all. Ar pezh a dennas muiañ an evezh e voe ar c'helc'hgelaouennoù kembraek ha brezhonek (Istor ar Yezhoù Keltiek, traoù Preder pe Hor Yezh da zeskiñ yezhoù keltiek) koulz hag al levrioù da zeskiñ brezhoneg. Bamet e voe darn o welout pegement a striv a lakaomp da sevel ha da embann oberennoù diwar-benn hor yezhoù.

Un druez e oa a lavaras re all, pa ne bade ket pelloc'h an diskouezadeg. Spi am eus evelato ne vo ket bet poan gollet, hag e kavimp tro da ober gwelloc'h a-benn bloaz. Marteze ec'h atizo Iwerzhoniz da studiañ hor yezh, ha piv oar, ur wech bennak, d' he degemer e-touez an danvezioù studi er Skol-Veur.

A. HEUSSAFF, 14-11-65.

436

#### **Galv ar C'hevre Keltiek d' ar Broadoù Unanet**

D' ar 4 a viz Du e voe kaset ur c'hounskrid en anv ar C'hevre Keltiek da Aozadur ar Broadoù Unanet. Ul levrig a 62 pajenn anezhañ, o tisplegañ perak o deus Breizh, Kembre ha Bro-Skos ar gwir hag ezhomm d' en em ren pe da vout gwarezet gant un urzhiadur etrevroadel. Ul lizher-ambroug a voe kaset da U Thant, sinet

gant Gwynfor Evans ha ganin. Ha gant ar skouerennoù kaset da zileuridi « diarsav » an holl Stadoù-ezel e voe lakaet ur c'helc'hlizher da dennañ o evezh war div pe deir eus sturiennoù A. B. U. ha war hon abegoù.

Graet hon eus evel pa vefe darn da vihanañ eus ar gouarnamantoù a-zevri gant kefridioù A. B. U. Ar pezh a glaskomp tizhout koulskoude n' eo ket e savfe unan bennak e vouezh a-du ganeomp er Vodadeg Veur : ne welomp Stad ebet hag he defe muioc'h da c'honit eget da goll ouzh hen ober. Tennañ evezh etrevroadel war gwall-enkadenn hor broioù an hini eo hor pal.

Broadelourien 'zo a lavaro marteze ez eo ret deomp kreizenniñ hor strivadoù er stourm a zo da ren e diabarzh pep hini eus hor broioù. N' o dislavarin ket. Ra lakaint bec'h eta war hon enebourien e-lec'h m' emaint an tostañ outo ! Ma chom an dud dre vras diseblant ouzh an dismantr ha ma chom ar pep brasañ eus ar vrogarourien sioulik-sioull, ne vo ket abeg da ober trouz en diavaez-vro kennebeut.

E Breizh muioc'h eget e bro geltiek all ebet marteze ez eus bet bec'h e-kerz ar bloavezhioù nevez-tremenet. Ma 'z eo gwir ne oa ket menozioù broadel e penn ar stourmerien, o deus diskouezet o displegadegoù koulskoude e oa youl gevredel c'hoazh e Breizh. Ne oa ket anezho broadelourien ? Diskouezet o deus - dre ziouer - ne oa diskoulm ebet da gudenn Vreizh er frammadur gall. Chom a reont sioul bremañ, rak aet int ken pell ha ma c'hellent er framm-se. D' ar vroadelourien eo bremañ komz adarre, hep mezh na digarezioù. War an dachenn diabarzh dreist-holl, eveljust. Met war an dachenn diavaez ivez. Rak hon unan ne vimp ket kreñv a-walc'h.

Gant ar c'hounskrid hon eus graet ur strivadeg war an dachenn diavaez. War ar foran etrevroadel. Keñveriet e vez Bodadeg Veur Aozadur ar Broadoù Unanet gant ur foran bedel, e-lec'h ma c'hell ar broadoù pe o renerien avelañ o menozioù hag o c'hlemmoù, ha pa ne zeufent ket a-benn da ober muioc'h e talvezfe c'hoazh da vihanañ da zistennañ an darempredoù etrevroadel. Ur foran all eo ar c'henreizhad-kelaouiñ (kazetennoù, skingomz, pellwel). Evitañ da vezañ sturiet e meur a vro gant ar gouarnamantoù pe gant rummadoù-tud na reont forzh gant hor broadelezhioù, ez eo dieupoc'h dre vras eget A. B. U. ha ken efedus ma n'eo ket muioc'h.

Kaset hon eus eta ouzhpenn 500 skouerenn eus ar c'hounskrid d' ar burevioù-kelaouiñ ha da gelaouerien ar c'hazetennoù brasañ en holl vroioù ma kav deomp e c'hellfed teurel evezh ouzh hor stourm.

Ouzhpenn-se, evit ober ar muiañ a vruderezh ma c'hellemp hon eus aozet bodadegoù-kelaouiñ e Dulenn, Kaerdiz, London ha Paris d' an deiz end-eeun ma kasemp ar c'hounskrid. An digarez evito diskleriañ perak ha penaos e oa bet sevenet ar mennad-se.

437

Diaes eo gouzout resis petore frouezh a vo d' ar strivadeg. Diouzh an heklevioù a zo deut betek ennon hon eus tizhet tost da vat kement ha m'hor boa spi da ober, da vihanañ en Iwerzhon hag e Breizh-Veur. Ne oamp ket e gortoz da welout kelaouennoù Bro-C'hall o teurel pled, nemet evit ober goap marteze.

E Dulenn hor boa pedet 25 kelaouer d' hor bodadeg en Ostaleri Gresham, dreist-holl kempennerien-geleier Inniu hag ar 4 kelaouenn bemdeziek ha Telefi-Radio Eireann. Dont a reas un dousennad, luc'hskeudennerien hag all. Yann Goulet a zisklerias ar c'hounskrid dre vras, tra ma respontjomp, Dr Noelle Davies, G. Mac G. Fh. (ur Skosad) ha me, d' ar goulennoù a voe graet goude. Ar fazi a rejomp a voe chom hep mont diouzhtu d' ar pouezusañ ha displegañ war-lerc'h. Paotred ar c'helaouennoù bras ne badont ket pell e neblec'h. Fellout a rae dezho gwelout hor pennoù moarvat, kemer un nebeut notennoù ha luc'hskeudennoù, ha tapout ar follennad diskleriadurioù a oa bet aozet a-ratozh da reiñ dezho. Chom a reas koulskoude c'hwec'h den bennak a-berzh kelaouennoù bihan evit ar c'houlennadeg. Goulennet e voe perak ne oa bet roet harp ebet gant gouarnamant Iwerzhon, perak ne oa meneg ebet eus ar gouezeleg e breudenn Bro-Skos (hor c'heneil skosat a ziskouezas ne oa ket kalz gwelloc'h emzalc'h ar gouarnamant saoz e-keñver e yezh

eget hini ar C'hallaoued e-keñver ar brezhoneg) ; ha daoust hag e vefe disteraet breudenn Gembre bremañ ma oa bet lakaet danevellskrid Hughes-Parry dirak ar Gouarnamant saoz ? Ur studiour hag a skriv evit unan eus kelaouennoù Skolaj an Dreinded a reas kalz goulennoù pervezh e-sell da embann ur pennad diwar-benn ar C'hevre hag ar c'hounskrid. En diwezh e sonskrivas kelaouer Radio-Eireann un diviz goulenn-ha-respont etrezañ ha me war an hevelep danvez.

E Kaerdiz e teuas 10 den bennak d' ar vodadeg aozet gant Gwynfor Evans ha J. E. Jones. En endervezh ez ejont da London, e-lec'h ma voe graet ar vodadeg en Ostaliri Piccadilly. P. O'Conchúir a oa kadoriad, ha prezidant Kevrenn London Strollad Broadel Bro-Skos a gemeras perzh en abadenn ivez. Dont a reas war-dro 18 kelaouer. Sonskrivañ a reas ar B. B. C. tri diviz berr gant Gwynfor Evans, unan anezho da vezañ pellskignet d' ar broioù « tramor ».

E Paris e voe kaset kouviadennoù da 75 kasetenn pe vurev-kelaouiñ d' ar sadorn 30 a viz Here, met daleet e voent en un doare souezhus a-walc'h : d' ar merc'her e ouezas E. Gwalereg ne oant ket bet degemeret c'hoazh, hag e kasas 25 kouviadenn all gant difrae, - a zegouezhas antronoz vintin. Da ziwall a oa na vije lakaet berzh war ar vodadeg ma vije embannet re abred. Dont a reas kelaouerien a-walc'h evelato evit kelaouiñ Breizh, Bro-C'hall hag ar broioù all ma karjent. Kaset e voe ur follennad diskleriadurioù da gelaouennoù ha burevioù 'zo diouzhtu goude. Met d' ar 6 a viz Du ne seblante ket e oa bet meneget ar c'hounskrid gant kelaouenn ebet er C'hwec'hkorneg. Eveljust, prezegenn E Veurded ha youl ar gelaouerien c'hall da devel war gement tra o tennañ da frankiz Vreizh a enebas ouzhimp ivez. Karout a rafen diskleriañ anaoudegezh ar C'hevre Keltiek da E. Gwalereg evit an trubuilh en deus kemeret oc'haozañ ar vodadeg ha da Y. Fouere evit bezañ asantet ober ar brezegenn.

438

En Iwerzhon ez eo bet brudet-mat ar c'hounskrid, koulz ha bodadegoù Dulenn ha Kaerdiz (e-lec'h ma reas Gwynfor Evans ur brezegenn dispar). Pennadoù peuz-hir a oa e teir c'helaouenn bemdeziek Dulenn (hini an Irish Times er bajenn gentañ), koulz ha war Inniu (ur pennad munudek en takad hewelañ). D' ar gwener e oa ur meneg klok e Keleier ar mintin war Radio-Eireann, ha d' ar sul war-lerc'h e voe skignet an « interview » sonskrivet er programm " Nuacht Anall Nuacht Abhus " da vare koan.

E Bro-Skos ec'h embannas **The Scotsman** ur pennad hir ; hag ar **Western Mail** hag a zo ur seurt " Ouest-France " e Bro-Gembre, a reas kemend-all, en un doare diskredus a-walc'h (pellgomzet e voe d' ur c'hargad bennak eus A. B. U. e London evit kaout e ali, hag hennezh a lavaras e vije lakaet skoilh d' ar c'hounskrid dre berzh ar reolenn a vir ouzh emellout en aferioù diabarzh ar Stadoù). Menegoù pe zanevelloù all a voe embannet en un dousennad kelaouennoù saoz da vihanañ, en o zouez an Times hag an Telegraph. Kelaouerien a bellgomzas a-hend-all da Wynfor Evans ha da J. E. Jones, unan anezho ur c'henskriver gant kelaouennoù Bro-Sveden.

Er gelaouenn sizhuniat amerikat Time-Magazine e vo marteze ur pennad diwar-benn ar pezh hon eus graet en niverenn ar yaou 'zeu (18-11). Goulennataet omp bet, Gwynfor, J. E. ha me, gant o c'henskriverien. Emichañs e vo a-walc'h a wirionez en o rentañ-kont evit reiñ d' o lennerien da c'houzout ez eus teir bro geltiek all o klask disteurel o yev hag ez eus kenlabour etre o stourmerien e-sell da se.

Moulañ 1.000 skouerenn eus ar c'hounskrid, o skignañ, hag aozañ ar bodadegoù-kelaouiñ, kement-se en deus graet un toull e kef ar C'hevre. Goulenn a reomp eta ouzh hon holl izili hor skoazellañ en ur baeañ o skodenn-vloaz hag en ur aliañ broadelourien all da genezelañ. D' ar re a fell dezho kaout diskleriadurioù diwar-benn hon aozadur, skrivañ da Sekretour Skourr Breizh ar C'hevre, E. Gwalereg, c/o Kerlann, kêr-Vreiz, rue Saint-Placide, Paris 6°. Digantañ e c'hellint kaout skouerennoù eus levr 1965 ar C'hevre, m' emañ embannet breudennoù Breizh, Kembre ha Bro-Skos (koulz ha pennadoù all), ha skouerennoù-bruderezh eus Celtic News ivez. Merket avat chomlec'h teñzorier ar Skourr : Ronan Tremel, 17 bis, rue de l'Argonne, Houilles (S.-et-O.).

A. HEUSSAFF, 14-11-65.

### **Reizhadenn**

E-barzh niverenn 111 AL LIAMM e pezh-c'hoari AR BLEIZ, paj. 239, goude ar werzenn " Dre ar prenestr... Uhel n' eo ket " ankounac'haet ez eo bet ar werzenn " Deomp n' eo ket diaes da lammet ".

### **Emglev an tiegezhioù**

D' ar sadorn 27 a viz Du en deus Ao. Ar C'HALVEZ graet ur gaozeadenn : " Va darempredoù gant Jarl Priel ". Y. E. Ar C'HORR, studier, en deus komzet eus buhez " Breuriez St Erwan " e Roazhon.

Da 15 eur ez eus bet lidoù eñvor war vezioù La Borderie, Fañch Debauvais ha Jos Gouinou.

439

### **Levrioù nevez " Al Liamm "**

Graet ez eus bet mouladurioù distag eus " Diazezoù ar sevel gwerzioù " gant Fr. Kervella bet embannet war niverennoù AL LIAMM. Al levrig en deus 72 pajenn hag a goust 6 lur.

Ur mouladurioù distag zo bet graet ivez eus barzhoneg Maodez Glanndour : " Kanadeg evit Nedeleg ". Ment Imram (21 X 18,5) en deus al levrioù ha moulet eo bet hepken war baper kaer. Da heul ez eus ur skeudenn kaer gant Langleiz. - Priz 6 lur.

R. HUON, 2, Venelle Poulbriquen, Brest - C.C.P. 1629-14 Rennes

### **Kelaouennoù**

Derc'hel a ra WANIG HA WENIG, kelaouennig ar vugale, a zalc'h gant hec'h erv evel AR BED KELTIEK. war an niverenn 84 e c'heller lenn ur gontadenn Nedeleg " An Ograouer " troet diwar ar Spagnoleg gant R. Hemon. Merzet hon eus ivez barzhoneg Gwihen Steven, 10 vloaz : " Kan an avel viz ".  
AR BED KELTIEK : 15 lur - C.C.P. 1907 07 Rennes.

Degouezhet eo ganeomp ivez lerc'h-ouzh-lerc'h niverennoù 20 hag 21 GWENEDOUR. An hini gentañ evit kuzuliañ d' ar Vretoned chom hep votiñ evit Impalaer Paris. An eil zo un droidigezh graet gant Abenez " Va Zrottig " Andrev Lichtenberger. D' hor soñj ur seurt skrid a rankfe bezañ e brezhoneg eeun kerkoulz hag an holl levrioù bugale. H. Hillion 56-Arzon - Koumanant 5 lur - C.C.P. Rennes 120 68.

### **Ar C'hevre Keltiek**

Izili ar C'hevre Keltiek n' o defe ket paet o skodenn-vloaz evit 1965 pe 1966 a zo pedet da gas dek lur da R. TREMEL, 17 bis, rue de l'Argonne, 78-Houilles - C.C.P. 14545-20 Paris, o reiñ o anv, o chomlec'h hag abeg ar gasadenn arc'hant.

### **" Istor Breizh "**

" Istor Breizh " gant an Ao. 'n abad Herri Poisson, pevarvet embannadur, reizhet ha klokaet, gant un daolenn eus an anvioù-tud hag eus an anvioù-lec'hioù. Rakskrid gant Dom Alexis Presse, eil diazeour Abati Boken (+ 1965).

440

Triwec'h bloaz ' zo e teue er-maez kentañ embannadur Istor Breizh an Ao. 'n abad Herri Poisson. Abaoe ez eo deuet da vezañ al levr klasel, o tereout ouzh an holl Vreizhiz. Gallet en dije an oberour, abalamour d' e oad, da gresk priz ar moulañ, d' ar strivadennoù ha prederioù a bep seurt ret da embregiñ evit gwerzh

al levr dilezel menoz un embannadur nevez ; n' en deus ket kredet hen ober ; evitañ e vije bet dilezel ar gostezenn vreizhat m' en deus labouret eviti bepred par ma c'helle, rak anaoudegezh Istor Breizh, gwelet a-nep-tu dre ziskouezadur eeun ar fedoù a zo unan eus an elfennoù pennañ evit reiñ lañs d' ar spered breizhat ha startaat amzer-da-zont ar Vro.

Gant ar soñj-se hag evit dont a-benn da strewiñ un embannadur nevez e c'halv an oberour an holl re a c'hell e skoazellañ en ur breñañ ur skouerenn pe veur a hini.

Ar pevarvet embannadur a zeuio er-maez e derou miz C'hwevrer 1966. Niverennet e vo ar skouerennoù prenet a-raok. Priz : 20 lur. Hep mizoù kas, evit ar Skouerennoù prenet a-raok ma vo e gwerzh al levr el levrديو.

Kas ar goulennoù hag ar arc'hant d' an oberour : Abbé Herri POISSON, 22, rue Brizeux, 35-Rennes - C. C. P. 83-07 Rennes.

**ROLL AR PENNADOU**

embannet war AL LIAMM  
Bloavezh 1965 (niv. 108-113)

Anvioù an oberourien renket hervez urzh al lizherenneg (112/333 a dalvez  
niverenn 112 pajenn 333)

abEnnez Breizhiz war hent o c'hrenn- hag o henyezh	112/333
BANDEIRA (Manuel) Recife (tr.)	108/7
BENEAD Kizhier bihan	108/3
Al Lennegezh e Breizh kant vloaz zo	108/30
BIHAN (Per ar) Al Levrioù	109/133
Al Levrioù	113/426
DRED (Y. an) Bro-Dreger	113/383
DREZEN (Youenn) Pellgent Loc'h Laoual	113/376
DIOLIER (Per) Galv an noz	112/318
EVEN (Arzel) Hol lennegezh kollet	111/252
GARGADENNEG (Rojer) Ar Bleiz	110/155
Ar Bleiz	111/228
GLANNDOUR (Maodez) Ar Vreuriezh Wenn e Gwengamp	108/25
Ailil va c'hazh rouz	112/317
Kanadeg evit Nedeleg	113/363
Mousc'hoarzh Jarl Priel	113/395
An Tad Aleksî Presse	113/413
Endro da bennad G. Pennaod	113/421
GLENMOR Mintin Eured	112/322
GOW (Yeun ar) Chomet e oa ar vazh e toull an nor	109/84
N'eo ket ar marv a zeu da vab den	112/319
CAOUISSIN (Herri) Eil marv Salaun ar Foll	112/296
KERLANN Ugent vloaz zo	111/227



KERVELLA (F.)	
Diazezoù ar sevel gwerzhioù	108/40
Diazezoù ar sevel gwerzhioù	109/101
Diazezoù ar sevel gwerzhioù	110/183
Diazezoù ar sevel gwerzhioù	111/261
Diazezoù ar sevel gwerzhioù	112/322
KLER (Jord)	
Al Levrioù	108/54
Daeloù (tr.) gant W. Whitman	109/81
A-dreuz-lenn	110/200
DENEZ (Per).	
Berenice (tr.)	108/17
Al Levrioù	108/56
Douaradur piv ? (tr.) gant H. Webb	109/83
Rojer Casement	109/119
Al Levrioù	109/132
DUVAL (Anjela)	
Noz derc'hent Gouel Yann	108/80
GWERNIG (Youenn)	
War gein ar Vro	108/4
Hentoù	108/5
An Toull en nor	109/75
Ar Roueed	109/76
Ar C'hovel	109/78
An Tokarn	110/157
HEUSSAFF (A.)	
Daskor relegoù R. Casement	109/122
Bodadeg ar C'hevre Keltiek	104/126
Al Levrioù	109/129
Al Levrioù	112/338
HUON (Ronan)	
Ur skouer hepken	111/219
Kenavo, Jarl Priel	112/291
C'HALVEZ (Armañs ar)	
D' am mignon kozh	113/398
Roll oberennoù J. Priel	113/402
MANAC'H (Jorjina)	
Keloù d' ar muiañ-karet	111/223
MENN (Garmenig Le)	
Jarl Priel gwelet gant ar re yaouank	112/299
MENN (Herve ar)	
An dourig mat	108/37
MORDIERN (Meven)	
Bodadeg ar Pevarzekved .	108/12
M. L. G.	
Nevez-Amzer	109/82
OLIER (Youenn)	
Al Levrioù	108/58
Buhez ar gêrbenn	110/194
A-dreuz-lenn	110/199
Prederiadennoù : Jarl Priel	113/404

PENNAOD (Goulven)	
Al Levriou	112/346
A-dreuz-lenn	113/418
PIRIOU (Y.-B.)	
Istor Kembre (tr.) diwar T. S. Thomas	108/10
Pirc'hirined an didermen	111/221
Force de frappe	111/222
Al Levriou	113/425
POE (E. A.)	
Bérénice	108/17
PRIEL (Jarl)	
Nag a wad	112/301
Skolidi SADED	
Ronan Huon gwelet gant Skolidi SADED	111/275
TALBOT (Yann)	
Recife (tr.) diwar Manuel Bandeira	108/7
THOMAS (R. S.)	
Istor Kembre (tr.)	108/10
TROAL (Erwan)	
Betek Dent-Heskenn an Andoù	109/95
WEBB (Harri)	
Douaradur piv ?	109/83
WHITMAN (Walt)	
Daeloù	109/81

#### PREDER

1. - Keal an Emrenerezh psikologek, 44 p., ademb., 5 F.
2. - Moneadur an Anevaled, 58 p., ademb., 5 F.
3. - DROUIZ TAL-HOUARN : An Amzer, An Ec'honder, 36 p., (diviet).
4. - HERVE KERVEVAN : Dirak ar darvoudoù, 30 p. (diviet).
5. - GOULC'HEN PENNAOD : Ur gudenn a vannouriezh, 38 p. (diviet).
6. - R. R. JESTIN : Ar spered relijiel sumerek en e endro usvedel, 44 p. (diviet).
- 7-8. - FANCH ELIES-ABEOZEN En ur lenn « Barzhaz Breizh », levrenn gentañ, 100 p., 9 F.
- 9-10. - ROPARZ HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg, rann 1, B-Bividik 100 p., ademb., 9 F.
- 11-12. - ABANNA : Geriadur a Gorfadurezh, rann 1, A - Li, 98 p., 9 F.
- 13-14. - ROPARZ HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg, rann 2, Biz - Chipot, 100 p., ademb., 9 F.
- 15-16. YOUENN OLIER Istor an Emsav Sevenadurel abaoe ar Brezel-Bed kentañ, 126 p., 9 F.
- 17-18. - FANCH ELIES-ABEOZEN En ur lenn « Barzhaz Breizh », eil levrenn, 96 p., 9 F.
19. - P. DENEZ ha G B KERVERZIOU : Douarouriezh (Skolioù kentaù brezhonek), 36 p., 5 F.
- 20-21. - ABANNA : Geriadur a Gorfadurezh, rann 2, Li - Z, 94 p., 9 F.
- 22-23. - ROPARZ HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg, rann 3, Chipotal - Derou, xij + 100 p., 9 F.

- 24-25. - A. TORAVEL, Gw. AR MENN, GOURLANN, ABANNA, BODMAEL, Y. OLIER, A. EVEN, P. DENEZ A HEUSSAFF, RIGAKOS : Tonkad 61, 120 p., 9 F.
26. - T. POL ROLLAND-GWALC'H, OFM, diwar NIKOLAI BERDIAEFF : Spered ha Boud, 26 p., 5 F.
- 27-28. - ROPARZ HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg, rann 4, Derou - Dilezenn, 100 p., 9 F.
- 29-30. - ARZEL EVEN, Lennour e Skol-veur Aberystwyth : Bevoniezh, 106 p. + XXII taolenn skeudennoù, 12 F.
- 31-32. - FANCH ELIES-ABEOZEN En ur lenn « Barzhaz Brelzh », trede levrenn, 94 p., 9 F.
- 33-34. - ROPARZ HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg, rann 5, Dilezer - Divizoud, 100 p., 9 F.
- 35-36. - FRIEDRICH NIETZSCHE : Evel-se e komze Zarathoustra, pennadoù troet hag addispleget gant ALAN HEUSSAFF, 84 p., 9 F.
- 37-38. - YOUENN OLIER : Tonkad 62, Teskad skridoù politikel 1945 - 1962, 138 p., 12 F.
- 39-40. - ROPARZ HEMON : Geriadur Istorel ar Brezhoneg, rann 6, Divizout - E, 100 p., 9 F.